

AL LIAMM 42

AL LIAMM

Tir na n-òg

NIVERENN 42

Genver - C'hwevrer 1954

TAOLENN

Kenskoazell, gant Ronan Huon	3
An Treitour, gant Ronan Huon	5
Skeudenn gant kleiz ruz. J. Prevert	6
Ar C'hi, gant Nikolaz Nikitin (tr. Jarl Priel diwar ar rusianeg)	7
Ar mesaer-gwiñvered, dastumet gant M. Klerg	19
Lâm Ngôc Sy, gant Goulc'hen Pennaod	25
Sant Per Plegad, gant Evnig Penn ar C'hoad	27
Breizh ha marvailhoù Arzhur, gant Roparz Hemon	30
Dir-Na-Dor en deus 80 vloaz, gant Benead	35
Ha lennet hoc'h eus..., gant Benead	37
Ar Gouezeleg, gant Per Denez	39
Notennoù lenn, gant F. Kervella	42
Notennoù	45
Roll ar pennadoù	58

KENSKOAZELL

gant Ronan HUON

Lenner AL LIAMM n' hell ket bezañ un den digas ha dibreder. Ne dle ket bezañ trawalc'h evitañ kas e vil lur pe e vil pemp kant lur ar bloaz d' ar merour ha resev bep daou viz, gant kalz a blijadur hag a vall, un niverenn fonnus eus AL LIAMM. Ur soudard e tle bezañ p' emañ e yezh en argoll, ur soudard dalc'hmat war c'hed hag a rank klask ledanaat e-touesk an dud anaoudegezh e yezh evel ur benveg a sevenadurezh ma vez skrivet enni traoù plijus hag a dalvoudegezh e pep keñver. Ul labour bruderezh e tle bezañ e hini.

Kalz a c'hourc'hemennoù hon eus bet war-lerc'h hon niverenn diwezhañ ha kalonekaus eo bet evidomp, rak lakaet hor boa hon holl breder evit kaout ul levr brav ha plijus d' al lagad, daoust ma 'z eo pell da vezañ ul labour disi.

Un dra a chom d' ober : gwerzhañ an embannadur distag hon eus graet eus ar BARZHAZ-se, hag ivez hon embannadurioù eus ar bloavezhioù tremen. Evit skignañ hol levrioù e kredan e c'hellfe hor mignoned reiñ o skoazell deomp. Evel ma ouzer difennet eo hol levrioù er skolioù a-berzh stad, ar pezh a zo ur c'holl a bouez, rak ALI BABA, AR SPONTAILH, AQUIS SUBMERSUS, AN ANTEKRIST hag ar BARZHAZ a zo kement a levrioù a zerefe ouzh hor skolidi, ouzh ar re vras da vihanañ, evel prizioù. Anez an difenn-se hor bife gwerzhet un hanter muioc'h a levrioù, moarvat, ha neuze hor bije gallet moulañ kalz traoù all, da skouer romantoù Jarl Priel ha Roparz Hemon.

Daoust d'ar skoilhoù-se e kendalc'homp, hag e kendalc'himp gant skoazell an holl Vretoned gredus. Ret e vije klask ober e pep lec'h ar pezh hon eus graet e Brest e div stal levrioù. Kaset hon eus levrioù d' ar stalioù-se, levrioù moulet ganeomp hag ivez levrioù moulet gant SKRIDOU BREIZH, ha goulennet ma vijent diskouezet, ar pezh a zo bet graet meur a wech en div stal. Gwerzhet mat eo bet al levrioù zoken. Bep tri miz pe bep c'hwec'h miz ez eo ret mont da welout ar varc'hadourien da zastum an arc'hant, en ur reiñ an diskont boas, ha kas levrioù all dezho.

4

Evit pezh a sell ar gelaouenn hec'h-unan ez eo ur gudenn a goumananterien. Ret e vije tizhout 400 koumananter. Hel lavaret hon eus a-hed ar pevar bloaz diwezhañ. Er bloavezh 1952 n' hon eus gounezet koumananter ebet, 358 hon eus bet e-pad daou vloaz. Er bloaz 1953 avat hon eus graet ur c'hammed war-raok hag evit ur wech n' eo ket bet digalonekaus sellout ouzh niver ar goumananterien. Tizhet hon eus 385. Ne vank nemet pemzek evit kaout 400, gwir eo hon eus ur wech lakaet tri bloaz evit gounit kement-se.

Ur wech c'hoazh e c'houlennin digant pep hini eus hol lennerien klask koumananterien en-dro dezhañ. Ma en em laka hanter-kant hepken ac'hanomp da soñjal en dra e vo kalz aesoc'h buhez AL LIAMM. Ha marteze n' emañ ket pell an deiz m' he devo pep niverenn eus AL LIAMM 100 PAJENN.

Setu ar pal a zlefemp lakaat deomp hon-unan e derou ar bloaz-mañ ha gant ur goanag eus ar re vrasañ eo e kinnigan ar mennad-se deoc'h.

AN TREITOUR

gant Ronan HUON

Marv eo. De Profundis.
 Lakaet e oa bet dirak ur voger
 Ha daouzek soudard plomm
 o deus savet bep a fuzuilh.
 Trouz o deus graet
 ha kouezet eo,
 - farsus -
 'vel ur verc'hodenn vezv
 torret ar winterell.
 Gwerzhet en doa e vro,
 a oa bet roet dezhañ
 pa oa deut er bed-mañ .
 Roet e oa bet dezhañ
 gant e liennoù babig,
 e voned seiz
 e viz da sunañ
 E zaoulagad da ouelañ
 hag e olifant keluloid.
 Kar anezhi, paeet e vezi.
 Paeet en deus.
 Un treitour eo,
 Ar c'hazetennoù o deus laret
 - gwir eo -
 Ha kouezet eo,
 evit e vro,
 a lare eñ,
 met n' eo ket gwir,
 arabat krediñ,
 un treitour eo.
 Marv eo, de Profundis.
 Ur merk teñval a zo chomet
 war an traez 'pad pemzete.
 Neuze ar glav 'zo deut,
 Ar goañv oa.
 Hag ar glav en deus gwalc'het ar merk,
 Ne chum mui netra.

Brest d' ar 7 a viz Genver 1954.

Skeudenn gant Kleiz Ruz

Al lasenn-grap he deus risklet war da zargreiz
 ha barr-arnev eürus da gorf karantezus
 'kreiz an deñvalijenn a-zo tarzhet a-daol.
 Ha da vrozhañ o kouezhañ war al leurenn goaret
 n' he deus ket graet muioc'h a drouz
 'get plusk un aouraval o vont war ur pallenn.
 Dindan hon treid avat
 e strake 'vel splus he nozelennoù bihan mamm-ar-perlez.
 Skeudenn a dan
 frouezhenn goant
 beg da vronn en deus treset
 ul linenn-chañs nevez
 e palv va dorn
 Skeudenn a dan

frouezhenn goant

Heol an noz.

Jacques PREVERT. (tr. Per DENEZ.)

AR C'HI

gant Nikolaz NIKITIN (1)

(troet a-ziwar ar rusianeg gant Jarl PRIEL)

(1) N. Nikitin, un den yaouank ne oa ket anv dioutañ kent na darzhas Dispac'h bras 1917, a zo deut da vezañ ur skrivagner brudet en e vro. Aozet eo bet gantañ ar gontadenn-mañ war-dro 1920, e-keit ma pade ar brezel etre ar re « ruz » hag ar re « wenn », ha ne ouie ket fraez mat ar bobl diwar ar maez war be du treiñ.

E peurvan deñval ar vourc'h n' eo ket ul leue a zo o peuriñ, met ur pikol pezh ki louet, gleb ha gludek ar c'hrev anezhañ. Daoust ha kollet e vefe gant al loen-mañ e spered ki, rak ne baouez ket da harzhal ouzh siminal labouradeg an Aotrou Pelmann ? Koulskoude ne zivoged ar siminal nemet ur wech en amzer ; kaset eo bet ar perc'henn da droadañ, dismantret eo bet ar mogerioù gant tennoù-kanol ha ne van nemet ar relegoù anezho. Penaos 'ta, ha gant peseurt boued e vager ar gaoter vras ? N' eus hini, na zoken ar c'hi evit intent kemend-all. Ha deskit din 'ta pelec'h n' en em sil ket ar chas, rak tanavoc'h eo o fri eget ma 'z eo lemm o lagad.

Skeiñ a ra ar beurvan ouzh ur stankenn, serzh a-walc'h an dinaou anezhi, ha ma vourboulh drezi ur stêrig herrus ha pennek, gant torkadoù broenn hag elestr war an eil vriell hag eben. Setu pelec'h e vez ar c'hi o vevañ, damdost -d' ar beurvan-se. Ha nozvezhioù 'vez e klever ar stêrig o kannañ he bili, hag ar c'hi o tiskargañ holl c'hllac'har e ene. Pe harzhal a rafe kentoc'h gant al levenez a vez ennañ, piv 'oar ?... N' eus tu ebet d' intent ur c'hi.

Dal 'ta, petra 'zo du-hont, e pellder an noz ?... evel pa vefed o terriñ gant un tammig morzhol ur werenn vresk kenañ. Un treiñ, moarvat, o stronsañ a-hed al linenn ; stirlinkat a ra e stokerezed ha gwashoc'h eget tarkizhier e viaou an ahelioù lardet fall. Berr-berr eo, tri garr-marc'hadourezh hepken, hag a-daol trumm, kerkent ha m' emañ a-rez gant bevonn ar vourc'h, raktal e peg ouzh ar bannoù evel ma rafe ur gelienenn ouzh ur bechad kig brein. Ruzañ a ra war e rodigoù dor ar c'harr diwezhañ, hag alesont e lamm didrouz d' en traoñ un toulladig tud, darn anezho soudarded, rak dindan loar staen an diskar-amzer e luc'h dir ul lavnenn war veg o fuzuilhoù. Hag i da gerzhout a-gevret war du ar beurvan. Pegañ a ra ar geot ouzh o heuzoù, pounner eo ar fank dindan o solioù ha ken pounner-all an oabl strafuilhet. Daoust ha na vefe ket hemañ war-nes kouezhañ war ar vro-mañ ?... Ha mar degouezh kement-se, da belec'h tec'hel ?

8

Nann, mont a ra ar soudarded gant o hent. Gout' ouzont ez eus douar kalet pe c'hrenegell dindan o zreid, gout' ouzont emaint o kas prizonidi betek ar beurvan, ha peseurt labour a zo d' ober du-hont. Van ne reont 'ta ouzh gourdrouz an oabl a-us d' o fenn, rak gant an dienez a-vremañ n' hell ket bezañ re sinac'h neb a fell dezhañ kaout boued fonnus da lonkañ, dilhad a-feson e-dro dezhañ hag ur re votoùler mat en e dreid... Setu da skouer ar serjant Korneiev, ur pabor anezhañ, teir barrenn arc'hant war bep skoaz hag ur regennad medalennoù war e vruched. Dre vrezeliañ du-mañ ha du-hont, dre skarañ, herr warnañ, eus an eil penn ar vro d' egile, na tu nag amzer ne gav da brederiañ war dra-mañ-dra. Daonet ! ne vez ket zoken kavet bemdeiz Doue butun a-walc'h da beurgouchañ ur c'hornedad...

Ar brizonidi 'vat, n' int ket ken mibin-all ; seul dostoc'h ma 'z eo ar pal, seul aliesoc'h ha seul donoc'h e sac'h hemañ pe henhont en un toull bennak ; met evelse e vez kont bep gwech gant ar seurt dezho. Na youc'h, na blej, na klemm ne glever a-hed ar beurvan. Hogen, dre ur rog er c'houmoul e krog da wilc'hata ur steredenn... Daoust ha na vefe ket kentoc'h ul lagad ki ?

- Arsav ! e c'hourc'hemenn Korneiev gant ur vouezh ken gros hag un taboulin. Ra lamo ar brizonidi o dilhad !... Ya, en noazh-pilh ; n' eus ezhom na bragoù na

lostenn er bed-all.

Aet eo davet ar serjant daou gomunist ar bagad : ar soudard ruz Petka ha Reubin, komiser ar bempvet rann-arme.

- Selaou 'ta, paotr e vedalennoù, hol laosk bepred da danañ ur sigaretenn...

- Ya, eme ar soudard Petka, an diwezhañ hini...

Daoust d' an deñvalijenn, merzout a ra Korneiev porpant ha bragoù-ler nevez-flamm ar c'homiser, diouzh e welout ur c'hanfard ken gwevn hag ur silienn.

- Butunat, emezoc'h ?... Ac'hañ 'ta mat !... gant ma tiwiskfec'h e-keit-se ho tilhad...

Hep rannañ ger, e tan an dud varnet d' ar marv pep a sigaretenn - da vihanañ, neb a van gantañ un tammig butun.

- Bugaligoù, eme ar serjant o kenteliañ e soudarded, eeunit ho fuzuilh war blankenn-skoaz an abostol a vo dirazoc'h ; e giz se ne c'hwito hini ebet war e daol... Regennet e vo ar re-mañ war wrimenn ar beurvan, ha kerkent ha ma vo echu an abadenn, stlepañ a raimp o c'horfoù er stêr...

9

Kent na vo pell e tarzho an deiz. Na flourat tra mouezhig ar stêr o plediñ gant he bili ! pegen kaer e kan, e c'hoarzh hag e voubou maezioù hor bro da c'houloù-deiz !.. Met netra ne wel na pe glev ar c'homiser Reubin ; emañ o kenteliañ d' e dro ar soudard ruz Petka.

- Gwellañ tra d' ober, emezañ a vouezh izel, eo tostaat ar muiañ m' heller ouzh ar stankenn hag en em deurel enni e koulz hag en amzer. Va intent a rez ?

Huanadiñ a ra Petka, en ur grignat ivin e veud.

- Kemer da greñv warnout 'ta ! Er stad emhout enni, netra n' ac'h eus da goll.

Ya, met ganet eo bet ar c'homiser en ur gêr vras, ha dre se penn ha kalon a zo ennañ ; Petka n' eo nemet ur paotrig diwar ar maez, ha kouerion int ivez an holl brizonidi all.

- Ma ! gra a gari, krener ! e lavar Reubin diwar fae, kent adstagañ da sachañ war e heuzoù.

Hag an dro-mañ c'hoazh evel boaz, kel lies gwech ma vez o kiañ ouzh al labour-se, setu petra 'zo war e spered :

- Ezhomm az poa, Reubin, da zibab ur re votoù kalz re start. Ardoù hag ardoù !

Ya, pa groger da ziwadañ moc'h, buan e teu pep hini, ha kiger a vefe, da vezañ bouzar gant o blejadennoù ; ni 'vat, ni 'oar ar stek da vervel ken sioul hag ur dervenn : un hej-skoaz hep mui ken, pe zoken fiñv ebet, ha setu eno !

- Prest eo ar vutunerien ? eme ar serjant, rak poent eo stagañ ganti...

E-keit m' emeur o pakañ tammoù dilhad ar re ruz, e tegouezh da Gorneiev parañ e selloù war heuzoù ar c'homiser.

- Klev 'ta, mabig, emezañ, din-me e vo da votoù, eus ar c'hentañ int. Ma !... n'int ket diouzhin, am eus aon, met n'eus forzh, gwelet e vo goude.

Tastournat a ra ler kuñv ha kreñv an heuzoù hag o c'hlenkañ a ra dindan e gazel. Lakaet eo bet brizonidi war wrimenn ar beurvan, pep hini en renk gant kemend-all a soudarded war hed dek kammed adreñv d' o c'hein.

- Warnoooo !... e c'hourc'hemenn ar serjant a bouez penn, ha kerkent-all :

Tennit !...

Strakal a ra ar volead evel ur skourjez, met lammet en deus Reubin a-bendraouilh er skantenn, ha netra n' hell ober Korneiev gaezh nemet leuskel war e lerc'h tri pe bevar zenn pistolenn.

- Sed amañ 'vat ar furlukin ! emezañ. D' an daoulamm ruz e felle dezhañ skarañ da buñs an ifern...

10

Pasaat a ra darn, hogen c'hoarzh ebet ne sav e-touez ar soudarded. Hag ar serjant neuze da vale a-hed linenn ar c'horfoù noazh ; en ur c'hwibanat ha war e blaen stekiñ a ra gant e votez ouzh ar pennoù ken gwak bremañ hag irvin, kent leuskel da bep hini un tenn ouzhpenn e toull e skouarn, rak bez' eus c'hoazh hiniennoù hag a skrab an douar gant bizied o zreid lous.

- Bremañ 'vat, bugaligoù, bec'h dezhi ! Stlepit an ebestel-mañ d' an traoñ...

Don-don e vez ar stêr er c'houlz-mañ bloaz ; bep tro ma kouezh un « abostol » en dour, ober a ra trouz ur pikol gwerenn danfoeltret a-dro jouiz ouzh ur voger, hag ar soudarded da c'hweziñ da vat gant an tenn ma 'z eo al labour. Du-hont, a-us d' ar menezioù e krog an heol da darzhañ, ur pikol hini, gant liv an dour-wad warnañ, hag a-greiz holl, evel pa vefe bet dislontret gant fankigell ar beurvan, e tifloup ne oar den eus pelec'h ar c'hi louet ha treut, naon bras dezhañ.

- Tec'h alese, te ! eme ar serjant sabatuet ouzh e welout. Ne dec'hi ket ?... Sed amañ ul loen gouez !

Kilet en deus ar c'hi un nebeudig : kluchet eo war gab e revr, e fri rognus eeunet gantañ war du siminal al labouradeg, ha stagañ a ra da leuskel yudadenn ha yudadenn mantrusoc'h an eil eget eben...

*

**

Bez' eus e pell-pellañ ar vourc'h, damdost d' ar beurvan, un tiig-soul war-nes kouezhañ en e boull, tiig Simka, un darinenn a blac'h gant daoulagad lemm ha sart en he fenn, ur c'hast, hervez ar vrud a red. Nag evit keloù se ?... ledan eo he divskoaz ha lart meurbet he fenn a-dreñv ; n' eo ket gant louzoù-kegin hepken e vez maget ar seurt merc'hed. Ma !... bez' eo bepred ur vaouez koant a-walc'h, daoust d' he brud, ha dont a ra eus he c'hroc'hen c'hwezh ar parkeier nevez-blommet, c'hwezh yac'h ha kreñv al labour-douar.

Pa zegouezh da dremenidi ar seurt gant Korneiev hag e « vugaligoù » kantreal dre amañ, kaset e vezont bep tro da di Simka, e-tailh da dennañ he mad diouzh n' eus forzh petore diavaezidi, ruz pe wenn. Rak paour pe baouroc'h eo an tiegezhioù all, kouerien pe vicherourien el labouradeg, ha da hini ebet ne fell kaout darempred gant tud estren. Kaset eo bet 'ta ar bagadig soudarded wenn d' an tiig-soul hag eno emaint bremañ o c'hoari lapavañ.

11

Bez' eus ur pikol gouign o peurboazhañ er forn, ha war an daol hini-kreñv, amann, soubenn ar c'haol trenk, silzig, bara-soudard, konfitur, kig sall druz ha togoù touseged a bep seurt, ha mar goulennit diganin a belec'h e teu kemend-all a draoù mat, ne sell ket se ouzhoc'h...

- Bec'h d' an daol ! e vlej ar serjant war gorf e roched. Ra bako pep hini ar pezh a garo ha kement ha ma karo. Dre vevañ e giz ma reomp ni, hag ur c'hwil-derv e-unan a zeufe da vezañ ul lonker, neketa, bugaligoù ?

Gant ur werenn leun-kouch e pep dorn, aet eo etrezek Simka ha kerzhout a ra kammed ha kammed en ur weañ e c'henou evel pa vefe o vale diarc'hen war dachou marc'h.

- Dal, va flac'hig, kas an div-mañ bepred d' an traoñ.

Hogen, e-keit m' emañ eben o plediñ gant he gwin-ardant, debron e teu dezhañ, ha strivañ a ra da bavata justin gwreg an ti.

- Ro peoc'h, lanchoe, emezi, ober a rez din tarlonkañ. Gortoz 'ta, amzer az po !

Daoudortañ gant ar fent a ra ar « vugaligoù ».

- Ya, eme unan anezho, ober traoù a bep seurt a zegouezh da neb a fell dezhañ kaout boued sofkont da gloukañ, dilhad a-feson en-dro dezhañ, hag ur re votoù-ler mat en e dreid...

Dre evañ bannac'h war vannac'h ruz-tan eo ar c'hokennoù, ha krog eo pennoù 'zo da vezevenniñ.

- Simka ! eme ar serjant erru pell a-walc'h ganti, deus amañ raktal war va barlenn.

- N' in ket da !.. sed amañ 'vat ur genou bras, c'hoazh e rogo din va zammoù dilhad !

Met kaer he deus difretañ, stad a zo enni rak d' he c'hrad e vez gwazed balc'h ha kreñv eveltañ, ha krediñ a ra dezhi emañ dija e vouchig barv ruz ken reut ha reun oc'h herlinkat he divjod pe chouk he c'hil.

Degaset eo bet ar c'houign war an daol ha setu blej ha stlakadeg daouarn en-dro dezhañ, met moredet eo bremañ ar serjant Korneiev daoust d' an dourni spontus.

- Ni, bugaligoù, emezañ dre e gousk, ni n' omp kiriek da netra. Kit da damall, mar karot, d' ar pennoù bras a-us dimp... Yaaaaa !

Krog eo Simka da bokat d' ar « vugaligoù » o lammat hag o fraoñval a heligentañ war he lerc'h. « D' am zro, kaezhig, d' am zro, Simka, pe da vin daonet !.. » Ha kan, ha koroll, ha c'hoarzhadeg, ha cholori, hag evelse bepred war washaat bete serr-noz. Dal 'ta, kouezhet eo ar serjant a-ziwar e skabell rak tomm-brav eo dezhañ.

12

- Paotred, eme ar vaouez, gwintit an tarv-mañ war lein ar fornigell da glouariñ... (1)

Diwezhat a-walc'h eo anezhi ; aet eo ivez ar soudarded da gousket d' ar c'hraou o vezañ n' eus eno pell 'zo na pemoc'h, na dañvad, na gavr, na zoken ur yar.

- Ha diwallit, eme Simka, ouzh an tan gant ho putun milliget !

Chom a ra hi ur pennadig da sellout dre ar prenestr. N' eo ket savet al loar, met bez' eus stered o ruilhañ e bolz an neñvoù evel greun diflipet diouzh ur ridell toull. Ober a ra gwreg an ti ur groazig vihan war he genou, rak dre varailhat tapet he deus an hik, ha goude brochañ al lutig a vez noz ha deiz war enaou dirak ur Werc'hez he stern kouevr; e pign d' he zro davet ar serjant war lein ar fornigell.

*

**

Bez' eus a-hed ar stêr ur wenojenn hanter-draezh hanter-lec'hid, hag e-mesk askol hir ha kras e kresk du-mañ ha du-hont bodadoù louzaouenn-an-tign. Pa grog ar glizh-noz da ziverañ e tivorfil ar c'homiser Reubin, ha kerkent-all e kred dezhañ emeur o paouez fotañ ur bodezad dour bervet war boull e galon ; gleb-touilh eo gant ar c'hwezhenn ha kelc'hioù houarn a stag da waskañ muioc'h-mui war e ilinoù ha pennoù e zaoulin : e vannac'h gwad o vont en-dro adarre.

- Bev on ! emezañ.

Tastournat a ra e zivhar ; poan a ra dezhañ an hini gleiz, koeñvet spontus eo, ha pounner 'ta ken ma 'z eo ; tu ebet ne vo, emichañs, da bouezañ war hounnezh.

- N' eus forzh, bev on bepred... Bev !

Manet eo war lein e gein da selaou e galon baour o talmiñ gant trouz ur mekanik ha zoken ul labouradeg a-bezh, ha parañ a ra e selloù war an oabl digor evel un aviel, gant e holl beoc'h a-us d' e benn. Frrrrt !... ahontik e taskren an askol kras : an aezenn marteze, pe bez' e vefe du-hont evnigoù deut da gludañ e goudor. Dindanañ e sant ar grean o herlinkat e groc'hen noazh, hag ouzh e dreid e kendalc'h ar stêrig da vourbouilhat en ur strivañ da gleuzañ a-dammoù ar bili kalet.

- Bev on !... bev !.. beeeev !.. BEV !

(1) Er mare-se gwele ebet ne veze gwelet e ti ar gouerien, da vihanañ ar re baourañ ; mont a rae an dud da gousket hep lemel na dilhad na botoù, darn war ar bankoù stok ouzh ar voger, ha darn-all, dreist-holl ar vugale hag ar re gozh war lein ur pezh fornigell graet gant brikenoù ha pri melen. (J. P.)

13

Ger all ebet ne zeu na war e spered na war e deod, evel pa vije bet diverket a-grenn kement darvoud c'hoarvezet kent na grogas da dastournat e zivhar. Daoust ha lazhet eo bet ar c'homiser Reubin, pe lazhet e vefe bet gantañ unan all bennak ?... Un taol kaer !... met sed amañ traoù a-bouez : an aezenn-noz, ar stêrig, evned munut, netraigoù na weler ha na glever ket, petra bennak m' ouzer emaint aze ez kichen : en ur ger, ar vuhez !...

Mont a ra gant mil boan war bennoù e zaoulin, met kentizh ha ma fell dezhañ sevel ha kerzhout, raktal e ramp e droad ha kouezhet eo a-hed e gorf, met war e c'henou an dro-mañ.

- Penaos 'ta e vez graet diouzh al louzoù-mañ ?

Ganet eo bet Reubin en kêr ha dre se n' eo ket evit ober an diforc'h etre louzoù 'zo ; desket en deus marteze o anvioù un tu bennak er skol, met ankounac'haet int bet gantañ ken prim-all.

- N' eus forzh, bev on !... Na kaerat tra an disterañ geotenn e sklaerder al loar !

Hogen, e-keit m' emañ Reubin o prederiañ diwar-benn ar geot, ar bili, an evnigoù hag ar vuhez, n' en deus ket taolet fed ouzh ar c'hi louet deut a-zoug e gamm d' e vete. Kregiñ a ra ar c'hi e skoaz ar c'homiser, hogos hep poan na gloaz, goustadig tre, kement ha tañva hepken, da c'houzout peseurt blaz a zo gant ar c'hig-mañ. Kerkent ha m' en em gav lagad an den a-rez gant daoulagad kriz al loen e stag Reubin da c'harmiñ a-nerzh e benn :

- Tec'h alese !

Souezhet eo ivez ar c'hi, rak betek hen biskoazh ne c'hoarvezas gantañ kemend-all ; leuskel a ra zoken un hirvoud skiltrus, met ne dec'h ket. Bez' eus en e benn daoulagad didan ha hiraezhus evel re ur c'hozhiad ; kozh meurbet e tle bezañ, koshoc'h marteze eget an douar hag ar stêr, krisoc'h eget ar vilienn galetañ.

- Ne dec'hi ket ?

Kilañ a ra ar c'hi a-benn ar fin, hag e-keit m' emañ o souzañ kammed ha kammed, derc'hel a ra da sellout pizh ouzh danvez e goan, en ur skrignañ e zent kennebeut ha tra evel pa vefe o vousec'hoarzhin hag o soñjal : « Amzer 'zo ha gortoz a rin kent na vo prest va fred ». Daoust d' an heug ha d' ar spont, ret mat eo da Reubin menel en e c'hourvez ur pennadig ouzhpenn da ziskuizhañ, met klevout a ra neuze nepell dioutañ unan bennak, gwech o chaokat hag o vandrouilhat, gwech o

tarlonkañ hag o vabouzañ... Harpet war e ilin dehou, merzout a ra an hevelep ki o
tebriñ kof-kar un den noazh hag o tiframeañ gant e skilfoù kroc'hen ha kigennoù.
14

- Oc'hoouo !

Piv 'ta a glevfe kriadenn Reubin ? er c'houlz-mañ bloaz ha war ar marc'had
keit ha ma pad ar brezel-diabarzh den ne vez war vale dre amañ goude hanternoz.
Van ne ra ar c'hi louet nag ouzh ar youc'hadennoù nag ouzh an taolioù-maen. Ne
bleg ket zoken da dreiñ penn war du ar blejer, ha derc'hel a ra da bakañ kig
fresk, kig mat evel da hini, komiser ar bempvet rann-arme ruz !... N' eus ket da
dortañ, ret eo tec'hel alese ar primañ gwellañ.

Daoust ha na wel diribin ebet, stagañ a ra Reubin da grapat en ur sachañ e
c'har c'hloazet war e lerc'h. Pebezh labour ! mezevenniñ a ra e benn, krenañ a ra
gant ar boan kerkent ha ma rank ober ur fiñf, ha dreist-holl gant an aon rak ruzañ
d' an traoñ, war-eeun dindan bav ar c'hi. Ha petra ober mar fell d' al loen mirout
outañ da vont kuit ? Emañ adarre o harzhal e-tal ar stêr, rak ar stankenn a-bezh a
zo e rouantelezh, perc'henn eo d' ar stêr, d' an traezh, d' an evned ha d' ar
bili, ha d' ar c'hig fetis kinniget dezhañ.

Den ne ouio morse pegeit amzer e padas merzherinti ar c'homiser hogen erru
eo a-benn ar fin war wrimenn ar beurvan hag en em ledañ a ra eno hanter-vev,
hanter-varv.

- N' eus forzh, emezañ, bev on ha bev e chomin...

Hag eñ d' en em stlejañ adarre, diouzh ma teuio gantañ, rak ne oar ket dre
belec'h tremen ; mont a ra gant e holl fiziañs er vuhez en ur dreuzigellañ e giz
ur mezhier, en ur horjellañ war e c'har yac'h ; kouezhañ a ra bep dek kammed a-hed
e gorf er fank, en ur ruzelenn, el linad, er spern hag en drez, met petra
vern ?... bev eo ha bev e chomo. Degouezhout a raio dezhañ marteze kaout war e
hent un ti bennak ma vevo ennañ tud a-du gantañ, pe dud na vo a-du gant kostezenn
ebet, met truez o devo dioutañ, bevenniñ a c'houli, roet e vo dezhañ repu pe da
vihanañ un dakennig dour rak pell 'zo emañ o krenañ gant an derzhienn. Ha mar
n'eus ti ebet war dro ?

- Geo, emezañ, geo !.. Bev on ha bev e chomin !

Hag eñ da sevel adarre, da bellaat diouzh ar c'hi. Ha dre ruzañ er stumm-se,
ar peurliesañ war e grabanoù, ken laour hag un touseg, e spurmant ul lutig damruz
o wilc'hata damdost dezhañ. Bez' eus du-hont 'ta ur prenestr, un ti, ha tud, va
Doue, tud ? Ankounac'haet en deus e bedennoù, aet eo ar seurt traoù e-maez ar
c'hiz e-touez ar re ruz, met amañ vat, amañ e vefe mat dibuniñ ur bater.

- Bev on, eme Reubin, bev on ha bev e chomin !

15

Setu aze e holl bateroù, kent mont war-raok c'hoazh ur wech.

...Erru eo d' an diwezh e-tal ur prenestr, hag eno, gant an dour war e
zaoulagad, e stag da huchal :

- Tudoù vat, en anv Doue, deuit d' am sikour !

Neuze, brevet gant ar boan, an derzhienn ha gant ar faezh ma 'z eo, en em
leuskel a ra da c'houzizañ e fankigell ur porzh. Nag evit se ?... erru eo e ti tud
a galon vat, erru eo er gêr, er baradoz...

*

**

E tiig Simka, setu pelec'h eo degouezhet Reubin. Douget eo bet er gegin gant
ar soudarded, ha ledañ a reont e gorf noazh war ur bank. Diskenn a ra buan ar
serjant a-ziwar lein ar fornigell ha da heul e lamm Simka d' an traoñ en ur
vountañ en e lec'h ur pikol tez difloupet e-maez hec'h hiviz. Ha hi da
gunujenniñ :

- Pelec'h an diaoul hoc'h eus higennet ar pesk kailharet-mañ ? Libistret holl e vo va bank gant al lastez peget outañ.

- Paouez da gagetal, eme Gorneiev. Ur gudenn gwall luziet am eus da zirouestlañ...

Raktal ma tigor e zaoulagad, intent a ra Reubin emañ etre daouarn e washañ enebourien.

- Arsa, eme ar serjant, piv 'out te, paotrig en noazh ? Met kerkent ha ma taoupleg a-us d' ar bank e tiroll da c'hoarzhin.

- Hemañ, bugaligoù, eo ar furlukin a lammas a-bendraouilh du-hont er stankenn... Ahahahahaha !... Gennet out adarre, ampouailh ruz, ha gennet da vat an dro-mañ. Kit da beurober ur gouskadenn, paotred, met da gentañ taolit ur c'hozh sac'h war hon amprevan, rak ur vezh eo sellout outañ...

Fellout a ra da Reubin lavarout un dra bennak, met allas n' eo ket evit rannañ ur ger. Harzhal a rae du-hont ar c'hi, ha gant gwir abeg rak gout'ouie e teuje e dro... Ac'han 'ta, mat !... Krediñ a ra d' ar c'haezh Doue e sav e-dro dezhañ ur vougasenn euzhus, ez eus dindanañ un toull don emañ o vont da rampañ ennañ kaer en defe stourm eus e wellañ, ha semplañ a ra c'hoazh ur wech...

- Peogwir emaut war vale, kaezhig, eme ar serjant, aoz din ur bannac'hig te n' on ket evit kousket goude kement-mañ.

Met tremen droug a zo e gwreg an ti, ha hi dezhañ :

- Na tamm na bannac'h n' az po diganin. Mar bijen me gouvezet, Herodez, e oa gwad war da zaouarn, biken n' o dije stoket ouzhin, rak...

16

- Rak petra, staoterez ? Soudard on hag ur soudard a rank plegañ, ha te, rak, rak, ha rak, evel ma ra an houldi...

Teuk, teuk !... Emeur o paouez skeiñ div wech diouzhtu war izelañ gwerenn ar prenestr. Redet eo Simka e-maez ha daoust d' an deñvalijenn anavezet he deus Panka, ur paotrig eus ar vourc'h souchet ouzh ar vogerenn.

- Me eo, emezañ. Du-se emañ bepred ar re wenn ? Gra dezho menel ez ti ar pellan m' halli. Aet eo micherourien al labouradeg a-du gant ar re ruz hag e sell emaint da dagañ da ganfarded holl gwitibunan.

- Pegoulz-ta, Panka, pegoulz ?

Hogen, skaret eo Panka kuit ha chom a ra ar vaouez ur pennadig da selaou ar c'hrennard diarc'hen - flip ha flap ha flip - o patouilhat er fank an hent don. Mont a ra neuze d' an ti met c'hoant ebet n' he deus d' aozañ te.

- Klev 'ta, soudard, emezi, sach ganit da gilhorou, ha raktal ! Anez se toullgofet e vi kent na vo pell gant tud ar vourc'h.

Intentet en deus Korneiev diwar hanter-c'her.

- Neuze 'ta, emezañ a vouezh izel, a-du emaint gant ar re ruz ?

- Na petra 'ta ?

Redek a ra ar serjant da zihuniñ e dud, ha kuit a dermal e wisk e vantell soudard war var e roched.

- Selaou, kaezhig, emezañ, gra d' az kanfarded chom ez ti ar pellañ m' halli, hag e giz se...

Kregiñ a ra Simka da c'hoarzhin, rak evelse war vete nebeut e komze ivez Panka, paotrig ar vourc'h.

- Petra 'eo dit skrignal, strouilhenn ? Gra evidon evel ma lavaran ha setu

amañ da c'hobr.

Kinnig a ra dezhi e walenn aour gant ur ruzvaen warni - n' eo ket ur c'holl bras, un dro bennak e laero unan-all evelti, pe vravoc'h c'hoazh - ...hag eñ er porzh... Kement a herr e oa warnañ m' en deus ankounac'haet krenn e borpant serjant war al leur-di, ha heuzoù nevez ar c'homiserr ouzh troad an daol. Da c'hortoz e chom Simka hep fiñval, harpet he c'hein ganti ouzh ar fornigell. Ha da c'hortoz petra ?... un aval gwall drenk he devo moarvat da grignat. Sellout a-gorn a ra a-wechoù ouzh Reubin ledet war ar bank ha kel lies tro ma tastourn gwalenn ar serjant bountet ganti en he godell, ne vez ket, ha pa rofec'h dezhi un tenn, evit mirout da vousec'hoarzhin, rak n' eo ket bemdeiz Doue e tegouezh d' un tammig pezh-fall diwar ar maez gounit un dra ken kaer...

17

*

**

Kerkent ha gouloù-deiz e teu tre afo micherourien ar vourc'h, ur bagad mat anezho, gant pep a fuzuilh da dennañ gedon war o skoaz, ha raktal e stagont gant Simka :

- Pelec'h emañ ar re-se ?
- Skaret int kuit...
- Petttr... ?

Tevel a rank ober Katagorov a ra evit rener ar strollad, rak taget eo gant ur barr paz. Dre lonkañ e vuhez pad poultr ha loustoni al labouradegoù un dra bennak a c'hoari gant skevent ar c'hozh alc'houezer.

- Petra an daonet ? Skaret kuit, penn ar c'hast laer, yourc'h an diaoul, ra vezo da vamm, da vamm-gozh ha te... Hag ac'hañ, hag alesont da Simka gaezh.

- Paouez da zismegañsiñ, emezi ; gant petra am bije herzhed outo ? N' am boa ket em zi pistolennou, na fuzuilhoù evel ho re...

Met n' eo e giz se e tizalbenner Katagorov, un den strizh hag eeun ma 'z eus unan er c'horn-bro-mañ. Hag eñ adarre da c'houlennata, met kaer en deus gwaskañ warni, netra ne glev digant Simka nemet « N' ouzon ket, n' ouzon ket ha n'ouzon ket ».

- Arsa, paotred, e lavar neuze an alc'houezer d' e genseurted, daoust ha pec'hed a vefe divouzellañ ar strakell-mañ.

Den na rann grik hag eñ da ziskouez gant e viz ar c'homiser hanter guzhet gant ur c'hozh sac'h bleud.

- Ha hemañ, piv eo ?
- N' ouzon ket.

Tapet en deus krog e porpant ar serjant ha c'hoarzhin a ra hiniennou o welout ar medalennoù hag an teir barrenn arc'hant war bep skoaz.

- Hag an dra-mañ, da biv 'eo ? Dezhañ ?
- N' ouzon ket.

- Hag ar re votoù-mañ, n' ouzout ket kennebeut all, serc'h a zo ac'hanout ? Gwelet e vo 'ta !

Hag eñ da ziframmañ ar sac'h a-ziwar ar c'horf noazh.

- Oc'ho, emezañ, unan diouto, anat ha splann ! Sellit ouzh kroc'hen e gof, ken gwenn, ken flour ha seiz ! Petra, daoust ha klañv pe vezv-dall e vefe ? N' eus forzh, dialaniñ a ra bepred.

Hag hep treiñ e benn war du ar re all bodet e-tal an nor, astenn a ra Katagorov e vrec'h a-dreñv e gein.

- Paotred, emezañ, damañ din ur benveg bennak. Nann! n' eo ket ur bistolenn a fell din kaout, va hini-me a zo em godell. Amañ e ranker labourat kuit a drouz, ha ne dalv ket ar boan koll un tenn gant ar seurt amprevaned...

18

Bez' eus bremañ en e zorn ur pikol kontell alc'houezer, lakaat a ra beg al lavnenn war c'houzoug egile, ha gant ur strak e tigor ar gorzailhenn evel ur grogen-alc'houez. War an taol e krog Reubin da winkal :

- Bev on !.. bbbbbb !

Met flistrañ a ra dija ar gwad, gwad tev ha du, ha goude, div pe deir c'hlogorenn displiv. Beret eo Simka war al leur-di, ha hi da yudal evel ur vleizez kollet ganti he re vihan.

- Na breñni ket da drap ? eme ar c'hozhiad en ur dorchañ ar gontell ouzh e vragezenn, n' eo ket te, genaouegez, emeon o tiwadañ. Ha bremañ, paotred, ra vo stlepet ar c'hagn-mañ du-hont er stêr, da heul ar paour-kaezh tud a-du ganimp a zo bet boureviet an noz tremenet...

Du-hont, eme an alc'houezer... Du-hont emañ ar c'hi o c'hortoz ; gout'oar petra ha penaos, rak tanavoc'h eo fri ar chas eget n' eo lemm o lagad. Daoust ha ma luc'h eus e wellañ heol staen an diskar-amzer, n' eus forzh, kañvus ha teñval ha mut e van ar beurvan, ar stêr, ar vourc'h, ar parkeier, hag ar vro a-bezh, ha koshoc'h eo ar c'hi louet eget an douar, ha krisoc'h eget ar vilienn galetañ, ha diouzh e grev gludek, sellit outañ ! e tiver dour-erc'h ha fank.

Ar Mesaer – Gwinvered

kontadenn-bobl

Un Aotrou bras a oa o vevañ en ur c'hastell eus ar re gaerañ. Bez' en doa evel ger-stur war e ardamezioù « Nec pluribus impar », da lavarout eo : « N' eus ket kalz a dud barrek da c'hoari ganin ». Kement-se a ziskouez e oa un den c'hwezhet-kaer ha leun a c'hloar. E-touez an traoù a oa en e di e oa ur bagad-gwiñvered doñv ; ha lorc'h a veze en Aotrou o tiskouez e wiñvered hag an troioù ouesk e oant gouest da ober : redek, lammat, treiñ rodoù bihan, kas en-dro milinoù bihan hag all... Setu ma reas embann un deiz bennak penaos neb a vije barrek da vesa dezhañ e gant gwiñver hep na vije kollet hini ebet, en dije e verc'h da zimeziñ...

Dal ma voe klevet ar c'heloù e teredas ur bern paotred yaouank da esa o chañs. Dre ma teuent e vijent lakaet da vesa ar gwiñvered ; met kaer o doa ober eus o gwellañ, kerkent ha ma veze laosket ar gwiñvered da c'hoari dindan ar bodoù er c'hoad e savent er gwez ha ne vezent mui gwelet. An Aotrou hag e verc'h a c'hoarzhe a galon vat o welout ar baotred o chom berr gant o labour mesa-gwiñvered ; ha dezho holl a veze roet o sac'h hag ar gordenn d' e heul, gant an Dimezell...

Ur pennad brav ac'hano e oa ur paotr yaouank o chom. Yannig a oa e anv. Ne oa ket gwall-speredet, met kalon vat en doa hag e lakaas en e benn monet da risklañ e chañs ivez. Hag eñ en bent, un tamm bara gantañ en e visac'h, e bolontez Doue. Hir e oa ar veaj hag hepdale ec'h en em gavas skuizh ar paotr yaouank ; hag eñ da azezañ en disheol war bord ur c'hoad, e-tal ur feunteun. Yannig a drempe en dour fresk, e damm bara sec'h d' hen sikour da vonet d' an traoñ. Edo gant e lein p' en em gavas gantañ ur wrac'h kozh daoubleget he chouk gant an oad : - Ha kontant e vijec'h, mar plij, paotr yaouank, da reiñ din un tamm bara ? Me 'zo erru kozh ha n' em eus den da c'honit bara din...

- Ya laouen ! maeronez, eme Yannig. Tostait amañ hag e roin deoc'h lod eus va bara. Keit hag am bezo un tamm kreun da lakaat dindan va dent, e lodennin anezhañ gant paouroc'h egedon-me...

20

P' he devoe debret he zamm bara, e c'houlennas an hini gozh digant ar paotr yaouank : - Hep bezañ re gurius, emezi, ha kontant e vijec'h da lavarout din o vonet da belec'h emaac'h evel-se hoc'h-unanik ?...

- Ya da ! maeronez. Me 'zo o vonet da gostez Pariz da vesa gwiñvered, pe da esa ober da vihanañ, rak an Aotrou, perc'henn ar gwiñvered-se en deus prometet reiñ e verc'h d' an neb a c'hello mesa ar gwiñvered hep koll hini 'bet anezho...

- Feiz ! va faotrig kaezh, ur gwall vicher ez ez da gaout. Met pa 'z out bet ken mat em c'heñver, setu amañ dit ur c'hwitellerez. Ha pa soni anezhi e teuo an holl wiñvered en-dro dit, ha pa soni teir gwech, e teuo muzik ken brav anezhi ma teuo ar gwiñvered war da lerc'h...

- Bennozh Doue deoc'h, maeronez ! eme Yannig. Ha Doue da reiñ deoc'h buhez hir ha yec'hed... Hag eñ war-raok goude bezañ klenket ervat e c'hwitellerez en e c'hodell...

P' en em gavas e-tal ar c'hastell ez eas da sachañ war ar gordenn a oa e-pign ouzh an nor hag e klevas ur c'hloc'hig o seniñ e-diabarzh ar porzh. Donet a reas ar porzhier raktal da welout piv a oa o seniñ :

- Erru 'oac'h, va faotr, emezañ. Petra a zo evit ho servij ?

- O klask labour an hini emeon ha ma vije ho polontez va goprañ da vihanañ

evit va boued ?

- Feiz ! gortozit ur pennad, rak n' eo ket me eo ar mestr amañ. Me 'zo o vonet da gomz gant an Aotrou. Chomit aze da c'hortoz.

Ur pennadig goude e tistroas hag e lavaras da Yannig : - Lavaret ez eus bet deoc'h monet da gomz gant an Aotrou.

Ha Yannig war e lerc'h er porzh ha d' ur sal gaer lec'h ma oa kadorioù goloet a zanveziou prizius hag an holl draoù o luc'hañ e-barzh :

- Arsa ! eme an Aotrou. Te an hini a zo o klask fred ? Petra a ouzout-te ober evelse ?

- Un tamm a bep seurt, Aotrou, a respontas Yannig.

- Ma ! roet e vo dit un tamm labour vrav da ober ha ma teuez a-benn d' hen ober evel m' eo dleet, e vo roet dit kaerañ gopr a oufes da soñjal : Va merc'h az po da bried.

- A zo mat, eme Yannig, met petra am bezo da ober eta?

- Bez' ez eus amañ kant gwiñver. Ret e vo dit monet d' ar c'hoad ganto d' o mesa eno. Hag evel m' emeon o pauez hel lavaret dit, ma teuez a-benn d' o mesa hep na ziankje hini ebet anezho, neuze e vo va merc'h dit...

21

...Kaset e voe ar gwiñvered da greiz ar c'hoad en ur pezh kaoued da Yannig d' o mesa. Ha digoret e voe an nor warno. Met a-boan ma oa digoret ar gaoued ma lammas ar gwiñvered er-maez hag i da grapat er gwez hag ur momedig goude, ne weled hini ebet anezho neb lec'h ebet. Mevel an Aotrou hag a oa aet da sikour dougen ar gaouedad-wiñvered a zirollas da c'hoarzhin, pa welas ar gwiñvered o vonet da c'hoari koach-koukoug e-touez ar brankoù : « Ar genaoueg-mañ, emezañ outañ e-unan ez erruo gantañ, ar pezh a zo en em gavet gant ar re-all en e raok. Ma soñj gantañ adaptapout ar re-seoù !... » Hag heñ d' ar gêr ha lezel Yannig da zigeriñ e logell (e c'henoù) ha d' en em zibab gant e loened bihan. Met pa voe degouezhet an eur da vonet d' ar gêr, Yannig a dapas e c'hwitellerez en e c'hodell, hag heñ da c'hwitellat ha kerkent setu ar gwiñvered en-dro dezhañ. Ne voe ret lavaret dezho monet er gaoued. En ur serr-lagad e oant en em voutet e-barzh o-unan. Pa voe degaset ar gaouedad en-dro d' ar c'hastell ne vanke loenig ebet. Ma voe souezhet an Aotrou ha muioc'h c'hoazh e verc'h koant : « Me, emezi, droug enni, ne gemerin a briz ebet ur seurt galouper-hentoù. N' houlan stok ebet dioutañ... »

Antronoz vintin e lavaras an Aotrou d' e vevel nevez : « Dec'h e oa deuet brav an traoù ganit, met ret eo din aprouiñ ac'hanout c'hoazh evit bezañ sur ez out gouest e gwirionez da vesa va gwiñvered ». Hag e kasas Yannig d' ur c'hoad all. Met an deiz-se evel an deiz a-raok, e teuas e holl wiñvered gant Yannig d' ar gêr adarre... Merc'h an Aotrou en em gavas nec'het da vat, an taol-mañ : « Ur vezh ez eo din renkout dimeziñ d' ur foeter-hent evel hennezh. Ret e vo kaout ur stumm bennak da vourdañ ar paotr evit ma c'hellin neuze en em zislavaret. » Tri devezh a voe roet da Yannig da ziskouez sklaer hag anat d' an holl e oa barrek-mat da vesa ar gwiñvered...

An deiz war-lerc'h eta ez eas an Dimezell d' ar c'hoad lec'h ma edo Yannig oc'h ober e vicher a vesaer-gwiñvered. « Peogwir, emezi da Yannig, e tleomp dimeziñ an eil d'egile, em eus ar gredenn ne nac'hot ket va goulenn ouzhin-me. C'hoant am eus da ginnig unan eus ar gwiñvered da unan eus va c'hamaradezed, hep gouzout d' am zad na d' am mamm. Gwerzhed din eta unan, mar plij...

- Hola 'vat, Dimezell, deoc'h-c'hwi ez eo ar gwiñvered, kemerit an hini a blij deoc'h ar muiañ. »

Hag hi da dapout unan ha war-raok en ur lavarout outi hec'h-unan : « Ar c'haezhig-mañ en em pavo gwall-nec'het emberr pa erruo dirak va zad ». Pa erruas ar mare da gas al loened d' ar gêr, Yannig a dapas e c'hwitellerez hag heñ da

c'hwitellat ha setu an holl wiñvered o tiskenn eus ar gwez ha d' en em lakaat en-dro dezhañ. An hini a oa etre daouarn an Dimezell, dal ma klevas ar c'hwitellerez o seniñ en em lakaas da zifretañ gwashañ ma c'helle ha pa ne felle ket da homañ diskregiñ, e skrapas kement he daouarn dezhi ma renkas he lezel da vonet.

22

P' en em gavas Yannig dirak an Aotrou edo bepred e gant gwiñver gantañ hep na vankje hini ebet...

An Dimezell he doa c'hwitet war he zaol : « N' out nemet ur c'henaouegez a lavaras he mamm dezhi. Me 'yelo warc'hoazh ha gwelout a ri pegen aes ez eo yennañ Yannig ! »

...Monet a reas eta an deiz war-lerc'h d' ar c'hoad lec'h m' edo Yannig o tiwall e dammoù loenedigoù rouz : -Selaou 'ta, Yann, eme an Itron, ha ne vijes ket kontant da werzhañ din unan bennak eus da wiñvered ? Met n' em eus ket c'hoant e oufe va fried na va merc'h...

- Ba ! eme Yannig, al loened-se a zo deoc'h, Itron, kemerit an hini a blijo deoc'h ar muiañ...

Hag an Itron o tapout unan hag ouzh he lakaat en he c'hrubuilh e prennas ervat warni : « Eno ne fiñvo ket moarvat, » emezi. Met kerkent ha ma klevas ar c'hwitellerez o seniñ ez en em lakaas ar wiñver da zifretañ kement ha da c'hoari kement gant hec'h ivinoù ma rogas he jave d' an Itron ha ma fregas he c'horfenn dezhi ha d' an traoñ war an hent da vonet da gaout Yannig hag e vandenn-loened... Ha p' en em gavas Yannig dirak an Aotrou edo bepred e gant gwiñver gantañ hep na vankje hini ebet...

P' o devoa an Dimezell hag an Itron c'hwitet war o zaol e oa tro an Aotrou da esa bremañ. Monet a reas d' ar c'hoad - sioul ha didrouz hag eno hep gouzout da Yann e tapas ur wiñver da lakaat dindan e roched : « Aze, emezañ e chomo hep mar ebet, hag emberr e vanko ur wiñver da Yannig ha neuze e vo roet e « gouign dezhañ ha peoc'h e vo dioutañ pelloc'h... »

Allaz ! pa sonas ar c'hwitellerez e krogas ar wiñver da skrapat ha da ziskrapat kement ha ken bihan ma voe lakaet kig an Aotrou evel pastez hag en desped dezhañ e renkas an Aotrou dibrennañ e roched buan-ha-buan evit lezel ar wiñver da vonet kuit...

Pa erruas an noz e teuas Yannig d' ar gêr hag eñ e penn e vagad lammerien vihan rouz, en ur c'hwitellat kae-meurbet gant e c'hwitellerez, ken e oa ur yec'hed hen klevout o seniñ. Echu e oa an termen eus e boanioù, rak tri devezh a oa bet roet dezhañ da ziskouez e ampartiz. Hag e c'helle esperout kaout da bried koantañ plac'h a oa er bed d' ar mare-se. Ya ! met an Dimezell a stourme bepred hag a yeas da gaout he zad : « Ne servij ket deoc'h, emezi ; ne fell ket din kaout hennezh da bried. Ret eo klask un digarez bennak da zifoarañ dioutañ, koustet a gousto ».

23

Galvet e voe Yannig da zonet da gaout an Aotrou : « Ma ! eme an Aotrou dezhañ, un den out evelkent, pa 'z out deuet a-benn da ober ar pezh n' en doa graet den ebet c'hoazh ez raok : mesa va c'hant gwiñver hep na ziankje hini ebet... Koulskoude, kent dit kaout va merc'h da zimeziñ e vanko dit ober un dra all c'hoazh : degas din ur sac'had-gwirionezioù.

- Ma ! a respontas Yannig, goulenn a rit diganin ober traoù ivez 'ta. Klask a rin evelkent reiñ ho mennad deoc'h ; met roit din, mar plij, ur c'holc'hed. »

Roet e voe ur c'holc'hed da Yannig hag eñ da vonet da gambr an Dimezell : « N' hoc'h eus ket a soñj, Dimezell, emezañ, ho poa goulennet diganin ur wiñver da reiñ da unan bennak eus ho kamaradezed hep gouzout d' ho tad na d' ho mamm ?

- Eo, emezi.

- Neuze ez eo gwir ? a c'houlennas Yannig diganti.

- Ya sur, emezi, gwir ez eo...

« Ac'hanta, eme Yannig, dre vertuz va c'hwitellerez, deuit em golc'hed. » Ha ploup hag an Dimezell war he fenn er c'holc'hed.

Ha Yannig er-maez gant e c'holc'hedad da gambr an Itron : « N' hoc'h eus ket a soñj, Itron, emezañ, ho poa goulennet diganin ur wiñver da brenañ hep gouzout d' ho pried ?

- Eo, emezi.

- Neuze ez eo gwir ? a c'houlennas Yannig diganti.

- Ya sur, emezi, gwir ez eo...

« Ac'hanta, eme Yannig, dre vertuz va c'hwitellerez, deuit em golc'hed. » Ha ploup hag an Itron war he fenn er c'holc'hed.

Ha Yannig neuze gant e c'holc'hedad da gambr an Aotrou : « N' hoc'h eus ket a soñj, Aotrou, emezañ, e oac'h bet oc'h esa tapout ur wiñver hep gouzout din, p' edon ouzh o mesa er c'hoad ?

- Eo, emezañ.

- Neuze ez eo gwir ? a c'houlennas Yannig digantañ.

- Ya sur, emezañ, gwir ez eo...

« Ac'hanta, eme Yannig, dre vertuz va c'hwitellerez, deuit em golc'hed. » Ha ploup hag an Aotrou war e benn er c'holc'hed. « Ha setu bremañ, eme Yannig, ur sac'had gwirioneziou brasoc'h eget na soñjec'h marteze, Aotrou... Ha setu c'hwi bet ho mennad ganeoc'h... Ha bremañ, c'hwi a chomo ho-tri em gloc'hed, ken n' am bo bet an Dimezell da bried, pe ma n' houl ket dimeziñ ganin, ken n' ho po roet va fouezañs a aour din-me... Gwelout a rit, Aotrou, kaer hoc'h eus bet merkañ war hoc'h ardameziou ez oc'h ker gouest ha meur a hini, an taol-mañ avat, hoc'h eus kavet ur mevel da vestr warnoc'h... »

24

An Aotrou a gomprenas ar gentel hag a c'houlennas digantañ digeriñ ar c'holc'hed hag e roje dezhañ ar pezh a garje... Ha pa ne deurveze ket an Dimezell kemerout Yannig da bried, e voe roet d' ar paotr yaouank ur sac'had-aour da vonet gantañ d' ar gêr. Met n' ankouas kammed e oa bet paour e-unan hag e voe dalc'hmat madelezhus hag aluzenus evit paouroc'h egetañ... Diwezhatoc'h e timezas d' ur plac'h yaouank a feson eus e vro... Eus va familh e oa ar plac'h yaouank-se ha setu perak e ouzon ervat istor Yannig hag ho pedan da grediñ ez eo gwir penn-da-benn...

hervez ur gontadenn klevet e Bulien

(M. KLERG) .

An holl bobloù hag an holl yezhoù o deus ar gwir da vevañ ha n' eo ket d' an Iliz pe d' ar Gouarnamant eo labourat da zistroadañ ur yezh evit lakaat un all en he lec'h. Deskiñ un eil yezh da ur bobl a c'hell bezañ mat, met deskiñ ur yezh nevez da ur bobl evit gellout, dre se, dont a-benn da reiñ lamm d'he hini gozh a zo fall, ha gant Doue ha gant an dud eo milliget ar re her gra.

Yann Vari PERROT.

Feiz ha Breizh, 1936.

LÂM NGÔC SY

gant GOULC'HEN PENNAOD

Piv e oa ? Unan bihan e-touez ar re vihan. Danvez-ofiser e gward-pobl ar Viêt Nam, e penn korn-bro Thô Truong, nepell eus Kê Sat, etre Ha Nôi ha Hai Zuong.

N' em eus ket e anavezet e-pad pell amzer : ur pemzektez bennak e-pad an argadadeg anvet « Begeg ». E garout a raen avat, hag eñ am c'hare ivez, dre ma oamp eus an hevelep gwad.

Ha setu eñ lazhet.

Kustum e vezer, e-pad ar brezelioù, da gomz eus marv an dud evit ar perzh en deus e-keñver pal bras ar brezel.

Emañ arme-pobl ar Viêt Nam o sevel a-enep arme komunist ar Viêt Nam. Hag emañ an arme-pobl o kenlabourat gant ar C'hallaoued. Daoust ha lavaret e vo diwar-benn va c'heneil e oa ur Viêt-Namad gallgar, ur skouer evit an holl ? Pe ur c'henlabourer milliget ? An eil hag egile moarvat.

Ha koulskoude ne oa nag an eil nag egile.

Bez e oa unan eus an dud yaouank-se a gaver en holl vroioù aloubet gant an estren, hag a gasa an estren-se kement ken ez eont betek lakaat o buhez en arvar evit kas anezhañ er-maez. Tud yaouank a anver Gwion Vissault, Leon Jasson, Stern Laizet e Breizh. Tud yaouank a anver Lam Ngôc Sy e Viêt Nam.

Bez e oa ivez unan eus an dud yaouank-se a stourm evit ur stumm kevredigezh, ar werinelouriezh vroadel, a-enep d' ur stumm kevredigezh all, ar voutinelouriezh. Tud yaouank a anver Gwion Vissault, Leon Jasson, Stern Laizet e Breizh. Tud yaouank a anver Lam Ngôc Sy e Viet Nam.

D' an 12 a viz Kerzu e tagas Tiêu Doan 42 ar Viêt Minh kêriadenn Thô Truong. Daou vil den e oant a-enep da gant hanter-kant. T. D. 42 ar Viêt Minh. D' un Europead ne lavar ar gerioù-se netra. Gwellañ bagad ar Viêt Minh en hanternoz ar Viêt Nam eo. Dirazo ne oa nemet un dornadig paotred eus ar gward-pobl, armet gant kozh fuzuilhoù Mauser diandenn. Ha padal, div eurvezh diwezhatoc'h e oa ar Viêt Minh o tec'hout. Pa erruas ar gadervenn-skoazell e welas ar banniel melen e deir roudenn ruz o stlakañ a-us d' ar gêriadenn.

« Mervel evel m' e welis o vervel...
Trec'hour e-mesk an drec'hourien. »

26

Tro-war-dro d' ar gêriadenn e oa korfoù marv ar Viêt Minh, hag armoù-tennata dilezet gant an enebour.

E-barzh ar gêriadenn, korfoù dibennet Lam Ngôc Sy hag e soudarded.

*

**

Ne fell ket din ober ur brezegenn, met dav eo din prederiañ war donkadur ar paotr yaouank-mañ hag a zo bet va c'heneil. Bez' on bet an Europead nemetañ en deus bet fiziañs ennañ, hag evel-se em eus gallet komz didro gantañ.

Ganet e oa bet e Nam Dinh, daou vloaz warn-ugent a zo. Desket en doa mat a-walc'h ar galleg hag ar saozneg e skol an derez kentañ, ha neuze e oa bet da skol ar gward-pobl en Hai Phong. Ul « lenneg » ne oa ket, hogen ur paotr eeun eus ar bobl, ha seul dalvoudusoc'h a se eo ar gentel roet gant e vuhez. Ennañ e oa, evel e pep Viêt-Namad, ur c'hoant deskiñ souezhus ha traoù a bep seurt a lenne. Evel

kalz eus e genvroiz ivez e sone ar banjo en un doare bamus. C'hoant bevañ dieub en doa dreist pep tra all. N' en deus ket kuzhet ouzhin e oa en e soñj reiñ an dorn da gas ar C'hallaoued er-maez eus ar vro kerkent ha ma vefe bet trec'het ar gomunisted. Dibabet en doa, ha war ar poent-se e fell din pouezañ, etre daou riskl : riskl an enebour diavaez ha riskl an enebour diabarzh.

« An enebour diabarzh eo an hini risklusañ, rak n' heller ket sevel ur stad kreñv gant ur preñv e-barzh. Ret eo deomp sevel ar Viêt Nam adalek ar maen kentañ war ar breinadur lezet deomp gant ar C'hallaoued. Ret eo deomp glanaat hor bro. Pa vo glanaet e tec'ho kuit ar C'hallaoued dre n' o devo ket mui tra da ober amañ. »

Eus Breizh e komze din alies hag e brezhoneg e salude ac'hanon bep mintin : « Demat paotr ! Breizh atav ! » Ha goulennoù a bep seurt a rae din diwar-benn hor pobl.

« Neuze emañ o stourm evel ma stourmas paotred Bezenn Yann Vari Perrot. War an hent mat emañ neuze ha ret eo din kenderc'hel gantañ. Dalc'hmat ivez, breur. Dieub e vo hor pobloù, pa fello dezho bezañ, rak breinadur n' eo ken ar gwasker. Ha goude *thais-binhf gaanf phucj-huwng, nhungz ngayf toots depj sez tais-sinh* : e vleunio ar peoc'h hag an devezhioù brav da adc'henel ! »

Marv eo Lâm Ngôc Sy.

Re all a varvo c'hoazh.

Evit ma teuio ar peoc'h hag an devezhioù brav da adc'henel.

SANT PER PLEGAD

gant EVNIG PENN AR C'HOAD

En ur barrez vihan goant a vro Dreger, etre Montroulez ha Plouared, e oa gwechall ur person kozh anvet Per ar Sant. Hogen en iliz e oa ur sant all, Per ivez e anv. Ha ma oa paour an aotrou person, Sant Per, patron ar barrez, a oa paouroc'h c'hoazh. Nemet Per ar Sant a rae muioc'h a wad fall eget Sant Per. Er presbital me lavar deoc'h ne veze ket brav bemdez bezañ karabasenn. Ur pennad zo, Soazig, ur geginerez diwar an dibab koulskoude, ne ouie ken petra aozañ da verenn, na da goan an Aotrou person ne gave ket mui mat netra, nag ar c'hig bevin, nag ar c'hig sall, nag ar sistr, nag ar gwin. « Ret e vo deoc'h, aotrou person, » eme Soazig un deiz, « mont da welout ar medisin. » Krak, war an taol e tegouezh Fañch ar sakrist.

« Sell 'ta Fañch, petra zo nevez ganit ? »

« Feiz, aotrou Person, strafuilhet-bras eo va spered. »

« Dal ! Gant petra va Doue ? Klañv out ? »

« N' on ket tamm ebet. Met eizh deiz zo n' em eus ket kousket un dakenn. »

« A ! Eveldon neuze, mab paour. Ha petra zo 'ta o krafignat da benn dit evel-se ? »

« Sant Per, aotrou Person, eo a gavan... »

« Sant Per ! Salokras Fañch, an hevelep kleñved zo ganimp hon-daou, 'm eus aon. »

« Barrek a-walc'h avat... »

« Hep, hep, Soazig, degasit amañ, mar plij, ur voutailhad sistr kozh ha div werenn. »

Soazig a chome a-sav, digor he genou ganti war nav eur.

« Ya, ya, hastit buan... »

« Ur plac'h jentil hoc'h eus aze, aotrou Person ! »

« Devezhioù, Fañch, evel ar merc'hed all. »

« Setu aze, aotrou Person. »

« Mat. Bennozh Doue, Soazig. Selaouit bremañ : Fañch a chomo da goaniañ ganin. C'hwec'h eur hanter eo. Pa vo seizh eur c'hwi a zegaso dimp un dra bennak a vat da zebriñ, hag ivez da evañ. Me zo oc'h ober yun ha vijil eizh deiz zo ! Ha Fañch ivez, hervez 'soñjan. »

« Feiz, kazimant gwir eo ! D' ho yec'hed. »

28

« Dit ivez ! Bremañ. avat, disac'h da gaoz buan ha buan, ma vo gwelet dre belec'h ez aio Sant Per da Gêrborzh. »

« Marteze ne vo ket ret dezhañ mont betek Plounerin. Ne gav ket deoc'h, aotrou Person, ez eo ur vezh gwelout e petore stad truezus emañ en hon iliz skeudenn Sant Per, patron ar barrez ? Ar paour-kaezh ! E benn a zo prest da gouezhañ ; e zaoulagad a zo debret gant ar preñved ; n' en deus nemet ur vrec'h ha troad ebet ken ; ur gozh vantell a zo gantañ war e choug, pilhaouer ebet na rofe

pemp gwenneg eviti. »

« Setu va brasañ glac'har, Fañch kaezh. Met petra ri ? Un delwenn nevez, kizellet en ur wezenn derv gant ur mestr war ar vicher, a zo prest e Lanuon c'hwec'h miz zo. Siwazh n' em eus ket peadra, na tost, evit echuiñ d' he faeañ. »

« Ac'hanta, n' hoc'h eus nemet sentiñ ouzhin, hag a-raok dimeurzh da noz e vezo Sant Per nevez, sonn en e sav e-lec'h m' emañ an hini kozh oc'h hirvoudiñ. »

« Gant ma ne ri ket marc'had ouzh an diaoul, me ne ran forzh. Dibun da gudenn eta. »

Fañch neuze da zisplegañ e gefridi. A-boan m' en doa echu, Soazig, ar garabasenn, a zered ha ganti peadra da derriñ naon ha sec'hed daou zen bet o palat seizh eur horolaj diouzhtu.

Dizamant o spered, Per ar Sant ha Fañch ar sakrist a reas enor d' ar geustereenn.

« Debr leizh da gof, va den mat ! »

« Setu kazimant tenn war va jiletenn, aotrou Person. »

« Deo gratias ! Mont a ran da echuiñ va breviel. Ken warc'hoazh, Fañch. »

*

**

En deiz war-lerc'h, kerkent ha brallet an eil kloc'had a-raok an oferenn-bred Fañch a 'n em gave en iliz. Tennañ 'ra diwar e sichenn ar paour-kaezh Sant Per ha buan a gas anezhañ da grignol ar sekreteri. Kemer a ra avat mantell druilhennek ha kalabousenn ar sant kozh hag e wisk anezho ; neuze e sav war ar sichenn. Erru oa poent ! Rak setu Job ar marichal e pign ouzh ar c'hloc'h bras hag an dud krog da zont e-barzh an iliz.

Mont a ra brav ar c'hirie-eleison, ar gloria ; ha, yao, an Aotrou Person er gador-brezeg, a-dal, eeun dirak Sant Per.

Ne badas ket pell ar sarmon. Evit klozañ avat mouezh ar beleg a greñva : « Sellit, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, sellit e peseurt stad mantrus, fromus, mezhus, emañ aze a-us deoc'h Sant Per, patron Plegad. Ha disul emañ pardon Per, Porzhier ar Baradoz. Rannet eo va c'halon ! Daoust ha chom a raio skornet hoc'h hini ? Evidon, ma vijen-me Sant Per, ne chomfen ket ur vunutenn ouzhpenn en iliz- mañ ! »

29

Ploum, ul lamm 'kreiz an iliz ha Sant Per kuit d' ar pevar lamm ruz. A-vec'h m' o devoa un toullad paotred bet amzer da welout un dra bennak ; ar merc'hed, int, bodet izeloc'h eget ar gador-brezeg, o doa gwelet Sant Per o skarzhañ evel ul luc'hedenn. Div pe deir maouez a gouezhas semplet. Fañch a guzhas buan e druilhòu en un torkad beuz e korn ar vered ha da redek ivez da heul an dud all. « P' eus ket gwelet dre belec'h eo aet Sant Per, Fañch ? » - « Ma Doue, nann ! D' ar Ponton, marteze ! » - « Setu aze un taol avat », eme Berin. Hag an teodoù en-dro pep hini o tegas e dezenn. An Aotrou Person a gave hir an amzer en e unan. Met Fañch, adalek ma kavas tu, a zistroas d' an iliz ; ha bec'h d' ar c'hloc'h bras !

« Deuet Sant Per en-dro, moarvat ; deomp da welet ! » Setu leun-kouch an iliz. « Credo in unum Deum ! » e tistag an aotrou Person war don ar c'hrampouezh gwinizh. Biskoazh kreda ken entanet ne dregernas dindan bolzioù iliz Plegad. Ken ma krene ar gwer. Fañch ar, sakrist ne chomas ket da dortañ : ar plad bras en e zorn, an dour o tiverañ en e gerc'henn, teir gwech e rankas dont da zegas e gest d' ar sekreteri. Paour ha pinvidik, bihan ha bras, pep hini a roe e brof, kalz pe nebeut.

« Ite missa est ! » eme an aotrou Person.

« Graet an taol ! » eme Fañch.

Ha setu perak ha penaos a-benn ar sul war-lerc'h Plegadiz o doa ur Sant Per
nevez, ken brudet ha Doue Pleuveur.

Hogen abaoe den ebet n' en deus bet keloù diouzh ar Sant Per kozh.

BREIZH HA MARVAILHOU ARZHUR

gant ROPARZ HEMON

ARTHURIAN TRADITION AND CHRETIEN DE TROYES, gant Roger Sherman Loomis, XIV/504 a bajennoù, Columbia University Press, New York, 1949 ; eil mouladur, 1952.

R. S. Loomis a zo anavezet a bell 'zo evel unan eus gwellañ studiourien Danvez Breizh e lennegezh ar Grennamzer. Brudet eo abaoe embannidigezh e levr Celtic Myth and Arthurian Romance e 1927.

E gredennoù diwar-benn orin ar marvailhoù arzhuriek a zo dastumet e kentskrid e levr nevez (p. IX) :

1. An doueedoniezh keltiek a zo pennorin an hengoun arzhuriek.
2. An hengoun-se, o tont eus Iwerzhon, Kembre ha Kernev-Veur, a voe kaset gant danevellerien a vicher d' ar Vretoned, ha gant ar re-mañ d' ar C'hallaoued ha d' an Normaned-ha-Saozon.
3. An anvioù-tud arzhuriek a zo peurliesañ deveret eus ar c'hembraeg, hag i alies distreset farsus o tremen dre yezhoù estren ha dre bluenn skriverien dievezh pe nec'het.

N' eus ket ezhomm bezañ gouiziek war ar gudenn arzhuriek evit merzout ez a ar c'hredennoù-mañ a-enep kredennoù an darn vuiañ eus ar romanegourien ; klotañ a reont madik a-walc'h gant kredennoù an darn vuiañ eus ar geltiegourien. Ar geltiegourien o deus lavaret hag a lavar e tarzhe marvailhoù Arzhur, dre vras, diouzh henvejennoù piaouet e derou ar Grennamzer gant pobloù o komz yezhoù keltiek. Ar romanegourien a zo bet techet da enkañ muiañ ma c'hellent tachenn an elfennoù keltiek er marvailhoù-se. Loomis, avat, war-lerc'h Zimmer, a lavar un dra ouzhpenn, un dra a bouez bras evidomp : Bretoned Breizh-Vihan a zo bet pennañ skignerien ar marvailhoù.

31

E rann gentañ e levr e klask spisañ penaos e voe ledet mojennoù Arzhur hag e varc'heien dre ar bed kristen e-doug an 12-vet kantved. Ne nac'h ket ez eo bet Chrétien de Troyes an hini kentañ da ober e vad, e romantoù hir savet e gwerzennoù gallek, eus brud ar mojennoù-se. Hogen Chrétien n' en deus tamm ebet ijinnet ar marvailhoù a zispleg. Se a lavar e-unan. En amzer ma skrive e oa Arzhur anavezet mat en Europa, hag e Breizh-Vihan peurgetket, mar kreder testeni Alanus de Insulis :

« It da rouantelezh Arvorig, anvet ivez Breizh-Vihan, hag embannit war ar marc'hallac'hioù hag er c'hêriadennoù ez eo marvet Arzhur ar Brezhon e-giz ma varvas tud all, ha prouet e vo deoc'h gant an darvoudoù o-unan pegen gwir eo diougan Merlin, e vezo douetus gourfenn Arzhur. Bec'h ho pezo o tec'hout dic'hloaz, hep bezañ sammet a vallozhioù pe flastret gant ar vein a vo strinket ouzhoc'h gant ho selaouerien. » (P. 9).

A-raok amzer Chrétien, hag ivez en amzer ma skrive, e kaver testenioù all a-berzh Breizhveuriz, o tiskouez e veze danevellet marvailhoù Arzhur gant Bretoned Arvorig. Ar re bennañ anezho a zo William of Malmesbury ha Marie de France. Ouzhpenn se, eme Loomis : « ar prouennoù-diabarzh diwar ar romantoù gallek, lec'hiadur yaouankiz ha bloavezhioù diwezhañ Tristan e Breizh, lakadur koad Brekelien en Yvain gant Chrétien, an anvioù brezhonek a dud hag a lec'hioù a-skign en anvadurezh arzhuriek... a ziskouez, a-gevret gant an testenioù a Vreizh-Veur, e oa brudet gant Breizhiz en o bro hengoun marvailhoù Arzhur ». (p. 18) .

Ar sebezusañ prouenn a zeu eus an Itali : ar rizenn-volz a-zioc'h dor-dal hanternoz iliz-veur Modena, gant kizelladurioù graet etre 1100 ha 1110, o skeudenniñ arroudoù eus mojenn Arzhur, gant anvioù engravet : Artus de Bretania, Isdernus, Che, Galvagin(us), Galvariun, Burmaltus, Mardoc, Winlogee ; anvioù hag a zoug, hervez Loomis, levezon ar brezhoneg hag ar galleg. En Itali ivez, en 12-vet

kantved, e kaver tud anvet Artusius ha Walwanus.

Nebeutoc'h anavezet eo ar marelladur-meinigoù en iliz-veur Otranto, graet e 1165, o tiskouez un den, ur vazh-roue en e zorn, a-c'haoliad war ur bouc'h, gant an enskrivadur « Rex Arturus ».

Loomis a veneg ar skridoù savet e Kembre a-raok amzer Chrétien, enno pennadoù eus mojennoù Arzhur, evel *Kulhwch hag Olwen*. Kembre, emezañ, a zo lec'h-orin ar mojennoù arzhuriek. Diarbenn krenn a ra, avat, kredenn un darn vras eus an arzhuroniourien, e vije bet tremenet ar mojennoù-se rag-eeun eus Kembre da Vro-Saoz :

32

« N' eus hogos netra da anataat o dije Kembreiz roet o marvailhoù diwar-benn Arzhur hag e varc'heien rag-eeun d' o amezeien a yezh saoznek pe c'hallek a-dreuz an harzoù. Sklaer eo, diwar an enebiezh padus etre ar Saozon ha Brezhoned Breizh-Veur, n' o dije ket ar re-mañ treuskaset a-youl mojennoù o kanmeuliñ haroz o gouenn, ha sklaeroc'h c'hoazh n' o dije ket ar re all o degemeret a-c'hrad-vat. Bez' e oa ivez skoilhoù ar yezh o virout ouzh Kembreiz da zaremprediñ Saozon-ha-Normaned. Ar martezead a laka e vije bet anavezet ar mojennoù keltiek gant ar C'hallaoued dre hanterouriezh ar Saozon-ha-Normaned a dle bezañ distaolet. Kudenn an treuskaserezh a gaver an diskoulm anezhi gant ar Vretoned. Ar re-mañ a oa divyezhek, a oa kerent da Gembreiz ha da Gerneveuriz, a zalc'he feal eñvor Arzhur, o deveze darempredoù tost, politikel ha sevenadurel, gant o amezeien a yezh c'hallek, hag ouzhpenn kaout perzh en Aloubadeg Bro-Saoz gant an Normaned, o doa gounezet domanioù ec'hon eno. Arabat dimp souezhiñ eta mar kavomp roud ar Vretoned ne vern pegoulz, pe vern pelec'h e veneger skignerien Danvez Breizh eus Kembre ha Kernev-Veur, gant un direizhadenn hepken. Hag an direizhadenn-se, Bleheris, a seblant bezañ implijet hengounioù a Vreizh-Vihan, hag a gonte hep mar e varvailhoù entanus e galleg... O zachenn (tachenn ar Vretoned) en em lede eus mervent Kembre betek kompezenn Lombardia, hag e 1170 ez ae kalz pelloc'h. » (p. 21).

Pouezañ a ra Loomis war un dra : marvailhoù Arzhur a voe kemmet ha kaeraet, gant ar Vretoned. Ne voent ket krouet ganto. Ne voent ket degaset ganto da Vreizh en ermaeziadeg veur ar 6-vet hag ar 7-vet kantved. Deuet int e Breizh war-dro ar bloaz 1000.

Ar Vretoned-se a skignas marvailhoù Arzhur a ranke bezañ danevellerien a vicher. E brezhoneg ar Grennamzer e oa ul lennegezh e gwerzennoù, sonioù, darn anezho diwar-benn Arzhur, al « *lais* » brudet, meneget gant Marie de France, Giraldus Cambrensis (« *fabulosi Britones et eorum cantores* ») ha re all. An danevellerien koulskoude, a zo abeg da grediñ, a zisplege o danevelloù e yezh-plaen (« *sanz rimer* », e-giz ma lavar Wauchier) hag e galleg. Darn eus an danevelloù a oa bet lakaet dre skrid a-raok amzer Chrétien, daoust na chom dornskrid eus nikun anezho : pezh n' eo ket iskis, pa soñjer ne chom dornskrid ebet kennebeut eus oberoù Chrétien ha Marie, eus ar re skrivet en 12-vet kantved.

33

Imbourc'hadennoù resis war darvoudoù peder eus oberoù Chrétien, Erec, Le Chevalier de la Charette, Yvain ha Le Conte del Graal, a ya d' ober korf levr Loomis (p. 61-459) . En holl, 74 a ranndanevelloù a zo studiet, pizhskejet, troet-distroet, keñveriet gant marvailhoù eus lennegezh ar Grennamzer e meur a vro ha gant marvailhoù-pobl dastumet en hon deizioù-ni : ul labour hervez giz gouizieien an Alamagn hag ar Stadoù-Unanet.

Petra soñjal en diwezh ?

Derc'hel a ra en nebeut frazennoù-mañ : « ...un darn vras eus ar peder barzhoneg... a zo keltiek a orin. Diouzh un tu, ar pep muiañ eus an anvioù-tud a zo keltiek ; kalz anezho anvioù kembraek kemmet gant ar Vretoned ; un nebeut a zo brezhonek ; lod a heulier o roud, dre Gembre, betek Iwerzhon. Evit pezh a sell stern an danevell, Erec a zo kenaozet dre vras gant mojennoù kembreat a-zivout ar boudiged Modron ha Rhiannon, Mabon mab Modron, ar c'horrige-roue Beli hag e vreur Bran. Framm ar Charette eo marvailhoù kembreat skraperezh Gwenhwyvar gant Melwas, kinklet gant arroudoù diouzh skraperezh Creiddylat gant Gwynn hag isdarvoudoù diouzh danevell-veur Cuchulainn ha mojenn Modron. Yvain a zo ar rann gentañ

anezhañ ur c'hemmesk stummoù disheñvel eus amproù kadourien Ulad gant Curoi, hag un hengoun breizhat diwar-benn Barenton ; an eil rann ur c'hendeuz eus Gwele-klañvour Cuchulainn gant mojennoù Modron evel boudig-an-dour. Le Conte del Graal a zo ur c'henframmdur gwall luziet, ennañ tammoù diouzh bugaleerezh Cuchulainn, istor ganidigezh Finn, e zial, e gejadenn gant e eontr, dezrevell gweladenn Conn e palez Lug ha pennrouelezh Erin, hengounioù kembreat diwar-benn ar roue gloazet Bran hag e vreur Beli, ur C'hastell an Itronezed war ar stêr Havren, kejadenoù ha krogadoù gant an hemolc'her balc'h Arawn. » (p. 467).

Taolomp evezh ouzh ar frazenn diwar-benn an anvioù-tud. E dibenn al levr (p. 477-492) ez eus ur geriadurig, ennañ anvioù-tud ar peder oberenn studiet, ha notennoù a-zivout pep hini anezho. Unan eus diaesañ kudennoù Danvez Breizh eo kudenn an anvioù tud ha lec'hioù ; ken distreset int bet gant faltazi an danevellerien ha skriverien an dornskridoù ma ne c'heller ket c' diskleriañ hervez reolennoù strizh.

Un dra all a zo. Loomis, evit e holl ouiziegezh, n' eo ket keltiegour. Pa glask tostaat anvioù-tud Chrétien ouzh anvioù brezhonek, kembraek pe iwerzhonek, e rank en em harpañ war labourioù yezhoniezh keltiek hep bezañ gouest da varn pe ez int talvoudus pe get.

34

Kemeromp an anvioù brezhonek pe levezonet gant ar brezhoneg. Da heul Ferdinand Lot e lavar Loomis ez eo Erec distresadur an anv brezhonek Guerec, pezh a c'hellomp krediñ. Da heul Zimmer, e lavar ez eo *Graillamer* an hevelep anv hag hini hor roue Gralon Veur, pezh a c'hellomp krediñ ivez. Martezeadoù all Loomis a gavan arvarus. Darn a zo gwirheñvel, avat, evel Avallon tostaat ouzh an anv brezhonek-krenn *Avallon*. Darn a zo hoalus, evel *Winlogee*, gwreg Arzhur e skeudennoù Modena, tostaat ouzh ar brezhoneg *Winlowen* pe Wenlowen (pe Uenlouen, Gwenlaouen, - daoust ma 'z eus ivez an anv-maouez Guenlodo e brezhoneg-krenn).

Ul levr evel hemañ a ra dimp prederiañ war ur gudenn all c'hoazh : kudenn hol lennegezh kollet.

Bez' e oa ul lennegezh vrezhonek er Grennamzer. Anez, ne vije ket meneget ken alies gant skrivagnerien gembreat, saoz ha gall ar mare-se. Al levr brezhonek en dije talvezet da orin oberenn veur Jafrez Menoe n' eus ket anezhañ, a greder. Jafrez, avat, n' en dije ket komzet eus ul levr brezhonek ma ne vije bet e brezhoneg levr ebet.

Ha kollet eo a-grenn al lennegezh-se ?

N' eo ket. Setu amañ ur roll bihan eus oberoù damsaveteet e stumm addisplegadurioù e yezhoù all :

1. Darn eus « *lais* » Marie de France, e galleg-krenn.
2. *Danevell ar Franklin*, gant Chaucer, e saozneg-krenn (bet troet ganin e brezhoneg e Gwalarn, 6 ha 7).
3. Sir Gowther, e saozneg-krenn.
4. Sir Orfeo, e saozneg-krenn.
5. Teir danevell dastumet gant Walter Map ha displeget gantañ e latin en e levr *De Nugis*, war-dro ar bloaz 1181.

Ar roll-mañ a c'hellfe hep mar bezañ kresket. Ret e vefe lakaat ivez an oberoù levezonet tamm pe damm gant al lennegezh vrezhonek. Adkavout seurt roudoù eus hon amzer dremenet a zo hor c'hefridi-ni. O pleustriñ war Danvez Breizh, ar ouizieien a Vro-C'hall o deus a-heligenañ sammet ha berniet dismegañs war hor pobl. Hervezo al lennegezh vrezhonek kozh n' eus ket bet anezhi. A zo gwashoc'h, kredet int bet re aes gant ar Vretoned. Labour Loomis, savet gant un Amerikan n' en deus ouzh Breizh na karantez na kasoni, gant ur gouizieg na glask nemet dizoleiñ ar wirionez, a dle digeriñ hon daoulagad ha reiñ c'hoant dimp da c'houzout muioc'h c'hoazh diwar-benn ar perzh bras kemeret gant hon tadoù e stummidigezh marvailhoù Arzhur ha lennegezh europat ar Grennamzer.

DIR-NA-DOR EN DEUS 80 VLOAZ

Piv ac'hanoc'h a gredfe em eus damzigoret dor al Lennegezh vrezhonek - didrouz ha disked, gwir eo - 25 bloaz 'zo dija ? Gant « Buhez souezhus Per Keriolet » e oa, en un doare ken souezhus all. Ne ouien, d' ar mare-se, ger brezhonek ebet, nemet deizioù ar sizhun. Pezh na vire ket ouzhin a skrivañ - e galleg, siwazh ! - pennadoù entanet diwar-benn Breizh hag he zud veur. Setu perak e teuas soñj da Rener « Breiz » gwiskañ en brezhoneg unan pe zaou anezhe, d' o embann en e gelaouenn. Izelek evel boaz, ne venegas ket zoken e oa un dra troet gantañ. Reiñ a reas din un anv barzhel a-grenn « Eostig ar Sal », ha mat ar jeu !

Ar paour-kaezh evnig-se a zo maro yaouank flamm, met piv 'oar pegement en deus pouezet war va flanedenn ?

Perak kontañ ar munudoù-se deoc'h nemet evit displegañ penaos am eus toullet darempredoù gant an denig treut, e vlev rodellet, ken didrouz ha ma oa strakus e lezano : Dir-na-Dor.

Hag ivez dre ma vo 80 bloaz d' an 9 a viz C'hwevrer, eo bet ganet Erwan ar Moal, 'kichen Gwengamp, e parrez Koadou, lec'h m' emañ o chom c'hoazh e Ker Mab ar Rouz.

Skrivagner brezhonek brudet en e amzer, savet en deus Pipi Gonto (1902), ul levr marvailhoù, n' eus ket gwelloc'h egetañ evit studiañ yezh korn-bro Gwengamp. Ouzhpenn-se fentigelloù evel Paotr e vragoù berr (1909), meur a bezh c'hoari poblek, levrioù a zevosion : Buhez an Den eürus Charlez Bleiz (1912), Buhez ar Sent, en yezh Treger, h.a., hep kontañ ur bern pennadoù embannet gant « Kroaz ar Vretoned » ha « Breiz ». Renet en deus e-pad bloavezhioù an div gelaouenn-se, en ur foraniñ evito e wenneion, e amzer hag e yec'hed.

Ne vez ket gwelet na klevet ken. Poaniet ha gouzañvet en deus betek re en e vuhez evit karout sevel c'hoazh e vouezh. Nemet emañ o paouez resev digantañ, e-giz Kalanna, un toulladig gwerzennoù melkonius. Klemm un den kozh en deus gwelet mont kuit, hini ha hini, ar re a gare. Klemm a dro, avat, da bedenn :

« Eus bered ma c'halon, ha hi leun a vezioù,
Re kerent, mignoned, kenvroiz aet e-biou,
Me a gas gant truez, an dour em daoulagad,
Evite da Zoue, pedenn an dilerc'hiad. »

36

80e bloavezh Dir-na-Dor a ro dimp an tu da lavarout dezhañ hon doujañs hag hon anaoudegezh, evit kement en deus graet evit ar yezh hag ar Vro.

BENEAD.

Pe da vare e splannaio an deiz a c'halvomp pell zo, deiz an emglev gwirion etre Goeloiz, Tregeriz, Leoniz, Kerneviz, Gwenediz, pa vo un doare rik ha spis, un doare hepken evit an holl Vretoned da skrivañ, da lenn, da gomz, da brezeg, da ganañ ar brezhoneg ? Breizh-Izel n' eo ket bras a-walc'h, nag he bugale stank a-walc'h dre ar bed, evit kaout daou pe dri stumm disheñvel da reizhañ hor yezh kozh.

Ao. TREHIOU,
Eskob Gwened, Gwengolo 1930,

HA LENNET HOC'H EUS...

...En levr galleg Henri Queffelec « Un Homme d'Ouessant », pennad I, ar frazenn-mañ : « L'homme ne doit pas employer des mots que ses parents ne puissent comprendre ». Pezh a zo en em varn en un doare kriz met reizh-meurbet !

...Un enklask diwar-benn kenimplij ar mekanikoù labour-douar embannet gant Chombart de Lauwe en un niverenn ispisial eus « Bulletin de la Société Française d'Economie Rurale », Here 1952. Strolladoù kenimplij-mekanikoù a zo niverus-kenañ e Breizh. 341 evit Aodoù an Hanternoz, 160 evit Penn ar Bed. Pezh a zo talvoudus da verkañ eo kement-mañ : ar gonid hollek en arc'hant (o kontañ an traoù gwerzhet hag an traoù implijet gant an tiegezh) a zo brasoc'h e mereurioù bihan eus Breizh eget en atantoù bras tro-war-dro Pariz. 91.300 lur e-keñver 87.516. Daoust hag e labourfe ar Vretoned muioc'h eget ar C'hallaoued ?

...Er gelaouenn « Foyer Rural » (18-12-53) ur pennad diwar-benn un doare-nevez d' ober framm an toennoù, ijinet gant un den eus Naoned, Stefan Marzhin. Heñvel ouzh pezh a reer evit eskell ar c'hirri-nij, ar framm lies-kelligel-se (multi-cellulaire), a zo skañv, aes, ha ne goust ket kalz. Anvet eo bet « Kazeg-Koad ».

...E « Foyer Rural » ivez (11 ha 25-12-53), pennadoù talvoudus : « Emañ Breizh o kavout brud ha pinvidigezh gant he had avaloù-douar » ha « Breizh, e penn an eost gall, a zo he hadoù koulz ha re ar broioù estren ». Kregiñ a ra an Ao. A. Bougeard o tegas goapaus frazenn al levrioù-douaroniezh : « Breizh a zo ur vro baour... » Dre forzh labourat ha stourm, e ro bremañ Penn ar Bed hepken an hanter eus had patatez Bro-C'hall a-bezh, 80 % eus ar c'hlas « Dibab », 70 % eus ar c'hlas A. Ken mat ha had an Izelvroioù eo deut da vezañ hini Breizh, ha n' eo ket echu...

...E « Soir Bruxelles » hag er « Figaro » (30-12-53), pezh a lavare n' eus ket pell an Ao. Harmel, ministr an Deskadurezh e Bro-Velgia : « Le souci d'un langage correct est un signe de la distinction d'un peuple, un élément de civilisation, une des formes les plus importantes de la promotion culturelle ». Ken gwir-Bater eo, ma karfen sankañ don ar frazenn-se e penn brezhonegerion 'zo !

38

Ha gouzout a rit ?

...Ez eus 20,6 benveg-radio dre gant den e Bro-C'hall a-bezh. Hogen n' eus nemet 10 er Mor Bihan hag Aodoù an Hanternoz, 11,4 e Penn ar Bed. Perak ? Re bell ar c'hreizennoù-kas ha dre-se fall ar selaou. Un niver bras a diez n' o deus ket tredan. Lakit ouzhpenn distervezh an abadennoù, hag al lodennig truezus graet da yezh, lennegezh, sonerezh ha traoù ar Vro.

...Ez eus un digresk souezhus e pezh a sell an duberkulozenn e Breizh. Er c'hontrol, e verker araokadennoù skrijus ar c'hriñg bev. Paneve al Loar Izelañ, emañ hon holl departamantoù a-us da niver-etre e Bro-C'hall. An alkoolegezh a zo, sur mat, unan eus abegoù pennañ ar c'hleñved euzhus-se. Petra 'vo graet a-enep an droug a ziskar didruez yec'hed hag ene hor Bro ?

BENEAD.

Klevet e vez c'hoazh tud berrwelet o youc'hal war ar re a c'houlenn ma c'hello Breizh en em ren adarre hec'h-unan, evel m' he grae betek bremañ ez eus seizh ugent vloaz ; war o meno ez int tud a zoare ; m' o laka kentoc'h, avat, e kostezenn an dud a zizurzh, rak ne welan ket a zispac'herien gwashoc'h eget ar re a vres gwirioù ur bobl hag an dud lezober a ya a-du ganto, gant aon rak o skeud. Yann Vari PERROT.
Feiz ha Breizh, 1937.

AR GOUEZELEG

NOTENNOU DIWAR-BENN AR GOUEZELEG HAG AR YEZHOU ALL E BRO-SKOS

gant Per DENEZ

(Kendalc'h)

1918-1950

Diouzhtu e voe tennet gounid eus an aotre. Prim-ha-prim e voe embannet, dindan renerezh ar c'helenner Watson, c'hwec'h levr-skol, hag e 1920, hervez danevell an Ensellerien, e oa kelennet ar gouezeleg e 36 eus skolioù kontelezh Earraghaidheal (1.200 diskibl), e 70 eus skolioù kontelezh Inbhirnis (3.120 diskibl) hag e 24 eus skolioù kontelezh Ros agus Cromba (500 diskibl). E 1923 e oa kenteliet ar gouezeleg e 73 eus skolioù kontelezh Earraghaidheal, en hevelep bloaz e oa kroget d' ober kentelioù e Skol-Vistri Glaschu (Glasgow Training College), hag e 1920 e veze prientet bugale d' an arnodenn ouezelek evit al Leaving Certificate e 5 skol a eil derez. Met kement-se ne oa ket kalz. E 1925 e klemme ar c'helenner Watson dre « na veze ket graet kement a labour ha ma tlefe bezañ graet » ha dre ma « oa dilezet en un doare mezhus kelennadurezh ar gouezeleg e kornioù e-lec'h na veze komzet nemet gouezeleg pe dost ».

Dek vloaz diwezhatoc'h e oa anvet gant An Comunn Gaidhealach ur Poellgor-studi. En em vodañ a rae ar poellgor evit ar wech kentañ d' an 9 a viz Meurzh ha bloaz war-lerc'h (30 a viz Meurzh 1936) e rae ar c'helenner Watson un diverrañ eus an enklask : « Labour mat-tre a vez graet evit al Leaving Certificate e (pemp skol a eil derez) (24) ... Evit ar skolioù kentañ, e vez desket gouezeleg e 284 anezho : 14 e Cataibh, 68 e Ros agus Cromba (39 anezho en enezenn Leodhas), 121 e kontelezh Inbhirnis (100 anezho en inizi) ha 79 e kontelezh Earraghaidheal (38 anezho en inizi) ». Etre holl e oa 7.129 bugel o studiañ ar gouezeleg, 5.743 en inizi ha 1.386 hepken war an douar bras. Un doare c'hwitadenn e oa bet 'ta kelennadurezh ar gouezeleg. Meur a oa abeg a oa d' ar c'hwitadenn-se : ne veze ket an ensellerien a-du gant ar yezh ; ne oa ket bras a-walc'h he lec'h er studioù hag en arnodennoù ; desket e veze d' ar ouezelegerien dre ar saozneg. An abeg pennañ avat, a oa, hag a chom, kabestridigezh politikel Alba.

40

Padet ez eus bet abaoe da genteliañ ar gouezeleg velse-velse, hep nemeur a wellaat. E 1947, hervez danevell ar Poellgor-Kuzuliañ evit an Deskadurezh e Bro-Skos (Advisory Council on Education in Scotland) ne oa ket c'hoazh kelennerien a-walc'h, na levrioù a-walc'h ivez, ha nac'het e oa bet lakaat ar gouezeleg, hervez goulenn An Comunn, « war an hevelep pazenn ar gant yezhoù estren all » (ar gerioù « yezhoù estren all » a zo fentus meurbet). D' ar 4 a viz Kerzu 1948 avat, da geñver bodadeg vras an Deskadurezh evit an Gaidhealtachd, e oa graet an emglev-mañ etre dileuridi an Educational Institute of Scotland ha renerien an Deskadurezh evit ar Gouezelegva : 1. desket e vefe ar gouezeleg e-pad div eurvezh hanter pep sizhun ; 2. ne baouezfe ket ar vugale a studiañ ar gouezeleg e-pad an holl amzer a dremenfent er skolioù, pe a gentañ, pe a eil derez ; 3. bewech ma vefe tu e vefe klasket ober skol e gouezeleg (ar c'hentelioù war an Aviel, da skouer, a vefe graet atav e gouezeleg) ; 4. ar vugale o kuitaat ar skol da bemzek vloaz a rankfe bezañ gouest, da nebeutañ, da lenn o yezh aes-tre ha da skrivañ anezhi reizh-a-walc'h, h. a. E 1941 en doa klemmet ar c'helenner Watson dre na oa ket kenteliet ar gouezeleg evel ma oa ret : « ar skolidi, » en doa lavaret, « a zo gwan-tre, zoken war ar pezh a zo ar pouezusañ-holl... a-wechoù int dizesk a-grenn pe ez eus bet desket dezho an traoù a-dreuz ». Kuzulioù 1948 d' ar gelennerien a zo ur c'hammedig en a-raok.

Skolioù a eil derez

Da gompren penaos e vez kenteliet ar gouezeleg er skolioù a eil derez, ha

petra eo gouest ar vugale d' ober pa guitaont ar skol, n' eus tra gwelloc'h d' ober eget teurel ur sell war poelladennoù ar Senior Leaving Certificate (25). Setu amañ roll ar poelladennoù roet evit al Lower hag an Higher Grade e 1947 : Lower Grade : 19 linenn komz-plaen ha 24 gwerzenn da dreiñ e saozneg, 13 linenn saozneg da dreiñ e gouezeleg, un danevellig 20 linenn da nebeutañ e gouezeleg, da ober e div eurvezh hanter ; Higher Grade : 21 linenn komz-plaen ha 32 werzenn da dreiñ e saozneg, 21 linenn komz-plaen en iwerzhoneg da lakaat e gouezeleg Bro-Skos pe da dreiñ e saozneg, da ober e div eurvezh ; 15 linenn da skrivañ diwar selaou, div bajenn da sevel war un danvez kinniget, 15 linenn saozneg da dreiñ e gouezeleg, un nebeut goulennoù war istor ha lennegezh Bro-Skos da respont, da ober e div eurvezh ha 45 munud.

Levrioù hag all

41

Evit ar skolioù kentañ ez eus kalzik a levrioù. N' int ket re ger. Evit ar skolioù a eil derez ez eus yezhadur MacBain ha levrioù « pennadoù dibabet », niverus a-walc'h. Er c'hlasoù uhelañ e studier dastumadennoù ar c'helenner Watson, ar *Bardachd* hag ar *Rosg Gaidhlig*, a zo enno skouerioù tennet eus al lennegezh ouezelek-skosat.

Un nebeut yalc'hadoù a vez roet d' ar vugale pe d' ar skolaerien a labour war ar gouezeleg, yalc'hadoù 15 lur sterling roet gant an Highlands and Islands Education Trust, hag un nebeut yalc'hadoù all, 295 lur sterling anezho-holl, roet gant an Donald MacKay Fund.

An dazoned

N' heller ket lavarout e vez graet kalz labour er skolioù evit ar gouezeleg. Goulennoù pouezusañ an Comunn n' int ket bet selaouet c'hoazh, ha n' eus nemeto koulskoude a c'hellfe reiñ d' ar gouezeleg ur chañs bihan da vevañ. Setu-int amañ :

1. Ober eus ar gouezeleg benveg an deskadurezh.
2. Aliañ an holl vugale er gouezelegva, zoken ar re na ouzont ket ar yezh, da studiañ ar gouezeleg.
3. Ober klasoù gouezelek en holl skolioù a eil derez e Bro-Skos a-bezh (26).

Dre vras e vez bremañ Skosiz a-du gant ar gouezeleg er skol. En hañv 1948 ez eus bet graet, gant ar studieren war an eneonezh e Skol-Veur Dun-Eidin, un enklask diwar-benn ar pezh a soñj ar bobl skosat eus kudenn ar yezh. Goulennet e oa gant an dud lavarout hag a-du gant ar frazenn-mañ e oant, pe a-enep « Un dra vat eo gwelout ar gouezeleg o vervel » ; 24 dre gant a lavararas e oant a-du, 56,6 dre gant e oant a-enep, 24,4 e oant neptu. Ret eo lavarout ouzhpenn na oa nemet 4,6 dre gant eus an dud goulennataet o chom er gouezelegva : pezh a ziskouez emañ an darn vrasañ eus Skosiz an Izeldirioù a-du gant ar yezh ivez, daoust d' ar pezh a glask tud zo lakaat da grediñ.

(24) Ne dalv ket ar boan reiñ o anvioù amañ.

(25) Arnodenn gevatal d' ar vachelouriezh. Evit pep danvez, nemet ar saozneg, e c'heller dibab etre daou rumm deverioù, un aesoc'h (Lower Grade), un diaesoc'h (Higher Grade). Evit kaout ar Certificate e ranker gounit daou Higher ha daou Lower. Evit bezañ degemeret en ur Skol-Veur ez eo ret bezañ gounezet daou Higher ha tri Lower.

(26) D' an 29 a viz Genver 1943 e lakae An Comunn he goulennoù adarre dirak an Advisory Council : diwar-se e oa kroget d' ober kentelioù gouezelek e Southend, Cinntire, hag abaoe 1947, e div skol eus Glaschu (90 diskibl e 1947). E 1950, a-hend-all, ez eus bet savet, evit reiñ alioù diwar-benn an deskadurezh er gouezelegva, ur Gaelic Informal Education Joint-Committee, a zo ennañ dileuridi eus an Education Committees eus ar pevar c'hontelezh gouezeleger, hag eus An Comunn Gaidhealach. Ar poellgor-se a raio kalz evit brasaat lec'h ar gouezeleg er skolioù.

NOTENNOU LENN

Pierre TREPOS. - A propos de AE, KENDAE, ABARDAE

(Annales de Bretagne, LX, 1, 1953, pp. 92-99)

Danvez fonnus a gavomp e niverenn diwezhañ an Annales de Bretagne. Keuz am eus bet avat o lenn ne vije ken moulet hiviziken er gelc'hgelaouenn-se ar pennadoù douaroniezh diwar-benn Breizh ha Keltia. E-keñver ar brezhoneg hon eus da venegiñ studiadenn P. Trepos diwar-benn rannoù an devezh war zigarez ar gerioù meneget en talbenn. Ma vije bet un tammig buhez vreizhek war-dro Skol-Veur Roazhon e vije bet tu dimp da lenn da nebeutañ hanter-kant studiadenn ar bloaz par da hini an aotrou Trepos ha kalz gouiziekoc'h e vijemp bet war ar pezh ez eo ar brezhoneg e gwirionez. Siwazh, pell omp bet eus ar gont.

Ar pennad-mañ a zo diazezet war gartennaoueg P. ar Rouz « Atlas linguistique de la Basse-Bretagne ». Ul labour talvoudus-bras, priziüs-bras zoken eo ar studi-se eus ar brezhoneg komzet. Hogen, aon am eus ne vije krog da ober droug bras ivez, rak ma 'z eo priziüs an oberenn he deus ivez kalz perzhioù gwan ha ret eo bezañ barrek-kaer ken tennañ diouti kalz talvoudegezh.

Peadra a zo rannañ kalon un den. Etre 1911 ha 1920 eo en deus an aotrou Rouz kaset e enklaskoù da benn ; en e gentskrid e tispleg en deus studiet evel-se un daouzek kant bennak a furmoù ger. Reizh eo e vije bet peurembannet ar studi-se da ziwezhattañ un dek vloaz bennak goude ma voe klozet, da lavarout eo e 1930. Ha padal n' eus bet lakaet e gwerzh nemet peder levrenn kant kartenn, unan e 1924, an eil e 1927, unan all e 1937, ar bedervet erfin e 1942. Ha setu : tri bloaz ha tregont goude m' eo bet graet an enklask ne anavezomp ket c'hoazh ouzhpenn an hanter eus al labour, ha gredin eo n' her graimp biken.

Da betra e talvez neuze ? Mar deo dreist ar galloud moulañ pep tra dindan stumm kartennoù evel re al levrennoù deut er-maez, perak 'ta ne werzher ket d' an dud un dastumad kartennoù gant an niverennoù lec'hiañ hepken, stummoù ar gerioù o vezañ roet lerc'h-ouzh-lerc'h e kaieroù distag (un toullad pajennadoù ar bloaz en Annales de Bretagne, da skouer) pe zoken e kaieroù liesskrivet ? Ar re a zo c'hoant dezho studiañ a ouiije mat en em dennañ ganto, n' ho pezet aon.

43

Ha koulskoude, spontet e vezan bep gwech ma keñverian an doare m' eo notennet el labour-se doare distagañ ur get-gant an hini a anavezan-me. Daoust ha pep tra a vije graet laosk hag a vije direizh ? Nann, sur-mat. Dre vras e tiskouez an traoù bezañ mat a-walc'h, dre ar munud avat ez eo ret diwall. Rak an oberour a lavar dimp e-unan en deus graet gant respont un den (ha c'hoazh da c'houlennoù graet e galleg !) tra ma vije bet ret kemer da vihanañ doare distagañ pemp pe c'hwec'h den eus an hevelep kornad, ken gwazed, ken merc'hed. Setu ar mank en deus roet tu sur a-walc'h d' an aotrou Trepos da skrivañ ez eo abardaez ur ger eus ar yezh lennek hepken peogwir ne vez meneget neblec'h e kartennaoueg P. ar Rouz. War gartenn 9 an dastumad-se ez eo rannet Breizh-Izel e teir dachenn o klotañ ouzh :

1° pardaez distaget (par'daës) er pep brasañ eus Bro-Leon

2° abardaez, distaget (abar'dë :) e Kernev hag en un darnig eus Leon ha Treger, (abar'dé :) en darn vrasañ eus Treger ;

3° anderv e Gwened hag e reter Kernev ha Gouelo ; dezhañ un adstumm *inderv* pe *enderv*.

Ma vije bet ledan a-walc'h enklask an oberour, en devije kavet sur-mat etre al lec'hioù 30 ha 31, da lavarout eo e-tro Daoulaz, e vez distaget aliesoc'h (abar'dë : z) eget (abar'dë :). Evit aezamant ar moulañ em eus graet amañ gant doare notenniñ ar Yezhadur bras ha neket gant hini an «Atlas ». Pa vo c'hoant studiañ ur ger oc'h echuiñ gant ur z (diwar d kozh), arabat lezel a-gostez gwech ebet ar vro « etre ar Faou ha Landerne ».

Du-hont, ha pa ne ve ken, ez eo abardaez, gant ar z distaget mat, ur ger eus ar yezh vev ha ne deo ket un adsavadenn lennegel, rak n' eo ket abardaevezh ez eo, peogwir ez eo anavezet-mat hemañ ivez.

Hag aez ivez a zo anavezet ha distaget (ë:z). « Mont da ober an aez » a reer goude merenn e-pad an hañv.

Ar ger *anderv* avat ne gredan ket e vije anavezet er vro-se. Poan bras am eus o krediñ e klotje ar ger-se gant ar c'hembraeg *anterth*. Rak ne welan tamm ebet penaos e vije troet z e v (ouzh « *anterth* », keñveriañ avat ar brezhoneg « *terzhienn* »), rak ar v a zo testeniekaet ivez gant andro Plozeved.

44

En hevelep pennad e lavar P. Trepos emañ er ger *roñsed* an taol-mouezh war *ed* an dibenn lies. Ne gredan ket rak ar ger a zo evit *roñse* +*ed* (1).

En hevelep kelc'hgelaouenn ez eus ur pennad gant G. Souillet diwar-benn ar ger « *kêr* ». Ar ger-se a zo bet lakaet da zont alies diwar al latin *castra* ; anat eo avat e vije neuze « *kastr* » e-brezhoneg. Ne gredan ket muioc'h e teuje diwar *quadra* ; rak ne gredan ket e vije kavet a stummoù kozh estreget *caer*, *car*- pe *kêr*. Diwar « *quadra* » e c'hortozjed **quazr*, **quaezr*, e brezhoneg bremañ « *kwaer* », stumm ha n' eus ket anezhañ kement ha ma ouzon. Ha ret eo avat e teuje ar ger diwar al latin ? Furoc'h, ha diazezet startoc'h eo moarvat goulakadur Loth hag Ifor Williams hag a dosta *kêr* ouzh kae.

F. K.

(1) Evit ar pezh a anavezan eus distagadur *roñsed* e Bro-Wened emañ ar pouez-mouezh war **oñ** ha nann war **ed**. R. H.

N' eo ket o klask deskiñ ur yezh muioc'h deomp eo emeur er skolioù, ar pezh a vije un dra vat, met o klask deskiñ ur yezh deomp hag a feller ganti mougañ hon hini hon-unan.

Yann Vari PERROT.
Feiz ha Breizh, 1930.

NOTENNOU

HOR MIGNONED. -

Teo ha Meirael Jeusset a zo laouen da gemenn deomp eured o mab henañ Erwan gant an dimezell Kristiana Ermoin, e Roazhon.

Roger Brisson ha Jacqueline Boutry a zo bet dimezet e Brest, d' ar 5 a viz Kerzu. Hor gourc'hemennou a eürusted d' ar priedoù nevez.

Gant plijadur hon eus klevet e oa bet ganet un eil bugel e ti hor c'heneiled vat Arzel Even hag Enid Mair Phillips, en Aberystwyth. Lila eo bet anvet ar verc'hig. Zaig An Timeur a zo laouen o kemenn deoc'h he deus bet ur breur; Ronan Mari Derien, d' an 12 a viz C'hwevrer, en Alre (Hor gourc'hemennou ha hetoù kalonekañ.)

Valmai Jones, anavezet mat gant ar vrezhonegerien a oa e Kamp Kleder, a zo marv he gwaz, John Gwilym Owen, da zeiz Nedeleg. Hor soñjoù mantret a gasomp d' hor c'heneilez kembreat.

Antoneta ar C'huñv ha Per ar Bihan a gemmen gant tristidigezh o deus kollet o c'hoar ha c'hoar-ger Tereza ar C'huñv, marvet e Châlons-sur-Marne, en oad a 40 vloaz.

PROFOU. -

Setu roll ar profoù hon eus degemeret e-korf an daou viz diwezhañ :

KERZU.

- Per Lemoine, 200 lur ; disanv, Breizh-Uhel, 1.000 ; J. Penneg, diner ar yezh, 1.300 ; P. Tangi, person, 200 ; M. Aodig, 954 ; Kab. Y. Souffes, 1.003.

- War un dro, 4.654 lur.

GENVER.

- Loeiz Bihannig, Kalanna Al Liamm, 3.000 lur ; X. Langleiz, 500 ; It. V. de Bellaing, 1.000 ; Kadoudal, Boulvriag, 2.000 ; J. Renault, 500 ; disanv, Breizh-Uhel, 1.000 ; disanv, 650 ; J. L. Badoual, 500 ; K. Riou, 500 ; F. Elies, 1.000 ; F. Even, 1.000 ; J. Abarnou, 500 ; Herri Henry, 1.000 ; B. Assicot, 200 ; C. Le Mercier d'Erm, 500 ; E. Bourdet, 250 ; Dr Leon, 500 ; Y. L'Heveder, 200 ; Y. Chapel, 500 ; Dll Anna er Meliner, 700 ; Dom. G. Godu, 500 ; Y. er Meliner, 1.000.

- War un dro, 17.700 lur.

E 1953 he deus tizhet sifrenn ar profoù 130.733 lur, pezh n' eo ket fall. Kounaomp avat hor boa bet 159.201 lur e 1950, ha 114.980 lur e 1951 ha 147.996 lur e 1952. Kregiñ a reomp mat ar bloaz-mañ gant 17.700 lur a brofoù evit miz Genver. Bennozh Doue d' hor skoazellerien vat.

NIVER HOR C'HOUMANANTERIEN.

- Sed ar sifrennoù kavet war hor c'haieroù e dibenn miz Genver :

Aodoù an Hanternoz, 53 ; Penn ar Bed, 89 ; II ha Gwinum, 28 ; Loer Izelañ, 27 ; Mor Bihan, 25 ; Pariz ha tro-war-droioù, 77 ; Departamantoù all, 46 ; Trevadennoù Bro-C'hall, 6 ; Iwerzhon, 10 ; Skos, 2 ; Kembre, 8 ; Bro-Saoz, 3 ; Stadoù-Unanet, 5 ; Kanada, 3 ; Arc'hentina, 1 ; Brazil, 1 ; Helvetia, 1.

- War un dro, 385.

Derou ar bloaz nevez en deus degaset deomp un toulladig a goumananterien nevez. Trugarez d' hor c'heneiled o deus selaouet hor galv ha koumanantet pe lakaet da goumanantiñ o mignonned. Mar kendalc'h an traoù da vont en doare-se, hor bo tizhet an niver a 400 koumananter a-raok dibenn miz Meurzh. An holl d' al labour, eta !

	lurioù
Moulañ	477.152
Mizoù-post	13.088
Kell deziadur 1953	808
En holl	491.048

ENKEFIADURIOU

	lurioù
Koumanantoù	332.447
Niverennoù gwerzhet	11.116
Profoù	130.733
Levrioù gwerzhet	8.614
Bruderezh	1.300
En holl	484.210

STAD AR C'HEF

	lurioù
Koll ar bloavezhioù all	43.013
Koll 1953	6.838
	49.851

An daolenn-se a ziskouez ur c'holl a 6.838 lur. Daou abeg a zo :

- muioc'h e bajennoù hon eus moulet eget e 1952 ; priz ar moulañ a zo 477.152 lur e-lec'h 407.677 ;

- nebeutoc'h a brofoù hon eus bet.

Arabat klemm re, avat. Niverenn diwezhañ Al Liamm - ur c'halanna a-zoare - he deus plijet kalz d' al lennerien, o deus hen diskouezet dre o frofoù niverus. Ar profoù-se hag ar c'houmanantoù nevez bet e miz Genver a ro deomp spi e wellaio stad ar c'hef hep dale.

UR C'HOUMANANT D'AL LIAMM EVIT NETRA. -

Kinnig a reomp ur c'houmanant eus Al Liamm war baper kaer d' an hini pe d' ar re a gavo 5 koumananter nevez etre ar lañ a viz Genver hag ar lañ a viz Gouere 1954, ha bremañ dao dezhi !

HOR MIGNONED A SKRIV.

- « Dudius eo niverenn ziwezhañ Al Liamm ha pouezus-tre eo ober ur wech, dre vare un niverenn a c'hell bezañ gwerzhet evel levr distag. » An It. K.

- « Nag a draoù kaer e niverenn ziwezhañ Al Liamm ! Nag a eurioù am eus « kollet » hag a « gollin » c'hoazh ganti. » P. B.

- « Eleih a lennerion er Liam e skriù d' ein eit laret emant bet eurus é len er gazetenn-sé. Guir é éma kaer, dreist ol en niverenn devéhan. » L. er M.
47

- « En niverenn 41, hag a zo eus ar re wellañ, ur fazi a zo bet graet diwar-benn marv Rojer Casement, rak an den-mañ n' eo ket bet fuzuilhet gant ar Saozon, krouget ne laran ket e Pentonville (Londrez) d' an 3 a viz eost 1916. (Gw. Istor Iwerzhon Ernest Joynt, pajenn 170) ». A. N.

- « Va gwellañ gourc'hemennoù deoc'h ha da Ber Denez evit « Barzhaz Al Liamm ». Dudiusañ niverenn em eus lennet betek-hen eo houmañ, moarvat ! » T. J.

- « Pebezh plijadur ! degemeret am eus hiziv Barzhaz Al Liamm. Kas din diouzhtu ur skouerenn war Outhenin-Chalandre (650 lur), ha, war un dro, « Ar Mabinogion » war baper kaer ha « Rannyezh Douarnenez » liesskrivet. » A. M., Constantina.

- « Brav-tre gwiskamant Barzhaz Al Liamm. » L.

- « Ho trugarekaat a ran meurbet evit ar skouerenn gaer niverennet hoc'h eus degaset din. Ur mestr-labour eo ar Barzhaz-se, unan eus ar re dalvoudusañ, gwiziekañ, plijusañ bet embannet en hon yezh penn-da-benn. Ma gourc'hemennoù deoc'h ha d' ho kevareg Per Denez, ha yô d' ar werzh ! » F. J.

- « Amañ hon eus unan eus al labourioù pouezusañ embannet abaoe pell 'zo. Pouezus dre ma tenn an evezh war istor hol lennegezh, nebeut anavezet. Pouezus ivez, dre ma tiskouez doare hor barzhoniezh o kemmañ he stumm hag he danvez a-dreuz ar c'hantvedoù. Nebeut a dud a gavo abeg en dibab, daoust ma 'z eus tu atav, e seurt labour, da c'houlenn perak eo bet lakaet ar pezh-mañ-pezh e-barzh, pe lezet ar pezh-mañ-pezh a gostez. Ar skridoù a zo bet lakaet en doare skrivañ

bremañ, an doare gwellañ d' ober. Ur wech c'hoazh e weler pegen gwevn eo skrivadur 1941, pegen brav e klot ouzh ar brezhoneg-krenn koulz hag ouzh an holl rannyezhoù. Ar « Barzhaz kant barzhoneg berr » a dle dont da vezañ un oberenn glasel, e-giz ar « Golden Treasury » saoznek. Studiet e tle bezañ, diouzhtu, hag e-pad bloavezhioù hir, en holl skolioù-etre. Un embannadur a-ziforc'h, gant ur golo gwenn ha limestra hag a goust 650 lur pe 400 lur hervez ar paper. »
(Ar Bed Keltiek, nnn 80.)

- « Ar bloavezh a zo nevez 'zo deraouet ha kinnig a ran deoc'h ha d'Al Liamm va gourc'hemennoù ar gwellañ evit ar bloaz nevez. Ra zegaso ar bloaz dezhañ un toullad mat a goumananterien nevez, hag evelse e c'hell marteze degas deomp bep daou viz un niverenn ken tev ha ken talvoudus ha diwezhañ niverenn 1953 a zo dreist. An holl varzhonegoù a zo brav-tre. Met evit darn eus ar skrivagnerien-se e vije bet gwelloc'h, marteze, reiñ o oberenn-pennañ, elec'h un tammig barzhoneg ha ne ziskouez ket peurliesañ o zro-spered ; dreist-holl evit ar re ha n' int ket anavezet kalz ha na vezo ken lec'h da lenn o oberennoù marteze. Ivez en notennoù diwar-benn ar skrivagnerien e vije bet dleet, d'am meno, reiñ roll o oberennoù ; evit ar re hag o deus skrivet kalz lakaat roll o oberennoù pennañ, gant ur varnedigezh hag un displegadur en un nebeut linennoù.
« Met se ne lam mann eus pinvidigezh an niverenn, nag eus al levnez hag an dudi a gaver ouzh he lenn. Ra vezo niverennoù all eus an dalvoudegezh-se e 1954. » R. P.

- « Merdeer on hag a-hed ar bloaz emañ o redek mor. Ne dremenan nemet daou pe dri miz bep bloaz e Breizh. Kalz plijadur am eus enta bep tro o resev « Al Liamm » hag a zegas din keleier eus Breizh hag an Emsav, ha brezhoneg c'hwek da lenn. Trugarekaat a ran ac'hanoc'h evit al labour pouezus a rit evit hor bro hag he yezh. Karout a rafen ober muioc'h eget na ran evit an emsav met diaes-kenañ eo din gant ar vicher am eus. Fiziañs am eus koulskoude da gaout ur c'houmananter nevez d' ar gelaouenn.
« Al, Liamm evel m' emañ-hi a blij kalz din. Gwazh a se n' eo ket avat ken fonnus ha « Gwalarn ». L. B.

48

ALIOU HA KUZULIOU. -

Strollad Bro Bariz Skourr Breizh ar C'hendalc'h keltiek a gas deomp al lizherig-mañ : « Tud Skourr Breizh bodet hirie e Ker Vreizh a gas d'Al Liamm o gwellañ gourc'hemennoù evit al labour vat kaset gant ar gelaouenn-se da benn e-kerz ar bloavezh tremenet. Meuleudi deoc'h dreist-holl evit dont bep daou viz ingal er-maez. Goulenn a reomp diganeoc'h klask muioc'h a dud, brezhonegerien a vihanik, da genlabourat d' ar gelaouenn ha reiñ fiziañs dezho dre embann o skridoù ». Trugarekaat a reomp tud Pariz ha gortoz a reomp skridoù talvoudus digant brezhonegerion a vihanik.

Diwar ul lizher all e tennomp an arroud-mañ :

« D' am meno e tlefe Al Liamm chom tostoc'h ouzh ar bobl, evel SAV gwechall, da skouer ; gant romantoù R. Hemon, ,pezhioù-c'hoari Jarl Priel, ar « Mabinogion » pe danevelloù-all displeget d' ar vugale e c'hellfec'h plijout d' ar re a glask el levrioù traoù « fetis », aes da gompren pe gentoc'h da welout, rak kalz a dud ne gomprenont nemet gant o daoulagad hag o faltazi. »

TRUGAREZ. -

An holl a oar peseurt labour arabadus eo aozañ rolloù ar goumanterien ha derc'hel ar c'hontoù. Setu perak e fell deomp trugarekaat amañ da gentañ hor sekretour Per ar Bihan hag ivez Yann Thomas. Trugarekaat a reomp ivez Andreu Latimier en deus asantet plediñ gant bruderezh Al Liamm er c'helaouennoù.

MARV ELFED. -

Elfed, bet Arc'hdrouiz Goursez Kembre a zo marv d' an 10 a viz Kerzu 1953, d' an oad a 93 vloaz. Tremenet en doa un darn vras eus e vuhez e Londrez, o labourat evel beleg protestant evit Kembreiz kêrbenn Bro-Saoz. A bep seurt skridoù en deus savet e kembraeg. Brudet e oa dreist-holl evel prezegour hag aozer kantikoù. Deuet e oa da vezañ dall, en e gozhni, pezh na vire ket outañ da labourat. Anavezet mat e oa en Eisteddfod Vroadel, a zaremprede abaoe meur a vloavezh.
(Ar Bed Keltiek, min 77.)

UN DIZOLOADENN A BOUEZ. -

Dizoloet e voe nevez zo, e Lenndi Broadel Dulenn, peder barzhoneg iwerzhonek, en holl ur 1.503 bennak a linennoù, eus ar 7vet hag an 8vet kantved. Eus an amzer-se n' anavezad betek-hen nemet nebeut-nebeut a skridoù, ma lakaer a gostez al Lezennoù, hag a zo hogos dic'hallus da gompren. Ar peder barzhoneg, diwar-benn ar C'hrist hag ar Werc'hez, a oa bet miret en un dornskrid eus ar 17vet kantved, ha nikun n' en doa taolet pled outo. Ur gentel eo dimp, Bretoned : ur bern dornskridoù brezhonek a zo el lenndioù (Kemper, Raozhon, Pariz, h.a.) ha n' int bet biskoazh lennet gant hor yezhourien. N' eus ket da grediñ e vo kavet en o zouez skridoù eus ar 7vet kantved, hogen traoù a bouez bras evit istor hor yezh hag hol lennegezh a c'hell bezañ kavet hep mar.

Ar c'helou-mañ a zo tennet eus « Ar Bed Keltiek » (niv. 77), follenn geleier ar « C'hendalc'h Keltiek » e Breizh. Evit degemer ar Bed Keltiek e ranker bezañ ezel eus Skourr Breizh ar C'hendalc'h Keltiek. Evit bezañ degemeret da ezel lakaat kinnig e anv gant unan eus izili ar Poellgor, rener Roparz Hemon. Diskleriadurioù hiroc'h a c'hell bezañ roet gant Al Liamm.

49

HO KERVEL A RIN EN NOZ.

Unan eus ar binvioù talvoudusañ er stourm evit adsavidigezh ar brezhoneg a zo, hep mar ebet, Ar Brezhoneg Eeun, krouet gant Roparz Hemon. Nebeut a dud, mantrus eo da lavarout, o deus graet implij eus ar brezhoneg eeun, zoken evit sevel levrioù da zeskiñ ar yezh, daoust ma 'z eo war ar yezh « eeun » eo e vez diazezet bremañ an holl levrioù da zeskiñ yezhoù, pe saozneg pe germaneg pe rusianeg e vefe. Anavezet eo Roparz Hemon evit e bennegezh, avat, hag ouzhpenn pourchas d' hor bro ar Brezhoneg Eeun, en deus pourchaset ivez skridoù da dennañ implij dioutañ. Peseurt deskard n' en deus ket lennet Kontadennoù a Vro-Skos, An Tenn, Ar Barrad-Erc'h, ha n' eo ket bet kennerzhet en e studioù o welout e c'helle tennañ implij, ha plijadur, eus ar yezh a oa o teskiñ gant kemend-all a boan ? Abaoe ar brezel e kendalc'h Roparz Hemon da reiñ deomp, e Brezhoneg Eeun, skridoù eus an dedennusañ. Moulet e vezont abaoe ur pennad er rummad Skridoù Nevez. Daou levr a zo bet embannet dija. An trede a zo o paouez dont er-maez. Anvet eo **HO KERVEL A RIN EN NOZ** ha displegañ a ra un istor kevrinus o tremen e Konk-Leon. An holl re a zesk ar brezhoneg o deve plijadur o lenn ar skrid-se, ken eeun ha ken bev. Ar re a oar mat ar yezh a gavo dudi gantañ ivez, hag a gompreno e c'heller ober labour lennegel gant gerioù eeun hepken. - Al levrig ne vez kaset nemet dre zek skouerenn. Kas 1.000 lur d' an teñzorier : Yves Tymen, 30, rue de la Résistance, Quincy-sous-Sénart. K.R.P. 572-325 Paris. Pa vo diviet an arc'hant e vo kaset kelou dezho. En gortoz e resevint an holl levrioù moulet.

LEVRIOU SKEUDENNAOUET EVIT AR VUGALE. -

Lakaet hon eus moulañ follennoù paper e brezhoneg da begañ war levrioù gallek evit ar vugale. Pevar levr brav a c'hell bezañ adaozet e-giz-se. En un doare kempenn-tre eo graet ar follennoù. Ar re a garfe kaout diouto a zo pedet d' o goulenn digant Per Denez.

HOR YEZH. -

E miz C'hwevrer e teu er-maez an niverenn gentañ eus ur gelaouenn nevez - liesskrivet - embannet gant Al Liamm : **Hor Yezh** eo anvet, ha plediñ a ra gant ar yezhoniezh. Renet eo ar gelaouenn gant Arzel Even, ha se a zo koulz ha lavarout e vo kavet kalz traoù plijus a-barzh. En niverenn gentañ, dindan ar wask, ez eus pennadoù diwar-benn ar brezhoneg, ar c'hembraeg, kudenn ar yezhoù e Finland, ha skridvarnadennoù. Priz an niverenn a zo 150 lur. Ar c'houmanant a zo 500 lur (4 niverenn). An arc'hant a zle bezañ kaset da P. Denis, Douarnenez. K.R.P. 1499-51 Roazhon. Ar pennadoù ha kement tra a sell ouzh danvez ar gelaouenn a zle bezañ kaset d' ar pennskriver ; J. Piette, N° 6, Comins Coch Estate, Aberystwyth, Wales. - Koumanantit d'Hor Yezh. Pe, da nebeutañ, prenit an niverenn gentañ : goude-se e koumanatoc'h !

LIESSKRIVET GANT AL LIAMM. -

Al levrig kentañ LIES-SKRIVET GANT AL LIAMM a zo bet gwerzhet mat : un danevell diembann e oa gant ar skrivagner brudet aet kuit re abred diouzhomp, G. B. KERVERZHIU. An eil levrig a zeu er-maez en deizioù-man : un droidigezh e vo, diwar un danevell fromus-tre gant Nikolai Schedrin, ur skrivagner rusian. Anvet eo an danevell AN DAOU VOUIK BIHAN. Disheñvel eo ar mouladur-se eus ar skrid kentañ

lakaet e gwerzh, hag a oa kalz fazioù e-barzh. En trede levrig a vo, a gredomp, un dastumadenn barzhonegoù, gant ur barzh re nebeut anavezet. Priz an eil levrig a zo 100 lur. Priz ar c'houmanant 350 lur. Da gas da P. Bodenan.

50

KELAOUENNOU BREZHONEK. -

Niverenn miz Kerzu « Bleun-Brug » a zo gouestlet da Yann Vari Perrot. Ne gomzer ket kalz anezhañ evel brogarour breizhat ha ne weler ket mat petra e teu prezegenn c'hallek an Ao. Duparc d' ober en un niverenn a vije bet mat anez da se.

Ur gelaouennig « Bleun Brug Bro Dreger » a zo bet savet nevez 'zo. E spered a zo eus ar re wellañ ha breizhekoc'h eget meur a hini.

Resevet hon eus ivez eus ar Brezil ur gelaouennig liesskrivet, kavout a reer e-barzh pennadoù sinet gant hor c'henlabourer Treizhermor. Traoù pouezus-tre diwar-benn ar yezh a gaver e-barzh. Ar brezhoneg anezhi a zo un tammiz « ispisial » a larfen met diskouez a ra ur spered broadel a zo rouez d' ar mareoù mañ. Anv ar gelaouenn a zo : TIR NEVEZ, Caixa Postal 1204 Recife (Brasil).

Degouezet eo ganeomp ivez ur gelaouenn nevez (niv. 2) anvet « An Tribann ». Moulet eo gant Per Loisel ha Taldir.

E niverenn 5 « Ar Falz » e kavomp pezh-c'hoari Per Helias «Eun ano bras », un istor iskis a-walc'h hag a dremen en ur veilh-avel. Stourm taer ur familh vras o vervel. Ar pezh a zo kriz an dud ivez evel ar mor o c'hronn atav hag a lonk anezho holl. Ar pezh a zo plijus da lenn hag an divizoù buhezek. Ar yezh a zo leun a droioù lavar c'hwek.

Un nebeut fazioù 'zo hag ar skritur a vez a-wechoù faltazius a-walc'h : « Evel-se beza graet » a zo skrivadur un distagadur fall a gaver e meur a lec'h eus « evel-se bezet graet ». E-lec'h « emañ-hi » e kaver « emei » ar pezh a dalv « emezi » evit an darn-vuiañ eus Breizh. Un trefodach a c'heller gouzañv en ur skrid komzet pa 'venner lakaat liv yezh ar vro en ur pennad, Met arabat d' ar skrivagner implij « emei kuit » er-maez eus ar skrid en displegadurioù-c'hoari pa gaver e-kichen troioù lennegel evel « fromet », « gant spi », h.a.

Setu ar c'helaouennoù o deus graet bruderezh evit Al Liamm :

- Tir Nevez ;
- La Terre Bretonne, 3, rue du Départ, Paris (14°) ;
- Bleun-Brug, V. Seité, Ty-Carré, Châteaulin ;
- Ar Bed Keltiek ;
- Skol-hañv ;
- L'Echo de Lannion ;
- La Liberté du Morbihan.

LEVRIOU BREZHONEG ER STALIOU. -

Diskouezet e vez levrioù brezhonek e div stal-levrioù eus Brest, e Librairie de la Cité, ru Siam, hag er Grande Librairie.

Laouen e vefen da c'houzout hag eñ ez eus stalioù o tiskouez levrioù brezhonek en o frenestroù.

DOARE-SKRIVAN. -

D' ar mare m' emeur o komz eus sevel ur pevare doare da skrivañ ar brezhoneg n' eo ket aner, marteze, embann, er-maez eus pep tabut, un nebeut dihelloù diwar-benn an doare-skrivañ unvan.

51

Setu, da gentañ, ar pezh a skriv Roparz Hemon en e levrig **AN DOARE-SKRIVA NEVEZ** (Roazhon 1942) : « An doare-skrivañ implijet betek bremañ gant GWALARN hag an darn-vuiañ eus hor skrivagnerien a oa hini EMGLEV AR SKRIVAGNERIEN sinet e 1908 ha peurreizhet gant an Aotrounez Emil Ernault ha Frañsez Vallee. Diazezet e oa dreist-holl war teir rannyezh : rannyezhoù Leon, Treger ha Kernev.

Ar pedervet rannyezh, hini Wened, a oa chomet er-maez eus an EMGLEV. Gwenediz a zalc'he eta da skrivañ en un doare disheñvel diouzh ar re all. Levrioù ha kazetennoù a veze moulet hervez an doare-skrivañ-se, ha desket e veze e skolioù Bro-Wened, ar re anezho a oa digor d' ar brezhoneg.

Keit ha ma vane Breizh morgousket, evel a-raok ar brezel-mañ, e oa ret tremen gant un daou zoare-skrivañ-se. Ur riskl bras e vije bet, ha ni dinerzh evel ma oamp, klask gwellaat stad an traoù. GWALARN e-unan, daoust d' ar c'hoant en doa da beurunvaniñ hor yezh, a savas krenn e vouezh a-enep ar skrivagnerien hag ar yezhourien en em vodas en Oriant e 1936 da glask diluziañ ar gudenn.

Kemmet e voe penn d' ar vazh gant an darvoudoù c'hoarvezet abaoe 1940. Niver ar Vrezhoneg dihunet a yae war gresk en un doare souezhus, tra ma 'z ae galloud hon enebourien war vihanaat. Ar skolioù, evit dezho bezañ c'hoazh e dalc'h estrenien pe Breizhiz aet da estrenien, an darn vuiañ anezho, a rank lezel tamm-ha-tamm brezhoneg da blantañ e zaoudroad, er porzh-c'hoari da gentañ, er salioù-kelenn da c'houde. Eus a yezh trec'het emañ o tremen da yezh trec'h.

Hag eno emañ an dalc'h : ur yezh trec'h a rank bezañ ur yezh unvan. Ret dezhi argas diouzh he c'hreiz pep gwrizienn a wander.

Oc'h ober ar beurunvanidigezh eta hon eus diskouezet e oamp ur bobl yac'h ha nerzhus. Diskouezet hon eus hor fiziañs en amzer-da-zont hor yezh. »

Pal bras ar beurunvaniñ a zo bet lakaat ar peoc'h da ren etre ar Vretoned. Er gelaouenn ARVOR e skriv Roparz Hemon kement-mañ d' ar 16 a viz Eost 1942 : « Aozet eo bet (an doare-skrivañ nevez) da echuiñ an tabut marvus etre rannyezh Wened hag ar rannyezhoù all. Evitañ da vezañ ur samm muioc'h war hor choug, gant levenez e tleomp dougen ar samm-se : lakaat an doare-skrivañ nevez da drec'hiñ a vo diskouez hon eus gounezet ar perzh a reas diouer deomp ar muiañ gwechall, perzh-mat ar gentsidigezh. »

Ur pal all avat a oa d' ar beurunvaniñ : rediañ ar C'hallaoued da lakaat ar brezhoneg er skol. Lavarout a rae ar re-mañ : « Ya, laouen omp da lakaat ar brezhoneg er skol. Met penaos ober, pa 'z eus daou zoare-skrivañ disheñvel ? En em glevit etrezoc'h Bretoned, ha p' ho pezo un doare-skrivañ hepken e touomp deoc'h e vo lakaet ho yezh er skolioù ». (Dihelloù pouezus a c'hellfemp embann war ar gudenn-se.) Evel just e kave d' ar C'hallaoued na zeufe ket ar Vretoned a-benn d' en em glevout. Graet e voe an emglev koulskoude. Er gelaouenn ARVOR (13 a viz Gouere 1941) e oa skrivet neuze : « L'adoption de cette réforme lève la dernière objection que l'on aurait pu faire à l'encontre de l'enseignement de la langue bretonne dans les écoles ». L'HEURE BRETONNE, diouzh he zu, a embanne kement-mañ d' an 12 a viz Gouere 1941 : « Ainsi se trouve levé le dernier obstacle que l'ON opposait aux promoteurs du brezhoneg er skol. Nous reviendrons sur cette importante décision qui est le fait des patriotes bretons SEULS ». Hag e brezhoneg e skrive Jos Pempoull : « Nitra ne barou kin doh hor ieh a vout disket er skolieu. Er brasañ digaré e vezé hijet dirak hor fri e zou d' en dias ! » D' an 11 a viz Gouere 1943 e skrive Roparz Hemon en ARVOR un dra bennak heñvel, met diskouez a rae ivez penaos e vefe stourmet gant enebourien hor yezh : « D' ar mare ma kerzh da vat ar brezhoneg e-barzh ar skolioù e rankemp kaout ur yezh unvan. Setu stanket o farouell d' hon enebourien, a oar ez eus un doare c'hoazh da zistruj kelennerzh hor yezh : lakaat kelenn, e-lec'h ar yezh unvan, ar rannyezhoù (ha klask a raint ober o mad, bezit asur, eus an doare-se d' hor mougañ) ».

52

Forzh penaos e oa graet an emglev. A-raok pep tra all e oa bet klasket mirout didorr hengoun lennegel ar brezhoneg ha peurseveniñ labour Ar Gonideg, Troud, Ernault ha Vallee. En ARVOR (11 a viz Gouere 1943) e skriv Roparz Hemon kement-mañ : « Pezh a oa d' ober ne oa ket diskar labour hon daou yezhour meur Ernault ha Vallee. Er c'hontrol bez' e tlee bezañ miret divoulc'h, kemmet hepken un disterañ da zont aezetoc'h da lenn da Wenediz »

D' an 8 a viz Gouere 1941 e oa degemeret reolennoù ar beurunvaniñ :

1. Degemeret e oa gant an holl an doare-aroueziañ implijet gant Emglev ar Skrivagnerien.

2. Al lizherenn **o**, pe **ou**, o klotañ ouzh an **ù** gwenedek a vo skrivet **v**.

3. Ar gerioù oc'h echuiñ gant **ff** e brezhoneg-krenn a vo echuet gant **ñ**.

4. Al lizherenn **z** o klotañ gant an **h** gwenedek a vo skrivet **zh**.

5. Dibenn al liester a vo skrivet **où** pe **ioù**.

En ur sinañ an Emglev nevez e voe divizet envel ur strollad-labour da

spisaat implij ar reolennoù degemeret gant an holl ha da studiañ un nebeut kudennoù bihan all. Ar strollad-se a oa ennañ : Abeozen, an Ao. Bourdelles, F. Kervella-Kongar, an Ao. L. ar Floc'h (Maodez Glanndour), Roparz Hemon, G. Bertou Kerverzhioù, L. Herrieu, an Ao. Marouille, an Ao. Mary, an Ao. Y. V. Perrot. Ar strollad-se en em vodas teir gwech, a eskemmas lizheroù, hag zivizas erbediñ un nebeut kemmoù d' ar skrivagnerien - evel skrivañ **o** e-lec'h **ou** e gerioù evel **don**, **dorn**, skrivañ **c'hw** e-lec'h **c'hou** e gerioù evel **c'hwi**, h.a. Traoù hag a voe kavet mat ha fur gant an holl.

Emglev ar brezhoneg unvan a zo bet sinet d' an 8 a viz Gouere 1941 gant : Abeozen (F. Elies), yezhour ; Loeiz Andouard, a-berzh ar gazetenn « Arvor » ; Gwilherm-Bertou Kerverzhioù, skrivagner ha yezhour ; Renan Kongar (F. Kervella)- ha Marc'harid Gourlaouen, a-berzh ar skol dre lizher « Ober » ; Andrev Koulouarn, a-berzh ar gelaouenn « Sav » ; an Ao. Loeiz ar Floc'h (Maodez Glanndour), a-berzh ar gelaouenn « Studi hag Ober » ; Yann Fouéré, a-berzh Ar Brezhoneg er Skol ; Roparz Hemon, a-berzh ar gelaouenn « Gwalarn » ; Loeiz Herrieu, a-berzh ar gelaouenn « Dihunamb » ; Xavier de Langlais, a-berzh ar gelaouenn « La Bretagne » ; an Ao. Le Marouille, yezhour ; Per Mokaer, skrivagner ha stourmer evit ar brezhoneg ; an Ao. Yann Vari Perrot, a-berzh « Feiz ha Breizh » hag ar « Bleun Brug » ; Frañsez Uguen, kenaozer (gant an Ao. Seité) al levr « Me a Zesk Brezhoneg ».

E-touez an dud a heulias, pe a vrudas, ar brezhoneg unvan e c'heller menegiñ hep ober ar roll klok anezhe : R. ar Mason, Youenñ Drezen, Dr Dujardin (L. Lok), Levot-Becot (ar C'houer Kozh), Ar Yeodet, Soaig Jonkour, An Diuzet, h.a.

53

HOL LENNEGEZH EN ESTRENVRO. -

E niverenn miz Kerzu ar gelaouenn frizek « De Tsjerne » ez eus un droidigezh eus pezh-c'hoari Roparz Hemon : Un Den a Netra. Anvet eo **Samar Ien**. Graet eo bet gant Jan Wybenga diwar un droidigezh saoznek gant Per Denez.

AR BED KELTIEK. -

Ar Bed Keltiek a zo anv follenn-geleier liesskrivet ar C'hendalc'h Keltiek e Breizh. 76 niverenn a zo bet embannet dija. Enno ez eus diskleriadurioù prizius a bep seurt diwar-benn ar vuhez vroadel en holl vroioù keltiek. En niverenn 75 da skouer ez eus keleier diwar-benn ar pevar ezel eus an « Arme Republikan Skosat » barnet nevez zo e Dun-Edin. Evit resev Ar Bed Keltiek e ranker bezañ ezel eus Skourr Breizh ar C'hendalc'h Keltiek. Goulenn diskleriadurioù gant da skouer - an deñzorierez : an Itron Galbrun, 78, rue de Fontenay, Vincennes.

KENDALC'H KELTIEK 1954. -

Kendalc'h Keltiek 1954 a vo graet en Iwerzhon, e Dulenn hep mar. Emañ Skourr Breizh a prientiñ a-zevri lodenn Vreizh er C'hendalc'h-se. Ar re a zo e soñj mont a rafe mat kas o anv da Ber Denez, a roio dezho diskleriadurioù e koulz mat.

DA WERZHAÑ. -

Bez hon eus da werzhañ : « Iwerzon gwelet gant eur Vretonez », brezhoneg gant Dirnador, 100 lur ; « Istor Breizh an Ao. Poisson », lakaet e brezhoneg gant Gournadec'h, 150 lur ; « Ar Gwaregata », gant F. Vallee, 80 lur ; « Ar Bazataerez Breizek », gant F. Vallee, 80 lur ; « Ar Pesk Aour », romant gant Paol Feval, lakaet e brezhoneg gant Roparz Hemon, 150 lur ; « Ar Voterez », « Le Vote », gant an Tad Rozeg, 50 lur ; « Almanag Breiz », evit 1933, 100 lur ; « Santez Koupaia, brezhoneg gant E. Ar Moal, 50 lur ; « Petites Industries Locales et Rurales », gant F. Vallee, 50 lur ; « Grammaire Française et Grammaire Bretonne », gant F. Vallee ha R. Le Roux, 100 lur ; « Notes de Grammaire Bretonne » (levrig glas), gant F. Vallee, 50 lur ; « Notes de Grammaire Bretonne » (levrig gwer), gant F. Vallee, 100 lur ; « Sketla Segobrani » (rummad klok an tri levr), gant F. Vallee, E. Ernod ha Meven Mordiern, 1.500 lur. Goulenn an holl levrioù-se digant Per Bodenan, 3, chemin des Potiers, Ergué-Armel, Quimper. KRP 212-23 Roazhon.

KAS BUGALE DA GEMBRE E-PAD AN HAÑV. -

Warlene ez eus bet paotred ha merc'hed yaouank eus Breizh o vont da Gembre, ha familhoù breizhat o tegemer Kembreiz yaouank. Laouen eo bet an holl gant an eskemm. Ar re a garfe kas o bugale da dremen un nebeut sizhunioù e Kembre e-pad an hañv, en ur familh kembraek, ha degemer en eskemm, en o zi, ur C'hembread, pe ur Gembreadez yaouank, a zo pedet da gas o anv da Ber Denez, ar c'hentañ ar gwellañ,

pe da sekretourez Urdd Gobaith Cymru, Miss Gwennant Davies, Swyddfa'r Urdd, Aberystwyth, Wales, en ur en em erbediñ eus Al Liamm.

54

AR VUHEZ VREIZHEK E PARIZ. -

E Pariz e vez graet skol vrezhonek d' ar merc'her e Lise Condorset ha Sant Jermen er C'hoad ; d' ar Yaou e Ker-Vreizh ; d' ar Gwener e Lise Condorset e Ti-Breizh ha e Ker-Vreizh ; d' ar sadorn e Keranna-Yerres.

Savet a zo bet ivez « Skol Veur ar Bobl ». Bep gwener e vez graet ur gaozeadenn. Setu ar re a zo bet graet betek-hen : « Ar vuhez pemdeziek e Bro Alamagn » gant Y. Souffes ; « Barzhaz Breizh e-keñver an Istor hag an Hengoun » gant A. J. Raude ; « Barzhaz Breizh » gant Y. Kerlann ; « Doareoù bevañ un tiegezh e Bro Leon » gant A. Creac'h.

E BREST. -

Skol vrezhonek a vez graet e kêr bep Meurzh. Un nozvezh a zo bet aozet evit Nedeleg gant Sonererezh, ur pezh c'hoari hag ur brezegenn diwar-benn an Aotrou Konk, graet gant an Ao. Le Bihan, beleg ; 24 den a oa deut d' ar vodadeg.

LES AMOURS JAUNES.

Adembannet eo bet nevez 'zo gant an ti anavezet mat N.R.F. oberenn vrudet ar barzh breizhat Tristan Corbière, a oa ken prizet gant Roperzh ar Mason. Aketus-tre eo bet graet al labour gant hor c'henvroad Erwan-G. an Danteg (notennoù puih diwar-benn an embannadurioù all, ar c'hemmadennoù, h.a.). Gant plijadur vras e vo adlennet gwerzennoù brudet « Pardon Santez Anna ar Palud », « Gwerz Kamp Conlie », h.a. Re vreizhat e oa chomet doare Tristan Corbière, moarvat, evit ma vije bet prizet e dalvoudegezh gant tud lipet re vat Pariz. Hetomp, gant Erwan-G. an Danteg ma vo hiviziken anavezet kement hag e genamzeridi Baudelaire ha Verlaine.

EMSAV AR SKOLIOU HOLLGEMBRAEK. -

Ouzhpenn daou vil bugel ez eus bremañ er skolioù hollgembraek a zo bet savet er bloavezhioù diwezhañ e kornioù saoznekaet ar vro.

E 1939 eo bet savet ar gentañ skol a seurt se : Skol Lluest, en Aberystwyth, e-lec'h ma vez 76 dre gant eus ar vugale o komz saozneg hepken. Da gregiñ n' he doa ar skol nemet SEIZH diskibl. Kreskiñ a reas ar skol buan, met hi koulskoude a chomas ar skol hollgembraek nemeti betek derou 1947. D' ar mare-se e voe savet ur skol all e Llanelli, hag ar wech-mañ gant Kuzul an Deskadurezh evit ar gontelezh, tra ma oa bet savet Skol Lluest, ha dalc'het en he sav, gant Urdd Gobaith Cymru.

Goude-se ez eas buan an emsav war-raok : e miz Here 1951 e oa 15 skol ha da fin miz Du 1953 e oa 26. Ouzhpenn-se ez eus c'hoazh 5 skol-babiged, dalc'het gant tud a youl vat, ha graet dreist-holl evit ar vugale vihan na ouzont nemet saozneg hag a fell d' o c'herent o lakaat da gomz kembraeg.

War-dro 80 diskibl ez eus e pep skol gembraek, ha kreskiñ a ra o niver atav.

En hanternoz ar vro ez eus 11 skol, hag emeur e soñj kaout unan ouzhpenn hepdale en Abergele. E kreisteiz ar vro ez eus 15 hag emeur o c'hortoz kaout re all e Merthyr, Penybont-ar-Ogwr ha Pont-rhyd-y-fen.

Da skoazellañ sevel skolioù kembraek e vez krouet Strolladoù Kerent Kembraek, a stourm evit lakaat ar C'huzulioù Deskadurezh da reiñ dezho ar pezh o deus c'hoant. Emañ an holl strolladoù bihan-se o paouez en em Vodañ en ur Gevredigezh vras a zeuio hepdale da vezañ un nerzh e buhez sevenadurel ar vro. Dija ez eus bet goulennet, e miz Eost 1953, ouzh renerien an Deskadurezh e Kembre labourat a-zevri evit lakaat holl vugale Kembre, ha saoznegerien e vefent, da zeskiñ kembraeg.

(Hervez Y. FANER, Genver 54.)

55

ALI D' HOR C'HENLABOURERIEN. -

Ma fell deoc'h e vefe embannet ho tornskridoù ez eo ret o skrivañ fraez gant ur skriverezh pa c'heller ha war un tu hepken eus ar follennoù.

AR B.A.L.B. D' E HARPERION. -

Goude ur stourm a badas 5 bloavezh leun, e tle renerion ar BALE dilezel an dachenn. Ne fell ket dezho hen ober, koulskoude, a-raok na vefe paeet penn-da-benn dleoù ar Vreuriezh, e-keñver ar re o deus bet fiziañs enni, da lavarout eo harperion ha pratikoù ar BALB.

Evit kompren ervat perak ne c'hell mui kerderc'hel ar BALB evel ti kenwerzh, ret eo soñjal en dispignoù a vefe ret dezhi ober evit chom en he sav : koumanant un implijad, da vihanañ, o redek an heñchoù, hini ur sekretour evit kas ar pakadoù ha respont d' al lizheroù, priz-feurm ur burev hag, ouzhpenn ha dreist-holl, an tasoù a zo da baeañ d' ar gouarnamant evit ur seurt kevredigezh.

Arabat ankounac'hat penaos hon eus kroget da vont... Gant nebeut tre a arc'hant : arc'hant renerion hag harperion ar BALB, hepken, da lavarout eo war-dro 200.000 lur, en holl.

Da gentañ ne zleemp gwerzhañ nemet levrioù fiziet ennomp, e prest. En amzer-se e oa c'hoazh ar c'hiz, met tammig ha tammig, abaoe ar brezel, e nac'has an holl embannerion-levrioù kenderc'hel gant ur seurt doare-ober hag e voe ret d' al levraouerion paeañ diouzhtu kement levr a werzhent.

Ha setu penaos, tamm-ha-tamm, ez omp deut da vezañ, ul levr di gwirion, gant levrioù prenet ganimp ni hon unan gant gounidoù ar BALB.

E lec'h mont a stal da stalig hag a stalig da netra evel ma kred tud zo, war welaat ez eo bet eta stad hor breuriez. war ar paper da vihanañ.

SETU SIFROU RESIS :

P' hon eus kroget gant ar BALB e eo er c'hef : 70.000 lur.

N' hon doa, evel just, ouzhpenn-se, levr ebet nemet hini Langleiz. Prestet e oa bet dimp, hepken, an holl levrioù all a werzhemp.

Bremañ hon eus war anv ar BALB, hervez hor roll-levrioù diwezhañ : evit UN MILION a levrioù.

Paeet hon holl dleoù, e chomo c'hoazh war anv ar BALB evit war-dro 800.000 lur a varc'hadourezh.

Tammig ha tammig, gant harp hon holl vignoned, e tleomp gwerzhañ ar varc'hadourezh-se... o c'hortoz gellout ober muioc'h. Setu perak hon eus klasket an tu da genderc'hel memestra, koustet a gousto, en ur doare all evel breuriez prevez.

Quatreboeufs en deus asantet bezañ e penn ar Vreuriez nevez-se, hep dispign ebet, hep burev feurmet, na marc'hadour war ar maezioù (siwazh !...) hogen e kendalc'ho memestra gant tud a youl-vat.

Bez e c'heller skrivañ dezhañ (gant ur timbr evit ar respont) d' ar chomlec'h-mañ :

Quatreboeufs, 9, rue du Thabor, Rennes (Pellgomz. 71-73. Roazhon). A-hend-all, e vo dirouestlet evel just kudennoù ar BALB giz-kozh gant Kervella (B. P. 108 Rennes).

A-RAOK HOR BARN... ARABAT ANKOUNAC'HAAT, MEMESTRA, AL LABOUR HON EUS GRAET E-PAD 5 BLOAVEZH :

Evit PEMP MILION a levrioù hon eus gwerzhet, an darn vrasañ anezho e brezhoneg ha gwerzhet war ar maezioù gant hon implijidi (piv a c'hello biken o zrugarekaat evit ar boan o deus kemeret dre garantez hepken evit ar brezhoneg ?...) PIV EN DOA GRAET KEMEND-ALL BETEG BREMAN WAR AN DACHENN-SE ?... Langleiz.

56

KAMP ETREKELTIEK E KEMBRE. -

Evel pep bloaz e ra ar strollad URDD GOBATH CYMRU ur c'hamp etrekeltiek. Padout a raio ar wech-mañ eus ar 15 betek an 22 a viz Ebrel. Priz an nav devezh er c'hamp a vo 5.503 lur. Pedet eo ar vrezhonegerien da vont. Plijadur o devo eno, o vevañ e ser Kelted all eus an holl vroioù, o weladenniñ Kembre, o selaou prezegennoù a bep seurt. Graet e vez ar c'hamp en ostaleri kaer an URDD, e Borth, e-kichen Aberystwyth. Ar re a garfe mont a zo pedet da skrivañ d' an Itron de Bellaing, Le Vali, Guingamp.

HOR YEZH. -

Emañ ar gelaouenn hon eus komzet uheloc'h diwar he fenn o paouez dont er-maez.

Setu taolenn an niverenn-gentañ :

D'hol lennerien ;

Gerioù dastumet e parrez Kerlaz ;

Enskrivadurioù brezhonek ;

Ar Svedeg e Finland ;

Daou c'heriadur ;

Stad ha kelennadurezh ar C'hembraeg

Levrlennadurezh
Geriadur ha yezhadur ;
Notennoù.

SEKREDOU KEGINEREZH. -

Ma anavezit sekredoù-keginerezh breizhek pe keltiek kasit keloù da An Timeur a zo krog d' ober un dastumad anezhe. Alioù al lennerien a zo da vezañ kaset da : Mme Latimier, c. c. du Loch, AURAY (Mhan).

57

DA REIZHAÑ ER BARZHAZ. -

Daoust d' an aked a zo bet lakaet da embann ar BARZHAZ ez eus chomet fazioù mantrus ennañ. Ar re vantrusañ eo ar re a zifeson barzhoneg Urien RIWALLON, PEDENN AR VARC'HEGOURIEN, pp. 121 ha 122. Ar pevarvet poz a zo da vezañ lennet evelhen :

Komzer. - N' hon eus ket a vadoù dimp,

Ni hag hon eus kinniget holl,

Ha graet fae war an Danvez.

Mes priziusañ pinvidigezh hor pobl,

Bravañ bleunioù ar spered kelt,

Ha n' hon eus ket ar pep bravañ ?

Ar c'hwec'hvet poz a zle bezañ lennet evel-hen :

Komzer. - Astennet omp war c'horre an douar,

Ni hag hon eus karet hon nesañ,

Bevet, stourmet ha marvet evitañ.

Mes hor Skouer a ren en Neñv,

Hag hor galvo stok d' e galon,

Ha n' hor bo ket ar pep gwellañ ?

Mankoù bihan all a zo, a roomp amañ ar roll anezho :

p. 71, eil diwezhañ gwerzenn, lenn : G' an deiz.

p. 101, eil diwezhañ gwerzenn, lenn : O rummad hir a nozioù.

p. 102, trede gwerzenn, lenn : war va gweuz.

hevelep paj., pempvet gwerzenn an diwezhañ poz, lenn :

Ha treizh an eurioù gwenn war un oaled c'hlan,

p. 118, pedervet gwerzenn an eil poz, ar ger flammell a zle kaout daou l ; talvezout a ra kement ha cyclamen.

p. 140, ar c'hwec'hvet gwerzenn, lenn :

Ar gargidi, te oar, kaset ha degaset,

En notennoù ez eus da reizhañ ivez :

- pennad BENEAD, ar sifr diwezhañ a zo 1942.

- pennad Ar MASON, lenn : CHAL HA DICHAL (1943).

- pennad PIKARD, lenn : marv e Roazhon.

- pennad Ar RUMEUR, trede linenn, lenn : Broadel.

- Ar ROZENN hag AR SPERN GWENN a zo tennet eus Kroaz ar Vretoned, Mezheven 1899.

- Yann SOHIER, 10 Gwengolo 1901 - 21 Meurzh 1935.

ROLL AR PENNADOU Bloavezh 1953 (niv. 36-41)

embannet war Al Liamm Bloavezh 1953 (niv. 36-41)

Anvioù an oberourien renket hervez urzh al lizherenneg
(39/28 a dalv kement ha niv. 39, paj. 28)

ABANNA	
Traonienn	39/28
Da vestr an tan tr.	39/29
Ar Bleizi, A. Loup	39/30
ABEOZEN	
Diskar-amzer	41/88
Rozenn miz Du	41/89
Galv da Briñs ar C'hornog Aour	41/90
ABGRALL	
Jabadao	41/107
An Amzer gollet	41/108
ALAN	
Noz avelek	41/109
AL LAE (Fañch)	
Va bleuniennig a zo marv	41/57
Du eo an deiz ha du eo an noz	41/59
AN UHEL (Fañch)	
Diskuizhadenn	41/43
AR BRAS (Anatol)	
Janedig an Dizes	41/55
AR BRAS (Charlez)	
Son nevez war un danvez kozh	41/61
AR GARREG (Hollsent)	
Diskar-amzer	41/67
AR C'HAMM (Yann)	
An neiz dilezet	41/91
AR YEODET	
Pedenn ar Mousig	41/73
AR JOUBIOUS	
D' am buhez	41/33
AR MAE (Fañch)	
D'ur mignon	41/52
AR MASON (Roperzh)	
E Kervoial	41/97
Ar Sikarned	41/98
AR MEE (Jord)	
tr.	
Katell, merc'h Houlihan, W. B.Yeats	39/31
AR MOUGN (Reunan)	
Bisigoù Mareñv	41/131
AR ROUZ (E.)	
Ebrel	41/87
AR RUMEUR (Jord)	
Devezh hañv	41/83
BENEAD	
Gwechall	36/3
Breizh o vevañ	37/69
Ul levrig a bouez	37/70
Frouesha	41/111
BERTHOU (Erwan)	
Pa zeu, d'abardaez noz	41/66
BLERGER (Yann)	
Va hent	41/134

BOUESSEL DU BOURG (Y.)	
Implij ar brezhoneg eeun	40/58
BRIZEUG (A.)	
Mari	41/31
Al Liorzh	41/32
KALLOC'H (Yann Ber)	
Pedenn en deñvalded, III	41/85
Ma c'halon 'zo e Breizh-Izel	41/86
KELIEN (Narsis)	
An amzer da zont	41/49
KENVEN (Loeiz)	
Kaoz Roue Frañs	39/60
KERAMBRUN (Gwilhou-Renan)	
Gwrac'h Ahez	41/37
KERVARKER	
'Vel un aval e beg ar wênn	41/39
Kanaouenn an Anaon	41/40
Ar Chouanted	41/42
KERVERZHIOU (Gwilherm Bertou)	
Kan an noz	41/112
Rinenn XX	41/113
Y mae 'r eneth	41/114
KONAN (Herve)	
An dastumadenn SAV	38/46
KONAN (Jakez)	
tr.	
Ali Baba hag an daou-ugent laer	36/11
KONGAR (Divi-Kenan)	
An hañv o tont	41/129
Ma 'z afemp-ni	41/130
KOSTA (J. P.)	
Barnadennoù	39/73
DENEZ (Per)	
Ar Gouezeleg	36/48
Ar Gouezeleg	37/63
Tangi Malmanche, stourmer	38/13
Kontadenn-bobl	38/33
Ar Gouezeleg	38/39
Ar Gouezeleg	39/68
Ar Gouezeleg	40/50
Hent hor barzhoniezh	41/7
Diskleriadurioù	41/15
3	41/137
31 a viz Kerzu	41/138
DISANV	
Buhez Mabden	41/18
Tremenvan an Itron Werc'hez Varia	41/19
Pemzek levenez Maria	41/20
Kanenn-daou	41/28
Ar spern-gwenn	41/62
Ar rozenn	41/63
Diaes Irae	41/133
DREZEN (Youenn)	
Mintin war an erin	41/92
Bremaik e nozo	41/93
Susinio	41/94
ELIES (Fañch)	
Prederiadenn	40/3
EOSTIG SARZHAW	
Oberenn Loeiz Herrieu	39/9
ERNOD (E.)	
Berr eo hor beaj	41/53
EVEN (Arzel)	
Gerioù nevez-keltiek e galleg	37/48
Kannad ur bed all	38/17

FARNACHANAVAN		
Diavaez		41/104
GERMENE (Ronan a)		
Pa vin marv		41/68
GAWAIN		
Levenez		41/119
Ezvezañs		41/120
GLANNDOUR (Maodez)		
Arouezelezh Gurvan		38/3
Morwazi		38/21
Elerc'h va ene		38/22
Ar bibl brezhonek		38/56
Beg ar Raz		41/115
Gwiadou loar		41/116
Menez Bre		41/117
An eur-se 'zo ken tost d' ar Peurbad		41/118
GOURLET (Loeiz)		
Me a garfe		41/72
GOVIG (Charlez ar)		
Ar Roc'h Allas		41/69
GWEGEN (Tangi)		
Noelenn gozh		41/22
GWESNOU		
Setu ar c'hloc'h o tiñsañ glas		41/50
GWICHAOUA (Yann)		
Ar garantez nijet kuit		41/123
GWILHOM (Joakim)		
E'it Miz Mari		41/29
HEMON (Roparz)		
Ar bank-oaled		37/7
O klask hol lennegezh kozh		37/56
Tangi Malmanche		38/9
Kilañ ha mont war-raok		38/37
An Alouber		40/6
Yezhadur nevez an iwerzhoneg		40/42
Al liorzh espar		41/99
Ar rozenn du		41/100
Kimiad		41/101
Kanenn vrezel		41/102
HERRI (Yann Wilhou)		
Kaerder an Itron Varia		41/30
HERRIEU (Loeiz)		
D' an deiz lakaet		39/14
Peah el lanneg		39/22
Peoc'h al lanneg		41/75
HUON (Ronan)		
Ur brogarour		39/3
Aod		40/4
Marv out		41/140
Barzhoneg e miz Gouere		41/141
IANN (Iann Vari ar)		
Kastell Tonkedeg		41/44
YEATS (William Butler)		
Katell, merc'h Houlihan		39/31
JAKOB (Yann Fraisez)		
An Eostig		41/80
Ar Falc'hour		41/81
JARL (Yann Eozen)		
Frankiz		41/103
JAFFRE (Job)		
Aogust Brizeug, marv div wezh		40/59
JAFFRENOU (Frañsez) gw. Taldir		
JEUSSET (T.)		
Diwar-benn anvioù-lec'h Breizh-Uhel		39/78
JOSIG (Melar)		

Istor ar brezhoneg	36/60	
LANGLEIZ		
Loeiz Herrieu, abostol Bro-Wened	39/5	
Ar feunteun zon	41/105	
LAURANS (Pier)		
War vlev du	41/70	
War ur plac'h mut	41/71	
LOUP (A.)		
Ar Bleizi	39/30	
MANER (Tad Juluan)		
Mab-den soñjit	41/26	
MEAVENN (Fant Rozeg)		
Levenez kreñv	41/127	
Soñjet em eus	41/128	
MEVEL (P. M.)		
D' unan dianket war an hent bras	41/132	
OLIER (Youenn)		
Prederiadennoù e sigur un nebeut skrivagnerion vrezhonek,		
Langleiz	37/39	
Meavenn	40/22	
OMNES		
Brezhoneg Ivonet Omnes	41/17	
PENNWERN		
Kloarek ar Bihan	37/3	
Iouan ar Bornik	38/23	
Kloarech Guegan	38/27	
Riwal	38/31	
PIKARD (Ivonig)		
Ar vered kozh	41/54	
PRADIG (R.)		
Ar C'herneveg o vont da get hag o tistreiñ eus a varv da vev		40/31
PRONOST (Per)		
O palarat	41/65	
PROUX (Prosper)		
Pipi an diwezhat	37/78	
Ar Fubuenn, lestrig a vrezel	41/35	
RIOU (K.)		
Ar Mabinogion	39/46	
RIOU (Jakez)		
An Tousegi	41/95	
Serr-Noz	41/96	
RIWALLON (Urien)		
Pedenn ar Varc'hegourien	41/121	
ROLLAND (Gwalc'h)		
Hon dispac'h hag hon istor (kendalc'h)	36/5	
Hon dispac'h hag hon istor (kendalc'h)	40/16	
SOHIER (Yann)		
E-tal ar Groaz	41/125	
TALDIR		
Dornskridoù brezhonek	37/74	
Salud dit, Ankou	38/63	
Pok ar mintin	41/77	
Ar c'han a gane Maggi	41/78	
TANGI (F. R.)		
Teir varzhoneg,		
Huñvre kreisteiz	40/5	
Palud	40/5	
An Islonk	40/5	
Ec'hoazadoù	41/136	
VALLEE (Frañsez)		
Ar gorventenn	41/64	
WADMAN (Anne)		
Keleier eus Bro-Friz	39/78	
WILHOU (Yann)		
Evit bevañ gant levenez	41 /46	

	Tad kozh da sul	41/47
X	Yann Bourc'his	40/37

EVIT 0 DEROU MAT
KINNIGIT D'HO MIGNONED AR BARZHAZ
kant barzhoneg berr (1350-1953)
ul levr kaer 156 pajenn
gant ur golo gwenn ha limestr
war Alfa-Navarre : 400 lur
war Outhenin-Chalandre : 650 Lur

EVIT HO PUGALE
PEDER C'HONTADENN EUS " AR MABINOION "
gant peder skeudenn
war baper boutin 80 Lur
war baper kaer 100 lur

AL LIAMM 43

AL LIAMM

Tir na n-ög

NIVERENN 43

Meurzh – Ebrel 1954

TAOLENN

Fiziañs, gant Ronan Huon	3
Baleadenn, gant E. Ar Rouz	4
Piv en deus lavaret, gant Rojer Brisson	5
Diwanenn d' an Amheol, gant Gunnar Ekelöf (br. G. Pennaod)	6
N'eus tonkadur ebet, gant J. Slowacki (br. P. Denez)	7
Dastumad Pennwern : Garand ar vriz	8
Endervezh, gant Y. Olier	11
An Den-heur, gant J. Konan	14
Blev Miriam, gant Issak Samokovlia (tr. Y. Drezen)	28
Penaos e adsaver ur yezh, gant Ceinwen Thomas (tr. P Denez)	33
Ar Gouezeleg, gant Per Denez	39
Kad Mag Muccrime	46
Ar paotr div wech reuzeudik, gant Benead	56
Notennoù lenn	57
Notennoù	66

FIZIAÑS

Klemm a reer. Meur a abeg a zo da glemm hag atav e kaver abegoù mat. Seul bouezusoc'h a se eo diskleriañ ivez hor plijadur pe hor fiziañs p' hon eus abegoù da harpañ ar re-mañ. Rak dalc'hmad hon devez fiziañs e don hor c'halon, n' eus forzh penaos e tro an traoù hag en desped d' hor c'hlemmadennoù.

En niverenn ziwezhañ e c'houlennemp digant hol lennerion hor skoazellañ da dizhout 400 koumananter. Ne ziskredemp ket warnoc'h ha koulskoude ez eo aet an darvoudoù buanoc'h eget na soñjemp peogwir e daou viz hon eus gonezet 24 lenner nevez ha tizhet evelse 409 koumananter. Trugarez eta d' an holl. Ma kendalc'h evelse hor bo 450 koumananter a-benn fin ar bloaz.

Komzet hor boa ivez eus gwerzh al levrioù. Evit gallout moulañ re nevez ez eo ret gwerzhañ mat ar re gentañ. Ret e vije deomp embann da vihanañ daou levr er bloaz. N' eo ket muí ar skridoù a vank deomp met an arc'hant d' o moulañ. Daoust da se e teuio er-maez er miz a zeu ul levr-deskiñ, a c'hellomp moulañ a-drugarez da vignoned a brest arc'hant deomp. Kontañ a reomp adarre warnoc'h evit hor skoazellañ da strewiñ al leur-se.

Chom a ra ganeomp meur a zornskrid, en o zouez ar romant hon eus dija komzet deoc'h anezhañ, met ouzhpenn daou c'hant pajenn a zo ennañ, neuze e vo ret gortoz. Ne vern, arabat eo fallgaloniñ peogwir an darvoudoù o deus prouet e c'hellemp kaout fiziañs,

Gant foenn hag amzer
E tarev ar mesper.

Ronan HUON.

BALEADENN

gant E. AR ROUZ

An noz a ziskenn plaen, ha plaen,
Ruz al loar 'vel genou ur forn ;
Amzer gaer ha klouar a ren.
C'hoar vihan, ro din-me da zorn.

Ha baleomp dre hentoù treuz
Maezioù hor farrez c'henidik,
Pell diouzh an dizurzh hag ar reuz,
An trouz hag al lorc'h pinvidik.

Sed ahont stivell Sant Ivi !
Me 'azezo war ar maen-korn ;
Ha te 'zaoulino da bediñ
Ha d' evañ dour gant palv da zorn.

Din-me marteze da evañ
Ur banne te a ginnigo :
Kemerout a rin 'n ur grenañ
Ha Sant Ivi hor bennigo.

Hed an nozvezh, war va muzell
E kavin blaz ur pok melus,
Glan evel pokig ur bugel ;
Pok va gwerc'hez karantezus.

War o c'hlood an evnedigoù
A gan c'hoazh 'raok menel kousket ;
'Us d' hor fenn evel bravigoù
E tispak fonnus ar stered.

Kouezhet eo an noz plaen ha plaen ;
Emañ bremañ uhel al loar ;
Kevrin ha karantez a ren !
Selaou kan ar galon, va choar !

(Evnig Penn ar C'hoad.)

PIV EN DEUS LAVARET...

gant Rojer BRISON

Piv en deus lavaret e oan paour
N' edon nemet ur soudard gant ur pikol kleze ?

Me 'zo pinvidik-me, va flac'h muiañ karet
Den ne oar pegen pinvidik on.

Sell ouzh ar mor dirazout
Aodoù trellus
Irvi spoum an aroziou
Avel an Aotrou e bannoù an heol
Kement-se a zo din.

An aour fetis
An aour ha n' eo ket stag ouzh ar varc'hadourien
Aour al lanneier
Adsked an heol war ar c'hoummoù
Koumoul ar c'huzh-heol
A zo din.

Daoust ha n' on ket pinvidik
Va merc'hig-me ?

Ha dreist pep tra
Ar vrasañ pinvidigezh
Ken bras
Ma n' eus den nemedon o kaout anezhi em dalc'h :
Skeudenn va dremm ez taoulagad.

6

DIWANENN D'AN AMHEOL

(Korollarium till skymningen)

gant GUNNAR EKELÔF

Ne welan ket mui va daoulagad
enebiñ a ra avat ar melre ouzh an amheol
en tu all d' ar prenestroù digor-war ar bed
e-lec'h m' emañ arc'hlas an noz
a skarzh kuit luc'h an neñv,
e-lec'h m' emañ an dremmwell o teuziñ
gant va hiniennelezh ha va goulakadurioù
betek ma 'z ay an aer ken sklaer ken ma c'hellin gwelout betek ar stered..
...o ra vezo va skuizhder
gourvezet abaoe pell hollwisket
war ur gwele abaoe pell diaozet
nebeutoc'h nebeutañ dihunet
d' ar vuhez gant ar vuhez o vont bihanoc'h bihanañ
...ra vezo ar surentez e teu pep meurded diwar habasketed,
ar gredenn ez eo marv va youl, ha va youl ar marv.

(diwar ar svedeg : Goulc'hen PENNAOD.)

7

N'eus tonkadur ebet...

N' eus tonkadur ebet a oufe va spontañ,
Sklaer-deiz e vo va hent tre betek an diwezh ;
Engehentiñ er boan, sed a ra va buhez,
Ha krouiñ ar gened va levenez krisañ.

Tec'het ar garantez he nozvezhioù eürus,
Steuziet bragerizoù ar beure roz ha glas :
Va freder zo hiziv oberoù kaer ha bras,
Leun a dristidigezh evel an heol pa guzh.

Bremañ n' anavezin ken buhez an emgann,
Hag e vo va spered skañv giz an alc'houeder ;
Ra gari reiñ dezhañ, Doue, eskell seder
Ma tinijo uhel e barr an neñvoù kann.

Juljusz SLOWAGKI,
(brezhoneg gant Per Denez
hervez an droidigezh esperantek, diwar ar poloneg, gant Juljan Tuwim.)

8

DASTUMAD PENNWERN

GARAND AR VRIZ

Person plouberz sur a woelle
En e gadeuor sermon pa pigne :
« Debonjour deoc'h ta, plouberis,
« Ag eur chelou trist en o hillis !

« E tena ar billet e zoc'h bed :
« Gant garan ar vris e digoezet
« A den truez outan nen deus ket ».

Garan ar bris sur a woelle
An or var e vam pa zigore :
« Savit, va mam, savit er mes
« Ma rin, eur voec'h c'hoas, o goele ez ».

- Pe te a zo skwiz deus va goelet
« Pe otramant skwiz gant va klenvet ? »
- Ne don skwiz na ganeoc'h na gant o klenvet,
« E tena dar billet e zoc'h bed
« A ganen, va mam, e zeo digoezet ».

Garan ar briz sur a woelle
Ar billet du dre ma tene :
« Garan ar briz, na woellit ket,
« Eunan benag a renk monet ».

- Me ne rachen fors eved tenan
« Penevid e va mam a zo klan,
« A zo seiz mis zo var he goele
« Na na neus den nemet ome ».

Ne voa ket e hir peurlavaret,
E kamarad en ti zo arrued :
« Asta fo, garan, depecha
« Me zefomp da Lannion da loja ».

Garan ar briz sur a woelle
An or var e vam dre ma selle (serre) :
« Mar de ta gorf te dar roue,
« Me garfe va hene da zoue ! »

Garan ar briz sur a woelle
En ti an aotrou person pa errue :
« Otrou person, tallit va alc'hoechou ;
« Kid da vellet va mam avichou.

« Ootrou sant Garan, va paeron,
« Grit eur miracle benag evid-on.
« Pa vezo va mam en e fassion,
« Likid kleier Cavan da sonn ;

« Pa vezo en e fassion vras,
« Likid kleïer Cavan da son glass ».

E Kemper, pa int arruet,
Kleïer cavan o dens klevet.
De gamarad an deus lavaret :
« Kleïer cavan a meus klevet ! »

E kamarad en deus lavaret
De korporal : « Kleïer Cavan en deus klevet »
- Possubl e ve e ve gwir kement se
« A te pemzek leo a hane ? »

- Lakit o troad var va hini
« Ag e klefot ive koulz a me».
E korporal an deus lavaret :
« Skrivit e gonje dan den man,
« Ma aï da vellet e mam zo klan ».

Garan ar briz sur a voelle
En ti an aotrou person pa errue :
« Otrou person, deud din va alc'hoecho
« Ma zin da vellet va mam a zo maro ».

- Possubl e ve gwir kement se
« A me neve deud a hane ! »
Garan ar vriz sur a woelle
An or var e vam pa zigore.

An or var e vam pan deus digoret,
Var leur an ti e voa lianet.
Daou pok dezi en deus roët ;
E galon dre n' enter a zo ranet.

Ar verchez ag an itron santez anna
A zo bet deus o liana.
Pelec'h e man ar c'har ag an den
Da c'hass an daou gorf da san Jerman ?

Jannton ar charlés, 10 février 1851.
Dastumad Pennwern, lev. 90, p. 24-27.

ENDERVEZH

gant Youenn OLIER

Ar paotr a lammas er-maez en ur strapañ an nor war e lerc'h. E diabarzh an ti e kleved gouelvan ha garm maouezed. « Aet on skuizh ganeoc'h a-benn ar fin » a youc'has Andreu a-raok redek kuit. « N' eus ket tu da vevañ ganeoc'h. » Dija e oa pell : sed an ti gwenn, deut bihan, e-tal tolzennad c'hlas ar gwez derv, harp ouzh ar run, war vord an hent blin gant ar boultrenn. Degouezhet e oa d' ar ganol : e-lec'h mont gant an hent-stlejañ avat e kavas gwell tremen en tu all dreist d' ar pont. Hedañ a reas neuze ar vriell c'heotek a gammedoù bras. Du-se a-zehou, e lein an dorgenn, plomm a-zioc'h moger ar mengleuz dilezet e oa en he sav bepred en oabl glas kroaz ar Mision diwezhañ, e penn ar vourc'h. Ha diouzhtu goude e valee Andreu dindan ar gwez fav hag ar gwez haleg ; dek eur beure e oa, digoc'henn an oabl, tomm an devezh dija; kavout a reas fresk gwasked ar gwez ; an dra-se a reas vad dezhañ. Pa zegouezhas da skluz ar Veuzid e oa torret d e varrad imor. Mont a reas a c'hwen e gof war al leton gleb. Hag eñ da soñjal neuze.

Envorañ a rae an tabutoù diniver a oa c'hoarvezet er gêr abaoe ma rae war-dro Breizh. E vamm o tamall dezhañ bepred chom hep klask gonit e vara da gentañ penn. « Pell 'zo az pefe bet ur plas er Postoù m' az pefe prizet labourat a-zevri e sell da arnodenn, e-lec'h koll da amzer gant ar brezhoneg. » Ha neuze « Ar re a ra war-dro an dra-se a fell dezho gonit arc'hant, paotr paour. Ar re-se a zo gwerzhet d' ar Voched ». Hag ar c'hoar o vont a-du gant he mamm.

Klasket en doa diskouez dezho ne oa nemet gevier ar radio Saoz ar pezh a gontent dezhañ. Mann d' ober avat. Ne c'houlent ket krediñ. Ha neuze e oa klemmuskerezh adarre « Ne garez ket da vamm ; ne fell ket dit selaou outi ». Daerou ur vaouez daoubleget war ur gador, kuzhet he dremm en he daouarn, e-tal ar fornigell er gegin, o ruflañ ha o tifronkal : « Hol lazhañ a ri gant da vrezhoneg ! Ne garez nemedout. Ma vefe da dad amañ... : abaoe da zek vloaz out gwashoc'h bemdez... » Ar c'hoar neuze da zont da frealziñ he mamm, o leñwañ a-gevret ganti a-benn ar fin hag o c'harmiñ : « Kerzh kuit 'ta, didalvez, ne welez ket zoken e peseurt stad emañ da vamm ».

12

Met evel un den disant e oa neuze, yen, stardet e javedoù, ha konnaret ruz hepken ouzh o sotoni ; menel a rae evelse harpet ouzh an nor, par e selloù er-maez war ur stignad gwez e skoaz d' ar prenestr, o selaou, hegaset muioc'h-mui tra ma kunuc'he e vamm outi hec'h un gant ur vouezh raouliet. « Setu petra eo reiñ deskadurezh d' ar vugale. Gwelloc'h am befe graet ouzh e gas da ziwall saout d' e zaouzek vloaz. Hemañ a zo diegus, siwazh. » O klevout an tamalloù direizh-se avat e teue d' o c'hasaat tost da vat. Diegus on-me ? Ha me prest da aberzhiñ pep tra evit va bro, da ober forzh pe labour, da reiñ va buhez, » a soñje-eñ en e bart e-un, leun a estlamm ouzh e galonegezh dispar. « Ar re-se avat ne soñjont nemet en o c'hof : gouenn gouerion sklav prest da sentiñ gant aon rak an trubuilh. Evit ar re-se n' eo adsevel ur vro netra nemet abuzetez. » Ha c'hwerv holl e kave gwelloc'h ober peoc'h.

Chom a reas e-giz-se da brederiañ ken na voe diwezhat en endervezh. Torret e oa d' ar wrez a-benn neuze. Dont a reas war-du ennañ skluzierez kozh ar Veuzid ; o tastum he div vuoc'h e oa : o c'has a rae bemdez da beuriñ war ribloù ar ganol. Ur vaouezig treut ha dister, blev louet dezhi, rouzet ha roufennet he dremm ; dougen a rae an hevelep lostenn dislivet ha takonet penn-da-benn d' ar bloaz. Bepred e oa war-dro he loened pe he farkad patatez a-dreñv d' an ti-skluz, hec'h unan penn a-hed ar bloaz. Pa zeuas hi e-biou dezhañ e taolas evezh ouzh he daoulagad bihan, sanket en o zoulloù, heñvel bepred o sell, un doare peoc'h loenek enno. Ha saludiñ a reas, hag er memes amzer e teuas endro d' e staon blaz gwinegr ar sistr a ginnige dezhañ pa rae ur gwel dezhi bep an amzer. Doñjer en devoe. « Setu c'hoazh tud va fobl, » a soñjas azrec'het holl.

Damc'houde e tremenas war an hent-stlejañ micherourion mengleuz ar Gêrgoat ;

war varc'h-houarn e oant ; o merzout a rae o vont war o fouez ahed ar ganol. C'hwec'h eur e tlee bezañ : ne gleved mui safar an drailherez. Anavezout a rae ar re-se : dont a raent da zebriñ da greisteiz e ti he mamm. Diverzout a reas Job Pouezevara da ziwezhañ holl : treuzigellat a rae war an hent-stlejañ, bec'h warnañ da vont warraok. C'hoarzhin a reas Andrev : Hennezh a oa gantañ ur mell pochad c'hoazh ha kounañ a reas fas disneuziet al lonker sistr : bemdez Doue e veze mezv. « Ma n' eo ket mezh, kaout gwad lor emose, hag ober bugale memes-tra, » a soñjas o paouez krenn a c'hoarzhin. Hag ar re-se a zlee « karout » war zigarez e oant kenvroiz dezhañ ! Dic'hoanaget e voe.

13

A-benn ar fin e chomas moredet gant luskellerez an dour o flistrañ disehan dindan stalafioù ar skluz. Huñvreal a reas. « Prenet en doa ur c'hi lous ha divalav hag evit e reizhañ e skoe gantañ, laouen holl. Sañset e garan koulskoude, a soñje. Goude-se e krede bezañ Rener-meur Breizh: kas a rae ur bern tud d' ar Groug, ha, souezhus e oa, heñvel mik ouzh Pouezevara, e vamm hag e c'hoar. Santout a rae pistigoù ar morc'hed, met poellata a rae dre e huñvre : dibabet on bet gant an Tonkadur evit saveteiñ Breizh. En em welout a rae bras-bras, a-stok e benn ouzh ar c'houlmoul, ar re all evel merion e-barzh e dreid, ha bamañ a rae kalz outañ e un. Arguiñ a rae : n'eo ket dlead an den-meur eo en em aberzhiñ met aberzhiñ ar re all disteroc'h egetañ. Sart e oa neuze evel unan a zo tec'het diouzh un arvar bras. »

Echuet e voe a-drumm e bennad kousk gant gwall-fraoñverezh ar c'hreñvlec'hioù-nij amerikan o skeiñ war-du an Orient. Serr-noz a oa deut gant ul loargann e-kreiz un oabl glas disliv. Ur vogedenn arwenn a riskle war dour du ar ganol. C'hwez ar c'hraou tost hag ar foenn nevez falc'het a zeuas betek ennañ hag a leunias e fronelloù. An ti-skluz gwennrazet e-barzh framm teñval ar gwez gant prenestr karrezek e solier a zeuas trumm dindan e sell. Didrouz a oa e pep lec'h, nep geiz labous, nep gwigour karr nep mouezh den ne oa da glevout, - nemet bepred fistilh moredus an dour o flistrañ dindan stalafioù ar skluz.

Andrev a grenas gant ar riv : gleb glizh e oa ar geot. Sevel a reas ha mont gant an dreuzell dreist d' ar skluz. « Reuz am bo c'hoazh fenozh, » eme ar paotr dre e zent, hejet gant ur gridienn.

AN DEN-MEUR

gant Jakez KONAN

War vete div lev diouzh Lannevern, war ribl ar mor, emañ an drev a reer Lokmerveñ anezhi. N' eo mui ur gêriadenn ha da gêr n' eo ket aet c'hoazh koulskoude. Lakaomp ez eo ur barrez vras evel ma kever meur a hini a-hed an aod.

Ma ! Eno eo o deus Lanneverniz pinvidik o ziez-hañv ha di ez a kalz a dud da dremen ar sulvezh, pa vez kaer an amzer, adalek ar Pentekost bete Gouel Mikael.

Pa nesaer ouzh Lokmerven dre an hent bras teret o tonet naou-dinaou diwar-du Lannevern, kentañ a weler petra eo nemet tourig an iliz o tiskouez e zaou gloc'h a-us d' un torkad gwez-tilh. Goude ur pleg-hent diwezhañ, setu m' en em zispak dirazoc'h ar barrez a-bezh. Ur straed hir, tiez gwennrazet en daou du dezhi, ho kas da greiz ar vourc'h. Eno, war ar c'hostez kleiz, ez eus ur blasennig e-lec'h m' emañ ar maerdi hag a-geñver da hemañ, bez ar soudarded marv er Brezel ; war ar c'hostez dehou e kever an iliz kozh, en-dro dezhi ar vered. Treuzit ar blasennig ouzh-eeun dirazoc'h ha div regennad all a diez gwennrazet, pouez-traoñ gante, ho plenio etrezek an hanternoz en ur ober pemp munud bete Porzh-Tuzeg ha, daou-c'hant metr pelloc'h, bete Trowern, an draezhenn velen.

E-kerzh an hañv, e Trowern, e vez tud, diavaezourion dreist-holl, o krazañ o c'hofoù, o c'heinoù, o divorzhedoù ha zoken kernioù o fennoù, ar re anezhe a zo moal.

E-lec'h e Porzh-Tuzeg, bigi eo a weler e-pad ar bloaz, un tregont bennak anezhe pa vezont holl aze, o luskellat war an dour, tra ma verzer alies war ar c'hae ur bodad paotred. Ha piv ar baotred-se ? Ar re-se, tud keizh, a zo pesketaerion !

Ar besketaerion, c'hwi a oar, en tu-hont ma c'houzont pesketa, heoliañ, evañ, tufañ, livañ o ziez ha dougen brageier ruz pe c'hlas peñseliet ha takonet, a gar divizout. E Lokmerven end-eeun ez eo war ar c'hae an hini en em blijont evit divizout, o selloù o parañ war o bagoù hag a-dreñv o c'hein ostaleri Jann ar C'horr e-lec'h ma c'hellont monet da waskediñ gwech hag amzer.

Eno, war ar c'hae-se, e vez kempennet dilhad tud ar barrez a-bezh. Ya, barnajet e vez a-wechoù kaozioù ha n' int ket kar d'ar wirionez penn-da-benn, na zoken kilhoroù. Diouzh klevout ar besketaerion o komz avat e c'houvezot diarvar piv a zo deuet-mat dezhe ha piv n' eo ket, piv a zo un den ha piv n' eo ket.

15
Kammed, kammed ebet koulskoude ne glevot anezhe o kavout abeg e Jeffig Skeren, rak hennezh a zo war o faperoù ha mar deus bet graet vil dezhañ un dervezh, n' eo ket gant ul Lokmervenad eo e voe.

Jeffig Skeren a zo « en em zibabet » hag un enor eo evit ar barrez.

N' enevit ket anezhañ ? Ar Skeren-se n' eo ket ar skolaer eo. Nann. Ar skolaer eo Charlez Skeren : c'hoazh e toug lunedoù moull korn pe askorn war e fri hag e son saksofon. Mat ! Jeffig Skeren a zo ur breur d' ar skolaer.

N' eo nag ur skoanard nag ur falleganig ar Charlez ; Jeffig, avat, a zo kalz brasoc'h egetañ paneogwir en deus pemp troatad hanter bennak a vent. Daoulagad glas, sklaer evel lagad an naer, a zo en e benn, ha war c'horre, evel un tog-kistin, ur greouchennad vlev melen.

Tapet en deus ar paotr bezañ implijad e burev ar B.N.B.K. (Bank an Naoned hag ar Broioù Keltiek) , plasenn Daldir e Lannevern. Setu perak e toug, war ar pemdez, ur gwiskaman-enkefier glas, bevennet ar porpant anezhañ gant ul lietenn arc'hantet, ha setu perak ez eo troidellet e gasketenn gant ur c'haloñs arc'hant

ivez, mik evel hini un ofiser-mor. E-kreiz ar gasketenn-se, war an diaraog, ha war daou gostez kolier e borpant ez eus ur skoedig, en arc'hant bepred, ma c'heller lenn warnañ ar peder lizherenn bouezus : B.N.B.K.

Ouzhpenn-se ez eo Jeffig un neuñver dispar, ur reder war varc'h-houarn diouzh ar c'hentañ, ha trec'h e vez d' an holl er c'hornad-bro evit sevel ar berchenn.

Hogen, mar deo Jeffig frammet-mat ha kreñv a gorf, n' eo ket ledan plas e loa, m' hen lavar deoc'h, evel ma c'hoarvez a-wechoù gant ar pezhioù tud, siwazh !

Ret e vije bet deoc'h klevet ar brezegenn en devoa graet d' un toullad paotred da zevezh an adpardon d' abardaez dirak ti Jann ar C'horr. Eizh deiz goude ma oa bet degemeret da implijad en Ti-Bank e oa se ha graet e oa bet meuleudi dezhañ abalamour d'e wiskamant nevez. Ac'hanta, a-viskoazh en devoa-eñ soñjet e oa an unvanwiskoù traoù dreist-par, ha pan en devoa tro da zisplegañ e soñj, hen ober a reas en un doare helavar-tre. Setu amañ un diverrañ eus e brezegenn :

Pell a zo, emezañ, e rede dre e empenn ur menoz bras, meur, estlamm, hag a vefe gouest da adlakaat urzh er vro, ken fall benneget an traoù enni ur pennad brav a zo.

16

Dre an dilhad end-eeun eo ez eus tu da zegas gwellaenn er bed.

E Breizh, da skouer, e tegemerfe pep den ur gwiskamant unvanstumm ha rannet e vefe an dilhad etre an dud evelhen : kement-hini a zo Ar C'hamm e anv, a rankfe dougen ur gwiskamant glas hag un tog du ; tud Ar Go, brageier glasgwer, porpantoù glas-ruz ha bonedoù ruz ; Ar Gonaned, brageier gwenn, korfennoù-stamm melen ha kalabousennoù louet ; Ar Weganed, lavregoù du, chupennoù glas ha gell ha kabelloù krenn liv d' ar roz-uku ; Ar Vrazion, brageier pennpeul marellet a bikoù melen-kistin ha du, yetroù arc'hlas, rochedoù limestra ha togoù kern-uhel du-pod evel ma vez peurliesañ ar seurt togoù-se, hep ankouaat ar sked lintrus anezhe, hag all...

Evit klokaat an adurzhiañ-se e c'hallfe Leoniz, paotred o c'hezeg bras, gwiskañ heuzoù kentrek, Tregeriz, botou-ler melen-izel abalamour dezhe da vale « delikat », ha Kerneviz, botoù-koad kizellet (bravoc'h eo da zañsal gavotenn ar Menez). Ar Wenedourion, int-i, e vefe en o zreidoù bodreoù chouanted.

Ha gant an deizioù gouel pe bardon, eme Jeffig en ur glozañ an displegadenn uhelvenoziet-se, o defe an holl Vreizhiz an aotre da ginklañ o zogoù gant ur bluenn wenn-ha-du !

Ar seurt prezegenn, evel ma c'hellit soñjal, a voe kavet kaer-kenañ gant an holl. An dibenn anezhi dreist-holl a reas berzh. Ac'hane e voe youc'het da Jeffig Skeren ha monet a rejod d' e heul da welout ha manet e oa un dakenn sistr bennak en ostaleri Jann Ar C'horr.

E gwirionez, ret hen anzav, parrez Lokmerven he deus ganet ur pabor, kreñv a gorf, poellek a spered ha distagellet a deod, en ur ger, ur paotr ha n'heller ket ober al lorig gantañ.

Diwezhañ sulvezh miz Mae a lintre.

War ar vro, pe gentoc'h a-us, e skede an heol, ha, goude na oa nemet dek eur diouzh ar beure anezhi e oa krog da dommañ da vat. Splannañ a rae laouen en ur deurel e vannañ gant largentez war ar maezioù glas, war ar c'hleuzioù alaouret ha war Jeffig Skeren, pignet war e varc'h-houarn reder, o tiskenn diskabell gant hent bras Lannevern war-du Lokmerven.

17

Er beure drant-se en em sante ar paotr yaouank leun a yec'hed hag a laouenidigezh. Selaou a rae gant plijadur ouzh geizadeg an ec'hwedered o c'hlizenniñ eus lein an oabl war an edoù tener ha war ar patatez en o bleuñv. O ya ! Pegen kaer ar grouadelezh pa vez heol, ec'hwedered, un hent brav ha Lokmerven e penn an hent !

Pa dizhas tiez kentañ ar vourc'h e kavas da Jeffig he devoa gwisket e barrez c'hinidik dilhad gouel d' e zegemer. Er liorzhoù e oa dispaket bleuñv-Sant-Ewan, roz ha jenofl, hag an dud o devoa digoret prenestroù o ziez. Dremmoù seder a weled war dreuzoù an norziou ha war hent an iliz, hag o kanañ en o zourig e klevet an daou gloc'h meneget uheloc'h.

Eus kreiz kalon an enkefier e savas al laouenidigezh dre gorzennoù e skevent, dre e c'houzoug ha dre e gorzailhenn betek e ziweuz :

- « Kaerat devezh sul ! Un devezh-gouel ! » a lavaras a vouezh uhel outañ e-unan ha sonnaat a reas war zibr-ler e varc'h-houarn endra stlake gouzougenn e rochedig wenn e zivskouarn gant an avel.

A-gleiz hag a-zehou e saludjod anezhañ seder dre ma treuze ar vourc'h. Respont a reas laouen, met ne chomas ket a-sav. Derc'hel a reas gant e hent etrezek Porzh-Tuzeg.

Un tamm pelloc'h eget an iliz hag eñ o verzout un dra iskis war greiz an hent : un den dianav a gerzhe war e c'horregezh davet ar mor, evel pa vije an hent holl dezhañ. Ur mell paotr a dri-ugent vloaz bennak e oa, un togig bihan fentus war e gitern, ur c'habell plouz kalet heñvel a-walc'h ouzh ur fourmaj war ur plad. A-dribilh ouzh e gostez kleiz war-bouez ul lerenn o treuziñ e gein hag e vruched a-veskell e oa ur voestig du, enni moarvat ul luc'hskeudennerez pe ul lunedoù-tostaat.

Jeffig, pa voe aet e-biou dezhañ, ne voe ket evit mirout a dreiñ e benn da sellout pishoc'h outañ :

- « Biskoazh kemend-all, emezañ, un diavaezour e Lokmerven d' ar c'houlz-mañ 'r bloaz ! »

Prestik goude ez erruas e Porzh-Tuzeg. Diskenn a reas diwar e varc'h hag eñ neuze, harp ouzh e jao, da chom d' arvestiñ ouzh ar mor o treañ, ouzh ar ruzelennoù o redek dre al lec'hidenn hag ouzh un toullad bagoù war ar sec'h, disoñjet-naet gantañ oristal e dog-fourmaj.

Pan en devoe sellet e walc'h ouzh ar mor, ouzh al lec'hidenn hag ouzh an toullad bagoù, hag eñ o sevel e zaoulagad d' an nec'h etrezek an oabl. Ne oa mui a ec'hwedered ennañ evel bremañ souden : gouelaned eo a spurmanted en dro-mañ, ur vandennad anezhe. Plavañ a raent, troet o fennoù da gaout ar Reter, peuz-difiñv o diwaskell gante. Un aezennig diamont o douge ha lavaret ho pije e oant o tiskuizhañ e bannoù an heol en ur eveshaat ouzh Lokmerven, ouzh Porzh-Tuzeg hag ouzh an hini a oa e zaoulagad o parañ warne, Jeffig Skeren e anv.

18

Ken boull e oa an aer ma verze hemañ ervat o figosoù melen o tigeriñ pa laoskent o garm gouraouet.

A-sav-taol e hañvalas da Jeffig e oa diskennet ur ouelanenn hep gouzout dezhañ a-dreñv e gein. Santout a reas taolioù pigos en e skoaz dehou. Hag eñ da dreiñ e benn, hogen e-lec'h ur pigos melen, ur pezh biz gwenn kuilh eo a welas. Neuze e troas e gorf a-bezh evit gouvezout piv a oa perc'henn d' ar biz amzere-se. Ha setu ma oa ur pikol paotr, kement hag eñ e-unan, un tri-ugent vloaz bennak dezhañ, ur c'hof person-kanton outañ, ur voestig-ler ouzh e gostez hag ur pladad fourmaj war e benn !

- « Ho tigarez, Aotrou, a c'houlennas perc'henn ar biz, ar c'hof, ar voestig hag an tog digant Jeffig e galleg, daoust ha n' hellfec'h ket lavarout din pe anv eo an draezhenn vihan a zo aze a-gleiz ? »

- « Trowern, » na respontas ken ar paotr yaouank hag a zisplije dezhañ feson an oristal.

- « A ! Trowern eo ! Mat. Hag un ostaleri bennak a zo digor en ho kêriadenn, din da vonet da leinañ bremaik ? » a c'houlennas an oristal adarre.

Gant e viz e tiskouezas Jefffig ostaleri Jann ar C'horr :

- « Kit, emezañ, da « Ziskuizh ar Pesketaer ». En ti-se e vez diskenn e-pad ar bloaz. »

Lavaret se gantañ, sevel Jefffig neuze war e varc'h-houarn ha kambliañ dre hent Beg-Ar-Vir davet ti e vamm, er penn all d' an draezhenn.

Sioul ha plijadurus e tremenas an devezh evit Jefffig Skeren. Gant e verenn e chomas e ti e vamm, a-gevret gant e vreur Charlez, ar skolaer, ha war-dro teir eur ez ejont d' an aod da Drowern. Kavout a rejont eno un nebeut paotred yaouank all hag en em lakajont da c'hoari war an draezhenn. Goude-se, daoust d' an dour bezañ yen a-walc'h c'hoazh e c'hoantaas meur a hini anezhe, Jefffig en o zouez evel-just, monet da gouronkañ. Ne chomjont ket pell da neuñvial, hogen pa voent deuet eus an dour e voe ret dezhe ober ur c'hoariadenn adarre da dommañ o izili.

Pa dostaas da c'hwec'h eur noz (e gwir, e oa c'hoaz pemp munud bennak da c'hwec'h eur) hag int o santout dre o c'horf an ezhomme eus ul louzoù-kreñvaat. Anezhe o-unan, o selloù a droas war-du ar Reter, war-gaout Porzh-Tuzeg, davet ar c'hae, bete « DISKUIZH AR PESKETAER », termen ar pennad-bale o devoa d' ober a-benn gallout saouriñ, evit arc'hant, an traoù nerzhus dalc'het gant Jann Ar C'horr.

19

Kerkent hag adwisket, setu ar baotred en hent, diviz kaer ha c'hoarzhadeg gante dre ma 'z aent, rak ebat eo bezañ yaouank, lirzhin ha dibreder hag un devezhiad plijadur ho laka en ho pleud. Evel-se 'ta e kerzhent a-hed ar mor bremañ en e c'hourlenn. Un toullad bagoù a oa war o eor e-kreiz ar porzh. Anaout a reas Jefffig ar « Reder-Mor », ar « Steredenn C'hlas » hag ar « Vari-Loeiza ». Bag e eontr Jozeb Skarabin (va zonton Job) , ar « Charlezenn » a oa ouzh ar c'hae e-touez re all, stag he bos ouzh un organell. Pesketaer ebet ne oa war-dro : ar sul ivez gant an dud a vor.

Meur a zen koulskoude a oa o sellout ouzh ar mor hag ouzh ar bagou diwar ar c'hae, baleerion-sul, Lanneverniz an darn-vuiañ anezhe.

Ne daolas ket ar baotred a devezh oute ; dre dreñv o c'hein e tremenjont hag int-i en ostaleri.

A-boan he devoa Jann Ar C'horr o saludet gant komzoù hegarat evel « Erru 'oac'h, kanfarded ? », ma voe klevet un trouz bras er-maez. Ne oa ket morgan an houlennoù dirollet e Trowern, na garmadennoù raouliet mil gouelanenn: Nann, ur yudadeg vraouac'hus an hini e oa, taolet gant kant korzailhenn mouezhiet-kreñv. Leuniañ a reas an aer sioul betek ar vourc'h ha pelloc'h zoken peogwir e c'houvezjod diwezhatoc'h e oa bet klevet ar c'hri ankenius-se e koumanant ar Poullfank, ul lev vat ac'hane, e-lec'h ma oad o c'hoero da enderv.

Ma ! Ar c'hri-se a oa bet taolet diwar gae Porzh-Tuzeg !

Kerkent ha m' o devoe tregernet evel-se ar gwiskadoù aer a c'holoe ar vro d' an ampoent e troas selloù kement Lokmervenad hen klevas, war-du Porzh-Tuzeg. Goude-se e troas korf pep hini etrezek al lec'h-hont ha dindanañ e krogas e divc'har da labourat, da bikat stank ha da zornañ hent, pezh e ziskouez sklaer hag anat penaos, en darvoudoù pouezus, e c'houzer redek kerkoulz e Lokmerven hag e Lannevern.

Lod eus ar baotred a save pennoù o daoulin ken uhel ha poull o c'halon en diaraog, serret o daouarn gante, en ur hejañ o divrec'h evel riboulerioù ur mekanik ; lod all, a gave gwell teurel o zreid, en tu diadreñv, a-live gant tamm tevañ o revr (gant resped deoc'h !) en ur gas o divrec'h a gleiz da zehou hag a zehou da gleiz evel pa vijent bet o falc'hat ur parkad foenn. Ar merc'hed, strobet en o brozhioù strizh, diouzh ar c'hiz a oa d' ar c'hoùlz-se, a stlabeze o zreid a-ziavaez bep ma skarent. Hag e skarent, fidamdoukou !

20

Ne vane war-lerc'h ar rederion nemet ar merc'hed kozh o tistreiñ eus an

draezhenn, bet fiziet enne ar vugale vihan hag ar panerou.

Ur marzh e oa gwelout an holl o hastañ fonnus evel-se dre straedoù ar vro davet an hevelep lec'h, peadra da reiñ deoc'h da gompren en ur selladenn pegen ouesk eo broiz Treger ha pegen skañv an dro anezhe : ur genou frank o huchal pe gant gouzoug mouezhiet-kaer o hopal a-unvan e korn pe gorn eus ar vro, setu kerkent chao etre an dud da c'houzout piv a vezo da gentañ e lec'h an huch hag an hop ! Atav e vezont prest da redek !

Evel-just, e « Diskuizh ar Pesketaer », an trouz bras graet gant ar c'hant gourlañchenn mouezhiet-kreñv ne lezas ket an dud diseblant. Dilammat a reas Jeffig Skeren hag e geneiled eus an ostaleri evel pa vijent bet fraoñvet e-maez an ti, gant an ostizez.

A-benn neuze endeo e oa ur stal dud e beg ar c'hal. Gorjet e oant eno evel gwenan e toull o c'holoenn, an eil o voutañ war egile da glask teurel ur sell war ar pezh a dremene, a-hervez, en dour. Paotred yaouank, firbij-holl, a yae hag a zeue, a rede hag a zirede, a lamme hag a sailhe en-dro d' an engroez evel sardoned o troidellat en-dro d' ur wezenn-avalou en he bleuñv. Touet ho pije e oant da vat gant ul labour bouezus bennak ha koulskoude ne raent ket ur fulenn war plaen.

En ur dremen e klevas Jeffig unan anezhe o c'houlenn : - « Petra ? N' eus kanod ebet er vro-mañ ? Pelec'h emañ, ar besketaerion ? N' eus pesketaer ebet ? »

Jeffig ne glaskas ket gouzout petra a c'hoarveze. Ar re all ouzh e heul, hag eñ dre douez an dud. A daolioù skoaz e toullas e hent ha ne voe ket pell o 'n em gavout e beg ar c'hal dirak ar mor.

Eno, en ur serr-lagad, en ur momedig hepken, e teuas da gompren en traoù :

Petra a oa kiriek d' ar c'hant korzailhenn mouezhiet-kreñv da vezañ laosket un huch skrijus dre sioulder an abardaez-sul ? Petra a oa pennabeg d' an dud d' en em vodañ e beg ar c'hal kentoc'h eget dirak « Diskuizh ar Pesketaer » ? Ha perak en devoa ranket, eñ e-unan, lammat e-maez an ostaleri ha toullañ e hent dre douez an dud da zegouezhout el lec'h m' en em gave bremañ ? War an taol e kavas Jeffig respont d' an tri goulenn-se.

21

Pa vezer lemm a spered ivez, ne vezer ket pell o tonet d' anavezout an doare ! Da skouer : ur stokadenn a glever ; d' hec'h heul e weler div wetur-dre-dan eilpennet mesk-ha-mesk en douflez, tammoù gwer, rodoù, un tog h.a., a-stlabez war an hent ha treid o tifretañ a-us d' al lann war ar c'hleuz : ac'hanta ! a-walc'h eo ur sell da gompren en traoù ha diskleriañ a c'heller, hep riskl da faziañ, ez eus bet eno ur gwallzarvoud !

Evel-se, dres, eo e komprenas Jeffig en traoù pa 'n em gavas er regennad-tud kentañ, dirak ar mor glas.

Dindan e selloù ' en em zispake un daolenn ha na oa arvar ebet da gaout diwar he fenn : ur gwall-zarvoud a oa c'hoarvezet e Porzh-Tuzeg !

Pemp metr diouzh beg ar c'hal, un tog iskis, liv ha stumm ur fourmaj war ur plad dezhañ, a vraniskidelle gouestadik war dri gourhedad dour sall ! Ar paour-kaezh kabell, penaos e oa degouezhet aze ? N' oa ket diaes lavarout, rak daouzek metr hanter pelloc'h e oa un dra bennak o tifretañ, o tiflapal, o yudal hag oc'h eonenniñ : un den e oa, anat-mat diouzh ar vouezh a grie e-kreiz an eon.

War a hañvale, en devoa kemeret an den-se da c'herioù-ardamez
« NEUÑVIN PE VEUZIÑ »

Siwazh dezhañ, ma ne veuze ket c'hoazh ne neuñve ket kennebeut : pailhokat dour ne lavarant ket ha... pellaat diouzh an douar kalet !

En-dro da Jeffig, den ne fiñve, an holl a glemme hag a zamante :
- « An den reuzeudik ! » a ouele ur gwaz mat.

- « Penaos e vo tennet alese ? » a c'houlenne un ene madelezhus.
- « Ur walenn-grog am eus er gêr, met re verr e vefe, » eme unan all.

Komz a rae pep hini ; den 'avat ne rae an neuz da vonet war sikour ar pailhoker-dour. Ne oa nemet an toulladig paotred yaouank am eus lavaret uheloc'h, a gement a vije o sardonenniñ ac'hanen hag aleshont, ar soñj gante e oant oc'h ober un dra bennak evitañ.

Diouzh ar beure e oa degouezhet gant Jeffig Skeren un oristal bras, ur c'hof person-kanton outañ, ur voestig-ler ouzh e gostez. Ma ! bremañ e oa aze, war vete seizh metr diouzh e dog, oc'h ober eon er mor. Penaos e oa en em gavet el lec'h risklus-se ? N' ouzon doare, met pa oa aet e oa aet !

22

Ne chomas ket Jeffig d' ober daou soñj na da dermal. Tennañ a reas prim-ha-prim e borpant stamm glas-du, lemel e vragoù-flanella da sul, diwiskañ e roched c'hlas ha stlepel e votoù-lien dioutañ. Fiziout a reas an holl dilhad-se en e vreur Charlez a oa erruet en e gichen. N' en devoa miret nemet e vragoù-dindan. Hag eñ neuze, plaouf, war e benn en dour.

Kerkent ez eas diwar wel !

Eus al lies bras a dud a oa oc'h arvestiñ ouzh an taol-kaer-se e pignas war-du an oabl hag ar gouelaned o nijelliñ ennañ, ur youc'hadeg a estlamm. Stlakal a reas darn o daouarn ; darn all, merc'hed anezhe, a lakaas o dorn war o daoulagad, evel pa vijent bet spontet o welout un den o splujañ e Porzh-Tuzeg hag ar mor en e c'hourlenn :

- « Emañ o vonet da veuziñ, » a lavarent.

Marteze, e gwirionez, ez eo gant ar bragoù-dindan eo e oant spontet, evel ar posubl, evelkent, e tlefed ober van eus un tamm « slip » pegen dizere bennak e c'hall bezañ pa vez ur c'hristen war var e vuhez. Tud efeek, ar merc'hed !

Bepred, c'hwec'h metr eus ar c'hae e toullas adarre penn Jeffig gorre an dour. Ober a reas ar paotr un dic'hwezhadenn. Gant e zorn e kasas diwar e zremm div gizennad vlev a oa deuet d' e zallañ ha dao neuze war-du an hini a oa o yudal unnek metr hanter dioutañ e-mesk an eon.

Ha setu ma tremenas dindan daoulagad divarc'het ar sellerion un nebeut munutennadoù a enkrez, a from hag a anken. Penn-da-benn d' ar c'hae e oa tud bremañ, met kement e voutent an eil war egile ma voe darbet da n' ouzon pet bezañ taolet war o fenn en dour war-lerc'h Jeffig. (Mar bije degouezhet kement-se, en em c'houlennan da bet eur en divije hemañ echuet e zevezh !)

Neuñvial a rae enkefier ar B.N.B.K. evel ur morhoc'h. Monet a reas e-biou d' an tog a vranskidelle atav ken flour war an dour. A nerzh e gorf e skoe davet e bal ha ne voe ket pell ouzh hen tizhout. Hogen aze e teraouas un abadenn all !

Krog e oa perc'henn an tog da skuizhañ, lonket gantañ meur a vannac'h dour-mor : berr e oa endeo war e gezeg. Pa ouzas e oa erruet Jeffig Skeren en e gichen ha pa santas hemañ oc'h esae lakaat e vrec'h dindan e c'hroñj-eñ dre dreñv e gein, evit e sachañ aesoc'h a se, e teuas a-benn d' ober un dro greñn, da gregiñ e brec'h e saveteer ha d' e vriatañ ar startañ ma c'hallas. Kaer da Jeffig klask dispegañ, ne oa netra d' ober : egile a waske gant nerzh an anken, evel unan o santout bizied yen an Ankou o herlinkat plantoù e dreid.

23

Nec'het Jeffig ? Tamm ebet avat. Desket en devoa penaos e reer er seurt plegioù : en em leuskel a reas da vonet d' ar strad evit lakaat ar bajaneg da ziskregiñ. O-daou enta ez ejont diwar wel ha melezeur an dour a serras warne. Nec'hamant bras e-touez an dud ! Seizh eilenn diwezhatoc'h avat o gweljed en-dro o tonet war-benn. Hogen bepred e oa briataet-start Jobig Skeren gant an oristal ; hemañ a seblante lavarout evel ar barzh :

« Evel ar vrennigen ouzh ar roc'h
Va c'halon 'zo stag ouzhoc'h ! »

Ma voe ret da Jeffig en em lezel div, teir, peder ha bete pemp gwech da sankañ dindan an dour. Ken lies tro e steuzient evel-se er mor e kleved un « O ! » rangalonus o tonet eus mil bruched an engroez war ar c'hae, hogen pa zeuent war-c'horre, un « A ! » divec'hius eo a gleved bep taol. Me hag a oa eno pa c'hoarvezas an traoù a zanevellan amañ deoc'h, n' ankouain biken an arvest bamus-se eilet gant sonerezh estlammus an « A » hag an « O » distaolet a-unvouezh gant ur boblad tud :

Daou benn o tiskenn dindan dremm c'hlas ar mor : O !

Daou benn o tiflukañ war-benn : A !

A!O! - A!O! - A!O !...

Brav e oa, gant ur vraventez from-us, dilavarus, andisplegus, didaolennus !

Mar diskenne Jeffig dindan an dour avat, ne oa ket, sur-mat, evit lakaat an dud da zistagañ « A » pe « O », hogen, evel m' am eus lavaret c'hoazh, evit lakaat paotr e dog plat da ziskregiñ. Strevial-distrevial, tufañ hag esae beogal an hini a rae hemañ gwazh-ouzh-gwazh bep gwech ma sante an aer en dro d' e benn. Nemet diskregiñ, a-hervez, n' oa ket merket war roll an abadenn ha ne felle ket dezhañ ober.

N' oa ket dinerzhet Jeffig evel an difreter divalav. Padal e teue un tamm fiker dezhañ en e gostez kleiz. Dre-se, pa n' oa tu ebet d' ober a-hend-all setu a reas : gant kalz a boan e tistrobas e vrec'h dehou, hag eñ neuze darc'haouiñ melloù taolioù-dorn gant penn an danvez-beuziad eneber. Hemañ a soñjas dezhañ edo Jeffig o vonet d' e lazhañ. Mar difrete a-raok, bremañ e tispac'he ha setu un emgann-daou spontus o tirollañ e kreiz porzh-mor Lokmerven.

Du e oa deuet ar c'hae hag ar c'hal da vezañ gant an dud. Ar re-mañ ne gomprenent mann ebet ken er pezh a welent. Ken saouzanet e oant gant an daou a oa en dour oc'h en em zorneta ma ne raent mui nemet garmat ha yudal. N' en devoe hini anezhe ar skiant da lammat en ur vag ha da gregiñ en ur roeñv evit monet d' ar paole war o skoazell.

24

Dizale koulskoude e c'hoarvezas ar pezh a zlee c'hoarvezout : an hini koshañ ha skuishañ eus an daou c'hourener-dour a fallaas. Deraouiñ boudinellañ a reas e benn, santout a reas e nerzh o vonet digantañ. Klevout a reas kleier o seniñ, mougañ a ginnige ober. Tagañ a rae. Edo war vervel, badaouinet gant taolioù-dorn e saveteer iskis !

Donet a reas na ouie mui petra a dremene ha pep skiant a gollas eus traoù ar bed-mañ : failhet e oa !

Pa welas Jeffig an oristal « kazimant » ken laosk hag ur sac'had lienaj en e gichen e chomas ur pennadig da zialaniñ, krog ennañ bepred. Soñjal a rae n' en devoa bet biskoazh kemend-all a boan o neuñvial war-lerc'h an houidi da zeiz ar redadegoù-bigi. Evit gwir, gant an houad-mañ e oa bet bec'h warnañ !

Graet ar soñj kaer-se gantañ, hag eñ o lakaat e vrec'h dehou en-dro da c'houzoug ar paotr tev ha stagañ da neuñvial war e gein en ur zerc'hel penn an damveuziad war e vruched-eñ a-us d' an dour. Tra ma neuñvie war-du ar c'hal e kave dezhañ e oa un dra bennak o tonet gwech hag amzer d' en em luziañ en-dro d' e zivc'har, met ne reas ket a van.

Bremañ e komprenne ar sellerion pebezh taol-dreist en devoa graet adarre mestr-neuñver ar barrez. Dre ma nesae ouzh ar c'hal e strinke ar youc'hadennou a levenez hag e tarzhe stlakadeg-daouarn a bep tu.

Pa voe erru tost a-walc'h en em astennas divrec'hioù hag a grogas en oristal, semplet atav, evit hen kas da di Jann Ar C'horr.

Neuze e chomas Jeffig en e sav, e dreid en dour, e traoñ dinaouenn ar c'hal, da gaout e alan. E-keit ma touged ar saveteadenn vadaouinet e c'hellas gwelout petra a oa bet o klask strobañ e zivesker : bez' e oa ur voestig a-dribilh ouzh ul

lerenn hag a oa o vransigellat c'hoazh evel ur momeder etre daou zouger ! An oristal en e bezh enta en devoa tennet eus an dour. Hopala ! Nann, n' en devoa ket, rak du-hont, pemp gwalennad dioutañ edo an tog fourmajheñvel o luskellat atav ken flour all war an dour sall !

Daoust da freskadurezh en abardaez hag en desped da yender ar mor, n' en devoa Jeffrig tamm riv ebet kement a vec'h ha m' en devoa roet. Klevout a rae an holl o youc'hal dezhañ : mezevet ne oa ket avat gant al lorc'hentez, rak outañ e-unan e lavare n' en devoa ket sevenet e zlead penn-da-benn. Ne selaoue nemet ouzh mouezh e goustiañs. Met ouzhpenn he mouezh, e goustiañs he devoa ul lagad hag an tog end-eeun kollet diberc'henn e-kreiz ar mor a oa heñvel ouzh al lagad rebechuse. Arabat e lezel enta da ober stek pelloc'h.

Ha Jeffrig, troet e gein ouzh ar c'hae, ouzh ar c'hloar oc'h astenn a-vremañ he divrec'h karantezus d' e gaout, a splujas er c'hoummoù adarre. Ne voe ket pell o neuñvial betek ar c'habell iskis hag o tonet en-dro gant hennezh en e zourn dehou e-keit ma hope an dud gant ar blijadur, a-nerzh o c'horzailhennoù :
« Bevet Jeffrig ! Bevet Jeffrig ! »

Pignal a reas neuze enkefier ar B.N.B.K. (Plasenn Daldir, Lannevern) da vat war zinaouenn ar c'hal e-maez an dour. Ur pennadig e chomas a-sav a-raok monet etouez an dud. En em ziskouez a rae dezhe en e splann.

Lavaret ho pije Liros, doue ar mor, o tiflukañ eus an tonnoù, un doue yaouank frammet kreñv-eston, ur pennad blev melen dezhañ, en e zourn dehou un tog plat, etre e zivc'har un tamm « slip » gwenn hag an dour o poulladiñ en-dro d' e dreid.

Luc'hskeudennet e voe evel-se gant skrivagner « AR C'HORNNOG », kelaouenn vras Roazhon, a oa dres e Porzh-Tuzeg d' an ampoent.

Goude un ehanig e kerzhas war-du an dud.

Hag eñ diwisk ha gleb, a-vec'h e c'hallas ober dek kammed davet « DISKUIZH AR PESKETAER » dre douez ar re a felle dezhe ober dezhañ o gwellañ gourc'hemennoù ha pa rankjent en em genvougañ holl en ur gevred hag e vougañ-eñ war ar marc'had. Dre eurvad e tapas e vreur hag e gemaradoù nesaat outañ, e sammañ war o divskoaz hag e zougen d' an ostaleri e-lec'h ma voe graet dezhañ gant Jann Ar C'horr un degemer a chomo brudet en istor ar barrez. Biskoazh den, ivez, n' en devoa degaset d' he zi kement a everion war un dro.

Antronoz ar beure abred e c'hraevie Jeffrig etrezek Lannevern war e varc'h-houarn reder. Kaer an amzer evel en derc'hent. Ur stignad brumenn danav a zamskeude an dremmwel : seblant a amzer vrav, sur. Chaogentañ a oa gant al labousedoù er girzhier, met ar maout a yae gant ur voualc'h hag a sutelle dispar ton gavotenn Skrignag.

Goude ma 'z oa bet skuizhus e zevezh-sul er gêr e nije Jeffrig, koulz lavarout, marc'h-houarn hag all, war-du e labour. Hañvalout a rae dezhañ e oa kresket e nerzh en ur ober peder eur warn-ugent en un doare burzhudus. Pouezañ a rae war an troadikelloù hep tamm poan. Biskoazh n' en devoa kavet ken brav all bevañ.

26

An holl a seblante e garout. En derc'hent d' an noz en devoa hen gwelet a-walc'h. Lid a oa bet graet dezhañ hag en holl diez Lokmerven, sur-mat, ne oa bet kaoz en noz-se nemet eus e daol-kaer. Bremaik e Lannevern e vefe, hep mar ebet, degemeret gant distalac'h, rak a-benn bremañ e oa bet lennet « Ar C'hornog ».

Hag evel-se e voe kont, er B.N.B.K. dreist-holl. Renner an ti end-eeun a zeuas e-unan da stardañ e zorn dezhañ en ur zisplegañ « a-berzh holl impliji an Ti-Bank » an troñsad lorc'h a oa enne o kaout en o zouez un den hag a rae enor d' ar Vro a-bezh.

War-dro unnek eur hanter e voe servijet en ur sal gaer eus an arc'hantti ur « gwin a enor » evit goueliañ kur Jeffig Skeren. Dres avat pa oa an evadeg-se a veuleudi o paouez echuiñ hag an enoriad o vonet d' e verenn a-gevret gant e gamaradoù, setu ma kavas hemañ un denig bihan divalav ouzh e c'hortoz e toull an nor. E anavezout ervat a rae Jeffig: an Aotrou Loarer, urcher e Lannevern, an hini e oa. Gwisket e oa evel meur a urcher treut all war an douar ha koulskoude ne oa ket un den all hañval outañ e Breizh pennda-benn.

Mourroù hir-hir a zouge stag ouzh lodenn-draoñ e zremm, el lec'h anvet, el levrioù uhel, pont-ar-mic'hi. Ur brank anezhe a herlinke e jod dehou, ur brank all o skeiñ war-du ar c'huzh-heol a rae allazig d' e jod kleiz hag ar peurrest a dribilhe dirak e c'henou. En-anat e talvez e al lodenn diwezhañ-mañ dezhañ da sil evit an evajoù hag ar boued tanav.

Marzhusoc'h kalz e oa c'hoazh ar mourroù stank a oa kresket dezhañ el lec'h m' emañ ar c'hiz gant an holl vroadelezhioù da zougen ambrantoù ! Ma seblante ar paotr sellout ouzhoc'h gant e vourroù-krec'h. War-hed daou-c'hant pemp metr ha tri-ugent ez oac'h sur d' e anaout difazi ; ne oa ket anezhañ un den bihan treut gant ur fri berr, daoulagad kaouenn hag ur gouzoug hir, hogen ur bern mourroù brec'hiek, garek ha troadek.

Ha setu bremañ ma kleve Jeffig Skeren, evit e vrasañ souezh, komzoù evelhen o c'hwitellat a-dreuz ar mourroù traoñ :

- « C'hwi eo, n' eo ket 'ta, an Aotrou Jozeb Skeren ? »
- « Ya, me eo, » eme hemañ sabatuet-net an tamm anezhañ.
- « Mat ! » a gouzantas Al Loarer.

27

Hag eñ neuze tapout ur baperenn c'hlas eus ar sac'h-ler a oa gantañ ha kregiñ da lenn buan-buan traoù diaes a-walc'h o c'hompren. Pezh a oa fraez da intent koulskoude eo e oa meneg er bern geriou iskis a gleve Jeffig evit ar wech kentañ, eus mor, bloñsadennoù, gloazadennoù hag all.

- « Ha bremañ, » eme baotr e vourroù pa voe echu da lenn, en ur ziskouez traoñ ar baperenn, « sinit amañ, mar plij ! »

- « Met kement ha petra e talv se holl, Aotrou Loarer ? » a c'houlennas Jeffig Skeren. « Ne gomprenan mann ! »

- « Un den hoc'h eus kannet ha dotuet : miret en deus greunenn ouzhoc'h a-hervez, Aotrou Skeren ! »

- « Un den am eus kannet ? »
- « Ya, graet hoc'h eus. »
- « Ha piv an den-se ? »
- « Ur Gall, Aotrou Skeren. »
- « Ur Gall, Aotrou Loarer ? »

« Ya 'vat ! Eugène Stromberger, 61 bloaz, o chom 241 Straed Glückenfeld e Pariz. Ha kaset oc'h dirak ar barner gantañ abalamour m' hoc'h eus e zornet, bloñset e zaoulagad outañ dec'h d' abardaez e Porzh-Tuzeg e parrez Lokmerven. Dalit ! Sinit amañ, mar plij ! »

- « Dirak ar barner... dirak ar barner, » a c'hagouilhas Jeffig Skeren en ur glask harp ouzh moger ar B.N.B.K. o vezañ ma seblante, a-sav-taol, an douar tuet da wakaat dindanañ.

An Den-Meur betek amañ.

Krec'h-ar-Roue,
d' ar bevarvet a viz Genver 1953.

BLEV MIRIAM

gant ISSAK SAMOKOVLIA

lakaet e brezhoneg gant YOUENN DREZEN

Hegas o doa ar vugale outi, hag alies e teue d' ar gêr en ur ouelañ. Skoet e veze ganti, sacht war he blev, ha stlapet outi grouan ha fank. Ma teue Miriam da vezañ tavedekoc'h-tavedekañ, hag aonik. Chom a rae er gêr, da durlutañ e-mesk he c'hoarielloù, ha, diblijadur, e c'hoarie lakaat he merc'hodenned ouzh renk war an divan. Ur wech an amzer e selle dre ar prenestr, war ar ru, o selaou ouzh youc'hadoù ar vugale, hag e save c'hoant bras enni mont ivez er-maez ha c'hoari gant ar vugale. O, a dra sur, ne vefe ket skoet ganti en-dro ; ar vugale, avat, a glaskfe digareziou da ziskouez dezhi o c'hasoni.

Evit ober goap, e veze graet anezhi « bê ! bêê ! » bihan, gavrig velen, pe lesanvioù all ken divalav. E penn ar baotred hag ar merc'hedigoù, ouzh o broudañ a-enep da Viriam vihan, e oa an Avram du, ur c'hrennard kreñv, daou pe dri vloaz koshoc'h egeti.

« - Skoit ganti ! » a lavare, en ur redek war he lerc'h da ober dezhi luziañ-pav ; neuze e chome a-sav, hag e c'hoarzhe 'leizh e c'henou o sellout ouzh Miriam o sevel en ur leñvañ, e-keit ma stlake ar vugale all o daouarn, pe ma roent dezhi taolioù treid. Tufañ a rae merc'hedigoù ouzh he dremm.

Ma hope unan : « Matchoro ! » e tec'hent holl d' ar c'haloup, pep hini diouzh e du, o 'n em stardañ ouzh ar mogerioù-pleñch, o skoachañ er grignolioù. Matchoro a oa tad Miriam, anavezet er c'harter evit bezañ un den tagnous ha kounnarus.

Abalamour da Viriam e veze trouz ha teodadoù dalc'hmat etre an tadoù hag ar mammoù, ken e oa aet droug ivez er wazed en o brud ouzh Miriam vihan, brav ha melen he blev.

« - Evel pa ne vije bet nemetañ o kaout bugale ; he cherisañ a ra evel pa vije ur briñsez vihan, an azen-se... »

« - Koulskoude n' eus anezhi nemet ur c'havr velen. N' oar den gant petra e vez eoulet he fenn evit kaout ar seurt blev. »

29

« - Ha c'hoazh, c'hoazh, ma vije bet ur paotr ; ur plac'h, avat ! Ma n' eo ket un druez ! »

Matchoro, evelato, a gare e Viriam vihan. Prenañ a rae dezhi brozhioù, ha bep sadorn e kase anezhi da bourmen gantañ. Mont a rae da welout an holl gendirvi da ziskouez dezho ar sae pe ar botoù-ler prenet da Viriam. Bez' he doa ivez un disheolier livet-splamm, merc'hodenned o daoulagad glas-oabl hag o fennadoù-blev melen rodellet. Hi hec'h-unan a oa melen ha rodellet he blev evel re he merc'hodenned.

Un estlamm e oa Miriam evit ar c'harter, leun a Yuzevien vihan, duarded o daoulagad du, o blev distoupet, diarc'hen, gwisket gant saeoù toull ha lous atav. Dont a rae Miriam eus he zi dre zor ar porzh, kribet kempenn he blev, gant ur plañson war he c'hein, ha rodelloùigoù melen en-dro d he diskouarn. A-hed ar wech e veze ganti un davanjer naet, boteier-ler ha loeroù hir. Sellout a rae alies er straed m' edo ar vugale o c'hoari, o lamm, pe, azezet war ar vein, o c'hoari gant bili pe o fardañ kouignoù traezh. C'hoant he doa, ken he doa c'hoant, bezañ ganto, azezañ er bouldrenn ha fardañ kouignoù-traezh, o c'hempenn war an douar, redek gant ar re all hag, evelto, en em silañ a-dreuz peulioù ar mogerioù-pleñch. Ret e oa dezhi, avat, chom e toull an nor, ha, diwar he chif, e sanke taolioùigoù dent e korn he zavañjerig.

« - Miriam, chom sioul aze, arabat mont er-maez, rak ar vugale a zo savet fall, » a lavare dezhi he mamm, en ur dreuzañ al leur, troñset he milginoù, savet he lostennoù, ken e weled traoñ he bragoù mezher groz.

Hag e chome Miriam evel-se hec'h-unanik-penn, ken na voe gwelet gant ar vugale all ha na hopjont dezhi :

« - Sell, ar c'havr velen ! Bêêê !... Bêêê !... Mêê !... »

« - Sell 'ta ! un davanjer wenn he deus !... Lakaet he deus dilhad sul evel pa vije Pask ! »

Simha vihan a zo tostaet outi hag e chom a-sav e-tal an nor. Dont a ra ivez an Avram du. Hag endra ma sach Simha gant he daouarn lor war he zavañjer, e lavar ar paotr :

« - Deus ganimp d' ar stivell, Miriam, da gerc'hat dour evit fardañ kouignoù ! »

Degouezhet er stivell, e kemeras Avram ur pod, e taolas ennañ poultrenn hag e lakaas dour ennañ betek rez. Stankañ a reas neuze gant e zorn kleiz genou ar pod, hag e roas anezhañ da Viriam.

« - Kemer, » emezañ, « an dra-mañ a zo dour evit ar c'houignoù. »

30

Kemer a reas Miriam ar pod, hag e skuilhas ur flistrad dour lous war he zavañjer wenn. Ma santeas glep penn-da-benn he loeroù, betek he botoù-ler. Edo prestik da ouelañ. En dro dezhi, e selle ar vugale outi diflach.

« - Stank an toull, genaouez !... Mont a ra kuit an dour ! » a hopas Avram. Sellout a reas Miriam ouzh ar pod, hag hel lezel a reas da gouezhañ.

« - Bêêê ! Gavr velen ! n' out nemet ur bêêê !... Te a zo da vlev evel reun ur c'havr, ha daoulagad, ha tavañjer ur bêêê !... Te a zo un Alamandez ! N' out ket ur Yuzevez ! N' ac'h eus ket mezher ? » hag e tufas Avram ouzh he dremm, tapout a reas ar pod lous hag e wiskas gantañ penn Miriam.

Stagañ a reas ar plac'hig da ouelañ ; d' an ampoent, avat, e tiskornas Rena, he mamm, hag hi da youc'hal, en ur zifretañ.

« - Penmoc'h ! sellit petra o deus graet eus va bugel ! Krev 'ta, hoc'h ! »

Tec'hout a reas ar vugale. Ne chomas nemet an Avram du ; hag eñ da zismegañsiñ Rena, oc'h hopal dezhi.

« - Ur vastardez eo Miriam, un Alamandez velen, ur bêêê, ur mêkêê ! »

Un deiz, e chomas klañv ar plac'hig. E penn kentañ pevare sizhunvezh he c'hleñved e kouezhas trumm he blev. Dastum a reas Rena gant evezh ar c'huchennoù alaouret, hag o lakaas en ur mouchouer. Dezhi da bareañ buanoc'h, he mamm he lakae da dommheoliañ el leur. Goleiñ a rae dezhi he fenn gant ur mouchouer gwenn hag e lavare dezhi jentil e teufe hir en-dro, ha buan, he blev brav o liv ken tener.

« - Gwir eo e teuint hir en-dro ? »

« - Ya, merc'hig aour ! »

« - Hag eo gwir, mammig, ne vint ket mui melen, hag e vint du-pod ? »

« - Ya, va ael ! »

Ha diwar an deiz-se e voe sederoc'h an hini vihan. En em lakaat a reas da zebriñ, da azezañ en he gwele, ha da deurel evezh ouzh cholori ar vugale o c'hoari er straed. Un devezh m' edo en e goazez war un dorchenn, el leur, e c'halvas ar bugel he mamm da anzav outi un dra bennak e pleg he skouarn. Stouiñ a reas ar vamm, endra ma poke dezhi ar bugel, o terc'hel he fenn etre he daouarnigoù kastiz ha m' he fede da c'hervel ar vugale.

31

« - Lavar dezho dont el leur da c'hoari, mamm ! Galv anezho ! »

Aozañ a reas Rena gant difrae kouignoù sall, hag e c'halvas ar vugale. Daou pe dri nemetken a gredas dont tre. Ar re all a astenne o fennoù ur wech an amzer e toull an nor.

« - Deuit tre, Miko, Rafitcho, Blankitza. »

Da greisteiz e voe brasaet niver ar vugale : edont un dek bennak. Edont azezet e-kichen ar pennwele, hag e tebrent kouignoù, brav en o flijadur.

« - Hag ebatit ! Setu c'hoarielloù ! C'hoarzhit ha c'hoariit gant va merc'hodenned ! »

Ar merc'hedigoù a gemeras ar merc'hodenned, a save dezho o brozhioù, a bismige o blev, o lakae da azezañ, a sache war o divrec'h.

« - Roz eo o divjod, avat ! »

« - Ur sae seiz eo houmañ ? »

Ha dalc'hmat e tarzhe an hevelep goulennoù war o diweuz.

« - Mochi, savomp un ti bihan d' ar merc'hodenned ! Deomp da gerc'hat ur gest er gêr, ha fardomp div gambrig, unan d' ar verc'hodenn ruz, an hini all d' ar verc'hodenn velen. »

Hag ar vugale ha bec'h warno raktal ; dastum arejont mein, kutuilh a rejont geot ha bleunioù. Mont a reas Rafo da glask boestoù houarn, Mirko a zegasas ar gest vihan e-keit ma kave Hannika un tamm koad karrezek.

« - An dra-mañ a vo ar gador. »

« - An dra-se a vo an divan. »

Ha dres pa voe an ebatou en o gwellañ, e tigoras an nor hag en em ziskouezas an Avram du.

Skrijañ a reas Miriam, dont a reas gwennoc'h c'hoazh ; hen gelver a reas, evelato, gant ur vouezh skiltr, da lavarout dezhañ dont tre.

« - Te zo treut, avat ! Gant ar boan benn emaut ? » a c'houlennas Avram o tostaat outi koutig-koutig.

« - Echu eo bremañ ! Pareet on bremañ hag e c'hellin mont da c'hoari ganeoc'h. »

« - Ha da vlev, pelec'h emaint ? » a c'houlennas Avram.

« - Kouezhet int ! » a respontas prim Miriam ; ha gant he daouarnigoù, ma weled sklaer drezo, e tennas ar mouchouer : Hag e voe gwelet ar penn bihan strewet warnañ blevennoù melen munut, ha dindano pikoù rouzard. He blev, aet rouez, a lintre ouzh an heol, heñvel ouzh an aour. O chourañ a reas gant he dorn, hag e lavaras :

« - Aet eo kuit va blev melen, ha bremañ e teuint du evel re Rikitza ! »

32

« - Du evel re Rikitza - ! » eme Avram gant diskred.. « Du, du ! »

An holl a chomas digomz. Merañ a reas Miriam he mouchouer gwenn gant he bizied. Ur c'hammed a reas Avram, war-nes distagañ ur ger bennak, met ne rannas grik ebet. En diwezh ez eas davet Rikitza, e krogas en he dorn, hag eñ etrezek an nor, o lavarout :

« - Deomp war ar straed ! »

Ha war o fouezig, an eil war-lerc'h egile, en em dennas ar vugale eus al leur. Chom a reas Miriam hec'h-unan-penn, astennet war ar goubennerioù, o verañ he

mouchouer gwenn. En-dro dezhi edo stlap-distlap mein, podoù-gwer, tammoùigoù lien a bep seurt liv, hag ar peurrest eus ar c'houignoù sall. E-kichen ar gest, ar merc'hodenned, dilezet, a vane astennet war o c'hof.

Miriam, prenet he genou, a oa prest da ouelañ. Redek a rae an dour a-hed he divjod. Pa zeuas Miko da gerc'hat e gest en-dro, Miriam, avat, a lammas diwar he goubennerioù, a sailhas evel un tenn ; gant difronkoù bras, e vriatas ar gest gant ur vrec'h, ha gant an dorn all, e tapas krog en ur verc'hodenn, hag hi da zistagañ taolioù ouzh penn Miko.

« - Pemoc'h ! » a hopas Rena diwar laez an dirioù.

Hag e voe gant poan e c'hellas Miko, hag ar gest gantañ dindan e gazell, en em laerezh betek an hent. A-dreñv e gein, e torras un « nanoula », e daou damm war ar vein.

« - Pemoc'h ! Tres-kroug ! Me az kavo c'hoazh !... » a youc'has Rena ouzh e c'hourdrouz gant un « nanoula » all.

Pelloc'h, skoachet a-dreñv garenn ur gouloù-straed, e sko an Avram du ur maen ouzh ur maen all, ha war an ton e c'harm an holl vugale :

« - Matchoro born ! Matchoro born ! »

E-keit-se, Miriam vihan baour a frap kuit, en ur zifronkal, kuchennadoù blev melen diouzh penn ur verc'hodenn.

PENAOE EZ ADSAVER UR YEZH :

AR STOURM EVIT AN DANEG E SCHLESWIG-AR-C'HREISTEIZ

hervez ur studiadenn gant Ceinwen THOMAS

lakaet e brezhoneg gant Per DENEZ

(An Doktorez Ceinwen Thomas, anavezet mat e Breizh evel Sekretourez Veur ar C'hendalc'h Keltiek, he deus bet tro da vont da studiañ kudenn ar yezh e Schleswig ar C'hreisteiz. Savet he deus da heul ar veaj-se, evit Undeb Cenedlaethol Athrawon Cymru, un danevellskrid o tisplegañ ar pezh he deus gwelet. Ur skrid all, damheñvel ouzh an danevell, a zo bet embannet gant ar gazetenn Y Faner er bajenn anvet CWRS Y BYD. Soñjet hon eus e vefe talvoudus d'ar Vretoned gouzout petra a dremen e Schleswig ar C'hreisteiz, ha dreist-holl kaout evezhiadennoù Ceinwen Thomas diwar-benn ar pezh a vez graet eno. Diwar he studiadennoù hon eus savet ar pennad-mañ da heul evit lennerien Al Liamm. Lezet hon eus a-gostez an displegadurioù re vicherel na vefent talvoudus nemet d' ar skolaerien ha d' ar gelennerien.)

Tro am eus bet nevez zo da vont en ur vro e-lec'h ma stourmer gant berzh-mat da saveteiñ ur yezh. Ar vro-se a zo Schleswig ar C'hreisteiz. En em ledañ a ra etre Kanal Kiel hag harzoù an Danmark. Gwechall eo bet ul lodenn eus Danmark met e 1864 eo bet kemeret gant an Alamanted. Tud ar vro a zo holl Daned, nemet er c'hornog, a-hed an aod, e-lec'h ma 'z eus Friziz o vevañ. Hini anezho avat ne gomz an daneg, rak lazhet eo bet ar yezh gant ar skolioù alaman.

Aesoc'h e vez avat ober d' an dud koll o yezh eget koll emskiant o broadelezh ha daoust dezho bezañ bet germanekaet e chomas Schleswigiz gwir Daned en o c'halon. E 1920 e voe adstaget hanternoz ar vro ouzh Danmark ha seul ponneroc'h a se e voe beli an Alamanted da dud ar c'hreisteiz. Gwellañ ma c'hellas e labouras ar re-mañ da virout o danelezh er bloavezhioù etre an daou vrezel, hag e 1945 e savjont strolladoù politikel galloudus, hag ivez ur Gevredigezh Danat da blediñ kentoc'h gant ar c'hudennoù a sevenadurezh.

34

Rak, evit Schleswigiz, n' eo ket bezañ unanet gant Danmark ez-politikel a gont hepken : fellout a ra ivez dezho bezañ unanet ez-yezhel hag ez-sevenadurel. Penaos ober avat evit dasorc'hiñ ur yezh a zo marv ? Respont Schleswigiz a zo : ober gant ar benveg a zo bet implijet d' he distrujañ, da lavarout eo ar skol. Ha kregiñ a rejont da sevel skolioù a vije o fal deskiñ daneg d' ar vugale, reiñ dezho un deskadurezh danek en ur aergelc'h danat.

Ne voe ket kollet amzer ganto o klask lakaat degemer an daneg e skolioù ar gouarnamant : gwelloc'h e kavjont lakaat o foan da grouiñ ur gelennadurezh vroadel. E 1949, dre un Emglev graet etre ar gouarnamant alaman hag ar Gevredigezh Danat, e oa anavezet ar skolioù danat, ha roet aotre d' ar Gevredigezh da grouiñ anezho e kement lec'h eus ar Schleswig ma vefe goulenn. Rak a-raok e oa ar skolioù danat, nemet an 9 anezho a oa e kêr ha korn-bro Flensburg, traoù enep al lezenn. Bremañ ez eus war-dro 85 skol gant 14.000 bugel enno. Pezh a zo ar souezhusañ-holl gant ar skolioù-se avat n' eo ket o niver, met an doare bamus ma teuont a-benn, dindan daou vloaz, da lakaat ar vugale da gomz daneg aes ha flour.

Beajet em eus dre ar vro a-bezh, eus Rendsborg er gevred betek Sylt, unan eus an inizi Vesterland, ha gwelet em eus 19 skol. Lod eus ar skolioù-se a oa skolioù bihan, nevez-savet e kêriadennoù bihan, lojet e barakennoù koad dilorc'h, lod all avat a oa savadurioù kaer-tre, unan anezho gant 850 diskibl. En un nebeut skolioù ne oa ket an holl vugale Daned : darn anezho a oa Frized, hag evito e veze graet kentelioù frizek. Ouzhpenn-se em eus gwelet ivez, e korn-bro Gettorp, skolioù-noz evit bugale hag evit tud en o oad.

Skolioù Schleswigiz a zo savet diwar batrom re ar C'hermaned. Da 4 bloaz e

c'hell ar vugale mont d'ar Kindergarten ; da 6 vloaz ez eont d' ar skol gentañ, e-lec'h ma c'hellont chom betek 15 vloaz ; ar re ra c'hell avat a ya da 10, vloaz d' ar skol-etre, ha goude-se da 15 vloaz d' ar Gymnasium, e-lec'h ma chomont e-pad 3 bloaz a-raok mont d' ar Skol-Veur. Pezh a zo a bouez gant Schleswigiz eo n' eus ket fellet dezho kaout hepken, evelomp-ni e Kembre, skolioù kentañ en o yezh : eus 4 betek 19 vloaz e c'hell ar bugel kaout e holl zeskadurezh e daneg.

35

An dra gentañ en deus skoet ac'hanon pa 'z on aet e-barzh ar skolioù-se a zo o braventez, ha sioulded laouen ar skolidi hag ar vistri. Zoken e skolioù bihan ar c'hêriadennoù e vezen paket gant ur santadur a levez o welout al leurennoù koaret-mat, ar mogerioù livet-skedus, an torkadoù bannieloù skandinavate e pign ouzh burev ar mestr, ha dremmoù mousc'hoarzhus ar vugale. Evit ar gelennerien, aes e oa gwelout e oant eürus en o labour. Pegen disheñvel eus hor skolioù ni, e-lec'h n' eo an deskadurezh nemet an arz da ziwriziennañ bugale diouzh o yezh hag o hengoun istorel. Ar skolioù danat, avat, n' int ket un dachenn-emgann a vez stourmet enno a-enep ene ur vro ; bez ez int evel oaledoù a vez kouviet e-tal dezho holl izili ar familh vras danat. Souezh ebet neuze ma ren enno ar peoc'h hag al levez, ha ma vez ar renerien, d' an holl dindano, evel tadoù madelezhus.

Luziet-tre eo ar c'hudennoù yezh e-barzh ar skolioù-se. An dud a gomz germaneg-izel, met ar yezh nemeti anavezet gant ar gouarnamant a zo ar germaneg-uhel, ha disheñvel-bras eo an eil yezh diouzh eben ken dre ar gerioù, ken dre ar frammadur. Daoust d' ar skolioù danat bezañ distag eus skolioù ar gouarnamant, n' int ket gwir skolioù prevez, rak arc'hant a zegemeront digant ar gouarnamant alaman. En abeg da se e rankont heuliañ reolennoù ar gouarnamant evit pezh a sell studi ar germaneg-uhel, istor, lennegezh ha douaroniezh bro-Alamagn. Ouzhpenn-se, evel m' hon eus lavaret uheloc'h, ez eus kalzik Friziz er skolioù war an aod, ha, peogwir e kenlabour an emsav danat hag an emsav frizat da sevel ur gelennadurezh nann-alaman, e ranker deskiñ o yezh da Friziz vihan ivez. Pezh a ra, e skolioù zo, peder yezh da implijout.

Pal ar skolioù danat a zo reiñ un deskadurezh danek en ur aergelc'h danat. Ar c'hentelioù a vez graet neuze e daneg. Ha peogwir ez eo marv an daneg er vro abaoe pellik amzer, se a zo koulz ha lavarout e ranker, war un dro, deskiñ daneg d' ar vugale ha deskiñ dezho traoù dre an daneg. Adalek ar vunutenn gentañ ma lak ur bugel e droad er skol, ne vez komzet outañ nemet daneg ken. N' eus, e gwirionez, tra nevez ebet en doare-se da ober : evel-se eo bet desket deomp ar saozneg. Nemet an dilerc'h a zo etre Schleswig ha Kembre eo hemañ : e Schleswig ne glasker ket rediañ an dud da zeskiñ ur yezh estren, pezh a reer a zo dasorc'hiñ yezh naturel ar vro hag a zo aet da get.

Soñjet e vo moarvat ez eo gwall-ziaes labour ar gelennerien. Ha lod anezho o deus anzavet din o doa soñjet evel-se a-raok kregiñ gant al labour. Ur wech kroget gantañ, avat, int bet souezhet-naet o welout pegen aes e oa. Aesoc'h e vez da vugale Schleswig deskiñ daneg eget deskiñ forzh petra all ha goude deskiñ an daneg e teskont gwelloc'h an holl draoù all : deskiñ a reont anezho kalz gwelloc'h eget ar Schleswigiz vihan a zo er skolioù alaman. Deut eo an dud da verzout an dra-se ha rener skol Bredstedt - ur gêriadenn baour a-walc'h e-lec'h ma vez ar vugale kentoc'h boud da zeskiñ - a lavare din e veze tennet eus ar skolioù germanek ar vugale o doa poan o heuliañ, ha lakaet er skol danat e-lec'h ma teskent kalz gwelloc'h.

36

Aes-meurbet e vez deskiñ daneg d' ar vugale vihan 4 pe 6 vloaz. En ur ober un nebeut mizioù e teuont gouest da gomz daneg ken brav ha ma komzont germaneg-izel. Diaesoc'h un disterig e vez an dra gant ar vugale koshoc'h, hag a zo bet, an holl anezho, er skolioù germanek e-pad ur pennad mat amzer, hogen gant ar re-se ivez e vez desket daneg buan-souezhus. Ha ne vez ket lezet ar germaneg-uhel a-gostez evit kelo-se : en arnodennoù koulz hag er c'henstrivadegoù graet evit kaout ur vicher emañ bugale ar skolioù danat e-touez ar re gentañ.

Ober implij eus an daneg adalek an derou evit kenteliañ ar vugale n' eo ket noazhus d' o emzispiegadur na d' o galloudoù spered. En enep. Daoust ma 'z eo an daneg dianav-krenn bremañ e Schleswig ar C'hreisteiz bez ez eus anezhañ gwir yezh ar Schleswigad : hemañ ne oar ket an daneg en un doare emskiantek, met bezañ a ra atav ar yezh e don e bersonelezh. Deskiñ an daneg dezhañ n' eo ket neuze degas

dezhañ un dra bennak estren, met dihuniñ, lakaat d' en em zisplegañ un dra a oa chomet kousket ennañ. Setu perak a-hend-all e c'hell bugale ar Schleswig deskiñ an daneg ken buan. Ha setu perak ivez ez eo ken mat dezho hen ober : deskiñ daneg a lak kempouez en o fersonelezh, a ro d' o spered atiz, ha dezho ur santadur nevez a frankiz personel. E-keñver eneoniezh ez eo an daneg ur gounid dezho penn-da-benn, ouzh o lakaat eürusoc'h, ha barrekoc'h ivez da dremen arnodennoù : ha se a ra bremañ da enebourien ar skolioù danat tevel gant o abegerezh. Rener Skol-Etre kêr Schleswig a lavare din pegen bamus e oa efed an daneg war ar Schleswigiz vihan germaneger : sioulaat a ra o fersonelezh a-bezh, o reiñ dezho ur peoc'h-diabarzh n' o doa morse anavezet a-raok, ur santadur a zieubidigezh a zegas dezho ul levnez eus ar re vrasañ. Alies e teu kerent da gaout anezhañ : « Petra hoc'h eus graet 'ta d' hor bugale ? » a lavaront. « Ken eürus ez int, ken kempouez ma ne fell ket mui dezho kuitaat ar skol ! »

37

N' eo ket ar skolioù hepken a labour da adsevel an daneg er vro. Pa n' eus ket tu da grouiñ ur skol, hag ivez evit an dud en o oad, e vez savet skolioù-noz ha kluboù. Tu am eus bet da vont da heul Vandrelaerer Gettorp da studiañ pezh a vez graet war an dachenn-se. Ar c'helenner-se a ya a gêriadenn da gêriadenn, oc'h ober kentelioù e-lec'h ma c'hell kavout plas, a-wechoù en ur gegin vihan, a-wechoù e salioù-degemer pinvidikoc'h. Dont a ra e skolidi da gaout o c'hentel diouzh an noz, pa vez echu ganto o devezh-labour, ur wech ar sizhun : deskiñ a ra dezho an daneg dre an daneg adalek ar vunutenn gentañ, ha kerkent ha ma ouzont un tammig ar yezh, da lavarout eo goude teir pe beder kentel, e komz dezho e daneg diwar-benn istor ha douaroniezh ar vro. En derou koulskoude e vez aotreet ar skolidi da ober o goulennoù e germaneg, met gant ar c'helenner ne zeu morse nemet daneg.

Bep bloaz e vez kaset ar vugale, zoken babigoù ar c'hindergarten, da dremen ur miz e Danmark ; an holl ivez a ya evit c'hwec'h miz da Skol-Uhel ar Bobl e Ladelund pa 'z int bet pevar pe bemp bloaz war studi an daneg. Pa c'heller e roer labour d' an dud yaouank e Danmark e-pad bloaz pe bloaz hanter.

Berzh-mat souezhus ar skolioù danat a zo dleet c'hoazh d' an doare ma vez renet al labour. Diwall a reer a reiñ re a draoù d' ar vugale da studiañ, rak aon skuizhañ koulz ar skolidi hag ar skolaerien. Er Skolioù-Etre hag er Gymnasia o devez ar vugale 36 kentel bep sizhun, ha pep kentel a bad 45 munutenn, gant 10 munutenn diskuizh etrezo-holl. Sammañ re ar vugale hag ar gelennerien a vefe mont a-enep da vad ha da efedusted ar gelennadurezh, rak ar skuizhnezh a rafe d' ar vugale bezañ direol pe dievezh, ha d' ar gelennerien bezañ konnarus. Ha kement-se a rafe droug bras da spered ar re yaouank.

Ret eo kompren mat erfin n' eo ket dasorc'hidigezh an daneg e Schleswig ar C'hreisteiz dasorc'hidigezh ur yezh hepken : bez ez eo e gwirionez dasorc'hidigezh an doare danat da vevañ ha da gompren ar bed. Dasorc'hidigezh ur bobl ha n' eo ket dasorc'hidigezh ur stumm-prezeg. Schleswigiz ar C'hreisteiz a fell dezho kaout ar frankiz politikel, met fellout a ra dezho ivez lakaat o relijion da advevañ war un dro gant o danelezh. Ne gredont ket, evel ma 'z eus bet lavaret a-wechoù e Kembre gant tud diboell, ez eo pouezusoc'h ar relijion eget ar yezh. En enep : evito ne c'hell ket ar yezh mont da get hep ma 'z afe kuit ivez ar relijion eus kalon an den. Ha diskouez a reont penaos eo deut Schleswigiz ar C'hreisteiz da vezañ danvezelourien, tud a-ziwar-c'horre goude ma 'z int bet germanekaet. An Danad a goll e ene pa goll e yezh : ha muioc'h a vad a zeu d' e ene diwar ganañ e daneg un himn na gompren ket, eget diwar gemer perzh en ul lid alaman a vez komprenet gantañ penn-da-benn. Primad an Danmark a skriv kement-mañ en ul levrig diwar-benn Schleswig ar C'hreisteiz : « Sevenadurezh speredel an denelezh a zo bet legadet din er stumm roet dezhi gant va fobl, ha va fobl an hini eo a ro din an tu da gompren ha da greskiñ an talvoudegezhioù-se gant skoazell va yezh ha va sevenadurezh vroadel. Hor buhez relijiel a vez ivez roet deomp en ur stumm hag a zoug merk hor pobl. Unan eus lezennoù-diazez ar vuhez eo e kreskfe hag e vevfe an hinienn diouzh hag e-barzh he fobl ».

38

Hag evel-se, pa vez savet ur skol danat e vez savet ivez, nebeut goude, un iliz danat, e-lec'h ma teu an dud a-du gant an daneg da heuliañ lidoù danek. En darn vrasañ eus ar skolioù e vez graet lidoù danek, ur wech ar sizhun, en unan eus kambroù ar skol, a vez kuzhet enni un aoter a-dreñv ur speurenn blegus.

Aesoc'h eo da Schleswigiz stourm evit o yezh eget na deo deomp e Kembre stourm evit hon hini. Danmark a zo tost, anezhi ur vro dieub hag a c'hell skoazellañ gant arc'hant, levrioù, arrebeuri, h.a. Kalz hon eus avat da zeskiñ gant Schleswigiz. Ar gwir hon eus bremañ e Kembre da sevel skolioù hollgembraek evit ar gembraegerien. Ar pezh hon eus d' ober bremañ a zo sevel skolioù da zeskiñ kembraeg da Gembreiz saoznekaet.

Er bed a-vremañ ez eus stourm etre an Impalaerouriezh hag ar Vroadelouriezh. Hag ar Vroadelouriezh an hini eo a c'hounez atav.
ANEURIN BEVAN.

« C'hwi zo Bretoned ? Ar C'hallaoued eo ar vistri ! »
MIRABEAU.

AR GOUEZELEG

NOTENNOU DIWAR-BENN AR GOUEZELEG HAG AR YEZHOU ALL E BRO-SKOS

gant Per DENEZ
(Kendalc'h)

2. - AR GOUEZELEG ER SKOLIOU-MEUR.

Dun Eidin, Glaschu, Obairdeathain

E Dun Eidin an hini eo ez eo bet savet ar gador ouezelek kentañ ha, betekhen, ar gador-gelenner nemeti. Savet eo bet gant arc'hant an holl. E 1875 e voe goulennet gant an dud profañ 12.000 lur sterling, a vefe lakaet e prest hag a zeufe diouto, bep bloaz, ur c'hampi a 500 lur, peadra da baeañ ur c'helenner. D' an 20 a viz Ebrel eus an hevelep bloaz e oa dastumet 4.610 lur, da zibenn miz Meurzh e oa dastumet 6.825, hag ouzhpenn 8.000 e-tro kreiz ar bloaz war-lerc'h. Pemp bloaz diwezhatoc'h e oa dastumet an holl arc'hant hag e 1882 e oa anvet ar c'helenner. Gouizieien anavezet o deus graet skol e Dun Eidin. Ne voe graet labour kaer e-touez ar studierien, avat, nemet goude m' en doe ar c'helenner Watson krouet, e 1922, ur Celtic M. A., da lavarout eo un arnodenn-dibenn-studioù war ar c'heltieg. Ouzhpenn ar c'helenner ez eus bremañ e Dun Eidin un adkelenner.

Ur gador-displeger (lecturer) a zo e Glaschu. Savet eo bet e 1881 a-drugarez d' ur prof prevez, kresket e 1910 gant ur prof prevez all. Tud vrudet, evel Magnus MacLean, Kuno Meyer, James Carmichael Watson a zo bet e karg eno. Un adkelenner a zo.

Ur gador-lenner (reader) a zo bet savet en Obardeathain e 1925. Un adkelenner a zo eno ivez.

Ne vez ket kenteliet ar gouezeleg e Skol-Veur St Andrews, daoust ma 'z eo anavezet ar gouezeleg eno evel danvez evit an Arnodennoù-dont-e-barzh (Preliminary Examinations).

An M. A. Keltiek

Ne zegemerer er Skol-Veur, evit prientiñ an M. A. keltiek, nemet ar studierien o deus an Higher Leaving Certificate, gant un testeni gouezelek, pe ar re o deus tremenet an arnodenn-dont-e-barzh. Koulskoude ez eus en holl skolioù-meur, e-pad teir eurvezh pep sizhun, kentelioù gouezelek digor d' ar studierien n' o deus c'hoant tremen arnodenn geltiek ebet.

40

Pevar bloavezh studioù a zo d' ober a-raok kaout an M. A. : un arnodenn (Ordinary Degree) a dremener e dibenn ar bloavezh kentañ, un eil (Advanced Degree) e dibenn an eil bloavezh, hag an drede (Final Honours) e dibenn ar pevare bloavezh. An drede arnodenn-se a zo enni deverioù latinek pe saoznek (da zibab) ouzhpenn ar re ouezelek.

E-pad an daou vloavezh kentañ ez eus 3 pe 4 eurvezh skol pep sizhun, hag e studier gouezeleg a-vremañ, krennouezeleg, lennegezh hag istor Iwerzhon ha Bro-Skos. En arnodenn ez eus troidigezhioù d' ober, danevelloù da sevel ha goulennoù da respont (na dalv ket ar boan lavarout amañ dre ar munud petra int).

E-pad an daou vloavezh diwezhañ e studier, ouzhpenn, kembraeg kozh ha krenn, gouezeleg kozh, istor ha lennegezh ar gouezeleg, istor Breizh-Veur geltiek, hag e ranker ivez dibab un danvez keltiek bennak da studiañ drezor an-unan. C'hwec'h poelladenn a zo en arnodenn diwezhañ, an holl anezho diaes-a-walc'h.

Mat e vije lakaat amañ, evel skouer eus live ar studioù, roll al levrioù a oa da labourat warno e 1948-1949 e Skol-Veur Dun Eidin. Evit arboelliñ un nebeut

pajennoù ne vo ket graet. Trawalc'h e vo lavarout e ranker bezañ gouiziek a-walc'h da dremen an M. A.

Yalc'hadoù

Ne dalv ket ar boan ivez embann amañ e brezhoneg ar roll klok eus ar « bursaries, scholarships and prizes » a vez roet bep bloaz d' ar re a studi ar gouezeleg : bez' ez eus 31 diouto, hag en holl e savont da 2.112 lur sterling. Yalc'hadoù a vez roet ivez d' ar ouezelegerien a zeu d' ar Skol-Veur da studiañ un danvez bennak estr eget ar gouezeleg : 37 a zo eus ar yalc'hadoù-se, ha da 1.104 lur sterling en holl e savont. An holl yalc'hadoù, leveoù pe brizioù a zo roet gant tud prevez pe gant kevredigezhioù skosat.

Meneg a c'heller ober ivez eus ar Murchison of Tarandale Memorial Trust, krouet e 1936 : bep bloaz e c'hell un nebeut studierien mont, e-pad ar vakañsoù, da labourat e kastell Tarandale, a vez digor dezho e lenndi hag e-lec'h ma vezont maget evit ur priz dister-tre.

Ur Skol-Veur Ouezelek

Evel e pep lec'h all, ar studioù keltiek e Bro-Skos ne vezont graet nemet a zarnoù : ar brezhoneg hag ar c'herneveg, da skouer, a chom er-maez a-grenn. « Lec'h a zo da wellaat an traoù, » a skrive ar c'helenner Watson e 1936, « dre grouiñ ur wir skol a studioù keltiek. » Met n' eo ket deut c'hoazh an huñvre da wir.

Ouzhpenn-se ez eo ar gouezeleg ur yezh a studier, ha n' eo ket ur yezh a reer studioù enni. E 1925, gwir eo, e kinnige ar Iona Society, eus New-York, reiñ arc'hant da sevel ur Skol-Veur Ouezelek en Uheldirioù, met en abeg da zarvoudoù arboellerezhel ar mare ne zeuas ket ar raktres da benn vat. Meneg a voe graet adarre eus ar Skol-Veur hollouezelek gant ar c'helenner Watson e 1927, gant Dug Atholl e 1928, ha gant ar c'helenner Watson meur a wech c'hoazh goude-se, hogen e 1936 e roas ar Sekretour-Stad da gompren e vije gwell chom hep komz eus an dra-se pelloc'h. Ha n' eus hiziv, er bed a-bezh, skol-veur geltiek ebet nemet an hini emeur o sevel, tammig ha tammig, e Galiv, war zouar Republik Iwerzhon.

3. - SKOLIOU-NOZ HA SKOLIOU PREVEZ.

Evel en holl vroioù e-lec'h n' emañ ket skoazellet ar yezh gant ar gouarnamant o devez ar skolioù-noz kalz pouez er stourm. En Alba ez eus skolioù-noz gant An Comunn, gant an Emglev Gouezelek (Gaelic League iwerzhonek), gant ar Strollad Broadel, gant ar Workers' Educational Association, pe c'hoazh gant kuzulioù deskadurezh ar c'hontelezhioù. Ar priz a baer peurliesañ evit heuliañ ar c'hentelioù a zo seizh chilling hanter (war-dro pevar c'hant lur gall).

N' eus ket tu da c'houzout ez-resis pet skol-noz a vez graet dre Vro-Skos a-bezh, ha pet diskibl o deus : strollad ebet n' en deus graet ar seurt enklask, ha n' hell ket un den e-un, dreist-holl ur studier, hen ober. Evit ar bloavezhioù 1946, 1947, 1948 ha 1949 em eus kavet meneg eus skolioù e 25 kêr disheñvel, na dalv ket ar boan reiñ o anvioù amañ. E Glaschu ez eus 5 skol bep bloaz, gant ur c'hant bennak a skolidi e pep unan anezho.

Skolioù-hañv evit ar vistri-skol hag ar gelennerien a zo bet e 1938 ha 1939. E 1948 ez eus bet kroget d' ober anezho adarre.

E-pad ar brezel ez eus bet skolioù-stalag, a veze kaset levrioù dezho gant An Comunn.

Evit ar re a labour er gêr ez eus ur skol dre lizher *Sgoil Eolais na h-Alba*, renet gant ar Reverant John MacKechnie. Ouzhpenn kentelioù gouezelek, e c'heller kaout er skol-se kentelioù war an holl yezhoù keltiek all. Pemp kant diskibl he deus bet ar skol er bloavezh kentañ (1945) ha derc'hel a ra he rener da labourat ken fonnus atav.

4. LEVRIOU DESKIÑ-LENN, LEVRIOU PENNADOU DIBABET, YEZHADURIOU, GERIADURIOU.

Levriou deskiñ-lenn ha pennadoù dibabet

Graet hon eus meneg dija eus labour vat ar Gaelic School Society : ganto eo c'hoazh e voe moulet ar c'hentañ levr-deskiñ-lenn embannet biskoazh e gouezeleg, *Ceud Leabhar* Alastair MacLauruinn (104 pajenn). Da heul hennezh e teuas tri levr all da glokaat ar rummad, war un dro gant un Aviel hervez Sant Lukaz e 1816. E 1823 e oa embannet gant ar GSS un eil rummad levriou, advoulet peder gwech er 25 bloaz da heul, hag e 1825 un Aviel klokoc'h, advoulet e 1826 ha 1827 (27).

Fromet ha nec'het e oa bet an Iliz e Bro-Skos gant labour ar GSS : e 1815 ez embanne tud an Iliz, d' o zro, ul levr ABK hag e 1826 ur rummad a bevar levr pennadoù dibabet, hag a voe advoulet meur a wech goude se.

Ul levr all da zeskiñ lenn, gant Seumas Munro, a voe moulet c'hwec'h gwech etre 1828 ha 1873, ar pezh a ziskouez e oa goulenn d' al levriou gouezelek er skolioù d' ar mare-se.

Kerkent ha ma voe bet embannet gant ar gouarnamant saoz, avat, e lezenn war an deskadurezh (1872) e voe paouezet hogos a-grenn a voulañ levriou-skol gouezelek. A-vec'h ma c'heller menegiñ div zastumadenn ar c'helenner MacKinnon e 1891. Goude 1918 hepken e teuas un tammig buhez en-dro d' an embannadurioù gouezelek : an daou levr-deskiñ-lenn hag ar pevar levr pennadoù dibabet embannet neuze gant ar c'helenner Watson hag e geneiled a zo chomet betek hiziv ar re wellañ a c'heller da gavout. A-hend-all ez embanner bremañ skridoù dedennus-tre evit ar vugale, evel *Companach na Cloinne* pe rummad *An Sgeulaiche*. Evit ar re a zesk o-unan ez eus rummad MacLaren hag al levrig plijus gant John MacKechnie, *Gaelic without Groans*.

Yezhadurioù

Yezhadurioù gouezelek a zo, pezh a gar. Ar c'hentañ hini (28) embannet ez-distag diouzh ur geriadur a seblant bezañ bet yezhadur Alastair Stiubhart (1801). Seizh yezhadur all a voe embannet etre 1828 ha 1899, aet bremañ an holl anezho er-maez a implij, nemet hini Duncan Reid e vefe, adaozet ma 'z eo bet, ha n' eo ket atav evit ar gwellañ, gant Norman MacLeod. Yezhadurioù Nicholson, Calder ha MacBain a zo savet en un doare skianteloc'h.

43

Geriadurioù

Ar geriaoueg savet gant Alexander MacDonald ha moulet e 1741 e Dun Eidin a vez sellet outañ peurliesañ evel ar c'hentañ geriadur gouezelek. Pezh n' eo ket gwir-tre, rak e levr Lhuyd, *Archaeologia Britannica*, 1707, e kaver ur roll gerioù gouezelek-skosat da heul ar roll gerioù iwerzhonek.

Geriadur William Shaw (div levrenn) a voe embannet e 1780 gant skoazell un 200 rakprener bennak. A-raok sevel e levr en doa an oberour tremenet ur bloavezh o veajiñ e Skos hag en Iwerzhon (1778). Daoust pegen bras eo ar fazioù a gaver e levr Shaw e tleer kaout kalz doujañs hag anaoudegezh-vat evit an oberour dre ma kare eus don e galon « yezh toc'hor ar Ouezeled » ha ma reas eus e wellañ evit he servijout. Krediñ a rae start an den mat-se e oa bet ar gouezeleg « yezh Jafet, (ur yezh a veze) komzet a-raok al Liñvadeg-Veur ha moarvat ivez implijet er Baradoz ».

Geriaouegoù ar vreudeur Mac Pharlainn (1795, 1815) a zo adaozadurioù marc'hadmat eus levrennoù W. Shaw.

Kalz muioc'h a labour personel a zo e geriadurioù Raibeart Gilleasbuig Armstrong (1825). Ha daoust ma pleg hemañ da voulañ en e levr un nebeut gerioù gresianek, gotek pe hebraek, n' eo ket klañv gant ar gerdarzhrezh evel ma vo re all ha bez' en deus ar galon da anzav, « daoust d' e garantez evit ar yezh keltiek, na c'hell ket bezañ a-du gant ar re a lak anezhi kalz koshoc'h eget un niver yezhoù all ».

An hini iskisañ eus an holl c'heriadurioù a zo hep mar ar geriadur gouezelek-saozneg-latinek embannet gant an Highland Society of Scotland. Ne voe ket a-walc'h d' an oberourien kavout ha menegiñ, gant gwir abeg, gerioù boutin etre ar gouezeleg hag « ar c'hembraeg, an arvoreg hag ar c'herneveg » ; mont a reas ar pemp Skosad kalonek a reas al labour betek furchal e-touez pinvidigezhioù « ar germaneg, an angl-ha-saozneg, ar svedeg, an daneg, an islandeg », pezh a c'hell c'hoazh bezañ talvoudus a-wechoù, ha ne voent ket spontet zoken o klask kerentiez etre o yezh hag « an hebraeg, ar c'haldeeg, ar perseg hag an arabeg ». An holl yezhoù-se, moulet en o skritur iskis, a ro d' o levr ur seurt hoal eksotek eus ar plijusañ !

44

Gant MacLeod ha Dewar e voe embannet, e 1831, ur seurt krennad, brudet a-walc'h, eus Geriadur an Highland Society. Ar geriadur implijet ar muiañ, avat, zoken tre betek hon amzer-ni, a zo geriadur Neil MacAlpine, hag a zo bet advoulet ouzhpenn ugent gwech abaoe 1832. N' eo ket e vije ken dispar al levr, met an hini marc'hadmatañ eus an holl c'heriadurioù eo bet adalek an derou : « pa gouste geriadur Armstrong £ 3.13.6, hini an Highland Society £ 7.7.0, hini MacLeod ha Dewar £ 1.1.0 » e veze gwerzhet hini MacAlpine evit c'hwec'h gweneg. E gavout a reer atav da brenañ, koublet gant ur geriadur saoznek-gouezelek gant John MacKenzie, hag a zo disteroc'h c'hoazh eget al lodenn gouezelek-saozneg. Da lavarout ar wirionez, perzh gwellañ ar geriadur en hon amzer a zo marteze mirout bev eñvor e oberour, hag a c'houzañvas kalz evit e yezh. Geriadurioù-distagañ a zo ivez, unan gant Dieckhoff, embannet e 1932, hag un all gant MacLennan. Geriadur gerdarzhel MacBain a zo anavezet-mat hag implijet kalz.

En un doare souezhus a-walc'h - met daoust ha souezhet e c'heller bezañ gant pezh a c'hoarvez e broioù iskis evel ar broioù keltiek ? - ez eo bet savet ar gwellañ geriadur gouezelek a zo, hag a vo e-pad pell, gant ur saozneger a vihanik, a ouenn gernevat a lavarer, anvet Edward Dwelly: d' an oad a seitek vloaz (1881) e krogas Dwelly da zastum gerioù gouezelek hag e-pad ugent vloaz e talc'has da fichennaouiñ pinvidigezhioù ar geriadurioù embannet en e raok, al lennegezh moulet, ar yezh komzet, o kinnig en diwezh d' ar ouezelegerien un oberenn a zo dastumet enni ouzhpenn 80.000 ger. Met n' eo ket e-keñver gouiziegezh ez eo labour Dwelly ar pouezusañ-holl, daoust ma 'z eo pouezus-tre : an hini kentañ e-touez an holl c'heriadurourien skosat e tispleg Dwelly ez eo e labour un oberenn a vroadelouriezh muioc'h eget a furcherezh ha diluziañ a ra dre ar vrogarouriezh kudennoù a veze klasket gant ar re all o diluziañ dre ar yezhoniezh. Diwar-benn ar gerentiezh etre gouezeleg Iwerzhon hag hini Bro-Skos e lavar Dwelly « e teu an diforc'h a zo etrezo muioc'h eus faltazi an dud eget eus ar wirionez hag... ez eo bet ijinet ha maget aketus kalz eus an disheñvelderioù-se evit abegoù politikel hepken, hervez kemenn ar ger-stur kozh Disrannañ evit Mestroniañ ». Evit pezh a sell ouzh ar gerioù saoznek e tifenn groñs Dwelly ober implij anezho e gouezeleg. Hep ar seurt brogarouriezh e vije chomet pell labour Dwelly e stumm un dornskrid prizius-bras ha dianav. Prederiet en doa Dwelly, avat, war ar frazennig a zo skrivet e derou geriadur Shaw : « Ar pezh a vez da galz tud d' ober ne vez da zen ebet d' ober » hag, e-lec'h gortoz skoazell digant ar re all, e krogas, gant sikour e wreg, da voulañ al levr eñ e-un, oc'h ober ar plomlizherennañ, ar moulañ, ar skeudennaouiñ (675 skeudenn a zo el levr) hag ar c'heinañ. Dont a reas al lodenn gentañ eus al levr er-maez e 1902, ha skodennoù 442 Skosad, war un dro gant un tamm leve digant ar Roue Edward, a aesaas da Zwelly echuiñ e oberenn. Adembannet e voe ar geriadur, e teir levrenn, atav gant Dwelly hag e wreg, e 1918 hag adarre e 1930 e stumm ul levrenn a 1.037 pajenn. Diviet e 1948 ez eo bet adembannet ar geriadur abaoe. Un dra gaer eo gwelout un estren evel Edward Dwelly o ouestlañ e vuhez d' ar gouezeleg ha d' ar baourentez, pa zibab kement a Gelted gouestlañ o hini da servij arc'hantet-mat ar mac'homer.

(Da genderc'hel.)

E pep pobl e kaver tud reuzeudik ha n' o deus ket a ezhomm e kinnigfed dezho tregont diner evit gwerzhañ o bro ; e Breizh int stankoc'h c'hoazh, marteze, eget e bro all ebet war an douar...

Yann Vari PERROT,
Feiz ha Breizh, 1929.

KAD MAG MUCCRIME

Setu amañ troidigezh un danevell iwerzhonek eus an Henamzer. Talvoudus eo en abeg d' ar c'helennadurioù a c'heller dastum enni a-zivout buhez Iwerzhoniz d'ar c'houlz-se ha plijus dre an doare eeun m' eo dibunet.

Ailill Skouarn Noazh mab Mav Nuz (1) oa roue e Mouan d' ar mare-se. Sadb merc'h Conn e Gant Kad oa e wreg, ha tri mab dezhi digantañ Eogan, Cian ha Cormac Cass. Diouzh ar re-mañ e teu an Eoganed, ar g-Cianed ha Dael Cass.

Lugaid Mab Ki (2) eus gouenn Lugaid a voe advabet gant Ailill. Maget e voe war an hevelep glin ouzh an hevelep bronn hag Eogan.

Un nozvezh Samon ez eas Ailill da vaesa e gezeg war Grec'h Ane. Ur gwele a voe aozet dezhañ war ar run. Dic'heotet-rac'h e voe ar peurvan en nozvezh-se, den ne ouezas penaos. Div wech e c'hoarvezas evelse, ur marz evit Ailill. Leuriñ a reas kannaded da gaout Ferchess mab Comman, ur barzh o chom war harzoù Lein, un diawelour hag ur c'hadour anezhañ. Ferchess a zeuas, ha da noz Samon ez ejont o-daou war ar run. Gortoz a reas Ailill eno, ha Ferchess un tammig pelloc'h. Ar c'housked a gouezhas war Ailill, o selaou ar gre o peuriñ. Neuze e teuas ar voudiged er-maez eus ar grugell, Eogabal o roue war o lerc'h, hag Ane e verc'h en e raok o seniñ dezhañ gant ul lourenn arem. Tostaat a reas Ferchess ha darc'hav un taol outañ. Eogabal da redek war-du ar c'hev. Pa oa o tremen e-tal Ailill, avat, e strinkas Ferchess ur speg meur outañ, a dorras dezhañ mell e gein. Ailill a redias ar plac'h da c'hourvez gantañ. Hi a skoas kement war e skouarn dehou ma ne chomas na kig na kroc'hen warni, hag evelse e vanas diwar se. Ac'hano al lesanv Skouarn Noazh da Ailill.

(1) Mav Nuz (= Mevel Nuz) en iwerzhoneg krenn : Mog Nuadat : lesanv Eogan Veur, roet dezhañ goude skoazellañ Nuz da sevel un din evit roue Lein. Eogan a zeuas goude se da vezañ roue en « Hanterenn v-Mav » tra ma rene Conn war « Hanterenn g-Conn » en hanternoz.

(2) Lugaid Mab Ki oa mab Sadb diwar ur c'hentañ dimeziñ. Denañ a reas ur giez e kêr Ailill.

47

« Gwan oc'h bet ouzhin, » eme Ane, « ouzh ma dismegiñ hag o lazhañ ma zad. Da zismegiñ a rin ivez ; ne lezin digoll ebet ganit (1) pa rannimp an eil diouzh egile. » Edo Eogan mab Ailill ha Lugaid mab Ki e gevaot o vont ur wech da gaout Art mab Conn, a oa oc'h ober un droiad e Connac'ht. Fellout a rae dezho kaout kezeg ha kebestr digantañ peogwir e oa breur da vamm Eogan (2). A-greiz treuziñ ur gompezenn e klevjont anao o tont eus ur bod ivin a-zioc'h ul lammdour. Un den a dennjont er-maez eus ar bod, hag e tegasjont anezhañ ganto da gaout Ailill peogwir e oant o rendaeliñ en abeg dezhañ. Un den bihan, teir c'hordenn en e lourenn.

« Pe anv zo dit ? - Fer Fi mab Eogabal (3). - Perak oc'h deut war ho kiz ? - Emaomp o rendaeliñ a-zivout an den-mañ. - Petore den eo ? - Ur soner mat. - Ra sono deomp ! - A vo graet, » eme an den.

Seniñ a reas sonerezh keinvanus, hag int da geinañ, da ouelañ ha da c'harmiñ. Pedet e voe da ehan. Neuze e sonas sonerezh fentus, hag int da ziskargadennañ, ma weled o skevent hgozik. Neuze e sonas sonerezh hunus o lakaas da gousket betek an hevelep mare eus an deiz war-lerc'h. Eli a zistroas d' al lec'h ma oa deut, o lezel broc'h etrezo. Gant an dra-se e oa laouen.

« Barn etrezomp, a Ailill, » emezo, pa zihunjont. « Nebeud da c'honit. Petra 'lavarjoc'h pa voe kavet an den ? - E oa din-me e sonerezh, » eme Lugaid. « E oa din-me ar soner, » eme Eogan. « Gwir, » eme Ailill, « da Eogan an den. » « Ur warnadenn c'haou, » eme Lugaid. « Reizh evidon, » eme Eogan. « N' eo ket, » eme Lugaid. « Dibaot a wech e vez reizh war da ziweuz.

- N' eo ket dit e tere d' hen tamall din, » eme Eogan, d' ur gwaz-le evel dout.

- Ur gwaz-le evel don eo a droc'ho ar penn-se diwarnout, hag a vac'ho da zivoc'h.

- Ha penaos 'ta ?

- En ur c'hadir. Ra zeui hiziv a-benn miz da geñveriañ ganin e Ceann Febrat.
»

(1) E saozneg : « she will outrage Oilill in requital, for she will leave him no compensation when they part », Compensation : athgabail = the word is ordinarily a legal term for distraint = gouestl, gwarant. « Beschlagnahme ». N' eo ket sklaer (2) « da vamm Lugaid », en un dornskrid all.

(3) Eogabal (gaol ivinenn) oa mab Durgabal (gaol dervenn). Gouzout a reer ez eus boudiged gourel koulz ha gwregel en hengounioù keltiek.

48

Goude miz enta e teuas pep hini gant e lu. A du gant Mab Ki e oa Lugaid Laga mab Mav Nuz, hag en doa desavet anezhañ (1). Mab Ki a yeas da gomz ouzh e c'hourboellog, a oa heñvel outañ dre neuz ha dremm.

« Bremañ, » eme Lugaid, e kinnigo Eogan emgann din, hag ernez un danvez-roue, mab ur roue ha douaran ur roue hon diskaro.

- Diougan fall gant ar c'homzoù-se, » eme ar gourboellog, « tonket eo dit bout lazhet. Mont a rin war arbenn Eogan, gant da gurunenn war ma fenn ha da zilhad en-dro din, en doare ma treuzkembro pep hini ac'hanon evidout. »

En degouezh ma vin diskaret, kae kuit raktal, rak an holl a lavaro ez out-te kouezhet eno, ha da lu a vo faezhet goude-se. Eogan avat a vo ouzh da glask dre ar c'hadir, ha ma wel da zivhar, a dra sur e vi diskaret (2).

Se a rejod. Ar gourboellog a voe lazhet. Eogan, evelkent, a ouie n' eo ket Lugaid en doa diskaret. Stagañ 'reas d' hen klask. E-touez ar gadourien e verzhas e zivhar lintrus heñvel ouzh erc'h un nozvezh. Hag eñ da redek war e lerc'h ha bannañ e c'hoaf outañ, a dizhas anezhañ en e arzell.

Eogan a oa trec'h. Kanet e voe :
« Kad Ceann Febrat a voe gonezet
War Mab Ki hag e gant kadour.
Seizh vloaz goude, n' eo ket diouzhtu,
E renas-eñ Kad Muccrime. »

Lugaid ne oa ket evit chom en Iwerzhon, goude se. Tec'hout a reas a-gevret gant Lugaid Laga da Alban. Teir gwech nav anezho. Diouzhtu e kemennas Mab Ki d' e dud chom hep mont e neb arvar, gant aon na vijent anavezet, ha lazhet neuze gant roue Alba war atiz roue Iwerzhon, Art mab Conn. Dezhho da ober evel pa vije pep hini roue d' ar re all ; hag arabat da zen hen gervel dre e anv-eñ.

Degemer-vat o devoe digant roue Alban. Ne lavarjont ket o anvioù, ha gour ne ouezas a-beban e teuent, nemet e oa Gouezeled anezho. Un hoc'h hag un ejen a zegasjod dezho bep endervezh en un ti a-gostez, betek dibenn bloaz. (Setu « annacol » Lugaid diwar-benn e c'hourboellog :

« Ne darzh mousc'hoarzh ebet
Abaoe m' eo aet Do Dera diouti.
Rak ? ez int
War-lerc'h ar gourboellog bihan. »)

(1) An ell tad-mager da Lugaid Mab Ki oa breur da Ailill, enta.

(2) Kroc'hen gwenn an tiern a lintrfe e-touez divesker gramennek diwalc'h e soudarded.

49

Estlammiñ a rae roue Alban ouzh o neuz kaer, o doare d'en em ren, hag o c'hadarnded, koulz hag ouzh o berzh er c'henstrivadegoù hag er c'hoarioù brandu, « buanbaig » ha gwezboell.

Edo Lugaid o c'hoari gwezboell gant ar roue, un devezh, pa weljont un den iskis o tont d' o c'haout.

« A-beban e teu an den-se ? » a c'houlennas ar roue.

« Eus bro ar Ouezeled, emezañ.

« Peseurt micher zo dit ? »

« Ur barzh zo ac'hanon. »

« Keloù ganit eus tud Iwerzhon, neuze. Ha mat an traoù gant renerezh Art mab Conn ? »

« - Mat an traoù. Biskoazh ne voe seurt renerezh en Iwerzhon.

- Piv zo roue e Mouan ?

- Eogan mab Ailill. Rak kozh eo deut e dad.

- Ha Lugaid mab Ki ?

- Den ne oar da belec'h ez eas pa voe harluet gant Eogan.

- Pebezh truez ! Gwa Iwerzhon p' emañ en dienez ! Ha tud Lugaid, penaos emañ ar bed ganto ?

- N' eo ket gwall vat. Meveliet, matezh et ha mac'homet ne lavaran ket. »

Lugaid a oa gwerin aour hag arc'hant en e zorn. Lakaat a reas e viz war daou pe dri anezho, ma voe kuzhet ar renkad kentañ a oa dirazañ. Hen merzout a reas ar roue.

« Trivliad a garantez a sav ennout, » eme ar roue.

Lugaid a yeas er-maez.

« Mat, a wazed ! Lugaid eo an den 'zo o vont er-maez. Anat eo din diouzh e c'hoari. »

Un den all a voe lakaet da zont d' o c'haout antronoz. Displegañ 'reas an hevelep danevell. Lugaid a reas an hevelep c'hoari.

« Gwir, » eme ar roue, « bez' ez eo Lugaid. Gant aon rason ne ziskleriont ket o anvioù. C'hoariomp dezho un dro-widre, evit gouzout. Roet dezho un hoc'h hag un ejen, bev en o fezh, ha lavaret dezho e rankont lazhañ hag aozañ al loened o-unan. Neuze e tennint prenn. Lugaid a lezint er-maez. Em merour ez an da fiziañ ar gefridi-se. »

Lugaid, avat, a gemeras perzh er prennenn koulz hag en aozadur.

« Gwel piv a ren ar rannañ, » eme ar roue d' ar merour.

« Ne oa den ebet eno nemet ar bouetaer. »

« Mat ! Lazhet din un toullad logod. »

Ar merour a lakaas war rannad bep hini ul logodenn ruz, kriz, blev hag all. Ma ne zebrjont ket al logod e vefent lazhet, a voe lavaret dezho. Liv fall-meurbet a zeuas neuze warno. Biskoazh ne oant bet dismegañset evelse.

50

« Penaos emaint ? » a c'houlennas ar roue.

« Preder warno, hag o fladoù dirazo. »

« - Preder Mouan a-zioc'h pladoù. Lazhet e vint ma ne zebront ket !

- Gwa neb a c'hourc'hemennas kement-se, » eme Lugaid, en ur lakaat ul logodenn en e c'henou, hag ar roue oc'h eveshaat outañ.

An holl wazed a reas eveltañ. Ur reuzeudig a vennas c'hwediñ pa zeuas lost e logodenn etre e ziweuz.

« Ur c'hleze e-barzh da c'houzoug treuz-didreuz, -> eme Lugaid.

« Debrñ ul logodenn zo debriñ e lost ivez. » Ar gour a lonkas al lost.

« Un eston ar pezh a reont evidout, » eme ar roue diouzh an nor.
« Ober a ran evito ivez.
- Daoust hag out-te al Lugaid ?
- Bez' ez eo ma anv.
- Ra vezi deut-mat e gwirionez. Perak ac'h eus kuzhet ouzhin ?
- Gant aon razout.
- Dialect em bije d' az huanadoù kent hiziv m' em bije da anavezet.
- Ro skoazell din diouzhtu !
- Skoazell az po, a dra sur. Roue Alban ez on-me. Merc'h roue ar Vrezhoned eo ma mamm. Merc'h roue ar Saozon ma gwreg. Fellout a ra din lakaat anezho holl a-du ganit, da zialañ d' ar gaou graet ouzhit. »

Ar roue e-unan a zastumas an holl vagadoù-se en ul lu. Kement lestr, bag pe skaf e bro ar Saozon hag ar Vrezhoned a voe bodet e Porzh Ri, un niver ken bras anezho ma lavarar e raent ur pont etre Iwerzhon hag Alban.

Gant al lu galloudek-se e teuas Lugaid da zialañ d' e enkreziou. Ne oa ket klouar ar paotr. Drastañ a reas Iwerzhon, hag e-leizh a vroiz a blegas dezhañ. Ne gejas gant enebour ebet kent dont betek Mag Muccrime, e kreisteiz Connac'ht. Mag Muccrime, ac'hanta ! moc'h-hud a zeuas er-maez eus kev Cruachan. Dor an Ifern ez eo, en Iwerzhon. E-maez anezhañ e teuas an euzh-evn trifennek a reas e reuz en Iwerzhon betek ken e voe lazhet gant Amairgen, tad Conall Cernach. E-maez anezhañ e teuas ivez an evned ruz a grinas en Iwerzhon kement tra a c'hwezhent o anal outañ, betek ken e voent lazhet gant Uladiz. Ha neuze ar moc'h-se. E kement lec'h m' edont bet ne greske mui nag ed na geot na deil e-doug ar seizh vloaz da heul. Ma klasked o c'hontañ en ul lec'h bennak, pe ma tenned warno, e steuzient evit dont war-wel en ur c'horn all eus ar vro. Ur wech avat ez eas Medb Cruachan hag Ailill d' o riñvañ, e Mag Muccrime end-eeun. Ur pemoc'h a lammas dreist karr Medb. Hi avat a dapas krog en e c'har, ken trumm ha tra. Kroc'hen al loen a darzhas war e dal hag a chomas a-gevret gant e c'har e dorn Medb. Abaoe ne oar den da belec'h ez eo aet ar moc'h. Setu perak e voe anvet al lec'h Mag Muccrime.

50

Mont a reas Eogan, derc'hent ar gad, da gaout Dil Mac hu Crega, un drouiz dall e rannvro Ossarg.

« Deus, » eme Eogan, « da ganflemmañ ha da hudañ ma c'hadourien. »

« Mont a rin ganit, a dad karet, » eme e verc'h. Plac'h dizemez e oa Moncha merc'h Dil. Bez' e vlenie dezhañ e garr.

Tizhout a rejont Mag Cliach. Anat e voe d' an drouiz diouzh komzoù Eogan e oa tonket dezhañ mervel.

« Mat, a Eogan, daoust hag e lezez hil war da lerc'h ? »

« Nemeur, » eme Eogan.

« Mat neuze, a verc'h, » eme an Drouiz, « kousk gant Eogan, da welout hag eñ e vo rouaned en Iwerzhon diwarnon da virviken. »

Ur gwele a voe aozet dezho o-daou. Ur ouenn vat a voe engehentet eno, Fiacha Mell-Ledan dres. Lesanvet e voe « ar gour e zaou c'hllac'har », peogwir e voe lazhet e dad d' an deiz ma voe engehentet, hag e varvas e vamm d' an deiz ma voe ganet.

Perak e voe anvet « Mell-Ledan » ? Ar gwentloù a grogas e Moncha e-tal ur roudour war ar Suir.

« Gwa ni pa n' eo ket warc'hoazh da veure e vi dieubet, » eme he zad. « Rak ar ouenn a c'hourveffe en Iwerzhon da virviken. »

« E gwirionez, » emezi, « nemet e teufe ar mabig a-dreuz ma divlez, dre hent all ebet ne zeuio. »

Hag hi da vont e-barzh an dour. Ur maen a oa e-kreiz ar roudour. Azezañ a reas-hi warnañ. « Bec'h a laka warnon, » emezi. Evelse e chomas-hi difiñv betek an

deirvet eur antronoz. « Poent eo, a dra sur, » eme he zad. Galvet e voe gwragez war he zro. Mervel a reas goude gwilioudiñ. Pladet e oa bet penn ar mabig war ar maen. Seta perak e voe anvet Fiacha Mell ledan, hendar an Eoganed.

52

Art mab Conn a yeas gant ul bras war-du ar C'hornog, en tu-hont d'ar stêr Sinan. Olc-Acha, ur gov a vro Gonnac'ht, a roas bod dezhañ evit an nozvezh a-raok ar gad. Setu penaos e komzas ar gov outañ : « Kreñv eo ar strollad en deus degaset Mab Ki a-enep deoc'h. Gouez e harzo ouzhoc'h ar c'hread-se a Vrezhoned hag Albaniz. N' eo ket o menoz tec'hout, rak re bell e rankfent mont war o c'hiz, darn anezho betek an Alpoù. Drouk rat a zo en den a ren anezho : tra en deus Lugaid bremañ da dalout ar pezh ez eo dleour da Eogan. Pet a vugale a lezez war da lec'h, Art ?

« Ur mab.

- Re nebeut, e gwirionez. Kousk gant ma merc'h a-benn noz, Art. Diouganet eo bet e tiwano meurdez diwarnon. »

E gwirionez, bras e voe ar veurdez, Cormac mab Art end-eeun.

Art a gouskas gant ar plac'h, enta. Lavarout a reas dezhi e c'hanfe ur mab, a vefe roue Iwerzhon. Bez' e tiskuilhas dezhi kement teñzor kuzh bet gorroet gantañ e-sell d' ar mab-se. Kimiadiñ a reas, o lavarout dezhi e vije-eñ lazhet antronoz, hag o kemenn dezhi kemer e gile a vro Gonnac'ht da dad-mager d' o mab. Mont a reas d' ar gad.

Lugaid a oa darev e zezo gantañ. An hanter euse lu a guzhas e-barzh an douar, da lavarout eo e voe graet klazioù, gant mouded ha klouedoù war o gorre. Goafioù a voe daouhanteret, ha lakaet da zerc'hel ar c'hlovedoù, a-dreuz war ar c'hlazioù. Eno e oa pep kadourien c'harvañ Lugaid. Ereet e voe troad Gouezel ouzh troad un Albanad, evit mirout outo da dec'hout.

An daou lu a zeuas an eil a-benn d' egile, gant o renerien, Lugaid Mab Ki, Lugaid Laga ha Béinne ar Brezhon diouzh un tu, Art mab Conn, Eogan mab Ailill ha Corb Cacht diouzh an tu all, war o zalbenn.

Lugaid a ginnigas emgann-daou da Eogan. Hemañ a eilgerias ne venne ket mont war e arbenn, gant ar regred en doa en e geñver. Lugaid a zisklaerias ne daje ket ur gourboellog en e lec'h, an dro-mañ : gwelloc'h gantañ bout debret gant kon Iwerzhon, eget bevañ pelloc'h en divro.

Taer e voe an argad, gant trouz an armoù bannet, trouz ar skoedoù ouzh barvenn ar c'hlezeier ha beg ar goafioù hag ar spegoù. Uzien raz ha pri o sevel uhel en aer. Tachoù distardet o strinkañ diouzh ar c'hlezeier hag ar gwiskamantoù. Gwad o redek, o teverañ, o kailhañ ouzh izili ha divlezoù ar gadourien.

Heñvel ouzh daou arz e-touez ur vandennad moc'h ez ae an daou Lugaid dre ar gad, o stagañ gant pep gour an eil goude egile. Un tog-houarn kribennek war o fenn, un hobregon houarn en-dro d' o c'horf, ur c'hleze meur en o dorn. Ken taer hag int e oa Art, Eogan ha Comb Cacht.

53

Pa voe an daou lu mesk-ha-mesk ec'h argadas ar re a oa kuzhet er c'hlazioù, o c'hlozañ o enebourien dre zreñv, en doare ma oa tapet ar re-mañ er c'hreiz.

Setu ma oa faezhet Art ha kadourien Iwerzhon. Tec'het e oant en disurzh war-du ar c'hreistez, war-du Ath Cliath e rannvro Oic Bethrae. Bez seizh mab Ailill zo eno, en hanternoz d' ar roudour. Pa oa Béinne Breizh o tibennañ Eogan e teredas Lugaid Laga. Sevel a reas karantez ennañ evit Eogan. Hag eñ ha darc'hav un taol gant Béinne war e gilpenn, ma kouezhas e benn war vruched Eogan.

« Divalavat taol-mignoniezh, a Lugaid, » eme v-Mab Ki.

« Da zigoll az po. Penn roue Iwerzhon ez an da zegas dit en elec'h. »

Mont a reas trema 'n hanternoz war-lerc'h ar re faezhet, betek ma kejas gant Art. E lazhañ a reas, hag e zibennañ war ur maen, e-kreiz ur geun a voe anvet

diwar-se « Geun Art », e rannvro Oic Bethrae.

Lugaid Mab Ki a gemeras rouantelezh Iwerzhon, ha seizh vloaz klok e voe e Teamair. Kemer a reas Cormac mab Art ivez da vab-mager en e di.

Ailill Skouarn Noazh, evelkent, a oa bev atav. Setu an « annacol » a reas :

« Krin eo ma zreid bremañ,
N' eus war o zro na mab na daouaran.
Setu ma dezo hep mezh :
Ezeved a zarevan evit Mab Ki. »

Sadb a gane :

« Gwa me, gwa Cliu,
Pa voe kavet Fer Fi en ivinenn.
Da heul e kouezhas Art Mab Conn
Ha seizh mab ma Skouarn Noazh,
. . . .
Gwa me, gwa Cliu,
Pa voe diskoachet Fer Fi en ivinenn.
Un taol 'ganas ouzh Art,
Ur bez a aozas da g-Corb Cacht. »

Ur wech e teuas deñved da laerezh e letonenn ar rouanez. Da Lugaid e oa da varn. « An deñved a vo bremañ d' ar rouanez, » emezañ. Cormac, hag eñ ur paotrig d' ar mare, oa en e c'hourvez e-tal ar roue. « Nann, a dadig, » emezañ, « reishoc'h eo reiñ ar c'hrev da zic'haou evit ar geot. Ar geot a gresko en-dro war ar c'hlazenn, hag ar gloan war an deñved. » « Setu ar varn reizh, » eme an holl. « Mab ar gwir diern eo he rannas. »

54

Raktal e kouezhas an tu eus an ti, e-lec'h ma oa bet rannet ar varn c'haou, d' an traoñ gant an dorgenn. Evelse e chomo da viken, Cloenferta Teamair (Krugell gromm Teamair) end-eeun.

« Lugaid an eog meur a rannas
Ur varn c'haou dre vrellidigezh. »

Bloaz c'hoazh e chomas da roue e Teamair, ha ne zeuas geotenn er-maez eus an douar, na delienn er gwez, na greunenn en ed. Iwerzhoniz a lamas ar rouantelezh digantañ en diwezh, peogwir e oa o ren e gaou.

Distreiñ a reas d' e dir er c'hornog, ha kalz a yeas d' e heul. Lugaid Laga, avat, ne deas ket. « Al lec'h, » emezañ, « ma enebis ouzh ma breur ha ma lazhis ma neskerent ne fell ket din gwelout mui. En em lakaat a ran etre daouarn mab ar roue a lazhis. »

Teir gwech en em erbedas Mab Ki da g-Cormac. Hag e loc'has neuze. Mont a reas da gaout Ailill e Mouan, evit ober azaouezus war e dro. Sadb a gejas gantañ e toull al lez. Lakaat a reas he divrec'h en-dro d' e c'houzoug ; « Na da ket, a vabig ! » emezi. « Droug zo en den, ha gourvenn. »

« Ra vi deut-mat, » eme Ailill. « Deus d' am c'haout, dit d' en em ouestlañ deomp, ma c'helli-te ober un tad ac'hanon, ha me ur mab ac'hanout. Rak n' em eus mab ebet da ober war ma zro. »

Stekiñ a reas e voc'h ouzh boc'h Lugaid. Gant un dant kontammus a oa dezhañ en e benn e c'hloazas Lugaid, avat. Pellaat a reas dioutañ kerkent. Lugaid a gejas neuze gant Sadb. « Reuzeudik an dra-se, » emezi.

« Setu un taol a ziskar ur roue.
Un dant niñvus en deus da lazhet.
Ur c'hlaz-hud zo krog ennout.
Reuzus e voe ar c'himiad diwezhañ. »

Ferchess mab Comman a zeuas da gaout Ailill, a lavaras dezhañ mont war-lerc'h Lugaid. Hemañ a oa goret an hanter eus e benn goude teir eur. Tizhet en doa

e dir, pa weljont Ferchess o tenesaat. Lugaid a oa harp e gein ouzh ur peulvan e-kreiz e wazed. « N' e lezit ket da zont amañ, » eme Lugaid. Ar gadourien a savas o skoedoù d' e gwareziañ. Ferchess avat a vannas dreisto e speg, a yeas a-dreuz tal Lugaid da zasseniñ ouzh ar peulvan. Kouezhañ a reas, gweñv, divuhez.

Ferchess a yeas neuze e-barzh al lammdour, hag a lakaas darnoù e speg war an dour.

Ailill a lavaras :

« Tregont vloaz zo on deut da gozhiad divi.

Bannadenn Mab Comman ar barzh

He deus divorfilet ac'hanon. »

55

STAGADENN

Bezañ gwan ouzh u. b. : bezañ drouk hep ezhom.

e gevaot : an hini a voe desavet a-gevret gantañ, breur-mager ; kevaot (diwar ar c'hembraeg hag an iwerzhoneg, « cyfallt » ha « comhalt »).

« **broc'h** » : disunvaniezh.

gourboellog : farvell, « Narr », « foll ». - War un dro an hini a ziduell ar roue gant e fentigelloù, hag an hini en deus furnez ha gweledigezh an dud iskis-se na reont ket evel an dud all. Setu perak e karfen mirout ar ger « gourboellog » (diwar ar c'herneveg « gorbulloc »).

tennañ prenn : tennañ plouz bras.

dialañ d'ur gaou, d'un droug graet ouzh unan bennak : veñjiñ.

Mouan, Connac'ht, Lein, Ula (e gwirionez e tlefe bezañ Oula evit klotañ ouzh an distagadur iwerzhonek) : rannvroioù Iwerzhon.

riñvañ : kontañ. Gwrizienn geltiek « rim- ».

gourvevañ (diwar skouer yezhoù all, iwerzhoneg, saozneg, galleg, alamaneg...) : bevañ goude, padout hiroc'h amzer.

brellidigezh : diwar « brell ».

niñvus : diwar nim, iwerzhoneg niomh = kontamm, moarvat an hevelep ger hag hor «niñv » = glac'har.

Gwelet em eus kalz o stagañ gant al labour vreizhek, ul labour tenn mar deus unan ; nebeut am eus gwelet o kas o erv da benn ; selaouet o deus an abegerien, kant gwech stankoc'h eget an oberourien ; sellet o deus war o lerc'h ; chomet int a-sav ; aet int war o c'hiz ; fiziañs am boa o divije graet labour gaer ; n'o deus graet netra ; kaout a rae dezho e c'helled salviñ ar vro hep poan : faziañ o deus graet ; na tiegezh, na bro, netra ne vez graet hep poan : na netra vat, na netra badus.

Yann Vari PERROT,

en ur brezegenn d' an 23 a viz Ebrel 1929 da geñver eured Frañsez Debeauvais.

AR PAOTR DIV WECH REUZEUDIK

Kemer a reas an Aotrou Doue traoù hag a oa skoemp evel an avel, gwidilus evel an naer, krenus e-giz ur c'heotenn, moan e-giz ur gorzenn, ken fresk hag ur rozenn, ken skañv hag un delienn ; kemer a reas ouzhpenn kelc'h al loar, sell tener an heizez, daerou ar goabrenn, sartiz ur bann-heol, voulouz ur bechezenn, troellenou ar gwezvoud, abafded ar c'had, fougé ar paün, ragach ar gegin, kaleted ar maen-diamant, blaz c'hwek ar mel ha krougousadenn an durzhunell...

Meskañ a reas ha stummañ ar vaouez diwar gement-se... Koant e oa ha dedennus. Kavout a reas d' an Aotrou e oa kaeroc'h eget ar c'hazelenn, ha, stad ennañ, e roas anezhi d' ar paotr.

Eizh deiz goude, e teuas ar gwaz, lostek, da gaout Doue. « Aotrou, emezañ, n' hellan ken padout gant ar c'hrouadur hoc'h eus roet din. Emañ o fistilhat disehan, hag o klemmichat evit un netraig ; lenvañ a ra ha c'hoarzhin war un dro ; hegasus ha youlek eo ; emañ bepred em c'hichen ha n' em eus tamm diskuizh ebet ken... Dre druez, Aotrou, kemerit anezhi en-dro. »

Ha Doue, madelezhus, a gemeras ar vaouez en-dro. Hogen, eizh goude, e tistroas ar paotr davetañ : « Aotrou, va-unanig emañ abaoe m' am eus rentet deoc'h ar c'hrouadur-se. Ken hoalus e oa pa selle ouzhin a-gorn. N' eus frouezh ebet war an douar a vefe ken flour ha hi. Ho pediñ aran : Rentit ar plac'h din ; n' hellan ken bevañ hepti ».

Ha Doue he rentas dezhañ.

Un sizhunvezh goude, e krizas tal an Aotrou o welout ar paotr o tistreiñ adarre gant e wreg, en ur vountañ anezhi dirazañ : « Aotrou, emezañ, n' ouzon ket penaos 'mañ kont ganimp, met, sur a-walc'h, e teu din, gant ar c'hrouadur-mañ, muioc'h a drubuilh eget a blijadur. Kemerit anezhi en-dro ha mat pell 'zo ! »

« Paotr, eme an Aotrou, droug bras ennañ, distro buan d' az lochenn, gant da hanter-diegezh, ha desk penaos padout ganti. Ma virfen ar plac'h amañ, e teufes d'am hegasiñ 'barzh ur sizhun, evit he c'hemer en-dro. »

Mont a reas kuit an den : « Reuzeudig maz on ! Div wech reuzeudig ! N' hellan ket padout ganti ha, memes tra, n' hellan ket tremen hepti ! »

Diwar ur gontadenn eus an Inizi Komor.

BENEAD.

Notennoù-lenn

L'EMPLOI DES LANGUES VERNACULAIRES DANS L'ENSEIGNEMENT. 171 pajenn. UNESCO 1953. (300 lur, digant Librairie Unesco. C.C.P. 21-27-90 Paris, war gont Société Générale, Comptes Publications de l'Unesco, 45, avenue Kléber, Paris.)

Al levr-mañ a zo ennañ danevellskrid an arbennerien a zo en em vodet e Pariz, e 1951, dindan evezh an UNESCO. da studiañ kudenn ar yezhoù « vernakular » en deskadurezh. A-raok an danevellskrid e kaver el levr notennoù pouezus diwar-benn talvoudegezh yezh-ar-c'havell. Goude ez eus studiadennoù diwar-benn kudennoù zo : an taraskeg e bro-Vec'hsiko, an arabeg skiantel, ar Yezh Indoneziat, ar Pidgin e Gwinea-Nevez, ar Rannyezhoù Akan en « Aod-an-Aour », an hiligayna en Iloilo, unan eus an inizi Filipinas, ar yezhoù finnek-ougriek : studiadennoù a bled gant ar c'henteliañ, pe an unvaniñ, pe ar c'hrouiñ gerioù nevez. Ul leur pouezus-tre eo evit ar Vretoned a stourm da saveteiñ o yezh.

El leur-mañ, evel en e holl embannadurioù emichañs, ne ra implij an UNESCO nemet eus skridoù ha testenioù a-berzh-stad. A-se ne lavarer ket ennañ penaos e vez heskinet yezhoù zo, ne lavarer ket zoken e vez heskinet yezhoù (peseurt gouarnamant a anzavfe ez eus heskinerezh; nemet e bro an amezeg e vefe ?). Daoust da se e kaver el levr traoù saourus-bras, evel hemañ diwar-benn douaroù nann-emren ar Meurvor Habask : « Er broioù meret gant at Saozon e vez klasket diwall ha pinvidikaat ar sevenadurezh c'henidik. Hag evit-se ereer er skol gant yezh-ar-c'havell, « santual ene ur bobl ». Eus un tu all, avat, ar skiant-prenet gounezet gant ar renerien c'hall, hag ivez c'hoant ar vroidi o-unan, a ra ma vez diluziet ar gudenn en un doare disheñvel e trevadennoù ar C'hallaoued : eno ne greder ket ez eo ret ober gant ar yezhoù « vernakular ». Lavaret brav eo : met an holl o deus komprenet.

Ne vo kavet netra el levr diwar-benn ar yezhoù heskinet, pe kentoc'h diwar-benn heskinerezh ar yezhoù. Kalz traoù a vo kavet, avat, ha traoù mat-tre, diwar-benn an doare ma stourmer, e broioù zo, da adsevel yezhoù.

58

Petra, da gentañ, a vez anvet gant an arbennerien-se ur yezh vernakular ? Setu amañ an diskleriadur : « ur vernakular a zo yezh-kavell ur strollad-tud a zo dindan beli politikel pe kevredigezhel ur strollad tud all a yezh disheñvel ». Ar ger vernakular a c'hellfe e eta bezañ troet e brezhoneg gant yezh-sujet. Koulskoude ur yezh-sujet n' eo ket ur vernakular mar deo yezh ofisiel ur stad all (evel ar germaneg en Elzas). En Europa (hep kontañ an USSR) n' eus eta nemet 14 yezh-suj : an armeneg, an euskareg, al lapeg, ar c'hatalaneg, ar wendeg, ar malteg, ar manaveg, ar provañseg, ar brezhoneg, ar c'hembraeg, ar gouezeleg, al lituaneg, ar c'haraiteg hag an tzigane. N' eus el levr, diwar-benn ar yezhoù-se, nemet ar pezh a c'hell kavout ar gouarnamantoù gall, saoz, h.a., da lavarout : gwall-nebeut a dra.

Degemer a ra arbennerien an UNESCO evel gwirionez-diazez n' eus benveg ebet gwelloc'h da reiñ deskadurezh d' ur bugel eget e yezh-kavell. N' eus benveg ebet gwelloc'h e-keñver eneoniezh, e-keñver kevredoniezh, e-keñver deskoniezh. Ret eo eta ober skol e yezh ar vro, ha n' eo ket en ur yezh all. Ma n' eo ket dereat ar yezh-se d' ober skol, n' eus nemet he lakaat dereat. Ma n' eus ket gerioù skiantel enni, n' eus nemet krouiñ. Ma n' eus ket levrioù, n' eus nemet embann. Ha ma ne fell ket d' ar bobl bezañ kenteliet en he yezh « ez eo ret prouiñ dezhi n' eus tra gwelloc'h eviti, hag he gounit d' ar gredenn-se ».

Diwar-benn talvoudegezh ar yezh-kavell evel yezh an deskadurezh ez eus bet graet en Iloilo un enklask talvoudus-meurbet. Goude implijout e skolioù zo, e-lec'h ar saozneg, an hiligayna (yezh ar vro) e voe goulennet ouzh ar gerent penaos e varnent emzalc'h o bugale, hervez ma veze graet skol dezho e saozneg pe en hiligayna. Setu amañ ar goulennoù hag ar respontoù:

« 1) Daoust ha muioc'h a c'hoant o doa ar vugale da vont d' ar skol pa vezent kelennet e saozneg ? 230 a gerent o deus lavaret e kave gwelloc'h o bugale

an hiligayna, 21 ar saozneg, 2 o deus kavet abegoù all da emzalc'h o bugale, ha 36 n' o deus ket taolet pled ouzh ar gudenn.

2) C'hoant brasoc'h da lenn ha da skrivañ ? Hiligayna, 234 ; saozneg, 18 ; abegoù all, 1 ; kemm ebet, pe c'hoant ebet, 36.

3) Barrekoc'h da gontañ istorioù, da zisplegañ darvoudoù ? Hiligayna, 222 ; saozneg, 20 ; abegoù all, 1 ; hep kemm ebet, pe divarrek, 47.

4) C'hoant brasoc'h da gontañ d' ar gerent ar pezh a zo bet desket er skol, diwar-benn al labourat aketus, an emzoujañs, ar garantez-vro ? Hiligayna, 214 ; saozneg, 18 ; hep kemm, pe hep c'hoant, 57.

59

5) Doujañs brasoc'h evit ar gerent, sentidigezh, sevended (evel lavarout kenavo, pokat d' an dorn, h.a.) ? Hiligayna, 233 ; saozneg, 11 ; abegoù all, 3 ; hep kemm, pe hep doujañs, 42.

6) Doareoù naetoc'h (gwalc'hiñ an dremm, kribañ ar blev, broustañ an dent, kemmañ dilhad, kibellañ, h.a.) ? Hiligayna, 198 ; saozneg, 18 ; abegoù all, 3 ; hep kemm, pe lous-tre, 71.

7) Prestoc'h da reiñ sikour gant labour an ti (ledañ pe rollañ ar pallennoù kolo, lazhañ an tan er gegin, skubañ al leurzi, naetaat en-dro d' an ti, mont davit dour, mont da gerc'hat keuneud, h.a.) ? Hiligayna, 194 ; saozneg, 23 abegoù all, 3 ; hep kemm, pe o nac'h reiñ sikour, 70.

Meur a wech em eus merzet, hag em eus lennet, e oa speredekoc'h ar vugale pa vezent desket en o yezh-int. An hevelep gwirionez a gaver displeget gant enklasker Iloilo. Rannet en doa bugale an enezenn e daou strollad : strollad ar re o doa graet pep tra e saozneg abaoe an derou, ha strollad ar re a oa bet desket en hiligayna hepken e-pad an daou vloavezh kentañ ; gant saozneg en trede bloavezh hepken. Atav eo bet bugale ar strollad 2 kalz war-raok e pep keñver, ha goude deskiñ saozneg e-pad c'hwec'h miz en trede bloavezh e oant ken barrek war ar yezh-se hag ar re o doa studiet ar saozneg, hag ar saozneg hepken, abaoe an derou.

Souezhus eo, a-hend-all, galloud ar vugale da zeskiñ yezhoù. E broioù zo e teskont 4, 5 pe 6 yezh er skol. Er Pakistan, da skouer, ur bugel a vefe ar pouchtou e yezh hag a vefe o chom er rannvro bengali a zlefe deskiñ : e yezh-kavell, ar pouchtou ; yezh e rannvro, ar bengali ; ar yezh vroadel, an ourdou ; yezh ar relijion, an arabeg ; ur yezh europat bennak, ar saozneg peurliesañ ; hep kontañ a-wechoù ar germaneg hag ar sanskriteg. Bugale Japan a rank deskiñ skrivañ japaneg gant arouezioù sinaek, gant arouezioù kana ha gant arouezioù romanekaet (romaji). An arouezioù sinaek, a-hend-all, a c'hell bezañ skrivet e pemp doare disheñvel, a ranker deskiñ, hag an arouezioù kana e pevar doare, a rank ar vugale deskiñ daou anezho da vihanañ, ar c'h-katakana, stumm moulet, hag an hiragana, stumm dornskrivet. En diwezh e rank ar bugel deskiñ c'hoazh pevar stumm-yezh (pe rannyezh) ar japaneg : ar c'h-kogotai pe yezh voutin, ar bungotai pe yezh lennegel, ar sorobun pe yezh ar skrivañ lizheroù, hag ar c'h-kambun pe yezh ar glaseien sinaek.

60

Niver ar yezhoù implijet e skolioù ar bed a ya war-gresk bemdez. El lodennoù eus Afrika dalc'het gant ar Saizon e reer skol e 91 yezh disheñvel (El lodennoù dalc'het gant ar C'hallaoued hag ar Velged e reer skol e galleg hepken : n' eus ket tu d'ober a-hend-all, ha tud ar vro ne fell ket dezho bezañ kenteliet en o yezh ! ! !), ha se n' eo nemet un derou : abaoe 1952, da skouer, e reer skol er yezh swazi er Swaziland ha n' eo ket mui e zoulou evel a-raok, e Kenya emeur o vont da zilezel ar swahili e meur a gorn-bro, daoust d' ar swahili bezañ bet degemeret da genyezh, pe yezh-kenwerzh, gant seizh milion a dud, evit ober gant ar yezhoù vernakular. Er Guatemala emeur o paouez sevel ul levr da zeskiñ lenn e quekchi (an holl ziskleriadurioù-mañ tennet eus Revue Analytique de l'Education, UNESCO, levrenn V, niv. 10) hag e bro-Vec'hsiko e reer skol abaoe un nebeut bloavezhioù e taraskeg (20.000 den o komz anezhañ), en otomi (87.000), e maya (114.000), e nahuatl (360.000), e miksteg (125.000), en ur c'h'hortoz gwelloc'h c'hoazh.

Muioc'h-mui a yezhoù a gentelier. Met yezhoù hepken a gentelier. Lezet e vez ar rannyezhoù a-grenn a-gostez. Pe, kentoc'h, ar rannyezhoù a rank bezañ graet diouto yezhoù unvan.

Kuzulioù talvoudus-tre a gaver el levr diwar-benn an unvaniñ yezhoù, ar skiantelaat yezhoù, ar bremanaat yezhoù. Seul dudiusoc'h em eus kavet ar c'huzulioù-se ma 'z int roet, a-wechoù e kenali gant arbennegerien all an UNESCO, a-wechoù war e giriegezh e-un, gant un den a zo bet anv anezhañ nevez zo en emsav, an Ao. Aurélien Sauvageot.

En ul levrig nevez-embannet diwar-benn doare-skrivañ ar brezhoneg eo ez eus bet graet meneg eus an Ao. S. hag eus e venozioù. Ar menozioù-se a zo displeget dre an hir el levr. « Kement ha ma c'heller, » a lavar kuzul an arbennegerien, « e tleer klask heñvelaat skriturioù ar yezhoù implijet en hevelep stad. (Teurel evezh e kemer an UNESCO ar stadoù evel m' emaint, hep en em c'houlenn ha mat int evel-se, pe fall.) Mar deo posubl, doare-skrivañ ar yezh lec'hial a zle klotañ gant hini ar yezh rannvroel, ha gant hini ar yezh stad pe yezh ofisiel, evit lakaat aesoc'h an tremen eus an eil d'eben ...E degouezhioù zo avat e c'hell bezañ gwelloc'h chom hep sentiñ ouzh ar reolenn-se... : mar deo diaes pe direizh doare-skrivañ an eil yezh (da lavarout eo, e Breizh, ar galleg ; ar « vernakular » a zo, evit an arbennegerien, ar yezh kentañ) evit traoù zo, n' eo ket un digarez evit choukañ er yezh lec'hial diaesterioù aner. Da skouer ne vefe ket mat implijout e yezhoù all an doare gallek pe saoznek da aroueziañ ar vogalennoù, zoken evit yezhoù lec'hial komzet en underioù politikel a yezh c'hallek pe saoznek. » Evit sentiñ ouzh kuzulioù an Ao. Sauvageot n' eo ket lakaat an doare-skrivañ brezhonek heñveloc'h c'hoazh ouzh an hini gallek eo a vefe d' ober, ar c'hontrol ne lavaran ket ! Ouzhpenn-se ne gav ket din ez eo aner displegañ ar pezh a zo kontet war ur bajenn all diwar-benn an doare-skrivañ vietnamek : adalek an deiz m' en deus ar vietnameg en em zieubet eus an doare-skrivañ sinaek, implijet gantañ betek-hen, evit degemer an doare quoc-ngu, eo en deus anavezet mare benniget an Azginivelezh (1) .

61

Ret eo unvaniñ ar yezhoù, arvar ebet war ar poent-se. Daou zoare a zo d' hen ober, a lavar an Ao. Sauvageot : pe kemer ar rannyezh komzet ar muiañ hag ober ganti, o tilezel ar rannyezhoù all, pe sevel diwar an holl rannyezhoù ur yezh-etre. Meuleudi a ra an Ao. Sauvageot da Finniz evit bezañ unvanet o yezh en eil doare : ar suomeg skrivet, diazezet da gentañ war rannyezhoù ar c'hornog hag ar mervent, a zo bet adstummet e doare da dennañ implij eus an holl rannyezhoù gwitibunan, evit brasañ mad ar yezh hag ar vro.

(1) Ur gudenn all a zo c'hoazh : pa vez komzet an hevelep yezh e pastelloù-bro hag a zo dindan beli meur a stad, da skouer an haoussa en Afrika ar c'hornog, e ranker klask kaout ur skritur hepken, ha n' eo ket meur a hini, evel ma c'hoarvez gant an haoussa. En hevelep doare e c'heller lavarout e vefe gwelloc'h tostaat doareoù-skrivañ ar yezhoù hag a zo kar-nes an eil d' eben : ma vefe ar brezhoneg da vezañ tostaat e zoare-skrivañ ouzh hini ur yezh all, ouzh doare-skrivañ ar c'hembraeg hag ar c'herneveg eo e tlefe bezañ tostaat da gentañ.

Ouzhpenn unvaniñ ar yezh, a lavar an Ao. Sauvageot, ez eo ret bremanaat anezhi dre grouiñ gerioù nevez. Meur a zoare a zo da ijinañ gerioù. An hini kentañ, ha fallañ, a zo amprestañ digant ar yezhoù estren, en ur gemmañ ar ger hervez reolennoù distagadur ar « vernakular ». Se, a lavar an Ao. Sauvageot, n'eo ket mat, rak ar gerioù-se ne c'hellont ket bezañ komprenet diwar o gwrizienn. An eil doare, gwelloc'h un tamm mat, a zo heñvelaat diwar ar yezhoù estren : en hungareg, da skouer, ez eo bet troet ar ger **materia** gant **anyag**, **anya** o talvezout kement ha mamm, hag al lizherenn g o vezañ un dibenn-ger diresis e ster ; e finneg ez eo bet troet ar germaneg **Gas** gant **kaasu**, ur ger a dalvez, e rannyezhoù zo, kement ha *latar yen*. An trede doare, gwellañ-holl, a zo ijinañ en ur dennañ implij eus pinvidigezhioù ar yezh : terzhienn, da skouer, a zo bet troet **kuume** gant Elias Lönnrot, **kuume**, (eus **kuuma**, tommer) o talvezout kement ha « ar stad m' emañ un den enni p' en devez tomm ». Ur pevare doare a zo, en diwezh : ijinañ penn-da-benn, evel m' o deus graet an Amerikaned p' o deus krouet ar ger **kodak** hag ar C'hallaoued (?) p' o deus krouet nevez zo, ar ger **Garap**. En estoneg, da skouer, en deus krouet J. Aavik ar ger **roim** evit lavarout torfed, dre ma kave dezhañ e oa ar sonioù-se a zeree ar gwellañ da reiñ menoz un torfed ; en hungareg ar ger o

talvezout evit farsadenn a zo **elc**, eus **el**, dremm ul laonenn, hag ar son **ts** (skrivet **c**), son laouen ha fentus.

62

N' eus ket da gaout aon ober re a c'herioù nevez, a lavar an Ao. Sauvageot. Evit an hungareg en deus Paul Bugàt kinniget ouzhpenn 40.000 ger o tennañ d' ar skianfoù-natur, hag a-drugarez dezhañ, ha da dud all eveltañ, eo ez eo deut an hungareg da vezañ ur gwir yezh vroadel (en divizoù pemdeziek ez implij Hungariz etre 30 ha 40 % a c'herioù ijinet), e-lec'h « an trefoedach oedach leun a c'herioù germanek, gallek, latinek, h.a. » a oa e derou an XIXvet kantved. Hevelep tra evit ar finneg, na oa d' ar mare-se nemet un «trefoedach euzhus a c'herioù finnek ha svedek » (1) .

Div evezhiadenn a ra c'hoazh an Ao. Sauvageot diwar-benn ar stourm evit ar yezhoù. N' eo ket, emezañ, gant ar yezhoniourien a vicher ez eo bet graet betek-hen al labour talvoudus : « ar yezhoniourien a vez peurliesañ a-enep an nevesadurioù - an nevesadurioù hag a ra koulskoude d' ar yezhoù trec'hiñ. Prederiet int da gentañ-holl gant studi ar yezhoù, ha stourmet o deus a-hed ar wech evit an distro d' an tremened, dre glask adsevel ar yezh kozh. N' o deus ket en em c'houlennet petra eo ur yezh, penaos e c'hell bevañ... Ur medisin an hini eo, Elias Lönnrot, en deus roet d' ar finneg e c'heriadur pa oa ar yezhoniour Ahlqvist o studiañ an deveradurezh-c'herioù hag ar c'henyezhadur ».

An eil evezhiadenn a garf en sachañ an evezh warni a zo diwar-benn talvoudegezh ar vroadelouriezh er stourm evit ar yezhoù. E gwirionez ne c'heller ket distagañ ar stourm evit ar yezh eus at stourm broadel. « E Finland, » a skriv an Ao. Sauvageot, « ez eo bet ar stourm evit ar yezh vroadel, tost da vat, ar stourm evit an dieubidigezh kevredigezhel ha broadel. En Estonia eo bet memes tra. »

(1) Ret eo ivez eeunaat ar yezhoù, a lavar an Ao. S. A-wechoù e tleer krouiñ stummoù a vank en ur yezh, evel ma 'z eus bet krouet ul liester hag unander e tahitianeg, ha stummoù-verb a zo e yezhoù poluneziek all. E finneg ez eo bet degemeret ar son **d**, na oa ket anezhañ en darn vrasañ eus ar rannyezhoù, met a lakae aesoc'h da renkañ displegadurioù gerioù zo. En estoneg ivez ez eus bet graet un dra bennak heñvel evit sklaeraat an displegadurioù gerioù ha krouet stummoù nevez da zisheñvelaat, da skouer, stumm adverboù zo diouzh stumm an dro-c'henel lies, o-daou oc'h echuiñ gant **ste** er rannyezhoù. A-wechoù all e tleer ober an dra gontrol, da lavarout eo lezel da gouezhañ stummoù a zo er rannyezhoù bev, dre ma seblantont didalvoud evit ur yezh a-vremañ : da skouer e finneg ez eo bet nac'het degemer er yezh skrivet an « amzer-dremenet displegañ » hag amzerioù-verb all.

63

Ur wech glanaet, unvanet, skiantelaet ha bremanaet ar yezh ez eo ret lakaat anezhi da drec'hiñ. Se n' eo ket diaes, ma karer hen ober - se n' eo ket diaes, ur wech gounezet ar frankiz politikel, avat. Meneg a zo el levr eus ar pezh a vez graet en Israhel, dreist-holl eus ar skolioù a-ratozh (Ulpanim) e-lec'h ma tesker hebraeg, dindan pevar miz, d' ar skolaerien, kelennerien, h.a., a zeu d' ar vro hep gouzout ger eus ar yezh vroadel (prestet a vez arc'hant d' an dud da vevañ ha da vagañ o ziegezh e-pad m' emaint o teskiñ en Ulpanim). Skridoù hiroc'h a zo, dreist-holl diwar-benn an arabeg skiantel, ha diwar-benn ar yezh indoneziat. Da yezh vroadel ez eo bet dibabet en Indonezia ar malezeg, daoust na oa komzet nemet gant pevar milion a dud, pe marteze dre ma oa yezh un niver bihan-tre, o lezel a gostez yezhoù a sevenadur kozh, ha kenteliet er skolioù abaoe pell, evel ar javaneg (40 milion a javanegerien), ar sunda, ar madura, h.a. E 1930 hepken e oa bet krouet gant ar strolladoù politikel holl-indoneziat da vrudañ ar ger-stur « Ur vro, ur bobl, ur yezh » hag e 1933 hepken e oa bet savet ar gelc'hgelaouenn gentañ e **bahasa** indonesia, ar gelaouenn lennegel ha sevenadurel anvet **Pudjangga Baru** (Ar Barzh nevez). Gant Japaniz, aloubet ganto ar vro, e voe difennet an nederlandeg ha rediet an holl gargidi da zeskiñ, hep an disterañ dale, ar malezeg, ha da ober o holl labour ennañ : ganto e oa anvet ivez, e 1942, ar c'h-Komisi Bahasa Indonezia, gant ar garg da sevel ar gerioù skiantel a vanke ha d' ober eus ar malezeg ur wir yezh a vremañ (seizh mil ger a grouas ar c'h-Komisi etre 1942 ha 1947 ha seizh mil all etre 1947 ha 1950) . Ur wech dieubet ar vro ne voe ket lakaet tud ar c'h-Komisi en toullbac'h : kendalc'het e voe gant al labour sevel ar bahasa indonesia,

hag a zo bremañ yezh nemeti ar mererezh.

Ur wech c'hoazh : kalz traoù mat a zo da gaout el levr-mañ, traoù na vezint kavet e nep lec'h all. Mat e vefe e d' ar stourmerien hel lenn. Kalz gwelloc'h c'hoazh brudañ anezhañ, pe da nebeutañ e zanvez.

Per DENEZ.

DIV STUDIADENN DIWAR-BENN AR MAEZIOU.

Tri bloaz 'zo e teue er-maez « Gant Menec'h ruz Pont Melvez » gant A. Bourges (St Briec, Les Presses Bretonnes, 1951). Warlene an Tad Chaussy a embanne « Ur barrez vreizhat : Lennon » (Quimper, Librairie St Corentin, 1953). Pont Melvez ha Lennon daou gorn bro o vevañ diwar al labour douar, unan e Bro Dreger, met war harzoù Bro Gernev, egile e-kreiz Bro-Gernev. O c'heñveriet hon eus gant plijadur savet ma 'z int gant tud disheñvel o stad. An Tad Chaussy a zo eus urzh Sant Benead hag an Ao. Bourges a zo rener ur skol kentañ derez, met o daou e tiskouezont anavezout ar gudenn.

64

Da gentañ, levr an Ao. Bourges a seblant bezañ aesoc'h da lenn, an doare-skrivañ o vezañ resisoc'h, ar frazennoù berroc'h ; bep pennad a zo rannet en un doare sklaer-tre. Soñjal a c'heller en deus klasket heuliañ diskleriadurioù ar Ministr (7 a viz Kerzu 1945) diwar-benn kelennadurezh istor ar c'horn broioù, e doare ma c'hellfe servij d' an holl. An Tad Chaussy ne oa ket ar preder-se en e benn hag e studiadenn a zo ledanoc'h ha bevoc'h a drugarez d' ar menegoù a ra eus istor Breizh.

Nag an eil nag egile n' o deus bet kalz a notennoù evit ar maread a-raok 1532, hen kompren a reer pa soñjer pegement a zistruj o deus graet e-touesk an dielloù prevez brezelioù ar re Unanet. Setu perak o deus studiet dreist-holl buhez ar c'houer breizhat en amzer a-raok an Dispac'h. Eveljust mare an Dispac'h hag hini hon amzer a zo studiet ivez, hag en doare reizh a-walc'h.

Met ret eo deomp tennañ an evezh war al lec'h roet d' hor yezh. Eus perzh an Tad Chaussy, n' eus netra souezhus. En tu-hont da bennadoù hir ha plijus gant ar barzh-kannad J. L. Henry a voe e-pad pell maer Lennon :

« Lennon zo eur barrozig na neus histor ebet, » e kinnig e dibenn e levr ur studiadenn war ster an anvioù-lec'h. Evit an Ao. Bourges, reiñ a ra div varzhoneg, kristen-tre avat, unan tennet eus dastumad Pennwern « Gwerz belek Guegan », eben savet gant un den eus ar vro, Moris Salaün « Gwerz Ermit Kroaz Huet ».

Bert-ha-berr setu div studiadenn gaer a ra enor d' an oberourion hag a zo skouerioù da heuliañ.

Abbé Elie GAUTIER. - L'Emigration bretonne : Où vont les Bretons émigrants. Leurs conditions de vie - 288 pajenn. Entraide bretonne de la Région Parisienne, 3, rue du Départ, Paris (14e).

N' heller nemet bezañ laouen o welout embannet tamm-ha-tamm tezenn ken pouezus an Ao. beleg Gautier, o studiañ pizh kudenn an divroadeg vreizhat, ...da lavarout eo an doare truezus a vez implijet da reiñ d' hor pobl al Lebensraum (kelc'h-bevañ) dleet dezhi.

65

Evel en div levrenn gentañ (s. o. Al Liamm niv. 21, p. 63) e weler anat penaos en em gav mac'homet spontus hor pobl da heul ar stad arboellerezhel enep lakaet da ren en hor bro gant renerien Bariz. El levr--mañ, e vez studiet aketus penaos e vev e-maez ar vro ar bernioù tud a soñj dezho kavout ur vuhez evurusoc'h ha plijusoc'h o vont da giañ dindan beli estrenien. Sklaer eo n' eo ket gwall-gonfortus seurt studiadenn ! Rouez-kenañ ar re a zeu a-benn da c'honit ur plas uhel ! peurvuañ, perzhioù mat ar ouenn a vez kollet hep tamm kempouez ebet. An divroadeg a seblant bezañ evit hor c'henvroiz un emlzhadeg a-youl-gaer, pa ne gaver ket bremañ e Breizh peadra da bourchas labour d' an holl.

Gwann a-walc'h - dreist-holl pa soñjer er menozioù ken kreñv ha ken yac'h embannet gwechall gant Breiz Atao war an hevelep kudenn - e vo kavet klozadeg an oberenn : goulenn a ra an Ao. Gautier labouradegoù e Breizh, evel-just, hogen evitañ, trec'h ar galleg a seblant bezañ ivez trec'h an araokaat... (n'en deus ket meizet kiriegezh don labour spontus an divrezhonekaat renet en un doare ken kriz gant an holl skolioù hag an holl c'halloudoù a-enep ar pezh a ra talvoudegezh ar Vretoned) (1). Nerzhusoc'h hor bijemp karet gwelout tamall d' ar c'hevredigezhioù divroidi disterded o obererezh : koroll ha banvezioù dreist-holl, pa c'hallfent bezañ skolioù dreist a spered yac'h hag a genskoazell.

Forzh penaos, gourc'hemenoù kalonek a zleer d' an Ao. Gautier evit al labour dispar en deus gouezet seveniñ war ur gudenn ken pouezus. Menegomp gant meuleudi al linenoù diwezhañ a vo kavet enno an hent nemetañ da heul evit diskoulmañ ar gudenn : « Bro-Nederland, ken heñvel ouzh Breizh e meur a geñver, a c'hell bevañ 200 den war bep km². Perak ne rafe ket Breizh kemend-all ? » Pa weler un espernour sirius evel Chombart de Lauwe o keñveriañ Breizh ha Bro-Danmark (2) e c'heller lakaat da wir n' eus a silvidigezh evit hor bro nemet en ur gemer skouer diwar ar broioù bihan-se : Nederland, Danmark, Suomi, Iwerzhon, h.a., ken ledan o doare-bevañ, ha ken bras o lec'h er bed a-vremañ.

(1) Ar c'helenner Morvan al Lannoù da skouer, daoust dezhañ chom yen a-walc'h e-keñver an emsav broadel, a gred lavarout en eil levrenn e Zouaroniezh Vreizh (p. 432) : « l'on peut admettre que l'autonomisme breton soit la solution de principe la plus claire et la plus totale du problème breton ».

(2) Chombart de Lauwe. Pour une agriculture organisée, Danemark et Bretagne.

NOTENNOU

HOR MIGNONED. -

An Dr Le Quinio hag an dimezell F.Thomas a gemenn dimp ez int bet euredet e Plouigno, d' an 13 a viz Meurzh.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d'ar priedoù nevez.

Gwenola-Youna Monjarret a zo laouen da gas keloù eus ginivelezh he c'hoar vihan badezet dindan an anv a Nolwenn-Anna, e Sant Brieg, d' an 10 a viz Meurzh.

Anna ar Bihan a zo laouen da gemenn ganedigezh he c'hoarig, Soazig, en Issy-les-Moulineaux, d'ar 5 a viz Ebrel.

Hor gwellañ gourc'hemennoù.

KANV. -

Doaniet omp o kemenn d' hol lennerien ez eo marv e Pau (Bro-C'hall), diouzh an noz, etre an 18 hag 19 a viz C'hwevrer diwezhañ, gwreg hor c'heneil Andreu Geffroy, ar brogarour kalonek. Harzet er bloaz 1944 ha gwallgaset neuze gant tud an « dieubidigezh », e chomas an itron Geffroy gwall-glañv da c'houde hag abaoe edo etre daouarn ar vedisined e klanvdioù hag e tiez-yac'haat.

Hor c'halonekañ gourc'hemennoù a gengañv d' he fried ha d' he bugale ha Doue d' he fardono !

Keloù hon eus bet ivez eus Andreu Geffroy, bepred en toull-bac'h en abeg d' e venozioù breizhat ha d' un torfed tamallet dezhañ e gaou. Hogen fiziañs hon eus e vo dieubet dizale a-drugarez da geneiled gredus ha kalonek na baouezont ket d' ober difreoù a-du gantañ. Salv e teufe hor spi da wir a-barzh pell !

Klevet hon eus ez eo marv nevez zo e Antony, e-kichen Pariz, an Ao. Caurel, bet skolaer kristen e Sant Tegoneg, hag anavezet en hol lennegezh dindan an anv « Evnig Arvor ». Skrivañ a reas an Ao. Caurel kalzik traoù en e yezh pa oa yaouank, met lennet hon eus e oa bet torret eus e garg ha kaset en harlu en abeg d' e vrogarouriezh, pezh a reas dezhañ tevel a-grenn. Poan hon eus o c'houzout ez eo marv hep adwelout Breizh.

DIEUBET ED BET ANDREV JAFFREZ. -

Gant levezet hon eus klevet e oa bet dieubet, d' ar 15 a viz Ebrel, gaude 9 vloaz tremenet en toull-bac'h, ha nouspet miz chadennet treid ha daouarn, ar broadelour Andreu Geffroy. Hor gourc'hemennoù ha hetoù gwellañ a reomp dezhañ en degouezh-se. War a glevomp e chomfe c'hoazh ur broadelour en toull-bac'h, Gervennou, eus Bezenn Perrot.

PROFOU.

- Setu roll ar profoù hen eus degemeret e-korf an daou viz diwezhañ :

C'HWEVRER.

- F. Kemener, 500 lur ; Marchand Gourlaouen, 1.000 ; Loeiz ar Floc'h, 500 Tad Yann Chapel, 200 ; Herri Floc'h, 200 ; Dll O. Chevillotte, 300 ; A. Gwilcher, 1.500 ; F. ar Bleiz, 200 ; A. Gwilhuo, 2.000.

- War un dro, 6.400 lur.

MEURZH.

- M. Alisse, 3.500 lur ; Dizanv, Breizh-Uhel, 2.000 ; Dizanv, 3.000 ; It. V. a Sant-Per, 3.000 ; Dizanv, 5.000 ; Haelog, 500 ; Ronan Chevalier, diner ar yezh, 1.000 ; Herve Maze, 500 ; J. Penneg, 500 ; Glaodina Mazeas, 500 ; E. Bourdet, 250 ; Y. Le Chapelier, 1.000 ; Dll O. Chevillotte, 1.000 ; Y. Bonvallet, 600 ; Dll Baron, 5.000 ; H. Delaporte, 500 ; A. Daniel, 2.700. -

War un dro, 30.550 lur.

Abaoe derou ar bloaz hon eus bet 54.650 lur a brofoù. En anv ar gelaouenn, trugarez d' ar brofourien galonek.

AL LIAMM HE DEUS 409 KOUMANANTER. -

Setu ar sifrennoù :

Aodoù an Hanternoz, 57 ; Penn ar Bed, 91 ; Il ha Gwinum, 31 ; Loer Izelañ, : 28 ; Mor Bihan, 27 ; Pariz ha tro-war-droioù, 80 ; Departamantoù all, 52 ; Trevadennoù

Bro-C'hall, 7 ; Iwerzhon Bro-Skos, 2 ; Bro-Gembre, 9 ; Bro-Saoz, 3 ; Stadoù-Unanet, 5 ; Kanada, 3 ; Arc'hantina, 1 ; Brazil, 1 ; Helvetia, 1.

Daou eus hor mignoned o deus betek hen kaset pephini 5 koumanant ha gounezet ur c'houmanant bloaz war Alfa. Al lizhiri bruderezh kaset gant A. Latimier, ar pennadoù er c'helaouennoù, ar galv en niverenn ziwedhañ o deus douget frouezh hag ivez strivoù hor c'heneiled feal. E daou viz hon eus gounezet 24 koumananter. Hor pal a zo bremañ tizhout 500 !

AR BARZHAZ. -

Ar Barzhaz distag en deus koustet deomp 100.000 lur. Gwerzhet hon eus evit tost da 50.000 lur. N' eo ket fall met daoust da se e chom un toull bras a-walc'h da stankañ hag a vo ret stankañ dre ar werzh.

HOL LENNERIEN A SKRIV

Evnig Penn ar C'hoad, brezhoneger a-vihanik a lavar kement-mañ : « Bez hon eus e-touez ar skrivagnerien vrezhonek darn hag a doufemp ez int brezhonegerien a-vihanik. Bez' ez eus ivez, brezhonegerien a-vihanik hag a zeu da vezañ gallegerien kozh pe zoken kozh-gallegerien. D' am meno un dra a zo ret dreist-holl hiziv an deiz : karout ar brezhoneg. Hag ar gwellañ doare da garout ar brezhoneg, ar gwellañ a-bell, eo Komz Brezhoneg ».

Pennad P. Denez « Hent hor barzhoniezh » am eus kavet mat-tre ivez. A-du krenn ez on gant J. K. Montreal, pa lavar deoc'h e vefe un dra vat brasaat lodenn an danevelloù, ar romantoù pe ar c'hontadennoù diwargoust lodenn ar burutellerezh, yezhoniezh, h.a. Rak ar re gentañ eo a yelo d' ober hol lennegezh vrezhon e-lec'h an traoù all ne vo pleustret warno nemet gant un nebeut gouizieien gozh n' o deus na n' o devo tamm levezon war amzer da zont hor yezh. A. G.

« Prederiet am eus war stad kef Al Liamm, embannet en niv. 42. E-pad ar bloaz tremenet hoc'h eus degemeret, e-giz profoù, wellwazh, dre goumananter : 130.733 lur : 385 = 340 lur

Bremañ, evit terriñ ar c'holl, a-walc'h e vo reiñ, en tu hont da se : 49.851 : 385 = 130 lur
en holl : 470 lur.

Gant 470 lur a brof digant pep koumananter eta ha pa ne gemmfe na gamm, an traoù, na niver ar goumananterien e c'hello ar c'holl bezañ kaset da get a-raok dibenn bloaz.

Emaon o vont da gas deoc'h un eil prof a 250 lur, ar pezh a raio 500 da seveniñ va soñj, ha re vevo Al Liamm ».

E. B.

68

Unan eus hol lennerien eus Zürich ar C'helenner Pokorny, a gemenn deomp e kelenn ar yezhoù keltiek abaoe 1943 e Berne hag e Zürich. En trimiziad a zeu (1/5 - 1/8) e raio ivez un nebeut kentelioù e Skol Veur Munich, div eur « Yezhadur kenveriet an Iwerzhoneg kozh », un eur « Kentelioù digeriñ da studi ar C'hembraeg », un eur war « d-talvoudegezh ar Gelted evit Sevenadur Europa ».

« Emaon o pauez resev ar BARZHAZ 1350-1953. Setu aze un dra talvoudus-dispar, hag a oa ezhomm anezhañ. Evel just ne vo ket akord pep unan (ha me an hini kentañ) diwar-benn dibab barzhonegoù zo ha chom hep dibab reoù all, hogen kement-se a zo un afer a vlizidigezh personel. Krediñ a ran avat ez eo ur fazi displegañ **an guen heguen** evel « ar voc'h wenn-tre » ; ar c'hembreak **hywên** a dalv « smiling » (Bodvan-Annwyl), diwar **gwên** ha n' eo ket diwar **gwyn, gwen** ; hogen ne vern penaos ne gav ket din e tlefed tostaat **heguen** ouzh **hywên** (« ar voc'h o vousec'hoarzhin » a vefe un tamm surrealist...) ; ret eo lenn **an guen he guen** -« an (hini) gwenn he boc'h ». Er werzenn da heul hon eus **an hegarat**, hep **hini** kennebeut ; n' eo ket reizh e brezhoneg bremañ, hogen bez e oa e brezhoneg krenn, ha soñjal a ran er werzenn **an fall nan ere diouz an seven** eus BUHEZ MABDEN a zo meneget ivez er BARZHAZ. » A. E.

UR C'HOUMANANT EVIT NETRA. -

Ar re a gavo pemp koumanant d'Al Liamm etre derou ar bloaz ha miz Gouere a c'honezo ur c'houmanant-bloaz war baper kaer. Brudit Al Liamm. en-dro deoc'h.

LEVR DA ZESKIÑ BREZHONEG. -

Hepdale e teuio er-maez trede mouladur « Cours Elémentaire » Roparz Hemon. Al levr a zo bet kemmet un tammig evit klotañ ouzh geriadur ar brezhoneg eeun.

PREZEGENN. -

Ur brezegenn diwar-benn al lennegezh a zo bet graet e Skol Veur Angers, d' ar 14 a viz C'hwevrer, gant Ronan Huon. Pedet e oa bet gant ar C'helc'h Keltiek.

KENSKOAZELL. -

Unan eus hor skrivagnerien gwellañ o vezañ klañv hag en dienez hon eus soñjet e oa ret deomp e skoazellañ evit ma c'hellfe kenderc'hel da labourat. En abeg da-se e c'houlennomp digant hor mignoned kreskiñ un tammig o frof pa gasint arc'hant d'Al Liamm. Implijet e vo mat. Trugarez.

69

AL LIAMM HAG AR C'HELLOUENNOU. -

Komz a reer -muioc'h-mui eus Al Liamm er c'helaouennoù, meneget hon eus Douar Breiz. « L'Echo de Lannion » a gendalc'h d' ober bruderezh, lennet hon eus ivez « War-Raok » kelaouennig bretoned « Loer ha Gwilum » hag he deus ur spered eus ar re vreizhekañ. Ar gelaouenn « Opinion gallega » eus Buenos Aires oc'h embann ur pennad diwar-benn Castelao, oberour ul levr war ar c'halvarioù a veneg ar c'helaouennoù « Ar Soner » hag « Al Liamm ». Embann a ra zoken ur pennad e brezhoneg.

War « L'Echo de Laurenan » e lenner kement-mañ e galleg : « Plijadur hon eus da gas keloù d'hol lennerien eus an enor a zo bet graet d' hor c'henvroad an Tad Duchauchix e. niv. 41 Nedeleg ar gelaouenn-uhel « Al Liamm ». Embannet zo bet ganti un dastumad kant barzhoneg dibabet e-touez ar re wellañ bet skrivet abaoe 600 vloaz ».

RAKPRENADURIOU. -

Darn eus hor mignoned a zo bet souezhet o tegemer ur « Barzhaz » hep bezañ bet goulennet. Kaset eo bet dezho dre m' o doa rakprenet ha ma chome arc'hant war o c'hont. Ar rakprenadurioù, 1.000 lur, a vez kaset da P. Bodenan. Moulet e vez ul levr bep gwech ma vez trawalc'h a arc'hant er c'hef.

LA TERRE BRETONNE. -

Ar gelaouenn eus Pariz a gendalc'h da embann brezhoneg ha d' ober bruderezh evit Al Liamm. Trugarekaat a reomp he renerion. Koumanant bloaz 400 lur. 3, rue du Départ, Paris (XIVe). C.C.P. Paris 8301-85.

KUDENN AN DIVROAÑ. -

E-barzh LA PLUS GRANDE BRETAGNE (Nevez-Amzer 54) e lennomp e vez 5.000 den o kuitaat bep bloaz departamant ar Mor Bihan. Ma 'z eus kemend-all o vont kuit eus an departamantoù all, e koll Breizh bep bloaz, neuze, 25.000 den. Tud yaouank evel just, e barr o nerzh. An enor trist he deus Breizh da vezañ ar vro geltiek a goll ar muiañ tud.

OGAM. -

Emañ ar gelaouenn Ogam o paouez embann ur studiadenn gant P. Kentel war ar gerioù : Aber, Ma, Man ha lec'h, Bor ha Bour en anvioù lec'h ; ar gerioù baz, bazenn ha ravazenn ; hag evit echuiñ ar gerioù or, erin hag eurlac'h. Kenveriet e vezont gant an iwerzhoneg hag ar c'hembraeg.

LA BRETAGNE REELLE. -

Resevet hon lizheroù kelc'h ur strollad kevredadel Armorikan, « La Bretagne Réelle ». Arvorig a zo ur rannvro enni Breizh, an Normandi, ar Maine, an Anjou ha Bro-Vendee. Ar rannvro-se a dlefe bezañ lodenn Europa Nevez.

E gwirionez ne gredomp ket e raio ur seurt menoz berzh e Breizh. Ret e vije a-raok pep tra dihuniñ er Vretoned o emskiant broadel, hep mont pelloc'h evit ar mare. - « La Bretagne Réelle », J. Quatrebceufs, 9, rue du Thabor, Rennes. C.C.P. 754-82 Rennes.

EMBANNADURIOU AR BIBL BREZHONEK.

Embannet a-benn bremañ :

Aviel Sant Mazhe, 96 pajenn moulet, 250 lur ha 30 lur mizoù-kas ; Koheleth, 34 pajenn liesskrivet, 80 lur hag 20 lur mizoù-kas ;
70

Diskuliadur Sant Yann, 72 pajenn liesskrivet, 180 lur ha 30 lur mizoù-kas.

Pa c'houlenner meur a levr pe a skouerenn war un dro, lakaat hepken 10 % evit ar mizoù-kas.

Goulenn levrioù ar Bibl digant an Dimezell St Gal de Pons, 48, rue des Salles, Guingamp. C.C.P. Rennes 519-40.

Da vezañ liesskrivet hep dale :

Aviel Sant Yann, troidigezh gant Marsel Klerg ha Maodez Glanndour.

War ar stern :

Levr ar Furnez, troidigezh gant Maodez Glanndour ;

Al lizher d' an Hebreed, troidigezh gant Marsel Klerg ha Maodez Glanndour.

Fazioù da reizhañ e Koheleth :

Rakskrid : linenn 3, lenn : Daoust hag-eñ e vefe tu.

Pajenn 10, linenn 18, lenn : Tonkadur an den diskiant ha va hini a zo un hevelep tra.

Pajenn 11, linenn 2, lenn : Rak piw oar daoust ha fur pe foll e vo.

Pajenn 29, linenn 15, lenn : o tebriñ pa vez ar c'houlz, evit...

Pajenn 30, linenn 13, lenn : ar bugel en askre e vamm.

Chom a ra da werzhañ :

STUDI HAG OBER, niverennoù 15 (nebeut kaer a skouerennoù), 16, 17, 18, 19, 21.

KAIEROU KRISTEN, niverennoù 2 : Milc'hwid ar Serr-noz, 3, 4, 5-6, 7-8 : Ar Werc'hez Vari.

Pep niverenn a vez gwerzhet 150 lur ha 30 lur mizoù-kas. Pa vez goulennet meur a hini war un dro, lakaat hepken 10 % evit ar mizoù-kas. O goulenn digant an Dimezell St Gal de Pons, 48, rue des Salles, Guingamp. C.C.P. Rennes 519-40.

Mar n' hoc'h eus ket dija anezhañ, goulennit al levrig AR BEDENN EVIT AR VRO, a vo kaset deoc'h evit netra. Lakaat hepken timbroù evit ar respont. Mar ne resevit ket anezho, goulennit ar follennoù Ar Bedenn evit ar Vro, a vo kaset deoc'h ivez en hevelep doare.

DENONIEZH. -

Hor mignon P. R. Giot, denoniour eus Skol Veur Roazhon, a ginnig d' ar re a zo dedennet gant ar studioù denoniezh ur c'houmanant 1.000 lur evit an embannadurioù a blijfe dezho hag ur c'hannadig war ar marc'had. Goulenn an displegadurioù digant P. R. Giot.

Un eil levr diwar an Dilhad Breizhek gant R. Y. Creston a zo bet moulet : « Bro Gerne », ennañ e kaver studiadennoù war Giz Fouen, ar Glazig, ar Vourledenn, Bro-Vigouden, Ar Penn Sardin h.a...

Gallout a reer rakprenañ betek an 31 a viz Mae 1954. Priz : 1.200 lur da C.C.P. Rennes 1482-28. P. Giot, Laboratoire d'Anthropologie, rue du Thabor, Rennes.

71

UN DISKOUEZADEG EVIT BRUDAÑ AR BREZHONEG. -

An Itron Kemere a ra bep bloaz en he stal, bali Kergelen, e Kemper, un diskouezadeg evit brudañ ar brezhoneg. Er bloaz-mañ e oa an diskouezadeg diwar-benn al laboused. Setu ar pezh a skriv deomp diwar-benn-se : « Un daolenn du a zo bet lakaet e-kreiz ar prenestr diskouez war ur parkig gant bokedoù an hañv ha laboused ar maezioù ; en-dro d' an daolenn ez eus brankoù ha warno laboused preizh ; en ur c'horn ez eus un draezhennig gant paniri ligistri, ur roued glas ha laboused mor. Pep labous en deus en e gichen ur skritellig gant e anv e brezhoneg. War an daolenn du e vez skrivet bep eil devezh ur pennad nevez diwar-benn unan eus al laboused diskouezet. - Deraouet eo bet an diskouezadeg-se d' an 18 a viz Genver ha padout a raio betek miz Meurzh. Rak kas a reer din laboused nevez, setu m' eo bet dav din, cheñch ar re gentañ. Al labous diwezhañ a vo studiet a zo bet lazhet a-ratozh gant un evnour a felle dezhañ e vefe diskouezet al labous-se ha kontet e gaoz war an daolenn du e brezhoneg. Ur vran eo, pe gentoc'h ur frav du a ouenn vreizhat, pe breizhekaet. An dud a zo dedennet eston gant ar studiadennoù-se. Gwelet e vez micherourien o tont a-ratozh, ha n' eo ket sellout en ur dremen, diskenn eus o marc'h-houarn ha dont da lenn, implijidi, moused o tont bemdez da

lenn ar pennad, lod a skriv anezhañ zoken war ur c'harnedig. Un den kozh a oa ken laouen ma ne ouie ken penaos lavar deomp ar blijadur a rae dezhañ lenn brezhoneg, bemdez, war ar c'hae. - Skoazellet on bet, evit ar pezh a sell ouzh an evnouriezh, gant va mab Erwan, a zo barrek war ar skiant-se. Savet em eus ar pennadoù eta gant e skoazell. E-keñver ar brezhoneg ar pennadoù a zo bet adwelet lod gant Yann ar Beg, al lodenn vrasañ gant Marc'harid Gourlaouen. - Ret eo bet deomp ober enklaskoù er porzhioù evit resisaat anvioù al laboused-mor, ken diresis. Goulennataet hon eus micherourien e lies korn. Bet omp e Douarnenez hag e Gwaien gant levrioù skrivet e saozneg evit na vefe ket touellet ar vartoloded gant ar galleg. Lakaet hon eus betek ar maltouter da reiñ deomp e skoazell ! Krediñ a ran omp deut a-benn da resisaat anvioù zo, evel ar Sparfell Veur, ar Morskoul, Labous Per, an Erev ha Frav Du Bro-Leon, pemp labous ha n'int ket anavezet mat. »

Hor gourc'hemenoù a reomp d' an Itron Kemere evit al labour brav-se a laka tud Kemper da soñjal un tammig en o brezhoneg.

AR BREZHONEG ER B.E.P.C. -

Bez e c'heller kemer ar brezhoneg evel « danvez-da-zibab » er B.E.P.C. Da lavarout eo na dalvez ket ar brezhoneg, evel er vachelouriezh, da gaout ur meneg hepken, hogen da vezañ resevet, evel forzh peseurt danvez all. 40 poent e c'heller gounit gant ar brezhoneg. Spi hon eus e vo kalz bugale o kemer ar brezhoneg evel danvez-da-zibab en arnodenn-se. Teurel evezh n' eus aze aotre nevez ebet. Lakaat a reer hepken da dalvezout ur reolenn gozh. Gant hor c'heneil K. Riou eo bet diskoachet ar reolenn-se.

BRUD AL LIAMM EN ESTRENVRO. -

Ur rentañ-kont eus niverenoù diwezhañ « Al Liamm » a lenner e-barzh « Irisleabhar Ceilteach », Levrenn 2, niv. 2, embannet e Toronto (52, Derwyn Rd.).

72

UN ENKLASK BIHAN DIWAR-BENN STAD AR BREZHONEG ER VRO-VIGOUDENN. -

E-barzh kazetennig douaroniourien ha naturourien Penn ar Bed, anvet PENN AR BED, e lenner ur pennad talvoudus gant Per Keraval diwar-benn ar gudenn-se.

Hervezañ e vefe implijet ar brezhoneg evel yezh kustum an darempredoù gant 75-80 % eus tud Penmarc'h, ar Gilvineg ha Lechiagat, gant 90 % eus an dud er maezioù a-dreñv, gant 40 % eus an dud e Leskonil, 95 % en Arvor ; evit Loktudi, an Enez Tudi ha Sainte Marine avat e vezont gounezet a-grenn ar galleg, dreist-holl dindan levezon an touristerezh ha Skol an Dourdi. E-touez ar c'hêrioù war an aod, Lechiagat a vije an hini fealañ d' ar brezhoneg. Lavarout a ra an Ao. Per Keraval, da echuiñ, e vete ret ober enklaskoù resis diwar-benn niver an dud a gomz brezhoneg, dreist-holl diwar-benn niver ar vugale a zo ar brezhoneg o yezh kentañ. A-du krenn omp gantañ war ar poent-se.

LABOURIOU GOUZIEK ROPARZ HEMON. -

Laouen omp bet e c'houzout e oa bet embannet er gelaouenn « Celtica » (Levrenn II, lodenn 2, 1954), div studiadenn gant Roparz Hemon : ON SOME FORMS OF THE VERB « TO BE » IN BRETON ha THE BRETON PERSONAL PRONOUN AS DIRECT OBJECT OF THE VERB: An div studiadenn-se, ken sklaer ha ken klok ha ma c'hellont bezañ, a vezo barnet en unan eus niverenoù a zeu « Hor Yezh ». N' int avat nemet ul lodennig dister eus al labourioù gouziek a zo bet savet gant Roparz Hemon abaoe m' emañ en Iwerzhon. E-touez al labourioù-se e c'heller menegiñ : Yezhadur eus Rannyezh Wened er 17vet kantved ; Yezhadur eus Rannyezh Treger er 17vet kantved ; Embannadur an Nouelennoù gwenedek eus ar 17vet kantved ; Embannadur ar Mister anvet « Ar Varn Diwezhañ » ; Yezhadur Istorel ar Brezhoneg ; Geriadur Istorel ar Brezhoneg (al lizherenoù A ha B o leuniañ 500 pajenn). Pegoulz e vezo tu da embann labourioù Roparz Hemon, an den a labour didrouz ha diarc'hant evit Breizh ?

BARR-HEOL -

« Barr-Heol », kannadig ar Bleun-Brug e Treger, a zeuio buan da vezañ unan eus hor c'hazetennoù gwellañ. An eil niverenn anezhañ, nevez-deut er-maez, a zo un dudi he lenn. Enni e kaver : ur pennad a-zivout AR BREZHONEG ER SKOL, o tisplegañ petra e tle bezañ « ar brezhoneg er skol » ma n' eo ket da vezañ farserezh ; ur pennad gant Loeiz ar Floc'h diwar-benn talvoudegezh hor stourm ; ur pennad kaer gant Klerg diwar-benn an Ao. P. M. Lec'hvien (1885-1944), marv evit Breizh ; ha keleier a bep seurt. - Koumanantit da BARR-HEOL : 100 lur da nebeutañ, da gas da Pierre

Even, 18 pl. Clemenceau, Gwengamp. KRP 508-07.

NEVEZ-DEUT ER-MAEZ. -

LLENA DAVIES, danevell gant G. B. Kerverzhioù, 80 lur ; DAOU VOUJIK BIHAN, danevell fromus gant Nikolai Schedrin, brezhoneg gant Per Denez, 100 lur. Liesskrivet gant « Al Liamm ». O-daou da vezañ goulennet digant P. Bodenan, 3, chemin des Potiers, Ergué-Armel. KRP 212-23 Roazhon.

HOR YEZH. -

Eil niverenn « Hor Yezh » a zo o tont er-maez. Enni e c'heller lenn : **Much Ado about Nothing** gant Arzel Even, pennad diwar-benn ul levrennig embannet nevez zo a-zivout an doaae-skrivañ ; **Enskrivadurioù brezhonek**, kendalc'h ; **Studi ur ger : HEVELEP**, gant A. J. Raude ; **Danvez evit ur Geriadur a Strilhouriezh**, gant Abanna ; **Traoù ha gerioù : An avaloù-douar**, gant Arzel Even ; **Skridoù Clet Teven**, dornskrid eus diwezh ar c'hantved diwezhañ, e brezhoneg ar C'hab. Ha notennoù a bep seurt. Rener an dastumadenn a zo Arzel Even. Evit koumanantiñ e tleer kas 500 lur da P. Denis, Le Ris, Douarnenez. KRP 1499-51 Roazhon.

73

DRE MA N' EN DOA KET HARZHET UR C'HI. -

Ul levr a zo bet embannet en alamaneg diwar-benn kudenn Andrej Jaffrez gant Erich Borchers « Weil ein Hund nichte bellte ». « Abalamour ma n' en doa ket harzhet ur c'hi » a zo istor gwirion kudenn A. Jaffrez hag he deus fromet ar bed sevenet a-bezh (a lenner war an embann). Erich Borchers a ro ar brouenn e oa digablus A. J. kondaonet d' ar marv dre ma n' en doa ket harzhet ur c'hi.

Diskouez a ra an oberour levezon an degouezhioù fallhag an tonkadur en abadenn-se.

Embanner : Adolf Spontholtz - Hannover.

« **AN CLUB LEABHAR** » a zo bet anv anezhañ meur a wech amañ. Savet eo bet e 1948. Ar menoz a zo eeun-tre : un den a bae £ 1, da lavarout eo MIL LUR gall, ar bloaz, hag en eskemm e vez kaset dezhañ levrioù iwerzhonek nevez moulet a-ratozh. Pal kentañ ar C'hlub oa kaout 1.000 rakprener. Hiziv ez eus ouzhpenn 2.000, ha spi a zo da gaout 3.000 a-benn ar miz-mañ. Al levrioù a vez peurliesañ moulet-kaer ha marc'had-mat-eston. An danvez a zo liesseurt : romantoù, kontadennoù, barzhoniezh, istor, eñvorennoù, beajoù. N' eus ket pell ez eus bet embannet un istor ar fiñvskeudennerezh. Aes eo kompren e c'heller ober kalz a dra pa vezer sur da werzhañ 3.000 skouerenn eus ul levr kerkent hag embannet (skouerennoù ouzhpenn a vez moulet ha gwerzhet a-unanoù d' ar re n' int ket rakprenerien) . Pelec'h emamp-ni e Breizh, ma 'z eus kement a vec'h o tastum 50 rakprener ?

Bremañ e fell d' ar C'hklub ober ur c'hammed c'hoazh war-raok : sevel kelc'hioù lennerien e pep kêr. Ar vodadeg kentañ a dle bezañ graet d' ar 4 Ebrel e Muileann Cearr, e-kreiz Iwerzhon, da sevel ur c'helc'h er gêr-se.

A-raok 1948, - 6 vloaz 'zo hepken, - ne oa ket gwall zisheñvel stad an traoù en Iwerzhon diouzh ar pezh a welomp hiziv e Breizh : diaes e oa embann, diaes e oa gwerzhañ levrioù iwerzhonek ; darn eus ar skrivagnerien wellañ a oa digalonekaet ha ne skrivent mui netra. 6 vloaz a zo bet a-walc'h da cheñch penn d' ar vazh.

A drugarez d' ar C'hklub ez eus bremañ ul lennegezh nevez o kreskiñ en iwerzhoneg, evit ar wech kentañ en hon amzer, ur rummad skridoù talvoudus ha plijus da lenn, skridoù par d' ar re a veze embannet gwechall gant « Gwalarn » hag a vez embannet bremañ gant « Al Liamm ». Ar C'hklub, avat, ne gav ket war e hent en Iwerzhon ar skoilhoù a gave « Gwalarn » hag a gav « Al Liamm » e Breizh. Ar c'hazetennoù bras hag ar radio a ra bruderezh evit ar C'hklub, e-lec'h tevel pe mont a-enep.

Un dra a ranker lavarout koulskoude : an 3.000 lenner-se a zo bet kavet dre ma 'z eo bet kelennet ar yezh vroadel e-pad tregont vloaz pe dost d' an holl vugale en holl skolioù.

Ur skrivagner a c'hell hiziv gounit muioc'h a arc'hant o skrivañ en iwerzhoneg eget o skrivañ e saozneg.

(diwar « Ar Bed Keltiek », niv. 86.)

74

EVIT SAVETIÑ AN IWERZHONEG. -

Un dra all c'hoazh a zo bet ijinnet er stourm evit an iwerzhoneg : bodañ an dud hag a zo o chom e Dulenn hag a zo an iwerzhoneg yezh o c'havell. Ar yezh

vroadel, evel ouzer, a ya atav war gil en nebeut parrezioù ma vez komzet. E-pad bloavezhioù ez eus bet goulennet « an iwerzhoneg er skol ». Hiziv emañ an iwerzhoneg en holl skolioù, bras ha bihan. Hogen anat eo bremañ ez eo dister levezon ar skol e-skoaz levezon ar gêr, ar fiñvskeudenn, ar skingomz, ar vuhez a vremañ dre vras. Evel a lavare ur prezeger e Radio-Eireann nevez zo, gwir abeg dilez an iwerzhoneg a zo diseblanted, an darn vuiañ eus an dud : N' emaint ket a-enep, hogen n' emaint ket a-du ; ar vugale-skol a zesk iwerzhoneg evel ma teskont traoù all a vez kelennet dezho ; n' eo nemet evit e lezel krenn a-gostez hag e ankounac'haat kerkent ha n' eus mui mestr-skol ebet d' o rediañ da zeskiñ. - Sed ar pezh a lenner war AR BED KELTIEK, niv. 84.

« Ar Bed Keltiek » a zo folenn-geleier ar C'HENDALC'H KELTIEK E BREIZH. Evit degemer anezhi ez eo ret bezel ezel eus ar C'hendalc'h. Bez e c'heller goulenn diskleriadurioù gant an deñzorier, da skouer : Itron Galbrun, 78, rue de Fontenay, Vincennes. Rener ar « C'hendalc'h e Breizh » a zo Roparz Hemon.

AN IWERZHONEG ER SKOLIOU. -

Aotre da zeskiñ iwerzhoneg er skolioù a voe roet evit ar wech kentañ er bloaz 1878. Ken strizh e oa ar reolennoù avat ma ne voe desket nemet en 50 eus an 8.000 skol a oa er vro. Pezh a c'hoarveze en Iwerzhon 76 vloaz zo a c'hoarvez hiziv e Breizh. - Tennet eus « Ar Bed Keltiek », follenn 83. Embannet gant ar « C'hendalc'h Keltiek e Breizh », rener Roparz Hemon.

GALVADENN. -

Skrivet eo bet deomp e vezo taolet relegoù ANDREV GEFFROY, fuzuilhet e Roazhon war un dro gant Leon Jasson, d' an toull boutin ma ne adprener ket e vez a-raok miz Gouere ha goulenn a reer ganeomp ober ur c'halvadenn da zastum un tammig arc'hant. A galon eo a reomp ar c'halvadenn-se, rak ur vezh a chomfe war hor remziad ma vefe lezet da vont en toull boutin ha dizanv relegoù ar re o deus roet o buhez evit ar vro. Bez Andrev Geffroy a rank bezañ prenet. N' ouzomp ket c'hoazh gant piv e vo graet ar brenadenn. Dastum a reomp arc'hant koulskoude a-benn-bremañ : tremen poent eo zoken. Ar re a garfe skoazellañ a c'hell kas o frof d'Al Liamm en ur verkañ evit petra ez eo.

KENDALC'H KELTIEK 1954. -

Ar C'hendalc'h Keltiek a vo graet hevlene e Dulenn, e fin miz Gouere. Evel kustum ez eo pedet ar Vretoned da vont niverus. Testenn ar prezegennoù graet er C'hendalc'h a vezo : AN EMBANN LEVRIOU ER YEZHOU KELTIEK. Bez e vo evel just, bodadegoù a bep seurt, abadennoù, hag ivez ur veaj d' ar Gaeltacht. Goulenn diskleriadurioù hiroc'h gant unan eus izili ar Poellgor evit Breizh : Itron Galbrun, teñzorier, Roparz Hemon, rener, da skouer. Bez e c'heller skrivañ ivez da R. Huon pe da Ber Denez.

DALC'HOMP SONJ EUS AR RE A C'HOZANV EVIT KELTIA.

- Iwerzhon : Liam Kelly, kannad broadelour eus hanternoz Iwerzhon, toullbac'het e Beal Feirste. Bro-Saoz : Manus Canning, Sean Stephenson, Cathal Goulding, tri Iwerzhonad barnet da 8 vloaz toull-bac'h e Bro-Saoz.

Bro-Skos : Callum Macalister, Owen Gillan, Bob Watt ha Raymond Forbes, izili eus an Arme Republikan Skosat, toullbac'het gant ar Saozon.

Kembre : Peter Lewis, ezel eus an Emsav Republikan Kembre, barnet da 18 miz galeoù evit bezañ bet kavet didarzhelioù en e gerz.

Breizh : Andrev Geffroy : toullbac'het abaoe 9 vloaz, bet chadennet, treid ha daouarn, noz-deiz, e-pad 20 miz. Keleier tennet eus « Celtic Time », kazetenn ar Gelted dihonet (18 Learmonth Gardens, Edinburgh, Skos).

75

BROADELOURIEN KERNEV-VEUR ER MOUEZHIADGOU. -

An Dimezell Helena Charles, renerez strollad ar vroadelourien gembre, « Mebyon Kernow » a zo bet anvet er mouezhiadegoù evit ar C'huzul Kêr ha Korn-Bro e Redruth. An trec'h-se a zo bet degemeret mat gant kazetennoù ar c'horn-bro. Eus Kerney e klevomp ivez e vo, evit ar wech kentañ, enskrivet pladennoù e kerneveg.

D' AR FURCHERIEN. -

Goulenn a reer ganeomp diskleriadurioù diwar-benn ur gelaouenn vrezhonek embannet e Stadoù Unanet Amerika e 1904: **DIHUN AR VENGLUZERIEN**. Moulet e veze e Pittsburgh, Pennsylvania, gant un den c'henidik eus Skrignag anvet ar Gwaziou. Anv a zo bet eus ar gelaouenn-se war kannadig Union Régionaliste, 1904, p. 56. Dianav

eo al levr el Library of Congress hag e levraoueg ar Columbia University in the City of New-York.

KEMBRE. -

Ur skol babiged nevez emeur o paouez krouiñ en Abertawe (Swansea) en tu kornog eus kêr. Ar skol all, skol Lôn Las, a oa re leun. 36 bugel, a zo bet enskrivet er skol nevez. Teir skol all a zo da vezañ savet hepdale e kreisteiz Kembre.

An divyezhegezh a zo bet dibabet da reolenn gant renerien an deskadurezh e Kembre. An divyezhegezh-se avat a zo disheñvel a-walc'h eus pezh a anver evel-se e Breizh : desket e vo saozneg d' an holl gembraegerien vihan, hogen ret e vo ivez d' ar saoznegerien vihan deskiñ kembraeg. Krog eo avat ar vroadelerien da glemm a-enep an dra-se : ur pennad speredek-tre a zo bet nevez zo en Y FANER gant Victor H. Jones, o tisplegañ e vefe se, a-berzh Kembreiz, anavezout gwirioù d' ar saozneg e Kembre, pa 'z eo bet broud ar stourm a-enep ar reizhadur deskadurel estren en deus graet da Gembreiz gounit emgann ar skolioù hollgembraek.

Da skoazellañ an embannerien levrioù kembraek ez eus bet krouet nevez zo e Lunden ur Gevredigezh al Levrioù Kembraek : pep ezel a bae bep bloaz war-dro 2.500 lur ha levrioù nevez, dibabet gant renerien ar gevredigezh, a vez kaset dezho evit an arc'hant-se. 300 ezel he deus bodet ar gevredigezh diouzhtu e Lunden ; krog eo bremañ da labourat e Birmingham.

An URDD SIARAD CYMRAEG, krouet un nebeut bloavezhioù zo gant ar Rev. Leonard Hugh, a ya war-raok atav : 5.000 ezel en deus bremañ. Degemeret e vez da izili ar re a ra le da zougen an arouez atav ha da gomz kembraeg hepken kenetrezo. Er c'hornioù saoznekaet e labour an Urdd Siarad dreist-holl.

An emsav evit ar PARLAMANT a ya war-raok brav-tre dreist-holl abaoe m' en deus da sekretour an Ao. Elwyn Roberts, ezel brudet eus ar Strollad Broadel. Bodadegoù a vez graet bep sizhun, kuzulioù lec'hieal a zo bet anvet ha krog e vezer da vat da zastum anvioù. War-dro 80 % eus an dud a sin ar c'houlennadeg. Ken eo peget ar spont e renerien al Labour Party, ha gourdrouzet eo bet ar gannaded socialist a gomz e bodadegoù an emrenerezh da vezañ taolet er-maez eus ar strollad. Taer o deus respontet, ha betek-hen n' o deus ket kredet renerien socialist Lunden mont pelloc'h. Unan eus renerien uhelañ strollad al Labour e Kembre, Huw T. Edwards, en deus diskleriet nevez zo e chomfe feal d' e vro, m' en defe da zibab etre ar fealded da Gembre hag ar fealded d' e strollad. Evit ar wech kentañ en e istor eo en em ziskleir ar strollad socialist a-enep d' an emrenerezh evit Kembre.

76

STOURM AR BROIOU BIHAN. -

An Ao. hag an It. Trefor Beasley a zo bet degaset nevez zo dirak al lezvarn e Kembre : nac'h a reont paeañ o zailhoù keit ha na vint ket goulennet diganto e kembraeg. Ne fell ket da dud an tailhoù avat lakaat moulañ paperennoù kembraek. An It. Trefor Beasley a zo hec'h anv plac'h yaouank Eileen James : Deut eo meur a wech da Vreizh, da Gamp ar Vrezhonegerien, ha gouzout a ra brezhoneg. Hor gourc'hemennoù d' hor mignoned kalonek.

SMALL NATIONS. -

Ur gelaouenn e saozneg a vo embannet hiviziken gant ar « Burev-Kelaoua evit ar Broadelezhioù-Suj Europat ». Hec'h anv a zo « Small Nations ». An niverenn gentañ anezhi a zo enni, ouzhpenn ur pennad-digeriñ gant ar rener, studiadennoù diwar-benn Kernev-Veur, Groenland, ha keleier diwar-benn an darn vrasañ eus ar broadoù bihan. - Evit koumanantiñ kas talvoudegezh 5 chilling saoz (250 lur) da Information bureau of Minorities, Vestre Boulevard, 40, KBENHAVN K. Danmark.

EUROPEAN MINORITIES. -

Setu anv ul levrig-brudañ talvoudus embannet gant an Information bureau. E saozneg eo skrivet, hag e kaver ennañ studiadennoù gant Povl Skadegard (European efforts in favour of Minorities) ; O. M. Olesen (National Rights) ; Per Thaulow (European Minorities). E pennad Thaulow e kaver notennoù talvoudus diwar-benn - holl vroadelezhioù-suj Europa. Priz al levrig a zo ur chilling, pe talvoudegezh ur chilling (50 lur).

DISKLERIADUR ESKIBIEN MADAGASKAR. -

« An Iliz he deus c'hoant bras gwelout an dud, hag ar bobloù ivez, o kaout ur vuhez aesoc'h hag o kemer muioc'h-mui a giriegezh - braster an den a zeu eus ma 'z eo dieub ha kiriek - hag ar frankiz politikel a zo unan eus an traoù a ra diazez pep kiriegezh. Bezañ hep frankiz politikel a zo, evit ur hobl, bezañ harzet war hent an emdroadur naturel, ha pobl ebet ne c'hell chom da viken evel-se. A-se ez anzav an Iliz, war un dro gant ar gwir naturel, he deus pep pobl frankiz d' en em ren hec'h-unan... Anzav a reomp 'tañ ez eo reizh kaout c'hoant da vezañ dieub ha stourm da sevel ar bobl betek an dieubidigezh. » Setu ar pezh a zo bet diskleriet e diwezh 1953 gant eskibien Madagaskar. Ar pezh a zo gwir e Madagaskar, daoust ha n' eo ket gwir e Breizh ?

200 MICHEROUREZ GOULENNATAET E BRO SVEDEN (digant hor c'henskriver e Bro Sveden E. Gwilhou). -

Al laouenidigezh el labour a gont muioc'h evit ar plac'h dizimez eget evit an hini dimezet, ar re-mañ eo a c'hortoz gant ar muiañ a vall eur an diskrog. Setu ar pezh a zo bet kavet war-lerc'h un enklask bet savet diwar c'houlennoù graet ouzh 200 michourerez eus seizh labouradeg Kreisteiz Bro Sveden.

77

Talvoudegezh o micher evit an amzer da zont a zo ivez pouezusoc'h evit ar re zizimez, ar re-mañ eo a glemm an aliesañ dre ma ne vezont ket paeet trawalc'h.

An enklask en deus diskouezet ivez e oa war-dro tregont vloaz (27 da 33) ar mare arvarusañ ha diaesañ evito, dreist-holl evit ar re zizimez. Ar re mañ a zo muioc'h distabil evit pezh a sell ar vuhez pemdeziek dre vras. D' an oad-se eo pouezus evito kaout gwaz ha bugale, kaout darempredoù mat gant o c'henseurtezed, goude e krog da wanaat. D' an oad-se eo pouezus dimeziñ **ha** krouiñ un tiegezh. Goude e tr **o** menoz war-du an arboellañ ha pishoc'h-pishañ e teuont da vezañ gant an oad. Kregiñ a ra unan da intent emañ echu mare ar yaouankiz hag ez eo deut an amzer da zimeziñ ma soñjer hen ober un deiz bennak. Ar re ne zimezont ket a glask an aester, buhez aesoc'h, amzer vak, darempredoù dieub gant ar baotred. Ar stad arvarus-se a skuizh anezho d' ar mare-se ha dre ma teu o c'hoantoù da vezañ diaesoc'h da seveniñ e vezont dindan ur seurt « nevrose » dibaouez.

ROLL EUS AR GERIOU TREGERIEK

implijet en danevell « an Den Meur » ha nebeut anavezet (1)

Enebenn 1

WAR VETE : war-hed.

A-GENVER DA : A-dal da.

KEVER : Kaver (Trede gour unan amzer-vremañ an doare-diskleriañ eus KAVOUT).

Enebenn 2

BARNAJIN KAOZIOU : teodata.

MAR DEUS (pe MAR GEUS) : Ma 'z eus.

ENEVIT : Anavit (Eil gour lies doare-diskleriañ ar verb ANAOUT ; amzer-vremañ).

SKOANARD : den bihan ha strizh.

FALLEGANIG : den dister ha frammet-fall.

Enebenn 3

SKLAER EVEL LAGAD AN NAER : (Tro-lavar),

TOG-KISTIN Klorenn-gistin.

TAPOUT (bezañ) : Donet a-behn da (vezañ),

TROIDELLET : kelc'hiet.

MIK EVEL dres evel.

N' EO KET LEDAN PLAS E LOA : n' eo ket ur sod.

Enebenn 4

KEN FALL BENNEGET : ken fall urzhiet. (Pennegiñ : lakaat en urzh),

YETROU : heuzoù (Unander : Yetrenn). Eus ar galleg : guêtre.

AC'HANE (e voe youc'het...) : Rak-se (e voe...).

Enebenn 5

OBER AL LORIG GANT U. B. : Tremen lost al leue dre e c'henoù,

EC'HWEDER : alc'hweder. (Ac'hane an anv-tiegezh AN EC'H-WEDER, e galleg L'HEVEDER).

AN NOROZIOU (pe AN NOROJOU) : an norioù. Liester, sellet evel direizh, eus dor. Keñveriañ gant al liester DOROZIOU ar c'hembraeg DRWS.

(1) Darn eus ar gerioù-mañ a zo bet moulet c'hoazh en ur roll genou tregeriek embannet e « Gwalarn » e-pad ar brezel. Darn all a zo er geriadurioù anavezet. Kalz a zo dianav er-maez eus Treger.

78

Enebenn 6

A-DRIBILH : A-istribilh.

D' AR C'HOULZ-MAÑ 'R BLOAZ : D' ar c'houlz mañ a'r (eus ar) bloaz.

Meur a lavarenn heñvel a zo e Treger. Da sk. : D' an eur mañ a'n noz.

E pevar c'hant lur emañ al lur a'n amanen, h.a.

DIAMONT (Taol-mouezh war ar silabenn ziwedhañ) : diwar ar reter. (Moarvat, diwar ar galleg : de mont).

Enebenn 7

A-SAV-TAOL : a-greiz-holl.

Enebenn 8

PEMP MUNUD DA , C'HWEC'H EUR : 6 eur nemet 5. - Lavaret e vez ivez : pemp munud da vont da 6 eur. (Troioù-lavar pemdeziek.)

BOS : Kordenn da stagañ ar vag ouzh ar c'hae.

ORGANELL (gg.) : lagadenn-houarn.

Enebenn 9

GOERO (pe GOURO) : goro.

DORNAÑ HENT : ober kalz a hent.

Enebenn 10

FRAOÑVAL E-MAEZ... : Strinkañ er-maez eus..., ken na fraoñv.

GORJET : bodet stank.

A-HERVEZ : « sañset ».

FIRBIJ-HOLL : fiñv-holl.

UR FULENN WAR AR PLAEN : Tremen hep ober ur fulenn war ar plaen eo « chom hep ober tamm labour efedus ebet ».

Enebenn 12

BRANSKIDELLAT : brañsigellat.

DIFLAPAL : ober fiñvoù bras, difretañ.

PAILHOKAT (dour) : feukañ (dour).

GWALENN-GROG (taol-mouezh war LENN) (gg.) : Krog e beg ur walenn hir evit monet da vorgevnita.

Enebenn 13

EVEL AR POSUBL E... : Evel pa...

KIZENNAD : Kuchennad.

Enebenn 14

BAJANEG : genaoueg.

Enebenn 15

BEOGAL : blêjal.

MONET D' AR PAOLE : paoleat.

FAILHAÑ : semplañ.

Enebenn 16

DINAOUENN lodenn war zinaou,

BADAOUINAÑ : badaouiñ.

Enebenn 17

GRAVIAÑ : Krapat gant un hent serzh.

CHAOGENTAN : Helebini.

Enebenn 18

DISTALAC'H : lid, lorc'h, digoroù.

PONT AR MEC'HI : al lodenn-zremm etre ar fri hag ar vuzell-grec'h (ger-bugel).

Enebenn 19

TRIBILHAL : bezañ e pign.

EN-ANAT : ez-anat,

AMBRANTOU : Divabrant (distaget : ambranchoù).

KOUZANTIÑ : asantiñ.

DOTUAÑ : bloñsañ.

MIROUT GREUNENN : mirout droug.

Enebenn 20

GAGOUILHAT : besteodiñ.

AL LIAMM 44

AL LIAMM
Tir na n-òg

NIVERENN 44

Mae – Mezheven 1954

10ed BLOAVEZH

ISRAHEL

TAOLENN

Ur ger a drugarez	5
Israhel, gant Per Denez	6
Keoded ar Marv gant H. N. Bialik	11
Emlad ar yezh hebreek, gant Leon Simon	15
Lennegezh Israhel, gant J. Shaanan	23
Penaos ez adsaver sevenadur ur vro	31
Notennoù Douaroniezh	36
Damsell war istor Israhel, gant Ruth Wolf	39
Pemp bloavezh eus istor Israhel e-keñver arboellerezh	45
Histadrout « Kevredigezh Labourerien Israhel », hervez Nathan Bar-Yaacov	52
Bagadou-difenn Israhel	59
Bodañ an harluidi, hervez Haim Yahil	62
Ar yezhoù en Israhel	66
Kentelioù hebreek	67
Penaos eo bet savet an niverenn-mañ	68
LODENN AR GELAOUENN :	
Va zammig buhez, gant Jarl Priel	70
Notennoù	82

Ur ger a drugarez

Abaoe m' eo bet savet he deus klasket hor c'helaouenn digeriñ daoulagad ar Vretoned war ar pezh a dremen er bed en-dro dezho. Embannet he deus niverennoù diwar-benn Kembre ha Fryslân. Hiziv e kinnig unan diwan-benn Israhel: Ur vro vihan eo Israhel: 700.000 den a oa enni e 1948. D'ar mare-se avat he deus gouezet, gounit`he frankiz a-enep da zaou eus galloudoù bras ar bed, ar Saozon hag an Arabed. Hag, hep gortoz tamm ebet bezañ gounezet ar frankiz politikel, he deus gouezet ivez dasorc'hiñ he yezh, marv abaoe ugent kantved evel prezeg pemdeziek. Ur vro vihan eo Israhel dre niver an dud. Ur vro vras eo dre an nerzh-kalon. Ha kalz hon eus da zeskiñ ganti.

Ne vije ket bet tu da embann an niverenn-mañ hep hegarated an Ao. Dan AVNY, eil sekretour e kannadti Israhel e Pariz, en deus roet deomp skridoù embannet gant ar c'hannadti hag hol lakaet d'ober anaoudegezh gant ar gelaouenn « Syntheses », eus Brussel. Ne vije ket bet tu ivez d'ober an niverenn hep aotre karadek an Itr Christiane THYS-SERVAIS, eus ar c'huzul-ren, da adembann pennadoù moulet e « Syntheses ». Rak eus ar gelaouenn-se hag eus kazetennig liesskrivet ar c'hannadti ez eo tennet tost an holl bennadoù a vo kavet amañ da heul.

En un doare hegarat-tre ivez eo bet prestet deomp ar c'hlichedoù a ginkl hon niverenn gant AN DOUAR ADKAVET (LA TERRE RETROUVEE) hag AMI (VA FOBL), div gazetenn yuzev moulet e Pariz.

Ra vo trugarekaet amañ an holl re-se, o deus hor skoazellet ken laouen.

AL LIAMM.

ISRAHEL

gant Per DENEZ

D' ar 15 a viz Mae 1948 e voe embannet frankiz Israhel. D' ar mare-se e oa 700.000 Yuzev o chom e Palestina. Daou vil bloaz a-raok e oa bet argaset o hendadoù eus ar vro. E-pad daou vil bloaz o doa dalc'hed da hetañ an eil d' egile en em gavent « ar bloaz a zeu e Jeruzalem ». Neuze, e dibenn an XIXvet kantved e oant kroget da zont endro. En em gannet o doa a-enep d' an Durked, ha soudarded Jabotinsky o doa roet dorn da vountañ anezho er-maez. E 1936 e stagjont d' en em gannañ da vat a-enep an Arabed. Hag e 1938 e stagjont d' en em gannañ a-enep d' ar Saozon war ar marc'had. D' an deiz ma oa embannet ar frankiz, e treuze bagadoù karrhobregonet ar stadoù arabek - 50 milion a dud o chom enno - harzoù Eretz Israhel hag, hervez arbennegerien ar Foreign Office, ne oa ket Israheliz gouest da zerc'hel penn muioc'h eget un nebeut devezhioù : gant an Arabed e oa tankoù, kirri-nij, kanolioù ponner, gant ar Yuzevien un nebeut bombezennoù graet er gêr ha mindrailherezigoù Sten. Ha gant an Arabed e oa ivez diplomaterezh ar Saozon, a stourmas par ma c'hellas en UNO da ziwall na vefe harzet ar brezel e Palestina. Hiziv avat ez eo dieub atav Eretz Israhel. Ur milion hanter a Yuzevien a zo o chom ennañ. Gounezet eo bet an Negev tre betek Elath. An hebreeg a zo yezh an holl vugale, hag ar banniel gwenn ha glas he steredenn velen a stlak a-us da gêr Jeruzalem. Ha trec'h Israhel, koulskoude, n' eo ket bet e gwirionez trec'h an armoù. Nebeutoc'h c'hoazh trec'h ar politikerezh. Nebeutoc'h c'hoazh trec'h an arc'hant. Trec'h Israhel a zo bet trec'h ar feiz - ar feiz a ra fae war furnez vihan, re boellek, ar bed.

Ul lusk a feiz e voe a-berzh Sioniz dibab Palestina da sevel o Zi Nevez. Ar vro a zo paour, kras an douar, nebeut a binvidigezhioù en he c'hondonioù. D'ar mare ma tiazeze Herzl menozioù ar sionelezh, e oa Palestina e dalc'h an Durked, gwall-zivrudet e-keñver o doare d' ober ouzh ar broadoù bihan sujet dezho. Ha poblet e oa ar vro gant Arabed, sichennet eno abaoe kantvedoù ha krog anezho da zihuniñ d' ar vroadelouriezh. E 1903 en enep e kinnige ar gouarnamant saoz reiñ da Sioniz douaroù a-walc'h en Oubanga da sevel un drevadenn.

7

Aze e oa strujus an douar, diemskiant morianed ar c'horn-bro, ha benniget ar raktres gant brasañ galloud ar bed. Uhelrenerien ar sionelezh a lavaras nann. Fae a rejont war ali an arboellerien hag ar bolitikerien a vicher. Dibab a rejont an hent reizh, ha na vez morse an hent aes : dibab a rejont traoniennoù kontammet gant ar malaria dre ma oant traoniennoù o bro gozh, ha menezioù drastet gant ar glaveier hag an digodañ dre ma oant menezioù Judea. Ha piv a gredfe lavarout, bremañ, o deus faziet ? Piv a gredfe lavarout o defe ar Yuzevien gounezet ha difennet gant kement a galonegezh un tamm douar bennak en Ouganda - p' o dije gouezet e oa douar tud all - ha dreist-holl lakaet ur bobl a-bezh da virviñ gant an hevelep c'hoant ha da ganañ en toulloù-bac'h, e kampoù ar marv, pe e bagoù bihan an divroadeg nevez Loshuv le 'eretz avotenou, hor goanag a zo mont en-dro da vro hon tadoù-kozh ? Piv a gredfe ? Ar feiz diboell an hini eo a zo bet ar wir furnez.

An eil lusk a feiz a-berzh Sioniz a zo bet degemer an hebreeg da yezh vroadel. Se ne voe ket graet diouzhtu. Herzl e-unan, krouer speredel Israhel, n' en doa ket gwelet ar gudenn : pep hini, a lavare, a gendalc'hfe da gomz e yezh dezhañ e-unan e Palestina. Ha, forzh penaos, ma oa da zibab ur c'henyezh d' an holl, e oa aesoc'h, ha furoc'h, dibab ar saozneg, - yezh vras, aes da zeskiñ, yezh ar c'henwerzh hag an deskadurezh. Pe, ma felle d' ar renerien kaout ur yezh d' ar Yuzevien o-unan, e oa tu c'hoazh da gemer ar yiddisch, pe al ladino - yezhoù bev, gwevn, dezho ul lennegezh hag ur geriaoueg a-vremañ. Adarre e kemeras ar Yuzevien an hent diaes, hag a oa an hent mat. Gant Eliezer Ben Yehuda e oa dibabet an hebreeg. Stourm a reas an dud fur a-enep, o lavarout e oa an hebreeg ur yezh tenn da zeskiñ, ur yezh na oa ket du da zisplegañ enni kudennoù ar bed, ur yezh a oa pep tra enni da sevel - pezh a oa gwir penn-da-benn. Stourm a reas ar rabined, ar re nemeto o doa c'hoazh un anaoudegezh bennak eus an hebreeg, o lavarout e vije ur pec'hed lakaat yezh santel ar Bibl da servijout da ezhommoù disantel ar vuhez

pemdeziek. E-unan-penn e oa Ben Yehuda o stourm a-enep youl fall un darn vat eus e genvroiz, hag a-enep leziregezh an holl. Gantañ ne oa nemet e feiz. Dont a reas avat da Balestina en ur douiñ na zistagfe morse ger ebet nemet en hebreeg e ve, hag en ur zifenn na vefe komzet yezh all ebet ouzh e vugel. Stlapet e voe mein outañ e straedoù Jeruzalem. Met adarre, ar feiz a drec'has war ar gasoni, ha, pezh a go diaesoc'h, war furnez laosk an dud dereat.

8

An trede lusk a feiz a-berzh Sioniz a voe reiñ d' al labour-dorn al lec'h a enor, ha nac'h tennañ gounid, zoken en o enkadennoù gwashañ, eus labour tud wasket. Ar Yuzevien gentañ o tivroañ da Balestina e fin ar c'hantved diwezhañ, war zouarou paret dezho gant ar baron Rotschild ne oant ket bet ken figus : ar gwiniogoù bras en-dro da Richon-le-Zion, ma oant renet gant Yuzevien, a oa gounezet e gwirionez gant Arabed paeet-fall. Kalonek e voe an enbroerien sionat o nac'h implijout servijerien marc'hadmat hag o tibab ober o holl labour int o-unan. Se, koulskoude, a voe degemeret diouzhtu da reolenn diazez ar c'hibboutzim, na vez morse gopret enno den ebet, ha stourmet e voe evit rediañ ar berc'hennet yuzev da implijout hepken Yuzevien paeet-mat. Koust ar duhez en Eretz Israhel a savas diwar-se, hag orañjez Israhel, unan eus ermaeziadoù bras ar vro, a zeuas da vezañ ar re gerañ er bed. Met war ur sichenn yac'h e voe diazezet buhez ar vro ha, pa dec'has kuit an ha Arabed (war-bouez 100.000 anezho) e 1948, ne gouezhas ket ar frammadur arboellerezhel en e boull. Adarre e oa ar feiz eeun ha didro hag a oa bet ar politikerezh gwellañ.

Ha diwar kement-se - diwar vevañ el lealded speredel, e kumuniezh gant douar ha yezh an hendadoù - n' eo ket hepken ur stad nevez hag a zu bet krouet, ar pezh a vefe, goude-holl, nebeut a dra. Ur stumm-den nevezan hini eo a zo bet krouet. Ar seurt Yuzev hag a veze, evel ma skriv Koestler, « devet ez-vev, plantet dezhañ ur gontell en e gof, lazhet er c'hambrou-aezenn-vougañ; hag a zeue en-dro, evel ur penn Yann er voest, gant e vousc'hoarzh klufan euzhus, da ginnig deoc'h ur rumm dilhad dre rankoñtr pe un takad douar da sevel ti e fabourzioù kêr », ar seurt Yuzev-se a zo aet da get en Israhel. Sabra-ed Palestina a gar al labour-dorn (n' eus en Israhel nemet 11 % a genwerzhourien), o oar gounit parkeier koulz ha difenn anezho, ha bezañ kalonek dirak ar vuhez. An **haloutz** a vez graet eus ar stumm den nevez-se. Hag ar spered **haloutzek** an hini eo en deus graet da wazed dilezel kêrioù bras Europa evit mont da c'hounit gouelec'h an Negev, da baotred ha merc'hed yaouank ar **Shahal** mont da sevel ur gêr nevez en Elath, e-lec'h n' eus nag ur wezenn, nag un eienenn-dour, da ouizieien mont da gemer karg en Israhel evit kaout, evel paeamant, just peadra da zebriñ, da drevadennerien Degania pegañ an tan, war-bouez boutailhoù bier karget gant dourennoù loskus, e-barzh kirri hobregonet siriatic, ha da emsaverien getto Varsovia en em gannañ e-pad 42 devezh a-enep d' an Alamanted. Hag ar seurt traoù eo a ra d' ur bobl bezañ dellezek da vevañ.

9

Ha koulskoude, ma 'z eus ur bobl hag a zo bet darbet dezhi mervel er bloavezhioù diwezhañ ez eo pobl ar Yuzevien: A-raok ar brezel e oa seizh milion anezho en Europa. Goude ar brezel ne chome mui nemet unan. C'hwec'h milion a oa bet distrujet er c'hampoù-bac'h. Hag ar re a glaske tec'hout diouzh ar marv a veze miret outo gant ar Saozon da zont e Palestina hag alies kaset en-dro d'al lec'h ma teuent dioutañ: Diouzhtu a-raok ar brezel en doa fellet da Jabotinsky lakaat ur milion Yuzevien eus Kreiz Europa da zont e Palestina : lavaret e oa bet dezhañ e oa foll, difennet e oa gant ar Saozon. E-giz ma lavaras ur c'hargiad eus ar Foreign Office e-pad ar brezel, d' ar mare ma oad a-zevri o tistrujañ ar Yuzevien : « en ur stad kaer e vefemp ma taolfe deomp an Alamanted ur milion a Yuzevien war hor c'houg ». Pa voe kinniget gant Sveden, e 1943, degemer 20.000 bugel yuzev eus eus an Alamagn (a-du e oa an Alamanted) gant ma vefent aotreet goude ar brezel da vont da Balestina, e lakas ar Saozon an emglev da c'hwitañ. Ha dirak ur bed digas e voe kaset en-dro d' ar marv divroerien ar Struma, ar Salvador, ar Patria ha nouspet bag all. « Ne gemerer ket truez eus ar re a vez lazhaedet, » a skriv Menachem Begin, rener an Irgoun, « n' eus a zoujañs nemet evit ar re a stourm. »

« Ma n'o dije ket Yuzevien Balestina, » a skriv Koestler, « en em savet ken taer, ken rust hag ar broadoù all pa son, eur an tonkadur, an Istor en dije graet ur c'hruz d' e skoaz ha lezet anezho a-gostez, o fiziout er Mufti hag en Emglev Arabek ar garg da beurseveniñ labour Hitler. » Nemet, klevet o doa ar Yuzevien eur

an Tonkadur o seniñ. Gant ar Burev Yuzeviat e oa un arme-emzifenn, an Haganah. Gant broadelourien strollad Jabotinsky e oa an Irgoun Z'vai Leoumi, hag ivez ur bagad bihan anvet bagad Stern, diouzh anv e grouer. An daou strollad diwezhañ a stourmas dre an armoù a-enep d'ar Saozon - o zaol brasañ a voe distrujañ, e-kreiz an deiz, hag e kreiz kêr Jeruzalem, penngarter ar Saozon en ostaleri King David. An holl - Haganah, Irgoun ha Stern - a unanas e 1948 da stourm a-enep an Arabed ha, forzh pegen fall e oant armet, da gannañ anezho.

Pell emañ Israhel da vezañ diluziet e holl gudennoù. Ar stourm a-enep an Arabed n'eo ket echu. Ne c'hounezet ket boued a-walc'h er vro, hag ar vuhez a zo ker-tre. Tud zo a ya kuit, ha kalz eus ar re a zeu ne zeuont ket dre feiz, hogen dre ma 'z int rediet da zont. Adarre e lavaro an dud fur : « ne bado ket Israhel, ne c'hell ket padout ». Padout a raio.

10

Pezh a ra pinvidigezh vrasañ Eretz Israhel eo an nerzh-krouiñ souezhus a zo gant he mibien. Ur vro eo, e gwirionez, a zle bezañ plijus bevañ enni, d' an neb a gar bevañ ha n' eo ket kousket. Divizet eo lakaat an dud da zeskiñ hebreeg ? Sevel a reer skolioù e-lec'h ma tesker ar yezh dezho dindan c'hwec'h miz. Ar Saozon a zifenn gwerzhañ d' ar vro ar c'horzennoù dir a zo ezhomm evit dourañ parkeier nevez ? Sevel a reer (Gouhere 1951, Sant Yann Akra) ul labouradeg d' ober dir, 24.000 tonennad ar bloaz, hag ul labouradeg (e Sarafand) d' ober korzennoù, kement ha ma 'z eus ezhomm. Re a zispigner da brenañ boued ha binvioù er-maez eus ar vro ? Sevel a reer labouradegoù d' ober sukr (Mezheven 52, e Beersheba, trawalc'h a sukr evit Israhel a-bezh), d'ober mneuioù (Mezheven 52, en Hadera, 60 % anezho a vo ermaeziet), d' ober simant (1951, labouradeg an Nester a ra 11.500.000 sac'had ar bloaz), d' ober seier paper evit ar simant (20 milion ar bloaz), d' ober louzoù a-enep an amprevaned (e Makhtech, Gouhere 52, espern d' ar vro : 1.500:000 dolar ar bloaz) h.a., h.a. An derzhienn sevel hag an derzhienn gounit douaroù nevez a zo peg en holl. Ne goller ket ur vunutenn. En Haifa e saver ur silo 24 metr uhelder e 7 devezh, o labourat noz-deiz, ar frammoù-koad da zerc'hel ar simant o sevel ingal eus 12 sañtimetr bep eur. Hag en Negev ez a (1952) 200 mederez-dornerez, o labourat noz-deiz, da eostañ an ed hadet er bloaz a-raok en ur milion dounam (100.000 hektar) gounezet evit ar wech kentañ. Ur seurt nerzh-bevañ, ur seurt nerzh-krouiñ, a zo un arouez kaer evit an dazont.

Marteze, hervez ar reolennoù, ne zle ket Israliel bezañ trec'h. Met morse, hervez ar reolennoù, n' en dije dleet bezañ ganet. Ha koulskoude ez eo bet ganet. Ha koulskoude ez eo bremañ ur vro dieub. Ha koulskoude e kresk e boblañs ken buan ma tizho hepdale an niver a warezo anezhañ ouzh un dagadenn a-berzh an Arabed. Ha kement-se a zo bet gounezet gant nebeut a dra. Gant nebeut arc'hant : lakaet er-maez ar baron Rotschild, n' eo ket ar Yuzevien binvidik o deus, a-raok ar bloavezhioù diwezhañ, kaset arc'hant da Israhel, met Yuzevien baour gettoioù Europa o lakaat pep hini e wennegig e-barzh boest glas ar Keren Kayemeth Leisrael, er sinagogenn. Gant nebeut a skoazell - nemet promesa Balfour da Weizmann, just ur promesa - hag a-enep da lod eus galloudoù pouezusañ ar bed. Gant nebeut armoù, nemet ar re graet er gêr hag ar re kaset dre garr-nij, d'ur mare diaes-bras e 1948, eus Tchec'hoslovakia. E gwirionez, pa brederier mat, gant netra. Netra nemet ar youl, ar feiz hag ar gadarnded.

KEODED AR MARV

Sav, kerzh war-du keoded ar marv, sell ouzh ar porzhioù,
 Ha gant da zaoulagad e weli, gant da zaouarn e tastorni
 War ar mogerioù, ar frammoù, ar mein hag ar plastr dismeret
 Gwad kaouledet hag empenn kaledet ar re vazhatet d'ar marv,
 Ha gant da dreid e valei war dismantrou, war levrioù ha parchoù distrujet. Arabat
 chom avat da sellout ouzh ur seurt diskar, kae en-dro war an hent
 Hag ar platanenned a saludo ac'hanout gant o sev hag o frond,
 Ha gant miliadoù biroù aour sked-disket o livioù
 E taolo an heol e c'houlou war an droug.
 Rak o-daou, an nevez-hañv hag ar marv, int bet pedet gant ran Aotrou d' ar banvez.
 An heol a sked, ar gwez a daol bleunioù; ar muntrer a lazhet,..
 Hag e tec'hez, hag ez ez war-du ar porzh e-lec'h ma 'z eus ur bern teil.
 War an teil, daou gorf marv : ur Yuzev hag e gi.
 Gant an hevelep bouc'hal int bet lazhet, en hevelep bern int bet taolet,
 Hag en o gwad kemmesket e vez, da noz, ar moc'h o torc'hwenial.
 Digomz e c'houl ar c'horfoù marv perak int bet lazhet, hag en o daoulagad ez eus
 un aters : Abalamour da betra ?
 Sevel a rez da sell war-du an doenn, met an teol a chom mut,
 O teurel ken o skeud warnout, mut - hag e c'houlennet gant ar c'hevnid.
 Testoù bev, testoù gwelet ganto pep tra, hag e kontont dit :
 Ur c'horf toullgofet leuniet gant pluñv,
 Korfoù faoutet o gouzoug, a-ispilh ouzh an treustoù,
 Ur babig e-kichen e vamm lazhet
 En e veg c'hoazh ar vronn a oa o tenañ diframmet.
 Setu an traoù a gonto dit ar c'hevnid,
 Traoù hag a sko en empenn hag o deus nerzh a-walc'h
 Da zistrujañ spered hag ene, da reiñ ar marv peurbadel.
 Met moustrañ 'rez war da youc'hadenn, derc'hel a rez anezhi ez korzailhenn
 stardet,
 Ha kent na darzhfe e kasez anezhi en-dro en donañ eus da galon.

12

Dastum a rez da nerzh, hag ez ez kuit : Ha - setu an douar evel a-raok
 Hag an heol evel dec'h, evel derc'hent-dec'h o fennañ e sked war ar bed.
 Diskenn a rez dindan zouar, er c'havioù
 E-lec'h m' eo bet gwallet merc'hed da bobl, ar merc'hed glan,
 Ar verc'h dirak he mamm, ar vamm dirak he merc'h.
 Met petra 'welez ? Hag-eñ n'emañ ket e teñvalijenn ar c'horn,
 Dindan ar mortez, a-dreñv ar varrikenn,
 Ar wazed, ar vignoned, ar vreudeur, o sellout; kuzhet-mat,
 An arvest spontus a dremen dirak o daoulagad.
 Gwelout a reont ar vezh ha ne fiñvont ket, ne lammont ket,
 O daoulagad ne serront ket, o spered a chom sklaer.
 Ha piv oar, hag-eñ n' en deus ket unan bennak anezho lavaret en don eus e galon :
 Aotrou, gra ur burzhud, met diwall na zeufe an anken betek ennon.
 Hag ar re-se, o tihuniñ eus o mezha hag eus o gwad,
 Kuitaet ganto o zoulloù a ya war-du tiez Doue
 D'E drugarekaat evit o silvidigezh hag o buhez.
 Ha pep tra a zeu en-dro en urzh, evel ma oa a-raok.
 ...Hag ez ez er-maez eus kêr, hag ez ez e-barzh ar vered
 Da welout bezioù ar re verzheriet, an holl anezho gwitibunan,
 Ha da galon a deuz ennout dindan gwask ar glac'har.
 Ya, aze maint, gourvezet mesk-ha-mesk :
 Ha ma 'z eus digoll evit o marv - gant petra e paeimp ?
 Pa zeuoc'h warc'hoazh da c'houlenn ho kwir
 E tigorin deoc'h : Deuit, sellit ; me zo paour eveldeoc'h,
 Gouzañv a ran gant ho poanioù, digeriñ a ran deoc'h va c'halon.
 Ho re lazhet, lazhet evit netra, ha me, ha c'hwi,
 Ne ouzomp ket perak ez oc'h marv, nag evit piv,
 N' eus ket muioc'h a abeg d' ho marv eget d' ho puhez.

.

Hag o tilezel beziou ar te varv, sell ur pennad
Ouzh ar pallenn glasvez en-dro dit.
Ar c'hlaenn a zo tener ha gleb evel ma vez da zerou an nevez-hañv.
Pell e sellez ouzh broñsoù ar marv hag ouzh geot ar beziou.
Diframmañ 'rez un dornad diouto hag hen teurel dreist da skoaz
En ur hiboudañ : Pobl ar Geot Diframmet - hag-eñ ez eus ur goanag evit an hini
diframmet ?

Serriñ 'rez da zaoulagad evit chom hep o gwelout ha da bediñ a ran da vont
Eus ar vered war-du da vreudeur, war-du ar re o deus en em dennet eus al
lzhadeg :

12

Setu int o yunañ, bodet e Ti ar Pedennoù
Ha betek da skouarn e teu trouz o c'hlemmoù.
Leun eo an ti gant hirvoudoù, leñvoù ha keinvanoù
Pegañ 'ra ar c'hrenerezh ennout, sevel a ra ar blev a-bik war da benn
Hag-eñ n' eo ket se ronkell ur vroad o vervel ?
N' eus ket ur mallozh o sevel eus o c'halon d' o diweuz.
Hag-eñ n' int ket gloazet e gwirionez ? Perak neuze o fedenn bilpous ?
Skeiñ a reont war o bruched, kovez a reont o fazioù,
O lavarout : Pec'het hon eus - met o c'halon ne gred ket pezh a lavar o genou.
Hag-eñ e c'hell tammoù pri pec'hiñ ? Stummoù torret ober an droug ?
Neuze, perak e teuont war va zu ? - Lavar dezho mallozhiñ gant nerzh ar gurun,
Sevel o daouarn ha goulenn kont
Eus merzherinti ar remziadoù abaoe an derou-holl...
Met setu echu ar yun, lavaret ez eus bet pedennoù.
Ha perak e chom an engroez en entremar ? Ha lennet e vo ar C'hunuc'hennou ?
Nann. Ar prezeger a bign gant diriou al leuren,
A zigor e c'henou; a laosk huanadoù,
A zistag poz goude poz a-zivout o anken dezho-holl,
Met n' eus ket ur flammenn o skediñ en o c'halon.
Lod a selaou en ur vazailhat, lod all a hej o fenn,
Arouez ar marv war o zal ha goullo o c'hreizon.
Marv eo o spered, diviet ar sev, Doue en deus o dilezet...
Te avat, n' az pezh ket truez outo, n' ez ket da skeiñ ouzh o gloazioù.
E peoc'h emaint en o buhez euzhus - da betra klask o frealziñ ?
Ha pep hini anezho, gant poanioù e galon, a ya en-dro d' e wele
Merglet e izili ha breinet e galon.

.

Er vered, dizouarit eskern ho kerent,
Hag eskern ho predeur merzheriet, leugnit ho seier ganto,
Ha warc'hoazh it da c'houlenn truez gant ar Jentiled, aspedit anezho,
Hag evel m' hoc'h eus astennet ho torn ez astennet ho torn c'hoazh, evel m' hoc'h
eus goulennet an aluzon e c'houlennoc'h c'hoazh.

.

14

Petra 'rez aze, Mab an Den, tec'h war-du ar gouelec'h,
Kas ganit kib an daeroù,
Ha du-hont e dek tamm e freuzhi da ene
Hag e walc'hi da galon gant ur gonnar dic'halloud.
Da zaeroù puilh, lez anezho da redek war lein ar menez
Ha laosk da youc'hadenn e-kreiz ar gwall-amzer.

H. N. BIALIK.
(1873-1934)

Dilezel a reomp ar vuhez kozh, a zo deut da vezañ argarzhus deomp, hag adkregiñ a
reomp gant pep tra abaoe an derou. Pezh a fell deomp n' eo ket kemm, na gwellaat
an traoù : met adober pep tra penn-da-benn.

A. D. GORDON,
unan eus diazeiourien Eretz Israhel.

15

EMLED AR YEZH HEBREEK

gant Leon SIMON

Tost da zek vloaz ha tri-ugent a zo abaoe ma voe adsavet an hebreeg da yezh vev pemdeziek. Er bloavezh 1881 e teuas ur Yuzev yaouank a Rusia, en doa kemeret an anv a Eliezer Ben-Yehuda, d' ober e annez e Jeruzalem, graet gantañ al le da chom hep komz yezh estr eget hebreeg e Palestina, ha dre nerzh souezhus e youl ha pennegezh e venoz e teuas a-benn eus un dra hag a seblante dic'hallus. An uhelvenoz a boulze anezhañ hag un dornad a huñvreerien all da gomz hebreeg a gavas un harp galloudus en ezhomm evit ur yezh nemetken da gemer lec'h ar Babel a yezhoù degaset da Balestina gant Yuzevien o tont a nouspet bro disheñvel. Ha pa vervas Ben-Yehuda e 1923, e oa bet degemeret an hebreeg da yezh wirion Yuzevien Balestina, anzavet gant ar Gouarnamant evel unan eus teir yezh-Stad Palestina dindan gefridi Breizh-Veur. Ar « yezh santel » marv pe beuzvarv a oa deut adarre da vezañ yezh vev ar skol, an tiegezh hag ar straed, yezh ar parkoù, ar burevioù hag al labouradegoù.

Evit kas ur seurt taol da vat, ne oa ket a-walc'h broudañ gwazed ha merc'hed, bet desavet e yezhoù all, da gomz hebreeg ha da lakaat o bugale da vezañ skoliet er yezh-se : ret e oa ivez reiñ dezho un hebreeg hag a c'hellfent ober gantañ. Ar yezh, bet implijet e-pad kantvedoù evit ar relijion hag al lennegezh hepken, a ranke bezañ adkempennet a-benn dont da vezañ gouest da zisplegañ efedus holl ezhommoù ar vuhez a-vremañ. Gwir eo, an dud a gomze ar yezh-se o dije gellet kreskiñ he geriadur tra ma raent gantañ rak tad an ijin eo an ezhomm : hogen, ma ne dlee ket an hebreeg mont d' un trefodach divalav, n'helled ket lezel al labour-se gant an dud voutin hepken. Setu perak, kerkent hag an derou, e savas Ben-Yehuda hag e geneiled ur strollad anvet **Va'ad Halashon**, karget da eveshaat ouzh emzispjegerezh an hebreeg bev, d' e vroudañ dre zizoleiñ gerioù nevez pe advevaat gerioù tennet diouzh levrioù kozh hebreek, ha da virout ouzh an dud a zegemer gerioù pe droioù-lavar trefodet, kement ha ma oa posubl ober an dra-se en ur vont dezho dre gaer. Ar Strollad-se, hag a zo war-nes dont da vezañ un Akademi anzavet ha skoazellet gant ar Stad, un tamm evel an « Académie Française », en deus kemeret ur perzh bras er pezh a zo bet graet e-pad an 70 vloaz diwezhañ. An den er straed, kenkoulz hag ar vaouez er gêr hag ar bugel er skol, o deus graet o lod, hag unan dister ne oa ket ; hogen an hebreeg komzet a hiziv, daoust ha ken pell diouzh ar beurc'hlanded ha ne vern pe yezh all, n' eo ket bet lezet da vont d' ur meskaj.

16

E-pad ar 25 bloavezh diwezhañ, tud eus ar Skol-Veur Hebreek eo bet an darn vuiañ eus izili ar **Va'ad Halashon**. Daou eus he c'helennerien dreist-holl, Joseph Klausner (bremañ kelenner a enor) hag N. H. Tur-Sinai (Torczyner), o deus roet skoazell vras en emledidigezh an hebreeg hag en e adstummidigezh diouzh ezhommoù ur vroad o vont dibaouez war-du ar frankiz peurglok, war dachenn ar politikerezh kenkoulz ha war hini ar sevenadurezh hag an arboellerezh. An imbours'h hag ar gelennerezh er Skol-Veur, ouzhpenn-se, o deus roet lañs da grouidigezh ur geriadur skiantek, a oa gwall-nebeut anezhañ e gre ar rummad-tud diwezhañ. Gant se, ha daoust da adstummidigezh an hebreeg evel yezh vev ha modern bezañ aet war-raok dizehan abaoe 1881, ar bloaz 1925, a welas ar Skol-Veur nevez o tigeriñ, a c'hell bezañ sellet outañ gant gwir abeg evel ur pleg-tro en istor an adstummidigezh-se, ha n' eo ket direizh ober un diforc'h etre ar 25 bloavezh diwezhañ hag ar 45 en o raok. Ret eo lavarout, evelato, ez eus un abeg all pouezusoc'h da dresañ ul linenn harz war-dro 1925 : ar reoladur nevez roet da Yuzevion Balestina dindan gefridi Breizh-Veur, a savas kevredigezh ar Yuzevien hogozik da renk ur vroad, hag an hebreeg, evel yezh ar gevredigezh-se hag unan eus yezhoù ofisiel ar vro, a voe ret dezhañ displegañ ur geriadur nevez mat da dalvezout er vuhez politikel hag er mererezh. War un dro, kreskidigezh ar c'henwerzh hag an ijinerezh e Palestina da heul enbroerezh ar Yuzevien, a redias an hebreegerien da sevel gerioù ha na oa ket ezhomm anezho betek-hen. Ha nevez 'zo, krouidigezh Stad Israhel gant he Breudoù, he c'hannadourien, he reizherezh, hec'h arme hag he c'hargidi, he deus roet d' an hebreeg an amproenn diwezhañ eus he gouestoni da seveniñ an holl c'houlennoù a c'hell ober ar vuhez vodern. Emledidigezh spontus an hebreeg, ret ha ma oa da heul donedigezh ar yezh war dachennoù nevez eus ar vuhez e-pad ar 20 pe 30 bloaz diwezhañ, a zo bet kaset da

benn, dre vras gant pinvidigezhioù ar yezh hec'h-unan. En amzer ma oa ar vro dindan kefridi Breizh-Veur, pa veze ankeniet ar Sionidi gant kreskidigezh c'horrek ar boblañs yuzev e Palestina, e veze implijet alies al lavarenn « **aliya**-diabarzh » evit envel ar greskidigezh naturel a yae en-dro a-gevret gant an **aliya** er ster wirion, da lavarout an enbroerezh. E kreskidigezh ar yezh hebreek ez eus ivez « **aliya**-diabarzh » : krouidigeih gerioù nevez diwar elfennoù hebreek-rik an hini eo - kenkoulz ha degemeridigezh gerioù estren ; hogen ar wech mañ ez eo an « **aliya**-diabarzh » a vez an tu-kreñv gantañ. N' eo ket hepken e vez amprestet kalz nebeutoc'h digant ar yezhoù estren eget na veze graet ugent pe dregont vloaz 'zo ; tuet e vezer ivez da lakaat gerioù savet diwar gwriziennoù hebreek hervez lezennoù an deveradurezh hebreek, e-lec'h ar gerioù estren hag a veze kemeret gwechall ne vern penaos. Den ebet, da skouer, ne deurevfe bremañ lavarout pe skrivañ **kultura**, **budget**, **kharakter** pe **diskiplina** ; hogen tregont vloaz 'zo pe war-dro, an hini a gomze pe a skrive hebreeg n' en doa tu all ebet da zisplegañ ar menoz aroueziet dre ar gerioù-se. Ha n'eo ar re-se nemet skouerioù dibabet etre kantadoù (1). Pell eo al labour-se a vezañ echu. Ur skouer hepken ; betek ur bloaz 'zo pe zaou e hañvale ar ger divalav **protsedura** bezañ gwriziennet-start en hebreeg nevez ; neuze avat an Ao. Sharett, Ministr Aferioù Diavaez Israhel, a ijinas **nohal** a zo ur ger stummet reizh diwar ur wrizienn hag a dalv «merañ » « ren », hag emañ dija ar ger hebreek-se o tistroadañ e gevezer estren.

Abeg an argas-se eus ar gerioù estren n' eo ket ur spered a vrizh-vrogarouriezh, ha n'eo ket kaset en tu-hont d'ar skiant vat. Gwir eo ez eus bet glanyezhourien na garfent mirout ger ebet ha na ve ket hebreek-rik (« hebreek » o talvezout, evel just, yezh skridoù ar Rabbined kenkoulz hag hini ar Vibl). Ben-Yehuda e-unan a oa tuet d' an dra-se. Mont a reas betek ijinañ gerioù hebreek evit anvioù ar skiantoù (2) : «buhez-ouiziegezh », « kleñved-ouiziegezh » h.a. Hogen an ijinadennoù-se ne rejont ket berzh ha lavarout a ra reomp didrabas **biologia**, **pathologia**, **psychologia**, h.a., en ur lakaat zoken ar pouez-mouezh war ar silabenn eil-diwezhañ, pezh a zo krenn a-enep boazioù an hebreeg. Ar Skol-Veur Hebreek hec'h-unan a ro skouer ar c'houzañvidigezh-se : ober a ra **universita** anezhi hec'h-unan (ha n'eo ket **mikhla** kinniget gant Ben-Yehuda), **rektor** eus he rener, **dekanim** eus be deaned, **professorim** eus he c'helennerien, ha zoken, siwazh, **s'gan-nasi eksekutivi** eus hec'h eil-rener oberier (« executive vice-president »). A zo muioc'h, dilezet he deus n' eus ket pell ur ger hebreek evit degemer unan estren en e lec'h, o vezañ grataet o goulenn d'ar skoazellerien, na felle ket mui dezho bezañ anvet **ozrim**, hogen **assistentim** (n' eo ket didalvez lavarout e talv **ozeret** kement ha « matezh »). Diouzh he zu, ar Skol-etre **Herzlia** e Tel-Aviv, a zo ken kozh hag ar gêr hec'h-unan, a zo c'hoazh anvet **gymnasia** (alamaneg **Gymnasium**) ; hag an alamaneg **Realschule** a gav un heklev er **betsefer reali** en Haifa. Taolomp pled, en ur dremen, ez eo **universita**, **gymnasia** ha **reali** skouerioù eus gerioù amprestet lakaet dezho un dibenn-ger hebreek.

20

Ma kuitaomp tachenn an deskadurezh, e c'hellomp menegiñ **demokratia**, **aktuali**, **interes**, **politi** ha **politika** evel skouerioù eus amprestadennoù hag a hañval bezañ hebreekaet da vat ha n' int ket en arvar da vezañ biken taolet er-maez. An hevelep tra a c'hellfed marteze lavarout eus an div euzhadenn **inflatsia** ha **protektsia**; en dro-mañ, avat, pa vez kement a dud hiziv an deiz o krediñ ar pezh a garfent gwelout o tont da wir, marteze e vez miret ar gerioù estren dre ma kred an dud, hep gouzout mat dezho, e teuio bremaik an deiz ma ne vo mui ezhomm anezho, dre maz aio an traoù o-unan da get evel m' eo dleet, ha gant-se n' eo ket ret kavout anvioù hebreek evito. A-wechoù ez implijer war un dro ur ger hebreek hag ur ger estren, hemañ gant ur ster strishoc'h : evelse, « eneberezh » er ster ordinal a zo **hignatdut**, hogen « an Eneberezh » er Knesset (Breudoù) a zo **ha-oppositsia**.

Penaos e vez divizet bep gwech hag-eñ e vo anvet an dra-mañ-dra gant ur ger hebreek pe gant ur ger amprestet ? Aesoc'h ober ar goulenn-se eget respont dezhañ. Ben-Yehuda, da skouer, a anvas ul lizher-orjal **mivrak** hag ur pellgomzer **sachrachok**. Hiziv ez eo **mivrak** ger ofisiel ar Post evit ul lizher-orjal (daoust maz implijer alies ivez **telegramma**), hogen **sachrachok** a zo e limboù ar gerioù c'hwitet, ha pep hini a lavar **telefon**. Ur skouer all : Israhel en deus ur ger hebreeg mat evit e Vreudoù, **knesset**, hogen n' en deus, da vihanañ bete-vremañ, ger ebet evit ar strollad-Ministred nemet **kabinet** e vefe. Perak ? Marteze ez eus bet

eno levezon yezhourien ar Va'ad Halashon, hogen gwirheñveloc'h eo e vez diskoulmet seurt kudennoù gant ijin-natur an hebreegerien voutin.

Doareoù ar yezh hebreek o-unan a zo ur warez vat a-enep ar re-amprestañ digant ar yezhoù a-vremañ, dreist-holl digant yezhoù europek. Daou dra arouezius a c'heller menegiñ er c'heñver-se. Da gentañ, gallout a reer treuzlizherennañ en hebreeg hogos ne vern pe anv-kadarn, en ur gemmañ an dibenn un disterañ diouzh ret. Hogen ar verb hebreek n' en deus nemet teir c'hensonenn, peder d' ar muiañ-holl. Mat evede, anat eo, kaout gerioù deveret eus an hevelep gwrizienn evit envel un dra pe ur menoz hag ar verb o klotañ gantañ, hogen frammadurezh ar verb a laka un harz da zegemeridigezh anvioù hag a c'hellfe bezañ amprestet a-hend-all. Da skouer, gouzañv a rafed a-walc'h an treuzlizherennadur **disinfektsia**, hogen dic'hallus-groñs eo fardañ ur ger diwar ur wrizienn hebreek evit lavarout « divreinañ », ha gant-se e vezer temptet da glask ur ger hebreek evit an anv-kadarn evit ma kloto gant ar verb. Gwir eo ez eus bet tud dispont hag o deus klasket sevel, da skouer, **lakved** evit « gwerzhadegañ » « to liquidate ») ha **tsavlez** evit « sevenaat » (« to civilise »), met seurt iskisadennoù n' o deus ket bevet pell (unan pe zaou koulskoude a zo bet degemeret : **argen** (« to organise ») eo ar ger ordinal evit « prientiñ », ha **talpen** evit « pellgomz » - (an **f** eus **telefon** o vont da **p** hervez lezennoù ar soniadouriezh hebreek).

Evit an anvioù-kadarn ez eus ivez un dra all hag a zo ur skoilh da amprestidigezh gerioù europek, hag ur broud da gavout anvioù hebreek evit kemer lec'h ar re bet degemeret end-eeun. An hebreeg a implij dibennoù e-lec'h gerioù distag e-giz anvioù-gwan perc'hennañ, ha se a laka ar gerioù estren diaes-meurbet da embreger. Ne oa ket tenn, da skouer, kemer ar ger **budget** evit envel « Glad ar Vro » - aesoc'h e oa, a dra sur, eget kavout ur ger hebreek evit ar menoz-se - hogen n' eus tu ebet da lavarout **budgetenu** evit « glad hor bro », ha ret eo ober gant an dro-lavar **habudget shelanu** « glad ar vro hag a zo hon hini ». Kavet ar ger **taktsiv** diwar ur wrizienn ha roet dezhañ ar ster « budget », netra aesoc'h eget lavarout **taktsivi**, **taktsivenu**, h.a.

A-du-rall, frammadur an hebreeg, diazezet ha m' eo war wriziennoù div- pe deirlizherennek a c'heller lakaat dezho rakgerioù ha dibenn-gerioù, a ro d' ar yezh ur galloud souezhus evit krouidigezh nevezc'herioù, hag ar galloud-se a zo un dic'haou a-bouez evit an diaesterioù a gaver pa glasker amprestañ gerioù europek, hag a zo ar re pouezusañ pa ranker displegañ ar vuhez hag ar reiz a vremañ. Diwar ut wrizienn bennak ez eo posubl sevel war-dro ugent anv-kadarn, pep a dalvoudegezh disheñvel o tennañ mui pe vui da dalvoudegezh ar wrizienn. E gwirionez, morse moarvat ne vez lakaet ur wrizienn da dalvezout en un doare peurglok, hag a-wechoù ez eus skoilhoù soniadouriezhel ; hogen ar pezh a chellfed envel an dachenn da c'hounit a zo ken ec'hon ma ranker labourat un darn anezhi hepken evit dastum un eostad puilh. Kemeromp da skouer ar wrizienn graet gant an teir c'hensonenn **yad**, **tsaddi**, **aleph**, hag a dalv « mont er-maez ». Dre stagañ rakgerioù ha dibenn-gerioù ouzh ar wrizienn-se ez eo bet stummet anvioù o talvezout « disparti », « tec'h », « ermaeziadur », « dispign », « frouezh (ul labour) », « dizoloidigezh » hag « ijinadur ». An holl c'herioù-se, na oa nemet un nebeut anezho en hebreeg klasel, a zo aes da zigemmañ an eil diouzh egile, hag anat eo enno ar wrizienn.

22

Ar galloud-se evit an « **aliya**-diabarzh », hag eñ hogos diharz, a zo pennabeg d' an hebreeg a hiziv bezañ peuzdieub a c'herioù europek. Evel m'hon eus hen diskouezet, n' eo ket un afer a gasoni ouzh ar yezhoù estren. **Universita**, **telefon**, **symposia** ha meur a c'her all a zo ostizidi degemeret mat, a-gevret gant amprestadennoù gresianek ha latin niverus deut a-ziwar amzer an Talmud. Hogen ijin ar yezh hebreek, ken enk e keñverioù 'zo, ken pinvidik e keñverioù all, a ra posubl an ober gant nebeut a c'herioù estren (nemet ar re hag a zo deut da vezañ etrevroadel). Hag an doare m'eo bet distroadet **export** hag **import**, da skouer, gant **yetsu** ha **yevu**, a ziskouez pegen yac'h eo ar yezh kozh, ha pegen barrek d' en em bourveziñ a-benn ur vuhez leun ha nerzhus er bed a-vremañ, hep koll tamm eus he fersonelezh.

(Diwar : Hebrew University Garland, a Silver Jubilee Symposium edited by Norman Bentwich ; Vallentine, Mitchell & Co., Ltd., London, 1952.)

(1) Kalz skouerioù all a gavor en ul levrig mat en hebreeg diwar-benn « Berzh-mat

an hebreeg a vremañ », gant Isaac Avinery (1946).

(2) An dra-se evel just n' eo ket souezhus evidomp ! (Notenn an troer).

Savet e vo mereurioù boutin en Israhel evit echuiñ gant an doujañs gouennel hag arboellerezhel.

Echuet e vo an dismegañs gouennel dre reiñ d' ar bobl hebraek ur stad broadel dieub e Palestina.

Echuet e vo an dismegañs kevredigezhel dre sevel eviti mereurioù boutin.

Diskleriadur 1911, e Romni, Polonia,

LENNEGEZH ISRAHEL

hervez J. SHAANAN

I. - Ar studiadenñ-mañ a zo he fal reiñ un daolenn eus al lennegezh a-vremañ. N' heller ket ober se, avat, hep menegiñ ar pezh a zo bet en a-raok, rak al lennegezh hiziv, evel ar yezh hiziv, a zo stag ouzh an amzer-dremenet, hag evit he c'hompren ez eo ret derc'hel soñj eus hec'h orin speredel : ar Bibl, ar Mishnah, skridoù rabinek ar Grennamzer hag an amzer-vremañ.

Ar getto krennamzerel, hag a zispartie ken strizh ar Yuzevien eus peurrest ar bed, en deus lezet e roud war al lennegezh yuzeviat : tamm ha tamm he deus ar yezh hebreek, harluet eus he bro c'henidik hag hep darempred ken gant an traoù, kollet pep galloud da livañ ar fetis. A yezh komzet e oa deut da vezañ yezh sakr.

Diwar neuze ne voe implijet ken an hebreeg nemet evit lezennoù ar Rabined hag evit al lennegezh kevrinadel. Homañ a glaskas mirout pinvidigezh ar yezh ha glanded ar stumm skrivañ. Evit al lennegezh rabinek, bez e kaver enni un adskeud eus spered Yuzevien an amzer-se oc'h asantiñ da holl zireizhderioù ar vuhez.

E-pad mestroniezh an Arabed war Vro-Spagn eo e voe al lennegezh kozh hebreek e barr he brud : eus ar mare-se e chom gwerzennoù, ha komz-plaen barzhonius levezonet gant al lennegezh arabek, met n'eur ket deut a-benn neuze da adsevel an hebreeg evel yezh komzet ar Yuzevien. N' eo ket souezh eta m' en em gavas paour-tre ar yezh da vare an dispac'h gall, hag e lakaas reiñ d' ar Yuzevien gwirioù an holl.

II. - Azginivelezh al lennegezh a zeuas war un dro gant hini ar yezh. Goude an dispac'h gall e stagas ar skrivagnerien da gemer perzh e menozioù al lennegezh europat, ha da lakaat en o skridoù kement tra a gaved enni. Fellout a reas dezho gwaskañ en ur c'hantved hepken ar pezh he doa lakaet Europa 300 vloaz da c'hounit. Koulskoude, daoust da levezon an nevez-klaselezh, ar romantelezh, an hollboellouriezh, ez eo chomet al lennegezh hebreek feal d' he spered yuzev, ken dre ar yezh biblek implijet ganti, ken dre an danvez, a zo anezhi kudennoù ar Yuzevien.

24

An Azginivelezh lennegel a oa ganet da varevezh an holl-boellouriezh e-touez Yuzevien an Alamagn. Ar romantelezh a zeu war-lerc'h a c'hanas war zouar Rusia. Bez' ez eus koulskoude un diforc'h anat etre ar romantelezh yuzev hag hini Europa : unan o vezañ diazezet war ar Grennamzer, eben o treiñ war-du un amzer koshoc'h c'hoazh, o klask ur frealz d' hec'h uhelvennad broadel en eñvorennoù leun a lorc'h eus ar vestroniezh politikel yuzev.

Kalz buanoc'h eget Europa e tremenas al lennegezh hebreek eus ar romantelezh d' ar wirvoudlezh-stourm. Dindan levezon an hollverzadourien rusian Pissarev ha Tchernichevski e teu al lennegezh hebreek, o lezel un tammig a-gostez he freder gant stumm ar yezh, da deurel evezh kentoc'h ouzh an danvez : pezh a zo a-bouez bremañ evit an arzour, da gentañ holl, eo ar menoz-stourm. Hag, o kemer da destenn amzer gozh ar frankiz hag ar veli yuzev, e tispleg al lennegezh hebreek menozioù politikel nevez a-grenn, a vir outi da vont d' en em deuziñ el lennegezhioù europat.

III. - Ar c'hammed bras war an hent nevez a voe graet gant ar skrivagner **Sh. J. Abramovitz**, anavezet gwelloc'h dre e anv skrivagner **Mendele Mokher Sepharim**, ginidik eus Rusia ar c'hreisteiz. Gant e zanevelloù eo e tigor ar mare gwirvoudel el lennegezh hebreek. Dedennet eo an arzour gant an dud, gant an darvoudoù a wel bemdez en-dro dezhañ; hag o livañ a ra en ur yezh leun a vuhez. Eus e daolennoù ken bev, ken c'hoarzhus, ne denn avat Mendele kentel ebet evit an Diaspora : da re all e vo ober ar c'hendastum politikel.

E-touez ar re-se, an hini pouezusañ a zo bet **Asher Ginsburg**, eus e anv-pluenn **Ahad Hâ am**. Preder kentañ e arz a zo ar vroadelouriezh. Ar vroad, evitañ, a zo kreizenn pep buhez ha dlead an arzour a zo bevañ eus e uhelvennad broadel. Evit-se e tiazeez atav e arz war an amzer gozh, hag a zle bezañ andon pep madelezh evit an amzer-vremañ.

M. J. Berditchovski, hag a veve en hevelep mare gant **Ahad Ha'am**, a savas a-enep reiñ un dalvoudegezh vroadel d' al lennegezh. Mestr an hiniennelourien ez eo. Ne gred ket e tle al lennegezh hebreek bezañ diazezet war istor kozh ar bobl yuzev. Reiñ a ra dezhi ur sichenn nevez, ouzh he lakaat da heuliañ tuioù ha plegoù al lennegezh vedel.

IV. - Etre menozioù **Ahad Ha'am** ha re **Berditchovski** eo bet an helibini en hol lennegezh atav abaoe. Ha se a ziforc'h, e derou ar c'hantved-mañ, daou varzh brasañ an Azginivelezh Yuzev : **Haim Nahman Bialik** ha **Tchernikovski**.

25

Pezh a gar Bialik dreist pep tra all eo ar bobl yuzev, ha kavout a ra e awen en he foanioù, en he c'hoantoù, en he zonkadur skrijus. Ur wir dalvoudegezh denel o deus e oberoù, ret eo hel lavarout, met en e werzennoù e vez atav unanet poan an hinienn ha poan ar vroad, goanag an hinienn ha goanag ar vroad. Ne vez an hinienn, evitañ, nemet skeudenn-arouez ar vroad. E-touez e oberennoù gwellañ e c'heller menegiñ **Ir Hahariga** (Keoded ar Marv), o sevel a-enep d' ar pogromoù ha - dezho un awen denel kentoc'h eget yuzev ez-strizh - **Habreikhah** (al Lenn) ha **Zohar** (Splander).

Bialik, mar deo bet barzh an dic'hoanag, a zo bet ivez diouganer an Dasorc'hidigezh vroadel. Kanet en deus poanioù e bobl : met ivez he zrec'h da zont. Ha, mar deo bet bras e levezon war dachenn ar menozioù, ez eo bet ken bras all war dachenn ar yezh. Ne da ket da glask er-maez eus gerioù an Testamant Kozh met, o lezel a-gostez o zalvoudegezh arouezius, e taskor dezho o gwir ster fetis. E yezh, eeun ha kreñv, a zo leun a yec'hed. Unan eus diazeziourien an hebreeg komzet ez eo bet.

Tchernikhovski a zo azeulour ar stumm hag ar skeudenn. Ar « gresian » ez eo en hol lennegezh, n'eo ket hepken en abeg d' e droidigezhioù diwar ar gresianeg, met ivez en abeg d' e baganelezh - ken disheñvel diouzh undouedegezh Bialik. N'eo ket gant ar bed kozh yuzev ez eo awenet Tchernikhovski, met gant doueoù kozh Gresia ha Kanaan, a stourmas outo an diouganerien yuzev. E hebraeg n' eo ket gwevn evel hini Bialik, met pinvidikoc'h eo, rak alies e vez taolennet gantañ an natur, bed ar bleunioù, al livioù hag al loened. A-hend-all, un oberenn leun a levez eo oberenn Dchernikhovski : karout a ra ar vuhez ha gwalc'het eo e c'hoant gant an uhelvennad danvezelour a gened hag a veze hini ar C'hresianed. A-se ez eo disheñvel e vezad eus dasorc'hidigezh Israhel diouzh hini Bialik : evit Bialik ez eo un distro d' an hengoun kozh, evit Tchernikhovski distro d' ar vuhez wir - da vuhez an douar.

V. - Bevet o deus Bialik ha Tchernikhovski en Israhel, met n' eo ket eno o deus savet ar pep gwellañ eus o oberenn. Ar skrivagnerien a-vremañ, avat, a zo holl tud diazezet-mat er vro, hag o deus kemeret an armoù evit gounit he dieubidigezh.

E-touez ar skrivagnerien gomz-plaen e c'heller menegiñ da gentañ **G. Shoffman**. Hemañ a zo brudet evit e zanevelloù berr. Ur mestr eo dre e stumm-skrivañ leun hag arboellus, dre e zoare aketus da studiañ an eneoù ar souezhusañ. Pell en deus bevet en Europa, hag europat e gwirionez eo e arz. **Yehouda Burla**, en enep, a zo un den eus ar Reter, barrek-tre ivez war an eneoniezh, met tuet d' an danevelloù hir, leun a zegouezhioù, ha livus-dreist - reterel en ur ger.

26

E-kichen an daou verrzanevellour-se ez eus daou romantour bras, **Sh. Y. Agnon** ha **H. Hazaz. Agnon** a blij dezhañ ar mojennoù kozh hebreek, hag un doare yuzev-rik en deus da livañ ar vuhez en Israhel kerkoulz hag en Diaspora. An destenn a gar ar muiañ eo ar stourm etre ar feiz hag ar vuhez pemdeziek : c'hoant ar Yuzevien da zasorc'hiñ en deus livet e-barzh **Belev Yamim** (En Donvor) ha sevenidigezh ar

c'hoant-se war zouar Israhel e-barzh **Tmol Shilshom** (N' eus ket keit-se).

Evit **H. Hazaz**, muioc'h e vefe troet d' ober goap, ha dilezet gantañ steuenn ar mojennoù kozh, e tiazeez-e holl oberenn war ur studi aketus eus ar vuhez pemdeziek. He lodenn a ro da Garantez ar c'hig, ha ne gilo ket, war an dachenn-se, dirak taolenoù un tammig reterel. Gouzout a raio ivez, avat, livañ arvesterezh kevrinadel ar remziadoù kozh, evel e-barzh **Yosheet Beganim** (Azezet e oa-hi e-kreiz al liorzhoù).

VI. - Tri barzh bras a zo bremañ o ren ar vuhez lennegel en Israhel : **U. Z. Greenberg**, **A. Shlonski** ha **Y. Lamdan**. Un 50 vloaz bennak o deus, an tri anezho, ganet int bet en Europa ar reter hag abaoe o yaouankiz emaint o vevañ en Israhel. E ziskibled hag e « skol » en deus pep hini anezho. **Greenberg** ha **Lamdan** a ziazeez o holl oberenn war ar vroadelonriezh. **Shlonski**, en enep, a zo a-du gant ar stumm « bedel ».

Evel Bialik, Greenberg a c'houzañv ennañ e-un poanioù e vro. E vallozhioù hag e gounnar a zo mallozhioù ha kounnar e bobl. Awenet eo gant daou zarvoud : stourm ar Yuzevien a-enep d' ar Saozon, ha lazhadeg 6 milion a Yuzevien gant ar C'hermaned. Greenberg a zo c'hoazh un diouganer eus Israhel Meur - o vont eus an Ejipt betek an Eufrates - ha n' eus morse evitañ a dreuzvarc'had etre an uhelvennad hag ar vuhez. E zastumadenn diwezhañ **Rehovot Hanahar** (Straedoù e-kichen ar stêr) a zo ur meulgan d' ar c'hwec'h milion a Yuzevien marv e-pad ar brezel : birviñ a ra gant un anken hag un nerzh hag a zo kevrin arz **Greenberg**.

E varzhoneg **Massadah** an hini eo he deus degaset brud da **Y. Lamdan**. **Massadah** a zo anv ar grec'hienn m' en em vodas warni difennourien diwezhañ rouantelezh Judea goude distruj Jeruzalem, ha m' en en lazhjont kentoc'h evit kouezhañ etre daouarn ar Romaned. En oberenn Lamdan e teu kendarnded brezelourien Massadah da vezañ ur skouer hag un atiz. Uhelvennad Massadah eo a ra d'ar Yuzevien baour harluet en Europa ar reter stourm atav evit o bro ha chom feal dezhi, daoust d' ar menoziadegoù all a c'hellfe o dedennañ.

Barzhonegoù **Shlonski** a zo, e-keñver stumm, ar re gaerañ a c'hellfed kavout el lennegezh hebreek. Heuliañ a ra doare an arz europek, met alies en em sil huñvreoù en e varzhoniezh hag an den dizoue a zo anezhañ a gar mont da glask e bed an dreist-natur un diskoulm d' e c'hoantoù ha d' e enkrez.

27

VII. - Ha bremañ eo dav lavarout ur ger bennak diwar-benn remziad ar re yaouank, ar re a zo anavezet abaoe un nebeut bloavezhioù hepken. Ganet eo bet ar re-se en Israhel, bevet o deus er vro hag en em gannet o deus eviti. Steuenn o buhez a zo bet an emgann evit an dieubidigezh, ha se ivez a zo steuenn o oberenn. N' o deus ket ezhomm mont pell da glask an drama : bemdez e kavont anezhañ e toull an nor.

Unan eus ar re vrudetañ e-touez ar skrivagnerien yaouank a zo **S. Yizhar**, anavezet dreist-holl evit e zaou romant **Hahurshah Begiv'a** (Ar c'hoadig war ar grec'hienn) ha **Khirbet Hize'eh**, a zo displeget enno o-daou darvoudoù eus brezel ar frankiz. En hini kentañ ez eus istor un nozvezh emgann evit un drevadenn nevez-savet war ur grec'hienn : en un daolenn hepken e tiskouez an oberour labour ha kalonegezh ur remziad a-bezh.

Stourm ar frankiz a zo ivez testenn oberennoù **Yigael Mossinson**. Brudet eo hemañ dreist-holl evit e zrama **Ba'aravoth Hanegev** (E gouelec'h an Negev) - a-zivout un emgann etre trevadannerien yuzev hag Ejiptiz. Ar gardarnded a zo, anat eo, testenn bennañ an holl oberennoù nevez - met en un doare ken eeun, en doare tre ma vez toueziet e buhez pemdeziek ar bobl. En danevell **Mi Amar Shehoo Shahor** - (Piv a laver ez eo du) e taolenn **Mossinson** ar vuhez en ur c'hamp labourerien-douar hag er romant **Haderekh Loyerikho** (Hent Jeriko) e komz eus kudenn an evurusted personel : den-meur ar romant, ar Serjant Green, en deus da zibab etre e gredennoù hag ar vuhez. Dibab a ra mervel : ne oa ket graet evit ar bed a-vremañ.

Ar romant ar muiañ-anavezet en Israhel **Hoo Halakh Besadoth** (Bale a rae a-dreuz parkeier) a zo bet skrivet gant **Moshe Shamir**, un arzour yaouank hag a zo o klask ur c'hempouez etre an nevez-romantelezh hebreek hag ar vodernelezh europek.

Livañ ar ra buhez ar c'hibboutzim ha tonkadur un den na deo na re vat, na re galonek, hag a ro koulskoude, a youl vat, e vuhez evit e vro.

Daou varzh a zellez bezañ meneget e-touez ar re yaouank : **Nayim Gori** ha **Yitzhak Shalev**. **Gori** a zo unan eus barzhed ar brezel : prederiañ a ra kalz war gudennoù ar vuhez hag ar marv, ha kevrinadelour ez eo un tamm mat. Evit **Shalev**, diskouez a ra, en e **Simphonia Yerushalmit** (Sumfonienn e Jeruzalem) ur seurt gwellwelerezh melkonius, hag ivez ur wir garantez evit an taolenoù sioul ha buhez didrouz an tremened.

28

Ar remziad yaouank a zo o paouez kregiñ gant e labour. Den ne oar da belec'h e kaso anezhañ an hent en deus dibabet. Dre vras, avat, e chom feal ouzh plegoù bras al lennegezh hebreek abaoe derou an Azginivelezh.

Unan eus labourioù pouezusañ ar relijion yuzev, e-pad daou vil bloavezh an harlu, a zo bet saveteiñ ar Yuzevien evel kevredigezh hag evel pobl. E buhez ar bobl yuzev ez eo bet ar relijion an nerzh en deus graet dezhi chom bev. Ur bobl hag a oa e pep lec'h un niver-bihanañ, a oa gwasket a bep tu gant sevenadurioù estren galloudus-tre - gresian, roman, buzantek, arabek, germanek, gall, saoznek, h.a. - ur bobl hag a oa, ouzhpenn-se kasaet hag heskinet, penaos he dije gallet en em wareziñ gwelloc'h eget dre zifenoù he relijion ? Ar gourc'hemenoù relijiel a-enep an dimeziñ gant nann-yuzevien, an azezañ ouzh taol, zoken, gant nann-yuzevien, h.a., a oa, en ur mare ma oa ken kreñv all ar santadur relijiel, trawalc'h d' ober d' ar bobl vihan chom hi hec'h-unan e-touez ar pobloù estren, ha bevañ he buhez hec'h-unan.

Samuel Hugo BERGMAN,
e-barzh « Syntheses ».

Penaos ez adsaver sevenadur ur vro

Sevenadur Israhel en amzer a-vremañ a ziskouez troioù kontrol ha dremmoù disheñvel-kaer. Emañ pobl koshañ ar bed o krouiñ ar Stad ar yaouankañ : en abeg da se, ez eus redoù galloudek a hengoun o tont eus tregont kantved a zo, a ya d' en em gemmesk gant ar c'hoant hag an ezhomm da sevel traoù nevez a grenn, en ur glask war un dro trec'hiñ warno. Ha koulskoude, ar bobl-se, disheñvel-don he zud gant o orin hag o boazioù, a zo unanet start gant un hevelep feiz en ur vision vras da seveniñ. Deuet eus hanter kant kumuniezh disheñvel, o komz yezhoù liesseurt, o tegouezh eus pep korn eus ar pemp douar bras, en em gav pobl Israhel dirak an dever da grouiñ ur vroad nevez. Sann brasañ al labour-se a zo da vezañ kemeret gant ar skolaerion hag ar gelennerion, an dud a ouiziegezh, ar skrivagnerion hag ar arzourion. O roll a zo mirout ar pep gwellañ eus an hengounioù oc'h ober war un dro an tremen etre sevenadur an amzer dremenet hag an amzer da zont.

Ar benveg gwellañ evit trec'hiñ war an disheñvelderioù hag evit startaat an unvanidigezh, eo sistemad skolioù Israhel. Diwar amzervezh ar Mañdad he deus resevet Stad Israhel da herezh ur rouedad a gelennerzh modern, a oa ennañ liorzhoù bugale, skolioù kentañ-derez hag eil-derez, kelenndioù labour-douar, ha skolioù stummañ skolaerion, a dizhe deskiñ drezo holl, war-dro kant mil skoliad pe studier. Met o vezañ m'eo bet daougementet ar boblañs gant donedigezh niverus-bras an enbroerion, eo bet kemmet pep tra, ha ranket ez eus bet strivañ tenn e-pad pell a-raok kaout an tiez, an arrebeuri, ar gelennerion a zo ret evit an 350 000 a vugale a c'houlenn bremañ bezañ degemeret gant skolioù Israhel.

AR C'HELENNEREZH

Unan eus kefridioù kentañ Gouarnamant Israhel a voe diazezañ ar Gelennadurezh ret ha dibae : Lezenn an 12 a viz Gwengolo 1949 a ziviz ar gelennadurezh ret ha dibae evit an holl vugale etre 5 ha 13 vloaz, hep diforc'h a relijion, a ouenn, a reizh-korf, evel evit an dud yaouank etre 14 ha 17 vloaz n'o devefe ket echuet gant o diorroerezh kentañ-derez.

32

Liorzhoù-bugale

Tost de 70 % eus ar vugale etre 3 ha 6 vloaz a va o taremprediñ al liorzhoù-bugale. Ar re-mañ a zo a bouez-dreist en buhez ar vro, evit treuzfurmiñ an enbroerion nevez, dre gelenn d' o bugale yezh ar vro ha krouiñ evelse ur remziad nevez unvan. Niver ar vugale o taremprediñ al liorzhoù-bugale a zo bet pevarc'hementet e-pad ar bloavezhioù diwezhañ

	1948/49	1952/53
Bugale	16695	75000
Liorzhoù bugale	426	1900

Skolioù kentañ-derez

Ar skolioù kentañ-derez a zo enno 8 klas (eus 6 da 14 vloaz) dalc'het holl dindan lezenn ar gelennadurezh ret. Skolioù ispisial a zo evit ar vugale diaes pe warlerc'hiet. O roll-studi, heñvel ouzh hini ar skolioù heñvel en Europa pe ar Stadoù Unanet, a zo bet stummet diouzh ezhommoù ar sevenadur hebreek. Roet e vez lañs enno d' ar vuhez a gevredigezh, dre atizañ ar vugale da sevel kenetrezo « Kevredadoù », pe « Kelc'hioù », dre ar sportoù, ar c'hoarioù, al labourioù dorn a zalc'h er skolioù-se ul lec'h a bouez. Setu amañ niver ar vugale o taremprediñ ar skolioù kentañ-derez

	1948/49	1952/53
Skolidi	71.542	215.000
Skolioù	342	490

Ouzhpenn-se ez eus ar c'hoursioù-nnoz evit ar grennarded etre 14 ha 17 vloaz n'o devefe ket echuet gant o c'helennadurezh kentañ-derez, rediet maz int neuze d'o

heuliañ. En abeg da se emañ bremañ ar c'hoursioù-se war gont ar Gouarnamant. 264 a skolioù a seurt-se ez eus bremañ, gant 14.000 skoliad d' ar c'hentelioù-noz goude labourat a-hend-all e-pad an devezh.

Kelennadurezh eil-derez

33

O vezañ n' emañ ket c'hoazh ar Stad e-tailh da gemer war e gont ar Gelennadurezh eil-derez, e vez paeet houmañ gant mizoù skoliadurezh, uhel a-walc'h, war goust ar gerent. Skolioù prevez eo al lodenn vrasañ eus ar skolioù eil-derez. Koulskoude, evit sellout peseurt tu a vefe da wellaat ar gelennadurezh eil-derez ha da zigeriñ anezhi d' ar re yaouank speredet-mat n'o deus ket o c'herent peadra da baeañ evito, ez eus bet savet ur strollad a-berzh ar Gouarnamant evit studiañ ar gudenn. Yalc'hadoù-studi, gwir eo, a vez dija roet gant ar c'huzulioù-kumun pe ar gouarnamant. Ar skolioù eil-derez o deus pevar bloaz studi da gas d'ar vachelouriezh. Ouzhpenn-se ez eus skolioù labour-douar a heuilh ur roll-studi a eil-derez en ur gelenn war un dro al labour-douar hag ar micherioù stag outañ. Evit al lodenn vrasañ ez int skolioù-lojañ. Setu amañ an niveroù evit ar skolioù eil-derez :

	1948/49	1952/53
Skolidi	6.442	15.000
Skolioù	37	76

Ar skolioù labour-douar e oa e 1953, 39 anezho, gant tost da 6.000 skoliad.

Abaoe diazezidigezh ar Stad nevez eo bet ivez kemeret gant ar Gouarnamant ar skolioù micherioù hag artizanelezh, ez eus enno d' ar c'houlz-mañ, 5.000 skoliad en 48 skol.

Stummidigezh ar gelennerion

Ur gudenn diaes eo n' eus ket a-walc'h a gelennerion doareet-mat. Strivet en deus ar Gouarnamant da greskiñ niver ar skolioù-stummañ hag ar skolachoù evit kelennerion : 25 ez eus bremañ anezho. Un uhel-skol kelennerion a zo bet savet e 1952, dindan evezhierarchy ar Skol-Veur hebreek ha Ministrerezh an Diorroerezh hag ar Sevenadur.

Kelennadurezh uhel

Setu amañ doare an tri savadur pennañ a zo en Israhel evit gelennadurezh uhel:

Ar Skol-Veur hebreek : daoust m' emañ er-maez eus he ziez lec'hiet war ar Menez Skopus, dindan dalc'h Yordania, e kendalc'h koulskoude ar Skol-Veur gant he labour en tiez da c'hortoz, gant 76 kelenner ha 111 iskelenner o kenteliañ 3.000 studier.

Ar Savadur a Dekniezh (Teknion) eus Haifa, o kelenn da 5.000 studier gant 5 kevrenn disheñvel.

Savadur skiantel Weizmann e Rahovoth, a zo ennañ 65 den a ouiziegezh, da vezañ ur benveg a enklask hag a araokaat skiantel.

Menegomp c'hoazh skolioù all, evel Skol an Arzoù kaer Bezalel, Akademiezh ha skol sonerezh Jeruzalem, skol Gwiraouriezh hag Arboellerezh Tel-Aviv.

34

Diorroerezh an dud en o oad

A bouez-kaer eo hemañ en ur vro ma teu enni ur bern tud eus an diavaez, ma rankont en em gustumiñ ouzh yezh ar vro: Koursioù ispisial a gelennerezh buan (anvet Oulpanim) a zo bet diazaset gant ar Burev Yuzev hag an Histadrout (Kevredad hollek al labourerion).

LENNEGEZH

Lennegezh a-vremañ Israhel a zo diwar div vammenn : da gentañ lennegezh hebreek an adc'hinivelezh vroadel en em gave en Europa ar Reter ar c'hreizennoù pennañ anezhi ; hag eus un tu all, ar strivoù a zo bet graet en Israhel gant ar bobl yuzev abaoe penn kentañ an trevadenniñ.

Daoust maz eus c'hoazh an hanter eus ar boblañs, a zo enbroerion nevez-degouezhet ha divarrek da lenn fraez ha plaen an hebreeg, e labour an tiez-embannerezh-levrioù en un doare souezhus : war-dro 800 pe 900 levr a vez moulet bep bloaz, 600 anezho o vezañ oberennoù nevez, hag ar peurrest troidigezhioù diwar yezhoù brasañ ar bed bremañ. Kazetennoù e-leizh a vez embannet ivez en Israhel : 22 gazetenn bemdeziek, 14 anezho en hebreeg, ha tost de 75 embannadur sizhuniek pe divsizhuniek, gant 90 kelc'hkelaouenn pe dastumadenn miziek pe drimiziek.

Ar c'hoariva

Tri strollad c'hoariva a zo en Israhel : **Habimah**, **Ohel** hag ar C'hoariva a gambr, hep kontañ ar **Matate** a ro komediennoù skañv, hag al **Li-La-Lo** a ziskouez arvestoù stumm Gweladeg. Al lodenn vrasañ eus ar pezhioù c'hoariet a zo troidigezhioù eus ar mestroberennoù klasek pe modern. E-pad ar bloavezhioù diwezhañ koulskoude ez eus bet savet gant skrivagnerion ar vro un toullad pezhioù o skeudenniñ ar c'hudennoù hag an doareoù a-vremañ en Israhel, hiniennoù bet degemeret gant kalz a verzh.

Sonerezh

Anat eo dedenn ar bobl en Israhel evit ar sonerezh, da varn diouzh niver an dud a ya da glevout sonadegoù al laz-seniñ Israheliat, strollad a sonourion a renk etrevrdadel, a c'hoari dindan renerezh mistri vrudet.

Un niver bras a sonaozourien a striv da stummañ tamm-ha-tamm un doare sonerezh israheliat, dre kemer harp war sonerezh ar Reter, war sonerezh yuzev al Liderezh, ha war kanaouennoù folklorek Europa ar Reter. C'hoariet ez eus bet gant berzh-mat, en diavaez vro, hiniennoù eus o oberennoù.

35

Ar c'horoll, ha dreist-holl ar c'horoll pobl, awenet gant dañsoù ar Reter, a zo unan eus doareoù pennañ ar vuhez en Israhel. En em ziskouez a ra alies en oberadurioù ar strolladoù yaouankiz, hag er gouelioù bras a zegas kenc'hoarierion eus pevar c'horn ar vro.

An arzoù skeudenniñ

Temz-amzer ha gweledvaoù Israhel o deus merket don oberennoù an arzourion nevez. Arvestoù, tudoù an Israhel yaouank a ya da vezañ danvez an taolennoù, an tresadennoù, ar skultadurioù, an engravadurioù... Skol Bezalel evit an arz hag an artizanelezh e Jeruzalem a zo kreizenn kelennadurezh an arz, evit krouidigezh ur stumm diouzh ar vro. Diskouezadegoù eus oberennoù arzourion ar vro hag arzourion estren a vez graet ivez a goulzadoù reoliek, dreist-holl e-barzh an teir gêr pennañ (Jeruzalem, Tel-Aviv, Haifa).

Amzer a vo ezhomm moarvat a-raok ma c'hello en em zisplegañ da vat en arz hag e lennegezh Israhel stummoù padus hag arouezius. Met spi a zo koulskoude e c'hello kement a strivoù dont a benn da grouiñ war douar ar vro nevez oberennoù bras a sevenadur.

Ar gwellañ doare da chom bev eo bezañ prest da lakaat e vuhez en arvar.
MENACHEM BEGIN.

NOTENNOU DOUARONIEZH

Israhel a zo e penn gevred ar Mor Kreiz, war ar strizh douar a zo etre ar mor-se hag ar Mor Ruz.

Bihanoc'h eget Breizh ez eo ar vro : war-dro 21.000 kilometrad-karrez hepken. Hir ha strizh eo, oc'h en em astenn etre ar Mor Kreiz ha traonienn ar Jordan. Ouzhpenn 400 km. a zo eus an norzh d' ar su, met al ledanañ m' eo eo 116 km. e penn norzh an Negev.

War zaou vor e sko ar vro ; tost da 200 km. aod a zo dezhi war ar Mor Kreiz hag ur pennad aod ivez war ar Mor Ruz e bae Akaba. Diouzh tu an douar o deus harzoù ar vro en tu-hont da 1000 km. hed. En norzh e stok ar vro ouzh al Liban, er biz ouzh Siria, er reter ez eo bevennet gant Bro-Jordan hag er mervent, etre an daou vor, gant an Ejipt. Torosennek a-walc'h eo ar vro ; al lec'h uhelañ a zo dezhañ 1.208 m. a-us d' ar Mor Kreiz hag an hini izelañ 392 m. a-is, war ribl ar Mor Marv.

Temz-amzer. - Kaout seurt traoniennoù kalz izeloc'h eget live ar mor a ziskouez anat ne deo ket puilh ar glaveier e pep lec'h. E gwir e tenn amzer ar vro da hini ar broioù kreizdouarek diouzh tu ar mor ; hini ar Jordan a zo dezhañ neuzioù trovanel tra ma 'z eo un dezerzh gwirion an hanter vat eus ar vro (an Negev).

Ne gouezh ar glaveier nemet e-pad ar goañv ha kemm bras a vez eus an eil bloavezh d' egile. E penn an norzh ha war ar menezioù eo e kouezh ar muiañ glav ; e menezioù Galile e vez ur metrad dour an eil bloavezh dre egile, da lavaret eo kement hag e menezioù Breizh-Izel, etre 500 ha 600 m/m war arvor ar Mor Kreiz (etre 600 hag 800 en arvor Breizh, met ingalet kalz gwelloc'h en hor bro). Nebeutoc'h eget 200 m/m, hag int en un doare direizh meurbet, a gouezh en Negev.

Doureier. - Er vro diwezhañ-mañ n' eus ket a stêrioù da badout, anat eo, hag ez eont da hesk goude bezañ bet redet ur pennad. Stêr vrudetañ Israhel eo ar Jordan ; hi kennebeut ne dizh ket ar mor ha mont a ra d' en em goll er Mor Marv. War 252 kilometrad red ar stêr ez eus 118 en Israhel. Treuziñ a ra lenn **Houleh**, mor Galile (165 km²) ha diskenn d' ar Mor Marv, dezhañ 1.050 km² en holl.

37

Gwiskad glasvezh. - Digoadet-kaer eo bet ar vro koulz hag an holl vroioù all endro d' ar Mot Kreiz. E lodennoù bras eus ar vro ez eus, anat eo, doareoù stepenn ha dezerzh.

Mineraloù. - Holenoù a bep seurt, gant kali ha brom, a vez tennet eus ribloù ar Mor Marv. Fosfatoù, pri gwenn ha traezh mat da ober gwer a vez kavet en Negev. En Negev ivez e kaver kouevr, houarn ha manganes, met ne ouzer ket c'hoazh hag-eñ e vo gellet o mengleuziañ gant gounid.

RANNOU AR VRO

Teir rann eus ar c'huzh-heol d' ar reter :

- an arvor,
- an uhelennoù kreiz,
- kleuzenn ar Jordan hag an Araba.

An arvor. - Etre Tir ha Gaza ez eo eeun-kaer an aod nemet ar bae m' emañ porzh bras Haifa. Drek ul linennad tuniennoù traezh e kaver ur gompezenn dezhi 6 da 32 km. ledander, o vont war zigeriñ eus an norzh d' ar su.

An douar a zo mat : grozol mesket gant pri pe liñvaj ; glaveier a-walc'h a vez evit reiñ tu d' ar plant da greskiñ met ken nevez 'zo e chome an doureier da sac'hañ ha da boulladañ e geunioù bras.

Lodenn vevañ ar vro eo an arvor hag eno emañ ar c'hêrioù brasañ : Tel Aviv,

Haifa.

Ar c'hounidegezh pennañ eo hini an agrumoù : orañjez ha dreist-holl « grape-fruit ».

An uhelennoù kreiz. - Menezioù Galile a zo torgennoù maen-raz ha bazalt. Labouret e vez an traoniennoù hag ar c'hompezennoù uhel hag ed eo dreist-holl eo e c'hounezet en izelvro tra ma kaver kentoc'h gwez frouezh war an douaroù uhel. O kodañ ar menezioù emeur da vat.

Nazared ha Safed eo ar c'hêrioù pennañ.

Izelenn Jezreel (Ezdrelon, Emek) a zo un draonienn a gas a-dreuz eus an arvor da stankenn ar Jordan, o rannañ menezioù Galile eus re ar Samari hag ar Jude. Douaroù ponner a gaver en izelenn-se ha goude bezañ bet dizouret ez int deuet da vezañ e-touez re wellañ ar vro.

Darn hepken eus menezioù Samari ha Jude a zo en Israhel. Nebeut a zour a gaver er vro-se ha krignerezh ar glaveier bil a ra kalz reuz. Klask a reer dont a-benn da lakaat koad da greskiñ evit harz ouzh ar walenn-se.

Jeruzalem eo ar gêr vras.

An Negev. - Tost da vat an hanter eus ar vro a zo anezhañ un dezerzh gwirion. E penn an norzh an Negev, douar mat ennañ e teuer koulskoude a-benn da c'hounid ed. Sklaer eo ne deo ket ken poblet an Negev ha rannoù all Israhel.

38

Menegomp kêrioù Beersheba hag Eilath, houmañ war bleg-mor Akaba.

Traonienn ar Jordan hag an Araba. - Bro-Houleh, en norzh, a zo douret mat daoust ma 'z eus geunioù ez eur krog bremañ d' o disec'hañ. Etre lenn Houleh ha mor Galile e tiskenn ar Jordan eus 288 m. en ur ober peder lev. Peadra eta da dennañ nerzh eus kas an dour.

Dre ma tostaer ouzh ar Mor Marv ez a ar vro war baouraat rak gwastet eo an douar gant an holen. En tu-hont d' ar Mor Marv e kendalc'h an draonienn gant ar « Wadi Araba » e-keñver dezerzh an Negev.

Krouet ha savet e vez ur yezh gant ur bobl ; hag, evel ma vez intret ar c'hrouadur gant spered ar c'hrouer pe, hervez an dro-lavar hasidek, evel ma vev er c'hrouadur spered ar c'hrouer, ar pezh a ra esparded ar spered broadel, a zo bet krouet gantañ ar yezh, a vez dre-ret adkavet er yezh-se. Setu perak ez eo anat deomp n' eus tra gwelloc'h eget implij ar yezh vroadel evit tostaat ouzh ar spered broadel.

AHAD-HAAM.

« Er c'hroazhent »

DAMSELL WAR ISTOR ISRAHEL

gant Ruth WOLF

1882-1917 : Maread kentañ an trevadennerezh sionat. Diazezoù kentañ ur gevredigezh vroadel harpet war trevadennoù-labour-douar labourer ha difennet gant an enbroidi o-unan. Lusk roet d' ar sevenadur hebreek.

1881 hag ar bloavezhioù war-lerc'h : An hirnezh bet a-viskoazh e kalonoù ar Yuzevien da zistreiñ da Vro-Balestina oc'h en em ziskouez en amzer-mañ dre ar c'hevredigezhioù a glask broudañ an dud da sevel trevadennoù-labour douar ha da adsevel Kreizenn sevenadurel ar Yuzevieg e Palestina. An hirnezh-se a zo pennkaoz d' an enbroadeg kentañ a Yuzevien o tont eus Europa ar Reter (1882-1903) an enbroerien nevez daoust da zifenoù ar Gouarnamant a sav un toullad kêriadennoù. An diazezennoù-se a zo harpet gant ar Baron Rotschild ha Kevredad an Trevadennerezh Yuzeviat (I.C.A.) savet gantañ ivez. An hebreeg oc'h advevañ evel yezh vev.

Etretant an Emsav Sionat a gresk e dachenn hag e vennadoù.

1897 : Kentañ kendalc'h Sionat bodet war c'halv Teodor Herzl ; savet eo ar Burev-Meur Sionat evit ar Bed-Holl ha degemeret program Basel (Bâle) : « Pal an Emsav Sionat eo krouiñ e Palestina evit ar bobl yuzev ur Vro gwarezet gant ar Reizh Etrevroadel ».

1903 : Ar Burev-Meur a ziviz kregiñ gant labourioù efedus. (Kef Broadel ar Yuzevien savet e 1901, evit pourchas daouaroù d' an drevadennerien, a ra e brenadennoù kentañ e 1908. Ar Burev Palestinat a reno labourioù an drevadennerien.)

1903-1914 : Enbroadeg lenneien a zeu da vezañ labourerien hag a ziazez an emsav a vicherouriezh hag a emzifenn ; krouiñ a reont ar gentañ Kêriadenn Voutin.

1910 : Tel Aviv a zo savet war tuchenoù traezh. Ar Burev-Meur a gemer en e garg kenreizhadur ar skolioù gant an Hebreeg evel yezh ar studioù.

1914 : Kumuniezh ar Yuzevien a gont war-dro 85.000 a dud war ur boblañs a zo enni 700.000.

40

1914-1917 : Ar Brezel Bras a zegas naonegezh. Kalz a Yuzevien forbannet, ar Gumuniezh a zo koazhet, eus an drederenn.

1917-1920 : 1917. Dre Ziskleriadur Balfour e c'hrata Gouarnamant Breizh-Veur sevel ur Vro Yuzev e Palestina.

1917-1920 Gouarnamant-arme 1917. Allenby oc'h antren e Jeruzalem. Batailhonoù yuzev savet en Palestina hag e lec'h all a servij en e arme.

1919 : Enbroadeg an difraosterien a adkrog.

1920 : Kuzul-Meur an Armeoù-Unanet a zegemer Diskleriadur Balfour hag a fizi ar Mañdad e Breizh-Veur. Melestrerezh sivil.

1920 : Ar Gumuniezh yuzevat adaozet gant ur C'huzul Broadel er penn. Krouidigezh Kevredad-Meur al Labour. Broadelouriezh nevez-c'hanet an Arabed a zo enep ar Mañdad war zigarez e vefe enep Emglev Weizmann-Faisal sinet d' an 3 Genver 1919. Taolioù-dispac'h e Jeruzalem. Ar penn-dispac'her Amin Al Husseini digastizet hag anvet Mufti Jeruzalem.

1921 : Taolioù-dispac'h e Jaffa. Goude m' eo argaset Faisal eus Siria, e sav e

vreur Abdullah kreizennoù-arme e Trans-jordania da adgonit Siria. Reiñ a reer dezhañ Emirelezh Transjordania hag a zo a-ziavaez eus ar rannvro merket e Diskleriadur Balfour. Kregiñ a reer da c'honit geunioù Traonienn Jezreel, kentañ rannvro lec'h ma 'z eus bet un diazevadenn ledan a Yuzevien.

1922 : Levr-Gwenn Churchill a strisha ster diskleriadur Balfour. Lezenn an Enbroerezh a ziviz ma vezo an enbroerezh diouzh galloud arboellerezhel ar vro, e-giz ma vo merket gant ar Gouarnamant.

1923 : Ar Mañdad krouet hervez Diskleriadur Balfour a zo gwirieketaet gant Kevredigezh ar Broadoù a ro ivez ur reizhadur ispisial d' an « Burev Yuzeviat evit Palestina ».

1924-1925 : Un taolad-enbroerien eus renkadoù-etre ar gevredigezh o tegouezhout eus ar Pologn, kement-se a ro lañs d' ar micherioù bihan ha da c'honidigezh an agrum.

1925 : Krouidigezh ar Skol-Veur Hebrek.

1929 : Ledanaet eo tachenn-labour an Ajañs Yuzev da zegemerout Nann-Sioniz. Taolioù-dispac'h a-berzh Arabed. Distrujidigezh kumuniezh yuzev Hebron.

41

1932 : Savidigezh Emek Hefer (e plaenenn ar arvor, er rannvro reuziet gant ar malaria).

1933-1938 : War greskiñ ez a an enbroerezh dreist-holl gant tud o vont eus Bro-Alamagn ha Bro-Bologn ; krouidigezh trevadennoù evit ar renkadoù-etre, uzinoù hag ijinerezhoù.

1936-1939 : Ar C'huzul-Meur Arabiat, nevez savet ha renet gant ar Mufti a laka trouz da sevel enep ar Yuzevien da gentañ, diwezhatoc'h enep ar Gouarnamant, kement ha ken bihan ma laka spont dre-holl e-touez ar Yuzevien. An Emzifenn Yuzev a gresk evel-just. Derc'hel a ra al labour trevadenniñ da vont war-raok.

1937 : Ar Gomision Roueel (Peal) a ro ali da lodenniñ ar Vro. Tec'hel a ra ar Mufti.

1938 : Ar Gomision karget da beurenkañ an traoù munut a zispenn Raktres ar Rannidigezh ; ar Rannañ distaoret gant Gouarnamant Breizh-Veur.

1939 : Koñferañs an Daol-Grenn e Londrez gant an Ajañs Yuzev, Arabed Palestina hag ar Stadoù arab. Ar C'hinnigoù n'hellont ket bezañ degemeret gant ar Yuzevien ha nac'het ez int ivez gant an Arabed.

17-5-39, Levr-Gwenn Mac Donald a zegemenn c'hoant Gouarnamant Breizh-Veur da echuiñ ar Mañdad ha da grouiñ ur Stad Palestinat Digabestr dindan 10 vloaz. Er c'heit-se e promet ar Gouarnamant lezel an dorn da vont tamm-ha-tamm gant an Arabed hag ar Yuzevien diouzh niver ar boblañs. War-hed pemp bloavezh e rankje en em astenn an enbroadeg hag an niver-muiañ eus an enbroerien e dibenn ar pempvet bloavezh ne zleje ket tremen 75.000 a dud nemet e plijfe d' an Arabed traoù all. Komision peurzalc'hus Mañdadoù ar S.D.N. a gondaon al Levr Gwenn evel un dra kontrol da lezenn ar Mañdad. Neuze e krog an enbroerezh enep-lezenn.

1940 : Reoliadur treusperc'hennerezh an douaroù a strisha pe a nac'h an droed da werzhañ douaroù d'ar Yuzevien e 95 % eus ar vro.

1939-1945 : Brezel. 25000 Yuzev eus Palestina oc'h emouestlañ en armeou Breizh-Veur.

1944. : Krouidigezh ar Vrigadenn Yuzev. An ijinerezh etre daouarn ar Yuzevien a zo adaozet en doare da labourat evit ar brezel. An Arabed a chom neptu pe a dro a-enep. (Ar Mufti emellet e dispac'h an Irak a gav repu e Berlin.)

1942 : An Emsav Sionat a c'houlenn ma vo savet ur Stad Yuzevat e Palestina.

42

1945 : Kevredad ar Broioù Arab a zigor boikoterezh enep madoù ar Yuzevien. Ur wech

anavezet gwall-reuz Yuzevien Europa e c'houleñ ar Prezidant Truman repu evit 100000 a dud e Palestina. Gouarnamant Breizh-Veur a zegemenn ez eo krouet ar Gomision Angl-Amerikan, ha da c'hortoz e ro aotre da 1500 a Yuzevien da enbroañ bep miz. War dreñkaat ez a an darempredoù etre ar Burev Yuzeviat hag ar Gouarnamant.

1946 : An Gomision Angl-Amerikan a ro ali da zegemerout 100000 a repuidi. Breizh-Veur avat a nac'h seveniñ an erbedadur-se. An Enbroerezh enep-lezenn a gendalc'h ; darn eus an enbroerien a zo dastumet en Enezenn Kipr. An eneberezh a ya war washaat, renerien an Ajañs Yuzev a zo toull-bac'het. Raktres Morrison ha Grady a-du gant ur Stad Kevredel gant ur rannvro vihan evit ar Yuzevien a zo distaolet gant an div gostezenn. Trevadennerien evit ar wech kentañ er Negev.

1947 : Al lestr « Exodus » a zo rediet gant ar Gouarnamant da gas an enbroerien en-dro d' an Alamagn. Breizh-Veur a gas kudenn Palestina dirak an U.N.O. Komite ispisial ar Broadoù Unanet evit Palestina (UNSCOP) a erbed lodenniñ ar vro. 29 Du 1947, ar rannañ degemeret gant Bodadeg-Veur ar Broadoù Unanet. 30 Du 1947, e krog an taolioù-strap gant an Arabed.

1948 : Nebeutoc'h-nebeutañ a surentez evit an dud er vro dre m' en em sil ar volonterien arab ha ma koazh beli ar Gouarnamant.

War ali o renerien, e kuita an Arabed ar vro evit amzer ar brezel. Breizh-Veur, hag a oa fiziet enni ar Mañdad, a nac'h seveniñ ar rannadur. Bro-Balestina a zo argaset eus Strollad-Sterling.

1añ Meurzh, Ar C'huzul Broadel Yuzev hag ar Melestrerezh Broadel Yuzevat a zo savet.

14 Mae, diskleriadur krouidigezh Stad Israhel. Ar Broioù arab goude en em glevout a zigor ar brezel enep Israhel.

Pemp bloavezh eus istor Israhel e-keñver arboellerezh

Diaes-tre e vije a dra sur, ober un adtreman ha dougen ur varnedigezh reizh war istor ar stourm fromus kaset en-dro gant Bro-Israhel war dachenn an Arboellerezh, e-doug ar pemp bloavezh a heulias he dieubidigezh, hep merkañ da gentañ-eeun e oa bras-euzhus al labour a sammas ar Vro a youl-gaer war he chouk. Ar c'hoant da gas da benn, en ur par ken berr ha ma 'z eo pemp bloavezh, ul labour hag a vije bet ezhomm degadoù a vloavezhioù evit gwir, da vezañ kaset da vat, a c'houlenne digant Israhel poanial ha strivañ spontus ; hag ar pezh a zo bet sevenet buan-ha-buan war dachenn an Arboellerezh, a zo bet sevenet diwar goust poanioù ha sakrifisoù e-leizh.

Gant-se, un daolenn diskoñfortus-tre eus al labour-se koulz hag un daolenn re vrav, na ziskouezjent ket en un doare leal stad wirion an traoù.

Un daolenn voemus ez eo e gwirionez ha warni traoù a-du ha traoù a-enep : araokadennoù gorrekaet gant c'hwitadennoù ; gwellaennoù kalonekaus ha kolloù diskalonekaus. Ar diaesterioù kavet war an hent, sioù ar raktresoù hag ar stummoù divat d' o seveniñ, a zo traoù barrek d' ober d' an dud fallgaloniñ, pa soñjer er pal a zo da dizhout hag a venner tizhout a-grenn ; met ma roer d' ar gwellaennoù gonezet war-bouez strivoù bras o gwir dalvoudegezh, ez eus peadra da galonekaat o welout an hent a zo bet graet abaoe ma 'z eur krog gant al labour.

A-benn pouezañ ervat ar gwellaennoù degaset evel-se en Arboellerezh, e renker en em harpañ war ar fedoù evel m' emaint, fedoù-natur pe fedoù-arboellerezh, fedoù o sellout ouzh kement kevrenn a zo er vuhez arboellerezhel.

ENBROEREZH HA POBLAÑS

En ur ober pemp bloaz, ez eus bet tost da 700.000 a dud muioc'h o tonet d' en em ziazezañ e Palestina eget na oa bet e korf 70 vloaz. Dre-se ez eo kresket ar boblañs eus 120 %, ar pezh en deus kaset an niver eus holl boblañs ar vro da 1.626.000 (1).

{1) 15/5/1948 - 31/12/1952 = 708.391 a enbroerien.
15/5/1948 - 31/12/1948 = 101.825 a enbroerien.

46

Gorrek hag a-sil-kaer e teu an enbroerien da gemerout o lec'h e buhez arboellerezhel ar Vro. Talvezout a ra ar boan eveshaat ouzh ar stumm m' eo ingalet ar boblañs nevez-se, hervez o c'hargioù hag o micherioù : tost da 100.000 a zo bet kemeret gant al Labour-Douar ; hag evel-se ez eo aet niver an dud implijet war-dro ar C'honidegezh-Douar war greskiñ, neket hepken keñver-ouzh-keñver gant ar peurrest eus ar boblañs, met kalz buanoc'h zoken. Kavet ez eus bet tu a-benn bremañ da dreiñ buanoc'h e gonideien-douar hag e micherourien an enbroerien nevez-se ha na oant ket kustum nemeur d' ober labour-korf. Daoust da se, koulskoude, ez eus c'hoazh tost da 200.000 eus an enbroerien-se er c'hampoù-tremen, hag evit bremañ n' o deus d' en em lojam netra ken nemet lochennoù-koad, pe lochennoù-follennoù-houarn pe deltennoù. Ul lodenn vat anezho n' o deus ket c'hoazh kemeret o lec'h e buhez arboellerezhel ar vro ; hag implijet e vezont d' ober labourioù ha na roont ket tu dezho da genlabourat gant o holl nerzh da zigabestrañ ar Vro e-keñver arboellerezh.

Strivoù bras a reer bremañ evit ober d' ar Geodediz nevez-se a Israhel en em doueziañ a-grenn gant ar re-all war dachenn ar vuhez kevredigezhel hag arboellerezhel.

GONIDEGEZH-DOUAR

Ur gudenn eus ar pouezusañ ez eo eostadoù an douar, en ur vro hag a zle dispign etre 60 ha 70 milion a zolaroù bep bloaz evit degas boued eus an estrañjour ha na zeu ket a-benn da grouiñ nemet an hanter eus ar pezh he deus ezhomm evel bevañs.

Kalonekaus ha konfortus-tre ez eo ar gwellaennoù degaset el Labour-Douar war an tu-se, evel m' hen diskouez ar sifroù amañ war-lerc'h :

	1948/49	1951/52
	dounam	dounam
Gorread an Douar Labouret	1.650.000	3.470.000
Gorread an douaroù दौरاet	290.000	510.000
Niver ar c'hêriadenoù labourerien-douar	300	640

	1949	1951
	Kwe	Kwe
Nerzh-tredan uzet en दौरاerezh	65.468.000	112.938.000
	Gwengolo 48	Meurzh 52
Traktourien	681	3.090

Brasjediñ a reer ez eo kresk Eostadoù an douar e-keñver pouez ha ment, diouzh kresk ar boblañs hec'h-unan.

Koulskoude, unan eus pennañ kevrennoù ar C'honidegezh-Douar : - ar frouezh agrum - a zo aet war ziskar ; kouezhet ez eo gorread an douaroù implijet evit ar gwez-frouezh-se, eus 50 %. Strivoù bras a zo bet graet avat e-doug an daou vloaz tremenet, evit adlakaat a-ratre ar parkadoù gwez-orañjez hag evit adplantañ re-all ; ha spi a zo e va gallet, en ur ober un nebeut bloavezhioù, adlakaat e stad vat, an tachennoù frouezh-agrum aet da fall.

Evit bremañ c'hoazh ez eo diazezet evit ul lodenn vat an eostadoù liesseurt war an dispignoù en arc'hant estren a renker ober evit enbroañ danvezioù-tan, boued-chatal, temzioù ha mekanikoù. Diwall a reer avat da re-greskiñ niver ar mekanikoù, klask a reer reiñ lañs d' an oberiañ temzioù- strilhouriezh er vro ha pourchas boued-loened war al lec'h : un dra vat ez eo kement-se holl ha war an tu-se e vezo ret gwaskañ da bellaat pep sujedigezh ha kempouezañ an eskemmoù-kenwerzh.

Bepred e renk ar vro enbroañ c'hoazh 50 % pe war-dro eus ar pezh he deus ezhomm 'vel bevañs hag er c'heñver-se ez eus plas frank da eostadoù al Labour-Douar da greskiñ.

*

**

IJINEREZH

N' eas ket an Ijinerezh ken buan war-raok hag ar C'honidegezh-Douar. Ar merk nemetañ o tiskouez dre vras ar c'hresk eus an ijinerezh ez eo an implij eus an tredan evit labourioù an ijinerezh : eus 97.000.000 Kwe, e 1949, ez eo aet an implij-se da 165.000.000 Kwe, e 1952. (Jedet ez eo bet ar sifr-mañ hervez ar statistikoù embannet evit an 8 miz kentañ eus ar bloaz 1952). Kement-se a ziskouez ur c'hresk eus ouzhpenn 60 % e korf pevar bloavezh, ar pezh a zo un tamm brav drezañ e-unan, met a zo pell diouzh bezañ trawalc'h hervez ar c'hresk eus ar boblañs.

Gwellaennoù a bouez bras a zo bet graet, evit pezh a sell liesseurtaat an traezoù oberiet, krouiñ kevrennoù-Ijinerezh nevez ha sevel labouradegoù liesdoare. Amañ ez eo mat menegiñ an araokadennoù arouezius graet en ijinerezh strilhouriezhel ha dreist-holl en oberiañ superfosfatoù, trenkenn sulfurek : savet ez eus bet ivez un uzin-amoniak ha roet lañs d' al labouradegoù a ra tuellinier, rodoù-kaoutchouk, pe a bled gant ar gweraerezh hag all... Ar c'honidegezh eus ar mengleuzioù en Negev, dreist-holl ar mengleuzioù fosfat ha kouevr, koulz hag an addigorigezh eus an uzinoù-potas war ribl ar Mor Marv, a zo araokadennoù hag a zo krog da zougen frouezh.

Un dilañs bras-tre koulskoude a zo da vezañ adtapet, peurgetket an dilañs war dachenn an ijinerezhioù a ra traoù da gas d' an estrañjour ; ha neuze ez eus un dra ivez hag a ra gaou ouzh an ijinerezh : dister-a-walc'h ez eo ar c'hresk a dalvoudegezh roet gant ijinerezh ar vro-mañ d' an danvezioù diaoz prenet en estrañjour...

Rekis-groñs ez eo reiñ ton da ijinerezhioù pouezusoc'h, dre dennañ ampled eus pinvidigezhioù ha galloudezhioù naturel ar vro ; ha gallout a reer dija merzout ar gwellaennoù degaset war an tu-se gant ar strivadenoù graet nevez 'zo.

AR SAVEREZH-TIEZ

O vezañ m' emamp en ur vro lec'h ma tired enbroerien a vil-vern d' en em ziazezañ, emañ brasted al labourioù war dachenn ar saverezh-tiez kalz en tu-hont d' ar muzul a zlefent kaout e buhez arboellerezhel ar vro a-bezh... Met ret-mat e oa pourchas lojeiz ha tiez d' an drevadennerien nevez, sevel labouradegoù ha tiez-feurm... C'hoant a oa da skignañ dre ar vro a-bezh an danvez-poblañ, da bourchas danvez-gonideien d' al Labour-Douar ha da lakaat ar mengleuzioù dindan c'honit ; met a-benn kas ar mennad-se da benn e oa ret da gentañ kaout tiez ha lojeiz er c'hreizennoù-poblañ hag er c'hreizennoù-labour ; rak diaes-tre ez eo evel just, reiñ ur garg efedus er vuhez arboellerezhel, da dud hag a zo o vevañ e lojeiz dibad pe e kampoù-tremen... Arabat eta bezañ souezhet ma 'z eo aet an hanter eus ar plasadurioù-arc'hant e-pad ar maread-se da sevel tiez.

An daolenn-mañ a ziskouezo al labour graet war dachenn ar saverezh-tiez, e-kerzh ar pemp bloavezh tremenet (e metradoù karrez) :

	1/12/1951	1/9/1952
Tiez-añez	1.946.900	1.226.966
Kreizennoù-lojañ	4.781	1.750
Savadurioù-kenwerzh	44.960	39.102
Savadurioù-ijinerezh	121.700	124.520
Savadurioù broat	19.221	21.704
war an dro	2.136.900	1.413.412

49

Tost da 450.000 eus an enbroerien a zo lojet e tiez padus. Ar savidigezh eus al labouradegoù a ziskouez ar pleg a zo da reiñ ar renk-kentañ, d' an tiez a servijo da greskiñ nerzh-oberiañ ar vro.

Ur bern micherourien, ur bern arc'hant hag ur bern dafaroù a zo bet implijet er saverezh-tiez, ha dre-se n' eus ket bet tu d' o implijañ evit kevrennoù pouezusañ an oberiañ. Ur reizhadur votet nevez 'zo a-du gant an ijinerezhioù-diazez en deus kresket labourioù ar saverezh-tiez dreist-holl e rannvroioù al Labour-Douar.

ENGOUESTLADURIOU ARC'HANT

An emdoueziañ eus an enbroerien nevez gant tud ar vro, koulz hag ar c'hresk eus an oberiañ hag eus al leveoù broadel, a zo evit ul lodenn vat, diouzh al lañs a vez roet da c'halloud-krouiñ ar vro; dre an engouestladurioù-arc'hant a zalc'h ar gouarnamant d'ober. Bras-kenañ ez eo bet an engouestladurioù-arc'hant nevez abaoe 1949 (rak e 1948 evit gwir e oa kreizennet an holl strivoù en-dro d' al labourioù-brezel evit an Dieubidigezh).

Ar sifroù amañ war-lerc'h, eus an engouestladurioù adal ar bloaz 1949 betek ar bloaz 1951 a ziskouez dre vras ha dre ar munud egit petra eo bet engouestlet an archant.

Engouestladurioù-arc'hant (E milionoù a lurioù israhelat, hervez an dalvoudegezh anezho bremañ)

	1949	1950	1951
Labour-Douar	17	34	26,2
Ij inerezh	11,5	17,1	28,5
Saverezh-tiez	32,6	56,4	87,6

Labourioù broat	4,5	14	16,4
Treuzdougadurezh ha daremprederezh	6,7	14,2	
A bep seurt	2,7	4,8	5
war an dro	75,0	140,5	175

Evito da vezañ bras-meurbet e-keñver holl dachenn an arboellerezh israhelat ez eo bihan koulskoude an engouestladurioù-arc'hant-se, ma varner an traoù diouzh kresk ar boblañs. Ha ma seller ouzh an implij anezho e renker anzav penaos, ma vije bet implijet ul lodenn vrasoc'h anezho war-dro an Ijinerezh hag al Labour-Douar, e vije bet kaset pelloc'h ar Vro war hent an Dieubidigezh Arboellerezhel.

50

Statistikoù an engouestladurioù evit ar bloaz 1952 ne dint ket prest c'hoazh ; met lec'h a zo da grediñ - hervez testenioù 'zo - e savo ar gont anezho tost da vat evel e 1951. Dre-se an niver klok eus an engouestladurioù etre 1949 ha 1952 a savje da 565 milionoù a lurioù pe war-dro.

Ur lodenn vat eus an engouestladurioù war-dro ar C'honidegezh-douar hag an Ijinerezh n' o deus ket gallet c'hoazh teurel frouezh, rak an embregerezhioù a Labourerezh-Douar hag a Ijinerezh na vezont e stad da zougen frouezh nemet tri bloaz bennak goude ma vezont bet savet.

ROLLOU AN ARC'HANTEREZH BROADEL

Al labour bras spontus evit hevelekaat an enbroerien ha reiñ lusk, er stumm ma'z eus bet graet, d' ar saverezh-tiez, gant ar vividigezh eus trevadannerion ha ne dint ket c'hoazh peurevret e buhez arboellerezhel ar vro, o deus bet goulennet ma vije deuet ar Gouarnamant da reiñ sikour gant e arc'hant.

Ar sifroù amañ war-lerc'h eus Rolloù an Arc'hanterezh Broadel e-pad ar pemp bloavezh kentañ goude an Dieubidigezh, a ziskouez brasted an dispignoù-se.

Bloavezh	- Arc'hantroll Ordinal	Arc'hantroll an Araokaat
1948/49	17.000.000	
1949/50	42.400.000	49.000.000
1950/51	63.600.000	65.000.000
1951/52	113.600.000	85.000.000
1952/53	168.500.000	115.000.000
	405.100.000	314.000.000

Tennañ a ra ar Gouarnamant al leveoù a zo ezhomm evit an arc'hantrolloù-se eus an truaioù eeun hag eus an taosoù war an traoù - gant ul lodenn brasoc'h-brasañ evit an truaioù eeun - eus an amprestadegoù broadel, eus an embannidigezh eus Bilhedennoù an Teñzor ha Bilhedennoù diwar ar Glad, eus an arc'hant roet en eskemm eus ar Sikourioù « Grant-in-Aid », eus amprestadegoù an Dieubidigezh hag eus amprestadegoù all...

51

Ar pezh a zo da verkañ en arc'hantrolloù-se ez eo al lodenn bras-direizh eus Dispignoù ar Gouarnamant evit gwellaat stad arboellerezhel ar vro. Adalek ar penn kentañ e veze pourchaset arc'hant an Dispignoù ordinal gant arc'hant an truaioù ; hag evit an Dispignoù all da wellaat buhez ar vro e veze pourchaset an arc'hant a oa ezhomm, darn gant an embannidigezh eus Bilhedennoù an Teñzor hag eus Bilhedennoù diwar ar Glad, hag ivez gant amprestadegoù. Met er stumm-se ez eas dle ar gouarnamant war greskiñ, ken en em gavas re a arc'hant-paper e-touez an dud, kalz muioc'h eget na oa traoù da brenañ. Efed fall a reas ar re-voneizadur-se war briz an traoù oberiet, war ar paeamantoù ha war an amprestadegoù-arc'hant digant ar broioù estren.

Met an arc'hantañ dre c'hwezhadur an arc'hant-paper a baouezas a-grenn e dibenn miz Here 1951 ; hag ur rummad reizhadurioù war draoù an Arboellerezh hag an Arc'hanterezh a voe lakaet da dalvezout e miz C'hwevrer 1952, da stourm ouzh ar c'hwezhadur-se ha aesaat ar c'hoazhadur eus an arc'hant-paper. Ar politikerezh

arboellerezhel nevez, a zeuas a-benn da herzel ouzh ar c'hwezhadur-se ha da adlakaat Arboellerezh Bro-Israhel e penn un hent suroc'h ha dirisklusoc'h.

KLOZADUR

Dispar ez eo hep mar ebet, ar pezh a zo bet sevenet gant Bro-Israhel war dachenn an Arboellerezh ha kaer-souezhus ar gwellaennoù hag an araokadennoù graet er c'heñver-se ; met al labour d' ober evit divazhyevañ Arboellerezh ar Vro n'eo ket echu na tost, hag evit hen kas da benn e vo dav da Bobl Israhel ober strivadoù ha sakrifisoù eus ar brasañ, ha kaout youl start ha dalc'husted.

**Hor pobl a oa o vevañ e Jeruzalem, pa ne oa London nemet un tachad raoskl.
Weizmann da v-Balfour, e 1906.**

HISTADROUT

"Kevredigezh labourerien Israhel"

hervez NATHAN BAR-YAACOV

« Ur bobl hag a zo bet troc'het a-grenn diouzh an natur, a zo bet dalc'het e-pad mil bloavezh en diabarzh eus mogerioù ar getto, a zo bet en em voazet diouzh kement stumm buhez a zo, nemet ar stumm naturel - da lavarout eo al labour emskiantek pourvezer a vuhez - ur seurt bobl ne zeuio morse da vezañ bev, da vezañ hi hec'h-unan e gwirionez, da vezañ oberiant hag efedus, nemet e stennfe kement nerzh a zo en he youl evit tizhout ar pal. Al labour n' eo ket hepken ar pezh a lak un den e darempred gant an douar, a ziazez e wir war an douar : al labour a zo ivez ar menoz-nerzh a zo ezhomm dioutañ evit sevel ur sevenadur broadel. » Kement-se a oa skrivet 40 vloaz a zo gant A. D. Gordon, unan eus krouerien emsav al labourerien sionat : kement-se a zo c'hoazh, e berr gomzoù, ar pezh a ra, hiziv an deiz, uhelvennad an emsav.

Evit kompren, avat, petra eo Kevredigezh Labourerien Israhel ez eo ret gouzout penaos e oa an traoù gant ar Yuzevien e Palestina pa 'z eo bet savet ar Gevredigezh e 1920. D' ar mare-se e oa war-dro 60.000 Yuzev o chom er vro, e-touez un hanter-vilion Arabed. Lod eus ar Yuzevien-se a oa deut eno dindan levezon meizourien evel A. D. Gordon, hag ivez dre ma oant heskinet en Diaspora. Diazezet o doa ar mereurioù boutin kentañ ha krouet ur Gevredigezh al Labourerien diwar ar maez. O ger-stur a oa bevañ diwar al labour-dorn hag en em skoazellañ. Int a gomprenas diouzhtu e vefe ezhomm eus ur Gevredigezh al Labourerien, met daleet e voe ar menoz da zont da wir gant ar Brezel Bed Kentañ ; nebeut goude avat, e 1920, e oa krouet Kevredigezh Yuzev al Labour, pe Histadrout, gant 4.500 ezel.

E-barzh an diskleriadur kentañ embannet gant ar gevredigezh e oa skrivet kement-mañ : « An Histadrout a gav ez eo e zlead krouiñ ur stumm nevez a labourerien yuzev ha teurel evezh, a-feur ma kresko an drevadennezh e Palestina, m'o devo al labourerien al lec'h a zo dleet dezho. An Histadrout a stroll an holl dud hag a vev diwar o labour, ha n' eo ket diwar labour ar re all... E bal a zo sevel ur gumuniezh al labourerien yuzev ».

53

Pal bras an Histadrout ne oa ket eta gwareziñ al labourerien, met krouiñ labourerien. Ouzhpenn-se, en tu all da labour kustum ar strolladoù-labourerien, e stourme ivez ar Gevredigezh da drevadenniñ ar vro ha da grouiñ ur sevenadur yuzev nevez. Ar stummoù disheñvel a zo hiziv da labour an Histadrout a darzh ez-eeun eus mennad e grouerien.

Frammadur.

Da izili e resev an Histadrout an holl re a vev diwar o labour o-un. Eus 4.433 e 1920 ez eo savet niver an izili da 16.000 e 1926, 26.500 e 1933, 89.000 e 1940, 114.000 e 1945. 181.000 e 1950 ha 250.000 e 1951 - atav war-dro 73 % eus niver an holl labourerien en Israhel (1). Priz ar skodenn a zo etre 4 ha 5 % eus ar gounid, hervez ar pezh a c'hounezer. Renet e vez labour ar Gevredigezh gant lezenn ar muiañ-mouezhioù : dre vouezhiadeg an izili e vez anvet ar c'huzulioù-labouradegoù, ar c'huzulioù-burevioù, h.a., hag ivez ar c'huzulioù-rannvro. Ar C'huzul Meur a zo anvet dre vouezhiañ gant ar Vodadeg Veur.

Izili an Histadrout o deus a bep seurt menozioù politikel. E miz Mae 1949 e oa aet 57 % eus ar c'hadorioù er C'huzul Meur gant ar MAPAI (Strollad Labourerien Israhel). Bremañ, war an 58 ezel a zo er C'huzul Meur ez eus 34 o tont eus ar MAPAI, 20, o tont eus ar MAPAM, strollad en tu kleiz d' ar MAPAI, 2 o tont eus Strollad al Labourerien sionat, strollad en tu dehou d' ar MAPAI. Strollad ar Relijion hag hini ar Gomunisted o deus pep a ezel.

Ar pezh a zo bet gounezet.

E-pad bloavezhioù kentañ ar stourm ne oa, ret eo derc'hel soñj, gouarnamant ebet da reiñ sikour d' al labourerien en o stourm. Ha kement tra a zo bet gounezet a zo bet gounezet dre ober emglevioù a-stroll gant an implijerien. Evel-se ez eus bet tizhet kaout an devezh eizh eurvezh, ar goprañ labourerien dre diez-eskemm al labour ha n' eo ket war-eeun, ar skoazell-tiegezh hag al leve-kozhni, an dilabour gant pae evit kleñved, h.a.

Abae savidigezh Eretz Israhel avat e pled an Histadrout dreist-holl gant kudenn ar goprou hag ar splotusted - pezh a zo a bouez-tre en ur vro yaouank a rank degemer kemend-all a enbroidi. Savet en deus an Histadrout raktresoù-splotusted, anvet kuzulioù labourerien-implijerien da greskiñ an oberiusted, h.a. Klasket en deus ivez barrekaat al labourerien war o micher hag evit-se en deus kaset ur c'halz anezho da studiañ an doareoù-labourat er Stadoù-Unanet, en Helvetia, e Breizh-Veur, e Belgia, en Holland, e Sveden hag en Italia.

Kenskoazell.

E-touez an oberoù kenskoazell e tleer menegiñ da gentañ-holl Kef al Labourerien glañv. Savet eo bet ar c'hef-se ken abred ha 1913, rak krouiñ ur c'henskoazell a-enep ar c'hleñved a oa ul lodenn eus al labour trevadennañ. An difraosterien a yae da dreiñ ar gouelec'h e parkeier a gomprene mat pegen stag e oant an eil ouzh egile, ha pegement e tleent en em skoazellañ. A-gevret e tleent stourm, pe kouezhañ. Se a zo anat er reolenn a rae dezho mont, pep hini d'e dro, da dremen an noz ouzh tal gwele o c'heneiled klañv. Se, evel just, ne c'hell ket mui bezañ graet bremañ, pa 'z eus ouzhpenn 450.000 den o tennañ gounid eus ar Chef-Kenskoazell. Met abaoe en deus ar C'hef-se savet klañvdioù, tiez-louzaouiñ, h.a., hag e 1952 ez eus bet dispignet gantañ evit skoazellañ ar glañvourien, 12 milion a lurioù israhelat. An darn vrasañ eus gounidoù ar C'hef (70 %) a zeu eus skodennoù an izili, hag ul lodennig eus skodennoù an implijerien.

Ouzhpenn Kef ar C'hleñved ez eus kefioù all - Kef ar re Nammet, Kef al Leveoù, hag ivez Mishal, Kef an Hevoud Kevredigezhel, a brest arc'hant d' al labourerien p' o devez ezhomm.

Arboellerezh al labourerien.

Kevredigezh al labourerien he deus un niver skourroù arboellerezhel : trevadennoù boutin; trevadennoù kenlabour, strolladoù kenbrenerien, kompagnunezhioù ha labouradegoù a zo dalc'het o lodennoù, pe lod anezho, gant kompagnunezh-derc'hel-lodennoù an **Histadrout, Hevrat Ovdim**. Reiñ a ra an **Histadrout** e skoazell bep gwech ma vez ret krouiñ un dra bennak pe reiñ labour d' an enbroidi. Anavezet mat eo ar c'h-kibboutz - kêriadenn voutin - hag ar **moshav** - kêriadenn a genlabour etre perc'henned vihan. Ar re-se - kibboutz ha moshav - o deus krouet ur stumm nevez a labourerien-douar yuzev, ha warno ez eo diazezet arboellerezh Israhel, pa vez gounezet enno muioc'h eget 70 % eus holl eostoù ar vro. E 1951 e oa, dindan an Histadrout, 214 kêriadenn voutin ha 193 kêriadenn-genlabour, enno 115.500 den o labourat.

Gwerzhet e vez an eostoù dre aked **Tnuva**, ar burev-gwerzhañ. Ur strollad kenbrenerien a zo ivez, **Hamashbir Haherkazi**, hag a c'hell pourchas pep tra d' an dud - adalek ludu evit an douar betek paper evit ar skriverez. Ouzhpenn-se ez eus ur strollad-kenskoazell evit ar sevel tiez, **Solel Boneh** e anv : **Solel Boneh** a implije 35.000 micherour e 1951, hag er bloavezh-se en doa graet labourioù evit 40 milion a lurioù israhelat. Ha, da lakaat **Solel Boneh** da vont en-dro aesoc'h, en deus an **Histadrout** krouet labouradegoù d' ober simant, brikennoù, gwer, toullet mengleuzioù, h.a. Erfin an Histadrout en deus savet un Ti-Bank al Labourerien (an enkefiañ-digefiañ a zo savet da 20 milion a lurioù israhelat e 1951) hag ur gompagnunezh kretadur, **Hassneh** hec'h anv.

55

Labour kenteliañ ha labour sevenadurel.

Kalz e labour ivez an Histadrout evit seveniñ c'hoantoù sevenadurel al labourerien yuzev. Alies o deus kevrennoù an Histadrout o skolioù kentañ hag uhel dezho o-unan, e-lec'h ma pouezer kalz war talvoudegezh al labour-dorn, an tec'hnelezh hag ar spered a genskoazell.

Ar spered-se an hini eo a ren e strollad ar yaouankiz, an **Noar Oved**, hag a stroll a labourerien dindan 18 vloaz. Evit ar yaouankizioù-se en deus krouet an **Histadrout** skolioù micherel a bep seurt, ha kluboù yaouankiz. Ar merc'hed o deus o c'hevrenn dezho o-unan, Kuzul Merc'hed al Labour : ar re a zo er gêr d' ober war-dro o zi a c'hell ivez bezañ degemeret er gevredigezh.

Da strollañ gwelloc'h hec'h izili ez embann Kevredigezh an Histadrout ur gazetenn bemdeziek **Davar**, a zo unan eus ar c'hazetennoù lennet ar muiañ er vro, ur gazetenn bemdeziek all **Omer**, a zo embannet en hebreeg eeun evit ar re a zo krog da zeskiñ ar yezh. Un ti-embann en deus an Histadrout, **Am Oved**, a lak da zont er-maez skridoù a bep seurt ha troidigezhioù diwar oberennoù gwellañ al lennegezhioù estren.

Se avat n' eo nemet un diverrañ eus buhez ha labour an Histadrout, ar gevredigezh a stroll an tri c'hard eus labourerien ar vro. Unan eus nerzhioù ar stad yaouank ez eo, ha teurel a ra kalz evezh da ober evel ma 'z eo dleet war-dro an enbroidi. Klask a ra evel just sikour an enbroidi en o micher, reiñ dezho arc'hant paz 'int klañv, h.a. Pezh a glask c'hoazh avat eo gounit an enbroidi d' an uhelvennadoù kozh. Un den, **Pinhas Lavon**, bet sekretour meur an Histadrout, en deus lavaret kement-mañ : « Labour an Histadrout a zo bet betek-hen dieubiñ ar vro. E labour a zo bremañ dieubiñ pep hini eus tud ar vro ». Da lavarout eo gounit anezho d' ar gredenn e talvoudegezh ar striv, ar c'henlabour hag ar c'henskoazell.
56

N' en deus morse klasket an Histadrout sevel menoziadegoù : klasket en deus atav reiñ pouez d' an talvoudegezhioù bev. Ha kompren a reer ez eo en doare-se c'hoazh e klasko diluziañ kudennoù an amzer-da-zont. Ar c'henlabour hag ar c'henskoazell a zo bet e venozioù-stur en tremened: e venozioù-stur a chomint en emgannoù a zo c'hoazh da vezañ gounezet.

(1) E 1952, 342.791 hag e 1953, 445.000.

Un arvest nevez, dic'hortoz, a c'hell bezañ gwelet en deizioù-mañ gant an neb a dreuz ec'honderioù ar c'hreisteiz. E-lec'h ma oa warlene ur gouelec'h goull o c'h en em astenn betek dremmwell ar menezioù pell, ez eus bremañ gwiskadoù divent alaouret o wagenniñ ken pell ha ma c'hell al lagad tizhout, troc'het hepken gant renkennadoù hir a wez bihan nevez-plantet... Ha pelloc'h c'hoazh, e traoñ an Negev, e-barzh kornioù lezet e gwenn war ar gartenn, emañ an traktourien o tigeriñ, evit ar gwinizh goañv, 300.000 dounam a zouaroù dianav.
ISRAHEL O LABOURAT,
kannadig an Histradrout, Mezheven 52.

BAGADOU-DIFENN ISRAHEL

Diwall Israhel diouzh pep argad eo kefridi ar Bagadoù-Difenn.

Savet ma voe e-pad ar Brezel, e rankas Arme Israhel en em stummañ e-kreiz ar reustl hag an emgannoù diroll, da vezañ ur benveg efedus evit ar stourm. Hogen, kerkent hag echu gant ar Brezel, e voe ret da Frammadur-Emzifenn ar Stad bezañ adkempennet-holl, adaozet diouzh buhez ar Vro, hec'h ezhommoù, he fiñvidigezhioù hag ar palioù dibabet ganti. Ha peogwir e oa troet Mererezh ar Stad en e bezh wardu ar pal pennañ : dastum hag israhelekaat ar Re-Harluet, e ranke Pennoù ar Gouarnamant hag an Arme sevel ar Framm-Difenn a vefe an efedusañ hag an digoustusañ war un dro, ha na gasfe ket holl leveou ar Stad da hesk. Setu perak emañ Frammadur-Emzifenn Israhel o tennañ e vad eus doareoù ar Vro, en ur ober diouto binvioù da zerchel ar Stad e savete.

Pevar skor a zo da Frammadur-Emzifenn Israhel : An Arme Reoliek, an Enrolladur evit ar Servij Broadel, an Adarme hag ar c'hêriadenoù diazezet war an harzoù.

Kreizenn vev Armead Israhel eo an Arme Reoliek. Tud emouestlet a-youl e vez hec'h holl izili. Enni 'z eus dreist-holl ofiserion hag is-ofiserion, anezho kadourion a vicher pe tud barrek da vezañ gourdonet-dreist.

E derou 1950 e voe savet. War wellaat eo bet dalchmat abaoe. Kement a dud a c'houlenn mont enni bep bloaz, ma n' eus tu ebet da zegemer an holl. Evit ur bloavezh pe dri pe bemp e c'hell an ofiserion en em ouestlañ. Hiroc'h pennadoù-servij a vo aotreet a-barzh nemeur.

An Arme Reoliek a zo dezhi he skolioù-arbennegerien, dindan veli Komandant ar Gourdonerezh, gant kentelioù lies-derez evit pep kevrenn eus an Arme, ar Merdeadurezh hag an Nijerezh. Lod eus an uhel-ofiserion a zo bet kaset d' an estren-vro da heuliañ kentelioù er Skolioù-Brezel.

Stank eo niver an uhel-ofiserion yaouank. Da skouer ar **Rav-Alouf** (Penn ur Rann-Arme) **Yadin**, hag a zo bet e penn an Arme, a oa en e 32 vloaz hepken, pa voe fiziet ar garg-se ennañ e 1949. Ar **Rav-Alouf Mordekai Makleff** a oa dezhañ an hevelep oad, pa gemeras ar garg war e lerc'h e miz Du 1952.

60

En Israhel, an Arme, ar Merdeadurezh hag an Nijerezh a zo anezho kevrennoù ur Frammadur-Brezel unan a anver : Bagadoù-Difenn Israhel. Dindan rener-meur an Arme hag ar Penngarter mañ an teir Gevrenn-se.

Dister a-walc'h e oa an Nijerezh hag ar Merdeadurezh, pa darzhas brezel an Dieubidigezh. Pezh na viras ket outo a skeiñ meur a daol-kaer. Adstummet-int bet tamm-ha-tamm, evel m'eo bet adstummet Armead an Douar, ha deut int da vezañ kevrennoù emliesaet meurbet. Kempennet eo bet o doare-emgannañ kenkoulz hag o armoù, d' o lakaat da jaojañ ouzh stumm ar brezel a rankfe Israhel kas en dro, ma vije taget adarre gant hec'h amezeion.

Kerkent ha tizhet ganto an oad a 18 vloaz, e vez sujet an holl yaouankizoù, paotred ha merc'hed, d' an Enrollerezh evit ar Servij Broadel. Daou vloaz hanter e pad ar Servij-se evit ar baotred, daou vloaz evit ar merc'hed. Disheñvel a-walc'h eo an Enrollerezh en Israhel diouzh ar pezh a weler e broioù all : bez' e c'hell an dud yaouank seveniñ ul lodenn eus o servij en ur labourat war ar maez. Ha kement-se a ziskouez splann ez eus daou dra er Servij-se : Difennerzh ar Vro hag al Labour-Difraostañ.

Pa vez galvet an danvez-soudard d' e servij, e c'hell bezañ kaset d' ur gevrenn eus an Arme a reer NAHAL anezhi. (NAHAL : lizherennoù kentañ gerioù liebreek o talvezout kement ha « Yaouankiz ar Stourm hag an Difraostañ »). E-pad tri miz e vez gourdonet ar re-yaouank evel soudarded. Goude-se e vezont kaset d' an trevadennoù, war an harzoù peurliesañ, e-lec'h ma labouront er parkeier e-pad nav miz. Da zibenn ar bloaz e c'hell pep unan dibab etre daou dra : pe tremen ar peurrest eus e servij en ur gêriadenn war an harzoù, pe en em reiñ d' ar vuhez soudardel-rik.

Abaoe daou vloaz ma 'z eus anezhi he deus tizhet NAHAL, ouzhpenn gourdonañ ar re-yaouank, sevel 15 kêriadenn nevez war an harzoù, an darn vuiañ anezho e kornadoù-bro a oa didud a-gent. Harp he deus roet ivez da 39 kêriadenn all. Berzh he deus graet NAHAL gant he zaol-arnod, o vezañ m'eo bet broudet Israheliz yaouank d' an difraostañ ha d'an trevadenniñ.

61

Ha bremañ, an Adarme pe Arme-Skoazell. E-keñver an niver ez eo an Adarme ar pep pouezusañ en F.E.I. Dezhi e vez sujet an holl wazed betek an oad a 49 vloaz, hag an holl wragez betek an oad a 34 bloaz.

Sed amañ ar pal anezhi. Ret eo da Israhel lakaat he holl strivoù da ober ur bobl gant an enbroerion a zired fonnus, ha da sevel ar Vro. En aner e vije foranet an holl strivoù-se, ma ne vije ket diwallet ar Vro diouzh an Argadoù. Frammet eo Adarmead Israhel en doare ma c'hell an darn vuiañ eus an dud en em reiñ d' ul labour frouezhus, war ar maez hag en uzinoù, koulz lavaret betek mare an argad. Kement-se a zo bet gonezet dre ijinañ ur mod-gervel-d'an-armoù hag a laka tud an Adarme da vezañ galvet, harnezet ha postet e berr amzer.

Tud an Adarme, betek an oad a 39 vloaz, a c'hell bezañ galvet bep bloaz evit ur miz. Goude an oad a 39 vloaz ha betek 49 vloaz, ne vezer galvet nemet evit ur pemzektez.

Pevare skor an F.E.I. eo kêriadennoù an Harzoù. Talvoudus ha kalonek-meurbet e voent e-pad brezel an Dieubidigezh. Gouez d' an Deknikourion-vrezel, kêriadennoù evel **Negba** (a harzas ouzh argadadeg Ejiptiz er Su) hag **Ein Gev, Degania** ha **Gesher** (a harzas ouzh Siriz ha Yordaniz er Biz hag er Reter) o deus sevenet kurioù-brezel a vije bet ezhomm eus ur bataillon reoliek hanter d' an nebeutañ evit kas da benn pep unan anezho.

Evelato, diglok e vije an daolenn, ma ne rafemp ket meneg eus labour an F.E.I. en tu-hont d'ar Brezelerezh. Pouezusañ benveg e dalc'h ar Stad eo Arme Israhel, emichañs, da stummañ tud en oad-gour. Desket e vez an Hebreeg diouzh ret, ha war roll-labour pep bezenn emañ ar Gelennadurezh ledan en ul lec'h enorus.

War-dro ar Genskoazell e vez graet fonnus gant an Arme evit ar boblañs. Heverk-dreist e voe ar - « Skoazelladeg **Maabarot** ». Kas a reas an Arme hec'h ijinourion, ha mezeion, he c'hlañvdiourezed, he skolaerion hag he c'hoskor da galz « **maabarot** » (kêriadennoù evit an enbroerion), da vare ar glaveier-goañv, da wellaat o stal dezho.

Diskouezet e vez gant-se emañ an Arme o sellout pelloch eget Micher ar Soudard. Pledañ a ra ivez gant ar stummañ Keodedourion. O tont eus an Arme, ar baotred hag ar merc'hed yaouank a zo anezho Israheliz emskiantek, barrek da gemer kiriegezh dindan ar Stad, er Peoc'h koulz hag er Brezel.

BODAÑ AN HARLUIDI

hervez HAIM YAHIL

Evit bodañ an harluidi eo bet krouet stad Israhel, ha dre vodañ anezho eo e vev. Adalek he savidigezh betek an 30 a viz Gwengolo 1951, da lavarout eo en ur ober 40 miz, ez eus deut 670.000 den da chom er vro. Da vare an dieubidigezh ne oa en Eretz Israhel nemet 665.000 Yuzev : adalek bremañ e ra eta an enbroidi al lodenn vrasañ eus ar boblañs.

Eus holl vroioù ar bed ez eo deut an enbroidi-se. Dreist-holl avat int deut eus Kreiz ha Reter Europa, e-lec'h m' eo bet ar Yuzevien ar muiañ heskinet, hag eus broioù arabek ar Reter Tostañ : etre ar 15 a viz Mae 1948 hag an 30 a viz Gwengolo 1951, da skouer, ez eus deut 324.753 den eus Europa (Polonia : 104.092 ; Roumanie : 115.185 ; Bulgaria : 36.867 ; Tchec'hoslovakia : 48.276) ha 234.824 eus ar Reter Tostañ (Irak : 121.633, Yemen : 45.009 ; Turkia : 33.927 ; Iran : 22.630). Eus Afrika ne oa deut neuze nemet 86.470, 41.157 anezho eus Afrika an Hanternoz.

A-wechoù ez eo an holl Yuzevien, pe dost, a oa o chom en ur vro, hag a zo aet kuit : da skouer an holl Yuzevien gwitibunan eus ar Yemen a zo deut da chom en Israhel. 90 % eus re Irak, Libua ha Bulgaria, an divdrederenn eus re Iougoslavia ha Polonia. Ha pa vez echu, tost da vat, gant an divroañ eus broioù zo, setu ma krog al lanv da zont eus kornioù all - eus Iran, eus Roumania, eus Afrika an Hanternoz, da skouer. N' eus ket ezhomm lavarout en deus bet Eretz Israhel da ziluziañ kudennoù arboellerezhel ha meradurel diaes-tre : n' eus bro all ebet er bed e-lec'h m' he defe daougementet ar boblañs dindan tri bloavezh.

Ret eo bet da renerien Israhel, n' eo ket hepken degemer an enbroidi, hogen ivez reiñ dezho labour, lojeiz, boued, ranna anezho etre ar c'hornioù bro hag an ijinerezhioù. Ul lodenn vat anezho, pa erruont er vro, a zo er brasañ dienez, pe ne ouzont micher ebet, pe e ouzont micherioù didalvoud evit Israhel ; lod all c'hoazh a zo klañv mui pe vui, hag a ranker o lakaat e klañvdioù ha prederiañ outo.

63

Istor an enbroidigezh en Israhel a c'hell bezañ rannet e tri maread. Er maread kentañ e oa tiez a-walc'h, chomet goull da heul ermaeziadeg an Arabed : neuze e oa tu da lojañ an enbroerien diouzhtu, ha reiñ dezho labour na oa ket ur gudenn re start. En eil maread ne oa ket mui a diez goull, ha ne oad ket krog c'hoazh da sevel ijinerezhioù nevez : neuze e oa lakaet an enbroerien e kampoù e-lec'h ma oant maget gant ar Burev Yuzeviat (Jewish Agency). An trede maread a zeraou e 1950, pa stag an ijinerezh da greñvaat ha da emzispiegañ : kaset e vez an enbroidi e kampoù **maabara** e-lec'h ma reont a bep seurt labourioù talvoudus en gortoz kaout un ti dezho o-unan.

Preder bras ar gouarnamant a zo ranna an enbroidi en un doare poellek etre ar c'hornbroioù hag al labourioù. C'hoant hon eus ez afe 25 % eus an enbroidi da ober war-dro al labour-douar, evit reiñ un diazez yac'h da arboellerezh ar vro ; c'hoant hon eus ivez ez afe 25 % anezho da vevañ en hanternoz ar vro (en norz pe reter da Haifa) hag 20 % en Negev.

Evezh a vez taolet ivez ouzh an doare ma kresk ar c'hêrioù : klask a reer mirout dreist-holl na dafe re a dud da vevañ en teir c'hêr vras (Jeruzalem, Tel-Aviv, Haifa) hag e kaver gwelloc'h krouiñ kêrioù bihan, etre 15.000 ha 60.000 den enno. Evel-se eo bet krouet **Beer-Sheba**, en hanternoz an **Negev**, **Migdal Askalon**, war an aod er c'hreisteiz, **Affuleh**, en **Emek**, **Kiriat Shmone (Halsa)** e Galilea Uhelañ, h.a.

Evel just, ar seurt enbroidigezh a lak frammadur ar vro ha doare he foblañs da gemmañ kalz. A bep seurt tud a zo e-touez an enbroerien : adalek al labourerien-spered ar wellañ eus Europa betek an anezeien kevioù eus Libua. Ha

pezh en em c'houlenner diouzhtu eo an dra-mañ : penaos e vo gellet biken ober ur bobl diouzh tud ken disheñvel ? Ar Yuzevien a oa o chom en Eretz Israhel a-raok na vefe dieubet ar vro o doa o doare dezho o-unan : un dibab e oant, bet degaset ganto an talvoudegezhioù eus emsavioù kevredigezhel Europa en XXvet kantved. Dre ma oa enbroidi ar mare-se un dibab e gwirionez eo e c'hellas bezañ diazezet e Palestina ur gevredigezh dieub, ur gevredigezh en em rene evel ur seurt stad, daoust na oa ket ur stad ez-ofisiel, ur gevredigezh a ouie sentiñ ouzh ur ger-stur hag heuliañ he renerien, ur gevredigezh he doa krouet an **haloutz**, trec'hour ar gouelec'h, paotr al labour kalonek, hag he doa graet dioutañ un den-skouer, ur gevredigezh he doa gouezet en em wareziñ hec'h-un a-enep d' hec'h enebourien, he doa lakaet da zont da wir, e meur a dachenn, uhelvennadoù ar c'henlabour kevredigezhel, ur gevredigezh, erfin, hag he doa dasorc'het ur yezh kozh marv ha savet enni ur sevenadur nevez. Kement-se en doa roet da boblañs ar vro un dalvoudegezh speredel bras-tre, kalz brasoc'h e gwirionez eget he zalvoudegezh arboellerezhel. Ha setu ar bobl vihan-se, a oa o vevañ serret warni hec'h-un, o tegemer kantmiliadoù Yuzevien all, war dec'h diouzh an heskinerezh en Europa pe er broioù arabek : setu hi o tegemer ar yuzevielezh gloazet, spontet, pe warlerc'hiet.

64

E-pad bloavezhioù o doa diaraogerien an emsav sionat en Israhel en em brientet d' an devezh bras ma teufe ar wenodenn strizh a oa o hini da vezañ un hent bras ha ledan o reiñ tremen d' an engroezioù. Deut eo an devezh-se. Bremañ e tic'h lans war ar vro miliadoù enbroerien : Pebezh diforc'h avat etrezo hag ar gevredigezh haloutzek ! Daoust ha trec'het e vo an diaesterioù, daoust ha kavet e vezo ur reolenn-vuhez o tereout ouzh an holl? Sed aze ar gudenn vras. Hag an diaesterioù brasañ n' int ket arboellerezhel - daoust ma 'z eo bras-a-walc'h ar re-se ivez. Da gentañ ez eo ret deskiñ d' an holl ar yezh hebreek. Kompren a ra an enbroerien na zle bezañ nemet ur yezh er vro, ha daoust ma vez klevet c'hoazh yezhoù estren en Israhel, an hebreekaat a ya war-raok buan a-walc'h. Dekmiliadoù enbroerien a vez o teskiñ ar yezh er skolioù-noz krouet gant ar c'huzulioù-kêr ha gant ensavadurioù a bep seurt. Skolioù a-ratozh a zo bet krouet evit ar skolaerien, kelennerien, mezeien, h.a. : en ur ober 6 miz e teskont mat-tre ar yezh, hag e-pad an amzer-se o devez arc'hant, war brest, digant ar stad evit bevañ. Evit ar wech kentañ eo e vez strivet en ur vro da zeskiñ ar yezh vroadel da dud en o oad, e skolioù e-lec'h m' o devez eus 7 ha 10 eurvezh kentelioù bemdez. Kevredigezh Vras al Labourerien, an Histadrout, a embann ur gazetenn bemdeziek, skrivet en ur yezh eeun-tre, evit an enbroerien, ar vugale a vez kenteliet dre an hebreeg, an arme hag an holl strolladoù e-lec'h ma vez enbroerien a ra kentelioù hebreek ivez. Hag adalek bremañ e weler an hebreeg o trec'hiñ war an holl yezhoù all a vez komzet c'hoazh er vro.

Lakaat an enbroerien d' en em deuziñ er gevredigezh israhelat a zo ur gudenn diaesoc'h avat. Kalz anezho a zeu eus broioù ar reter, warlerc'hiet eus meur a gantved p' o c'heñverier gant diazdourien gentañ Israhel. Enbroerien ar Yemen, da skouer, a zo bet o meuriad o vevañ e-pad kantvedoù distag-krenn eus peurrest ar bed, relijiel-tre ez int hag ar wazed a zo barrek-meurbet war anaoudegezh ar relijion. Ar maouezed avat a zo dizesk a-grenn ha dalc'het e vezont en ur renk izel-tre. Peogwir e vez aotreet ur gwaz da gaout muioc'h eget ur wreg, ez eo bras-tre niver ar ganedigezhioù ganto, met niver ar marventezioù-bugale a zo uhel-spontus ivez, war-dro 50 %. Eus an Irak er c'hontrol e teu tud eus ar c'hlasoù desketañ, kargidi, breutaerien, kelennerien, an holl anezho hep relijion ken. Ur wall gudenn eo 'ta, aes eo kompren, teuziñ an holl dud-se en hevelep pobl, hag en un doare disheñvel e tleer mont ouzh an enbroidi o tont eus Kazablanka, eus enezenn Djerba, hag eus menezioù an Atlas. Ar re a zeu eus Istamboul a zo disheñvel c'hoazh eus ar Bene-Israhel, anezho ur meuriad en deus bevet e-pad kantvedoù er brasañ dizarempred e bro-Indez. Hag an holl re-se a sell en hevelep doare ouzh Yuzevien ashkenazi Europa. Aon o deus bezañ lakaet da gerent paour, bezañ lezet en o c'horn. Ret eo labourat gant kalz a garantez d' o stagañ ouzh o bro nevez - daoust na chom ket ar gouarnamant en entremar evit lakaat berz war al lieswregiezh, implij an drammoù morzus, h.a.

65

Lakaat an enbroidi europat d' en em deuziñ e buhez ar vro a zo kalz aesoc'h, daoust m' o deus ar re-mañ ivez o c'hudennoù. Ar pezh o deus gouzañvet ar Yuzevien e-pad ar brezel a lez en o speredoù disfi, diskred hag a-wechoù un tamm mat a

emzilez dichal da nerzh an tonkadur. « Carpe Diem » a zo ger-stur ar re a zo chomet bev dre vurzud, pe dre zarvoud. Ur wech avat m'o deus pareet o eneoù gloazet en em reont mat-tre ouzh o buhez nevez.

Degemer kemend-all a enbroerien en deus lakaet war boblañs kozh ar vro ur samm eus ar ponnerañ : ne c'heller reiñ da bep hini nemet ar pezh en deus ezhomm, hag a-wechoù nebeutoc'h eget ar pezh en deus ezhomm. Ha dibaouez e ranker stummañ kelennerien, froebelerien, skoazellerezed-kevredigezh, klañvdiourezed, alies zoken e ranker ober gant skoazellerien hep testenioù-arnodenn. Ar pep retañ ne c'heller ken ober bremañ, da virout na dafe al live sevenadurel war ziskar. Aesoc'h e vo pa c'hell al labourerien-spered dont ez-dieub er vro, e-lec'h ma kavint labour forzh pegement d' ober.

Un hent start a zo dirazomp, ha stennet e tle bezañ holl nerzhioù korf ha spered ar vro : met ar seurt stourm a ro un dalvoudegezh dreist d' ar vuhez. Israhel n' eo ket hepken ur vro he deus taolet kuit yev an estren, ur vro nevez o sevel an hini eo : hor rummad-ni he deus bet ar garg da grouiñ ur bobl nevez en ur adkavout an talvoudegezhioù kozh legadet a rumm da rumm abaoe mare ar Bibl hag an Diouganerien.

AR YEZHOU EN ISRAHEL

Ar Yuzevien, oc'h erruout en Israhel, a gomz a bep seurt yezhoù. E 1948-1949 e oa bet graet un enklask e-touez an enbroidi nevez-degouezhet e Jeruzalem : 3,15 % anezho hepken a oa an hebreeg o yezh pemdeziek, 18,89 % a gomze ar yiddisch, 11,28 % a gomze an arabeg, ha 10,33 % a gomze al ladino.

Aesoc'h kalz e vefe bet degemer da yezh vroadel Israhel pe ar yiddisch, pe al ladino, o-div yezhoù komzet gant Yuzevien hepken. Evit siellañ gwelloc'h an unvaniezh vroadel hag hengounel eo ez eo bet dibabet an hebreeg.

Ur wech dibabet an hebreeg, ez eus bet labouret a-zevri d'ober dezhañ dont da vezañ gwir yezh ar vro. Setu amañ disorc'hoù un enklask graet e 1948 (ar sifroù a verk, evit pep rummad, ar c'hementad eus an dud a gomz **a** an hebreeg evel yezh nemeti, **b** an hébreeg evel yezh kentañ, **k** an hebreeg evel eil yezh, **d** ur yezh all hepken) :

evit ar baotred :

eus 0 da 4 bloaz :	a 87,3 ; b 4,8	; k 1,1	; d 6,8.
eus 5 da 14 vloaz :	a 80,1 ; b 13,8	; k 1,9	; d 4,2.
eus 15 da 29 bloaz :	a 59,9 ; b 18,8	; k 3,9	; d 17,4.
eus 30 da 44 bloaz :	a 51,3 ; b 26,1	; k 5,5	; d 17,1.

evit ar merc'hed :

eus 0 da 4 bloaz :	a 87,1 ; b 5,4	; k 1,0	; d 6,5.
eus 5 da 14 vloaz :	a 78,5 ; b 15,1	; k 2,3	; d 4,1.
éus 15 da 29 bloaz :	a 51,1 ; b 23,7	; k 5,1	; d 20,1.
eus 30 da 44 bloaz :	a 44,6 ; b 28,9	; k 6,9	; d 19,6.

Evel ma weler e teu buan an hebreeg da vezañ yezh nemeti ar vro.
(hervez POPULATION, 1952.)

KENTELIOU HEBREEK

Evit an dud en o oad ez eus a bep seurt kentelioù. Kreizenn Sevenadurel an Histadrout a ra da skouer, rummadoù-kentelioù eus an noz hag a bad eus 6 da 10 eurvezh ar sizhun. Er goañv 1950-1951 ez eus bet graet 700 rumm-kentelioù e-giz-se, ha 13.000 den o deus desket an hebreeg enno.

Ar c'hêrioù ha kêriadennoù a ra rummadoù-kentelioù ivez, 450 anezho gant 7.500 diskibl en hevelep goañvezh.

Ouzhpenn-se ez eus skolioù hollbad, e-lec'h na reer tra nemet deskiñ hebreeg a-hed ar sizhun : 100 skoliad a vez degemeret e pep rummad, ha kerkent hag echu gant ur rummad, e teu 100 all da gemer o flas.

E Tel-Aviv a-hend-all ez eus bet krouet un dra all : Skol-Veur ar Bobl. Eus an noz hepken e vez graet ar c'hentelioù, ha 50 kentel a zo en ur rummad : da fin ar rummad e vez roet ur skrid-testeni d' ar re a zellez. Ur miliad studierien - an darn vrasañ anezho micherourien - a dremen dre ar skol-se bep bloaz.

Diouer a gelennerien a zo avat : alies e vez degaset ar skolidi d' o c'hentel dre gamionoù.

(tennet eus ISRAHEL O LABOURAT, kannadig an Histadrout, niv. 8 ha 9.)

BANNIEL ISRAHEL

Banniel Israhel, moulet ar skeudenn anezhi war bajenn gentañ an niverenn-mañ, a zo gwenn, gant div roudenn c'hlas hag ur steredenn-David melen.

Penaos eo bet savet an niverenn-mañ

An niverenn-me a zo bet savet e kenlabour gant lod eus mignoned AL LIAMM.
 Setu amañ gant piv eo bet troet ar pennadoù :
 Maodez GLANNDOUR : Penaos ez adsaver sevenadur ur vroad ;
 F. KERVELLA : Notennoù-Douaroniezh ;
 Pol ha Gwion ROLLAND-GWALC'H : Bagadoù-Difenn Israhel ;
 KLERG : Pemp Bloavezh eus Istor Israhel e-keñver Arboellerezh ;
 Herve KONAN : Damsell-war Istor Israhel ;
 Arzel EVEN : Emlad ar Yezh Hebreek ;
 Ronan HUON ha Per DENEZ : Lennegezh Israhel ;
 Per DENEZ : Keoded ar Marv (diwar un droidigezh gant an Ao. Rabin Meur Deutsch embannet er gelaouenn « Hillel »), Bodañ an Harluidi, An Histadrout, hag an notennoù.
 Andrev LATIMIER hag ABANNA o deus pourchaset dihelloù da sevel an niverenn.
 Per ar BIHAN en deus dibabet an darn vrasañ eus ar skeudennoù.
 Gant Per DENEZ ez eo bet aozet an niverenn.

VA ZAMMIG BUHEZ

gant Jarl PRIEL

(Pennad kentañ)

« Le Moi est haïssable, » eme ar C'hallaoued, ha war ar c'hraf-se da vihanañ a-grenn emañ a-du ganto. « Poent ha tremen poent eo deoc'h stagañ da skrivañ hoc'h eñvorennoù, » eme renerien Al Liamm, Ronan Huon ha Per Denez. O vezañ ne baouez nag an eil nag egile da derriñ din va fenn gant ar gudenn-se, kregiñ a ran d' an diwezh gant al labour-mañ da sul Fask, hag evit o finijenn kinnig a ran dezho o-daou un oberenn marteze kalz re hir, ha sur a-walc'h kausas daonet da ziviz al lennerien.

J. P.

Krec'h Eliez, 18-4-1954.)

I

Deut on er bed, tudoù, an dri warn-ugent a viz Ebrel (1) er bloavezh 1885, en ti melen bourc'h Priel, damdost da Landreger. Ur c'hoarig, - Mari vihan a veze graet diouti, - am eus bet, met mervel a reas ar paour-kaezh krouadur a-benn un daou pe dri miz ha setu penaos ez on manet pennhêr Tremel.

Ostaleri ha ti-butun a oa gant va zad Erwan-Vari Dremel, (pe gentoc'h E-Mari, evel ma lavarer em c'horn-bro) ha gant va mamm Ann-Mari an Aubin. Mat e oa ar stal ganto, Doue d'o fardono o-daouig, met daoust da se n' on ket bet savet er vourc'h, met er c'hraev gozh war un tamm tosenn, Krec'h Eliez; hervez ma vez graet diouti, e ti va zad-kozh ha va mamm-gozh, da lavarout eo en ti emañ bremañ o chom ennañ.

(1) « An deiz ma voe ganet W. Shakespeare, » hervez ma skrive din gwechall un tenner planedennoù, daoust ha ne ouie ket e vezen ur pennad 'oa oc'h ober war-dro ar c'hoariva. Met biskoazh n' on ket penboufet gant al lorc'h war-zigarez ar c'hendegouezh-se, rak gallout a ra n' eus forzh piv dont war an douar deiz ganedigezh Jul Kezar, sant Erwan, Newton, Landru pe ar rouanez Mari-Antoneta, hep bezañ tonket evit kelo-se da vezañ ur brezelour dispar, ur sant holl-vrudet, ur mailh war ar skiantchoù, na, Doue da viro, da vezañ dibennet evel an daou all.

71

Brezhonegerien eus an dibab a oa an daou gozhiad ez on bet savet ganto, met ne ouie lenn nag an eil nag egile. Dont a rae a-wechoù, hag ur ral e veze, pennadoù galleg saout gant an hini-gozh, evel skouer « il a frigassé son pied » (friket eo bet e droad), pe « un petit morçon du pain », hogen biskoazh em buhez n' am eus klevet digant he fried nemet ur ger galleg, hag eñ distaget fall : ar mor Atélantik, emezañ. A drugarez d' an azenerezh-se, evel ma lavarfe darn 'zo, ha d'o diouiziegezh venniget, hervez ma kredan-me, rak daou benn he deus pep bazh, desket ha desket mat am eus va yezh a-vihanik, ha mil bennozh Doue dezho evit se ! Gwir eo, er mare-se ne veze ket klevet ar vugaligoù o trailhañ gallegach dre an heñchoù ; holl a raent, krennarded koulz ha merc'hed, gant ar brezhoneg dalc'hmat, er gêr, er c'hatekiz, en parkeier pa vezent o vaesa pe o neizhata, e pep lec'h nemet er skol, rak eno e veze krozet dezho, ha kastizet e vezent zoken gant ar « Symbol », ar « Vuoc'h goad », kerkent ha ma tifloupe diganto ur ger en o yezh vroadel. Allas Doue ! bremañ 'vat n' emañ ken kont evelse gant Yann grenn, da vihanañ em bro Dreger.

Va zad-kozh, Jakez an Aubin, a oa un den a vent vray, treut ha kreñv, lemel e varv a rae da sadorn, nemet ur pezh torkad reun fouet miret gantañ a bep tu d' e zremm krizennet e-giz an darn vuiañ eus martoloded gwechall rak, atav o loveal du-

mañ ha du-hont war vourzh listri brezel, bevet en devoa e-pad pemp bloaz warn-ugent pell-pell eus e vro. Gounezet en devoa e-keit-se medalenn ar Meksik ha div pe deir all ouzhpenn, hag, o vezañ ma voe bet gloazet ha gweet krenn biz meud e zorn kleiz gant un tenn e porzh-mor La Vera Cruz ne veze graet dioutañ e Priel nemet Biz Kamm...

Peurechu gantañ e amzer, e teuas a-benn ar fin d' an gêr, met ne veze ket gwell druz ar peuriñ gant kozh wernier Krec'h Eliez daoust d' ar bañsion digant ar gouarnamant. Rankout a rae 'ta poanial war e gozhni da c'hounit e vara, mont bemdeiz d' an aod da besketa, da gerc'hat merl pe vezhin d' an Enez-Terc'h gant kobar e vreur o chom e Roc'h Velen. Hemañ a c'hoarie un dra bennak gant e c'har, hag o vezañ ma 'z oa ivez Jakez e anv badez, pa veze ezhom d' ober un diforc'h etrezo o-daou, em c'herentiezh hag ivez er barrez a-bezh, e veze graet diouto Jakez Vras ha Jakez Vihan, hag aliesoc'h c'hoazh Biz Kamm ha Gargamm. Degouezhout a rae d'am zad-kozh ha d' e bried tañva evel-just tammoù a bep seurt, met en em ober a raent eus ar c'hentañ evel gwenn ha melen ur vi, ha mar felle d' e wreg plegañ d' ur reuziad poan-spered, ne veze ket pell Biz Kamm o frealziñ anezhi et stumm-mañ : « Na ra ket gwad-fall, Soaz, pelloc'h amzer c'hoazh e vi marv eget ne vi paour ! »

72

Soaz Prijent a oa anv va mamm-gozh kent na zimezas ; met pa veze komzet diouti, morse ne save kaoz nag eus Soaz Prijent nag eus Soaz an Aubin (Soaz an Aubin a oa unan eus va c'henitervezed). Bep gwech ha gant pep hini e veze graet diouti « Soaz Sapeur », dre ma 'z oa bet gwechall he zad « Sapeur » o vrezeliañ n'ouzon ket pelec'h an diaoul war-lerc'h Napoleon kozh. Digant he den zoken ne gleve nemet al lesanv-se, ha mar c'hoarveze d' ur martolod all e bediñ ur sulvezh da noz da chom gantañ e bourc'h da c'hoari kartoù ha d' evañ ur bannac'h re, raktal e lavare Biz Kamm : « Trugarez, va faotr, met poent eo din kerzhout d' ar gêr, anez-se trubuilh am befe digant merc'h Sapeur ».

Eviti da vezañ pell 'zo er vered: derc'hel a reer bete-vremañ d' ober meneg eus ar c'haezh Doue, rak bez' eus amañ e moger va liorzha war ribl an hent ur feunteun ma kaver enni hep mar na marteze gwellañ dour tro-war-dro, ha dour e-leizh, forzh pegen kras e c'hellfe bezañ an amzer. Ac'hañ 'ta, selaouit ar merc'hed o tremen gant kelornioù pe armoù all : « Emaon o vont, emezo, d' ober un tamm tro davete feunteun Soaz Sapeur ». Hag he sivi 'ta ! er mare-se ne weled neblec'h dre amañ ar seurt frouezh nemet en he liorzha hi, hag adal ma krogent da 'zareviñ fret ha skrap a veze warno ken ma veze. Na pegen alies e c'hoaevez din betek-hen klevout digant ur c'hozhiad bennak evel don : « N'ac'h eus ket soñj Jarl, eus sivi Soaz Sapeur ? nag e vezent saourus ha marc'hat-mat ! » Abaoe ma 'z eas va zad da anaon, netra nemet drez, spern ha linad ne ziwane el liorzha venniget-se ; n'ouzon ket an tu da labourat douar, ne blij ket din ar vicher ha gant va gwreg ken pell 'zo klañv war he gwele, n' am beze ket amzer da bleidiñ gant ar seurt traoù. Tapet am eus pleg koulskoude warlene e-kerz an hañv da dennañ alesont ar pep gwashañ, met Doue ha me a oar pet bragoù am eus difindaonet, ha gwelloc'h eo ganin tevel war ar skrapadennoù, ar c'hignadennoù ha dreist-holl war an drein em daouarn.

Pa veze lidet e Priel un eured e ti tud a-beadra, ur vadeziant pe obidoù war an ton bras, bep gwech e veze pedet Soaz Sapeur d' ober war-dro ar gegin, rak gout'ouie koulz ha den ar stek d' aozañ boued. Ha chervat a veze graet ganti, - pa lavaran, petra bennak ne gemere ket kalz tra digant tud an ti, ugent real ar peurliesañ, ugent lur d' ar muiañ, met dastum a rae un tamm brav a werzh-butun, peogwir e veze alies betek un daou pe dri c'hant bennak o verniañ an deiz kentañ an eured, rak ne veze ket sellet berr d' ar c'houlz-se, ha tri dervezh e pade an abadenn : d' al lun evit ar pennoù bras, d' ar meurzh evit an dudigoù, mitizhien, amezeien hag all, ha d' ar yaou evit ar veleien, ar gerent hag ar vignoned nesañ.

73

Va mamm-gozh a oa ur vaouezig strizh ha treut-ki, met daoust da se ken nerzhus hag un aneval, ha buhez enni evel n'hoc'h eus gwelet biskoazh ; eviti da vezañ o loeniñ a-hed an deiz, morse ne teue liv ar skuizh warni. Abaoe m' am eus koun, pa oan ur bugelig o ruzata war e barlochoù dre leur an ti, gwenn kann e oa dija he fennad blev. Gwell hir e kaven me he fri sparfell, ha bez' oa en he fenn daoulagad damc'hlas evel pa vijent bet dislivet dre skuilh daeroù, rak diwar an disterañ digarez hag alies hep tanfoeltr abeg ebet, stagañ a rae da leñvañ druz.

Plijout a rae dezhi moarvat ober ur wech an amzer ur c'hofad gouelañ, ha Biz Kamm, daoust ha ma veze ar peurliesañ ken dibreder hag ur vi nevez dozvet, a lavare neuze, ur sac'had droug ennañ : « Va Doue ivez 'ta gant houmañ ! krog eo adarre merc'h Sapeur da zougen kañv d' he bramm kentañ ! » Met gwellañ tra 'oa, ken prim all e torre d'he glac'har. Goude ma oa Soaz Sapeur kalon-vat holl; graet e veze evelkent anezhi ur plac'h feuls, ha zoken gouez a-walc'h, da vihanañ ouzh ar re na ouient ket ober diouti. War lavar an holl e-dro din, tennañ a ran dezhi e-keñver meur a dech ; a c'hell bezañ, hogen ne gred ket din e vefen ken kalon vat ha hi, na pell ac'hane !

E-keit ma 'z oa he fried o vale bro war vor, ha kerkent ha ma voe didonet va mamm - ur bennhêrez ivez ! - e tegouezhas da Soaz Sapeur mont da vagerez d' an Treou da gastell Koatriou. Setu pelec'h e tiskas emichañs an tu d' aozañ boued-Aotronez. Ha diwezhatoc'h pa zeuas da vezañ va mamm-gozh ha war an dro va maeronez, daoust ha reiñ a reas din un anv kouer bennak, Jakez, Yann, Loull pe Bipi ? nann, mar karan, Jarl eo va anv badez, hini ar c'hrouadur maget ganti, mab henañ an Aotrou Markiz.

Bez' oa c'hoazh o chom war Grec'h Eliez va mamm-you-gozh, Ivonañ, intañvez ar « Sapeur ». Nebeut a dra a lavarinn diwar he fenn rak n am boa nemet pemp pe c'hwec'h vloaz pa voe douget d'ar vered, hogen soñj mat am eus diouti. Krog e oa en he femzek vloaz ha pevar-ugent, met tamm ebet ne oa en he bugaleaj. Kollet he devoa ar gweled ha mezevenniñ a rae a-dal ma save ; dre se e veze ar peurliesañ war he gwele. Un deiz bennak, diouzh ar beure, e c'houlennas disant he merc'h : « Arsa, Soaz, peseurt trouz a glevan ? - Ataoe, ar c'hi, eme eben, ar c'hi o lonkañ un dakenn soubenn manet abaoe dec'h d' an noz. Aflikaflak, emezañ, aflik aflak, n' eo ket gwell druz, met mont a ra bepred d' an traoñ ! » Neuze e tirollas Ivonas gozh da skrignal, met tevel a reas a-daol trumm ; edo o paouez mervel en ur c'hoarzhin.

74

Pevar bloaz am boa nemetken pa stagas va mamm d' ober gant he fennhêr un denig desket. Brav-bravig e teue ganin evit pezh a sell ouzh lenn, met daoust ha ma skrive hi evel ur c'homis noter, c'hwitet he deus va mamm gaezh war an dra-mañ : krog on en dek vloaz ha tri-ugent war vete nebeut ha betek-hen, kaer am eus bet c'hoari, na gant pluenn na gant kreion, biskoazh n' on deut a-benn d' ober gwelloc'h eget skrapadennoù yar, un euzh hepken sellout outo ! Da bemp bloaz mont a raen bemdeiz-Doue da di leanezed Priel, ha gwell abred e huche warnon Koko, peroked Fulup, ur c'hozh vartolod evel Biz Kamm, o chom e tu all an hent : « Alo 'ta, Jarlig, poent eo mont d' ar skol ! » Met n' aen ket va-unan, tudoù, ur c'heneil yaouankoc'h egeton a rede war va lerc'h. Ha piv 'ta ? va fidamdoustig, bep tro, diouzh ar mintin kerkoulz ha goude merenn, kaset e vezen bete hanter-c'hrav gant ur chilhog besk gwenn-erc'h, hag eñ ken dosv hag ur c'hi. Douget on bet a-viskoazh da garout al loened, ha forzh pelec'h e tegouezhas din bevañ, e Breizh, e Rusia, e Polonia, en Algeria pe e Bro-C'hall, dalc'hmat ez eus bet e-dro din daou pe dri gazh da vihanas, ur c'hi hag un evn bennak, ha war a gredan errumat on ivez gant va breudeur daoudroadek pe bevarzroadek.

Pa oan bihan-bihan, pemp bloaz bennak am boa, kerkent ha ma veze lonket diwezhañ tamm ar pred, merenn pe goan, tapout a raen ur bechad bara, ha raktal er-maez, ha d' al liorz. Goulenn a rae diganin a-wechoù va mamm-gozh :

« Arsa, petra ac'h eus d' ober bemdeiz gant ar bara-se ? -

« Feiz, emezon, boueta va evn ! »

Un dro bennak, e teuas hi war va lerc'h el liorz ha hi da vlejal o welout peseurt evnig a oa va hini : ur pikol touseg o chom en un toull er voger ha deut da vezañ doñv, ruzañ a rae e maez e doull da zebriñ bara eus va dorn a-dal ma huchen warnañ : « Biti, biti, biti ! » Ne oa ket Soaz-Sapeur evit klevout komz eus touseged, ha lazhañ a reas raktal va faour-kaezh « evn », kaer am boe pediñ hag aspediñ. Sed aze ar c'hentañ glac'har em buhez !

Va mamm a oa ur goantenn a blac'h, ur veleganez he daoulagad glas-oabl, ha dezhi ur mousc'hoarzh doanius evel p'he dije drouksantet na oa ket tonket da welout he mabig o tont da vezas un den. Daoust ha ma veze ruz ha bev-mat he liv, ne dlee ket he c'halon bezañ en he reizh, rak pa felle dezhi mont da di he mamm, berr e veze warni o pignal gant an diribin, ha rankout a rae chom a-sav da dennañ hec'h alan en ur starda he daouarn ouzh he bruched. Poan dent ivez he deveze alies

ha soñj a zeu din a-wechoù eus c'hwezh an eol fav ter a blave a-reujadoù e-dro dezhi. N'eo ket degouezhet ganin gwelout nemeur a wragez diwar ar maez ken mistr, ken kempenn ha hi ; forzh pegen abred e tremenen er vourc'h dalc'hmat e veze stipet evel da sul, ur sae vezer du e-dro dezhi, ur voulouzenn pe un dantelezhenn en he c'herc'henn, ha war he fenn, ur pikol evn gwenn, ar « jubile » hervez ma lavaret dre amañ.

75

Ha nag a draoù he devoa disket : gout'ouie gwriat kerkoulz hag ur gemenerez a-vicher, brodañ, ober dantelezh a bep seurt, aozañ gant paper seiz, gant koar, gant danvez, gant kregin munud ha zoken gant gloan bleunioù kaeroc'h eget ar re a gutulier el liorzhoù. Ha me kozh, bepred e c'hoarvez din ur wech an amser gwelout en ur vereuri bennak un torkad bleunioù « graet gant Ann-Mari an Aubin », eme an dud, ha dre-se miret gant evezh dindan ur pezh boull wer, tri-ugent vloaz goude ma 'z eo aet hi da anaon. Ha pebezh mouezh a oa hec'h hini! daoust d'ar c'hlasved, o kanañ a veze ar peurliesañ, skiltroc'h eget un eostig da guzh-heol. Den ne gave re hir oferenn bred ar gouelioù-berzh pa veze « Ann-Mari » o kanañ hec'h-unan evel un aelig Doue e-tal an armolut. Digant pet ha pet n' am eus ket klevet kement-mañ, ha n' eus ket gwell-bell c'hoazh : « Pegen brav ivez 'ta e kane da vamm da sul ar Sakramant pe da ouel Itron-Varia Hanter-Eost ! » En he laouenañ e veze pa gave amzer da lenn, rak diskouez a rae bezañ disket : tapet he devoa n'eo ket hepken ar « sanktifikat », met ar « brevet », ur ral em c'horn-bro er mare ma komzan dioutañ. Dre-se, adal ma voen re vras da vont davet al leanezed, den nemeti ne gelennas he faotrig kent na voe poent e gas war du kloerdi Landreger.

He fried 'vat ne ouie, koulz eo lavarout, na bu na ba, rak o vezañ m' en devoa kollet tad ha mamm e-vihanik ne oa bet er skolnemet tri pe bevar miz. Daoust da se, ne glaske tu nemet da c'hallegachiñ, rak plijout a rae dezhañ ober ardoù evel ma lavare Biz Kamm « c'hoari e grak-Aotrou, leun e reor a bilhoù ! » Ha koulskoude bez' oa anezhas ur marvailher fentus, un teod mat a abostol a-dal ma plege d' ober gant e yezh vroadel. E-pad ar brezel diwezhañ, ne veze du-mañ na tredan, na gouloù, na rousin ; mont a raemp 'ta abred da gousket ha menel a raemp a-wechoù da zivizout en deñvalijenn betek hanter-nnoz en ur vutunat delioù teol, louzaouenn ar paz, huelenn wenn ha n' ouzon ket peseurt moc'haj all. E-keit-se, ober a raen dezhañ displegañ darvoudoù eus e vuhez krennard, komz diwar-benn tud ha traoù gwelet en e yaouankiz, ha disket am eus digantañ e-giz-se ur bern troioù-lavar, krenn-lavarioù, gerioù e-leizh na vezont ken distaget nemet gant ar re gozh-kozh.

76

Ne dremene ket hep gouzout pegoulz en deveze d' ober gant ur mailh war hon yezh. Kent na zimezas, mont a rae bemdeiz da labourat da di an Aotrou Goaster, marc'hadour gwin dre vras e Landreger. Un deiz bennak e fellas da hemañ pediñ da verennañ Ernest Renan o chom er vro er mare-se. Kerkent ha ma teuas an Itron da c'houzout he dije da vezañ tal ouzh tal gant ar seurt lakez an Drouk-Spered, raktal e skaras d' ar Porzh-Gwenn gant he bugale hag an holl vitizhien. Setu ma rankas va zad aozañ boued hag ober war-dro an daou vignon. O vezañ ma plije d' ar Goaster diskouez ne oa ket bajanek holl gant ar brezhoneg, ne voe komzet ouzh taol ger ebet nemet er yezh-se. Ha meur a wech am eus klevet digant va zad : « Daoust ha m' am boa kas ouzh Renan, biskoazh brezhoneger n' am eus klevet e-tailh da gaozeal ha da farsal ken dudius hag eñ, ha bete vitam aeternam e vijen chomet gant va genou bras ouzh e selaou » (1).

(1) Evitañ d' ober gant ar brezhoneg ken brav, pa droe en e benn, sed amañ ur pennad eus al lizlier skrivet gant E. Renan da baotr ar Roc'h Narcisse Kellien an dregont a viz Gouere er bloavezh 1879 : « Un idiome a toujours assez vécu quand il a été aimé et que de bonnes études philologiques ont fixé son image pour la science ». Da lavarout eo, troet en devoa kein ouzh Doue e yaouankiz, ha kemend-all a fae a rae 'ta war e vro « garet » ha war yezh e gavell.

Ger ebet ne fell din skrivañ a-zivout e vent, e zremm, e stumm da gerzhout hag all. Piv bennak a zo bet o sellout ouzh ar film « Mister ar Folgoad » en deus gwelet anezhañ, rak kement e daole dezhañ e vab « Salaun » m' ho pije touet e oant daou c'hevell, pe div graoñenn gouezhet a-ziwar an hevelep skourr (2).

(2) Tapit krog, mar plich, em skeudenn embannet e niverenn 36 « Al Liamm », ha sed aze dirazoc'h va zad heñvel-poch.

Dre ma 'z oa ur minor rik, savet e voe gant e dintin Mari-Job Derrien, ur vaouez ken lart hag ur vlonegenn ha mat-tre ar stal ganti, met daoust da se, tost-daonet. Darn, eme an dud, a sell gwell verr ouzh o bleud hag ouzh o brenn ; houmañ 'vat a sile ar yod, evel ma lavarer, dre lostenn hec'h hiviz. Petra bennak ma veve muioc'h eget n' eus forzh piv e doujañs Doue - bet 'oa zoken maeronez unan eus kleier Priel - ne oa ket evit he zeod ha gallet ho pije kanañ dezhi gant gwir abeg :

Deiz mat, Katell bebrennig,
Lemmoc'h he beg eget ur spilhennig !

77

En ur ger, gwashañ keben er barrez. Den ebet nemet Tremel vihan ne ouie, na ne grede, kas e gulatores d' he zoull; ha kaer he divije bet pediñ hag aspediñ, n' eo ket bepred d' he zi e vije aet a c'hrat-vat meur a gristen da dañva gwadegennoù. Evit pezh a sell ouzh he fried, va zonton Pipi, ur skribiton a baotr reutoc'h eget un troad pal, met abaf ken ne oa ket evit blejal « Chou 'ta ! » war ur yar, hogos bemdeiz e ranke tec'hel kuit eus ar gêr da chaseal, da besketa, da glask ober un tamm frotañ d'ur goantenn bennak, pe da beurechuiñ ur pifad e ti ur mignon. Kement ha trouc'hañ berr, tennañ a rae e baour-kaezh vuhez war ur gozh vuoc'h dreut, trenk put he laezh. Krenañ a rae ivez an Aotrou Person dirak ar gac'herez diaes-se, ha setu peseurt troioù-gwidre a ranke c'hoari an den santel evit bezañ erru-mat ganti, da vihanañ ur wechig. Da c'houlz ar c'horaiz bihan, pa dremene gant ar prosesion damdost d'he zi, arabat e veze dezhañ ankounac'haat enlakaat ar pennad-mañ e letanioù ar Sent :

- Sankta Mari-Job Derrien !
- O-ora pro nobis ! eme e barrezianiz a-leizh o genou.
- Sankte Pipi Dreme-eel !
- O-ora pro nobis !
- Sankte E-Mari Dremel, ar bugel braa-av !
- O-ora pro nobis !

Neuze e lavare va zintin, o c'hedal war doull he dor, lorc'h ha stad enni eveljust : « Ac'hañ 'ta ma ! ur sac'had mat a winizh en devo ar Person da gaout pa zeuio d'ober e gest-ed ».

N' am eus ket anavezet va mamm-gozh all, Mon Dremel, met klevet am eus meur ha meur a hini o komz diouti. Ne baouez ket, emezo, da zenañ ur c'horn pri melen gant ur c'harenn verr-verr. Gounit douar a rae he fried, ha pa'z ae Mon da labourat er parkeier - rak, un tourc'h-paotr anezhi, plommañ, mediñ, troc'hañ lann, charreat, ha zoken ober kleuzioù, kiañ a rae a lazh-korf evel ar wazed - bep gwech e veze ganti, e-pign ouzh las he davanañjer, un tammig c'hwezhigell leun-kouch a vutun, ha mogedenn a laoske a-dal ar beure bete serr-noz. Mallozhiñ a rae ivez ken ma sponte ar brini, ha ne rae fae na war ar butun-karot na war an hini-kreñv. Treuzkaset he devoa, am eus aon bras, ar si-se d'he mab henañ E-Mari.

78

Ur pikol levr a c'hallfen skrivañ diwar-benn breudeur ha c'hoarezed va zad, hag a-zivout va c'hendirvi: paotred ha merc'hed, met pec'hed marvel a vefe din tremen hep ober meneg eus va goureontr Yann Dremel, rak n' eus bet biskoazh ha biken ne vo gwelet sebezusañ oristal o vale heñchoù Priel. Gouez d' am c'herent all, tamm ebet ne denne na d' e dad na d' e vamm, tud ken fur ha ken sioul ha n' eus forzh piv ; diouzh an avel 'ta en divije dleet ober tataig. Paotr yaouank a oa manet eveljust, rak pebezh cholori ma c'hoarvefe d' ar seurt pod-houarn kavout ivez e c'holo !

Da gentañ, den nemetañ ne blede na gant e varv na gant e vlev a dape dezhañ betek e zivskoaz ; ober a rae dezho un tammig divegañ ur wech ar bloaz war-dro Nedeleg. N' eo ket kennebeut-all a-drugarez dezhañ e c'helle kemenerien ar vro lardañ druz o bara, rak troc'hañ ha gwriat a rae e-unan e dammoù dilhad. Ha peseurt danvez a zibabe hañv goañv, a gred deoc'h ? mezer, voulouz, lien, « berlinj » ? nann, ma karan, netra nemet an danvez skañv-skañv a bep seurt liv ma vez graet gantañ stignoù-gwele. Stummañ a rae ta evel ma ouie ur bragoù, ur jiletenn hag ul levitenn: a-wechoù e veze pikoloù evned ruz o tarnijal war ur vragezenn, ha chas melen o redek gedon a-hed ur vragezenn all, tanfoeltr van ne rae Yann ; bugale ar skol 'vat, ne lavarant ket. Bez e veze en e gerc'henn ur pezh kolier lem-laka, dek meudad dezhañ, ha war e benn un tog, foñs hir gant ur bern seizennoù ruz, glas, ha me oar o tivilhañ hag o fraoñval a-youl ar pevar avel.

Setu aze, kwita, ur pipi ! n' am eus gwelet an istrogell-se nemet div pe deir gwech, ha gwell vihan e oan d'ar c'houlz se. Soñj am eus koulskoude e oa liv ar yec'hed warnañ ; gant e vlev hir hag e varv gwenn kenañ tennañ a rae da Sant Per, met d' ur sant Per a gavfe mat e voued, rak paotr e gof a oa ivez, diouzh klevout va zad. Siwazh ! kerse bras eo ganin o vezañ n' am eus ket gallet kaout darempred gantañ.

Mont a rae da chaseal, ha pakañ a rae koulz ha den gedon, glujiri, lern, en ur ger, ar pezh a gave, met nepred ne deurveze prenañ un aotre da vale bro gant e fuzuilh. Bez e veze gantañ evelato e godell e levitenn a bep seurt liv ur paper skrivet gant va zonton, Pipi :

+ Jezuz, Mari, Jozeb +

Grit an anv Doue ma tapin jiboez sof-kont.

Evelse bezet graet !..

79

Ha mar degouezhe da baotred Mari-Robin, an archerien, dont en arbenn dezhañ, goulenn a raent digantañ e baper kement hag abuziñ o amzer, ha goude ober sin da lenn e lavarent kuit a c'hoarzhin :

- Eus ar c'hentañ, va den mat, derc'hit da vont, rak gwelout a reomp emañ pep tra ganeoc'h hervez al lezenn...

Tanfoeltr troad ne lakaje en iliz, na zoken deiz obidoù e vignon nesañ. N' eo ket abalamour ne oa ket un den a feiz, ar c'hontrol eo ; re vil, war a grede dezhañ, e veze graet d' an Aotrou Doue en ilizoù, ha hervezañ re griz holl e oa ar veleien : « Ur vezh eo dezho, emezañ, leuskel hor Salver da baourenteñ e noazhpilh, koulz eo lavarout, war e groaz ». Bez' e oa ivez en e di ur groaz, hag ur pikol hini gant un Aotrou Doue tachet warni evel m' eo dleet, met hennezh 'vat ne c'houzañve ket gant ar riv, rak gwisket e oa dezhañ ur gorfenn stamm hag un tamm bragoù voulouz. Hogen kerse 'oa gant e berc'henn o vezañ n' en devoa ket kavet tu da lakaat ur re votoù koad en e dreid.

Kempennet en devoa e kambr al laezh ur seurt chapelig gant skeudennoù sant Erwan, sant Tual ha sant Jozeb, patrom ar barrez, treset ha livet war ar mogerioù gwenn-raz gant brudetañ arzour ar c'horn-bro, Mabig ar Remon, skarzher seminaloù (ur c'hwil all, pa lavaran, itrik e-leizh ennañ (1), hag a-us d' an aoter - ur c'hozh laouer-doaz - a oa stag ar C'hrist bragezennet emañ o paouez komz dioutañ. Da bep gouel bras, Nedeleg, Pask, hag eveljust da sul ar Beuz (deiz pardon Priel), da ouel sant Erwan ha sant Jozeb e kane Yann ar gousperoù hep sakrist na kolist, evel ma teue gantañ. Ger latin ebet ne veze klevet eno ; rankout a rae e barrezianiz tremen gant « Ne n' eus ket e Breizh », « Ni ho salud, Steredenn vor », « O kalon sakr ! », « Sant Jozeb, pried Mari » hag « Un Doue hepken adori » met sarmon a rae mestr an ti, ha bep tro diwar fallagriezh ar veleien : « Bete pegoulz, emezañ, e laoskint o Mestr hag o C'hrouer kuit a lostenn hag a vragoù ? » Kloc'h ebet ne oa er chapel met plaen ha brav e rae va zonton hep kleier, rak disket en devoa digant e geneil Mabig ar Remon ober gant e c'henou kement son e veze ret : gout' ouie da skouer tintañ ar c'hlanz, an añjeluz, kloc'h an tan, ha dreist-holl brallañ ar c'hleier. A-zruilhadoù e tirede ar saverien o fri d' ar gousperoù war zigarez skrignal hag ober goap.

- Arsa, Yann, e c'houlenne hini pe hini berr warnañ, daoust ha n' on ket re ziwezhat d' an ofis ?

- Nann 'ta, emezañ, amzer 'zo, n' eus bet c'hoazh nemet ar son gantañ...

(1) Ne live Mabig nemet gant huzil, raz, pri ruz ha pri melen ha bleun kannerezed evit an daoulagad. Brav a-walc'h e teue gantañ ha pedet e veze zoken gant Aotronez - Anatol ar Braz ha Botrel da skouer - da livañ sent en o zi.

80

Diouzh klevout va zad, ur barzh a oa ivez e donton Yann, un dra bennak moarvat evel Yann ar Minouz, ginidik eus ar Roc'h Velen, e Priel. N' eus manet eveljust roud ebet eus e oberennoù peogwir ne ouie na lenn na skrivañ, met plijout a rae dezhañ kanañ e sonioù hag e werzioù war lein un dosenn damdost d'e di en ur seniñ ur violoñs bihan-bihan, ur c'hoariell a ugent real bennak prenet gantañ e foar Dreger. Ra glevo da virviken Yann gaezh, Mabig ar Remon ha Yann ar Minouz,

du-hont, e baradoz an dud didro, kleier ha violoñsoù an eürusted beurbadus !

Daoust hag-eñ ne dennan ket un nebeudig da vrasañ oristal em c'herentiez ? N' eo ket abalamour ma 'z oa douget da wiskañ ar sent, na dre ma plije dezhañ kanañ ar gousperoù e brezhoneg penn-da-benn, met o vezañ ma verve faltazi, ha marteze fentigell e-leizh en e gokenn, o vezañ ma 'z eo bet un aozer gwerziou, gwell dister emichañs, met da vihanañ un damskeud, ur raktres eus un arzour. N' ouzer ket bete vremañ meur a dra diwar-benn ar hir-herêrezh, hogen ne oa ket peurechu va nav bloaz pa grogis da blediñ gant ar c'hoariva.

Skrivet am boa da geñver Nedeleg ur mesaergan hanter-vrezhonek hanter-c'hallek ; mab henañ ar sakrist, merc'h ha mibien paotr al lizheroù, daou golist koshoc'h egeton, sed aze va c'hoarierien, hag an arvestourien, va c'herent ha re ar vugale all. Ur grennardenn a oa ar Werc'hez, met ger ebet n' he devoa da lavarout, o vezañ ma 'z oa kalz re abaf, ha netra d' ober nemet derc'hel war he barlenn ur poupig graet gant pilhoù, ur « Mabig Jezuz » hogos ken bras ha hi. Darn eus ar baotred am boa dibabet da vezañ an tri roue ; bez' oa eveljust ur sant Jozeb hag ur mesaer hepken, ha gantañ un dañvad a rae « ouek, ouek » a-dal ma veze gwasket an disterañ war e gof. Dirollañ a rae neuze an arvestourien da skrignal ha mont a raen kerkent all en gouez, rak roll ebet n' am boa miret evidon, a-walc'h e oa din reizhañ ha ren pep tra: « Metteur en scène » a oan dija, mar plich ganeoc'h !

A-drugarez d' am mamm, gwisket eus ar c'haerañ e oa va zud gant kozh gweledennoù ruz-tan pe c'hlas, pallennoù gwele ha liboudennoù all a bep seurt liv, kurunennoù hag hobregonoù paper alaouret evit ar Rouanez. Balthazar, mab ar sakrist, en devoa degaset eus ar gêr tog kouevr e donton bet gwech all paotr an tangwall n' ouzon ken pelec'h. Leur an ti a rae dimp evit c'hoari-lec'h, kraou ar Mabig Jezuz a oa ur foeltrenn seminal, ha da c'hortoz o zro chom a rae ar rouanez hag all kuzhet en deñvalijenn dindan ar viñs. En ur ger, aozet e oa an holl draoù gant mil evezh. Kement ha diskouez pegen aketus e veze darn eus va c'hoarierien, va roue Morian en devoa livet en du n' eo ket hepken e zremm, e zaouarn hag e zivrec'h, met ivez... e deod.

81

Ur bloaz goude e fellas d' am strollad c'hoari en ostaleri va zad ur pezh hiroc'h, tri pe bevar arvest war a gredan, skrivet ganin-me c'hoazh ur wech. Leun kouch e oa sal vrasañ an ti melen, un dra aes da intent, rak c'hoari a raemp ur sadorn da noz, netra ne gouste da zen, ha war ar marc'had kinniget e voe goude da bep arvestour bara 'g amann, kafe gant laezh pe un dakenn hini-kreñv. E stumm-se ne oan ket eveljust war var da rastellat madoù gant ar c'hoariva. Yaouank e oan, a gred deoc'h ? Siwazh, eviton da vezañ aet war goshaat, n' am eus ket c'hoazh kavet an tu da binvikaat gant ar vicher-se.

Gwashañ 'tra, mar bez un dro bennak dastumet ha moulet va holl oberennoù, ne vo ket kavet en teskad ar pezh-se c'hoariet dirak kement a dud ur sadorn da noz, gant va mammig o wiskañ hag o tiwiskañ ar c'hoarierien. Ankounac'haet krenn am boa danvez ha zoken anv ar bennoberenn-se, met ul lajadig kent na darzhas ar brezel diwezhañ e tegouezhas din en em gavout gant ur c'habiten-lestr - unan eus va c'hoarierien vihan, aet bremañ da anaon evel an darn vuiañ eus ar re all. N' am boa ket gwelet ar c'heneil-se abaoe un daou-ugent vloaz bennak hag a-greiz-holl e stagas da ganañ ur pennad eus e roll :

Teutatès veut du sang,

Gloire à notre dieu tout-puissant...

Neuze e teuas din da soñj va fezh-c'hoari, un dra fromus e don koadoù Arvor gant drouized, brezelourien, tan, kurun ha gwad ken ma findaone. Ne ouien ket er mare-se e tleen un deiz da zont bale war greiz an deiz ha dirak ar bobl gant ur sae wenn e-dro din hag ur bodig uhel-varr em dorn, e-touez hor breudeur tra-mor o lidañ gouelioù ar Gorsedd e Perros, Trec'horenteg, hag e lec'h all.

(Da genderc'hel, mar karer.)

NOTENNOU

HOR MIGNONED.

- An Ao. hag an Itr. Rojer Gaudaire a gemenn deoc'h gant plijadur ganedigezh ur verc'hig Regine-Annelle, e Pariz, d' an 22 a viz Ebrel.

- Gant plijadur hon eus, klevet e oa bet ganet ur paotrig, d' ar 6 a Vezheven, e ti hor c'heneiled Anne ha Hylkje Wadman. Xander Gerrit eo bet anvet. Hor gourc'hemennoù gwellañ d' ar gerent, hag hon hetoù d' ar bugelig.

Da geñver Pask o deus an Aotrou hag an Itron Guyesse lidet o eured-aour. Hor gourc'hemennoù doujus hag hetoù gwellañ a ginnigomp dezho, hag o deus stourmet kement evit Breizh ha roet kement eviti.

Ronan Vari Loarer a zo laouen da gemenn deoc'h donedigezh vat e c'hoar vihan Gaela-Mari-Jouna, e Montroulez, d' ar 26 a vis Mae.

Hor mignon ha kenlabourer Goulc'hen Pennaod, o vont da nijlammer a youl vat, a zo bet dilestret a-us da Zien-Bien-Phu d' ar 4 a viz Mae - daou zevezh a-raok fin an emgannoù eno. Klevet hon eus abaoe e oa prizoniad gant ar Viet-Minh. Spi hon eus en em denno dibistig alese hag e teuo buan en-dro d' e vro.

KANŶ. -

Marvet eo d' an 3 a Vezheven, e Pariz, Cecile ar Minous, mamm ha mamm-gaer hor c'heneiled Ronan Chevalier ha Mona Kiger. Hor gourc'hemennoù a gengañv.

PROFOU. -

Setu roll ar.profoù hon eus degemeret e-korf an daou vis diwezhañ :

EBREL.

- F. ar Bleiz, 200 lur ; Dll Cazin d'Honincthun, 1.000 ; Ch. Cornec, 600 ; Dizanv, 5.000 ; Dizanv Breizh-Uhel, 2.000 ; Itr, V. a Sant-Per, 5.000 ; Yann Thomas; 1.060 ; Yann ar Beg, 10.000 ; A. Noury, 5.000 ; Dr Kervran, 500.

- War un dro, 30.300 lur.

MAE.

- Kab. Y. Souffes, 1.000 lur ; Remont Bothorel, 300 ; A. Gwazdoue, 600 ; A. Le Bars, 50 ; Dll J. Queille, 500 ; Fañch Elies, 1.000 ; Dll Baron, 5.000 ; J. Soulard, 1.000 ; Autret, 100 ; L. Fleuriot, 1.000 ; A. Noury, 1.000 ; G. Etienne, 3.000.

- War un dro, 14.550 lur..

Abaoe derou ar bloaz hon eus bet 99.500 lur a brofoù. Warlene, evit pevar miz kentañ ar bloaz e oa degouezhet ganeomp 39.354 lur. Salv ma kendalc'ho an traoù da vont evel-se ! Meuleudi d' hor profourien galonek. -

413 KOUMANANTER. -

Kreskiñ a ra bepred (goustadikoc'h, siwazh) niver hor c'houmananterien, a-drugarez d' hor bruderien. 4/5, ha n' eo ket 9/10 eus ar c'houmanantoù nevez abaoe derou ar bloaz a zo bet « dineizhet » gant hor c'houmananterien gozh. Setu ar sifrennoù : Aodoù an Hanternoz, 58 ; Penn ar Bed, 90 ; Il ha Gwinum, 31. ; Loer Izelañ, 28 ; Mor Bihan, 27 ; Paris ha tro-war-droioù, 82 ; Departamantoù all, 52 ; Trevadennoù Bro-C'hall, 7 ; Iwerzhon, 12 ; Bro-Skos; 2 ; Bro-Gembre, 9 ; Bro-Saoz, 3 ; Stadoù-Unanet, 4 ; Kuba, 1 ; Kanada, 3 ; Arc'hentina, 1 ; Brazil, 1 ; Helvetia, 1 ; Sueden, 1.

LIZHIRI HOR MIGNONED. -

« Goude bezañ gwelet el Liamm e oa pemp koumananter dezhi amañ er Stadoù Unanet, e teu ar c'hoant din gouzout piv eo an tri n' anavezant ket.

Laouen e vefen da anaout ha da zaremprediñ ho lennerien amañ.

Amañ e Reading er Pennsylvania, kement ha ma ouzon n' eus breton all ebet ganet er vro. Tud troet gant Breizh a dle bezañ, rak kavet am eus er « Public Library » ur bern levrioù diwar-benn hor Bro. Gwelet am eus ivez ul levr eus an Testament kozh hag an Aviel e Kembraeg. Eus Bro-Gembre hag Iwerzhon ez eus bet

deut kalz tud amañ da chom eus a bell 'zo. Er «Berks County » ez eus ur ger anvet « Caernarvon » un all «Morgantown » ha « Cumru » eo anv unan eus pennoù-kanton hor c'hontelezh.

Hor c'henvroidi emañ an darn vrasañ anezho o labourat hag o chom e New-York, pe war-dro New Jersey. Bet on meur a wech e New-York pa vez ur c'hoan pe ur c'hrogad dañs bennak gant « L'Association Bretonne ». Ar pep brasañ eus ar re-mañ a zo - bretoned kant dre gant...

Pennadoù ha notennoù « Al Liamm » a blij din. Met a benn pebare e kavfomp enni luc'hskeudennoù, kartennoù, studiadennoù diwar-benn anvioù tud, kêrioù ha chomlec'hioù diwar ar maez, h.a.

Y. M. Reading (Penn.) U.S.A.

CHOMLEC'H KEMMET. -

Chomlec'h nevez Remont Bothorel o zo : 18, rue du Château, MORLAIX, Finistère. (E chomlec'h kozh a oa 16, rue de Paris, e Montroulez ives.)

ALI D'AR GOUMANANTERIEN. -

Hol lennerien kemmet o chomlec'h ganto, a zo pedet d' hel larout hep dale d'ar sekretourva : a-hend-all e vez kollet amzer ha skouerennoù eus « Al Liamm ». Fur eo ivez kas un adkoumanant hep termal. « Time is money. » Trugarez. Eus hon tu e strivimp da embann AL LIAMM e poent hag en amzer.

KENDALC'H KELTIEK. -

Ar C'hendalc'h Keltiek a vezo graet hevlene e Dulenn, eus an 20 d'ar 27 a viz Gouere. Evel kustum e vo prezegennoù, bodadegoù-studi hag abadennoù a bep seurt. Krediñ a reer e vo kalzik Bretoned o vont di. Ar rea garfe mont a rafe mat kas o anv da rener Skourr Breizh : Roparz Hemon, I-A Leeson Park, Dublin.

KAMP AR VREZHONEGERIEN. -

Kamp ar Vrezhonegerien a vezo graet hevlene e Kleden ar C'hab, etre Gwaien ha Douarnenez, eus as 6 betek an 22 a viz Eost. Priz an devezh er c'hamp a vo 500 lur (450 lur evit an izili). Evel kustum e vezo kentelioù ha prezegennoù dudius a bep seurt. Al lec'h a zo brav-tre, hag ar skol, e-lec'h ma vo graet ar C'hamp a zo eus ar gwellañ. Un dra nevez er C'hamp hevlene a vo DEVEZH AL LIAMM : ar re a ra war-dro ar gelaouenn a zeuio da zisplegañ petra o deus graet, petra n' o deus ket graet ha petra o deus c'hoant ober. Respont a raint d' ar goulennoù a vezo graet dezho, ha laouen e vint o klevout alioù ha tamalloù o c'houmananterien. Ar re-mañ a zo pedet da zont niverus d' an devezh-se a vezo graet d' ar meurzh 17 a viz Eost. Peogwir n' eus ket kalz plasoù er c'hamp, ar re o deus c'hoant mont a rafe mat skrivañ ar c'hentañ ar gwellañ d' ar renerez : Itron de Bellaing, Cadolan, GUINGAMP (C.-du-N.).

84

SKOAZELL D'AR BREZHONEG. -

Kas a reomp da soñj d' hor mignoned ne resevomp skoazell arc'hant digant kevredigezh ebet. Ar re eta a fell dezho e vije moulet levrioù nevez a rank kas o frofoù war eeun d' Al Liamm.

KENLABOUR. -

Goulenn an Ao. Ters gant ar re a ra war-dro ar gelennadurezh hag eñ e vijent darev evit e skoazellañ el labour-mat :

- 1) treiñ e brezhoneg nemetken « Les mots du breton usuel -> » pe gentoc'h reiñ e brezhoneg ster ar gerioù n' heller ket displegañ dindan stumm ur skeudenn hepken ;
- 2) sevel roll ar gerioù, gant niver implij pep unan, a gaver el levriou gouest da vezañ lakaet etre daouarn ar vugale.

Ar re a fell dezho ober el labour-se a dle skrivañ a-raok da : F. Ters, 72, rue Henri-Regnault, Saint-Cloud (S.-et-0.).

AR STOURM EN AFRIKA AN HANTERNOZ. -

D' ar 5 a viz Ebrel ez eus bet sinet e Kairo un emglev anvet « Emglev Strollad an Dieubidigezh evit ar Maghreb Arabek ». Holl strolladoù broadel Afrika an Hanternoz a gemer perzh en emglev nevez : evit Marokko, Strollad Demokratel ar Frankiz, Strollad an Adstummidigezh Marokat, Strollad an Unvanidigezh hag ar Frankiz, Strollad an Istiglal ; evit Aljeria : Strollad ar Bobl Aljeriat (Messali Hadj) hag ar Strollad El Bayan ; evit Tunizia : an Destour Kozh hag an Destour

Nevez. Ar pal a zo stourm evit ar frankiz klok, hep unvaniezh ebet gant Bro-C'hall, hep kenrenerezh ebet gant ar C'hallaoued a zo en Afrika an Hanternoz. A-hend-all en deus skretourva an Emglev Arabek kemeret dindan e evezh an holl vagadoù soudarded hag emsaverien a zo bremañ o stourm gant an armoù en Afrika an Hanternoz ha roet en deus dezho ur skoazell kentañ a 15 milion (hervez Le Monde).

YEZH HA LENNEGEZH EN ALBANIA. -

Albania a zo ur vro vihan, tost teir gwech bihanoc'h eget Breizh : 1.154.000 den a zo o chom enni. Divroidi a zo, dreist-holl e Iougoslavia (600.000 e rannvro Kossovo ha Metohija), e Gresia (60.000) hag e Sikilia (150.000, abaoe un divroadeg eus ar 15vet kantved). Ar skrid albanek kentañ anavezet a zo un nebeut linennoù eus ul lidou badeziant eus 1462. Ar skrid pouezus kentan a zo eus 1555 (gant Djon Busuku) met er 17vet kantved eo e krog ar yezh albanek da vevañ e gwirionez evel yezh skrivet, dindan levezon beleien gatolik Shkodra, en o zouez Frank Bardzi (oberour ur geriadur latinek-albanek) ha Peter Bogdani, oberour ur Buhez ar Sent. En 18vet kantved ez eo tro ar reizhgredennourien (ortodoksed) da labourat evit o yezh, gant Miechtri Daniela, oberour ur geriadur albanek. En 19vet kantved ez eus skrivagnerien a boues evel Jerom a Rada (1814-1903), rener an emsav politikel ha lennegel, ha barzh brudet, Gabriel Dar (1826-1885), barzh (e Varzhoneg anavezetañ **Kan Diwezhañ Bali**) ha Zef Zerembe (1843-1891), barzh (e varzhoneg anavezetañ **An Tonkadur**).

Tad al lennegezh albanek a zo Kontantin Kristoforidi (1830-1895) : o treiñ ar Skritur Sakr en e yezh, en deus krouet an albaneg lennegel diwar ar rannyezhoù. Ar benveg krouet gantañ eo en deus roet tro da Naim Frasheri (1846-1900) da sevel ur gwir lennegezh a-vremañ : gouestlet gantañ e vuhez d' ar stourm evit frankiz politikel, ha speredel e vro, en deus Naim Frasheri savet ar barzhonegoù kaerañ, war a lavarar, eus al lennegezh albanek, evel **An tropell hag ar vro**, an dastumadenn kanaouennoù **Bokedoù-Hañv**, hag un **Istor Skanderberg** e 22 ganaouenn (Skanderberg a zo den-meur ar vro). Barzhed all a zo bet : Filip Chiroka (1859-1935), ar barzh-brezelour Mikhal Grameno (1872-1931), Anton Tchako (1866-1930), Ndre Mjeda (1866-1937). Brudet eo ivez an arnodskridour Faik Konitza (1875-1941) hag an eskob reizh-gredennour Fan Noli (ganet e 1880) en deus troet Shakespeare, Cervantes, Ibsen, h.a.

85

E 1912 en o deus emsavet Albaniz ha gounezet o frankiz : e 1915 avat e oa sinet e London un emglev kuzh etre ar Re Unanet evit rannañ ar vro etre Serbia ha Gresia. Bro-Italia an hini eo a lakaas an emglev da derriñ dre embann e 1917 frankiz ar vro. Eveljust ne oa ket dre garantez ouzh ar reizh e rae Italia kement-se, rak en Eost 1918 e roe Kuzul ar Peoc'h, e Pariz, ur mañdad war Albania da Italia. Ur gouarnamant a-du gant Italia a zo savet e Durres, met un emsavadeg vroadel a zo, hag ur gouarnamant broadel a zo savet e Lushnja e 1920 : adc'hounezet o bro gant ar vroadelourien renet gant Ahmed Ben Zog. E 1920 e teu Albania da vezañ ezel eus Kevredigezh ar Broadoù.

Anavezet eo gant an holl ar c'hemmoù politikel a zo bet c'hoarvezet er vro er bloavezhioù diwezhañ. Met ne fell deomp komz amañ nemet eus yezh ha lennegezh. E 1938 e oa embannet er vro 6 kazetenn pe kelaouenn, a veze tennet diouto 17.000 skouerenn en holl ; e 1945 e oa embannet 15 kazetenn ha 14 kelaouenn, gant 83.060 skouerenn en holl ; e 1953 e oa embannet 41 gazetenn pe kelaouenn. Levrioù a vez moulet kalz ivez, anezho dreist-holl, ret hel lavarout, levrioù a varksiadegezh : a-raok 1952 e oa bet moulet dija 1.231.700 skouerenn diouto. E 1952 ivez ez eo bet moulet ar c'hentañ romant savet biskoazh en albaneg.

E Gwengolo 1953 e oa 593 lenndi er vro.

Evit ar skolioù, ne oa ket a skolioù-stad a-raok 1920, skolioù misionou hepken ; e 1939 e oa 679 skol gentañ ha 22 skol a eil derez ; ne oa avat Skol-Veur ebet ; e 1945 e oa savet 336 skol nevez ; e 1946 e oa votet lezenn an deskadurezh dre ret ha degemeret an doare soviedat da rannañ ar studioù (tri derez e-lec'h daou) ; e dibenn 1951 e oa muioc'h eget 2.000 skol gentañ, 200 skol a eil derez, ha 24 skol a drede derez ; ouzhpenn-se e oad krog da sevel ur Skol-Veur, kevrenn ar skiantoù o vezañ savet da gentañ-holl. - Un dra c'hoazh : difennet e vez kenteliañ ken ar yezhoù marv.

AR BLIJADUR DA C'HOUZOUT LENN O YEZH. -

En niverenn 2 (1954) eus « COURRIER » an UNESCO ez eus ur pennad plijus gant an

Nevez-Zelandad, H. W. Gaudin : ennañ e tispleg an den penaos en deus lesket da vorianed enezenn Malaita, en enezeg Salaun, lenn o yezh. Ar yezh-se, an araereg, a zo komzet gant un nebeut miliadoù tud hepken. Dianav e oa, a-hend-all, d' an Ao. Gaudin, ha dianav ez eo chomet dezhañ betek an diwezh. Displegañ 'ra en doare-man penaos e labourer : « Evit sevel ur gontadenn e yezh ar vro e ris evel-hen : tresañ war an daolenn du ur c'hi o harzhal dirak ur wezenn a oa pignet enni ur c'hazh ; diskouez a ris ar skeudenn da unan eus gwazed speredekañ ar gêriadenn, ha goulenn gantañ (Notenn : e pidgin e oa graet ar goulenn, ar c'henyezh komprenet gant an holl) kontañ din an istor en e yezh ; skrivañ a raen an istor-se, a-feur ma kleven, e skritur mouezhionel. A-barzh pell em boe un dastumadennig istorioù, hag o amprouin a ris un den all eus an hevelep meuriad, o c'houl gantañ lavarout din en-dro e pidgin pezh a lannen : evel-se e oan sur e oa reizh va skrid. Va gwreg a reas neuze skeudennoù, ha liesskrivañ an istor.

86

Dont a reas an deiz bras ma c'hellis reiñ ar follennoù d'an diskibien. Holl dud ar c'hlas, dalc'het ganto o anal, a chomas ur pennadig alvaonet gant ar sebez. Ha neuze e tarzhas un tousmac'h spontus : an holl a lenne, pe a lakae an amezeg, diouiziekok'h an tamm anezhañ, da lenn. Sabatuet e oamp, va gwreg ha me, hag e-pad div eurvezh e selljomp ouzh hon diskibien o lenn hag oc'h adlenn, a-wechoù lizherenn ha lizherenn, istor ar c'hi hag ar c'hazh. Evit ar wech kentañ en istor e oa tud eus o meuriad o lenn un istor savet en o yezh. Bras e voe an efed war o speredoù : o buhez-pad o doa bet avi ouzh ar re o doa desket, e skol ar mision, lenn un nebeut gerioù saoznek en ur bibl. Ha bremañ e welent e oa posubl, e oa aes a-walc'h zoken, lenn ur skrid en o yezh. Ur souezh e oa gwelout o levez. »

LEVRIOU, KELAOUENNOU, LIZHIRI

...Degouezhet eo ganeomp pempvet niverenn ar gelc'hlizher « Bretagne Réelle » (100 lur. J. Quatreboeufs, 9, rue du Thabor, Nantes.- C.C.P. 754-82).

...Gwirioù Breizh a zo trede niverenn ur gelc'hlizher o tifenn gwirioù Breizh e Bro an Naoned.

...Koun Breizh a gemenn deomp e vo lidet deiziadoù hon istor broadel d' ar 27 a viz Mezheven e Bains-sur-Ouest, 25 a viz Gouere e Sant-Albin. (G. Vallée, 28, rue d'Antrain, Roazhon.)

...Bet hon eus pedervet niverenn an Tribann o reiñ keleier ar Gorsedd. Setu ar pezh hon eus lennet diwar-benn ar gevredigezh anvet « Fondation Culturelle Bretonne » :

« Nous savons par « La Bretagne à Paris » que cet organisme rattaché au C.E.L.I.B. a désigné son Comité. Nous n'en n'aurions que du bien à dire, si M. Toulemont n'avait ajouté ce commentaire : « Le Comité ne comprend que des militants de l'action culturelle ayant déjà fait leurs preuves. On verra que tous les groupements culturels de Bretagne y sont représentés, ainsi que la Faculté des Lettres de Rennes, c'est une garantie d'équité, etc..., etc... »

« Groupements représentés : C.E.L.I.B. ; Ar Falz ; Kendalc'h ; Bleun Brug ; Radio-Bretagne ; Jeunesse Etudiante ; Cercles Celtiques ; Faculté des Lettres.

« Il existe un groupement, le Gorsedd des Bardes, qui a été le premier à faire du breton sa langue officielle. M. Toulemont se voile la face rien qu'à l'énoncé du mot « Barde ». Passons. Mais il y a toute une école linguistique bretonne dont l'organe est la revue AL LIAMM (400 abonnés) et qui se voit exclue du Comité pour une méchante querelle d'orthographe. Là nous protestons au nom de cette équité qu'on a invoquée à tort. »

Trugarez d' « an Tribann » a gred diskuilhañ ar wirionez.

(P. Loisel, 70, avenue du Plessis-Tisson, Nantes.)

87

Kaset eo bet deomp Irisleabhar Cellteach en iwerzhoneg, gouezeleg, kerneveg, brezhoneg ha kembraeg. (343 Belsize Drive, Toronto 12. Canada.)

...N' eo ket an istor desket deomp er skol a gavomp e levrig Yann Poupinot « LA BRETAGNE CONTEMPORAINE » - moan eo, kant pajenn ennañ, hogen pegen fonnus - na kennebeut pennaou bruderezh aozet evit ar stourmer breizhgar, livet re flamm, gwir

pe diwir, petra 'vern.

Da gentañ, trugarez da Yann Boupinot bezañ graet e seizh gwellañ e-sell bezañ gwirion ha nep-tu. Ezhomm hon eus da welout sklaer. Hag ouzhpenn tremenet poent oa deomp da gentañ deskiñ hon istor abaoe 1789 - al levr 'zo leun a fedoù ha n' anavezet ket peurliesañ - ha d' an eil tennañ ar gentel anezhañ.

Er pajennoù kentañ, prouiñ a ra an oberour unander Arvorig ha penaos Breizh, an elfenn buhezekañ anezhi a en em lede e marevioù klodusañ hec'h istor war zouaroù all Arvorig. Tezenn hoalus - honnezh : hini hor c'helc'h-bevañ. Gwir zremm ar chouanerezh a zo diskouezet deomp ivez, ha dreist-holl dihun Breizh e diwezh ar c'hantved diwezhañ. Tennet 'vo evezh al lenner gant ar pajennoù war an arboellerezh, ur gwir taol-mestr. Al levr a ginnig un dremm klok eus hor Bro etre 1789 ha 1914, he faouentez hag he finvidigezh, rouez ar re na zeskint ket un dra bennak eno.

An darvoudoù, ar skouerioù, an evezhiadennoù a vo magadur fonnus da re an Emsav. Ha pebezh diskuliadur evit ar re nevez, ar re na ouzont ket he deus bet Breizh un istor abaoe an dispac'h gall. Ar re glouar ivez - ar re na gredont ket hep gwelout - a gavo un toullad arguzennoù d' o feurgendrec'hiñ. Gwall ezhommek omp eus seurt labourioù sirius.

Ar fedoù hag ar sifrennoù roet a ra o-unan prosez ar jakobinelezh, ar stad c'hall kreizennerezhel o vevañ diwar goust ar rannvroioù dizeriet. Gant mall e c'hortozimp bremañ an eil levrenn, enni istor an Emsav a-raok hag e-pad brezel 40.

« La Bretagne Contemporaine » a zo embannadur ar skol istor kelennet e Kêr-Vreizh gant Yann Boupinot ; evel al levr, heverk eo kentskrid Per Laurent, rener « Ti ar Vretoned ». (N' eus ket bet moulet ur bern skouerennoù). Goulenn a c'heller an oberenn digant sekretourva Al Liamm : P. ar Bihan, 13, route de Vaugirard, Meudon (S.-et-O.) - C.C.P. Paris 5349-08. - 300 lur franco.

P.A.B.

...Meneget eo bet « Al Liamm » e niverenn 23 « Le Républicain des Côtes-du-Nord » embannet e Dinan.

...hag ivez er gelaouenn « War Sao » eus Ivry. Setu lodennoù eus ar varnadenn a c'heller lenn war ar gazetenn-mañ : « Ar gelaouenn Al Liamm hag he deus kemeret lec'h ar gelaouenn « Gwalarn » a zalc'h da stourm evit ar brezhoneg. He doare da vezañ a zo kalonek a-walc'h en ur mare ma 'z a kuit ar vrezhonegerien eus ar vro ha ma tilez an Iliz yezh ar vro... »

Ha setu dibenn ar pennad : « M' hon eus plijadur o kavout e-barzh Al Liamm studiadennoù war stad ar yezhoù bihan er Bed e vezomp kerseet pa ne gavomp enni barnadenn ebet na zoken an disterañ meneg eus an abegoù kevredigezhel a zo pennabeg stad fall an arboellerezh e Breizh hag he diskar sevenadurel. Arabat e vije, zoken evit mad ar yezh, chom dic'houzvez eus ezhommoù ha goulennoù ar vicherourien hag ar gouerien vreizhat. Yann Sohier a oa en e soñj ober eus ar brezhoneg ur benveg sevenadurel diouzh ezhommoù ar bobl. Siwazh, marvet eo re abred hag ar gelaouenn en doa krouet a zo marvet gantañ. Renerien Al Liamm a rankfe lakaat en o soñj ne vo ket posubl adsevel ar brezhoneg ma ne vez ket kendalc'het gant e oberenn ».

88

...AIMSIR CHEILTEACH, niverenn miz Meurzh, a zo o paouez dont er-maez, a zo, evel kustum, leun a geleier plijus. Dedennet omp bet dreist-holl gant ar c'heleier eus Kendalc'h ar Broadoù Bihan a zo bet graet e Munster, Westfalia, e miz Mae. Studiet eo bet stad an traoù e meur a vro bihan, ha degemeret eo bet gant an holl ar wirionez-mañ : tonket eo an emsav sevenadurel da c'hwitañ en ur vro pa ne vez ket un emsav politikel ouzh e skoazellañ. An Dr. Hilcman, eus Westfalia, en deus degaset da brouenn skouer Bro-Brovañs, e-lec'h m'emañ an emsav sevenadurel o c'hwitañ dre ma n'eus ket bet gouezet plediñ gant ar politikerezh. Klask a ra ar C'hendalc'h diazezañ lezennoù etrevroadel da wareziñ ar broadoù bihan sujet hag evit-se emañ e darempred gant an UNO hag ar bodadoù etrevroadel all. - Evit koumanantiñ d' ar gelaouenn akriavañ da Aimsir Business Manager, 18 Learmonth Gardens, Edinburgh, Scotland.

...Hor c'heneil mat A. ar C'halvez, beleg ha skolaer e Ploueg ar Mor, a zo krog da embann un dastumadenn c'hwec'hmiziek anvet SKOL. An niverenn gentañ a zo deut er-maez nevez zo hag enni e kaver pennadoù pouezus a bep seurt : Ar Brezhoneg er akolioù kristen ; Aergelc'h breizhat ar skolioù ; Penaos kelenn ar brezhoneg evel eil yezh ; Ar C'hembraeg e skolioù Kembre ; Levrioù evit ar vugale hag ar

skolioù ; ha notennoù plijus. Ar c'houmanant a zo 200 lur, da venañ kaset da Abbé Le Calvez, Plouezec, C.C.P. 863-85 Rennes.

Kement hini a zo dedennet gant kudenn deskadurezh ar brezhoneg a zo e zlead koumanantiñ d'ar gelaouenn-se, hag a labouro kalz war un dachenn n' eo ket bet difraostet betek-hen.

...Eil niverenn HOR YEZH a zo deut er-maez nevez zo ; enni ez eus ur pennad gant Arzel Even diwar-benn ul levrig gant an Ao. Falc'hun diwar-benn skritur ar brezhoneg; ur studiaden gant A. J. Raude diwar-benn ar ger Hevelep, ur pennad talvoudus diwar-benn gerioù strilhouriezh, gant Abanna, skridoù diembann e brezhoneg ar c'hab gant Clet Teven, kendalc'h an enskrivadurioù brezhonek, ha kalz a draoù plijus all. En niverenn gentañ e oa 21 bajenn ; en eil niverenn ez eus 31 bajenn ; en trede niverenn, a zeuio er-maez e-kreiz an hañv e vo muioc'h a bajennoù c'hoazh; ha skridoù talvoudus. - Koumanant 500 lur ar 4 niverenn, Kas an arc'hant da P. Denis, Douarnenez, C.C.P. 1,499-51 Rennes.

89

...Daou levrig liesskrivet a zo deut er-maez dija e-touez LIESSKRIVADURIOU AL LIAMM : LLENA DAVIS, danevell gant G. B, Kerverzhiou, ha DAOU VOUJIK BIHAN, danevell gant N. Schedrin, troet gant Per Denez. Priz al levrioù a zo 80 ha 100 lur. Koumanant d' ar rummad 350 lur, da gas da P. Bodenan, 3, chemin des Potiers, Ergué-Armel, Quimper. C.C.P. 212-23 Rennes. An trede niverenn eus ar rummad a zeuio er-maez e-pad an hañv.

...Ul levr fentus e galleg a-zo o paouez dont a zindan ar wask e ti Plon « Picou, fils de son père », Hor gwellañ gourc'hemennoù d' hormignon ha koumananter E. Ollivro, oberour al levr. Spi hon e ray perzh. Displegañ a ra al levr bugaleaj un tregeriad yaouank, e drubuilhoù er skol hag er ger e Louaneg. Ar re a gar ar fent hag ar goaperez a ra brud Tregerik o devo plijadur bras ouzh e lenn.

VA ZAMMIG BUHEZ. -

Setu amañ un nebeut gerioù a vo kavet diaes gant tud 'zo marteze :

ARMOLUT : (e galleg) « harmonium ».

BAJANEK : ur gazh, un den dibalamour, pe disampart.

BUTUN-KAROT : butun chaok.

KOLIER LEM-LAKA : (e galleg) « faux-col ».

DRUILHAD : ur bern traoù pe ur bern tud.

ENEZ-TERC'H : (e galleg) « île d'Er ».

EOL FAV TER : (e galleg) « créosote ».

GOUELEDENN : (e galleg) « cotillon ».

GRAV : sav, krec'h.

CHOU 'TA ! : e vez kriet war ar yer d' ober dezho redek kuit.

ITRIK : Gwidre.

JUBILE : koef bihan Bro-Dreger, koef d'ar pemdeiz.

LOSTENN : (e galleg) « pan de chemise », ha n' eo ket sae na brozh.

LOUZAOUENN AR PAZ : (e galleg) « Tussilage ».

PIFAD : (ober ur pifad) ur sac'had, ur c'horfad hini-kreñv.

PIPI : ur pipi = un den hep e bar gant ar fentus pe ar souezhus ma vez.

RAL : un dra na weler pe na glever ket alies.

SKRIBITON : un den a vent izel ha blin da welout.

SIN : (ober sin) - ober an neuz.

SOF-KONT : e-leizh, ur bern mat.

STEK : (gouzout ar stek) gwech all e veze c'hoariet gant kartoù dre amañ ar stek, un dra diaez-tre hervez m' am eus klevet, ha dre se, gouzout ar stek a zo bezañ ampart kenañ d' ober tra pe dra.

TEOL : (e galleg) « Salsepareille ».

TOG FONS HIR : (e galleg) « Gibus, haut de forme ».

TOURC'H-PAOTR : (e galleg) « virago ».

AL LIAMM 45

AL LIAMM
Tir na n-òg

NIVERENN 45

Gouere – Eost 1954

TAOLENN

Va steredenn, gant Ronan Huon	3
Donjer, gant Jakez Ugen	4
Gwreg yaouank paour..., gant Pol Rolland-Gwalc'h	5
Devezhioù goañv, gant Youenn Olier	6
Nouchka, gant Borislav Stankovitch, tr. Y. Drezen	8
Bisousig, kazh an tevenn, gant Abeozen	13
Peder c'hontadenn	48
An enebourien, gant Abanna	58
Ar gouezeleg, gant Per Denez	60
Lennet hoc'h eus, gant Benead	71
Notennoù	73

Va steredenn

gant Ronan HUON

Roit din va steredenn,
 m' he lakain 'barzh va godell,
 m' he zennin pa garin,
 m' he diskouezin, e kuzh,
 e kornioù an oabl hag ar mor
 d' ar re a blijo din.
 Roit din va steredenn,
 a c'hellin derc'hel em daouarn
 evit o zommañ
 e goañv an deizioù.
 Un tamm anezhi a roin
 d' ar re a garan.

E pradeier an hañv
 e kan c'hoazh ur wazh
 ennañ livioù va steredenn
 pa 'z a an heol da guzh.
 Roet am eus tammoù
 eus va steredenn
 ha bremañ am eus riv.
 Na sot e oan da reiñ va steredenn
 da n' eus forzh piv.

Donjer

Da Vro Gozh va Zadoù.

Ur mintin e klevas :
 « Da c'hervel a rin,
 Chom aze... »

Chom a reas un eurvezh,
 Div eurvezh,
 Teir eurvezh,
 Un devezh leun e chomas.
 D' an trede deiz edo c'hoazh o c'hedal.
 Glav a rae.
 Ur sizhunvezh a badas
 Ha mizvezhioù
 Ha bloavezhioù.
 Ur c'hantved holl a dremenas,
 Ha luc'hed, ha kurun, hag avel.
 O c'hedal edo bepred...

Neuze e tigoras he daoulagad
 Hag e welas
 Kemmet-holl e oa neuz an tachad
 Kemmet-holl dremm ar bed
 Kemmet an dud.
 Kemmet o meiz
 Kemmet o lavar
 Kemmet o doueoù.

Hag ez eas gant ar straed
Davet an davarn digemmet
Hag ec'h evas, hag ec'h evas, hag ec'h evas.
Hag e kouezhas me'v-dall
Ha gwazed he gwallas
Ha gwazed he gwerzhas
Ha gwazed he lazhas

E-pad ma oa
Me'v-dall, me'v-dall, me'v-dall,
Me'v-mik,
Me'v-mik-dall.

Jakez UGEN.

4

Gwreg yaouank paour....

Gwreg yaouank paour a welis
dorn he mab diwezhañ 'n he dorn,
Tri baotrig c'hoazh war he lerc'h,
Ha dic'hoarzh o temp
en o dilhad skuizh
liv an Dienez,
Ha kadarn o femp
war hentoù kriz
ar Bed divent
ha didruez.

Daoulagad boull ar bugelig
e zorn e dorn ar baourez c'hlas,
Daoulagad glan ha dianken,
enno stivell hollbad ar Baradoz
o strinkañ hinon hag estlamm,
e kejas va sell
gant o skleur ken bev.

Ha sklinter e laras o goulou :
Kaerat mammig va hini-me,
Rouanez uhel ha galloudus
dreist da C'halloud ar Bed !
ne ouezez ket ?
- Gouzon, a glevis em c'hreiz.
Hag uvel e stouis,
Itron Veur a welis.

POL ROLLAND-GWALC'H.

(o vont gant ar « Pont du Change », Lyon, 18 a viz Meurzh 1954.)

6

DEVEZHIOU GOAÑV

(Heuliad)
gant Youenn OLIER

Donedigezh

War-du ar c'hornog e penn an hent

an dremmwel ;
bolz an neñv a ziskenn trumm
kafunet ;
an oabloù a dap an douar blin
simudet
ha linennoù arwenn liñselioù yen
astennet
a dec'h en ec'honder blot ha mut
hep herzel.
A-boan, a-dreuz ar vrumenn, ma par
un dasskleur
war c'horre dourioù lent ar stir
a lugud
e pradoù disliv ar glannoù bas
o tevel.

Broutac'h un devezh digas a wask
war-lerc'h splannder tomm un devezh ankouaet
an hollved diek
a bleg d' e donkad
hep spi na joa.

Beure

Latar arwenn war ar menez
'n em stlej hep fin e-tal an oabl ;
an neñvoù izel leun a huzil
a zo troc'het gant krec'hioù du.

Lammdour ar bre a zo dic'hlannet ;
gant kruz ha roc'h e vont war-raok
e zourioù priek a verv dispac'het
a-hed ar straed kousiet a fank.

Plaender ar stêr he froudoù herrek
a gas didrouz he gorre gwer
tramek ar run hen lonk hep dale :
heñvel eo ar stêr ouzh ur c'helan moñs.

An heol zo marv ha pep mouezh 'zo tavet ;
en dic'houlou, va unan penn ez eo
o tevalañ digalon en hentoù risklus,
souchet va c'hein, ponner va fenn,

dic'houest da grediñ er goursav grataet.

NOUCHKA

gant BORISLAV STANKOVITCH
lakaet e brezhoneg gant YOUENN DREZEN

Hiziv emañ ar sul, ha kaset on bet d' ar gêr, a-enep da 'm c'hoant, diouzh an eured. Traiko, hon amezeg, a zimez e vab henañ. Tostik emañ e di d' hon hini. Aet eo di va mamm ha va zad d' ar goan, ha me a zo bet kaset en-dro d' ar gêr, evit ma ne chomo ket Nouchka hec'h-unan-penn. Amañ emañ Nouchka, abaoe disadorn da noz ; aet eo va mamm d' he c'herc'hat, moarvat evit ma vezo unan bennak o tiwall an ti hag oc'h aozañ ar boued, e-doug ma vo va zad ha va mamm en eured, hogen ivez evit ma c'hello-hi, Nouchka, kemer he flijadur, da lavarout eo sellout dreist moger hol liorz h ouzh an eured hag ar c'horoll.

Ha sellout a reas Nouchka a-hed an deiz-Doue.

Dastumet e oa bet ganti kement maen, kement keuneudenn he doa gallet kavout tro al liorz h, ha lakaet ouzh harp ar voger, sko er wezenn gignez ; ha pignet warno, ec'h arvestas ouzh ar gorolladeg. Niverus e oa an dañserien, ha me va-unan a zañse. En em lakaat a raen e-kichen ar vouilhañ paotred, ha degemeret mat e vezen ganto. N' eo ket evidon va-unan ; eviti, ne lavaran ket, evit hor c'houviadez Nouchka, m' edo he dremm grenn gwenn-holl o skediñ a-us d' ar voger, dindan ar skourroù deliaouek. Ne weled anezhi nemet lod uhelañ he bruched, aet reut o harpañ war ar voger, ha dispaket warnañ kelc'hennadoù a zugadoù hag a zoublonou.

Hag ac'hano ez arveste ouzh ar gorolladeg ; lavaret e vije bet, evelkent, ne wele den ebet. M' edo heskinet ar yaouankizoù, dreist-holl Mladen, ar paotr yaouank bras-ruz deut eus e garter betek amañ, a-ratozh eviti, ha ne echue ket kas ar c'horoll en dro hag ingalañ gwerzh-butun etre an dziganed, a-ratozh eviti.

Evit diskouez dezhi, hep mar, pegement eo karet gantañ, ne rae aotre da blac'h yaouank ebet, pa zeraoue ar « kolo », da gorolliñ en e gichen, ha ne grope e dorn all nemet em hini-me, kenderv Nouchka, evel ma vijen bet evitañ un dra bennak anezhi. Nouchka, avat, a vousec'hoarzhe, gant he sell o ruzañ warnañ, hep e welout.

9

Setu perak, pa 'z eas kuit an heol, e voen kaset d' ar gêr, a-enep da 'm c'hoant. Va zad ha va mamm a serras dor al leur gant an alc'houez, hag a zistroas d' an eured da goaniañ, gant ar soñj e vijemp aet da gousket, Nouchka ha me. Ha me, droug bras ennon, em boa kas ouzh Nouchka. Nac'h a ris ar c'hraoñ hag ar c'histin a ginnige din...

« - Debr, Nouchka ! »

Kemer a ra bara, e ruilhañ a ra dindan he bizied, da ober boullouigoù. Ne chom neblec'h, gwech e tinozell he bolero hag he hiviz, gwech e freuzh he flañsonou, hag e hej he fennad-blev :

« - Re domm eo din ! » emezi.

« - Petra a c'hoarvez ganit ? » a c'houlennen. Ne save ket he fenn, avat, evel ma n' he dije ket kredet sellout ouzhin. Dalc'hmat ez en em nozell hag ez en em zinozell, e ra avel, e troñs milginoù he hiviz, hag he daoulagad a zo enno n' ouzon dare pe dra iskis ha kuñv. Tridal a ra al loar. El leur, ma 'z omp azezet, ne sked netra nemeti, hag emañ ar peurrest e teñvalijenn ar gwez bras en-dro dimp.

D' an ampoent e stagas sonerien an eured da c'hwezhañ kreñvoc'h, ha war un ton uheloc'h, p' edod, emichañs, oc'h evañ da yec'hed an dud nevez. Klevet e voe mouezhiadeg :

« - O ! » a laoskas Nouchka, hag e savas. Ha hi ha stagañ d' en em zic'hourdañ. War vrasaat ez ae safar an eured. Houpet e voen, a-greiz-holl, gant Nouchka, stardet outi, ha kaset ganti el liorzh :

« - Deomp da welout ! » e huanadas.

Va dougen a reas e-harz ar voger, dibab a reas al lec'h an teñvalañ, e-kichen an avalenn. Va azezañ a reas war ar voger, ouzh tu an eured ; chom a reas a-dreñv va c'hein, harpet ouzh kef ar wezenn, lakaat a reas he divrec'h en-dro din, ha skoachet evel-se a-dreñv va c'hein, ez arvestas ouzh leur an tu all.

Sellout a reas ouzh an taolioù e-kichen ar voger, ouzh an dud azezet tro-dro : ar paeron, an tad-kaer hag ar vamm-gaer, ha kouvidi all. Tommet mat dezho a-benn neuze, kouezhet en e bern, damzigor ganto o jiletenn, ha diwisket o chupenn, edo kroget darn anezho da basaat, da hikat ha da zic'hwezhañ pounner. An dud-nevez, end-eeun, eo a servije ar gouvidi.

Ul letern nemetañ, a-ispilh ouzh an abrikezenn, a ro sklerijenn dezho.

E-kreiz al leur emañ ar puñs ; hag en-dro dezhañ e lintr an dour skuilhet. A-benn ar mare, e tegaser eus an ti pladadoù kig, ha gwin. Hag, e-tal an ti, dindan an apoueilh, etre ar wazed el leur hag ar maouezed e-barzh an ti, emañ an dziganed o sonañ, azezet en amc'houlou.

10

N' oa ket a blas evit Chaban ar fleüter, ha ne weled nemetañ er sklerijenn. Kroaziet en deus e zivesker ha stouet eo e benn ; gwenn-kann eo e durban ; e zremm askornek a zo du, ken eo du a-walc'h, ha, war e fleüt, emañ e vizied treut ha du o piklammat. Sonañ a ra, hag e gi e lost besk, - ma redemp-ni, bugale, atav war e lerc'h, peogwir e kroge ennomp bep tro ma tostaemp ouzh e vestr, - a zo en e gluch dirazañ. Savet e benn gantañ, e sell ouzh e vestr, ha ne fich nemet e bavioù a-raok, a-unan gant an ton. Ha sonañ a ra an holl sonerion. Hag ar paeron, pa n' eo mui evit padout, a youc'h da Chaban :

« - Chaban, dao dezhi, taol dimp ar son trist ! »

Hag an holl dziganed ha stagañ gant ar son. Ne c'hortoze ar maouezed nemet se, hag e teuont bremañ er-maez, gant ar van da selaou nemetken ; bremaik, avat, e kemerint perzh er c'horoll ivez. Ha kroget ez eus gant ar « kolo ». Savet diouzh taol ur c'houviad bennak, tennet o deus mouchoueroù, kemeret servietennoù, hag o stouiñ o fenn evit mirout a strebotiñ, en em lakaet o deus da zañsal pounner, galloudus.

« Klev 'ta, Mile, reiñ a rafen kement am eus evit bezañ ez lec'h, » a huanadas ur vouezh voud, p'edon em gwellañ estlamm. Teurel, a ris ur sell, hag e welis ur fez kostezet war zremm duard Mladen, aet ruz-tan hag ar c'hwezenn o tiverañ dioutañ.

Nouchka, a-dreñv va c'hein, a gluchas izeloc'h c'hoazh, a stouas, am stardas ouzh he brennid evel evit va difenn outañ. Mladen, avat, a save evit he gwelout em c'hichen, hep dont a-benn, evelato. Ne wele eus Nouchka nemet he daouarn kuilh ha gwenn, lakaet war va daoulin, hag ouzh va stardañ ; daoubleget evel-se, e skoachas a-dreñv va c'hein. Mladen a dennas e yalc'h hag e kinnigas din un dinar.

« - Del, da bremañ traoù ! » hag en ur reiñ din ar pezhig, e lakaas e zorn war daouarn Nouchka, hag e chomas pell krog enno.

« - Na gemer ket ! Na gemer ket ! » a lavare din Nouchka, strafuilhet bras a-dreñv va c'hein.

Distreiñ a ris. Souchet e oa Nouchka betek an douar, ha krenañ a rae he fennoù-daoulin.

Poan he doa da chom war he zreid. Santout a raen war va daoulin he dispac'h evit frapañ he daouarn a-dre gwask Mladen ; hemañ avat ne zispege ket. Ar sonerion

a gas an ton, kalonek ha gouez, hag ar « kolo » a zo brasaet e gelc'h, hag a zo bremañ sko ennomp. Mladen, avat, ne denn ket e zorn, ha ne fell ket dezhañ mont kuit.

11

Gallout a ra Nouchka en em zieubiñ en diwezh :

« - Deomp kuit ! »

Houpet e voen ganti diwar ar voger, ha, pa voen en traoñ, etre he divrec'h, em stardas kreñvoc'h ouzh he bruched, hag ez eas kuit. Tamolodiñ a ris ouzh Nouchka.

Tomm eo dezhi, ha c'hweziñ a ra. Ha me ivez a zo ar c'hwezenn warnon en abeg dezhi. Lakaet em eus va brec'h dehou en-dro d' he gouzoug, ha gant va dorn e chouran he genou o tianalañ, he muzelloù tomm. Grizias ha kalet eo he divronn. Santout a ran evel boullouigoù o teuziñ hag o terriñ, en he divronn, dindan va ilinoù. Me a zo devet va divesker, zoken, gant ar wrez anezhi...

« - Ne selaou ket hennezh !... Droch eo, droch da stagañ, » emezi din evel m' he dije klasket en em zidamall ; horjellat a rae, ha kerzhout a rae gant poan pebezhe dic'hwezhadenn e tennas, p' en em gavas en hol leur.

Azezañ a reas war ar gwele... Tremena a rae he dorn war he zal, dastum a rae he blev, ober a rae avel... Tostaat a reas ouzh ar puñs, hag e tennas dour hag en em sparfes... Habaskaat a reas, pa voe distanet dezhi.

Dont a reas bliv he lagad, he divjod a ruzias, he dremm a oa peget warnañ kuchennoù e-leizh.

Klevout a raed atav sonerezh an eured. Goude-se, un hir flour a sonenn unton, o vont war zilloaat, war zrantaat... Ha sonañ a ra ar fleüt, ken na darzh hor c'halon... A-daol-trumm e pign ar son :

« Yann, va c'haredig kentañ... »

Sevel a reas Nouchka, prim. N' oa mui evit herzel. Kemer a reas ur plad kouevr ha hi ha kregiñ da zañsal. N' ankounac'hain biken. Un dra estlammus e voe.

Gouzout a rae n' oamp gwelet gant den, hag e korollas, e lammas, e youc'has, e plegas war he dargreiz, evel m' he dije bet diwar se mil dudi ar baradoz.

Tridal a rae, roget ganti he bolero, damzigor he hiviz, he divronn o luc'hañ evel marmor. He blev, du ha mouest, a skourjez anezhi, hag en em rouestl. He daoulagad a zo ledan, iskis, teñval, daoust ha lufus. Ar son hag an ton, o tegouezhout eus an eured, a zo mezvusoc'h-mezvusañ. En em astenn a ra sklerijenn al loar, war vordo... war vordo...

Hag ar son gentañ diouzh an tu all, a dregern bepred :

« Ken nebeut, o va anken garet, hon eus sellet an eil ouzh egile ».

Soublañ a reas Nouchka a-c'hwen he dargreiz.

12

He blev a dizhas an douar, he divronn - a reutaas, he milginoù a droñsas betek he divskoaz hag a gouezhas goude. Gwariet evel-se, Nouchka, krog er plad o lintrañ gant sklerijenn al loar, a ganas an diskan :

« Yann, va c'haredig kentañ... »

En em lakaat a reas a-bezh er c'homzoù-se, evel ma vije bet trelatet. Digor he genou, lavaret e vije bet edo o vezviñ gant kement a zeue eus an eured, hag eus sklerijenn al loar, hag eus an noz, hag eus pep tra, pep tra... En diwezh e chomas a-sav. Tennañ a reas al lenn, e tisac'has war ar gwele, am houpas war he divrec'h, e lakaas va fenn klok etre he bronnoù, hag e pokas din :

« - Kousk, bihanig, kousk ! »

Va habaskaat ha va luskellat a rae en doare-se, evit degas ar c'housed
din ; krenañ a rae, avat, penn-da-benn he c'horf, dre ma oa, moarvat, pep tra en-
dro dimp mezhvusoc'h ha boemusoc'h. Skrijañ a rae, ha c'hwez-vat a oa ganti
c'hwezvot, un dudi.

BISOUSIG, KAZH AN TEVENN

gant ABEOZEN

E giz kentskrid

1 - Ginivelezh

Er c'halatrez er c'hornig ma taoler an truilhoù, a-raok o gwerzhañ d' ar pilhaouer, ar gazhenn vrizh a ro da zenañ d' he zoradig. Tri int : unan gwennkann, unan brizhennet evel e vamm hag unan du-pod.

Emañ just an heol o parañ warno, pa zeu Frañsa-Mari, mab henañ an ti, war vegoù e dreid da sellout outo. Anavezet-mat eo eñ gant Brizhenn eveljust. Evelato ne zistag ket-hi he daoulagad diouzh e fiñvadennoù. War evezh e ranker bezañ bepred gant an dud. Diaes d' ur c'hazh gouzout petra 'dremen dre o fenn.

« Koantik-holl int, eme Frañsa outañ e-unan. Un druez eo ! Dizale e vo klevet mamm adarre o klemm : Poent kas ar c'hizhier-mañ da veuziñ. N' eus ket a voued amañ evit kement-se a feneanted.

« Neket al logod a vank koulskoude en ispisiri en traoñ, » a soñj c'hoazh Frañsa. Met Brizhenn, daoust dezhi da vezañ ur gazhenn vat, pa gar, a blij gwelloc'h ganti mont da bourmen en noz war an toennoù tro-war-dro, en ur ganañ kantigoù d' al loar-gann, gant holl gizhier ar Ru Nevez, eget chom da logota er gêr. « N' anavez Brizhenn an ti, a lavar alies mamm, nemet da boent pred ha pa vez deut hec'h amzer dezhi d' ober he neizh evit reiñ deomp un torad all a gizhier nul da veuziñ.

« Koant int koulskoude, eme Frañsa en ur bellaat sioul. Paour-kaezh Gwennig ! Paour-kaezh Brizhig ! Paour-kaezh Bisousig ! Hennezh ar c'hoantañ, an hini bihan du-pod. »

2 - Môn

- Pesked ho po, Katarin ? Pesked fresk eus an aod ? eme ur vouezh raouliet war dreuz dor an ispisiri.

14

- Petra 'zo ganeoc'h er sizhun-mañ , Môn ? a c'houlenn Katarin ar Gall. Deuit er stal 'ta, Môn. Freskik eo an avel er mintin-mañ.

- Ur meilh bennak a chom c'hoazh em faner, sellit, hag ur c'houblad lizenned vat, gant pikoù ruz war o c'hein.

Ha dre ma komze, e lakae Môn, kramennet he dremm dindan he chikolodenn, he faner war ar c'hontouer.

- Roit din al lized, Môn, fonnusoc'h pesked int hag aes da zizreinañ d' ar vugale.

- Pevar real ar pezh a c'houlennin diganeoc'h nemet ken, Katarin... ha bennozh Doue deoc'h, emezi en ul lakaat ar pezh gwenn en he godell.

- Gortozit 'ta, Môn... Ha n' ho pije ket c'hoant da gaout ur c'hazh bihan ?... Amañ ez eus un torad da veuziñ adarre.

- Feiz avat ! kas a rafen unan ganen, kement hag ober. Nemet bras a-walc'h

eo da zizonañ, da vihanañ ?

- Kredabl !... C'hwi 'roio dezhañ ur banneig laezh en deizioù kentañ.

- Aes e vo din, peogwir em eus ur vioc'h ahont en tevenn.

- Frañsa-Mari, kae 'ta d' ar c'halatrez da gerc'hat unan eus ar c'hizhier bihan da Vôn, an hini a giri.

Krapet en deus buan ar paotr gant an derezioù ha dizale emañ en-dro gant ur c'hazhig du, kluchet e pleg e vrec'h hag o parañ, war an dud hag an traoù, daoulagad sklaer ha sebezet.

- Dre chañs, n' oa ket Brizhenn war an neizh, emezañ dialanet. Anez he dije klasket marteze va c'hrabiñsat... Bisousig eo e anv, Môn..

- Dalit, Môn, eme Gatarin, un dornadig rubanoù paper da lakaat e korn ho paner. Bisousig a vo aze ken tomm dezhañ hag en e neizh.

- Kenavo ur wech all, Katarin ! Kenavo, va faotrig-me ! Brav kenañ da gazhig, te 'oar. Bez dinec'h, ne vo ket maleürus ahont en tevenn. Bennozh Doue deoc'h adarre !

15

Hag amañ bremañ e stag

Eñvorennoù Bisousig

Kazh Du an Aistinoù

ganet e kalatrez ispisiri Katarin ar Gall,
e nec'h ar Ru Nevez, e Landivizio,
hag aet da vevañ e vuhez-kazh
da di Môn Senant ha Saig Porc'hell,
e tevenn an Aistinoù, en arvor Ploueskad.

3. - En hent

Lavarout a rae Katarin e vefe ken tomm din amañ hag em neizh. Ne deo ket gwir. Un dra bennak yen a zeu a-dreuz kostezioù ar baner. Marteze ez eo an dra yen-se a anvont an avel. Hag ouzhpenn-se, ur c'hwez kreñv a zo er baner. Moarvat, eo chomet war-lerc'h an traoù lintrus-se a zo bet tennet bremaik diouzh va c'hichen en un ti n' anavezen ket. Klasket em eus tec'hout diouzh an toull teñval-mañ, met n' em eus ket nerzh a-walc'h em c'hrabanou c'hoazh da sevel gant ar c'hostezioù. Miaoual a ran kement ha ma c'hellan. En aner. Chom a ran en deñvalijenn. Storloket on spontus. Trouzoù iskis a glevan ha spontañ a reont va zammig kalon em c'hreiz. Kaer am eus klask, dre voaz, ar beg-bronn a roe din laezh dous klouar va mammig, da bep tro ma 'm beze sec'hed, ne gavan da stekiñ va fri nemet aozilh reut ar baner e-lec'h reun flour he c'hostezioù madelezhuz dezhi... Pa soñjan, avat, ne deo ket displijus ar c'hwez kreñv a glevan en dro din. Krediñ a rafen zoken e tle merkañ ur boued yac'hus evit ur c'hazh. Nemet me a zo bihanik c'hoazh hag em eus keuz em c'horfig penn-da-benn da laezh va magerez.

16

4. - Saig

N' eus mui a storlok. Klevout a ran ur vouezh sioul o c'houlenn :

- Ha neuze Môn, gwerzhet hoc'h eus mat ho pesked ? N' oc'h ket bet re bell gant ho tro e Landi.

- E Sant Noug a em eus kavet ur c'harr bet o kas traezh glas ha savet on ennañ da zont betek Pont-Krist. Aes kenañ em eus gwerzhet va fesked. Ugent lur ha dek gweneg a zo ganen em godell hag ur c'hazhig du em faner, Saig. Sellit 'ta pegen koant eo, ar paour-kaezh bihan !

Hag un dorn, o krenañ un tammik, en deus va zennet eus ar baner ha va lakaet war an daol. Sellout a ran en dro din ha c'hwesa a bep tu. Ouzh an daol, un den, louet e vlev, a zo azezet war ar bank e-tall ar pezh a anvont ur gwele kloz. Me fiñv tamm an den ouzh va gwelout hag e tenn maged eus ur c'horn pri, stardet gantañ etre e javedoù.

- Feiz avat, Môn, ur brenadenn gaer hoc'h eus graet !

- Evit ur bennozh Doue em eus bet anezhañ, Saig. En tamm bouteg kozh-mañ e vo brav dezhañ kousket war un dornad pilhoù, e korn an oaled. Rak re vihan eo c'hoazh evit ma klaskfe mont da durlutal al ludu. Ur beradig laezh dous klouar dezhañ bremaik hag e c'hellou kousket da c'houde da ziskuizhañ eus e veaj. Neketa, Bisousig ?

Lakaat a ra din dindan va fri un asied gwenn, gant un dra bennak ennañ, ken gwenn all ha c'hwez vat gantañ. Lipat a ran a daolioù teod munut, goustad ha war evezh. Ne deo ket par da laezh va mamm, mar kirit, met naon bras am eus hag, ur wech m' eo reut va c'hof, ez an em gourvez er bouteg d'ober ur c'houk, leun a huñvreoù, ma tremen enno va mammig ha va breudeur.

5. - An tan

An noz hag an deiz a zo aet e-biou din meur a wech abaoe m' emañ. Saig Porc'hell, mestr an ti, ne ra ket nemeur a van ouzhin. Môn Senant, avat, va mestrez, a ro din laezh meur a wech bemdez em asied.

Pa vez-hi war-dro he c'heusteurenn, oc'h elumiñ tan en oaled, da boazhañ ur chotouronad patatez en o c'hroc'hen gant un tamm kig-moc'h, pe da virviñ dour da deurel war ar c'hafe, e sellan, gant dudi, ouzh an tan o strakal er c'heuneud. C'hoant a zeu din, meur a dro, da vont tostoc'h ouzh an dra ruz bev-se a ro tommder din, met difennet groñs eo ouzhin ruzat war an tu-se, ha, bep gwech ma 'm eus klasket mont etrezek an tan on bet lakaet en dro em bouteg gant dorn prim Môn.

17
- Ata, diodig, a vez laret din, ne vi kontant nemet pa 'z po rostet da vourennoù !

Setu ma choman em c'hornig bremañ, en ur roc'hellat gant plijadur, va malvennoù damserr, kement a vad a ra din an tan-se o strakal drant war an oaled.

Pa zeu an noz da deñvalaat pep tra en dro deomp - komz a ran evel an dud, rak d' am daoulagad-me eo ingal an deiz hag an noz, gwelout a ran an traoù fraez bepred en dro din - e vez elumet un tan all war an daol. Melenoc'h eo an tan-mañ. Ne strak ket evel hini an oaled ha lakaet e vez en dro dezhañ un dra treuzwelus evel ma 'z eus war ar prenestr bihan e penn an daol. Ul lamp a reont eus ar pezh a zoug an tan didrouz-se. Elumet e vez a-raok ma sav tud an ti en o gwele-kloz ha lazhet e vez ur wech m' eo deut evito ar poent da gousket.

6. - Dre an ti

Alies e vezan va unan-penn en ti. Môn ha Saig o deus labour d' ober er-maez, emezo. Komz a reont eus ar mor, a besked, a vizhin, a yer, eus Bailhenn. N' ouzon-me tamm ebet c'hoazh peseurt a zo dindan an anvioù-se, met dont a rin da c'houzout. Dre ma teu nerzh em izili, dre ma trantellan nebeutoc'h war va favioù ez an a bep tu en ti da firbouchal. Pa vez aet an dud er-maez, ne vez nemet aesoc'h a se din, evel just.

Nag a draoù a zo da zizoleiñ en un ti ! Anaoudegezh am eus graet gant ar botoù-prenn a zo renket dindan an armel. Plouzennoù a sachan diouto da stlejañ war al leur zi, a-gleiz hag a-zehou. Pelloc'h, dirak toull an nor ez eus sailhoù, podoù a bep liv. Yen int pa stoker outo ha n' eus tu ebet da grapat ouzh o c'hostezioù da welout peseurt a zo e-barzh. Ne choman ket pell war an tu-se. Yenc'h kalz eo dre aze gant an avel o c'hwezhañ dre zindan an nor.

7. - Ar Momeder

Er beure-mañ em eus graet ur gavadenn. Dizoloet em eus a belec'h e teu an trouz ingal a glevañ noz-deiz abaoe m' emañ en ti-mañ. Tik ! Tak ! Tik ! Tak ! bepred. Ouzh an tu all d' an oaled, e penn an eil gwele-kloz, ez eus un doare kased hir, koaret-brav. Deut on a-benn d' ober ul lamm eus an oaled war ar bank e-tal ar gwele hag on aet betek ar c'hased. Aon am eus bet ha graet ul lamm-pik war gil. A-dreuz an dra treuzwelus-se a anvont gwerenn e welen ur bladenn velen lintrus o vont hag o tont, eus un tu d' ar c'hased d' an all. Tik ! emezañ, en ur vont a-zehou. Tak ! emezañ en ur zont a-gleiz. Hag e-giz-se, dibaouez. Pebezh loen iskis ! am eus-me soñjet.

18

Gouezet em eus abaoe e vez graet ur momeder eus ar bladenn velen-se, dalc'hmat o vranseñlat. Ne deo ket tamm ebet bev, war a laront. Ul lodenn n' eo ken eus un ardivink ma reont anezhañ un horolaj. Servijout a ra d' an dud da c'houzout pe da boent emaint eus an deiz pe eus an noz. Bep abardaez, a-raok stagañ da ziwiskañ e zilhad evit mont d' e wele, Saig a zigor dor gwerennet an horolaj da sevel dezhi he fouezhioù, evel ma lavar. Sachañ a ra war ziv chadennig, klevout a reer un tammig stirlink kag e kloz an nor adarre. Evit gouzout an eur, e sellont ouzh krec'h d' an horolaj. Tro-dro d' ur bladenn wenn-kann ez eus ur renkad arouezioù du, ha bizied metal melen o fiñval gorrek eus an eil arouez d' an all. Pell amzer on-me bet a-raok merzout e fiñve ar bizied-se, ken gorrek ez eont ! Petra fell deoc'h ? Se a zo hep talvoudegezh ebet evit ar c'hizhier. Ni a sav pa vezomp diskuizhet, a zebr p' hon eus naon ha bep gwech ma teu un dra bennak lipous dindan hor pav, hag a stag da gousket pa zeu choant deomp, pe zeiz pe noz e ve anezhi.

An dud, avat, a zo gwall zisheñvel diouzhomp hadiaes eo, meur a dro, d' ur c'hazh kompren peragoù o doareoù d' ober.

8. - Ar Bont - Ar Yer

Buhez ur c'hazh yaouank a zo leun a spontadennoù. Hiziv, tapet ganen va zammig lein... (bruzun patatez, frigaset en ur banneig laezh, hag un tamm tonenn kig-moc'h, taolet din gant Saig. Mil boan am eus bet ouzh he chaokat, met ken mat oa ma ne skuizhen ket o lipat va mourroù da c'houde). Tapet eta va lein, edon a-zevri o c'hoari polotenn gant ur bont, kouezhet diwar an daol e-pad pred. Ur c'hoariell zispar eo ur bont. Stokit outañ un disterañ hag emañ war ruilh. Redit war e lerc'h hag e chom trumm a-sav hag e rit ul lamm en tu all dezhañ. Evel un dra buhez ennañ eo ur bont, nemet ne deo dañjerus e doare ebet. Edon eta o c'hoari polotenn, pa glevis ragach e toull an nor. Ha me ha sellout. Hag e teuas war wel, e-kichen ar sailhoù, unan, daou, tri, pevar loen, kalz brasoc'h egedon. Divhar dezho hepken, un dra bennak ruz war o fenn, ur beg lemm dezho, daoulagad bihan ruz ha grougouserezh rok o tont eus o gouzoug kerkent ha ma welont un dra bennak na blij ket dezho. Me ne raen ket, moarvat, rak ragachat a raent gwashoc'h-gwazh dre ma pare warnon o daoulagad. Unan anezho dreist-holl, brasoc'h eget ar re all, flammoc'h e liv hag hiroc'h e lost, a c'hroz mole kement ma krogas aon ennon ha me d' ar red d' am bouteg. Hag ac'hane e sellis outo dre zindan an daol. Môn a zeuas dres en ti d' an ampoent-se.

18

- Che ! emezi, kozh yer lous, deut adarre da gac'hat en ti. Ha te, kilhog divergont, mont a ri er-maez pe ne ri ket ?

Hag e serras Môn an nor. Graet em boa anaoudegezh gant ar c'hilhog hag e yer ha n' em eus ket bet pell-amzer aon razo. Trouzus int. Droug a rafent sur a-walc'h, mar ne vefent ket aonikoc'h c'hoazh eget ne dint divergont. Met n' eus ket da ober van outo.

9. - Bailhenn

Hiziv on aet evit ar wech kentañ betek toull an nor. C'hoant am boa, pell 'zo, da vont da welout petra eo ar maez-se, ma teu tud an ti diwar e dro gant pep seurt c'hwezioù iskis en o dilhad hag ouzh o c'horf, nemet war evezh e ranker bezañ bepred gant an traoù dianavez pe e vezer tapet.

Aet on eta da doull an nor. Ha dispourbellañ am eus graet va daoulagad tre ma c'hellen. Un dra bennak skedus, a-us d' am fenn, a daole war bep tra al liv

laouen-se a bare warnomp er c'halatrez a-hont hag a zeu amañ, da c'hoari war goadaj ar gweleoù ha kouevr an horolaj, dre brenestrig an ti, pa dosta fin an deiz.

Môn a oa o tont a gleiz ha, pa 'm gwelas, e stagas da farsal :

- Fri kurius, setu te e toull an nor a-benn ar fin ! C'hoant ez poa, moarvat, d' ober anaoudegezh gant da vagerez, an hini a ro laezh dit abaoe m' out bet dispartiet diouzh da vamm. Ata, Bailhenn, deus 'ta !

Hag e stleje Môn d' he heul, a-bouez ur gordenn, ul loen, pevarzroadek hemañ, kalz brasoc'h c'hoazh eget ar yer, daoulagad dizrouk en e benn, ruz ha gwenn e groc'hen. Aon am boe ha ken bihan ha ma c'hallen ez en em skoachen e toull an nor. Blejal a reas Bailhenn ha c'hwezhañ kreñv war va blev pa dremenas e-biou din ha me ne greden ket fiñval zoken.

20

Môn a bellaas war al leurenn c'hlas a zigore dirak an ti, en ur vale goustadik e-kichen he bioc'h, a zistage gant he dent eus an traoù glas a c'holoe al leurenn. Evelse e ra ar saout. Peuriñ eo a reont ha ne deo ket dibriñ evel dompni. Me dint ket loened drouk peurvuiañ, gant ne deot ket da droidellat etre o zreid pe re dost d' o c'herniel, pa vez ar c'helien ouzh o hegasiñ.

Soñj al laezh dous a lipan bemdez am laka da gaout doujañs evit Bailhenn ha morse, mar gellan, ne savo trouz etrezomp.

10 - Ar Mor

Er mintin-mañ, pa 'm eus digoret va daoulagad, ne bare ket, evel boaz, ar sklerijenn laouen war gouevr ha koadaj koaret an arrebeuri. Ur skleur disliv a zeue hepken dre ar prenestig e penn an daol. War an oaled, e troidelle ar flammoù pennfollet hag ar maged a zeue en ti, a-frapadoù, ken kreñv e c'hwezhe ar fourradoù avel et siminal.

Oc'h aozañ kafe e oa Mon. Mat-kenañ e kav va mestrez an dourenn zu-se. a ziver, ilbouedus he c'hwez, diouzh beg ar greg en he bolenn. Lakaat a ra ouzhpenn, avat, laezh e-barzh, hag un tamm pe zaou eus an traoù gwenn-se, dous un drugar, ma reer sukr anezho. Al laezh hag ar sukr a zo a-walc'h din-me. Eus ar c'hafe ne ran forzh. Saig, eñ, a gav gwelloc'h ur volennad soubenn ar patatez hag ur banne gwin ruz war-lerc'h, ur wech an amzer. Ar gwin, an dourenn ruz teñval-se, m' eo sot an dud ganti betek koll o skiant a-wechoù, ne blij din kennebeut nemet abalamour d' ar bontoù a vez war ar boutailhoù anezhañ. Ar re-se eo va c'hoarielloù karetañ. N' eus nemet pellennoù gloan pe neud Môn, pa gouezhont eus he boest, e-pad ma vez o wriat pe o peñseliañ dilhad ha loeroù, a rafe muioc'h a blijadur din. Gwelloc'h e speg enno va ivinoù. Nemet trouz am bez p' o stlejañ war al leur-zi. Didrabasoc'h eo ar bontoù. Ne sav ket a groz diwar o fenn.

- Mat ! Môn, eme Saig, a oa c'hoazh en e wele d' an ampoent, ne dalv ket ar boan din sevel ken abred-mañ. Tu ebet da vont war ar mor gant ur seurt gwall amzer.

- Nann, ne gredan ket ez afe bag ebet er-maez hiziv, Saig. Chomit en ho kwele betek lein. Abred a-walc'h e vo deoc'h da vont goude da welout ha ne zeu netra d' an aod gant an avel walarn-se.

21

Me a vorede em bouteg ouzh huanadoù an avel er siminal, nemet e soñjen :
« Traoù e-leizh am eus sur da zizoleiñ er maez-se, ma teu anezhañ kement a safar er beure-mañ, nemet e rankin, moarvat, en dro-mañ, mont pelloc'h eget toull an nor. »

War-dro kreiz an deiz e savas Saig. Ouzhpenn e zilhad boas, e lakaas, avat, ur pezh jiletenn stamm hag, en dro d' e benn, ur galabousenn c'hlas hag eñ er-maez, me war e seulioù.

Darbet e voe din pensodiñ. Skañv ez en em santen evel ur bluenn-yar hag an

avel a zifoupe ar blev war va c'hein evel p' en dije bet c'hoant d' am diskroc'henañ.

Mont a ris koulskoude da heul Saig betek penn ar vur a ra tro ar c'henkiz, stok ouzh an ti diouzh tu an tevenn, hag e chomis spouronet. En deiz all, pa sellen ouzh Môn o pellaat gant Bailhenn war al leurenn c'hlas-se a anver an tevenn, em boa gwelet larkoc'h un dra bennak all, a-liv gant an oabl pa vez sklaer an heol, nemet e fiñve, amañ hag ahont, en dro-mañ roudennoù gwenn, kemmus o neuz.

- Brav ar mor hiziv, a lare Môn en deiz-se d' ur gwaz a oa o tremen dre an tevenn d' ar mare.

Mat hiziv ne deo ket brav ar mor, nann. N' eo ket glas evel an deiz all, met gwer-louet, ha, pa lamm dreist ar reier du, e teu da vezañ gwenn-kann hag e sav uhel en aer. En ur zeredek war-du an aod, e koeñv e doare torgennoù kribennet gwenn hag e teu da darzhañ ouzh an tevinier gant un trouz spontus.

Ken herrek e taoulamm ar mor etrezek an Aistinoù ma krog aon ennon da vezañ paket gantañ, hag e teuan, tizh warnon, ruilh-diruilhet gant an taolioù avel-dro war ar leton gleb hag e sailhan d' am bouteg, berr warnon gant ar spont.

- Ur paotr koant a zo ac'hanout, Bisousig, eme Vôn ouzhin, en ur sevel he fenn diwar he stamm. Ne deo ket un amzer na d' ar c'hizhier na d' ar merc'hed da lakaat beg o fri er-maez. Peñse a vo, sur a-walc'h. Nemet, evit ar mare, hor plas ni a zo e korn an oaled. Warc'hoazh, pa vo torret war an avel, marteze ez aimp da welout en aod.

A-benn neuze me a oa a-zevri gant va zeod o lakaat en urzh va feur difoupet gant an avel ha ne loc'his ket diouzh korn an oaled betek ma nozas.

11. - Ar C'hrank

Sioul e oa an amzer antronoz. Ne glemme mui an avel er siminal. Saig a oa aet er-maez beure-mat. Pa skoas Môn d' he zro war-du an nor e piltrotis d' he heul.

- Fellout a ra dit avelañ da fri, evit doare, Bisousig, emezi ouzhin pa droas da brennañ an nor. Deus 'ta, hiziv an avel ne c'hoario ket polotenn ganez.

Ha ni en hent, me sonn va lost, kement a stad a oa ennon. Etrezek aod ar Staol-Gozh e skoe Mon a gammedoù dillo. Sklaer e oa an oabl. Eonenniñ a rae c'hoazh ar mor en traoñ, daoust m' oa torret war an avel.

- Emañ tost d'an dazre, eme Vôn en ur ziskenn gant un doare hent merket er c'herreg gant tachou ar botoù koad.

En traoñ e-touesk ar bizhin, Saig a zifrete. Dougen a rae war e skoaz ur post koad-sapr hag a-bouez un dorn e tegase ur c'hased hanter-dorret ha goullo.

- Pense a zo, evit doare, eme Vôn en ur vont etrezek ennañ. Te, Bisousig, taol evezh da gouezhañ er poullou dour pe e vi beuzet.

Teurel evezh a raen eveljust, nemet, memes tra, e ris u lamm en ur poullig damc'holoet gant ar bizhin-glas. Ar glebor ne blij ket tamm ebet din hag edon o hejañ va favioù, pep hini d' e dro, da lakaat an dour kasaus-se da ziverañ buanoc'h, pa welis o tont war wel, en un draezhennig, etre daou vaen, ul loenig iskis. Kelc'hiek e oa, e doare un nozelenn eus chupenn Saig, paviou moan en-dro dezhañ, eizh anezho, hag, e-lec'h mont war eeun gant e hent, ez ae war e gostez, hep tennañ diwarnon e zaoulagad difiñv.

- Sed ama, avat, un abadenn ! emeve. C'hoariomp gant hemañ evel gant ur bont da welout ha kement a ebat a vo.

Ha me hag astenn va fav dehou, hep sonna va ivinoù rak aon da ober droug d' an nozelenn vev-se ken fentus. Ya ! al loenig a chomas a-sav krenn, e zaou viz a-raok, tevoc'h eget ar re all, bannet gantañ war du ennon, ha, pa stokas va fav outañ, e serras war va blev ha va c'hroc'hen ur c'hraban treitour am lakaas da viaoual gant ar boan.

- Sell 'ta ! eme Saig, erruet tost din gant e dammoù peñse, Bisousig tapet gant ur c'hrank glas. Furoc'h e vo dit, immobil bihan, chom en ti da logota eget dont da granketa en aod. Ne deo ket c'hoazh diouzhtu e kavi an tu da chaokat al loustoni-se.

Kaer em boa-me, avat, hejañ va fav, ne zispege ket ar c'hrank fallakr, ma rankas Môn dont d' am sikour ha terriñ dezhañ e viz. Ar c'hrank a skampas kuit dindan ur maen en ul lezel e viz torret war an dachenn. Ha me d' ar gêr da heul an dud, met ne zisoñjis ket piñsadenn ar c'hrank ha bepred em eus diwallet a stekiñ outo da c'houde.

12. - Logota

Logota ! Logota ! N' ouzon dare perak e laka ar ger-se un dra bennak kevrinus da dridal em c'hreiz. Ne welan ket fraez petra 'zo dindanañ ha padal am lakaat a ra da fringal ha da ober lammou-choug-va-fenn gant al levez.

Diouzh klevout Môn ha Saig o varvailhat diwar va fenn ec'h ouzon e tle ur c'hazh a-zoare bezañ logoter, evel ma tle ur gwaz bezañ labourer hag ur vaouez, kempenn warni hec'h-unan hag en-dro d' he zi. Me 'vo eta ul logoter eus an dibab, rak me fell din bezañ ur c'hazh a-zoare, penn-kil-hag-ivinoù.

Eveljust va ivinoù zo prest. Bemdez o lemma war ar valaenn e toull an nor. Dispar eo ur valaenn da welout ha nerzh a zo en hoc'h ivinoù. Spegañ a reont er bleñchoù ha ne deo ket re reut ar re-mañ, memes tra, evit ober poan deoc'h en ho pavioù. Arabat ober se, avat, pa vez Môn tost ouzhoc'h pe e viot kaset da gorn an oaled da veilhañ an tan, moredet dindan ur gwiskad ludu.

- Immobil bihan. Kae alese da logota pe da luduañ. Ne bado ket hanter ar valaenn-mañ ganez, ouzh he c'hrabiñsat evel ma rez.

.

Mat, en noz-mañ, kavet em eus petra eo logota.

Edon moredet em bouteg, evel boas, pa glevis un trouz munut-munut o tont diwar ar bank, e penn an daol. Sevel a ris didrouz war va zivhar a-dreñv ha sellout. Ul loenig krenn, a-liv gant an noz, a rede hag a zirede en-dro d' ar bruzun bara a oa kouezhet aze, pa oa bet torchet an daol goude koan.

Un drivliadenn espar a santis o redek em izili. Evel pa vije aet holl nerzh va buhez em daoulagad da sellout hag em favioù da sailhañ. En ul lamm e voen war al loenig. Gwic'hal a reas pa ziskennas warnañ va c'hraban. E sammañ a ris em genou hag, evel ma tifrete, e stardis warnañ muioc'h mui va c'harvanoù ken na fiñvas mui. N' oa ket aet kuit ar vuhez dioutañ koulskoude. Santout mat a raen. Diskregiñ a ris neuze ha lakaat al loenig em bouteg, va fav warnañ koulskoude.

Pa voe deut an deiz, e savas din c'hoant c'hoari. Ha me ha stlepel en aer va loenig hanter vadaouet d' e dapout adarre dindan va fav pa gouezhe war al leur-zi.

24

- Sell 'ta ! eme Saig, a oa o wiskañ e borpant grosañ da da vont er mor. Bisousig en deus paket ul logodenn. War a welan, e vo ur c'hazh mat... Mont a ran, Môn.

Hag eñ kuit.

Môn a zeuas en he fuch da sellout ouzhin o c'hoari.

- Añ ! gwir eo, ul logodenn a zo gantañ. Me 'gave din ivez e kleven trouz en noz, abaoe ur pennad. Mat, Bisousig, e c'hellez lavarout diwar hiziv e c'hounezez da voued.

Me, e-keit-se, a sailhe, a dorc'hwenie en dro d' am logodenn, peogwir, evit doare, ez oa al loenig louet-se ul logodenn. Re start e skois ganti un dro, en ur ober ul lamm warni a-bell ha, diwar neuze, ne fiñvas mui. Dizale e teuis da inouiñ ganti hag ez is da gorn an tan d' ober un ehan ha Mon a skubas ar c'horfig marv war ar bern teil.

Meur a logodenn em eus debret a-c'houdevezh, em buhez kazh. Ne dint ket fall, nann. Plijus a-walc'h eo ivez trouz o eskernigoù o frailhañ dindan ho tent. Nemet ne deo ket yac'hus d' ur c'hazh dibriñ re anezho. Dont a ra buan da boursal diwarno. Ar blev, moarvat.

13. - Kentañ pesk

Ur pennadig mat a-raok poent koan ez oa Saig en-dro er gêr. Degaset en doa gantañ un doare paner bras, kromm war c'horre, gant un toull da ziskenn ennañ, plat dindan. Tremen a c'hellen va fav etre e vizhier aozilh.

- Un aozañ am eus d' ober d' ar c'havell-mañ, eme Saig en ur azezañ. Drailhet eo bet un tammig amañ, sellit, gant ur roc'h begek moarvat.

Leun oa an ti gant c'hwez kreñv ar mor. Me a zigore va fronelloù, tre ma c'hellen.

- Del, Bisousig ! eme Saig adarre. Morse ne soñjan degas dit un tamm boued eus ar mor. Sed amañ, dre chañs, ur par gwrac'h chomet er c'havell pa 'm eus e riñset bremaik. Marteze e kavi mat ar pesked.

Ur peskig liv-gwer a oa dirazon. Reudet oa gant ar marv ur pennad 'oa. C'hwesa a ris anezhañ ur pennadig, e dreiñ hag e zistreiñ, hag a-benn ar fin, e stagis gant ar penn. Atav eo gant ar penn e kroger da zibriñ ar pesked, evel an holl loened a baker. Diskiant e ve ober a-hend-all. Ur wech m' hoc'h eus klevet eskern ar penn o vruzunañ etre ho javedoù, n' eus mui riskl ebet ez afe kuit ho preizh.

25

Un tamm lipous eo ar par gwrac'h, lipousoc'h kalz eget an touilhed a vez foetet din alies gant ar besketaerien chifretez. Anzav a rankan em eus, a-hed ur wech, kavet gwelloc'h blaz gant ur peskig eget gant ul logodenn. Ha pa vez foetet dirazoc'h, bev-buhezek c'hoazh, ez eo ken plijadurus e lazhañ eget ne deo ober he stal d' ul logodenn. Nemet ar pesked ne wic'hont ket. Mut int, a leverer. Padal, klevet em eus gwrac'hed bras ha pezhiadoù siliou-mor o roc'hal pa vezont tennet war ar sec'h.

Edon o lipat va mourroù, ur wech chaoket ganen ar peskig, lost hag all, pa lavaras Saig, a daole ur sell war-du ennon, bep an amzer, e-pad ma trese ar c'havell :

- Hemañ a vo sotoc'h egedoc'h war ar pesked, Môn.

- Evel a garo, a respontas Môn, en ur lakaat ar soulenn war an daol. Me n' em eus ket defot anezho e doare ebet, na zoken eus ho pizied kranked aze, a gavit c'hwi ken mat, Saig, gant un tamm bara hag amann. Nag eus pesk nag eus kig ebet. Ne gavan ket mat.

14. - O vouchounañ - Ar Vorgazhenn - Ar Vrinikenn

Edomp krog er poent bloaz m' eo an hirañ an deiz. Aliesoc'h ez ae Mon bremañ war-dro an aod ha pa ne skoe ket da re bell ez aen-me ivez alies a-walc'h d' he heul.

Un deiz reverzhi, ma tiskenne kalz izeloc'h ar mor, Môn a dapas krog en ur

bouteg. Lakaat a reas e-barzh ur sac'h huanou, peñseliet e meur a lec'h, ha dav da vouchounañ.

Mont a ris war he roudou. Bepred e skoe Môn d' an hevelep tu, ar Staol-Gozh pe Borzh-Kraou. Da gentañ ez oa aes diskenn gant ar reier, met, ur wech erruet tostoc'h d' an dazre, e teue ar bizhinoù a bep liv da wiskañ ar c'herreg penn-da-benn ha n' ouien ket ken re pelec'h teurel va favioù evit bezañ war ar sec'h.

Pa voemp en traoñ, e tiskennas Môn en dour, botoù hag all. Me a skrije em c'hroc'hen ouzh he gwelout o tistagañ dindan ar mor, en-dro d' ar vein, eus ar bizhin krenn glasmelen ma reont anezhañ bouchounoù pe c'hoazh pioka. Pa vez leun ar bouteg, e taoler ar bern er sac'h huanou hag e kroger da zistagañ adarre. Arabat koll amzer. Ne chom ket pell ar mor en dazre ha pa zeu red el lanv ez eo dizale poent sevel war an tevenn gant ar seier bouchounoù.

26

Un draezhennig vihan vrav en heol am boa kavet en deiz-se hag edon, war gab va reor, o tommañ warni, en ur sellout ouzh an aezenn-vor o c'hoari gant blev gleb ar bizhin rouz ha glas a-ispilh ouzh ar c'herreg bras em c'hichen, pa welis ul loen vil o fiñval nepell diouzhin. En em riklañ en doa graet a zindan ur roc'h a oa bremañ war ar sec'h, dilezet gant an tre. Larout a ran ez oa ul loen dre ma valee, ma ruilhe kentoc'h war e baviou bouk, n' ouzon ket pet a oa anezho. A-liv oa gant ar bizhin ruz. En doare sac'h a oa kreiz e gorf, daoulagad difiñv, yen ha kriz, a chome paret warnon. Aon rason e seblante kaout an euzhadenn hag e santen koulskoude he doa c'hoant war un dro da deurel en dro din lasoù he divrec'h lipous. Me a reudas va blev war va c'hein hag a stagas da roc'hal eus va zu, prest da zifenn va zammig buhez.

Dres d' ar poent-se e teuas Môn da lakaat en e sav, war ur roc'h plat em c'hichen, ar sac'h leun-kouch a vouchounoù. - Sell 'ta, ar pikol morgazhenn ! emezi, ha, tapet ganti ur maen e-tal he zreid, e tarc'haouas un taol ouzh an euzhadenn. Houmañ a gemmas liv, pa stokas ar maen outi. Evel un dornad dilhad gleb, e riklas er poull-dour dindan ur garreg vras, en ur zuañ ar mor war he lerc'h.

Me 'oa bet tomm din ha tostoc'h e talc'his da Vôn da c'houde. Edon he gortoz da sevel war an tevenn, pa voe tennet va evezh gant ur grogen vegek o fiñval stok ouzhin. Kavout a reer eus ar c'hregin-se, penn-da-benn d' an aod, ouzh ar c'herreg. Brinik a vez graet anezho. Houmañ, avat, a oa ur pikol hini gozh, ruz he c'hrogen. Dam-zistag e oa diouzh ar roc'h, ma teuas em fenn ar c'hoant d' he distagañ naet, da welout ha ne vefe ket enni un dra bennak da lipat. Me voe ket diaes din tremen va ivinoù etre ar maen ha bevonn ar grogen. Met neuze e voe un abadenn all. Ar vrinikenn, kerkent ha ma santas va ivinoù, a spegas kloz ouzh ar maen ha setu me stag ouzh ar roc'h a-bouez va fav. Ha me ha miaoual ha sachañ. Met, dre ma sachen, ar vrinikenn a starde hag a rae poan din em c'hraban.

- Petra c'hoari ganez-te c'hoazh, Bisousig ? eme Vôn, deut da sammañ he sac'had pioka. Chesus ! staget eo ouzh ar roc'h gant ur vrinikenn. Biskoazh kemend-all !

Hag en ur c'hoarzhin e tapas krog er gontell gozh a oa ganti en he bouteg hag e tispegas ar vrinikenn diouzh ar maen.

Me ne chomis ket da c'houlenn va rest, na da c'hwesa na da lipat ha buan betek an tevenn war roudou Môn.

P' edo o ledañ ar bouchounoù, bod-ha-bod, war al leton evit sec'hiñ, e laras Môn en ur c'hoarzhin da Jani Gergouarat, a rae ar memes labour un tammik pelloc'h :

27

- Dre forzh bezañ tapet e teu skiant-prenet d' an dud, war a leverer. Evit ar c'hizhier ez eo heñvel, Jani. Hemañ a zo bet staget a-bouez e bav ouzh ur roc'h, gant ur vrinikenn, aze en traoñ bremaik ha n' ankounac'haio ket diouzh tu, a c'hellit krediñ.

Me ne raen ket an neuz da glevout hag a selle ouzh ar porterioù o skeiñ

etrezek Porzh Gwenn gant o c'hargoù bizhin-soud, met ne oa ket kalz a lorc'h ennon memes tra.

Antronoz e oa staget ar bouchounoù da ruziañ hag un nebeut deizioù diwezhatoc'h ez oant gwenn-kann ha kraz. Neuze e voent sammet e seier adarre ha douget d' ar bourk d' ur marc'hadour o c'has da bell-vro d' ober koñfitur, war a leverer, pe draoù lipous all a-seurt-se.

15. - Ar C'hi

Dre forzh bezañ tapet e teu furnezh d' an dud ha d' ar c'hizhier, a lavar Mòn. N' ouzon ket, avat, hag e teuo biken doareoù dereat d' ar chas.

Edon dres war an tevenn o sellout ouzh Saig o sevel ar sac'hadoù pioka e karr Laou Gergouarat, pa voe ret din pladañ ouzh an douar ha diouzhtu ober ul lamm a-gostez evit tremen hep bezañ taget gant ul loen en doa graet ul lamm dreist din hag un all e-biou da c'houde, en ur ober un trouz spontus gant e c'heol. « Ouaou ! Ouaou ! » emezañ, ken na storloke e gorf a-bezh. Me 'm boa graet ul lamm war ar roc'h rouz a zo e-kreiz an tevenn hag ac'hane e sellen ouzh ar genaoueg-se o piklammat en dro d' am c'hilud. Graet em boa just, hep gouzout din, ar pezh a oa d' ober, rak an imbisiled-se, ma reer chas anezho, n' ouzont ket skrimpat. Tro am eus bet, meur a gant gwech abaoe an deiz-se, da welout ez eo gwir. Ne deo ket fur, avat, d' ur c'hazh klask redek re bell en o raok war ar plad, rak herrek-kenañ int. Ur vur, ur roc'h sonn, un doenn-kraou, ur bern bizhin, amañ n' eus ket a wez, a zo ar gwellañ repu ouzh an harzherien zifeson-se.

- Sell ! eme Saig da Laou, erruet Kintiniz adarre war hor c'horf. E-verr e vint o c'houlenn laezh, n' ouzon pet litrad, evel ma vefe un duellenn ha nann un tezh ouzh kov ur vioc'h... Ro peoc'h, ki nul !

- Bonjour, Saik, eme ur vaouez korfek. Ça va bien ? Mône est à la maison ?

- Ya, itron, en ti emañ, a respontas Saig.

- Merci, Saik. Viens, Nono ! Veux-tu venir ici !...

28

En desped dezhañ e sentas ar c'hi. Ha setu penaos e ris anaoudegezh gant Nono, ki bourc'hizien Kintin a zeu da dremen an hañv er c'henkiz a zo ouzh tu ar prenestrig. Komprenet em eus diwezhatoc'h eo dezho ez eo an ti m' emamp o chom ennañ. Feurmet eo da Saig gant un tammig tachenn e-tal Porzh-ar-Straed. Hag en abeg da se e tle Mòn ober war-dro an ti, pa ne vezont ket en aod ha reiñ dezho, pa vezont amañ, laezh muioc'h pe dost eget n' hell goro diouzh Bailhenn.

- Torrioù kased n' int ken, a lavar Saig da Vôn, etre e zent, en ur sachañ war e gorn-butun, pa zispleg dezhañ e hini gozh peseurt froudenn amboubal nevez a zo o paouez diwanañ e penn ar berc'hennez.

16. - An Eost

Tomm-berv eo deut an heol da vezañ. Bremañ ne deo ket ken e korn an oaled e choman da ec'hoazañ. Pa ne savan ket war lein ar bern keuneud en tu all da graou Bailhenn, ez an war ar roc'h rouz e-kreiz an Aïstinoù. Eno n' eus ket a riskl e kouezhfe ar chas war ho korf dre ho kousk.

Trouc'het eo ar gwinizh en tachennoù penn-da-benn d' an aod. O gwelout a reer, touzet betek an douar, betek Maen-Goubarz er Sav-Heol ha Kergouarat er C'hreisteiz. Beg ar bernioù a weler o sevel, melen-aour, a-us d' an tiez eus Gwazh-Vihan betek Porzh-Gwenn, hag e stag an dremmwel da voudal. Deut eo amzer an dornañ. Saig ne da ket ken war vor. Daoust ma n' eus tamm gwinizh en e dachenn mont a ra da reiñ sikour d' an amezeien. Mòn a vez ivez er peurzorn e ti Laou Gergouarat. Mab yaouankañ an ti a vez war vor gant Saig, evel mous. Klevout a reer kanaouenn o sevel e nozioù sklaer miz Eost. Laouen eo an dud da vezañ medet ha dornet peadra da gaout bara evit o bloavezh hag ober a reont un tammig fest, evañ a reont zoken ur banne pe zaou muioc'h eget ne deo fur ober marteze. Ar pezh a ro poan benn antronoz, evel ma lare Saig er beure-mañ, p' oa prest da vont war ar mor da sevel e gevell.

- Mat, evit ur skudellad laezh-ribot, eme Vôn dezhañ, hag e tistano d' ho penn.

Me ne don ket aet c'hoazh betek Kergouarat. Morse ne vin troet, zoken pa vo ac'hanon un tarv-kazh doujet tro-war-dro, da vont d' ar peurzornioù. Re a voused, tommet d' o zammig penn a zo war dro al leurioù. Re a chas o klask tabut en-dro d' ar fornezioù. N' eus nemet kazh an ti, mar goar chom fur e korn an oaled, hep mont da strobañ ar geginerezed, a c'hello kaout tro da lipat ar restachoù rata gant un drailhenn gig pe ziv, ankounac'haet en e asied gant ur mekaniker leun e gov.

29

Me ne don nemet ur c'hazh aod. Ne dan war-dro an tachennoù gwinizh nemet pa zisouler, rak a-wechoù e kaver dindan ar gwrac'hellou un neizhiad logod-mors, yaouankik-flamm ha tener, un drugar. Gwelet em eus ivez koulskoude, bloavezhiennoù, pa vez ar vederien er park, degouezhout war dorad re vihan ur gornigell, kroget re ziwezhat da sevel he neizh, met ne deo ket alies e vezont tapet berr e-giz-se. N' eus nemet pa vez dare an eost abretoc'h eget boas.

An Eost evidon-me a zo amzer ar c'houskoù-ae hir dindan an heol tomm-poazh en un oabl glas digoumoul, pa ne gav mui ar saout ur geotenn c'hlas da beuriñ e tonenn rouzet an Aïstinoù, ha ma chomont d' ober selloù goullo etrezek an mor.

17. - An Deviñ-Bizhin

Gant miz Gwengolo e tistanas an amzer. Saig a stagas da dennañ e batatez en dachenn feurmet gantañ e park Laou Gergouarat. Gant bizhin-trouc'h eo bet teilet douarskañv an dachenn ha brav-tre ar patatez, yac'h oc'hroc'hen melen-sklaer ha flour.

A-benn un devezh bennak, pa voent disec'het mat war an douar, e voent lakaet e seier, kaset d' an ti gant ar garrigell - ha douget d' ar solier. Gant ur skeul eo e pigner betek eno hag ur pennad on bet hep gouzout krapat a-zoare gant pazinier ar skeul, hep risklout dont war va fenn d' an traoñ ar pezh a zo un tammig mezhus, zoken pa gaver an tu, evel ma ra bepred ur c'hazh, da gouezhañ a-blomm war e dreid.

Er solier e vez ledet ar patatez war ar plañchod hag e-giz-se ez en em virint mat e-pad ar mizioù-goañv, da c'hortoz mont da boazhañ er chotoroun gant un tamm kig-moc'h mogedet, a laka deoc'h ho fronelloù da dridal gant e c'hwez ilbouedus.

Gant Gwengolo ivez em eus gwelet, evit ar wech kentañ, riblennadoù moged gwenn tev, o souchañ en avel-vor, a-us d' an holl vegoù douar etre Roc'h ar C'hi hag ar C'hernig. Santout a ris c'hwez ar bizhin o teviñ d' ober soud oc'h en em skignañ war an aod. Re gasaus ar moged-se deoc'h da gaout plijadur o vont tost d' ar fornioù. Pell e choman diouto eta da sellout ouzh an dud o tremen-didremen a-dreuz ar moged, a laka an daeloù da zont d' o daoulagad, tizh warno o teurel bizhin sec'h a vriadoù war an tan, ken na chom mui eus ar bernioù savet da goulz reverzhioù an hañvezh.

30

Un nebeut deizioù diwezhatoc'h e vez gwelet tolzennoù louet al ludu-soud, berniet e-kichen ar forn, goullo ha yen, ruziet ha duet ar vein plat er strad hag er c'hostezioù gant tantadoù an devezhioù a-raok. Sammet e vezont en ur c'harr ha dav d' an uzin iod a zo a-hont e penn-krec'h Lenn ar C'hernig. War a lavar Môn a-wechoù da Saig, gwellaat kalz o bloavezh a ra tud an aod gant ar soud. Daoust da se n' em eus gwelet morse Saig oc'h ober war-dro al labour-se. A-walc'h en deus gant e dachennad ognon ha karotez, e dachennad patatez hag e vag.

18. - Ar Goañv

Hag e teuas warnon ar goañvezh kentañ. Adal miz Here, ne deo mui aet Saig war ar mor. Re rust e c'hwezh an avel bremañ, koulz lavarout bemdez. Goude Kala-Goañv e vez Saig devezhioù penn-da-benn hep mont er-maez, nemet diouzh an abardaez, un eurvezh pe ziv, da vesa Bailhenn a-hed ar c'hleuzioù. Môn a ra war-dro an ti, ar yer hag ar vioc'h er c'hraou. Me a chom da soñjal e korn an oaled, va daoulagad, etre va malvennoù damserr, o parañ war ar regezennoù o tivogediñ

goustadik dindan al ludu.

D' ar Sadorn peurliesañ ha d' ar Sul ingal ez a Môn ha Saig d' ar bourk, ma weler e dour begek en dremmwel diouzh tu ar c'hreisteiz. D' an ofern eo ez eont da Sul, a laront, ha Môn a zegas ganti en-dro, en ur baner zu ne deo tamm ebet heñvel ouzh paner ar pesked, pakadoù a bep seurt ma ra anezho he defotachoù. Hag e sellan outi o tennañ war an daol ur c'hasedad sukr e tammoù, ul lur gafe, ur pakad chikore e baper livet-flamm, un tamm kig-bevin a-wechoù evit aozañ ur gokelennad rata da Saig. (Hi ne zebro nemet patatez. Me, avat, ne da ket fall ganen em asied un drailhenn gig hag un tamm druzoni gant patatez frigaset ha bruzun bara soubet en hilienn.) Pa 'm bezo meneget ur bellenn c'hloan pe ziv, ur pakad nadozioù (da zifiziout ounto, rak flemmañ spontus a reont) ha pellennouigoù neud gwenn ha du, em bezo lavaret kement tra a c'heller gortoz da zont er-maez eus paner Môn, nemet ul litrad gwin ruz pe zaou ur wech an amzer hag ul lur avaloù pa vez anezho er stalioù war ar blasenn, goude an ofern.

31

Hag ez a ar goañvezh e-biou deomp, sizhun war-lerc'h sizhun. A-wechoù e sav barradoù gwall-amzer spontus. An avel kounnaret o c'hwezhañ diouzh Gwarlarn, Kornog pe Mervent, a c'harm er siminal, evel ur vandenn chas o yudal d' ar marv. Neuze ez an tostoc'hik d' an tan hag e selaouan ar gorventenn o klemm er-maez, an tarzhoù mor o tourtal ar c'herreg, ar gweleni o koagal a-us d' an tevenn hag e c'hortozan.

Môn ha Saig a lavar bezañ inouet a-wechoù, daoust dezhi da gaout, ouzhpenn, he c'heusteurenn da aozañ, dilhad ha loeroù da beñseliañ ha stamm da vrochennat kement hag e c'hell ober. Saig, eñ, a vez war dro e gevell da lakaat e stad, e fardaj hag e roued-stlej da zresañ. Met an dud n' int ket habask eveldeomp-ni, kizhier. C'hoant o deus bepred da dapout Pask a-raok Nedeleg hag e tlefent gouzout, peogwir e kred dezho bezañ speredekoc'h egedomp-ni, e teu pep tra d' e boent hag ez eo ret d' ar goañv bezañ kriz evit ma vo un hañvezh tomm hag un eost kaer.

19. - Galv an Nevez-Amzer

Nebeud-ha-nebeud ez eo aet an deizioù war hiraat. Yenoc'h eo kalz, avat, hag a-wechoù e vez revet gwenn geot an tevenn pa zigorer an nor diouzh ar beure hag e vez tammoùigoù skorn ouzh an delioù brikoli a zegas Saig evit Bailhenn o vlejtal en he c'hraou.

Un dra bennak em gwazhied a lavar din koulskoude emañ ar goañv o tennañ d' e zibenn hag ez eo erru an Nevez-Amzer. Marteze, avat, ez eo ni, kizhier, a sant ar c'hemm-se an abretañ.

Ur c'hazh bloaz on bremañ hag e santan ez eus er-maez un dra bennak kevrinus ouzh va gervel. Pa sklerijennas loargann miz C'hwevrer tevenn an Aistinoù gant he skleur gwenn-flour, ken c'hwek d' al lagad, e santis oa deut ar poent. Pa voe aet Môn ha Saig en o gwele-kloz, e ruzis er-maez dre zindan an nor. Sioul-meurbet e oa an noz, mouch avel ebet, ar mor oc'h alanat ingal, boull an oabl, gant ur steredenn amañ hag ahont o lugerniñ. Hag e-kreiz an neñv al loar en he brasañ sked o fennañ war an douaroù hag ar mor he sklerijenn arc'hant bev. Seblantout a rae din ez oa leton an Aistinoù, flour evel ur pallenn dindan va faviou, hag e trois a-gleiz etrezek Porzh-ar-Straed. A-hont, war-du torgenn ar Zilin, e kleven vat breudeur o kanañ hag ez aen daveto gant nerzh va mouezh yaouank.

32

Edont aze, c'hwec'h bennak, o hirvoudiñ o galv d' an Nevez-Amzer. A-unvouezh ganto e kanis troet etrezek al loargann, en holl levenez va bloavezh kentañ. Dihunet e voen trumm eus va goursav gant trouz kannoù em c'hichen, tufadennoù, leoù douet, evel ma oar ober tarv-kizhier zirollet. Stagat e oa daou d' en em gannañ evel pennfollet. Peder gazhenn a selle outo en ur genderc'hel gant o son. Ar yaouankañ, avat, unan louet, lentoc'h un tamm, a bellaas a-benn ur pennad amzer ha me a skampas d' he heul e freskder tarzhan an deiz o sklaeraat a-nebeudoù dremmwel ar Reter.

Nouspet gwech abaoe ez on en em gannet, me ivez, ouzh tarv-kizhier ar

c'hornad. Roet em eus taolioù pav kement hag em eus resevet. Mar deo bet faoutet din va skouarn gleiz, ur bloavezh, meur a gein em eus divlevet gant va ivinoù. Hounnezh eo hol lezenn. Kanadegoù an Nevez-Amzer ne deont ket hep ar c'hannoù ma tiskouezomp enno hon nerzh d' ar c'hazhenned, dezho da zibab gwelloc'h ar re a ra enor ar muiañ d' o gouenn galonek.

20. - An Ormel

Gant loar miz Meurzh e porzhias an avel er C'hornog. Glav yen ha kazarc'h a skourjezas ingal an Aistinoù gant fourradoù avel-dro na roent ket c'hoant deoc'h mont da aveliñ ho fri en aod.

Padal aliesoc'h e veze Saig er-maez. Diskenn a rae e galabousenn betek war e zivskoaz hag ez ae en ul lavarout hepken :

- Môn, a-dreñv ar Roc'h-Plat, e-kichen ti Barzhig e vin. Deoc'h da c'houzout pe du va gervel pa vo poent lein.

- Kit 'ta, Saig. Marteze e teuo un dra bennak en aod hiziv.

Ti Barzhig a zo ar c'henkiz stok ouzhimp ouzh tu Froudenn. Pa ne ra ket a c'hlav hag an avel er gwalarn, ez a Saig da skoachañ a-dreñv ar Roc'h-Plat ha n' en deus nemet sevel e benn un tammig evit gwelout ar mor betek Enez Eog ha pelloc'h betek beg douar Brignogan, a weler e rez an dremmwel, pa vez sklaer a-walc'h an amzer. Hag eno e chom Saig, eurvezhioù-pad, keit ha ma ne deo ket deut ar mor da vezañ brav a-walc'h evit morañ ar bigi adarre.

Komprenet em eus petra e vez Saig o spiañ e goudor ar Roc'h-Plat diwar e welout o tont ingal d' e lein d' ar mareoù-se, gant kasedoù hanter-dorret pe bostoù prenn a bep ment.

33

Peñse eo e vez Saig o c'hedal a-us d' ar Staol-Gozh a zo evel pa ve e rann eus an aod. Pa sellan mat, pennoù a welan o spiañ pelloc'h, en tu all da borzh Froudenn, e Porzh-ar-Wezenn, er C'heinou. Hag e tle bezel heñvel penn-da-benn d' an aod, betek ar Brouan hag Enez Vaz, en tu all da Roc'h ar Skeis. Tud war-c'hed war gement tuchenn a zo d' an aod-mañ, troet war-du Gwalarn ha Kuzh-Heol.

Gant reverzhi bras miz Meurzh e voe red spontus er mor. An avel er C'hornog a zeue da greskiñ c'hoazh nerzh al lanv. Ur riblennad bontoù liej, evel ma kaver war an traezh e-lec'h ma teu ar gourlenn da vervel, a welis ur mintin e-kreiz an Aistinoù, tost d' an hent karr ha d' ar Roc'h-Rouz. Deut oa ar mor betek aze e-pad an noz.

En deiz-se, evel m' oa tre brav, ez eas Môn ha Saig da ormelañ, pep hini gant e vouteg hag e falz gozh verglet. Me n' eo ket bet tost din mont d' o heul. Re yen an avel, hag ar mor a dle bezañ gwashoc'h c'hoazh. A-bell, avat, em eus sellet outo, e gwasked ur roc'h, a-us da borzh Froudenn. Diskennet oant ouzh troad Karreg-ar-Rouz, ur bikol garregenn blat a zo anezhi dibenn ar steudad kerreg du a gloz porzh Froudenn diouzh an avel viz. O gwelout a raen ac'han, ha tud all a oa ganto, er mor betek o dargreiz o treiñ mein pe o furchal e faoutoù ar c'herreg gant o falz. Pebezh micher !

Pa zeujont d' ar gêr, edont glib-dour-teil ha revet. Ur guchennad vat a ormel a oa ganto, avat, un ugent dousen bennak en holl. Môn a wiskas buan dilhad sec'h evit mont d' ar red d' ar bourk da werzhañ ar c'hregin ruz-se. Ur gont just a gasas ganti. Chom a reas nay war an daol, peadra d' ober ganto ur gokelennad rata evit koan. Amzer em eus bet da sellout outo a-dost. En un doare int heñvel a-walc'h ouzh ar brinik. Evelto e spegont ouzh ar reier, nemet ar re mañ a vez dindano hag izeloc'h en aod. Ne zeuer aes betek enno nemet pa vez tre bras. Kalz istimetoc'h int eget ar brinik, nemet labourus int da gempenn. Ret o zennañ eus o c'hrogen, a zo gwenn-lintrus ha flour en diabarzh, o divouzellañ, o rimiañ gant ur broust kalet hag o fladañ gant ar c'holvazh d' o zeneraat. Gwelet em eus Môn oc'h ober diouzh ar pardaez pa voe graet he zro ganti er bourk. Met ar rata a vez graet ganto a zo un dra lipous, me lar deoc'h. Reiñ a reont d' ar patatez ha d' an hilienn ur vlaz dispar ennañ holl frondoù ilbouedus ar mor.

E-pad koan Saig a lezas da gouezhañ em asied meur a zrailhenn ormel. Netra blazusoc'h ha c'hwekoc'h eget ormel poazhet mat. A-wechoù all e vezont fritet war ar billig ha dispar int ivez en doare-se.

34

21. - Gwin-peñse

Un taol-amzer a zirollas en deizioù war-lerc'h. Berr e voe, met spontus ha, pa zispakas an heol e benn adarre da sklerijennañ an tevenn gwentet ha skubet, ez eas Saig d' ober un dro d' e doull-ged. Trumm e teuas d' ar gêr.

- Môn, barrikennoù a zo erru gant al lanv. Nemet ne zeuio ket ar valtouterien da lakaet o fri dre amañ a-raok an noz!

Ar valtouterien a zo tud gwisket e glas a weler o vont bemdez a-hed an aod. Arvoriz ne blij ket kalz dezho o gwelout pa vez peñse war wel. Ar valtouterien a lavar ez eo ar peñse d' ar gouarnamant hag e ranker e gas da Rosko da werzhañ ha da c'houde e teuio lod eus an arc'hant-se d' ar re o deus e dennet eus ar mor. Tud an Arvor a gav gwell mirout ar peñse evito hep tremen dre dud ar gouarnamant, ha setu penaos e sav cheu a-wechoù etrezo hag an dud o felerinenoù glas.

Klevet em eus istorioù kriz a-walc'h diwar o fenn, e korn an oaled, pa stag Saig, lemm e lagad, da zibunañ tamm pe damm eus e eñvorennoù d' unan yaouankoc'h, deut d' ober ur weladenn dezhañ war-dro Nedeleg pe ar Bloaz Nevez. Neuze e vez lakaet war an daol, e-kichen ar greg hag ar pod-sukr, ar voutailhad lagout pe rom hag e teu an teod da vezañ hiroc'hik, met furoc'h eo tevel war an darvoudoù-se. Peurvuiañ e tremen didrabasoc'h an traoù, pa ne vez ket eus ar valtouterien tud da glask tabut.

Evel dre zegouezh, p' emaint war o hent d' an aod, e kav ar valtouterien tud d' o fediñ da zont ganto d' o zi da evañ ur banne gwin en ur zibriñ un tamm bara kig-moc'h. Da c'houde e vo ur banne kafe hag ur werennad hini kreñv pe ziv pe deir. Amzer da lakaat un tamm tan war ur c'horniad butun hag ez eo deut serr-noz pe dost. Mont a reer buan betek an aod, pe gentoc'h van a reer da vont hag... endro d' ar bourk... warc'hoazh e vo deiz adarre.

Setu a c'hoarvezas en dro-mañ ivez, moarvat, rak ne voe ket gwelet beg fri ur maltouter en aod Froudenn, e-pad ma poanie tud ar c'hornad da zegas war ar sec'h, e-harz an tevenn, ur pezh barriken. Hevelep tra a dremene en aodoù all.

- Moarvat, eme Saig, eo ur vatimant o tont a Vourdel he deus kollet, en taol-amzer diwezhañ, ar barrikennoù gwin a oa war he bourzh.

35

- Moarvat, eme Laou Gergouarat. Greomp dillo, avat. Da gentañ gwelomp ha gwin eo.

Toullañ a voe graet gant ur minaoued, e-kichen ar bont, e tal ar varriken hag unan a lakaas ur blouzenn en toullig hag a sunas.

- Gwin ruz, emezañ, eus an dibab !

Hag e tostaas an dud gant listriañ a bep seurt. Ar barazioù zoken a oa diskennet en aod da resev gwin e-lec'h dienn. Nemet, e feson, ne zivere ket fonnus a-walc'h ar gwin hag e stagas mouezhioù da glemm. Erru oa an noz ha n' o doa c'hoazh bet berad ebet eus ar gwin.

- Mat ! eme Jampi Gervoa, a zeue ken propik ar galleg gantañ pa veze tommet d' e benn, lakait ar varriken war he reor. Me zo o vont d' he didalañ deoc'h hag ez aio buanoc'h an traoù.

Diouzhtü e voe gwintet ar varriken ha Jampi en e sav warni o tarc'haouiñ taolioù botoù gant e holl nerzh. Souden e voe klevet ur strakadenn. Tal ar varriken a vankas dindanañ hag, a-raok m' en doe bet amzer da ober ul lamm a-gostez war an traezh, ez oa Jampi er gwin betek e zivskoaz.

- Sed amañ ur vadiziant dit, avat, Jampi, eme Laou Gergouarat, e-keit ha ma c'hoarzhe an holl ha ma tenned Jampi eus e gibell win. Diwar vremañ ne vi ket mezv ken.

Ne voe ket lakaet diaesoc'h an dud tamm ebet, en abeg ma oa bet soubet Jampi e-barzh er gwin. Goulonderet e voe ar varrikenn e berr amzer. Mòn ha Saig, tost eus o zi evel m' oant, a reas meur a dro gant o sailhoù. Ha, diouzh an noz, e-keit ha ma tommen-me ouzh an tan, e voe riñset gant dour klouar kement boutailh c'houllo a oa en ti, furchet war-lerc'h an holl bontoù a voe gallet da gaout, ha, da c'houde, gant an trezer, e voe diskennet ar gwin-peñse er boutailhoù ha pa voent stouvet aketus e voent savet d' ar solier ha kuzhet en ur c'horn dindan ur gwiskad seier huanoù.

- Eizh litrad ha daou-ugent a zo anezho, eme Vôn, hep kontañ ar pezh a chom er sailh glas hag a vo gwelloc'h evañ warc'hoazh... gant ma n' ho po ket re a boan benn, Saig, a gendalc'has-hi en ur c'hoarzhin sioul, rak meur a vanne sonn a zo aet ganeoc'h hiziv, 'm eus aon.

Saig, e werenn leun dirazañ, a sache war e gorn, ur skleurig drant en e zaoulagad, skoachet dindan o abrantoù blevek.

- Mat, Mòn, an Aotrou Doue en deus truez ouzh an Arvorad. Pa n' en deus ket aes da brenañ gwin evel mondianed kêr, e kas dezhañ ur varrikennad evit netra ur wech an amzer, peadra d' ankounac'haat ur pennadig blaz an dour sklaer.

36

- Ya, eme Von, ur bannac'hig gwin a domm d' ar galon... Me ne gavan ket fall kennebeut. Gwelloc'h eo ganen, avat, e ve bet ur varrikennad gwin evel-hen ha nann unan hini kreñv, evel ma teuas kement en aod, er bloavezh seitek, e-pad ar brezel, soñj hoc'h eus. Lod ne voent ket diwar an dour e-pad an hañv penn-da-benn ha meur a unan a zo bet darbet dezhañ kreñviñ, devet e ziarbarzh gant al laouig, evel ma raed eus al lagout-se.

22. - Ar Bizhin-trouc'h

Setu deut da vat an amzer vrav. Moret eo bet ar bigi diwar an tevenn, e-lec'h m' o doa tremenet ar goañv war o genou.

Bemdez, koulz lavarout, e vez Saig er-maez adarre, pell en tu all da Enez Eog pe d' ar Benven. Met ar bloaz-mañ a zo an hini diwezhañ dezhañ da vont. Gounezet en do e bañsion a besketaer hag er goañv-mañ e werzho e vag, e gevell hag e fardaj d' e vartolod. Ne viro nemet e roued stlej, kenkaz ma teufe, ur wech bennak, un taol meilhed e porzh Froudenn.

Gant Kala Mae e teuas ivez poent ar bizhin-trouc'h. Ar bizhin du-se, klogorennoù outañ, a zo war ar c'herreg en aod, n' eus ar gwir d' e drouc'hañ nemet d' ar poent-mañ bloaz. Ar bizhin du-se eo a ya da sevel ar bernioù, kabellek gant mouded, a weler a-renkadoù amañ hag ahont war an tevinier. Un teil dispar eo. Setu perak ez eus kement a glask dezhañ.

Deiz kentañ an trouc'h a zo evit ar beorien, ar re n' o deus na karr na loen. An deiz da c'houde evit ar re all.

N' eo ket an dud a vanke eta en aod da Gala Mae. Sammoù bizhin a zo bet savet war an tevenn ha skignet war al leton da zizourañ ha da sec'hiñ a-raok bezañ lakaet e bernioù kelc'hiek a vo graet dezho peurliesañ ur c'habell mouded evit mirout ouzh ar glav da ziskenn enno.

Zoken e-touesk ar re n' o deus na karr, na loen, na bag, e kaver tud da fellout dezho ober un eost bizhin fonnusoc'h. Mont a reont pelloc'h war-du an dazre. Liammañ a reont kenetrezo un hanter-dousen pe vuioc'h a hordennadoù bizhin hag e c'hortozont al lanv. Unan a sav neuze war ar bern gant ur berchenn hag a zeu en aod gant red ar mor. Nemet risklus eo an doare-se d' ober. Tumpañ a ra a-wechoù ar bern, pa zeu e strad da stekiñ ouzh ur roc'h dindan an dour hag an hini a zo war c'horre a zeu da heul war e benn er mor. Er bloaz-mañ ez eus bet beuzet ur

gwaz e-giz-se, nepell diouzh Karreg-ar-Rouz, botoù hag all. Re ziwezhat eo erruet ar bigi evit e saveteiñ. Ne voe adkavet e gorf nemet daou zevezh goude.

37

23. - Beleien o chifretezañ

Gant an hañv e weler tud a-ziavaez o tont d' an tevenn da dremen an devezh. Da di Môn e teu bep bloaz, peurvuañ war-dro miz Gouere, ur person eus diabarzh an douaroù hag ur c'heneil bennak gantañ.

Er bloaz-man ez eo daou veleg all gant ar person. Me kazh, n' em eus ket kalz a dro da gaout darempred ouzh ar veleien hag eveljust ez oan war evezh gant an teir sae zu-mañ e-barzh an ti.

Barbilh ha c'hoarzh a oa ganto, e-keit ha m' en em aozent da vont da chifretezañ. « Tintin Môn », en hent-mañ , « Tintin Môn », en hent-se, n' oa peoc'h ebet diouto. A-benn ar fin, setu an tri beleg e toull an nor, pep hini e banerig ouzh e skoaz ha troad e roued en e zorn.

- Anat eo, Tintin Môn, eme ar person, mignon an ti, ni n' omp nemet c'hoarierien war ar chifretez. C'hwi a ranko mont, evel boaz, d' an toulloù mat a anavezit aze en traoñ, evit ma tebrimp e-verr estreget bugale chifretez.

- Ya, ya, bezit dichati, aotrou person, mont a rin.

Ha, pa voe ar podad soubenn war an tan o virviñgoustad, Môn a bakas krog en ur roued troadet berr hag, ur banerig kelc'hiek a-bouez he dorn kleiz, setu hi en hent da ziskenn er c'herreg, etre ar Staol-Gozh ha Porzh-ar-Straed, me war he seuliou.

Diaes-tre ar c'hornad-se eus an aod. Uhel ar c'herreg ha dindano, en toulloù du, pa seller mat, e weler pezhiaoù chifretez, peget ouzh ar garregenn, a rez dour ar poull.

Ur reverzhi a-zoare eo hini miz Gouere er bloaz-mañ. Erruet e voemp dizale stok ouzh ar c'herreg meur, heñvel ouzh keinoù louet, ne da ar mor diwar o zro nemet pa vez tre bras. Dindan ar c'herreg-se ez eus dalc'hmat poulloù dour hag enno e teu ar chifretez bras da repuiñ war an traezh ha dindan ar bizhin da c'hortoz al lanv. E faoutoù ar roc'h e chom ivez a-wechoù ur silienn pe ul legestr krenn pe c'hoazh, tra doñjerusoc'h, ur vorgazhenn.

38

Môn ne voe ket pell o riñsañ ar poulloù eus o chifretez bras. Mont a rae dichipot dindan kof ar c'herreg hag e taole, eus he roued en he faner, bizhin hag all.

- Sell 'ta, Bisousig, emezi souden, ul legestr, chomet da c'henaouegiñ amañ er poullig. Deomp-ni e vo !

Hag e welen un dra bennak glas o reiñ taolioù lost fuloret en he roued. Tapout a reas Môn peg ennañ dre e gein d' aon da vezañ gwasket gant div durkez e baviou a-raok hag er baner, ma chomas peoc'h diouzhtu dindan ar bizhin. Ar genaoueg, evit gwir, a grede dezhañ bezañ salv, moarvat, dre ma oa bremañ adarre en deñvalijenn.

- E tle bezañ ur silienn dre amañ, Bisousig. Pa vez ul legestr en un toull ken uhel en aod, peurvuañ n' emañ ket pell ar silienn. Gortoz a ra ma kemmo al legestr e grogen. Ha pa vo gwasket gantañ he hini nevez, bouk c'hoazh, e kavo ar silienn an tu da lonkañ hec'h amezeg. E-giz-se eo buhez al loened hag an dud er mor ha war an douar. Dibriñ ha d' e dro, deiz pe zeiz, bezañ debret.

Pa vez hec'h unan ganen-me, Môn a varvailh dibaouez evelse ha ne goll ket hec'h amzer peogwir e komprenan kement tra a lavar.

- Bremañ deomp d' ar gêr, Bisousig-me. Ur guchennad vat a chifretez em eus, ul legestr hanter lur, hag ur loñj dit-te, sell, gant an taol roued diwezhañ.

Hag e tiskoueze din un doare silienn grenn, ruz-bizhin, o widilañ er roued.

Krapañ a rajomp d' an ti.

Dizale e voe klevet ar veleien o c'hoarzhin er-maez.

- Emaint erru, klev ! Poent eo din trempañ ar soubenn. Naon o do, sur mat.

- Me a oa oc'h echuiñ gant va loñjig n' oa ket fall tamm ebet, pa zeuas an tri chifretezer drant e-barzh an ti.

- Me, eme ar person, am eus paket un ugent chifretezenn bennak... dereat... hag ul lamm mat !

Hag e c'hoarzhe.

- Sellit, Mô, emezañ en ur dreiñ e gein, ha ne deo ket gleb-dour-teil, respet deoc'h, foñs va bragoù.

- Alato, aotrou person, ret e vo deoc'h e lakaat da sec'hiñ, eme Vôn.

- Bezit dinec'h, Môn, unan all a zo ganen er baner, war va marc'h-houarn.

E-keit-se an daou veleg all a lakae o fesketaerezh en ur plad war an daol. Mousklennoù farsus a raent en ur welout o doa, dezho o zri, tapet war-dro un hanter lur. Daou pe dri zouilh a oa ouzhpenn ar chifretez, avat, ho taolet e voent din e-tal an nor ma 'z is kerkent d' ober dezho o stal.

39

Pa zeuis en dro, edo an tri beleg oc'h ober meuleudi chifretez Môn ha brasoc'h meuleudi c'hoazh eus al legestr.

- E-pad ma tebrot ho soubenn, eme Vôn, me 'zo o vont da gerc'hat ur gastelodennad dour mor da boazhañ ar re-mañ. Kalz rusoc'h e teuont da vezañ en dour mor ha gwelloc'h blazet ivez, war a lavarer, rak evidon-me n' ouzon ket. N' em eus biskoazh tañvaet un unan.

Naon o doa tapet ar besketaerien da nebeutañ ha brav e tiskenne ganto ar soubenn legumaj. Degaset o doa, avat, pourvezioù all. Bezañ en aod a zigor ar galon. Ar person a lakaas ur bolez rostet war an daol, hag an daou all, unan ur pezh tamm morzhed-pemoc'h hag egile kilhevardon a bep seurt. N' oa ket bet ankounac'haet ar boeson kennebeut. Teir boutailhad gwin, gant liketennoù gwenn, a oa renket war an daol, pa zeuas Môn eus he zro en aod gant an dour mor.

Lakaet e voe diouzhtu ar gastelodenn war an tan ha pa vervas an dour e voe taolet chifretez ha legestr e-barzh. Un tamm difreta da gentañ en ur gouezhañ en dour berv hag echu. Dizale e voent ruz hag e voent lakaet en ur plad ha taolet hoalen gwenn warno.

Brav kenañ e raent e-giz-se d' al lagad ha c'hwez mat a oa ganto !

D' an ampoent e tegouezhas Saig, echu e zevezh war ar mor. Pedet e voe kerkent da vont ouzh taol gant an tri beleg a oa a-zevri bremañ gant ar morzhed-pemoc'h.

- Feiz, avat, ne larin ket nann. Digor eo va c'halon fenozh, eme Saig, en ur azezañ ouzh an daol.

- Ha c'hwi, tintin Môn ? eme ar person. Ne zebrit ket, kement a vall a zo warnoc'h bremañ da deurel dour war ho kafe. Deuit 'ta da zibriñ ganeomp !

- Morse tamm kig ebet, gouzout a rit, aotrou person. Un tamm bara hag amann am 'bo hag echu.

- Hag ur banne gwin mat, Môn, eme ar person, a leunie ar gwer war an daol. Arabat kaout aon, Môn. Hemañ ne raio ket a zroug deoc'h. Ar gwin onest a sav

nebeutoc'h d' ar penn eget an hini trafiket. D' ho yec'hed, tintin Môn, ha deoc'h, Saig !

E-pad ma tebrent, n' oan ket reuzeudik, me kennebeut. Tonenn ar morzhed-pemoc'h, druzoni ar c'hilhevardon, eskern ar bolez ha peadra outo da lipat a oa deut em asied lerc'h-ouzh-lerc'h. Un devezh lipous em buhez kazh, me lar deoc'h !

40

24. - Saig ha Bolo-Pacha

Ur wech diblusket ganto o chifrevez ha digoret al legestr d'e drouc'hañ e tammou, e teuas muioc'h a varvailh gant an dud.

Me a oa o lipat diabarzh korf al legestr pa glevis ar person o lavarout da Saig :

- Nag a draoù nul hoc'h eus tennet diouzh ar mor, tonton Saig ! Nann, ne gomzan ket eus ar gwin-peñse nag eus al laouig milliget-se a echuas da boazhañ diabarzh va c'henderv, Job ar Palud-Bihan. Nann eus an tammou koad nul a zeu ganeoc'h peurvuañ war-lerc'h an taolioù amzer eo e fell din komz... Ha morse n' hoc'h eus kavet d' an dazre, enket etre div roc'h, ur varilhad aour. Dipitus eo, pa soñjer en holl deñzorioù a zo bet lonket gant ar mor.

Saig en doa lakaet tan war e gorn-butun ha, distagellet e deod gant ar gwin c'hwek a oa o paouez evañ, e lavaras gant ur mousc'hoarzh hag ur sell a gorn :

- N' em eus ket kavet aour er mor, nann, gwir eo. Ur pikol kasedad aour am eus gwelet koulskoude tost ac'halen.

- N' eo ket posubl, tonton Saig, eme ar person stad ennañ o lakaat Saig da varvailhat, eñ ken tavedek peurliesañ.

- Eo, eme Saig, aour Bolo Pacha.

- C'hwi hoc'h eus anavezet Bolo Pacha, Saig ? An hini a zo bet barnet d' ar marv er bloavezh c'hwezek, a gredan.

- N' ouien ket e anv d' ar mare-se. Abaoe eo em eus gouezet, a gendalc'has Saig, en ur sachañ moked eus e gorn. Er bloavezhioù-se, Kintiniz amañ e-kichen ne zeuent ket da dremen an hañv en o c'henkiz. O mab a oa dister e skevent ha d' an Uhelgoad eo ez ae, e-pad ar mizioù tomm da alanat frond ar c'hoadoù pin. Feurmet e veze eta an ti da dud diavaez, a gemme bep bloaz. Er bloavezh pemzek eo, a gred din, e teuas amañ, gant ur c'harr dre dan eus Montroulez, ur vandennad oristaled n' em eus morse gwelet o far. Ar wazed a oa etre daou oad, na kozh na yaouank, na kaer na vil. Tud chik e oant, avat, tamm ebet sellus war ar gwerzhañ-butun, pa 'z aen-me da ginnig pesked dezho. Ar merc'hed eo am lakae souezhet. Teir maouez yaouank kaer a oa anezho, gwisket evel paotred peurliesañ pa 'z aent en hent, gant heuzoù evel an dud a ya war varc'h. Lijer e oant, n' hellfec'h ket krediñ. Da neuñv ez aent bemdez, mintin ha pardaez, hag, evit mont buanoc'h en dour, e-lec'h tremen dre an nor a gas war hent Porzh-ar-Straed, e lamment dreist ar c'hael a zo etre al liorz hag an hent-karr e ribl an tevenn. Ya, Aotrou person, evelse e raent. N' oant ket seizhdaletoc'h eget na laran deoc'h. Ur sachadenn war o divrec'h ha yav, dreist ar vur en tu all, war o zreid evel kizhier. Nann, Bisousig amañ n' hellfe ket ober gwelloc'h.

41

Me ne gollen netra eus an danevell.

- Klevet em eus abaoe laret er bourk ez oant o zeir merc'hed ouesk eus ur sirk bras. Neuñv a raent evel pesked ha ne raent forzh nag eus kerreg nag eus kas an dour. Alies a-walc'h ez aent d' ober un dro da Vrest hag e tistroent ac'hano gant kasedadoù traoù a bep seurt, lipouserezh, fanfarluchoù hag all.

Môn ha me a veze dalc'hmat en dro d' an ti, hi o skaotañ pe oc'h ober ar c'houez, me o tegas pesked pe o kempenn tra pe dra war-dro ar porzh.

Un deiz ez is tre er sal. Skoet em boa an a-raok war an nor. Moarvat ne grede ket dezho eo me a oa o tont pe n' o doa ket klevet, n' ouzon ket. N' oa nemet ar wazed er sal. Edont azezet o zri en dro d' an daol. Daou anezho o renkañ hag o kontañ ruilhadoù pezhioù aour dre m' o zenne an hini koshañ diouzh ur valizenn ler e-tal e dreid. Me n' em boa biskoazh gwelet a bezhioù aour nemet re a zek pe ugent lur. Eno war an daol e oa re vrasoc'h, re gant lur, a gav din. Morse n' em boa gwelet kemend-all na morse n' em bije kredet zoken, mar n' em befe gwelet gant va daoulagad, e c'helle bezañ ur seurt bern aour e kerz un den.

Santout a ris, kerkent hag antreet, ez oant tapet diaes ouzh va gwelout dirazo. Me ne raen ket a van da welout hag a ginnigas dezho va fesked, leñveded, ma 'm eus soñj mat. Degemeret e voent, evel kustum, ha n' em boe nemet o c'has d' ar gegin. Ha me kuit gant va arc'hant, ur wech lipet ar banne gwin a veze diskarget din da bep tro.

Me n' on ket aet da ganañ da zen ar pezh am boa gwelet en deiz-se.

- N' hoc'h eus laret din-me zoken nemet pell da c'houde, eme Vôn, trenkik he mouezh.

- Mont a reas kuit gwazed ha merc'hed, eme Saig, a-raok dibenn an hañv. Ne soñjen ket ken enno nag en o aour pa zeuas un deiz un den d' am gwelout. A Vontroulez e teue, hervez a lavare. War am eus komprenet, er bolis e oa, eus ar re-se a vez gwisket evel tud kêr ha na zisfizier ket outo.

Displegañ a reas din ez oa ur prosez d' an ampoent a-eneb un den anvet Bolo-Pacha hag e klasked testoù da laret o doa e welet amañ d' ar poent-mañ-poent.. Diouzh ar pezh a lare din diwar-benn an den, e zoare hag all, e welen anat e oa an hini koshañ, eus ar wazed bet o hañviñ amañ, ma raed anezhañ Bolo-Pacha.

42

« Hag anavezout a rafec'h an den a laran deoc'h, lakaomp, e vefec'h galvet da dest en e eneb ? » eme din ar polis en ur echuiñ.

Ha me ha respont dezhañ : « Ya, ma vez ar memes dilhad gantañ ».

Abaoe n' em eus ket bet a gelou.

C'hoarzhin sioul a reas ar veleien.

- N' oac'h ket chalet, tonton Saig, eme ar person en ur lakaat tan war ur c'horniad all, da vont dirak al lez-varn.

- Tamm ebet, eme Saig. An nebeutañ ar gwellañ ma 'z eer war dro ar bolis pe ar varnerien. Ha neuze ar Bolo-se n' en doa graet droug ebet din-me, ar c'hontrol eo. N' ouzon ket a belec'h e teue dezhañ e aour, met un tammik aesoc'h e tiskroge diouzh e wenneien eget ar re-mañ... (hag e tiskoueze troad e gorn ti Kintiniz) ... pe houmañ... (hag e troas e benn war-du ti Barzhig).

Ur pennad goude ez ae ar veleien en o hent war o c'hezeg-houarn.

25. - Kêriadenn an Aistinoù

Pa zeuas an Diskar-Amzer e laras Saig kenavo d' ar mor. Graet en doa e lod warnañ. Hiviziken e vevfe gant Môn diwar e dammig pañsion. Div dachennig a oa gantañ dindan ognon, karotez, patatez hag un nebeut kaol-pome, peadra da gaout e legumaj evit ar bloavezh ha da werzhañ un nebeut sac'hadoù pa zeue an traoù da vat. Diouzh ar pardaez, ez afe, da vesañ Bailhenn a-hed ar c'hleuzioù, en ur doullañ kaoz gant an amezeien oc'h ober war-dro o zrevadoù.

Poent an diskuizh a oa deut evitañ.

Hag evelse ez eas an amzer e-biou, en ur zegas warnomp, tro-ha-tro, ar goañv hag an hañv.

Ur bloavezh, d' an Nevez-Amzer, setu karradoù mein diskarget war an tevenn

a-zehou deomp, stok ouzh tachenn Laou Gergouarat. Ez oad o vont da sevel ti d' ar pesketaer nevez dimezet.

Un ti bihan a voe anezhañ, un tammik evel hon hini. Un nor, ur prenestr bihan, troet ouzh ar c'huzh-heol, ur solier. Kraou d' ur vioc'h ha d' ur pemoc'h. Echu e voe a-benn ar goañv hag e teuas an dud nevez e-barzh.

43

Er bloavezhioù war-lerc'h e kreskas c'hoazh ar gêriadenn. Ul lochenn-brenn a voe savet tostoc'hik ouzh ar roc'h rouz e-kreiz an tevenn. Un eil hag un trede da c'houde. Tud a zeue enno da dremen ar miziou hañv. Niver ar vugale a zeuas war greskiñ a vloaz da vloaz hag e tiazezas da vat kêriadennig an Aistinoù. N' oa ket mui hepken anezhi daou gozh, ur vioc'h hag ur c'hazh du, met ivez rummadoù yaouank hag o bugale o sevel mouezh o joa hag o yec'hed en avel-vor.

Kement-se n' oa ket hep talvoudegezh evidon-me. Da besketa ez ae ar re vras hag eveljust ar piri-gwrac'h hag an touilhed a vez din-me da bep tro ha restachoù kig ha kilhevardon a vare da vare.

26. - Marv Saig

E-keit-se, ni deomp ket war yaouankaat. Mar demaon-me bremañ e barr va nerzh, Saig ha Mòn a zeu war ziskar. Saig dreist-holl, rak Mòn, daoust d' he lagad fall, a chom drant bepred, dalc'hmat o vont a-gleiz hag a-zehou hag atav prest da varvailhat gant neb a gar.

Met Saig a zo o vont da fall. Ne gomz mui ouzhan dud nemet a vommoù berr, diaes da gompren meur a wech. Pa sav barradoù gwall-amzer e vez devezhioù-pad hep sevel diwar e wele-kloz hag e teu e izili da vorzañ muioc'h-mui. Mòn a ra war e dro evel war-dro ur bugel. Se ne vir ket ouzh ar gwad da redek gorrekoc'h-gorrek e gwazhied he hini kozh. Mervel a ra ennañ goustadik tan ar vuhez dindan ludu ar bloavezhioù tenn.

A-raok dibenn an hañv er bloaz-mañ eo chomet Saig war e wele hep gallout sevel ken. Ne deas ket pell amzer e-giz-se: hag ur beure ez oa marvet da viken skleur ar vuhez en e zaoulagad.

Difennet e voe ouzhin mont tre en ti ken na voe kaset va mestr d' ar vered. Kavet e vez tud da larout ez omp-ni gouest, ni kizhier, d' ober droug da gorfoù ar re varv. N' ouzon ket ha gwir eo. Kousket em eus e kraou Bailhenn betek ma tistroas Mòn gaezh diouzh interamant he fried. Glac'haret holl e oa en he mantele du.

27. - Stourm evit bevañ

Hag e teuas adarre an Nevez-Amzer hedro gant he reuziadoù glav-pil hag he sklaeraennoù heol o parañ war an tevenn glas-flamm. An tonnoù, a-liv gant an oabl, a zeuas da boket gant o c'hoarzh lirzhin d' ar reier rouz o tommheoliañ e-tal an traezhennoù skarzhet gant ar goañv.

44

Kazeg ar Wazh Vihan, pa stagas adarre da zaremprediñ an Aistinoù, a oa un ebeulig gell ouzh he heul, o piklamm, o c'hrizilhat hag o rual hep abeg, evit ar blijadur da fringal ha netra ken.

Du-mañ, avat, ne fringer ket kalz ha neket ar boued a zebromp a rojo deomp c'hoant d' hen ober. Abaoe m' eo bet kaset Saig d' ar vered ne vez ganeomp da bred nemet soubenn, patatez, kafe ha bara hag amann. Al laezh zoken a zo deut da vezañ berr en ti, rak gwerzhet eo bet Bailhenn da foar Ebrel ha ne vo mui buoc'h ebet er c'hraou. Evit kaout ul litradig laezh e rank Mòn bale betek Kergouarat pe belloc'h a-wechoù. O, n' eo ket e tisplij dezhi mont en hent. Morse ne dremen hep ober he zro er bourk da sadorn ha da sul. Aliesoc'h eget a-raok ez a da di he breur en tu all d' an Ti Ruz. Neuze e teu ingal litradoù laezh dous ganti hag e vez bepred ul lommig evidon-me.

Met un tamm kig a ra vad din-me ur wech an amzer. Meur a neizh kornigell am eus difoupet e derou an hañv en tachennoù melchon. Gant al lapined eo, avat, on

bet rikouret kalz gwelloc'h adal an hañv. N' on ket bet pell oc'h anaout kement lec'h ma vezont o terc'hel o bodadegoù war an tevenn pa vez bras al loar.

Ar re gozh en em vod evel komerezed o kuzulikat hag e keit-se ar re yaouank a c'hoari patati tro-war-dro war al leton glebiet gant ar glizh-noz.

Nag aes eo din-me mont dezho, dindan o avel, en ur skoachañ a-dreñv ar c'herreg. Ul lamm trumm pa vezan deut tost a-walc'h. Ur wic'hadenn, a-wechoù netra. Skampañ 'ra ar c'honikled d' o riboul, met etre va skilfoù e chom e bep gwech ul loenig tener, un drugar !

A vare da vare e tapan e-giz-se un tamm pred lipous a gavan gwell eget va skudellad soubenn an tri zraig. Buan e tisoñj al lapined moarvat pe marteze ne c'hellont ket tremen kennebeut hep o c'horolloù-noz ouzh skleur al loargann.

28. - Marv Môn

E-pad ar goañvezh war-lerc'h e fallas kalz da Vôn. Ne wellas ket kalz dezhi gant an Nevez-Amzer. Da vare gouelioù Pask e veze trempet dezhi ur skudellad soubenn ar c'haol hag ar patatez a rae vad kenañ d' he diabarzh, emezi d' hec'h amezeien deut da dremen un nebeut devezhioù war an tevenn, daoust d' an amzer griz a rae c'hoazh d' ar c'houlz-se.

45

Met aet an dud en o roud adarre betek an hañv, e chome Môn bepred e korn an oaled, e-tal he zanig dister. A-vec'h m' he doa kalon da aozañ he zamm keusteuenn. En-diavaez eus ur banne kafe gant laezhkignet, pa veze degaset dezhi eus ti he breur, ne gemere mui tamm boued nerzhus ebet. He nizezed a zeue war he zro ur wech an amzer, nemet n' hellent ket chom dalc'hmat ha Môn ne felle ket dezhi, e doare ebet, kuitaat he zi, evit mont da lojañ ganto.

.

Pemzektez 'zo bremañ n' hellas mui sevel diwar he gwele ha, derc'hent dec'h ez eo marvet. Aet eo da gaout Saig e bered ar barrez ha me 'zo deut da vezañ bremañ ur c'hazh hep ti nag ôz, rak rannet eo bet an arrebeuri etre ar gerent ha serret an ti gant ar perc'henn.

Me, avat, n' on ket chalet gant va lojeiz. Pa dro em fenn, ez an e kraou goullou Bailhenn. Aliesoc'h e vezan o kousket en un toull, e penn ar bern kolo, e-kichen ti Visañtig. Va boued a glaskan e skudell ar c'hi pe ar yer. Chaseal a ran muioc'h-mui en tachennoù hag en aod, ha, pa gavan an tu, ez an er c'henkizioù tro-war-dro, dre ur prenestr kornzigor hag e samman ganen, dichipot, un tamm kig pe un tamm pesk. Bezit dinec'h ne varvin ket gant an naon.

29. - Ar Brezel

Savet brezel etre an dud. Dalc'hmat e vez meneg ganto a vrezel en un tu bennak. Met en dro-mañ, evit doare, eo kroget tostoc'h ouzhimp. Tennet eo bet bag Lan war an tevenn ha n'emaomp krog nemet e deizioù kentañ miz Gwengolo.

Kuit eo aet ar baotred yaouank hag ar wazed e barr o nerzh ha deut warnomp ur c'hoañvezh kriz hag hir. Tremen am eus graet ar mizioù du o vorediñ en un toullig goudor er bern kolo. Pa gousker e santer nebeutoc'h e reer kof moan.

Gant an hañv o tostaat ez oan-me sederaet-holl evel bep bloaz. Rouesoc'h oa an dud en dro din, nemet gouzout a ra pep unan ar pezh en deus d' ober neketa ? En un taol kont, avat, em eus santet ur pezh strafuilh dre ar vro. « Erru int ! Me lavar deoc'h int erru ! »

Hag un deiz em eus gwelet o tegouezhout war an tevenn ur strollad gwazed, gwisket e gwer-louet, gant heuzoù ponner ouzh o zreid, armoù ouzh o skoaz. Paotred terrupl a oa anezho, melen o blev peurvuiañ. C'hoarzhin a raent evel bugale en ur sellout ouzh ar mor a oa sioul meurbet en deiz-se.

46

Menel a reas un toullad eus ar soudarded-se er vro. Daoust dezho da gomz ur

yezh disheñvel-krenn, a-benn e teuent da reiñ da gompren d' an dud p' o deveze c'hoant da brenañ un dra bennak. Digor kenañ oa o c'halon ha mont a ra traoù e seurt korfoù tud, me lar deoc'h.

Gant ar goañv o tont e troas an abadenn da fall. Er vro zigoad-mañ ez eo diaes kavout peadra da dommañ pa zeu ar yenienn, nemet degaset e vefe a-bell keuneud pe c'hlaou. Ar soudarded estren a oa ken troet gant an tantadoù ha m' oant sot gant an elumennoù vioù. Pa ne zeuent ket a-benn da gaout glaou a-walc'h, o deus staget da ziframmañ koadaj ar c'henkizioù tro-war-dro. Lod eus ar re-mañ a zo bet dismantret-krenn. Un druez eo !

Da c'houde eo staget al laeron d' ober ar riñs er c'henkizioù n' oant ket c'hoazh dismantret. El lochennoù zoken int bet ivez o furchal. Al laeron-se n' oant ket holl a-bell-vro. Me 'm eus daoulagad a wel sklaer en noz. Met peoc'h ! Er vro-mañ e reer pep tra, e ouezer pep tra hag e taver pep tra.

En hañv-mañ, avat, e derou miz Eost, setu aet kuit ar soudarded estren ziwezhañ. Ne gred ket din e ve keuz dezho. Diaes diaesoc'h e teue a-zeiz-da-zeiz bevañ en o serr. Laouen an dud bremañ en dro din. Emaint o c'hortoz ar brezel da echuiñ dizale ha distro e vo kent pell o c'herent aet d' ar broioù krec'h, emezo.

30. - Da glozañ

Setu me deut d' ur c'hazh kozh. Disoñjet o deus an holl va anv gwechall. Ne don mui, evit ar re am gwel o tremen d' ar red etre ar reier, nemet teuz an Aistinoù. Hag, evit gwir, deut on da vezañ ul lodenn eus ar c'hornad douar-mañ. Tennet em eus va buhez dioutañ war un dro gant al levenez hag ar boan am eus bet tro ha tro. Kavout a ra d' an dud em eus tremenet diseblant en o c'hichen. Ur fazi eo. Sellet em eus ouzh labour tenn Arvoriz gant daoulagad sioul na vezont ket touellet gant an arvezioù. N' em eus ket serret va malvennoù gant dismegañs war o foanioù muioc'h eget n' em eus graet fae war o eurvad. Douget em eus d' am feson kañv da grennard ar c'hourater, beuzet un devezh kañv e Porzh-Meur, tri bloaz 'zo, evel ma 'm eus douget kañv d' am mistri aet d' o bez goude tremenet ganto un hir a vuhez war an douar.

47

Nemet ne ran ket a drouz gant va glac'har, mar graen, un amzer 'zo bet, safar gant va joa. Ar gwad siouloc'h a red bremañ em gwazhied n' am foulz mui da abadennoù-noz an Nevez-Amzer o kellidañ dindan kann al loar. Mar redan dalc'hmat dre an nozioù boull pe deñval, ne dan mui da glask trabas ouzh tarvighier all ar c'hornad. Deut eo din gant an oad ur furnez sioul ha don.

Arc'houere an Aistinoù, setu petra on deut da vezañ. Spered ha gwad ar vro-mañ a red em c'horf bepred lijer daoust d' ar gozhni. Gwelloc'h, a gav din, e komprenan ene kuzh ar vro eget ne ra an darn vuiañ eus he bugale, trellet o daoulagad gant o frederioù pemdeziek. Furoc'h e vefe dezho selaou un tammik pishoc'h ouzh mouezh kevrinus o douar ha nebeutoc'h ouzh ar randonerezh douellus a-vaez-bro a zeu ingal da hilligañ dezho o diskouarn.

Na sioul e vefe manet o c'halon mar n' o dije disoñjet ar wirionez nemeti : Tremen a ra ar vistri, ar vro a bad !

Soñjal a ran a-wechoù e tad ar pevar faotr kaer a chome el lochenn vras dilezet bremañ. Stag oa hennezh ouzh ar vro-mañ evel m' on-me c'hoazh. Eñ en deus va c'homprenet hag a lakaio, deiz pe zeiz, va eñvorennoù en e yezh. Ne vevin ket pell amzer ken moarvat. Karout a rafen koulskoude gwelout, ur wech c'hoazh da nebeutañ, an Nevez Amzer o tigeriñ lagad an tommheolig e leton an Aistinoù ha klevout an alc'hweder o sevel a-blomm en oabl glas miz Gouere gant e bedennig bennek da borzhier ponner-glev en neñvoù :

« Pêrig, Pêrig, digor din ! »

Betek hen ne deo ket bet selaouet e bedenn. Mar bez er bloaz a zeu, ez aio gwelloc'h an traoù evit mat gant ar bed-mañ hag e c'hellin neuze klozañ digerse va daoulagad e levenez yaouank-flamm tevenn an Aistinoù o c'hlasveziañ adarre dindan heol ar peoc'h... Nemet ra ziskenno ar peoc'h en dro-mañ betek e goueled kalonoù trenket an dud !

Evelse beze graet !
Roazhon-Pariz,
Here 1944 - Gouere 1946.

PEDER C'HONTADENN

BRO-C'HRES

AR BIZIED AOUR

Bez' e oa e bro-C'hres ur roue anvet Midas.

Sot-pitilh e oa gant an aour ha daoust m' en doa kalz, c'hoazh ne oa ket evurus.

Un devezh e lavaras unan eus an doueed dezhañ : « Midas, petra 'garfes kaout dreist da bep tra all ? »

« Aour, » eme Midas, hag an tan en e zaoulagad.

« Diouzh ar c'hentañ, » eme an doue, « adalek vremañ e vo pep tra o treiñ en aour dindan da vizied. »

Evurus-meurbet e oa ar roue. « Aour ! » a lavare Midas, en ur rimiañ e gostezioù gant laouenidigezh. Sellout a reas war draoñ. E oa e zilhad warnañ o paouez treiñ en aour rik. Dindan e vizied e veze pep tra o treiñ en aour - avaloù, bleunioù, koad ha mein.

Ma ne oa mui kreñv a-walc'h e vevel evit dougen an holl aour-se war-lerc'h e vestr.

Mont a reas en e balez hag azezañ war e dron. Hag an tron ha dont da vezañ aour dindanañ.

A-benn neuze e oa savet c'hoant ennañ kaout boued hag e lavaras d' e vevelion degas dezhañ raktal peadra da zebriñ ha da evañ.

Pa 'z eas ouzh taol, e troas al listri hag ar boued, ar werenn hag ar gwinn e tammoù aour etre e zaouarn. Ne oa mui Midas ken evurus a-benn neuze ; ma lavaras d' e vevelion stlepel kuit an aour-se diwar e dro.

Neuze e teuas e verc'h vihan er sal. Kaer-dispar e oa hi evel ur vleunienn e-kreiz an hañv.

« Va zad ! » emezi, en ur redek davetañ d' e vriata. Kregiñ a reas Midas enni hag e troas ar verc'h vihañ da zelwenn aour war e varlenn.

Trist-meurbet e teuas ar roue da vezañ, hag eñ neuze d' ar c'haloup, penna-benn gant an hent, betek ti an doue.

« Emañ an dud e-pad an amzer o klask kaout ouzhpenn o c'hont, » eme an doue, « kae d' en em walc'hiñ e stêr Patoklus. »
46-50

Ha Midas da gerzhout war-du ar stêr ha d' en em walc'hiñ en he dour glan. O tont er-maez eus an dour, e krogas en ur maen. N' eas ket ar maen da damm aour en e zorn hag e vouc'hoarzh gant plijadur.

« Setu-me desket ar gentel ganin da viken, » emezañ, hag e tistroas d' e balez, roue laouen anezhañ.

DRO AR GOZAKED

AR MESTR KRIZ

Gwechall e oa un den ha dezhañ ur c'hi. E-keit ha ma oa yaouank ar c'hi, ha kreñv ha gouest da labourat ervat, e voe hegarat-kaer e vestr en e geñver. A-walc'h a voued en deveze ar c'hi ha pa veze yen an amzer, e c'helle kousket er gegin ouzh an tan.

Hogen pa voe deut ar c'hi da vezañ kozh - ken kozh, e gwirionez, m' en doa kollet e zent - hag eñ dic'halloud da labourat hiviziken - e teuas e vestr da vezañ kriz en e geñver. Ne roe ken boued d' ar c'hi kozh, hag a-wechoù e skoe warnañ un druez ! Betek ma taolas anezhañ er-maez eus an ti.

Kerzhout a reas ar c'hi kozh gorrek ha trist etrezek ar c'hoad. Ur pennadig e fellas dezhañ azezañ dindan ur wezenn vras, ha dizale e teuas war-du ennañ ur pezh pikol bleiz louet. Stagañ a reas ar c'hi kozh da grenañ gant an aon, hogen buan e teuas da welout e oa ur bleiz karadec anezhañ.

« Penaos emañ da gont hiziv ? » eme ar bleiz.

« Trist-kenañ, e gwirionez, » eme ar c'hi, « Kriz-spontus eo bet va mestr em c'heñver. Dre ma 'z on deut da vout re gozh evit labourat en deus pilet warnon, un druez, ha stlapet ac'hanon er-maez eus an ti. Ha setu-me amañ bremañ ! »

« Trist-kenañ, » eme ar bleiz. « Ret eo reiñ ur gentel d' az mestr. Selaou ! »

Astenn a reas ar c'hi kozh e ziskouarn da selaou gant evezh.

« Taolet em eus pled, » eme ar bleiz, « e vez da vestrez o lakaat he babig en e gavell en tu all d' an nor-dreñv, bep beure, tra m' emañ hi gant he labour. »

« Ya, 'vat, bep beure, » eme ar c'hi,
51-52

« Mat ! » eme ar bleiz. « Arc'hoazh d' ar beure e vimp o c'hedal aketus ha pa zeuio hi gant ar babig, me a redo davet an nor, sevel a rin ar babig diouzh e gavell ha mont kuit gantañ d' ar pevar-lamm. Ret e vod dit, avat, redek war va lerc'h, ha harzhal kreñv en askont dit bezañ klevet ganti. Evit dit bezañ dizant, evelkent e ranki ober van da lammat warnon. Neuze e laoskin ar babig hag e tec'hin kuit. Hep mar ebet e lavaro da vestrez d' he gwaz e vo bet saveteet ar babig ganit hag e c'halli distreiñ adarre ha bezañ degemeret. »

« Mat-kaer da venoz, » eme ar c'hi. « Mil drugarez dit ! »

Antronoz veure e savas ar c'hi hag ar bleiz abred-abred ha pa oa ar wreg o lakaat ar babig er c'havell ouzh an nor-dreñv e teuas ar bleiz d' ar red betek ennañ hep ober trouz. Sevel a reas ar babig gant e c'henou ha mont gantañ d' ar c'haloup war-du ar c'hoad.

Hag ar c'hi kozh neuze war-raok. « Bow-wow ! Bow-wow ! » emezañ, gant safar hag en ur redek war-lerc'h ar bleiz. Dont a reas ar wreg er-maez ha pa welas ar pezh a oa oa degouezhet e krogas da c'harmiñ d' ar pevar avel : « Aiou ! Aiou ! Aet eo ar babig gant ar bleiz ! Aiou ! Aiou ! Aiou ! »

E oa he gwaz o labourat pell e diabarzh ar c'hoad ha ne glevas ket he mouezh o hopal warnañ. Ar wreg a welas ar c'hi kozh o redek war-lerc'h ar bleiz hag o lammat warnañ. « Ow ! Ow ! » eme ar bleiz, o tiskregiñ diouzh ar babig hag o redek kuit.

Pa voe ar wreg degouezhet ouzh ar bugel, hag o welout e oa dic'hloaz, e voe stad vras enni.

« Sell aze ur c'hi mat, » emezi, « sell aze ur c'hi mat ! Komz a rin ouzh da vestr diwar da benn. »

Degemeret e voe adarre ar c'hi kozh gant e vestr, hag e vevas evurus e vuhez war hec'h hed.

BRO-IWERZHON

AN TEÑZOR ER PARK

E-pad an hañv e oa. Brav an amzer. Ur paotrig anvet Yann, o pourmen dre ar parkeier, a glevas a-greiz-holl trouz ur morzhol bihan o skeiñ. Sellout a reas er c'harzh, ha piv a welas eno ? Ur c'horrigan o renkañ ur votez vihan gant ur morzhol bihan. En e gichen e oa ur bailh bras.

53-54

« Ret din tapout anezhañ, » a soñjas ar paotr. « Met dav eo din teurel evezh bras pe e skarzho kuit... Demat, den bihan, » eme Yann dezhañ. « Petra zo ganit e-barzh ar bailh-se ? »

« Gwin a zo e-barzh. »

« Gwin, » eme Yann. « Eus pelec'h ac'h eus bet gwin ? »

« Gant bleunioù brug em eus graet anezhañ. »

« Gant bleunioù brug ! N' eus den ebet a c'hellfe ober gwin gant bleunioù brug, » eme Yann.

« Eo, eo ! » eme ar c'horrigan. « Met sell 'ta, da saout a zo aet e-barzh ar parkad gwinizh ! Tuchantik az po ar vazh gant da dad.

Bez e oa Yann o vont da dreiñ e benn pa soñjas e rafe ur sotoni.

« Gwelloc'h din tapout anezhañ diouzhtu, » a soñjas, hag e pakas ar c'horrigan etre e zaou zorn.

« Lez ac'hanon da vont kuit ! » a youc'has ar c'horrigan. « Ma lezez ac'hanon da vont e lavararin dit pelec'h ez eus un teñzor kuzhet er park. »

« Mat, » eme Yann. Hag e lakaas ar c'horrigan war an douar. Bale a reas d' e heul, ken na errujont, en tu all d' ar pont bihan, en ur park bras leun a vleunioù melen.

« Sell, » eme ar c'horrigan o tiskouez ur vleunienn. « Dindan gwrizioù ar vleunienn-se ez eus ur bodez leun a aour. »

« Penaos e rin avat da gaout ar bodez-se pa n' em eus pal ebet da doullañ an douar ? » eme Yann.

« Kerzh d' ar gêr da gerc'hat unan ! »

« Arabat dit mont kuit, avat, » eme Yann.

« Ha perak n' em befe ket ar gwir da vont kuit, » a glemmas ar c'horrigan. « Graet am eus ar pezh em boa prometet. Diskouezet em eus dit pelec'h emañ an teñzor. »

Skoulmañ a reas neuze Yann e vouchouer ruz ouzh troad ar vleunienn. Evel-se, a soñjas, e ouezin pelec'h ober an toull.

« Ma, kerzh kuit, ma fell dit, » emezañ d' ar c'horrigan, « met diwall a dennañ kuit va mouchouer. »

« Ne rin ket, touiñ a ran, » eme ar c'horrigan.

En ur redek ez eas Yann d' ar gêr. Pa zeuas en-dro avat, ur pal gantañ en e zorn, e oa skoulmet ur mouchouer ruz, heñvel-plak ouzh e hini, ouzh troad kement vleunienn a oa er park.

56

BRO-JAPAN

AR C'HAD HAG AR GURLAZ-MEUR

Ha c'hwi oar perak o deus ar gedon ur vuzell faoutet ? Setu amañ an istor.

Ur wech e oa ur c'hadig vihan o chom en un enezenn e-kichen Bro-Japan. Kement he doa redet ar c'hadig-se dre an enezenn ma oa deut da anavezout kement gwezenn ha kement karregenn a oa warni. Ha c'hoant a zeuas dezhi ober un droiad da Vro-Japan.

Penaos treuziñ ar mor, avat ? Kaer he doa bet redek e-pad devezhioù a-hed an aod, n' he doa gwelet bag ebet o tont.

Un deiz, avat, setu ma welas ur mell gurlaz-meur o neuñ en dour, hag ur menoz a zeuas dezhi raktal.

« Aotrou Gurlaz-meur, » a hopas, « deuit amañ, me ho ped. »
« Petra zo ? » eme ar gurlaz-meur o tont a-dizh.

« Me 'fell din goulenn un dra bennak ouzhoc'h, Aotrou Gurlaz-meur. Pet gurlaz-meur a zo o vevañ er mor-mañ ? »

« N' ouzon ket, » a respontas ar gurlaz-meur. « Met perak e c'houlennit an dra-se ? »
« Peogwir e kredan ez eus muioc'h a c'hedon o vevañ en enezenn eget n' eus a c'hurlazed-meur o vevañ er mor. »
« Se n' eo ket gwir avat, » eme ar gurlaz-meur feuket-bras.
« Gwelet e vo. It da gerc'hat kement gurlaz-meur a zo o vevañ dre amañ. Me euz va zu a zegaso an holl c'hedon, ha kontet e vo pet a zo eus pep seurt. »

Ha diouzhtu ez eas ar gurlaz-meur da gerc'hat e vreudeur hag e vignoned. Abenn ur pennadig e oa ar mor o virviñ ganto e-tal an enezenn.

« Mat, » eme ar c'had. « Met n' on ket evit ho kontañ e-giz-se. En em lakait holl en ul linenn, ma vo aesoc'h din al labour. »

En em lakaat a reas ar gurlazed-meur en ul linenn, ha kement a oa diouto ma oa stok al lost eus an hini diwezhañ anezho ouzh douar Bro-Japan.
« Brav e-giz-mañ, » eme ar c'had. « Bremañ e c'hellan kontañ. »

Ha hi da lammat eus, an eil gurlaz-meur d' egile en ur lavarout a vouezh uhel : « Un... daou... tri... pevar... pemp... c'hwec'h... »

Pa erruas gant an hini diwezhañ e lammas war an aod.
57

« Trugarez, » emezañ d' ar gurlazed-meur. « Bremañ emeus treuzet ar mor, ha setu holl ar pezh em boa ezhomm ober. »

Hag e stagas da lammat, ha da zañsal, ha da c'hoarzhin - da c'hoarzhin kement ken ne faoutas he muzell.

Hag e-giz-se eo bet an holl c'hedon abaoe, faoutet o muzell.

NOTENN, - Ar peder c'hontadenn-mañ a zo bet embannet e-barzh CYMRU'R PLANT. Lakaet int bet e brezhoneg diwar ar c'hembraeg, an div gentañ gant Per EVEN, an div ziwezhañ gant Per DENEZ. Ar skeudennoù a zo bet prestet ar c'hlichedoù anezho gant URDD GOBAITH CYMRU. Trugarekaat a reomp an arzour, Syr IFAN AB OWEN EDWARDS hag an Dimezell GWENNANT DAVIES evit o madelezh.

Pec'hed eo d' un tad ha d' ur vamm dirannañ o bugale eus kaerañ teñzor o gouenn, rak ar gwir da c'houzout yezh e dud kozh eo kentañ gwir a ro an natur da un den o tont er bed-mañ ; setu perak pa welan tadoù ha mammoù, anvioù breizhat, eus ar re gaerañ, dezho, ha gwad breizhat, eus ar yac'hañ, o redek en o gwazhied, o c'hallegat ouzh o bugaligoù - hag aon ganto na ouezfent ur ger brezhonek - e vezan doñjeret evel dirak ur pec'hed a-enep an natur.

**Yann Vari PERROT,
Feiz ha Breizh, Genver 1929.**

AN ENEBOURIEN

gant ABANNA

E bodadeg ar C'hendalc'h Keltiek e Gwengamp, da fin an devezh diwezhañ, e kleven Per Denez, a-greiz burutellañ ur skrid nevez-embannet, o komz eus an Aotrou Perrot e-giz-mañ : « Ma karas ar Frañsizion, e oa hepken en abeg d' al lezenn gristen a c'hourc'hemenn karout an enebourion ».

Gwelet em eus sklaer neuze pegen divoulc'h e oa chomet betek-hen em spered kudenn an enebouriezh ; ivez pegen rouez an dud, pe en iliz, pe er-maez eus an iliz, hag a asant lavarout o deus enebourion. Perak ar seurt tabou er bed-mañ a vrezel, a vrezel speredel, arboellerezhel, broadel, kevredigezhel ? Pe c'hoazh perak en em repuiñ en difetis ha lavarout : « Ar Bed, setu an enebour », « Ar Pec'hed, setu an enebour », « An Arc'hant, setu an enebour » ?

Va enebour eo an hini a vir ouzhin da vevañ. An hini a lak diaesoc'h va bividigezh ; an hini a zo va spered en e zalc'h er c'hiz-mañ-c'hiz hag a barra outañ da greskiñ, pe a sank ennañ menozioù faos, boazioù drouk. Hag ar gwashañ enebour, bez' ez eo an hini na azaouez ket va ene, tempt Doue, na ginnig ket din an teñzorioù a gargas Doue ganto e ene dezhañ.

Enebourion Vreizh eo ar re a vez ganto ur galloud bennak war traoù Breizh ha na reont ket war-dro an traoù-se e sell eus mad hor bro. Ar Frañsizion enebourion Vreizh, hon enebourion, ya ! N' hor bezet ket aon d' hel lavarout. Ma vez rouez, e-touez ar C'hallaoued a bep rumm, ar re a zo deut da renerien ar Stad C'hall hag o deus bet kudennoù Breizh etre o daouarn, e vez peurrest ar C'hallaoued kenwallerion, ha pa vije dre chom dic'houzvez - peurrest ar C'hallaoued ha Breizhiz en o zouez... Ha koulskoude, piv e Breizh, en Emsav, a weler o tistagañ er brasañ peoc'h-kalon : « Hon enebourion ar C'hallaoued » ? Hag-en o defe an dud a relijion aon da bec'hiñ o lavarout kement-se ? Padal n' eo ket « N' ho pet ket a enebourion » eo a lavaras Jezuz, hogen « Karit hoc'h enebourion ». Dioueriñ enebourion a vez nac'h furn uhelañ ar garantez.

59

N' eo ket an aon rak pec'hiñ a laka un tabou war gudenn an Enebouriezh e spered an dud a relijion, nag e spered an dud direlijion, daoust d' ar pezh a gred o c'houstiañs emdrut. An aon rak an traoù meur a zo e pep krouadur war an douar, setu ar pezh hor pella diouzh ar gudenn-Doue-mañ : karout an enebourion. Er bed kriz a-vremañ e kavomp gwelloc'h derc'hel serr hon ene, ennañ hepken un toullig-dor da lezel an traoù plijadurus da zont tre, ha ni prest atav d' hen serriñ prim ouzh ar re zisplijus. Hag atav e vez displijus an traoù meur, rak ni a zo bihan hag int a zo traoù meur, ha n' hellont dont ennomp nemet war-bouez freg ha freuzh : gwell ganimp chom pell diouto, tamolodet war poullig mukr hor buhezic, eget lakaat hon holl danvez da ziflukañ evel Jezuz ouzh ar Groaz. Hon askre digalon a gav re dev ar ger Enebour en abeg d' ar menozioù kasoni - pe karantez - a zo stag ouzh an neudennig-se. N' on ket feizdoueoniour, hogen chom hep klask an enebourion a zo evidon an hevelep pec'hed ha nac'hañ karout an enebourion, ur pec'hed grevus, enep ar Wirionez hag ar Garantez, ma n' eo ket grevusoc'h c'hoazh.

« Ha bremañ, pedomp evit hon Armeoù ! » : nag a wech em eus klevet ar frazenn-se e galleg, evel just, e-barzh chapel va skolaj, pa oan krennard, e-pad ar brezel 1939-40. Hag e peden, a gav din... n' eo ket peursioul, avat, rak biskoazh n' em eus karet ar brezel. Hiziv avat, nag e karfen klevout o kouezhañ diwar muzelloù beleien Vreizh (ha beleien broioù all ivez) prezegennoù e-giz-mañ : « Ouzhoc'h e komzin diwar-benn ho tlead anaout hoc'h enebourion hag ho tlead karout anezho ; hag a-c'houde e pedimp evit hon enebourion ». Neuze kalz a galonoù, ha va hini en o zouez, a baouezfe a vezañ gwasket evel ma vezont alies pa welomp, goude an Aviel, ar beleg o treiñ war-du an dud d' ober e brezegenn. Rak ec'hon evel an neñv eo kudenn an Enebouriezh, ha mar deo bet pleustret gant Kristenion Veur, poent eo dimp, muioc'h eget biskoazh, bezañ kelennet warni. Yec'hed hor bro a zo e-barzh.

Sav eus ar poultr, o Breizh, torr da chadennoù ha kerzh war hent an amzerioù
bepred plan ha dinamm, divlamm ha didamall, kaer ha splann.
eskob Gwened, 1937.
Ao. TREHIOU

NOTENNOU DIWAR-BENN AR GOUEZELEG HAG AR YEZHOU ALL E BRO-SKOS

gant Per DENEZ
(Kendalc'h)

5. - AN ILIZOU HAG AR GOUEZELEG.

Ne c'heller ket reiñ amañ, siwazh, niver an ilizoù hag ar chapelioù a vez prezeget enno e gouezeleg : un enklask a zo bet graet e 1942 gant An Comunn Gaidhealach met n' eo bet morse embannet ar frouezh anezhañ. N' eus bet gallet dastum evit al labour-mañ nemet un nebeut notennoù.

E Glaschu ez eus bet krouet ur Gaelic Chapel Society e 1768 hag un iliz ouezeleg a zo bet savet eno e 1770. Un iliz ouezeleg all a voe digoret e Grianaig (Greenock) e 1791, un drede e Paislig (Paisley) e 1793, div c'hoazh e Glaschu e 1798 ha 1824. Ilizoù gouezeleg all a zo bet savet e Glaschu e 1834, e Cowcaddens e 1860, e Cille Mhaoil Chaluim (Govan) e 1862 ha 1866, e Glaschu adarre e 1875. Bremañ ez eus servijoù gouezeleg bep sul en eizh eus ilizoù Glaschu ha bep miz en un iliz all.

En e levrig talvoudus diwar-benn ar gouezeleg e ro John Lorne Campbell ar roll eus kargoù an Iliz a zo ret, pe aliet, gouzout gouezeleg evit mont enno. Ne fell ket din eilskrivañ ar roll-se amañ en e vunudoù : trawalc'h menegiñ e vez ret gouzout gouezeleg evit 55 karg war an douar-bras, evit an holl kargoù en inizi nemet re Arainn ; aliet e vez gouzout gouezeleg evit 65 karg all war an douar bras.

An Iliz Dieub, evel a ouzer, a zo bet a-hed ar wech a-du krenn gant ar gouezeleg. An Iliz Katolik (kontelezh Earraghàidheal) a zo, evel e Kembre, a-du gant ar yezh. An Iliz Eskobel he deus ur garg ouezeleg e Gleann Comhann (Glencoe).

Ne vouler ket a ouezeleg e kazetenn sizhuniek an Iliz Eskobel The Scottish Guardian. Teir pajennad gouezeleg a vez atav e kelaouenn viziek an Iliz Dieub The Monthly Record of the Free. Church of Scotland. Kelaouenn Iliz Presbutel Bro-Skos Life and Work he deus ur stagadenn ouezeleg.

61 6. - BIBLOU HA LEVRIOU-SALMOU.

Bibloù

Al levr kentañ embannet biskoazh e gouezeleg (Notenn : gouezeleg a dalvez amañ kement ha gouezeleg Bro-Skos, arabat faziañ.) a zo ul levr a zevosion : un droidigezh gant Seon Carsuel, eskob an Inizi, eus Liderezh Knox. Moulet e 1567 ez eo anavezet al levr bremañ dre an eilskrid embannet ez-aketus e 1873 gant an Dr. MacLauchlan. Talvoudus-tre eo an oberenn e-keñver yezhoniezh.

E-tro kreiz an triwec'hvet kantved hepken e voe troet ar Bibl e gouezeleg evit ar wech kentañ. Gant James Stuart e voe graet troidigezh an Testamant Nevez (29) war goulenn an SPCK, hag e 1767 e oa embannet 10.000 skouerenn anezhi, adembannet 21.500 skouerenn e 1796, hag adembannet 10.000 skouerenn adarre e 1796, 1813, 1819, 1821. En hevelep bloaz (1821) e oa adembannet ar skrid ivez gant ar BFBS (British and Foreign Bible Society), hag adarre e 1825 hag e 1828. Plomennoù 1828 a voe neuze skeudennet war zink hag abaoe o deus servijet d' ober meur a vouladur hep deziad ebet. E-keñver relijion ne voe ket ken pouezus an **Tiomnadh Nuadh** (Testamant Nevez) hag ar C'hatekiz Berr. Pouezusoc'h e voe avat e-keñver yezh, rak e zoare-skrivañ an hini eo a zo bet degemeret gant an holl.

Ur mab d' ar Rev. J. Stuart, anavezet dindan an anv a Dr. Stuart, a lakaas, e kenlabour gant un den anvet John Smith, an Testamant Kozh e gouezeleg, hag evit e labour e tegemeras 1.000 lur sterling digant ar gouarnamant saoz. Dre lodennoù e voe embannet an droidigezh etre 1783 ha 1805 (5.000 skouerenn bep taol). E 1807 e oa graet ur mouladur e stumm ul levr (20.000 skouerenn moulet gant an SPCK) hag adembannet e oa en hevelep bloavezh koublet gant an Testamant Nevez (20.000 skouerenn c'hoazh) . Etre 1821 ha 1902 ez eo bet advoulet ar Bibl gouezelek seitek gwech da nebeutañ gant ar BFBS, ha skouerennoù marc'hadmat koulz hag « a lorc'h » a gaver da brenañ. An droidigezh nevesañ-holl a zo bet graet e 1937 gant an Dr. G. A. Frank-Knight evit an National Bible Society of Scotland.

Katekizoù

E 1631 ez embanner un droidigezh eus Katekiz Calvin, hag e 1651 e teu er-maez ar C'hatekiz Berr ken brudet : 83 gwech da nebeutañ e voe adembannet hemañ etre 1651 ha 1855, hag e gavout a reer atav da brenañ, lakaet en doare-skrivañ a-vremañ gant H. MacDougall. Katekiz ar Mammoù, embannet e 1752, a voe advoulet meur a wech ivez. Unnek katekiz all a anavezer, met n' int ket bet ken brudet.

62

Levrioù Pedennoù ha Salmoù

Ar Book of Common Prayer a zo bet lakaet e gouezeleg e 1794 hag adembannet dek gwech etre ar bloaz-se ha 1858 dindan an anv **Leabhar na h-Urnuigh Choitchinn**. An Dr. John Smith, - an hini a skoazellas treiñ an Testamant Kozh - a embannas levrioù pedennoù e 1777 ha 1789 hag ur *Jezuz-Krist, Skouer ar Gristenien* (Leanmhuim Criosd) e 1785 (adembannet e 1836). Un droidigezh all eus *Heuliomp ar C'hrist* a voe graet ivez gant ur beleg katolik MacEachen.

Er Salmoù hag er *Laoidhean Spioradail* eo e weler awen ar Ouezeled en he c'haerañ. Eus ar Salmoù embannet gant **Sunod Earragàidheal** ez anavezer 80 mouladur graet etre 1659 ha 1836. Abaoe ez eo bet kemeret plas ar Salmoù-se gant barzhonegoù relijiel **Dughall Bochannan** ha **Padruig Grannd**. Al **Laoidhean** gant **Dughall Bochannan**, troet meur a wech e saozneg ken brav int, a zo bet adembannet 27 gwech etre 1767 ha 1875. An **Nuaidh Dhain** gant **Padruig Grannd** a zo bet moulet 23 gwech abaoe 1809 (30) .

Un nebeut levrioù brudet

E-touez al levrioù saoznek a zevosion e voe **The Call to the Unconverted** unan eus ar re gentañ da vezañ troet e gouezeleg : nav embannadur etre 1750 ha 1877. Levrioù all a seurt-se a zeuas da heul : **The Alarm to the Unconverted**, 8 mouladur gouezelek etre 1781 ha 1860, **The Saints' Everlasting Rest**, 7 mouladur etre 1862 ha 1878, **Confession of Faith**, 13 mouladur etre 1825 ha 1898, **The Pilgrim's Progress (Cuairt an Oilthirich)** , 10 mouladur etre 1812 ha 1876. Barzhonegoù un nebeut skrivagnerien o deus graet berzh bras ivez : barzhaz Uilleam Ross a zo bet moulet 6 gwech, Grain Rob Donn 5 gwech, Orain Gaidhealach Donchadh Mac an t-Saoir 10 gwech, barzhonegoù Alastair Mac Dhonuill (Alaistair Mac Maighstair Alastair) 10 gwech, Dain Seumas Mac Ghriogair 6 gwech (ar wech diwezhañ en Amerika) . Kement-se a ziskouez pegen bev e oa chomet ar gouezeleg evel yezh skrivet zoken goude « Unanidigezh » ar Parlamantoù: ar skol an hini eo hepken a oa da lazhañ, tost da vat, anezhañ.

63

7. - KEVREDADOU GOUEZELEK.

Un taol-sell hepken

Kevredadoù skosat a bep seurt a zo e Bro-Skos, met kalz anezho a zo chalet muioc'h gant an haggis, ar predoù en enor da Rabbie Burns hag ar bagpipes eget gant ar gouezeleg : eus ar strolladoù-se ne vo ket komzet amañ. Kevredadoù gouiziek a zo ivez, evel an **Ossianic Society**, hag e c'hell bezañ troet mat ouzh ar gouezeleg : an **Edinburgh Royal Celtic Society**, da skouer a ginnige e 1939 kant luriad a brizioù evit ur genstrivadeg ouezelek. Meneg a rank bezañ graet, ha gant

kalz meuleudi, eus Kevredigezh Ouezelek Inbhirnis (**Comunn Gaidhlig na Inbhirnis**, savet e 1871), he deus stourmet atav evit ar gouezeleg evel evit ur yezh vev : ur 500 ezel bennak he deus, hag embann a ra un dastumadenn leun a notennoù talvoudus. An emsav **Tir nam Beann**, bev-mat un tregont vloaz bennak a zo, ne vez ket mui klevet anv anezhañ. **Comunn na Piobaireachd** a vod ar ouezelegerien a ra war-dro ar bagpipe, **Comunn na Clarsaich** (500 ezel e 1947) ar re a ra war-dro an delenn vihan. Ar **Scottish Gaelic Text Society**, krouet e 1934, he deus embannet levrioù pouezus-tre e 1937, 38 ha 39 : emeur e soñj adsevel anezhi. Ar strollad **Fios** (Gouiziegezh) - ar ger Fios o vezañ graet eus lizherennoù kentañ ar gerioù-mañ : **Folklore Institute of Scotland** - savet e 1947 gant John Lome Campbell eus Kanna, a zo kroget da zastum kanaouennoù ha kontadennoù en inizi hag e 1950 o deus embannet lod eus o fladennoù souezhusañ. Ouzhpenn-se ez eus un nebeut Skosiz o labourat en inizi, abaoe bloavezhioù, evit an Irish Folklore Institute (31). Met brasañ strollad Bro-Skos e-keñver yezh a zo **An Comunn Gaidhealach**.

An Comunn Gaidhealach

Pa vo graet istor Keltia en hor mare-ni e vo ret merkañ levezon souezhus Kembre war ar broioù all evit pezh a sell ar stourm sevenadurel. An nebeut tud en em vodas e miz Here 1890 da sevel An Comunn o doa c'hoant kaout un Eistezvod skosat ; daou-ugent vloaz diwezhatoc'h ez eo skouer Urdd Gobaith Cymru a ro da **Seoras Marjoribanks** ar soñj da grouiñ **Comunn na h-Oigridh**.

En **an t-Oban** eo e voe savet **An Comunn**, d' an 30 a viz Ebrel 1891, hag en hevelep kêr e voe graet ar Mod kentañ (Mod - bodadeg) er bloaz war-lerc'h. An Comunn avat a zo kalz muioc'h eget ar Mod, daoust ma 'z eo anavezet dreistholl dre ar Mod : bez ez eo ivez ur strollad-stourm sevenadurel, gouestlet da zifenn ar gouezeleg er skolioù hag er vuhez pemdeziek, da skoazellañ kement tra a denn da lennegezh, istor, sonerezh hag arz Bro-Skoz, da skoazellañ ijinerezhioù an Uheldirioù, ha da lakaat dougen ar gwiskamant skosat.

64

Goustad met dibouez ez eo kresket ar c'hevredad. E 1892 e teue 50 kenstriver d' ar Mod ; pa voe graet ar Mod evit an eil gwech en **an t-Oban**, e 1934, e teue 1664. E miz Eost 1904 en doa an Comunn 50 lur sterling madoù ; e 1939 en doa 25.000. Er bloavezh 1905 e oa deut 70 lur a-hed ar bloaz e-barzh keff an Comunn ; e 1939 e tegemere an Comunn 1.100 lur. E 1939 en doa an Comunn 160 kevrenn, ha 5.000 ezel e 1943.

Renet eo an Comunn gant ur c'huzul a zo ennañ 30 ezel, en o zouez ur rener ha tri is-rener ; dindan ar c'huzul-se ez eus 8 poellgor, 12 ezel e pep hini anezho, hag a ra war-dro an Arc'hant, an Deskadurezh, an Embannadurioù, an Abostolerezh, an Arz hag an Ijinerezh, ar Mod hag ar Sonerezh, **Clann na Fhraoich** (Strollad ar Brug, o vodañ ar re a ra le da gomz gouezeleg hepken kenetrezo) ha **Comunn na h-Oigridh** (Strollad ar vugale). Labour an Comunn a zo kaset en-dro a-hed ar bloaz, gant seizh kargiad gopret (1947) , anezho ur sekretour-meur, un adsekretour, ur rener evit hanternoz ar vro, ur rener evit ar yaouankiz, ur rener evit ar sonerezh hag ar c'hoariva, ha div sekretourez. Kargidi all a zo c'hoazh, o reiñ ul lodenn hepken eus o amzer : an Teñzorier Meur, Rener ar Gelaouenn, ar Gelennerien Sonerezh ha kelennerien ar Skol-Hañv Ouezelek.

Bevañ a ra ar C'hevredad diwar skodennoù an izili, profoù, gwerzh ar gelaouenn **An Gaidheal**, gounid sonadegoù ha dañsadegoù, hag ivez kestoù. Bep bloaz, da geñver ar Mod, e vez graet ur gest vras er c'horn-bro e-lec'h ma vezo ar gouel : e 1948 ez eus bet dastumet war-dro 2.500 lur evit Mod Glaschu ha 2.180 lur muioc'h a voe dastumet e-pad ar Mod. Abaoe diwezh ar brezel ez eus bet kroget da zastum arc'hant evit **Comunn na h-Oigridh**. E-pad ar brezel e veze kestet evit **Maoin Litreachais Gaidhlig**, da baeañ levrioù gouezelek d' ar soudarded ha d' ar brizonidi.

Kelaouenn **An Comunn** a zo **An Gaidheal**, embannet bep miz e div yezh, gant skeudennoù (28 pajenn vras bep taol). Klasket ez eus bet ivez sevel ur gelaouenn lennegel en teir yezh, **Alba** hec'h anv, met un niverenn hepken a zo deut er-maez betek-hen. E 1946 ez eo bet divizet gant renerien **An Comunn** moulañ dreist-holl levrioù evit ar bobl : ar **Scottish Gaelic Text Society** a vefe lezet da blediñ gant ar skridoù gouiziek, an **Educational Institute of Scotland** gant al levrioù-skol.

Klasket en deus **An Comunn** ober skolioù-hañv, hogen morse n' eus deut kalz tud dezho. Graet eo bet ar c'hentañ kamp e **Lochabar** e 1909, gant 35 kamper ; ken nebeut a dud a zeuas ar bloaz war-lerc'h ma ne voe ket mui graet skol-hañv ebet e-pad pell. Ur c'hamp all a zo bet e 1913, war a seblant, hogen n'eo nemet goude ma voe savet **Clann na Fhraoich** gant **Iain Moffat-Pender** eo e voe adkroget da vat gant al labour, : 28 den a zeuas d' an **t-Eilean Sgitheanach** e 1928, 30 da **Port Ellen** e 1929. Un nebeut bloavezhioù hep kamp ebet adarre, war a seblant, ha neuze ur skol-hañv en **Arasaig** e 1934 gant 45 den en o oad ha 25 bugel ; unan e **Tobar Mhoire** e 1935 gant 30 den, un all e **Stornabhadh** e 1937 gant 36 den. Skol-hañv **an t-Oban**, e 1940, gant 30 den a seblant bezañ bet an hini diwezhañ.

Deut eo ar Mod da vezañ, abaoe e zeizioù kentañ en **an t-Oban**, un dra bras-bras - ar pezh n' eo ket marteze eus ar gwellañ evit ar gouezeleg : pevar devezh e-pad ar gouelioù, kenstrivadegoù a bep seurt a vez graet, prizioù a vez roet evit barzhonegoù, danevelloù, pezhioù-c'hoari, evit lenn gouezeleg, kanañ tonioù gouezelek, c'hoari an delenn, gwiat ha livañ danvez, ober pezhioù stamm, pezhioù broderezh, ha meur a dra all. Ouzhpenn-se, un devezh a-bezh, **Latha na h-Oigridh**, a vez gouestlet d' ar vugale. E gwirionez, kement a genstriverien a zo bremañ ma ranker ober Modoù rannvro da brientiñ ar Mod broadel : e 1939 ez eus bet seizh Mod rannvro (241 kenstriver e Mod **Ile**, 231 en hini **Muile**), dek e 1947 (lod anezho o padout daou zevezh), pevarzek e 1948 (300 kenstriver e Mod **Inbhir-Lochaidh**, 500 en hini **an t-Eilean Sgitheanach**). D' ar Mod broadel e teu atav ur 1.500 kenstriver bennak : 1.076 e **Peairt** e 1947, 1.557 e **Glaschu** e 1948 (543 e rummad ar re yaouank, en o zouez 188 evit ar genstrivadeg dre skrid ha 133 evit ar genstrivadeg dre gomz ; 1.014 e rummad an dud en o oad, en o zouez 49 dre skrid ha 124 dre gomz) ; 1.441 en **Inbhirnis** e 1949 (524 bugel ha 917 den en o oad). Siwazh, dont a ra muic'h-mui ar Mod da vezañ, e-lec'h ur vodadeg ouezelek, ur Gouel an Highlands, gant ar gouezeleg ennañ evel un dra iskis da vezañ diskouezet. Goude Mod **Inbhirnis** e tisplege unan eus danevellourien ar BBC, **Patrick Shuldham-Shaw**, kement-mañ : « Ur C'hembread en deus lavaret din e oa bet heuget o klevout kement a saozneg war al leurenn. Pezh en deus nec'het ac'hanon kalz muic'h a zo bet gwelout gouezelegerien vat oc'h en em gavout, o lavarout un nebeut komzoù e gouezeleg, hag o treiñ d' ar saozneg diouzhtu. Ma n' eo ket prest ar gouezelegerien da ober eus ar gouezeleg yezh ar gêr, yezh o darempredou gant o mignoned ha, bewech ma vezo tu, yezh o labour hag o c'henwerzh, e teuo buan ar gouezeleg da vezañ un eñvor eus an amzer gozh. Lavarout ur geriennig bennak ur wech ar bloaz da geñver ar Mod ne raio netra da zerc'hel ar gouezeleg bev ».

Comunn na h-Oigridh

E 1932 ez eo bet savet **Comunn na h-Oigridh** gant **George Marjoribanks (Seoras Gallda)**, ur Skosad saozneger desket gantañ ar gouezeleg (32). Anvet e oa bet **Seoras Gallda** e penn **Clann na Fhraoich** e-lec'h **Iain Moffat-Pender**, hag e diabarzh ar Clann e tibabbas krouiñ ur strollad digor d' ar vugale dindan 16 vloaz hag a rafe le da gomz gouezeleg hepken kenetrezo. Berzh a reas e strollad diouzhtu : e 1939 e oa tremenet tost da 4.000 bugel drezañ hag e miz Here 1947 8.159 rik-harik. Er bloaz-se en doa ar strollad 136 **Feachdan** (Kevrenn) oc'h ober bodadegoù, kanadegoù, o werzhañ levrioù gouezelek, o teskiñ traoù a-benn kenstrivañ er Mod, a-wechoù oc'h embann kazetennoù (evel An **Caibearnach** embannet gant kevrenn **Port Righ**).

Ar re wellañ e-touez ar vugale a dremen arnodennoù anvet **Làn Ghaidheal** ha **Sàr Ghailheal** (hemañ diaesoc'h) a ro dezho ar gwir da zougen arouezioù. Setu amañ niver ar vugale o deus gounezet arouez al **Làn** pe ar **Sir Ghaidheal** etre 1938 ha 1949 (sifr al **Làn Ghaidheal** a zo roet da gentañ) : 1938 : 140, 75 ; 1939 : 84, 31 ; 1940 : 65, 38 ; 1941, 1942 : war a seblant ne voe arnodenn ebet en daou vloavezh-se en abeg da varv **Seoras Gallda** ; 1943 : 63, 57 ; 1944 : 65, 40 ; 1945 : 67, 37 ; 1946 : 114, 47 ; 1947 : 91, 68 ; 1948 : 105, 69 ; 1949 : 91 61.

Bep bloaz e vez graet ur skol-hañv gant **Comunn na h-Oigridh**. Dalc'het eo bet an hini gentañ e 1936 dindan renerezh **Seoras Marjoribanks** ; an eil e 1937 gant 49 bugel ; un all e 1938 gant 81 bugel ; un all c'hoazh e 1939 gant 60 bugel.

Paouezet e voe gant ar skolioù e-pad ar brezel. E 1946 e oa adkroget ganto : e 1947 e teue d' ar c'hamp 36 paotr hag 20 plac'h ; e 1948 73 paotr ha 22 blac'h ; e 1949 38 paotr hag 28 plac'h. E miz Kerzu 1949 e voe graet ur Skol-C'hoañv, a badas tri devezh, evit ar renerien-gevrennoù, hag e miz Mae 1948 ar Mod kentañ gouestlet penn-da-benn d' ar vugale a zeuas ouzhpenn 100 kenstriver dezhañ.

67

Meizet ganto pegen talvoudus e oa labour Comunn na h-Oigridh evit dazoned ar vro, e tivizas renerien **An Comunn Gaidhealach**, e miz Gouhere 1947, distagañ ar strollad diouzh **Clann na Fhraoich**, reiñ dezhañ e rener e-un (**Hector Mac-Dougall** an hini eo a voe anvet rener) ha dastum evitañ 10.000 lur sterling. O c'hoant a zo krouiñ ur gazetenn evit ar vugale, sevel ur Skol-Veur ar Vugale digor a-hed ar bloaz ha kaout ur c'helenner d' ober war-dro. Dija e vez embannet **An Gaidheal Og** evel stagadenn d' **An Gaidheal**. Ne vo ket gwelloc'h doare da enoriñ eñvor ar brogarour mat, **Seoras Gallda**, Doue d' e bardono, eget ober eus **Comunn na h-Oigridh** ar strollad kreñv ha niverus en doa bet c'hoant da sevel.

8. - KAZETENNOÙ HA KELAOUENNOU GOUEZELEK.

Traoù a zevosion eo a voe embannet da gentañ e gouezeleg (gwelout pennad 6). Bremañ, a-hend-all, ne vez mui embannet kelaouenn pe gazetenn ebet e gouezeleg penn-da-benn.

Kelaouennoù relijiel

Ar gentañ kelaouenn ouezelek a gavomp roud anezhi a zo **An Teachdaire Gailach**, a voulas 600 pajenn e 1830 ha 1831. Pemp bloaz goude e voe kemeret e lec'h gant **An Teachdaire Ur Gaidhealach** a voulas 248 pajenn e 6 niverenn. **Cuairtear nan Gleann**, krouet e 1840, a reas berzh gwelloc'h, peogwir e vevas tri bloavezh, oc'h embann 1.200 pajennad a ouezeleg. E 1844 e kroger da voulañ **Caraid nan Gael**, ha n' en doe nemet 5 niverenn. **Teachdaire nan Gaidheal**, kroget d' e voulañ en hevelep bloaz, a yeas betek an niverenn 13. **An Fhianais**, embannet e 1845 ha 1846, en doe 36 niverenn (656 pajenn). Da heul e teuas c'hoazh **An t-Aoidh Miosuil**, 1847-1848, 17 niverenn ; **Fear-Tathaich nam Beann**, 1848-1850 ; **Caraid nan Gaidheal**, 1853, un niverenn hepken ; **Bratach na Firinn**, 1873-1874. E 1879 e voe kroget da embann stagadenn ouezelek **Life and Work**. Hag evel hon eus lavaret dija e vez teir pajennad gouezeleg e pep niverenn eus **The Monthly Record of the Free Church of Scotland**.

Levrioù bruderezh

N' eus bet embannet nemet gwall-nebeut anezho : unan a anavezer, moulet e liv ruz, diwar-benn ar c'holera, daou gant strolladoù kretadurezh, ha neuze un niver almanakoù, an darn vrasañ eus ar **Feillire**-se moulet gant **Edward Dwelly**.

68

Kazetennoù

N' eus ket bet tu da studiañ en un doare klok an holl gazetennoù embannet bremañ en Uheldirioù. An **Inverness Courier** hag ar **Stornoway Gazette** a ra evel pa ne vije yezh ebet anvet ar gouezeleg. An **Oban Times** a embann bep an amzer un nebeut linennoù e yezh ar vro. An **Northern Chronicle** eus **Inbhirnis**, an **Highland Herald** (savet e 1947) , ar **Weekly Scotsman** a embann pennadoù gouezelek.

Kelc'hgelaouennoù

Ar **Scottish Gaelic Review** (1881-1885) hag ar **Celtic Review** (1914-1916), o deus graet labour mat war dachenn ar studioù keltiek. E-barzh an **Transactions of the Glasgow Gaelic Society** hag e-barzh re ar **Gaelic Society of Inverness** e kaver ur bern traoù talvoudus ivez. Ar gelaouenn wellañ bremañ eo ar **Scottish Gaelic Studies** embannet abaoe 1926 gant **John MacDonald**, lenner keltiek e skol-veur **Obairdheathain**.

Kelaouennoù gouezelek

An Gaidheal, kentañ kelaouenn savet biskoazh da zifenn ar gouezeleg, a zo bet moulet da gentañ e **Toronto** e Mezheven 1871. O tont da **C'hlaschu** e 1873 da heul

he rener, **Angus Nicholson**, e vevas betek 1877. He lec'h, chomet vak e-pad pell amzer, a voe kemeret e 1905 gant **An Deo Gréine**, kazetenn **an Comunn Gaidheallach**, a gemmas anv e 1923 evit dont da vezañ **An Gaidheal**. Moulet brav eo ar gelaouenn-se : reiñ a ra, e gouezeleg hag e saozneg, keleier, kuzulioù evit izili an **Comunn**, pennadoù a bep seurt ; ne bled ket gant al lennegezh.

Ur gelaouenn lennegel a voe savet e 1901 gant **Ruairidh Stiubhart Erskine of Marr** : hec'h anv a oa **Am Bard**, an **Tir agus an Teanga** ; ne voe embannet, avat, nemet seizh niverenn anezhi, ur 16 pajenn bennak e pep niverenn. E 1911 e savas **Erskine of Marr** ur gelaouenn all, **Guth na Bliadhna**, a voe embannet ur wech bep tri miz e stumm niverennoù 100 pajenn. Skrivet da gentañ en div yezh, e teuas buan **Guth na Bliadhna** da vezañ unyezhek hag ez embannas traoù pouezus-tre mervel a reas a 1925. Bep an amzer (1917, 1918, 1921, 1930) en deus **Erskine of Marr** embannet ivez un dastumadenn gaer anvet **An Rosanarch. Alba**, ur gelaouenn gouestlet d' al lennegezh ha d' ar brederouriezh vroadel, a zo bet embannet he niverenn gentañ e 1948. Abaoe un nebeut mizioù (1953) ez embanner ivez ur gelaouenn all talvoudus-tre, **Gairm** hec'h anv.

69

An holl gazetenoù pe glaouenoù broadel a ra ul lec'h bras pe vrasoc'h d' ar gouezeleg : en o zouez e c'heller menegiñ **Alba. Nuadh** (marv abaoe), **The Freeman**, **The Scots Independent**, **The Scots Socialist**, **The New Scot** (marv abaoe), **The Voice of Scotland**, **The Scottish Chapbook**, **The Lion Rampant**, h.a. **An Ceum**, kazetennig an Emglev Gouezelek (Iwerzhonek), a vez embannet en iwerzhoneg hag e saozneg. **Crois Tara**, ur gelaouenn dalvoudus e gouezeleg penn-da-benn, a zo bet lazhet gant ar brezel diwezhañ. **A Bhreatach** a zo marv ivez. E gwirionez, ar gazetenn ouezelek nemeti a c'hellas biskoazh bevañ-bevaik e-pad ur pennadig-amzer n' eo ket bet moulet e Bro-Skos !

Tiez-embann

Pevar zi a embann levrioù gouezelek : **John Grant** e **Dun Eidin**, **Eneas MacKay** e **Sruighlea**, **MacLaren**, e **Glaschu** ha dreist-holl, abaoe un nebeut bloavezhioù, **William MacLellan** e **Glaschu** gant ti **MacLellan** eo bet roet d' ar ouezelegerien levrioù kaer evel **Dain do Eimhir** ha **Fuaran Sleibh. An Comunn**, evel just, a embann levrioù ivez. Er **Scottish Centre** e **Glaschu** e kaver da brenañ an holl levrioù gouezelek.

9. - AR GOUEZELEG HAG AR SKINGOMZ.

E 1926 e voe skinet gouezeleg evit ar wech kentañ met e 1935 hepken en doe ar gouezeleg e bennadig-amzer bep sizhun : un hanter- eur da gregiñ, ha goude-se 55 munutenn e 1939. Pa darzhas ar brezel e voe lezet ar gouezeleg a-gostez, met diwezhatoc'hik e voe roet dezhañ un hanter- eurvezh endro. E miz Genver 1949 e veze skinet gouezeleg e-pad 95 munud bep sizhun, en doare-mañ : d' al Lun, un danevellig e-pad 10 munud ha kanaouennoù e-pad 20 munud ; d' ar Merc'her ur servij relijiel, 20 munud ; d' ar Yaou, c'hoari goulennoù ha respontoù, fentigelloù, 35 munud ; d' ar Gwener, keleier, 10 munud. E miz Here 1949 e voe roet ur c'hard- eur ouzhpenn d' ober kentelioù gouezelek : levrig ar c'hentelioù (embannet gant ar BBC) koulz hag ar c'hentelioù o-unan a reas berzh bras.

Ar re a ra war-dro ar gouezeleg er BBC skosat o deus meur a wech divizet gant kouerien dirak ar skiner, pe lakaet anezho da ganañ, pe da gontañ danevelloù. Lod eus an traoù dastumet evel-se a zo bet embannet e stumm ul levr **Am Measg nam Bodach**. E-pad ar brezel ez eus bet enskrivet ivez kanaouennoù, danevelloù, divizoù gant gouezelegerien a-vihanik eus ar Chanada, deut evel soudarded da Vro-Skos, ha talvoudus eo an enskrivadurioù-se e meur a geñver. Abaoe 1941 he deus kevrenn ar gouezeleg e **BBC Glaschu** ur c'harr dezhi hec'h-unan, gant kement benveg a zo ret da enskrivaat mouezh an den.

70

Betek-hen n' eus bet graet tra c'hoazh evit ar skolioù hag ar vugale. Ha n' eus ket da grediñ e vo graet kalz tra keit ha na vo skinva ebet en Uheldirioù. Un druez eo, rak ur skinngomz broadel a rafe kalz da ziwall ar gouezeleg ha da unvaniñ anezhañ.

(Da genderc'hel.)

A dra sur, an holl strolladoù tud o komz ar memes yezh o deus ar gwir da
glask en em unaniñ ha dont da vezañ dishual.
Christian MOREUX.
« Journal de la Marine Marchande » , 11 mars 1954.

HA LENNET OC'H EUS ?...

...En « **Ecclesia** », c'hwevrer 1954, ur pennad gant **Jakez Ducharme**, diwar-benn an Ilizoù gallek en U.S.A. Kuitaet ganto ar C'hanada, en abeg d' an dienez, emañ ur milion a dud o vevañ bremañ e broioù-krec'h ar Stadoù Unanet. Talvoudus meurbet eo ar pennad-se evidomp ; da gentañ, dre ma tiskouez al labour fonnus graet war-dro 1855 gant an Aotrou 'n Eskob de Goesbriand ha pemp beleg breizhat all. D'an eil, dre maz eo evidomp ur skouer a bennegezh hag a stourm. « Ar pezh a ro d' an dud-se un doare ken ispisial, eme Ducharme, eo dezho fellout a-grenn derc'hel d' o yezh en pep degouezh a-bouez eus o buhez, daoust d' an holl gastizoù arboellerezhel pe gevredigezhel. »

En holl skolioù, gwitibunan, e vez kelennet ar c'hatekiz hag ar pedennoù e galleg, hep kontañ ar yezhadur hag ar pep retañ eus al lennegezh c'hallek.

A-wechoù e vije bet plijet d' un eskob, disheñvel e soñj diouzh e fideled ganadat-gallek, o lakaat da blegañ dindan ar saozneg. Met ar gristenion a zo en em savet diouzhtu bep gwech, hag a zo chomet feat rik d' o yezh.

Bez' ez eus tost da 200 skol-barrez kanadat-gallek, en o zouez skolioù-uhel ; ne vank dezho nemet ur Skol-Veur.

Ar pezh a ra bemdeiz un nebeut a dud dastrewet en ur vro divent, beuzet e mor ar saozneg, daoust ha n' hellfemp ket hen ober-ni ?

...Komzoù Claudel : Ar wirionez n' he deus tra ebet da welout gant niver an dud a c'hell bezañ gonezet ganti.

...Levrioù Makabeiz, ho po ar blijadur, deiz pe zeiz, d' o lenn en brezhoneg yac'h. En ur eilskripañ an droidigezh savet gant an Aotrou Klerg, em eus merzet pezh a zeu alies, evel un diskan, war vuzelloù ar c'hozhiad santel Eleazar, ar Seizh Breur hag o mamm, a-hed o merzherinti : Respont a reas Eleazar en yezh ar vro... Lavarout a reas an eilvet mab en e yezh... Fromus eo gwelout penaos e felle d' ar yuzevion, gwasket gant an alouberion, derc'hel da yezh ha da zoareoù o zadoù. Ha derc'hel betek er poanioù krisañ, betek ar marv. Tostait o c'homzoù ouzh ar pezh a lavare Pikot, mevel Kadoudal, 150 vloaz 'zo e-pad e brozez « Oc'h heuliañ an hent o deus desket din va zadoù kozh, n' hellan ket diroudañ ». Diwar vremañ e chomo tud-veur amzer Vakabeiz kalz tostoc'h d' am c'halon, hag o fediñ a rin evit silvidigezh ar brezhoneg.

...Lizher Eskibion Madagaskar (miz Du 1953. Talvoudus eo evit diskouez o deus ar gristenion ar gwir ha zoken an dever da vezañ broadelourion ha da glask frankiz o bro. Reiñ a reomp ar bommoù pennañ, rik evel maz int bet skrivet, en galleg, evit na c'hellfe den ebet tamall din cheñch pe dreuzkemer tra pe dra o treiñ anezho :

« L'Eglise souhaite ardemment que les hommes comme les peuples progressent vers plus de bien-être et assument toujours davantage leurs responsabilités - et la liberté politique est l'une de ces libertés et de ces responsabilités fondamentales, Ne pas en jouir prouve une évolution inachevée, et ne peut être que temporaire. Aussi l'Eglise, comme le droit naturel, reconnaît la liberté des peuples à se gouverner eux-mêmes... En conclusion, nous reconnaissons la légitimité de l'aspiration à l'indépendance comme aussi de tout effort constructif pour y parvenir. »

BENEAD

Ar c'hilheien-raden, eme Dolstoi, p' o devez c'hoant da dreuziñ ur stêr a en

*em gemer evel-hen ar re anezho a vez da gentañ a en em daol, war o fenn, en dour,
a vil vern, ken na deu o c'horfoù marv da ober ur pont d' ar re all da dremen. Ret
e vo ivez da veur a gant Breizhad en em reiñ evel-se, korf hag ene, evit saveteiñ
hor brezhoneg.*

Yann Vari PERROT, Feiz ha Breizh, 1929.

NOTENNOU

HOR MIGNONED. -

Frañsez ar Bihan, breur, en Ensavadur Breudeur Sant Yann, a zo bet beleget gant an Aotrou 'n Eskob Renard a Versailhez, e prioldi Sant Yann Champrosay, d' an 18 a viz Gouere. Kanet en deus e oferenn gentañ e Pleiber-Krist, d' an 8 a viz Eost. An Tad Gwion Rolland S. J. a zo bet beleget e Penniliz Sant Yann, Lyon, gant an Aotrou Kardinal Gerlier, arc'heskob, d' an 30 a viz Gouere. Bez e tle kanañ e oferenn-bred kentañ en iliz Sant Loeiz, Brest, d' an 29 a viz Eost. Hor gourc'hemennoù doujus.

An Ao, hag an Itron F. Kervella-Kongar a zo laouen da gemenn deoc'h ez eus bet ganet dezho un eil merc'hig, d' ar lañ a viz Gouere. Anna-Gwenola eo bet anvet. An Ao. hag an Itron Andrev Merser a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o mab Alan, e Peillag (Morbihan), d' an 30 a viz Mezheven. - Gwellañ gourc'hemennoù d' hor mignoned.

KAÑV. -

An Ao. hag an Itron J. de Bellaing a gemenn gant tristidigezh ez eo marv o mamm, an Itron Charbonnier de Sireuil, e Pariz, d' an 12 a viz Mezheven. An Ao. hag an Itron Cheritel a gemenn gant tristidigezh eo marvet o mab Joel oadet a beder sizhun, d' an 10 a viz Gouere 1954, en Alfortville (Seine). Hor gourc'hemennoù tristañ d' hor mignoned glac'haret.

419 KOUMANTANTER. -

Kreskiñ a ra niver hor c'houmananterien. E gwirionez, e-pad daou viz hon eus gounezet 12 koumananter nevez : (Amañ e rankomp menegiñ labour kalonek hor c'heneil, Alan Al Louarn, en deus kavet abaoe derou ar bloaz 15 koumananter) hogen 6 all o deus nac'het adkoumanantiñ. Ur galv a rimp c'hoazh e miz Here d' ar vrezhonegerien bet koumanantet d' Al Liamm, Setu ar sifrennoù :

Aodoù an Hanternoz, 59 Penn ar Bed, 90 ; Il ha Gwinum, 34 ; Loer Izelañ, 28 ; Mor Bihan, 28 ; Pariz ha tro-war-droioù, 85 ; Departamantoù all 51 ; Trevadennoù Bro-C'hall, 6 ; Iwerzhon, 11 ; Bro-Skos, 1 ; Bro-Gembre, 9 ; Bro-Saoz, 3 ; Stadoù-Unanet, 4 ; Kuba, 1 ; Kanada, 4 ; Arc'hentina, 1 ; Brazil, 1 ; Helvetia, 1 ; Sueden, 1 ; Aostralia, 1.

PROFOU.

- Setu roll ar profoù hon eus degemeret e-korf an daou viz diwezhañ : MEZHEVEN.

- Paol Kalvez, 1.000 lur ; J. Cormerais, 500 ; J. ar C'hozh, 500 ; R. Jestin, 500 ; G. ar Moal, 100.

- War un dro, 2.600 lur.

GOUERE.

- Prof ur paour evit Al Liamm, 500 lur ; Merwen Runpaot, 1.000 ; E. Malard, kef ar bruderezh, 500 ; Treizhermor, 5.000 ; F. ar Bleiz, 300.

War un dro, 7.300 lur.

Abaog derou ar bloaz, kouezhet eo en hor c'hef 100.400 lur a brofoù, daoust da sifrennoù mezheven ha gouere bezañ gwall izel : a-hervez e vije deut mat - gant hol lennerien hon niverenn diwar-benn Israhel : hogen koustet he deus deomp 99.377 lur. Ha neuze, spi hon eus da gaout er mizioù-mat un tamm muioc'h a skoazell. Hor gwellañ trugarez d' ar brofourien galonek.

SONJOU HOR MIGNONED.

- « Sur em eus kavet dudi o lenn ho kelaouenn diwar-benn Israhel. Ar pezh he deus graet ar bobl vihan-se evit he yezh hag he sevenadur, perak ne rafemp ket ni Breizhiz ? Ar pennad skrivet gant Jarl Priel hag an notennoù war-lerc'h a zo plijus-tre ivez. Spi am eus e plijo din kement ha homañ niverennoù all « Al Liamm ».

F. C. L.

Diwar ar Bed Keltiek niv. 93 : « E lodenn ar gelaouenn ez eus ouzhpenn notennoù, derou eñvorennoù Jarl Priel, anvet « Va Zammig Buhez ». Dibaot a wech ez eus bet lennet en hor yezh ur skrid ken bev ha ken saourus. Ra vezo graet buan ul levr gant an eñvorennoù-se ».

Plijus ha brav an niverenn diwezhañ. Ur c'hembread hag un alaman o deus skrivet din a-benn lavarout e oa brav ha spletus. »
Y. T.

KAMP AR VREZHONEGERIEN. -

Seizhvet kamp ar vrezhonegion a zo bet dalc'het e Kleden Cap Sizhun eus ar 6 a viz Eost betek an 21. Renet eo bet gant an Itr. a Vellaing, Langleiz ha Ronan Huon. Evel ma ouzer pal ar c'hamp a zo bodañ tud a fell dezho gwellaat o brezhoneg ha komz ar yezh e-pad pemzek deiz. Ne vez ket klevet ur ger galleg e-touesk izili ar c'hamp, ar reolenn vras eo honnezh. Diouzh ar beure e vez graet ar c'hentelioù hag ar prezegennoù. Setu ar brezegegerion o deus komzet : Y. ar Go, A. ar Berr, Rouan Huon, Per Denez, Kervella-Kongar, V. Seite, P. ar Roue, Dr. Tricoire. Darempredoù plijus a zo bet skoulmet ivez gant tud ar Vro war-lerc'h abadennoù biniou ha dañs graet er vourc'h ha war ar maez.

Un devezh a zo bet ivez kensakret d' ar gelaouenn vrezhonek « Al Liamm », gant un diskouezhadeg ha prezegennoù.

Bep endervezh ez ae an izili war an aod nemet pa oa fall an amzer. K.A.V. a zo unan eus an oberennoù pouezusañ savet abaoe ar brezel ha pep Breizhad a zo deut mat hag a c'hell tremen evel-se 15 devezh vakañsoù marc'had-mat gant ar re yaouank a raio Breizh da zont.

KENSKOAZELL.

Laouen omp bepred da zegemer arc'hant evit skoazellañ hor skrivagnerien ezhommek a c'hello evel-se kenderc'hel gant o labour. Trugarez d' ar re o deus dija kaset arc'hant.

AR C'HENDALC'H KELTIEK. -

Ar c'hendalc'h keltiek a zo bet dalc'het e Dulenn etre an 20 hag ar 27 a viz Gouere. Eizh ezel eue Skourr Breizh a oa eno. D' ar meurzh 20 diouzh an abardaez ez eo bet degemeret ar Gendalc'hidi en ur sal e-kichen ar Skol-Veur. Kalz Iwerzhoniz a oa eno, en o mesk an Ao. De Valera. D' ar merc'her 21, diouzh ar mintin e voe digoret ar C'hendalc'h, dindan renerezh Kadoriad Skourr Iwerzhon, an Ao. Conchobar Mag. Uidhir, Barner meur: prezegennig gant an Ao. David Craine, rener ar C'hendalc'h, hag un nebeut gerioù gant un dileuriad eus pep skourr. Goude e voe lennet danevellskridoù ar Skourroù. En endervezh e voe degemeret ar Gendalc'hidi gant prezidant Republik Iwerzhon, Séan T. O. Ceallaigh.

75

En abardaez, prezegenn diwar-benn ar biniou skosat, gant Seamus MacNeill. D' ar yaou 22, ar Gendalc'hidi a yeas gant an treñ a-dreuz Iwerzhon betek Gaillimh, hag ac'hano gant kirri betek Rosmuc, e-kreiz ur gouezelegva. Eno ne gomzer nemet iwerzhoneg.

D' ar gwener 23, diouzh ar beure e voe dalc'het bodadeg Veur. Hervez diviz Bodadeg Veur hor Skourr, Roparz Hemon a bedas ar C'hendalc'h da zont e Breizh e 1955. Ar c'hinnig a c'hounezas asant an holl. En abardaez goude gweladennet Skolaj an Dreinded e voe klevet div brezegenn diwar-benn ar Broioù keltiek.

D' ar sadorn e voe ur c'hendiviz a-zivout an embann levrioù. R. Huon ha Per Denez a gomzas en anv Breizh. Diouzh an abardaez e voe un degemer gant ministr an deskadurezh ha c'hoariva iwerzhonek.

D' ar sul 25 ez eas ar vretoneg da lakaat bleunioù war bez Padraig Mac Piarais. Dileuridi eus Kembre, Kernev-Veur hag ur skosad a yeas d' o heul. E-pad an oferenn-bred, an Tad O'Laoghaire a sarmonas en iwerzhoneg ha kembraeg. Un nebeut gerioù brezhonek a zeuas gantañ ivez evit meuliñ an Ao. Y. V. Perrot.

D' al lun d' an endervezh e voe graet un dro vale betek Teamhair, war ar motennoù a verk pennlec'h roueed Iwerzhon.

D' ar meurzh 27, diouzh ar mintin e voe degemeret pennoù ar skourroù e ti ar Barner Meur. En endervezh, bodadeg ar ouezelegerien ha da heul bodadeg ar bredenegerien. P. Denez a gomzas eus stad ar brezhoneg.

Ar C'hendalc'h a echuas gant un degemer en abardaez a-berzh renerien ar Skol-Veur.

RAKPRENIT « VA ZAMMIG BUHEZ ».

Emaomp o prientiñ embannadur unan eus levrioù bourrusañ hon amzer, eñvorennoù Jarl Priel. Hol lennerien o deus gellet kaout un tañvañ eus ar bennoberenn-se e niverenn diwezhañ « Al Liamm ». Ur yezh bev ha pinvidik o kontañ ur vuhez eus ar re binvidikañ ivez. « Va Zammig Buhez » a vo ul levr kaer a 200 pajenn. Un nebeut skouerennoù war baper kaer-tre sinet ha niverennet a vezo tennet evit ar rakprenetien hepken, koust a raio 1.000 lur. Evit hor skoazellañ rakprenit diouzhtu en ur gas an arc'hant da : R. Huon, 23, rue de la République, Brest. C.C.P. 684-08 Rennes.

LEVRIOU DA WERZHAÑ (Skrivañ d' ar gelaouenn gant un timbr). -

Hini pe hini a-douez lennerien « Al Liamm » a ve marteze eürus da c'hellout prenañ unan bennak eus al levrioù-mañ da heul.

I. Levrioù o tennañ d' ar brezhoneg :

- Glossaire moyen-breton, en 2 tomes, E. Ernault.
- Lexique étymologique du breton moderne, Victor Henry.
- Toponymie bretonne (lexique étymologique), W. B. S. Smith.
- La Langue Gauloise, Dottin.
- Dictionnaire breton-français du dialecte de Vannes, E. Ernault..
- Dictionnaire français-celtique, Grégoire de Rostrenen.

76

II. - Levrioù kembraek pe da zeskiñ kembraeg dre ar saozneg :

- A grammar of Welsh, gant W. Spurrell, 1870.
- How to learn Welsh (English-welsh vocabulary).
- Llawlyfr Gramadeg Cymraeg (yezhadur e kembraeg).
- Caban f'Ewythr Tom (Ti va eontr Thomas).
- Rhyfeddodau'r Cread (burzhudoù ar grouadelezh).
- Enwau lleoedd (anvioù-lec'hioù), Ivor Williams.
- Meddwn i (kaozeadennoù), Ivor Williams.
- Yr Ogof (ar vougev), romant biblek.
- Anfarwol Werin (Tud divarvel), romant brezel.
- Datblygiad y Cymraeg (Istor ar c'hembraeg).
- Dirgelwch yr atom (Kevrin an atom).
- Y Ffordd yng Nghymru (Istor an hent e Kembre).
- Ceiriog (dastumad barzhonegoù).

III. - Levrioù iwerzhonek pe da zeskiñ iwerzhoneg :

- Irish without worry,
- Graiméar na Gaedilge (yezhadur e saozneg).
- Irish-English dictionary, Dinneen.
- Toraideact Diarmada agus Grainne (danevell).
- Fiche 'Duan (20 barzhoneg).
- Gnás na Gaedilge (anaoudegezh eus an iwerzhoneg),
- Fion na filideacta (gwin ar varzhoniezh).
- An gaot Aniar (an avel gornok), arnodoù.
- Aids to the pronunciation of Irish.

ISRAHELIZ HA BREIZHIZ

gant TALDIR

Un niverenn a bouez bras eo an hini en deus gouestlet « Al Liamm » da zasorc'hidigezh ar Yuzevien. Gant ur maen, daou dad : da gentañ, reiñ gwirievezh d' ur ouenn-dud bet pell mac'homet, ha deut nec'hoazh a-benn d' en em zieubiñ ; d' an eil, tennañ evezh ar Bed sevenadurel, emañ ar Yuzevien e-touesk e ouizieien, war stad Breizh ha Breizhiz hon amzer-ni.

Ar Yuzevien a zo bet, hiniennoù anezho, mignoned d' an Emsav Broadel Breizhek. Marteze n' eo ket didalvez degas da soñj d' ar Remzi yaouank en-dro d' Al Liamm hon eus bet ni, ar C'hozhidi, darempredoù mat-tre gant tud desket a Ouenn Israhel, ha bet skoazell diganto da gas da benn hon labourioù.

- An Aotrou Robert Mond, breur da Lord Melchett, ministr e stroll Balfour e 1919, skoazeller da Sion (skeudenn Lord Melchett a zo bet savet war ribl Lenn Tiberiad) - an Aotrou Robert Mond eta, a lavaren, a zo bet en e vev un harper bras dimp war-lerc'h Brezel 14-18. Ar Yuzev-se en doa priedet, en eil briedelezh, gant ur Vreizh-Izeladez, Mañ ar Manac'h, eus Benac'h. Prenañ reas Kastell Koadannoz, ha dont a reas di da chom e-pad an hañv. Pa voe adsavet Skol-Veur ar Varzhed e 1927,

an Ao. Robert Mond hag e Itron a glevas, hag a zegasas din o harp da vont a-raok. Ret eo lavaret e oa an Aotrou Mond perc'henn da Vengleuzioù glaou-douar traoniennoù Merthyr ha Rhondda, hag e oa troet bras gant Bro Gembre ha sevenadur an hengoun keltiek. Ur furcher « dolmenoù » ha « tumuli » e oa : bez Tout-Ank-Hamon a zo bet enklasket gantañ.

Pa bedemp tud a Vreizh-Veur da zont d' hon Goursezioù Digor, an Aotrou Mond a gemere war e goust o degemer. A-wechoù, e wreg hag eñ o fede da Goad an Noz, hag a rae gouelioù ha banvezioù en o enor. (Rosko 1934 ; Perros-Gireg 1937.)

77

An Aotrou Mond a fellas dezhañ bout douaret e Breizh-Izel. Ur chapelig vrav a zo bet savet war bod e ludu (luduet eo bet e gorf) e bered Benac'h e 1939.

- Ur Yuzev all eus Naoned, an Aotrou Schwob, rener ar Phare de la Loire, -a oa mignon bras d'ar vroadelerien vreizhat. E 1919, pa oan distro eus ar brezel, e c'houlennas diganin mont da labourat en e voulerez. (Bet e oan mouler, e Karaez eus 1904 da 1914.) Ne asantis ket kuitaat bro gozh ma zadoù.

- An Aotrou Goughenheim, Naonedad ivez; a verkas e anv e mesk ar re gentañ da skoazellañ An Oaled e 1929. Reiñ a reas arc'hant da sikour krouiñ Armorica, kevredigezh da embann levrioù a-zivout Breizh. Dastumet gant an Alamaned e 1942, an Aotrou Goughenheim a varvas, siwazh, en ur c'hamp tud dibradet.

- Ur Yuzev eus Bro-Aostria, an Aotrou Leo Perutz, a zeuas d' am gweladenniñ war-dro 1926. Ur skrivagner brudet e oa, oberour Romantoù e germaneg, bet troet e saozneg Amerika. Studiet en doa ar yezhoù keltiek. A-du e oa gant ar Vroadelourien, hag en Iwerzhon en doa mignoned. Bep bloaz goude, Perutz a zegasas ur skodenn vras da harpañ ar gouelioù barzhiek, ma oa bet lakaet da Varzh a Enor !

E 1938, pa yeas Hitler da gabestriñ Tchekoslovakia hag Aostria, Leo Perutz hag e diegezh, o vezañ ma oant Yuzevien a zivizas tec'hout diouzh Vienna. Dre aked an Aotrou Albert Ar Bail, depute Kemper, hag a oa hir e vrec'h, ur paseporzh am boa bet da Berutz evit tremen dre Vro-C'hall da vont da Afrika-Hanternoz. Ac'hano, ez eas da Israhel, hag e savas e di e Tel-Aviv, e ribl ar mor. E derou ar bloavezh 1945, n' ouzon penaos e klevas e oan toullbac'het e Kemper. Hag eñ raktal o tastum sinoù a-berzh Yuzevien vrasañ Tel-Aviv, hag o kas anezho d' ar Jeneral de Gaulle evit ma vije dishualet ar barzh kozh. Pa soñjan zo tud hag a lavar eo dizanaoudek ar Yuzevien !

En Afrika-Hanternoz, e-pad pevar bloaz (1948-1951) am eus hentet hiniennoù, ha ne 'm eus kavet enno nemet tud flour, a stumm vat, ha prest atav da rentiñ servij. Breizhiz ne dleont ket eta (d' am meno da vihanañ) unaniñ o mouezhioù gant dispennerien aheurtet ar ouenn yuzev.

BEZ ANDREV GEFFROY. -

Ur c'halvadenn hon eus greet ur pennadig amzer zo : arc'hant a oa ezhomm evit prenañ bez ar brogarour Andrev Geffroy, a vije bet taolet e relegoù er foz kumun ma ne vije ket bet prenet e vez. Laouen omp o lavarout hon eus degemeret arc'hant evit ober ar brenadenn-se ha trugarez a lavaromp a-greiz-kalon d' ar brofourien. Setu emañ roll ar profoù degemeret betek-hen : L. an D., Landreger, 500 ; A. N. Kraozon, 1.000 ; M. G., Pariz, 500 ; Y. C., Naoned, 500 ; R. J., Boulogn, 1.000 ; A. an N., Pariz, 1.000 ; Broadelourien Douarnenez, 1.800 ; G. ar. M., Naoned, 500 ; Dr J. A., Pariz, 500 ; A. al L., Pariz, 500 ; Y. ar B., Kemper, 500 ; Kerrenour, Iwerzhon, 1.000 ; L. T. Kembre, 500. En holl : 10.300 lur. Hepdale e vezo graet ar brenadenn. - Evel ma oar hol lennerien, Andrev Geffroy, mevel go eus Ploneour Jaudi, a zo bet soudard e Bezenn Perrot: barnet eo bet d' ar marv e Roazhon ha fuzuilhet eno war un dro gant ur soudard breizhat all Leon Jasson.

78

« **ZEITSCHRIFT FÜR CELTISCHE PHILOLOGIE** (levrenn 24, kaier 4, 1954). -

Kavout a reer e-barzh ur pennad-studi gant Roparz Hemon diwar-benn ar verb-emober e brezhoneg, adalek amzer ar brezhoneg-krenn betek ar rannyezhoù a-vremañ. Da c'houde e teu un notennig gant Paol Kentel diwar-benn orin gerioù brezhonek 'zo.

BRETAGNE REELLE. -

Un niverenn voulet eus ar gazetennig-se a zo o paouez dont er-maez. Talvout

a ra ar boan bezañ lennet ha skignet, rak gwall nebeut a gazetenoù breizhat a gred en deiz a hiziv diskleriañ ez int broadelour ha lavarout ar pezh a soñjont e gwirionez. An niverenn diwezhañ-mañ a zo mat. Koumanant-bloaz : 400 lur. Ar « Bretagne Réelle » a zo o paouez embann ivez ul levrig gant J. La Benelais anvet « Galerie Bretonne ». Daoust ma c'hellfed tabutal diwar-benn barnadennoù a zo, ez eo hep mar ebet ar pañfled talvoudusañ embannet abaoe fin ar brezel ha pep broadelour a zlefe prenañ ur skouerenn anezhañ. Ar priz a zo 300 lur. Kas an arc'hant da J. Quatreboeufs, C.C.P. 754-82 Rennes. Chomlec'h ar Bretagne Réelle a zo B. P. 128 Rennes.

LIZHER

« Un evezhiadennig bennak am bije plijadur oc'h ober amañ da gentañ menegiñ daou skouer roet din nevez 'zo eus an temz spered gall en hor c'heñver hag eñ didrec'hus (dre eurvad, a lavarjen). Edon en un tren va unan gant un itron war an oad ha c'hoant dezhi komz. Komz a rejomp eta diwar an dra-mañ hag an dra-hont, me kentoc'h o selaou. Anat e oa an itron-se ur vaouez speredek ha desket-tre hag he doa beajet kalz, gwelet broioù e-leizh ha berniet evezhiadennoù. Dont a reas da zisplegañ din pegen dedennus he doa kavet pesketaerien trowardroioù Napoli hag int gouest alies da zibunañ ken brav barzhonegoù Vergilius. « Soñjit, a gendalc'has an Itron, soñjit bremañ e pesketaerion Breizh. » Nevesoc'h 'zo me eo edo o komz dirak un nebeut selaouerien diwar-benn tud ha traoù e Turkia ; lavarout a raen e weler du-hont war ar maezioù skouerioù tud, dezho un neuz garv, chatalek evel ma n' eus mui e Kornog Europa. Ha kerkent digant un itron gozh ivez, ken desket ha speredek hag eben : « Kavout a ra deoc'h n' eus ket tud e giz-se e Breizh ? Me 'gred ez eus ! » Dediet d' ur re, kalz re niverus en hor bro; a skeudenn dre o emzalc'h, ar c'hrennlavar gall : « Peignez vilain, il vous oindra ».

« Bremañ ur gudenn all : plijet eo bet a dra sur, ha kement ha ma c'heller bezañ, an holl vrezhoned, katoliked pe get, gant an doare eeun hag efedus, kaer ha dellezus m' eo bet lidet 10vet deiz ha bloaz marv Y. V. Perrot, brogarour dibleg, gwir leonad ha gwir Breizhad. Met c'hwervoni a sav e don an ene pa soñjer er re-all, er re o deus roet o yaouankiz, o amzer da zont, o buhez evit ar Vro ha na weler abaoe an disterañ meneg anezho en hor c'helaouennoù (lakaet er-maez ar re guzh). Eñvoradur ebet, kurunenn brenet ha kinniget a-gevret ebet, linenn ebet, prezegenn ebet, bodadeg ebet en o enor. Ar « genlabourerien » c'hall o deus evelato muioc'h a emzalc'h ha koulskoude ma c'hellent, int, kaout an neuz da vezañ ganas, ni, a gav din ne c'hellomp ket. Ar baotred graet o aberzh gant ur seurt haelded (ennout-te e soñjan dreist-holl, L. J. !) nebeutoc'h eget den. Diskouez ur wechig an amzer, en un doare forzh pegen evezhiek, e talc'homp koun, doujañs hag estlamm evit hon harozed, holl anezho, a vefe hon dever rikañ dimp-ni broadelourien. » R. Jestin.

79

ARGAD .

- Keloù a zo bet kaset deomp eus krouidigezh ur strollad broadel-sosialist. En e ziskleriadur gentañ e tispleg Argad e vo a-enep da bep tra a zo ur skoilh da emled speredel ha kevredigezhel ar menoz keltiek. Ger-stur ar strollad-mañ a zo Labour ha Sevenadurezh.

AL LIAMM 46

AL LIAMM
Tir na n-òg

NIVERENN 46

Gwengolo - Here 1954

10ed BLOAVEZH

Koumananterien : 432
Profoù : 140 000 lur

A DRUGAREZ DA PROFOU AR RE A GAR BREIZH HAG AR BREZHONEG E C'HELLIMP LAKAAT DA
VEVAÑ HOL LENNEGEZH.

TAOLENN

Al lestr taer, gant Farnachanavan	3
Hentoù, gant Y. Olier	4
Ar Skolaer Halfar, gant Petr Bezruc (br. Abanna)	6
E-tal ar Feunteun, gant Y. Drezen	8
Frañsez Vallee ha Meven Mordiern, gant Abeozen	13
Piv eo I. Babel ? gant J. Priel	23
Ûl lizher, gant I. Babel (diwar ar rusianeg, gant J. Priel)	25
Zon ar Matoutier, gant Dr. C. Laurent	32
Milinoù Bolllore, gant Per Even	35
Geriadur Istorel ar brezhoneg, gant R. Hemon	38
Ar Gouezeleg, gant Per Denez	48
Korn ar Gwenedeg, gant Job Jaffre	56
Notennoù	58

AL LESTR TAER

gant FARNACHANAVAN

- Ha gwelout a rez
Al lestr taer
Gant e wernioù uhel
O tañsal en aer ?

- Gwelout a ran ervat
al lestr taer
Hag eñ war an dremmwel
Gant e ouelioù gwenn
Dispaket d' an avel
'Vel ur menez uhel.

- Ha gouzout a rez
Perak e sko a-benn-herr
Al lestr taer
En deiz hag en noz
'Trezek ar porzh kloz ?

- Gout a ouzon ervat
Perak e sko a-benn-herr
'Dreuz d' ar gwall-amzer
Al lestr taer
War-du ar porzh kloz.

Va muiañ karet
A zo war e vourzh
Ouzh hen leviañ hep repos
En deiz hag en noz.

Loman da lestr kaer,
Lomanig taer,
Deus afo da c'houdoriñ
Keit ha ma kari
E porzh kloz va divrec'h.

HENTOU

(heuliad)

gant Youenn OLIER

DIGORADUR

Bag, nijourez skañv
a gousk e peoc'h ar porzh,
simiadez sentus ha mistr,
da livrez gwenn ha glas
ha lañs da werniou moan,
kinnig da aros kromm,
emro ledan da bont
am hoale.

Anaout an divent vlot,
mont d' an dremmwel laosk
hep rankout hedañ pizh
hentoù pleustret d' an holl,
ankouaat e-pad ur c'houlz
retted ha mezha an aod
a vennen.

Ha padal e tibabis an Tir,
an 'hentoù du da lod,
da blanedenn, o linenn enk
didec'hus, a gas hep mank
da baliou tizhet ez sur,
fetis kalet ha kriz,
kuzhet enno ar Reuz
a zoujen.

*

**

DISPARTI

A-dreuz an deil e tea ar gouloù sklaer ;
glas eo an oabl ; pinenned mistr a sav,
kinvi aour el lanneg flamm a dav
'n o gortoz mut ; ur vran o nijal a glever.

E pelec'h eta e rankin mont, Aotrou ?
Emaon em sav va un e-kreiz an hent
a rann ar c'hoad a walarn da vervent
hep gellout e nep lec'h merzout a roudoù.

5

MONT

Dirak va sell, setu va hent :
e c'hirzhier glas 'vel div voger,
e hirder du serr er pellder ;
er sioulder e klevan frond ar bent.

Ha mont a rin gant herr ha fo ?
Keneil ebet n' am ambrougo.

Ha mont a rin feleun ha fizius
dreist d' ar c'hrec'h en dremmwel kuzh ?

*

**

ARSAV

Deomp, poultrenn an hent a sav c'hwerv
ha penn-da-benn dirazomp ar c'hrozol garv

a wigour sec'h hag unton er broutac'h dihegar
o waskañ en diabell griz loes ur c'halvar.

Kollet hon eus pell 'zo roz ar mintin
ha diglevet en tourioù sklaer ar galvoù sklintin :
lezel a rankimp er c'hroazhent hoalus kriz
an eñvor ac'hanoc'h, dremmoù karet na welimp mui

*

**

DIRAEZ

Anavet em eus a galon hirder poanius
ar c'hrec'h a sav hep lein na dibenn,
dallentez ha skuizhder er c'hammdro touellus
goude kerse pineg vistr ar stankenn.

Ha padal em eus ho karet, beajoù brevus,
pa gerzher hep pal war wel hep ehanañ :
mont bepred d' ar c'hornog davet an heol ruz
a-hed an hentoù du a lintro gant ar joa !

Gwaien-Gwened 1952-1954.

AR SKOLAER HALFAR

gant PETR BEZRUC

Ur paotr brav, ur paotr mat e oa ar skolaer Halfar,
sioul e spered,
ennañ avat ur si divalav-bras :
e Techin e komze tchec'heg

zoken dirak ensellour an departamant.
Neuze pa 'n em laosk ur skolaer da vont ken fall-se..
Bez' ez eus, gwelit-hu, er c'hatekiz, pec'hedoù
ha na vint distaolet morse.

Tremen 'ra bloavezhioù, rouesaat ar blev
e-giz deil pa zistro ar goañv,
ha Halfar advestr atav.
Plas ebet evit Halfar...

Ur muzik a dregern lammedik er c'hafedi ;
kefrisa Halfar 'zo 'paouez dimeziñ er chapel :
perak e c'hortozfe-hi
mizvezhioù ha bloavezhioù ?...

Sed o tont aotrouien, an Aotrouniezh :
poloniek 'vo ar skol.
An Aotrou Maer a chom digas.
Disuj e talc'h Halfar da gelenn
hervez ma c'hourc'hemenn lezenn Doue...

Ar skolaer, dic'hoarzh, digeal,
a gantre, didrouz, dre 'r gwenodennoù.
E-unan-penn, d' an noz, er c'hafedi,
e sell ouzh an douar, en em ro da evañ...

Tra ma tint an anjelus er wiler,
- na klouar 'ta an abardaez -
e tered ur plac'h 'barzh ar gambr amheoliet :
« Krouget ar skolaer ouzh an avalenn ! »

Douaret e voe e korn ar vered
hep leñvoù na pedennoù,
giz ma vez graet da bec'her aheurtet.
Evel-se e kavas Halfar ur plas,

7

Petr Bezruc (distag : bezroutch) , anv-pluenn ur c'hargad er post e Brno, a
zo oberour ul levr barzhoniezh nemetken : Kanzennoù Silezia, dispar ar veurder
anezhañ. Ur garm argoll ha dic'hoanag o sevel eus bro ar mengleuziou glaou hag an
uhelfornioù, ma tiouenned enni 70.000 a vengleuzierion tchec'hat dindan an tri yev
ma oa ar germanekaat, ar poloniekkaat, hag ar mac'homerezh kevredigezhel.

Heñvel ouzh ur Profed e sav Bezruc da adluskañ ar c'henskiantoù morgousket,
broudañ evezhiañs tud Praha, ha bountañ ouzh dremm ar mac'homer an tamalladur
spontus eus miliadoù pariaed.

Loes e ouenn tonket da vervel a leugn kalon ar barzh ; berrgellusk,
dirskoet, garv eo e yezh daslivet a drefoedajoù sileziek. Ar violoñs unangordenn-
mañ a c'hoari danevellganoù enno ar pep uhelañ eus ar varzhoniezh kevredigezhel.
(brezhoneg ABANNA.)

8

E-TAL AR FEUNTEUN

gant Youenn DREZEN

Ar gazeg-koad, o c'houlenn dour, a dregerne koadoù Triagad gant he youadennoù, hag ar skrilhed-douar, war vord o zoullig, dindan ur wrizienn brug, a daole o c'hri ken e oa ur jolori.

Miz Mae. Tomm an amzer, hep ur pikad avel. En oabl glas dizolo, an heol a ziskenne war e-bouez war-du mor Penn-Marc'h, du-hont, a-dreñv an toenioù diniver o lintrañ e-harz an tour-tan. Ar bodoù lann, er gwaremmoù, a flamme, melenaour. Ur vogedennig voull a grene a-us d' ar palud, hag ar mor, e-giz ur melezour, a oa estonet ha didrouz e traoñ an erinoù hag en-dro d'ar c'herreg rouz strewet, du-mañ du-hont, betek penn pellañ an dremmwel.

Tina Garo, splann he zavañjer, ha sonn he c'hoef war he fenn, a save, skañv he zreid en he chosonoù glas-lin, gant gwaremm Keristum, o vont da gerc'hat dour da Gêrleger. Kri diniver ar skrilhed en daou du d' ar wenodenn veinek a lakae ar plac'hig da c'hoarzhin gant ar blijadur.

Degouezhet war al laezenn, e chomas a-sav hag e tistroas da sellout. Kerkent e tavas ar skrilhed, ha ne voe klevet mui nemet tron ar wrez ha safron unton ha disehan ar gwenan e bleunioù ar brug.

Du-hont pell dirazi, en tu-all da wez evlec'h Trowidi, e tassonas taolioù boud ur morzhol, en ur chanter bagou eus ar Gellvêneg.

Un dorn ganti a-zioc'h he daoulagad, abalamour d' an heol, chom a reas Tina da sellout e-pad ur reuziad.

Ar gourlanv, e-giz ur pikol kontell-gamm, a sanke e-kreiz-tre tiez gwenn izel ar Gellvêneg ha re Lechiagad, pelloc'h eget Lost-an-Dro, tre betek ar Veilh-Vor.

Ar vigoudenn yaouank, avat, a bare he sell dreist ar porzh ha dreist an tiez, war gerreg ramz ar C'heloù, du-se, e-kreiz ar mor, er-maez da Gêriti. Ar c'herreg du, soubet er sklerijenn, n' oant ket difiñvoc'h eget an amzer, na muioc'h sonnet eget ar mor damroz. Kalm-chok. Ha, du-se, pemp pe c'hwec'h bag a oa o tont en aod, an eil war-lerc'h an hini all, goustad, goustad.

- Emaint o tont ! eme Dina outi hec'h-unan.

9

Ya ! edo ar bagou brilli o tont. N' oant ket pare, avat, da vont e gleuer. Ar wern vras, ar vizan a istribilhe outo al lien, un druez, hep an disterañ aezenn da c'hwezhañ e-barzh. Dav oa bet teurel ar roeñvoù en dour... Ha mac'homp, paotred, ma teuy nonn deoc'h !.. Ha diwar bec'h ingal ar roeñvoù bras o sankañ en dour, o sevel lintrus ha gleb, hag o sankañ en-dro ingal, goustad, ha dibaouez, ez en em stleje ar bagou etrezek ar Gellvêneg, gorrek evel melc'hwed war un delienn gaol.

- N' emaint ket en o butun ! a soñjas Tina. Ha gwelout a reas dre he soñj ar baotred war gorf o rochedoù - unan dreist-holl - ar c'hwezenn ruz warno, o frapañ war ar roeñvoù da lakaat ar bagou ponner da vont war-raok.

- Ba ! emezi ; warc'hoazh emañ pardon Plomeur ; ne day nemet gwelloc'h ar reuz en-dro.

Soñjal a reas er sal-dañs. C'hoarzhin a reas outi hec'h-unan, hag e reas un dro-vals gant he zoukenn, en ur vouskanañ un ton anavezet.

Korantinaig Garo a oa en oad eürus ar bleunioù, ar skrilhed-douar hag an nevez-amzer. Seitek bloaz. Kaeroc'h eget brav e oa. Dastumet he doa en he neuz holl gened, otus un disterañ, he gouenn ha merc'hed a-gostez ar mor.

Gwelout a reas adarre dre he soñj, rak n'oa ket deut c'hoazh en aod, pa oa bet digêret gant he mamm da gerc'hat dour, martolod he c'halon davat o roeñvat, eñ ivez, hep ket a var.

- Herri paour, emezi ; bec'h a dle dont dezhañ. Hag hi en traoñ, d'ar red, gant an dinaou a gase da feunteun Kêrleger, er foeneg.

Eno, avat, e chome krenn a-sav war bazenn uhelañ an diri karrezek a rae an dro d' ar feunteun. Dont a rae ruz gouzoug ha divskouarn hag all. Un hordenn beugel en e gichen, un den ruz-wisket, a oa, war bennoù e zaoulin, oc'h evañ dour. N' en doa ket klevet ar plac'hig o tont. Joz Bideo !... unan eus ar baotred a oa sotrennet ganti !... N' oc'h ket merc'h ostizez, ha brav-dreist, ha bezañ hep kaout ar baotred yaouank war ho tro.

- Amañ 'z eus pater da glevout ! a soñjas Tina. N' oa tu ebet da skoachañ, avat, pe da vont war he giz.

An dour, o redek en ur rizenn vaen, a-barzh mont da droidellat dindan elestr ha geot uhel ar foeneg, en tu-all d' ar c'hleuz izel, a ragache lirzhin e disheol skourroù ur c'harzh skav.

- ...O ! met ! Ne respontin ket... Hag e tiskennas.

- Mat an dour, Joz ? eme Dina.

10

- Dispar ! Treiñ a rae an den e benn. « A ! c'hwi eo, Tina ! »

Souezhet. Kerkent, avat :

- Roit din ho poutailh rouz, kuit da c'hlebiañ ho chosonoù !

- N' eo ket dao ! Me 'ray va-unan.

Graet he doa Tina Garo tiz ur glazard betek bord ar feunteun, hag e sanke prim he benveg en dour.

An den en doa dastumet e dorkad beugel ; savet e oa diwar e zaoulin, war e bouez. Sellout a rae ouzh ar plac'h yaouank hep disarrañ e rann, ouzh he c'hein hoalus, stardet er c'himono du, e-giz en ur moull, eus an dargreiz betek ar gouzoug flour dizolo. Anat ne ouie ket dre be du mont dezhi. Ha Tina, a ratozh-kaer, ne droe ket he daoulagad a-ziwar c'horre an dour.

- Amzer eus ar c'hentañ, Tina, da bourmen war ar maez ! eme ar paotr.

- E-giz-se !

Bouilhbouilhat a rae an dour e toull-gouzoug ar voutailh rouz ; hag ur golvenig, e-touez ar strouezh, a c'hwitelle disoursi.

Joz a glaske tennañ kaoz :

- Gwall-amzer, avat, ar c'halm-chok-mañ evit ar bagou a zo er-maez. Trenkañ a ray ar pesked.

- Tostaat a reont, memes tra, a respontas Tina, hep mui. Neuze, ne c'hellas ket derc'hel hiroc'h war he zeod, diwar he c'hoant kuriuziñ. Goulenn a reas :

- Penaos, Joz ! N' out ket aet d' ar mor ?

Un astenn a reas egile d' e vourrenn, en ur ziskouez e viz lienet.

- Bez' e tlefen bezañ o lakaat roeñvoù ar Berrou kammn da blegañ, emezañ. Padal, un troc'h a netra bet digant ur vriellenn. Dañjer a viskoul ; ha setu me aet, evit pemzek deiz bennak, da glasker skubelennoù-bag.

Diskouez a reas gant e chink e hordenn kelenn dizrein. Hag e tic'hwezhaz :

- N' eo ket ur vuhez kaout ur biz evel-se.

Ne respontas ket Tina. Ha Joz ha huanadiñ :

- Nag un hir-amzer ! Ne vourran mui ur begad, goude ur stardañ d' e javedoù.

- Hir-amzer ? a estlamme ar plac'h, an taol-mañ. Dirollañ a reas da c'hoarzhin leizh he dent yaouank. Hag e lavarez an dra-se e-giz m' az pefe kalonad evit gwir !... Ken brav evel m'eo an deiz, ha pardon Plomeur warc'hoazh !... Hir-amzer ? A, feiz, va Doue ! Ur c'haer a zen yaouank eveldout ?... N' emhout ket mat, Joz Bideo ?

11

- Pardonioù, heol tomm, leurioù nevez !... Mat a-walc'h, mar karit. Nemet, a-benn bremañ, me zo soñjoù donoc'h oc'h ober diaes d' am spered.

- Diouzh pell e tenn anezho ! a soñjas Tina. Ne dalv ket e deod e zaouarn.

N' oa ket douget ar vigoudennig d' ober beg prenet. Hag hi chigardet, ken e oa chigardet, o c'hortoz pezh n' oa ket evit mirout da glevout, gournijal a reas ur mousc'hoarzh moan etre kornig he muzell ha toullig he jod. Savet e oa, gant he benvegad dour a-ispilh ouzh he dorn, evel o vont kuit, ha sellout a rae ouzh ar paotr e-kreiz e zaoulagad.

Ha Joz Bideo, reutañ martolod ar Gellvêneg, mentet-kaer, ha kreñv e-giz ur marc'h, ha dirukel ouzh an holl, dre ma n' en doa ezhomme ouzh den, ha mestr-bag ouzhpenn, setu ma chome aze dirak an tamm merc'hodenn yaouank-se, harpet e gein ouzh ar vogerig a rae tro ar feunteun, e zaoulagad o parañ gwechoù warni, gwechoù war an dour sklaer, hag aliesoc'h war e votoù choukenn melen, drop, lopes, korilh, o klask e gomzoù aozet pell a oa evit ar mare-se gortozet keit-all. Ha setu m' en doa kavet e du hiziv, ha ma ne wele stumm ebet da wiskañ e gomzoù.

An heol laouen a daole e wrez war an tro-war-droioù morgousket ; ar golvenig, er c'hleuz, a c'hwitelle atav, ha brañsellat a rae an doukenn a-hed brec'h ar plac'hig, war-nes bezañ sammet ganti war he skoaz.

Ar paotr a grizas e dal. Ober a reas ur sav d' e chink.

- Mar deo dao memes mont da glask ar c'hemener da zirouestlañ din va neud ! emezañ outañ e-unan. Frapañ a reas war e anal, ha :

- Tina Garo, un dra bennak em eus da lavarout deoc'h.

- A, ya ?

- Tina, ur vag nevez em eus lakaet fardañ e Douarnenez. Ar re gozh, du-mañ, a lavar din kelliez ha bemdez : - Paotr, e pe soñj emhout ? - Tina Garo, piv a gred deoc'h a yafe diouzhin, tro aze ?

- Den yaouank, me n' on ket kouritourez.

- Tina Garo... Rozenn ! - Sachañ a reas war e anal. Ha plijout a rafe ganeoc'h dont da vestrez e ti ar gwellañ mestrouer a zo er vro ?

Ur c'haer a vartolod e oa Joz Bideo, e-kreiz nerzh e bevar bloaz war 'n ugent, diskoaz ledan dezhañ ha daouarn evel morzholioù. Un troc'had mat a zen a pep feson, er gobari groñs. Gwaz penn-da-benn en e otoù hag e saro nevez livet gant kouez ruz ar rouedoù, hag e votoù-choukenn melen-vi. Ur pennad blev du rodillet en don, ha dinijal a rae un nebeut rodelloù er-maez eus e voned.

12

- Rozenn ! eme adarre ar paotr.

Ne respontas ket ar plac'h yaouank diouzh-tu. Heuliañ a rae he sell, evel gant evezh, troidelladoù an dour-red, en naoz, o vont dre doull-fi ar c'hleuz d' en em goll e-touez an elestr ha geot uhel ar foeneg.

Ar Bideo ne ziroufenne ket e dal ; mac'hañ a rae war e galon, o c'hortoz ur respont d' ur goulenn ker fraez.

Lakaat a rae Tina ur mouchouer e skouarn ar voutailh rouz, ha sammañ a rae ar benveg war he c'hein : - « Pa ouio an Herri an dra-mañ ! »

- Joz ! emezi, selaou ac'hanon ! Me lavar eo gwall-zister c'hoazh ar sardinenn evit goulenn diganti pe dre an dour pe dre an amann e vo aozet...

« Ha, bremañ, poent din redek d' ar gêr ! »

Diwar Rozenn ar Gellvêneg.

Fransez Vallee ha Meven Mordiern

gant ABEOZEN

War un dro gant diskleriadurioù diwar-benn an daou zen-se hag o skridoù e karfen hiziv lakaat da advevañ eñvorennoù a zo evel glaou o vogediñ dindan ludu an amzer ma 'm eus darempredet Frañsez Vallee ha Meven Mordiern e Sant-Brieg.

Kentañ gwech ma 'm eus gwelet Frañsez Vallee eo pa voen kaset eus skolaj Dinam da lise Sant-Brieg er bloaz 1922-1923. Klevet em boa komz eus an den abaoe pell a oa. Lenn a raen Kroaz ar Vretoned p' edon c'hoazh e skol ar frered e Landi. Nemet n' on dare perak e krede din e oa Vallee ur beleg pa brenis e Dinam **La langue bretonne en 40 leçons** evit stagañ da zeskiñ skrivañ ar yezh a lennen a-vihanik.

Un deiz, diwar pe zigarez, n' em eus mui soñj, ez is betek e di e penn ar straed Sant-Benead. Tremen a raen dre eno en ur vont hag en ur zont etre al lise ha va lojeiz stok ouzh an templ protestant nepell diouzh ar vered a-us da draonienn ar Gouedig. P' en doe tintet ur pennad ar c'hloc'hig e welis o tont war-du dor al liorz d' ar piltrotig un denig kozh barvek, lemm e zaoulagad a-dreñv gwer e lunedoù.

- Deuit tre, deuit tre, emezañ din, stad ennañ evel bep gwech ma teue unan bennak d' e welout : unan bennak all, marteze anezhañ ivez ur mignon d' ar brezhoneg.

Larout a ran e oa kozh Vallee d' an ampoent. N' oan-me c'hoazh nemet seizh vloaz warn-ugent e keit ha m' oa eñ krog en e drivet bloavezh ha tri-ugent peogwir e voe ganet d' ar c'hwec'hvet warn-ugent a viz Gwengolo 1860 e Lokmaria, parrez Plounevez-Moedeg, e-kichen Benac'h (Bro-Dreger). Eno e rene e dad ur vilin-baper.

Ne deo ket un anv brezhonek hini Vallee. Deut eo ar Valleed da Vreizh eus Bro-Normandi kent amzer an Dispac'h ha brezhonekaet int bet buan dre an dimezioù er vro.

Mamm-gozh Frañsez Vallee, a berzh-tad, a oa genidik eus Molenez. A du e vamm e tenne d' an Drevidied, un tiegezh eus ar Gemene.

14

Hep riskl da faziañ e c'hellan lavarout e troas an diviz etrezomp diwar-benn kudenn ar brezhoneg hag an ezhomm a oa eus skrivagnerien yaouank da vont war roudoù ar re goshoc'h. Ne gred ket din em eus graet adal neuze anaoudegezh gant Meven Mordiern. Deut oa da vevañ e Sant-Helori e-kichen Pordig abaoe 1920, evit kas da benn al labourioù en doa boulc'het gant Frañsez Vallee. N' oa ket dianav din e anv, avat, rak prenet em boa e Bleun-Brug Kastell-Paol, e 1920 moarvat, eizhvet levrig an Notennoù : Ar Gounid-douar hag ar maga-loened gant ar Gelted koz.

Kaset e voen da lise Roazhon e derou 1924. Mont a raen war dro kentelioù ar Skol-Veur. Gresianeg, latin, galleg krenn ha galleg bremañ hag ivez, tra iskisoc'h, e voen unan eus an hiniennoù a veze o selaou kentelioù keltiek Per ar Rouz.

Un deiz e resevis ul lizher o kemenn din dont d' an eur-mañ eur, e straed La Chalotais, d' an niverenn-mañ-niverenn, d' ur gambrig er solieradur kentañ d' ober anaoudegezh gant Frañsez Debauvais.

Labour Vallee oa kement-se. N' en doa ket daleet pell a-raok skrivañ da verour B. A. ez oa deut da Roazhon ur Breizhad mat, moarvat ennañ danvez ur skrivagner. N' em eus ket gwelet lizher Vallee, nemet ez eo ar pezh a laran tost

a-walc'h d' ar wirionez hep riskl a fazi, rak evit Vallee pep brezhoneger n' helle bezañ nemet ur Breizhad mat hag un danvez skrivagner.

Un dra zo asur : ne voen ket lezet pell amzer da zeskiñ. Lakaet e voen da skrivañ ha war-dro miz Mae e teuis a-benn da sevel va fennad kentañ e brezhoneg : ur rentañ kont diwar-benn Gurvan ar Marc'heg Estranjour.

Deut oa Frañsez Vallee a-benn eus e daol : lakaet en doa unan all ouzhpenn da zuañ paper e brezhoneg.

E Roazhon eo em eus klevet hirroc'h a-zivout Meven Mordiern. Debauvais en doa gwelet anezhañ e ti Vallee. Ur pikol den, mourennoù rouz, reut e stardadenn zorn, tavedek ur souezh.

Pa voen kaset en dro da Sant-Brieg evel kelenner el lise, e miz Here 1927, em eus kroget da zaremprediñ da vat ti Vallee. Hag un abardaez bennak, ur merc'her pe ur gwener, rak d' an deizioù-se e teue Meven Mordiern da Sant-Brieg da brenañ e zefotachoù, em eus kejet eno gant Renan ar Rouz.

Ya, bez' e oa anezhañ un den postek, gwisket gant dilhad voulouz tev, botoù ler ponner en e dreid, ur vantell-c'hlav e danvez du en dro dezhañ keit ha ma pade ar goañv. Ruz oa e benn ha skoachet oa e zaoulagad a-dreñv e lunedoù-fri a chome a-ispilh alies a-walc'h a-bouez ur chadennig. Ya, stardañ a rae deoc'h ho torn peadra da lakaat melloù ho pizied da strakal. Tavedek oa e gwirionez. Gwell e kave selaou eget komz e-unan, nemet n' on ket bet pell o verzout ne zisplije tamm ebet dezhañ komz diwar-benn an traoù hag an dud ma rae stad anezho.

15

Kalz yaouankoc'h e oa Meven Mordiern eget Frañsez Vallee. Ganet e voe e Bourdel d' an 29vet a viz Here 1878. E dad a oa medisin en arme. Dont a reas hemañ e retred e 1879, hag e vevas diwar neuze e bro e gavell, er Vertelotierenn e-kichen Gwiler (Villiers) nepell eus ker Gwengen (Vendôme e galleg) e departamant Loer-ha-Cher betek miz Meurzh 1891. Mont a reas Renan ar Rouz war e studi da Bariz er bloaz-se, betek 1897, el lise Kondorset. Chom a reas da vevañ e Pariz betek miz Here 1920, nemet ur bloavezhig tremenet e London da zeskiñ ar saozneg (Gouere 1898 betek Mezheven 1899).

A-hend-all, en diavaez eus ar bloavezhioù m' eo bet soudardelaet e kompezenn Sant-Denez e-pad brezel 1914-1918 (e labour a oa sammañ sac'hadoù bitailh da gargañ bagonioù a gase pourvezioù d' an arme), n' en deus graet Meven Mordiern nemet studiañ war ar skiantoù a blije dezhañ : keltiegouriezh hag holl skiantoù an Natur hag an Den. Ur studier eo bet e holl vuhez pad.

Pa gomzer eus Meven Mordiern arabat disoñjal ar c'hemm bras a oa etrezañ ha Frañsez Vallee. Renan ar Rouz n' oa ket Breizhad. Bez' e oa ur Gall eus ar rummad rouez a-walc'h a sant o c'halon tommoc'h ouzh Galianed Verkingetorix eget ouzh soudarded Julius Kezar. Deut oa da stagañ ouzh Breizh dre ma 'z eo manet bev er vro-se un dra bennak eus kened ar Geltelezh : ar brezhoneg a fell din lavarout.

Frañsez Vallee eñ a oa un Tregeriad. Yezh e vamm a oa ar galleg gwir eo, nemet ar voused ma 'z ae da c'hoari ganto ne gomzent nemet brezhoneg. Micherourien e dad deut an darnvuiañ anezho eus Montroulez da Venac'h ne ganent nemet kanaouennoù brezhonek. E ti un eontr e kavas un deiz un darn eus Barzhaz-Breizh hag e stagas da zeskiñ ar gwerzioù dindan eñvor. A-hed e vuhez, war a gredan, en deus kendalc'het Vallee da glevout gant ar brezhoneg frond Paradoz kollet e vugaleaj. Ha setu perak ez eo moarvat chomet stag betek en e gozhni ouzh ar c'hoarioù a zo bet e gelennerien war ar brezhoneg : ar vazh-dotu, ar saezh hag ar vatalm.

Dont a reas Frañsez Vallee da chom e Sant-Brieg pa voe deut en oad da gregiñ gant ar studioù klasel e skolaj Sant-Charlez. Tremenet gantañ ar vachelouriezh setu hor Sant-Briegad da Roazhon c'hoant gantañ mont da gelenner war ar brederouriezh. Bevañ a reas e Roazhon pevar pe bemp bloaz. Ur wech deut da aotreeg e voe degemeret da gelenner e skolaj Sant-Visant e-kichen liorz an Thabor.

16

Hag ar brezhoneg e keit-se ? Ne golle ket tachenn war a seblant. Mont a rae

Vallee war-dro kentelioù keltiek Jozeb Loth. Mar chomas yen a-walc'h ouzh ar soniadouriezh ne voe ket heñvel evit ar c'hembraeg. Hag amañ e teuer da gejañ gant ar c'hemm bras a zo etre ur Vallee hag ur Jozeb Loth ha zoken un Emil Ernod. An daou ziwezhañ a zo gouizieien, ar yezhoù keltiek danvez o studi. Frañsez Vallee a oa da gentañ-penn ur brezhoneger ma oa ar brezhoneg danvez e vuhez. Gouiziegezh en deus dastumet, ya, nemet da dalvezout evit ar brezhoneg bremañ : un talvoud-oberour (ur « pragmatiste ») a oa anezhañ war dachenn ar brezhoneg. Perak e voe ken dedennet gant ar c'hembraeg ? A dra sur dre n' oa ket evitañ ar ger Keltia ur ger goullou hogen ur baradoz kollet all, met ivez dre ma oa ar c'hembraeg kenderv kompez ar brezhoneg, nemet chañsusoc'h, bet abretoc'h war e studi, manet bepred yezh an dud uhel kenkoulz hag hini ar bobl vunut, miret glanoc'h ha kenedusoc'h gant ar Vibl, lennet aketus e Bro-Gembre. Ma vefe tu da lakaat hor paour-kaezh brezhoneg warlerc'hiet da zont da vezañ seven evel e genderv ! Setu a soñje Vallee.

E-keit-se e teuas e yec'hed da vezañ fallik, ma rankas hor c'helenner distreiñ da Sant-Brieg. N' oa ket paour evit ar mare-se. Peadra en doa da vevañ diwar e leve. Ha diwar neuze n' en deus mui labourer nemet evit ar brezhoneg.

E 1896 e savas Frañsez Vallee ur skol vrezhoneg e skolaj Sant-Charlez. Jaffrennou-Taldir hag Olier Sagory, diwezhatoc'h medisin e Monkontour, a voe eus e gentañ skolidi.

E miz Genver 1898 setu Kroaz ar Vretoned o tont d' ar vuhez. Padout a raio evel kelaouenn sizhuniek betek ar bloaz 1920.

D' ar gelaouenn-se en deus gouestlet Frañsez Vallee e amzer e-pad ouzhpenn ugent bloaz, e amzer hag e arc'hant. Ar pennadoù a veze kaset dezhañ, e ranke peurluviañ o reizhañ evit an doare-skrivañ pa ne oa ket ken ret all o reizhañ war dachenn ar yezh.

« Foranet en dije e amzer e vuhez-pad, a lavare din Meven Mordiern, o tivankañ brouilhedoù deskarded ma ne vijen ket deut da reiñ dezhañ danvez da lakaat da dalvezout e anaoudegezh don eus ar brezhoneg. »

Rak Kroaz ar Vretoned a zo bet ar pont en deus lakaet da gejañ Frañsez Vallee ar brezhoneger gant Meven Mordiern, diskennad gouizieker ar C'halianed kozh.
17

Amañ e teuomp stok ouzh dibunañ penn ar gudenn e darempredoù Frañsez Vallee gant Meven Mordiern. Pa oa studier Frañsez Vallee e Roazhon, en deus ergerzhet e-pad an ehan-skol Bro-Dreger, Bro-Leon ha Bro-Gerne ha zoken Bro-Wened. Evel brezhoneger ne deo bet biskoazh ur razh levraoueg evel Emil Ernod, lennet gantañ kement skrid a zo bet embannet e brezhoneg n' eus forzh pegen dister e ve e dalvoudegezh. Dastumet en deus Frañsez Vallee gant e sonskriverezh Edison tonioù Gwerzioù Breiz-Izel ha Sonioù Breiz-Izel an Uhel a vije aet da goll panevetañ, rak an Uhel hag Anatol ar Braz a grede dezho bezañ kaset da benn o labour p' o doa miret ar gerioù, kollet ganto ar pep gwellañ eus o ene p' oant disrannet eus an ton a rae anezho ur ganaouenn vev. Pennaouet en deus dornskridoù eus pezhioù c'hoari kozh, eus gwerzioù dastumadenn Penngwern, nemet ne deo ket eñ en deus lakaet an eostoù-se da dalvezout. An tonioù a zo aet da binvidikaat dastumadenn Maurice Duhamel : **Musiques Bretonnes**, e ti Rouart ha Lerolle, Pariz, ul levr a erbedan da gement Breizhad douget da sonerezh e vro, rak eno emañ e gwirionez teñzor kevrinus santidigezh hor bro, eno hag e dastumadenn Loeiz Herrieu ha Morvan Duhamel : **Gwerzenneu ha Soñnenneu Bro-Wened**.

Rolloù koad an tonioù dastumet gant Vallee a zo bet skignet a bep-tu, lod anezho a zo dre eurvad aet da Skol-Veur Roazhon e lec'h ma c'hellint talvezout d' un dra bennak. An dornskridoù o deus bet hevelep planedenn. E levraoueg Roazhon o deus kavet repu da c'hortoz ma vint embannet.

Nemet setu deut eo Meven Mordiern. E vamm a hete dezhañ mont d' un dizoloer broioù, kerzhout war roudoù Stanley ha Livingstone. Ne soñje ket dezhi e c'helle he mab degouezhout gant un dachenn ken fraost ha diabarzh Afrika : ar brezhoneg.

Ha setu a zo c'hoarvezet. Dedennet gant ar Geltelezh, hentet gant Kamilh

Jullian, Dechelette, Jozeb Loth ha, moarvat, meur a hini all en doa staget Meven Mordiern da studiañ ar brezhoneg. En amzer ma 'z ae da dremen an hañv e bro Kiberen gant e dud n'oa tamm ebet plijet gant brezhoneg Gwened. N' oa ket anezhañ ur barzh, nag ur muzikour, nag un arzour.

Nemet gant ar benveg a glaske Frañsez Vallee kempenn e Kroaz ar Vretoned e kavas da Veven Mordiern e oa tu da sevel un dra bennak. Ober eus ar brezhoneg o vont d' ur bruzun rann-yezhioù, ur yezh unvan a sevenadurezh hag a ouiziegezh na pebez taol kaer ! Ha setu en deus klasket kas da benn. Ne deo ket aet evel Gerbault da vervel en inizi ar Mor Habask. Embannet en deus kentañ levrig an Notennoù e 1911. Staget en doa gant dizoloidigezh ar brezhoneg unvan. Ha n' en deus ket diskroget eus an dizoloidigezh-se.

18

Pa, voe aet e vamm da anaon e 1920, e teuas da chom e Sant-Helori e-kichen Pordig. Ac'hane an treñ patatez a gas eus Sant-Brieg da Bempoull a roe tro dezhañ da zont pa gare da labourat gant Frañsez Vallee e penn ar straed Sant-Benead ha n' eus a zarvoud er c'henlabour-se nemet al levrioù nevez o tont er-maez eus ar wask pa veze arc'hant a-walc'h a gostez d' o embann.

N' em eus mui soñj peur on bet evit ar wech kentañ betek Sant-Helori. Mar deo gant Vallee e oa d' an nevez amzer pe d'an hañv rak ne rede ket kalz bro dre an amzer fall. Kemer a ris buan a-walc'h ar boazh da vont da dremen ur yaouvezh abardaez bep miz gant Meven Mordiern e St-Helori. Chom a rae an treñ a-sav stok ouzh an ti. Ur wenodenn a gildroe etre kefioù ur vodad gwez onn hag e stoken ouzh dor an ti. Ur pezh ti peadra da lojañ un tiegezhriad a c'hwec'h pe eizh. Meven Mordiern a zeue da zigeriñ. Pa veze brao an amzer ez oa boas da vezañ war gorf e roched. Diouzh an tu dehou ar gegin. Un oaled bras nemet danzen a rae e voued war un dommerez dre-eoul-maen. War an dorn kleiz ar gambr ma veve enni, ur pikol armel levrioù stok ouzh ur prenestr, un daol grenn, ur gador-vrec'h dirak an oaled, ur gador all pe ziv, arrebeuri deut gantañ eus Pariz goude marv e vamm. D' an nec'h e kouske. Dre ar prenestroù e weled en tu all d' ur vozad gwez bras ur vereuri. Ac'hane e teue ur paotrig da zegas dezhañ ul litrad laezh bemdez war-dro peder eur abardaez. War bazenn uhelañ ur skeulig a dalveze dezhañ da sevel betek renkadoù uhelañ e levrioù e vorede peurvuiañ ur c'hazh. Meur a rumm kizhier am eus gwelet e Sant-Helori abaoe ar gazhenn gozh drailhet he divskouarn en emgannoù ha manet ur pav a-raok dezhi etre karvanoù ur c'hi en un emgann kalet betek Klemmichen ar c'hazhig du deut eus ti Vallee, dizonet re abred moarvat ma klemme dibaouez gant keuz da laezh e vamm. Dizale e teuas da vezañ ken gouez hag ar re all ha ne glemmas mui. Ul labousig, ul logodenn tapet war dro an ti n' oant ket fall kennebeut hag ur banne laezh a veze bepred da lipat, e korn an oaled, en ur skudell. Ar mestr oa sioul. Dont a rae ar c'hazh da vezañ heñvel hag e vevent kichen-ha-kichen pep unan diouzh e zoare hep diaezañ an hini all.

E keit ha ma tivizemp diwar-benn niverenn ziwezhañ Gwalarn pe al levr-mañ-levr nevez deut er-maez eus ar wask e lakae Meven Mordiern dour da dommañ ha dizale e teuear pikol pod te war an daol hag ez ae ganeomp tasad te war dasad te en ur vutunañ pe en ur zebriñ gwestell kraz. Hag e teue ar poent da ziskenn adarre gant ar wenodenn da c'hortoz an treñ distro da Sant-Brieg war-dro c'hwec'h eur abardaez.

19

Dibaot a-walc'h ez on bet o vale gant Meven Mordiern war ar maez tro-dro d' e di. Ur wech koulskoude, m' eus soñj, ez oa deut en arbenn din betek arzav Porzh Karv hag ez oamp diskennet betek an aod. Heuliet ganeomp an draezhenn e-pad ur pennad mat betek penn all aod Tournemin ez oamp degouezhet e genou ur ganienn strizh. Ur wazhig dour a zeue ac'hane da goll en traezh. Sevel a rajomp dre un hent kleuz dizarempred nemet da goulz ar foenn betek an uhelenn ma oa kuzhet e di warni e-touesk ar gwez. Ar c'horn-bro peuz didud-se a oa graet da blijout da Veven Mordiern. Eno e paote ar gonikled hag ivez eveljust al louarn hag ar gaouenn. Dilerc'hiadoù laboused dibluet a weled e pep kildro an hent kleuz. Tremenet oa Alanig dre aze pe marteze kizhier dam-c'houez ar c'hornad.

Un dro oan deut gant Vallee. Goude ar foenn e oa rak touzet oa ar pradoù. D' an ampoent-se en doa adkroget Vallee gant c'hoarioù e amzer-vugel : ar saezh dreist-holl. Ha meur a wech on erruet en e di p' edo en e stalig-labour er penn all d' e liorz oc'h aozañ gwareg pe saezh. Degaset en doa gantañ en deiz-se da

Sant-Helori peadra da gaout didu : ur wareg, ur c'hlaouierad-biroù hag ur « boomerang » ha c'hoari a rae brav gant an eil hag ar re all.

Ur fazi bras a ve ober eus Vallee ur furcher levrioù kozh. Ne deo deut da vezañ ludueg nemet dre m' eo aet e yec'hed war fallaat. Un tu bennak en e Envorennoù beaj e tispleg ken eeun ha tra ez oa en dro-se e ti Lady Herbert war-un-dro gant Jozeb Loth. Ul levraoueg kaer e oa e maner Lady Herbert gant levrioù kozh ha dornskridoù kembraek talvoudus. Mat e keit ha ma steuzie Jozeb Loth el levraoueg eus ar beure betek an noz, Frañsez Vallee a oa war al lenn o vageal, pe o siliaoua gant ur mevel, pe c'hoazh war-dro ar gegin o komz ouzh ar mitizhien kembraeg ar Vibl.

Evel ar brezhoneg ez oa ar c'hembraeg evit Vallee ur yezh bev ha nann un danvez-studi. Iskiz eo d' un den en deus, e-pad meur a vloavezh, sellet ouzh Frañsez Vallee o labourat gant e fichenoù leuniet a lavarennoù hag a c'herioù dastumet e lec'h pe lec'h gantañ pe gant ur c'henskriver bennak, soñjal ez eo bet tamallet dezhañ bezañ aozet ur « brezhoneg kadoer ». Gwir eo en deus ijinet ur ger bep gwech ma, ne gave hini en implij evit an dra a felle dezhañ envel. E pep yezh e vez graet kemend-all ha ne wele ket Vallee na Meven Mordiern perak an diaoul e ve ret d' ar brezhoneg drailhañ galleg bep gwech ma teu da zaremprediñ tachenoù ar skiantoù hag ar ouiziegezh. Ur gentel gaer honnezh o deus roet deomp. Mar deo re hir e-leizh eus ar gerioù ijinet ganto, mat deomp eo d' ober gwelloc'h, bravoc'h, berroc'h mar domp barrek.

20

Lavaret em eus endeo e teue Meven Mordiern div wech ar sizhun da labourat gant Vallee e Sant-Brieg. E-pad ar peurrest eus an amzer ec'h eilskrive ar brouilhedoù reizhet a-gevret gant Vallee hag Emil Ernod. Teir levrenn ar Sketla, an Notennoù, ar Geriadur bras, Istor ar Bed hag all a zo bet adskrivet gantañ gant aked ha gorrek evit ma vefe pep lizherenn aes da lenn da rouesaat fazioù ar mouler.

Da gantañ holl, evit ar **Sketla** hag an **Notennoù** da skouer, e save Meven Mordiern ur skrid gallek ha gant Vallee e veze lakaet e brezhoneg. Diwezhatoc'h avat e stagas da skrivañ war eeun e brezhoneg ha Vallee a reizhe pezh na gave ket mat.

Pa voe deut Emil Ernod da vevañ e Sant-Brieg gounezet gantañ e retred e teue ivez da di Vallee ha d' ar gwener e kaven hon tri den o labourat a-gevret. Kement-se a oa en amzer ma oa ar Geriadur bras war ar stern. Azezet oant en dro d' an daol grenn er sal-debriñ ha pep-unan a lavare e soñj. Pa veze deut ar mare e tegase ar vatezh an te war an daol. Hag e kendalc'hent da labourat divall. A-wechoù zoken e c'hoarveze un darvoudig farsus. Kement-mañ da skouer. Jakez Riou en doa embannet **Gorsez Digor** hag eveljust en doa **Emil Ernod** ar furcher staget da pennaouiñ er gerioù implijet gant hor C'hernevad. Er brezegenn veur ijinet gantañ evit an Drouiz Meur ez oa chomet a-bann **Emil Ernod** dirak al lavarenn-mañ : « War droad pe war vilo ». Hag ez oa o klask eus pe wrizienn an diaoul e teue ar ger-se dianav dezhañ. « Milo, Bilo, emezañ. Petra 'soñjit ? » Darbet e voe din tarzhañ. Nemet ken dic'hoarzh ha ma c'hellis e tistagis : « Me 'gred ne deo nemet ar galleg vélo ». Me lar deoc'h e voe c'hoarzh en deiz-se. Nemet me a anaveze Jakez Riou hag a ouie pebezh farser eus an dibab e oa hon den.

Pa veze siferniet Frañsez Vallee pe ret dezhañ chom war e wele dalc'het gant un diaester bennak ez aemp da labourat en e gambr-kousket.

21

Rak ret oa dezhañ bezañ gwall-glañv evit menel dilabour. E mareadoù ma oa e-giz-se war e wele eo en deus tennet Meven Mordiern digant Vallee frazenn war-lerc'h frazenn danvez **Envorennoù ur Brezonegour**. Muioc'h mui dre ma teu daoulagad Vallee da vezañ falloc'h fall e skrivo Meven Mordiern pep tra gant e skritur bostek. Hag e tremen an amzer. E 1935 e varv Emil Ernod, m' am eus soñj mat. E 1938 e ranko Vallee kuitaat Sant-Brieg da zont da vevañ e Sant-Lorañz e-kichen Roazhon. E 1939 ar brezel. E 1940 oan-me d' am zro deut da Roazhon da labourat endro da skinva Roazhon-Breizh. Ur sulvezh m' oan distroet da Sant-Brieg evit an dervezh e kejis gant Meven Mordiern e-kichen an ti-hent-houarn kreiz. Edo azezet evel boas e-kichen e bakadennoù hag e c'hortoze an tren da zistreiñ da Sant-Helori. An dra a zo c'hoarvezet e 1941, a-raok ar peurunvaniñ moarvat, rak hegarat

e voe an diviz etrezomp. N' oa ket deut c'hoazh ar zh da drenkañ ar soubenn. Setu ar soñj diwezhañ em eus dalc'het eus Meven Mordiern. Un den o c'hortoz un abardaez hañv an eur da zistreiñ d' e beniti. Paour-kaezh Viking deut da vevañ er C'hornog diwar boued laezh ha patatez !

Frañsez Vallee am eus gwelet evit ar wech diwezhañ e Sant-Lorañz e miz Meurzh 1943. Bepred drant daoust dezhañ da vezañ dall pe dost. Kenderc'hel a rae da labourat. Er bloavezh a-raok e oa bet goulennet diganen lakaat e brezhoneg evit SAV diwar notennoù e galleg ur pennad diwar-benn Kevreadurezh ar brezhoneg. Ar wech diwezhañ eo bet din da genlabourat gant Vallee. Ar wech diwezhañ eo bet din er bloaz war-lerc'h da vezañ bet war-dro Vallee. Hen anzav a rankan ne blij ket din gwelout o vont da get ar re am eus anavezet yac'h ha sonn.

Gwell eo ganin soñjal en amzer ma teue eñ ha Meven Mordiern pe Meven Mordiern e-unan d' ober un dro betek va zi war hent Cesson, un deiz m' oa deut Roparz Hemon da Sant-Brieg pe diwar un abeg all. Amzer eürus hor mignoniezh eo bet honnezh. N' oa ket nemeur a geloù brezel en amzer-se. Ne dae ket pep tra evit ar gwellañ evit ar brezhoneg. Met spi hon doa ez afe gwelloc'h deiz pe zeiz. N' ouiemp ket petra oa ouzh hon gortoz e tro an hent.

Rak darvoudoù a zo bet o tiouganañ deomp an dazont. E 1938 e teuas ar prezidant Albert Lebrun da Sant-Brieg ambrouget gant un armead gwarded mobil ha polised. Setu me galvet en derc'hent da vurev proviseur al lise. Un enseller polis a oa eno. Hag e voe goulennet diganen reiñ va c'her e chomfen e pinijenn em zi keit ha ma vefe ar prezidant e kêr. Laret em eus ya ha chomet on er gêr. Anez da se e vijen bet kaset d' an bidouf evit an deiz evel meur a hini all e Sant-Brieg. Un den dañjerus oa ac'hanon moarvat. Met kement-se a oa ken gwir all eus Vallee. Difennet oa bet groñs dezhañ dont da aveliñ e benn el liorzbig dirak e di. Soñjit, dont a rae ar prezidant da sellout ouzh ur C'helc'h Keltiek bennak o korolliñ dindan gwez bras ar vali ha Santig Breizh en defe gallet stlepel outañ ur vombezenn. Tud speredek a zo memes tra !

22

Frañsez Vallee n' en deus bet kasoni ouzh den, zoken ouzh e enebourien. Meven Mordiern n' oa ket heñvel. Un den e-unan, distak diouzh pep tra, nemet diouzh an hini a oa deut da vezañ pal e vuhez : ar brezhoneg yezh a sevenadurezh, a lennegezh hag a ouiziegezh. Nemet n' en deus ket zoken klasket kompren ar re o deus degaset kemmoù hep tamm plijadur er benveg ijinnet gantañ. Er-maez e oa eus an abadenn evel m' oa un tamm er-maez eus ar vuhez boutin.

Un deiz e lavaras din n' en doa anavezet maouez ebet nemet e vamm da dalvezout ar boan da foranañ ganti un hanter eur diviz. D' ar re a fell dezho hirroc'h diwar-benn-se, lenn Logotigiakos, e Gwalarn 1938.

Mar deus bet un den graet evit bevañ e-unan penn Meven Mordiern eo hennezh ha padal eo deut da drenkañ dre ma teue da gozh. Un abeg a zo bet a-walc'h anezhañ en diavaez eus ar re a c'hell bezañ deut ouzhpenn. E 1920 Meven Mordiern hep bezañ pinvidik en doa leve a-walc'h war e anv evit bevañ dereat o kas da benn e labourioù. E 1925 an diskenn war an arc'hant gall a skoas ur gwall daol ouzh e dammig danvez hag e 1937 e voe peurachuet ar mestaol. Daoust d' an den da vezañ balc'h ha distag n' en deus ket gallet herzel ouzh taolioù dic'hortoz hep gouzañv e don e spered hag e galon.

Kendalc'het en deus da labourat daoust da se betek an dibenn evel m' en deus graet Vallee e Sant-Lorañz ha bet int bet o daou e-pad tost da hanter-kant vloaz ur skouer a garantez hag a oberiantiz dalc'hus war dachenn ar brezhoneg. Roet o deus d' ar yezh-se nerzh o empenn, o arc'hant, hag holl c'halloudegezhioù o c'halon. Dibaot ar re ma c'heller lavarout kemend-all diwar o fenn.

Prezegenn graet e Ker-Vreizh 1950.

PIV EO I. BABEL ?

A-dal ma stagas kelc'hgelaouennoù evel « LEF », « Krasnaya Nov » ha « Rousski Sovremennik » d' embann pennadoù eus e deskad « An Arme war varc'h », kerkent-all e krogas I. Babel da vezañ kanmeulet eus an eil penn e vro URSS d' egile.

Gwir eo, kent na darzhas Dispac'h 1917, embannet en doa dija daou pe dri bennad eus e deskad all « Kontadennoù kêr Odessa » er gelaouenn « Lietopis » renet gant Maksim Gorki ha sed amañ meno ar skrivagner holl-vrudet a-zivout e genlabourer yaouank : « Lemm hag evezhiek-etre eo spered Babel ur marvailher dispar ha nerzhus anezhañ ; n' eus den e-tailh d' ober gwelloc'h egetañ gant yezh ha troioù-lavar ar bobl, ha gout'oar kerkoulz all ar stek da beurstudiañ ha da zisplega dirazomp buhez pe varv, poanioù ha levezon an dud dister, kouerien pe soudarded, e-dro dezhañ ».

Ac'hañ 'ta, daoust ha ma 'oa e anv war roll an RKP-b (Strollad broadel ar Volcheviked), evitañ da vezañ stourmet er c'hreisteiz Rusia hag e Polonia e touez soudarded ar « c'hamalad » Boudionny - bremañ marichal an URSS - diouzhtu ma voe bet moulet a-bezh e levr « **Konarmia** » (An Arme war varc'h) (1) , setu ma strakas ur gorventenn spontus a-us d' ar paour-kaez Babel.

Ar brizhskrivagner-mañ, e lenned er gelaouenn « **Pravda** » eus Moskov (niv. 17-IV-24), n' eo ket hepken un trubard, met un enebour. Aner e vefe deoc'h klask en e oberenn skeudenn skedus hor soudarded ruz, ar varc'hegourien kalonek a varvas war an dachenn-vrezel, pe a gendelc'h betek-hen da giañ evit ar vro, ar bobl hag an RKP-b. Diouzh klevout Babel ne oa 'ta en Arme war varc'h ar « c'hamalad » Boudionny nemet torfedourien touet, riblerien hep feiz na reizh ?...

E kelc'hgelaouenn « **Oktiabr** » (niv. III-1924) e skrive evelhen Boudionny, rener ar Arme war varc'h : El levr-mañ ne ra Babel nemet droukkomz eus gwellañ mibien an URSS, nemet duañ neb a skuilhas diglemm e wad evit ma chomfe dieub hor pobl, torret ganti he chadennoù, evit ma virfe da virviken ar gounidoù dreist-meiz degaset dezhi gant hon Dispac'h, e miz Here 1917...

(1) Ar « c'hamalad » Jozet Stalin a oa komiser politikel en Arme-se.

24

Met bev e oa Lenin er c'houlz-se ha gwell bell diouzh ar stur e oa c'hoazh kraban Stalin na oa netra nemet sekretour an RKP-b. Dre se, gallout a reas ar skridvarner A. Voronski sevel a-du gant Babel hag embann e kelc'hgelaouenn **Krassnaya Nov** ar pennad-mañ da zisammañ an tamallad :

Tamm ebet n' eo troet I. Babel da vezañ ur bruder a-vicher ; un arzour 'vat, ne lavaran ket. Un amzer a voe, neb a felle dezhañ komz eus an Arme ruz ne rae bep tro nemet gant ur yezh hepken, yezh stambouc'het ar vodadegoù politikel. Ha perak se ? netra aesoch da intent pa soñjer e pe stad arvarus e veze er mare-se an URSS. Met goude ma 'z eo aet an trec'h gant hor breudeur soudarded, tremen poent e vefe marteze paouez gant ar c'hiz se, ha diwar-vremañ petra 'virfe ouzh hor skrivagnerien da glask ha da ziskuliañ ar wirionez ?... A dra sur, ne vez ket tuet Babel da sankañ ur bod lore war dal kement-hini dibabet gantañ, na da strewiñ bleunioù a vilvern war hent e holl genvrezelourien... Met forzh pegen euzhus e vefe an darvoud-mañ-darvoud, pe gwall sioù hemañ pe henhont, kavet en deus ar skrivagner ur ster amguzh dindano, ur ster dibar, ha n' en deus ken c'hoant nemet diskouez d' al lennerien e gavadenn... Ya, buhez mab den evel m' emañ, ene mab den dihonet bennozhañ da levezon hon Dispac'h e kement gwiskad, ha zoken an izelañ, ar bobl, sed aze an danvez gwirion dilennet gant I. Babel... Du-mañ en URSS kerkoulz hag e lec'h all, techet e vezer d' ober un diforc'h etre ar skrivagnerien : darn, emezo, a zo broadel hepmuiken, ha darn-all a zo etrevroadel rik. Hep mar na marteze, Babel a zo eus an eil rumm, rak a-drugarez d' e drosperead gallet en dije aozañ pep kontadenn eus e levr « Konarmia » e n' eus forzh peseurt bro...

E n' eus forzh petore bro, ya, nemet e hini-eñ, da vihanañ e-keit ma rene eno Stalin hag e genseurt Jdanov. Un daou pe dri miz bennak kent na varvas, fellout a reas da Jdanov krennañ o diwaskell d' un toullad arzourien : d' ar soner Prokofiev, da skouer, ha d' ar skrivagnerien Mikaël Zotchenko, L. Seifoulina hag Anna Ac'hmatova (1). Kerkent, e klevjod hud ha blej a-dreuz hag a-hed an URSS, evel pa vije bet e pep korn ar vro bagadoù bleizi na badent ken gant ar c'hoant tagañ ha diframmañ ar paour-kaezh tud nevez flatret, hag ar re-mañ da stouiñ penn diouzhtu, da zaoulinañ dirak Jdanov : Mea maxima culpa, emezo, kablus on, met ne bec'hin ken, kamalad ker, gant m' ho po un tammig truez ouzhin. »

(1) Intañvez ar barzh Goumiliev, barnet d'ar marv gant ar G.P.OU.

25

Ac'hañ 'ta, pell 'zo, kent na zirollas Jdanov da leuskel tan ha kurun, daoust ha n' eo ket e giz se e vefe bet ivez stouvet e c'henou da Vabel ? Ne gav ket din en defe skrivet ur bajenn ouzhpenn abaoe ma c'hwezhazas ur barr-amzer ken diseblant e-dro d' e levr **Konarmia**. Neblec'h ne vez graet anv anezhañ, n' ouzon ket zoken ha bev e vefe betek-hen (1). Kaset eo bet marteze da ziskar gwez pe da duriañ douar du-hont, el lec'h ma 'z eus bet bountet dija kel lies a Juzaz, « enebour ar bobl ». Ha mar deo bet foetet e liv, roget dezhañ e baper ha torret e bluenn gant ur « c'hamalad » bennak, ra vezo milliget ar genaouek hollc'halloudek se, rak galvet e oa I. Babel da vezañ un deiz da zont ken brudet ha Maksim Gorki pe Anton Tchec'hov, n' eo ket hepken en e vro didruez, met dre ar bed a-bezh.

J. PRIEL.

UL LIZHER

gant I. BABEL

Al lizher-mañ da gas d' ar gêr a zo bet skrivet ganin-me diwar lavar ar soudard war varc'h Vassili Timofeitch (2) Kourdioukov. Talvout a ra ar boan, e kav din, e vefe taolet pled outañ, ha kerse e vefe ganin mar na vefe ket lennet gant an holl ; dre se, adskrivet am eus an testeni-mañ war eeun hag hep kemmañ an disterañ ger.

Va mamm garet, Evdokia Fiodorowna Kourdioukova,

E penn kentañ va lizher, mall eo ganin kemenn deoc'h ez on bepred a-drugarez Doue bev ha yac'h, ha spi am eus emañ ivez kont evelseig ganeoc'h c'hwi. Hag e tu-hont da se, stouiñ penn a ran dirazoc'h gant doujañs, ha plijet ganeoc'h degemer va gwellañ gourc'hemennou. Grit ivez, mar plich, va gourc'hemennou da...

Bez 'oa amañ ur pikol lostad gourc'hemennou d' ur bern tud eus e gorn-bro, kerent, mignoned hag amezeien. Kerkoulz eo din, moarvat, tremen hep ober meneg diouto ha stagañ diouzhtu gant eil lodenn al lizher.

(1) Un dro bennak, eme ar skrivagner en diverradur e vuhez, e tegouezho din, am eus aon, mervel evel ur c'hi kuit a berc'henn stok ouzh ur c'harzh pe en ur c'hroazhent digenvez.

(2) E rusianeg, an dilostger **itch** a dalv mab, hag **owno** = merc'h. Da skouer, tzarevitch = mab ar tzar ; Rodionovitch = mab Rodion ; Timofeitch = mab Timofe ; Fiodorowna = merc'h Fiodor, hag all.

26

Hag ouzhpenn se, va mamm garet Evdokia Fiodorowna Kourdioukovna, mall eo ganin kemenn deoc'h emañ bremañ o vrezeliañ en Arme war varc'h ar c'hamalad Boudionny, ha bez' eus ivez en hon touez ho kenroad Nikon Vassilievitch war nes bezañ ur marc'hegour ken kalonek ha den. Dibabet on bet gantañ da reiñ dorn dezhañ evit ur gefridi a-bouez, ur gefridi a-berzh strollad politikel an Arme, da lavarout eo, mont gantañ betek an talbenn-brezel da skignañ etre hor soudarded

levrigoù ha kelaouennoù, da skouer, « Ar C'heleier » hag « Ar Wirionez » eus Moskov, hag eveljust hor c'hannadig ni, « Ar Marc'heg Ruz », rak berveñ a ra hor stourmerien gant ar c'hoant lenn o c'hannadig, ha kerkent all stagañ a reont adarre da roustañ Poloniz ken ma fu, persevaled a zo anezho holl gwitibunan, ha gant se, anat deoc'h, bevañ a ran evel ur pabor, gant ho kenvroad Nikon Vassilievitch.

Hag e tu-hont da se, va mamm garet Evdokia Fiodorowna Kourdioukova, ho pezit ar vadelezh da gas din, mar plich, kement tra a vo en ho kalloud hag eveljust diouzh m' emañ bremañ ho peadra. Ho pediñ start a ran da ziwadañ ar porc'hellig brizh-du hag en anv Doue kasit din ar primañ gwellañ ur bakadenn gig sall pe seurt a vo, ha sed amañ va chomlec'h : Vassili Timofeitch Kourdioukov, er strollad politikel Arme war varc'h ar c'hamalad Boudionny, rak mont a ran hogos bemnoz da gousket hep debriñ tamm, hag en noazh emañ war vete-nebeut, e doare ma baourañtean da vat gant an naon hag ar riv. Hag e tu-hont da se, skrivit din a-zivout va ebeul Stiopka : daoust ha bev eo c'hoazh, ya pe nann ? Ho pediñ a ran da bliediñ gantañ ha da gemenn din un draig bennak diwar e benn : daoust ha kenderc'hel a ra da stekiñ an eil troad ouzh egile, pe baouezet en defe d' en em c'hloazañ e stumm se, hag ouzhpenn se, komzit din, mar plich, eus an debron en deveze en e divhar a-dreñv, daoust ha houarnet eo bet dija, ya pe nann ? Ho pediñ a ran, va mamm garet Evdokia Fiodorowna Kourdioukova, diwallit en anv Doue d' ankounac'hat gwalc'hiñ e zivhar a-dreñv gant ar bechad soavon am boa laosket er ger a-dreñv skeudenn ar Werc'hez santel, ha mar deo bet implijet holl ar soavon se gant va zad, kit raktal da brenañ un tamm all e Krasnodar, ha Doue d' ho paeo evit se.

27

Hag ouzhpenn-se, kemenn a ran deoc'h ez eo paour daonet ar rannvro m' emaomp enni er mare-mañ. Tec'hel kuit dirazomp a ra kouerien diwar-dro, ha skarañ a reont gant o chatal da guzhat e don ar c'hoajoù gant aon rak hon ered ruz ; evelse ne gouez ket nemeur a ed dindan hor skilfoù, ha ken munut e vez ar greun anezhañ ma 'z eo ur fent hepken, met n' eus den en hon touez tuet da c'hoarzhin. Hadet e vez dre amañ kerc'h ha gwinizh ; bountañ a ra houpez e-dro d' ar bizhier hir sanket en douar, e doare ma vez, da vihanañ dimp da welout, pep tra en e reizh er parkeier. Gant ar houpez se, emezo, e vez graet er vro-mañ ur seurt hini-kreñv strilhet er gêr.

Ha kement ha derc'hel da vont gant va lizher, mall eo ganin komz deoc'h diwar-benn va zad, Timofei Rodionovitch Kourdioukov en deus lazhet ur bloaz 'zo a-daolioù sabrenn va breur Fiodor Timofeitch. Ha setu penaos : edo brigadenn ruz ar c'hamalad Apanassienko, ma 'z oan neuze o vrezeliañ enni, war nes mont a-stourm ouzh kêr Rostov, ha setu m' en em silas un trubard en hor bagad. Va zad a oa d' an ampoent se kabiten pennrener ur gompagnunez en arme wenn ar jeneral Denikin, ha diouzh klevout ar re en em gavas gantañ, dougen a rae bepred ur regennad medalennoù a-dreuz e vruched hervez ma rae gwechall, keit ha ma veze, an Impalaer hag ar pennoù bras all o krignat hon tammig buhez. Ma ! bennozhañ 'ta d' an trubard emañ o paouez komz dioutañ, degouezhout a reas dimp holl bezañ paket gant an enebourien. Ha kentiz ha ma paras va zad ur sell war va breur Fiodor, stagañ a reas da skeiñ gantañ en ur veogal : « Loen brein, emezañ, penn-bastard ruz, mab ar c'hast ! », hag ac'han, hag alesont, ha kenderc'hel a reas da c'hwistañ warnañ betek an abardaez-noz, kent na dennas va breur e huanad diwezhañ. Skrivet am boa e koulz hag en amzer ul lizher da gemenn deoc'h e oa bet douaret Fiodor hep tanfoeltr kroaz ebet war e vez. Met allas ! tapet e voen gant va zad, va dorn er pod, da lavarout eo, gant al lizher nevez-skrivet, hag eñ da yudal : « Ya, emezañ, gwir vibien ho mamm oc'h ho tri, ganet oc'h bet diwar ur penn-gast, hogen me eo an hini a reas da gof o mamm koeñviñ, ha kemend-all a rin c'hoazh, met o vezañ ne dalv ken va buhez ur vozad teil, e gwir emañ da zistrujañ, mar karañ, neb a zo bet krouet ganin ». Ha me 'oar petra ouzhpenn a glevis digantañ, met daoust d' ar boan a c'houzañven e-keit-se, chom a ris da selaou, difiñv ha sioul evel Jezuz Krist. Hogen, a-barzh un nebeudig amzer e kavis pleg da skampañ kuit ha da gejañ gant peurrest strollad ar c'hamalad Apanassienko. Etretant, gourc'hemennet e voe dimp skeiñ war-du Voronej el lec'h ma tleemp gortoz soudarded all d' hon skoazellañ. E pred hag e kentel e teuas betek eno ar soudarded se ha bez' oa ganto evidomp-ni kezeg, arc'hant, bitailh ha kement tra all hor boa ezhomm bras dioutañ.

28

Diwar-benn kêr Voronej, va mamm garet Evdokia Fiodorowna Kourdioukova, ne

lavarin deoc'h nemet kement-mañ : bez' eo hounnezh ur gêr eus ar re vravañ, brasoc'h c'hoazh, e kav din, eget Krasnodar. Ken kaer eo an dud a vev enni ma vez un dudi, sellout outo, ha bez' eus war-dro ur stêrig, ur blijadur hepken kouronkañ enni. Bemdeiz Doue e veze roet da bep soudard daou lur vara, un hanter-lur gig ha war ar marc'had sukr diouzh ma tegouezhe ganimp, e doare m' am beze tu da glakañ te lipous diouzh ar beure kerkent ha war vale. Boued a veze ivez da lonkañ da verenn, kement ha ken bihan ma 'z oamp war-nes ankounac'hat petra eo an naon, ha da goulz koan mont a raen davet va breur all Semion Timofeitch da zebriñ kouignoù gwai, ha me oar, ha goude 'vat pep hini d' e doull.

Hag e-keit-se e fellas d' am breur Semion Timofeitch, ur gwaz a foeltr forzh anezhañ, dont da vezañ pennrener ar rejimant a-bezh, ha gourc'hemennet e voe raktal gant ar c'hamalad Boudionny ober diouzh e c'hoant. Roet e voe 'ta da Semion daou loen kezeg, ur gwiskamant eus ar c'haerañ, ur c'harr da sammañ warnañ an holl draoù en deveze ezhom diouto, ha war ar marc'had medalenn ar Baniel Ruz, ha me da vezañ evel reder en e c'hourc'hemenn dre ma 'z oan me e vreur. Ha gant se 'vat, mar fell bremañ d' un amezeg bennak ober gaou ouzhoc'h, torret e vo e benn dezhañ gant Semion, ha fin dre eno !

Diwar-se, e stagjomp da zigludañ aotronez ar jeneral Denikin, ha dre lazhañ a vilvern an ailhoded se, argaset e voent ganimp betek ar Mor Du, met tu ebet ne gavjomp ni da gregiñ e kabiez va zad, kaer en doe Semion Timofeitch klask ha diglask anezhañ e pep lec'h, rak ne oa ket torret d' e galonad abaoe muntr ken kriz hor breur Fiodor. Met peogwir n' oc'h ket hep anaout pleg va zad, bez 'oa, kwita, korvigell ennañ pe ne vezo en den, diskleriañ a rin deoc'h an dro-louarn ijinnet gantañ : livet en doa e varv ruz, ya, livet kuit a vezh e varv e gell-du, hag ur wech lemet gantañ e zilhad kabiten, bale a rae war e blen dre gêr Maïkop e doare ne ouie den e touez keriz e oa ar c'hanfard se gwellañ mevel pennoù bras an amzer gent. Hogen, a-benn ar fin e teu pep tro ar wirionez da sevel war c'horre, hag un deiz bennak e tichañchas d' ho kenvroad Nikon Vassilievitch en em gavout tal ouzh tal gant ar paotr brav se e ti ur bourc'hiz e Maïkop, ha kentañ ma reas e voe skrivañ ul lizher d' am breur Semion Timofeitch. Ha , ni diouzhtu war varc'h, ha d' ober d' an druilh-drask ur pikol flipad hent, un daou c'hant lev bennak, da lavarout eo : me, va breur hag un toullad soudarded deut d' hon heul eus o fenn o-unan.

29

Ha petra, e kred deoc'h, e kavjomp ni e kêr Maïkop ? Ataoe, dont a rejomp war an taol d' intent ne oa ket eno nemeur a hini douget da stourmerien an Arme ruz, bez' oa trubarderezh e-leizh e pep lec'h, hag evel merien e verve ar Yuzevien, en ur ger, derc'hel a rae an traoù da vont koulz ha biskoazh, 'vel ne vije ket bet didroaded an Impalaer.

Dre-se, n' ouzon ket pegeit amzer e rankas Semion Timofeitch difretañ hag arguziñ kraf ouzh kraf gant ar Yuzevien-se, ken ma veze berr warnañ. War zigarez e oa ar c'hamalad Trotzki o paouez da zifenn lazhañ ar brizonidi, ne felle ket dezho leuskel va zad da vont ganimp, rak kraouiet e oa bet ganto ha morailhet o doa warnañ. « Ganimp ni, emezo, e vo barnet an den-mañ , ha n' eo ket ganeoc'h, chas klañv a zo ac'hanoc'h ! ha mat pe fall, ober a raimp dezhañ diouzh m' en deus graet eñ. » D' an diwezh e teuas koulskoude va breur a-benn d'ober dezho intent anat ha splann edont oc'h enebiñ ouzh pennrener ur rejimant war varc'h, ouzh ur stourmer en doa bet digant ar c'hamalad Boudionny holl veladennoù ar Baniel Ruz. « A-hend-all, eme Semion gant an droug a oa ennañ, gweañ a rin e c'houzoug da gement hini a savo pelloc'h a-du gant va zad hag a viro ouzh ar re-all da zibrennañ warnañ. » Ha war ar marc'had klevout a rejont kement all digant ar soudarded diredet d' hon heul. Ne oa ket deut va zad e-maez an toull-bac'h, ma krogas Semion Timofeitch da lardañ anezhañ a-daolioù skourjez, kent gourc'hemenn d' e dud mont en ur porzh, pep hini en e renk, evel m' eo dleet hag evel ma ra ar soudarded a-feson.

Hag eñ d' en em lakaat da walc'hiñ e varv d' e dad en ur bodezad dour, ha kerkent ha glebiet e krogas ar c'hrev se da zislivañ. Ha sed amañ peseurt kaoz a savas kenetrezo o daou :

- Ac'hañ 'ta, va zad, e c'houlennas Semion, daoust hag en ho pleud emaoc'h er mare-mañ ?

- Nann, eme Dimofei Rodionovitch, ne gav ket din e vefen.

- Ha va breur Fiodor, daoust ha stad 'oa ennañ e-keit m' edoc'h o trouc'hañ-didrouc'hañ ar paour-kaezh a-daolioù sabrenn ?

- Tamm ebet, am eus ar gredenn.

- Ha daoust hag heñ, e c'houlennas Semion c'hoazh ur wech, n' ho pefe biskoazh drouksantet e vefe un dro bennak roet deoc'h stoup evit stoup ?

30

- Nann 'vat, morse n' am eus sammet va spered gant ar seurt traoù.

War se e troas va breur war du e soudarded en ul lavarout evelhen :

- Ma ! evit va c'helou-me, hen gouzout a raen fraez mat, mar dije gallet ho krabanoù tapout krog ennon, tanfoeltr truez, na zoken un dakennig, n' ho pije bet ouzhin. Rak se, va zad, e sell emañ bremañ d' ober ho stal deoc'h.

Ken buan all e stagas Timofei Rodionovitch Kourdioukov da vallozhiñ, da zismegansiñ e vab, da ganañ ar seizh seurt ruz diwar-benn hor mamm hag he brud vat, ha d' an diwezh tufañ a reas e-leizh e c'henou e kreiz-tre daoulagad Semion. War an taol e c'hourc'hemennas hemañ din skarañ e-maez ar porzh, ha setu perak n' on ket e-tailh da ziskleriañ deoc'h dre ar munut e pe stumm e voe graet e stal d' am zad, rak sentiñ a ris diouzhtu ma voen bet pedet da vont kuit. Ur pennadig goude, kaset e voemp etrezek Novorossiisk, met a-zivout ar gêr se n' am eus nemet daou pe dri ger da gontañ, hogen n' hellan ket chom hep kemenn deoc'h n' eus tamm douar ebet en-dro dezhi, netra nemet dour ha dour a bep tu : ar Mor Du, hervez ma vez graet dioutañ. Menel a ris eno kent na dremenas miz Mae, hag alese aet omp da vrezeliañ e Polonia el lec'h ma reomp d' an holl krenañ gant aon 'rak an Arme Ruz.

Ho mab karantezus,

Vassili Timofeitch Kourdioukov.

Ha diwallit, va mamm garet, d' ankounac'hat plediñ gant va ebeul Stiopka, rak Doue d' ho paeo evit se.

*

**

Sed aze al lizher kaset d' ar gêr gant ar soudard war varc'h Kourdioukov ; netra, na zoken ur pik, n' am eus kemmet, pe lemet dioutañ. Raktal ma paouezis da skrivañ, tapout a reas Vassili ar follennoù hag eñ da glenkañ anezho dindan e roched, stok ouzh e groc'hen.

- Arsa, va faotr, e c'houlennis digantañ, ur prizoniad a oa evelato da dad ?

- Va zad a oa ul loen brein, emezañ en ur stouiñ e benn.

- Ha da vamm, daoust ha gwelloc'h e vefe egetañ ?

- Netra n' am eus da damall dezhi... Dal, sell, mar karez, ouzh va c'herent...

31

Tennet en doa diouzh e c'hodell ul luc'hskeudenn vastaret ha joget, ha bez' oa warni e dad Timofei Rodionovitch Kourdioukov, ur c'hof braoued anezhañ, gwell ledan e chouk, gant ur gasketenn is-ofiser war e gokenn, hag eñ ken reut hag ur peul, gant e varv kribet eus ar c'hentañ, e zivjod lart evel pa vijent koeñvet, hag en e benn daoulagad hep liv na neuz, daoust ha ma kaven lemm daonet ar selloù anezho.

Ha bez' e oa ivez en e gichen, en he c'hoazh war un tammig kador-vrec'h aozilh, ur vaouezig diwar ar maez, klañvidig hag aonig da welout, gant ur sae ken dibalamour hag ur sac'h e-dro dezhi.

Hag e penn pellañ, e-tal ur voger gartonz ar seurt ma kaver e kêriadennoù

'zo e ti al luc'hskeudenner - gant bleunioù, koulmed hag all, livet warni evel ma teu e teu - e spurmanten daou baotr yaouank, pe gentoc'h daou ramz besk a-walc'h o spered, da vihanañ war a grede din, gant daoulagad kaouenn a-rez o zal, un dremm a vent gant un asied, hag i en o sav sonn, tenn warno evel soudarded war c'hed, an daou vreur henañ Kourdioukov : Fiodor, bet lazhet gant e dad, ha Semion, muntrer e dad.

I. BABEL.

Novograd-Volinsk, Mezheven 1920 (1).

(1) Ar pennad-mañ a zo tennet eus al levr « Konarmia » (an Arme war varc'h) .

ZON AR MATOUTIER

Niverus eo ar re o deus kavet plijadur o lenn Bilzig, romant kaer Fañch al Lay, daoust m' am eus aon ne gaver ket mui aes-tre al levr da brenañ. Darn a zo bet marteze souezhet o welout, er pennad etre Bilzig hag ar maltouter (p. 71) e laka an oberour Bilzig da ganañ ur son a ranke bezañ lemm ha flemmus-tre pa weler fulor ar brigadier ; ha keuz e teu dimp pa n' ouzomp ket petra e c'hope Bilzig e divskouarn ar paour kaezh.

E gwirionez ar ganaouenn a oa bet savet ha setu amañ ar bajenn adkempennet hervez dornskrid F al Lay. Miret hon eus doare-skrivañ an dornskrid, un tammig disheñvel eus an hini moulet :

Ha padal na dreist trouz ar jolori, kroz an tarziou mor er c'haolennou hir, setu e sav eur vouezik skler divar kern uhela beg ar c'hastell. Pep hini a anaveé ar ton hag ive ar zon : zon ar brigadier ar matoutier. Var beg ar garek, Bilzig hag eun toullad potred ha potrezed a gane ar clan, ar wased hag ar merc'hed d' an traon adalek beg ar c'hastell, beteg an enezenn a ziskane. Piou a nevoa gret an ouidel zè ? Piou ? Tamall a ret anèi da Jarlik Koz. Setu-hi aman penn da benn.

ZON AR MATOUTIER

Var eun ton anaveet

Jesus pegen kaèr è
Kurunenn potr Kernè,
Kerniel a bep kostè,
Var tal an dogan zè.

Berr e kav an amzer,
Ar c'horgnek matoutier,
Pa ve, dre ar hentchou,
O ruza e voutou,

O vessa ar c'hleuniou,
Ié porz ar bagou,
Ar mor hag ar pesked,
Koc'h ar vortoloded.

33

Epad an amzer zè,
Tom d'èi en he guelè,
E vreg zo c'hourignal,
Gant eur matoutier all :

Evurus an dogan
Kleuk en e di bihan
O lemma e gerniel
Eur beg e vreg fidel.

Na karout a rafenn
Bea var he barlenn
O kana de ha noz
Kantik ar baradoz !

Ar zonig ze a voa bet gret da vrigadier ar vatoutêrien, eur C'hernévad kajuz ha killen.

En diwezh e voe nec'het an oberour kement hag e genskriver Joseph Ollivier a embanne Bilzig e Buhez Breiz : « *Pour ce qui est de ma chanson du Douanier, je reconnais qu'elle est un peu verte, écrivait le 13 janvier 1924 Fañch al Lay à son*

ami. Mais j'ai eu tant de plaisir à la faire, avouez aussi qu'elle n'était pas mal venue.

« Je l'ai refaite - mais, et vous en jugerez, combien moins expressive :
Voici la chanson retapée :

Diskan
Jesus pegen kaer è
Stad ar c'hefelek ze
Netra dehan d'ober
Ar paour kez matoutier !

Netra ne ra bemde
Met debri ha bale,
Bemnoz ne ra netra
Met bale hag efa.

Berr e kav an amzer
Ar paour kez matoutier
O vont dre an henchou,
O ruza e voutou.

O vesa ar c'hleuniou,
Ive porz ar bagou,
Ar mor hag ar pesked,
Koc'h ar vortoloded.

34

Epad an amzer ze,
Tom dei en e guele,
E vreg !... Salver Jesus !
Nag hen zo evurus !

Rag pa zistro dar ger,
Mousc'hoarzin ra seder,
Neus ken netra, d'ober.
Ar paour kez matoutier !

« Comme vous le voyez, ce n'est pas très brillant. Enfin ! »

N' am eus ket adkavet peurrest al lizhiri ha n' ouzon ket perak ne voe ket embannet an eil destenn. Gallout a reer soñjal perak. Kollet he doa he saour hag evel ma oa e oa tu c'hoazh da dermal dre ma oa graet al levv evit an holl. Marteze ivez o doa aon da zisplijout da lennerion all 'zo dre ma oa savet war don ur c'hantik. N'eus forzh penaos ne gaver ar ganaouenn nag e niverenn Gouhere-Eost 1924 Buhez Breiz nag el levr embannet e 1925 ; koulskoude e vije bet un druez ma vije bet kollet da vat.

Dr. C. LAURENT.

G. S. - Skritur Al Lay a zo diaes a-walc'h da lenn. E linenn diwezhañ ar pevare poz e lennomp koulskoude : Eur beg e vreg fidel. Daoust hag ur fazi e vije evit : eus beg e vreg fidel ?

BRASAÑ LABOURADEG AN EUROP WAR AR PAPER SIGARETEZ A ZO BREIZHAT

MILINOÙ BOLLORE

gant Per EVEN

Stalamardet eo bet kentañ papererezh Bollore en 1822 gant René Bolloré.

E-kerzh e veajoù bras evel mezeg war vor, en inizi Japan dreist-holl, eo e studias tad ar milinoù Bollore penaos labourat ar paper, hag ur wech distro d' e vro, e teuas hennezh en e benn sevel ur bapererezh war ribl Stêr Oded, ur pemzek kilometrad bennak, e krec'h diouzh Kemper.

E 1834 e plantas un ardivink paper-dibun (1) , hag adalek neuze e troas ar vilin vihan-se d' ober a bep seurt paperennoù tanav.

Ret eo, avat, dont tre betek ar bloavezh 1861, d' ar c'houlz m' edo trec'h ar sigaretenn dre-holl, kent gwelout ar vilin oc'h aozañ koulz lavaret, nemet paper-sigaretez.

Diwar neuze eo e loc'has, evit mat, kreskidigezh labouradegoù Bollore : da gentañ feurmiñ, goude-se prenañ un eil milin Kaskadeg ; diwezhatoc'h prenañ ur vilin all adarre e Troyes (Bro-C'hall) ; ken na voe dindan renerezh ar Volloreed ur genlabouradeg enni 11 ardivink-paperezh.

Betek 1939 ne labouras milinoù Bollore nemet evit an Amerik, pe dost, o pourchas paper-sigaretez d' ar merkoù bras evel Camel, Chesterfield, Philip Morris, Old Gold, meulet ganto holl gwitibunan perzhioù dreist ar marc'hadourezh breizhat.

En tu-hont d' ar paper war ganell, graet da vezañ stignet war wikefreoù-fardañ-sigaretez, e werzhe ivez Bollore, bep bloaz, d' ar « British Amerikan Tobacco Company », kaieradoù paper-sigaretez dre zekmilionadoù. Deut eo bet ar brezel da derriñ lañs bras an ermaeziadurioù-se ha 5 bloavezh war o hed eo manet Bollore, hep gallout tonkañ an disterañ marchad gant e wizion en Amerik.

36

Hogen, diwar ar bloavezh 1938, ar Stadoù-Unanet, o welout pell en o raok, o doa raktreset sevel e Karolina-an-Hanternoz, ur pikol labouradeg war baper-sigaretez, gant harp tec'hnegourion da Vollore, rak bras-spontus e teue dispignoù an Amerik da vezañ, dre berzh ar goulenn, atav o kreskiñ war ar marc'hadourezh breizhat. Dioueret eus paper Breizh, e-doug ar brezel diwezhañ, e roas an Amerikaned d' o milinadeg ur dalvoudegezh vrasoc'h eget na oant e-sell d' ober da gentañ. Ma c'heller bremañ lavarout o deus o fapererezhioù-sigaretez pep mestroni, neket hepken war dachennoù-gwerzh o bro, met e tiskouezont ivez bezañ ar gevezourion washañ war varc'hallec'hioù ar bed holl.

Tavet ar brezel, setu ma ranked adsevel kefridi v-Bollore penn-da-benn. Ar milinoù chomet morzet dindan an Alamaned a oa da vezañ adkempennet, ha ret oa kavout fred nevez evit kempouezañ drouziwezh ar marc'hata gant an Amerik. War dachenn ar vicherouriezh eo e voe renet ar strivoù kentañ raktal, hag evelse, en ur ober un nebeut bloavezhioù edo etre daouarn ar brenourion, strewet dre ar bed, kement seurt paper-sigaretez o klotañ, en doare gwellañ, gant ezhommoù pep hini.

Diouzh un tu all, dre bouez labourat ha poaniañ, e tizhas skiantvicherourion v-Bollore peuraozañ paperennoù tanav-all c'hoazh o talvout evit an ijinerezh.

Hiziv an deiz, emañ Bollore o pourchas da vroioù Breizh ha Gall ouzhpenn 80 % eus ar c'heimentad paper-speuriañ fetisaerioù-tredan (2) a gaver eno. Al labouradeg-mañ a zo unan eus ar re a c'hell spletiñ (produiñ) bemdez 3.000 kilo

paper-fetisaer tanav-dreist, 7 mikron troc'had dezhañ.

Pleustret o deus kalz ar Volloreed ivez war studi ar pluskennoù evit paper-glaouet (3) , hag e 1951, e c'holoent ouzhpenn an hanter eus ar marchad gall. Mar strollomp gant an teir micheradur-mañ (paper-sigaretez, paper tanav evit an ijinerezh, pluskennoù evit ar paper-glaouet), hini ar paper-bibl o talvout evit an embannadurioù-lorc'h ha dreistholl evit ar rummad anvet « La Pléiade » e galleg, neuze e c'hellomp kaout un daolenn glok a-walc'h eus labour-papererezh seurt kevredigezh.

War leur ar c'henwerzh, o deus ranket ar Volloreed adkemer o c'hreñv koulz hag evit un eil aloubiñ.

An ermaeziañ boas gwechall etrezek an Amerik ez eo bet kemeret e lec'h gant kasadegoù davit kement bro a zo war an douar hag e 1951, e oa trec'h un eil gwech ar re Vollore war un dachenn-varc'hata par d' an hini o doa gounezet a-raok ar brezel.

37

An teir milinadeg, lakaet a-gevret, a vez o taskor ouzhpenn 20 tonellad paper bemdez ha gant aratozidigezh an ardivinkoù, e vezer deut da gaout perzhioù labour n' hall den pismigañ outo.

Pep milinadeg e kaver enni un arnodlec'h evit ensellout ouzh temz ar paper da werzhañ, hag arnodlec'h-kreiz milin an Oded, e studier ennañ penaos lakaat diouzhtu da dalvezout ar c'havadennoù nevez-c'hraet.

E-keñver an oberoù kevredadel, o deus atav diskouezet ar Volloreed e oant diouzh o c'harg evel renerion-labour. Rak savet o deus en-dro da vilinoù an Oded ha Kaskadeg kêriadenoù gwirion gant bep a skol, bep a dachenn-sportoù ha bep a greizenn-vugelouriezh.

Mar deo gwir e weler ar Volloreed o chom a rumm da rumm e penn ar Bapererezh, ken gwir all eo e kaver ivez, e-mesk ar goskor, tud bepred diwar an hevelep tiegezhioù hag a zo deut da sevel o c'hein dre ma rae berzh ar vilinadeg.

Gant urzhiet evel m' eo al labour e tri skipailh oc'h ober pep unan anezho, eizh eurvezh bemdez, e c'hall ar vicherourion kaout amzer a-walc'h da intent ouzh o atant, pe o liorz.

Milinoù-paper Bollore, ganet e Breizh, kant tregont vloaz a zo, n'o deus tamm ebet kollet o brud vat war varc'hallec'hioù ar bed. Ha bremañ, gant unnek ardivink ha pemzek-kant micherour war dro, e tiskouezont bout embregerezh kentañ an Europ evit ar paper-sigaretez hag ar paperennoù tanav divoutin.

(1) papier en continu, e galleg.

(2) papier isolant pour condensateur électrique.

(3) papier carbone.

GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG

gant Roparz HEMON

E-doug va labour yezhoniezh er bloavezhioù tremenet, em eus dastumet un niver bras a c'herioù hag a lavarennoù, tennet diouzh skridoù a bep oad, adal amzer ar brezhoneg-krenn betek an amzer bremañ. Dastumet int bet ganin da sevel ul labour bras, Yezhadur Istorel ar Brezhoneg, kerkoulz hag ur bern labourioù berroc'h, a zeuio er-maez tamm-ha-tamm, am eus fiziañs, er gelaouenn iwerzhonat « Celtica », er gelaouenn alaman « Zeitschrift für celtische Philologie », moulet e stumm levrioù gant « Skol ar Studioù Keltiek » Dulenn, pe zoken marteze, - rak burzhudoù a c'hoarvez,- embannet e Breizh.

Ar gerioù hag al lavarennoù, skrivet e kaieroù ha war milieroù a fichenoù, ne dleont ket koulskoude mont da get, evel ma 'z eas da get darn eus ar re am boa dastumet a-raok ar brezel, distrujet e bombezadeg Vrest gant ar Saozon e 1941. Talvoudus e c'hellont bezañ d' an holl dud a studio hor yezh en amzer da zont. Setu perak on krog, abaoe daou vloaz, d' o urzhiañ evit ober ar pezh a anvan Dafar Geriadur Istorel ar Brezhoneg.

PAL HA STERN AR GERIADUR

Pal ar Geriadur eo reiñ pep ger eus ar yezh, gant skouerioù tennet diouzh ar skridoù, en doare da ziskouez ar stummoù hag ar furmoù, ar sterioù hag an implijoù pennañ anezho.

Ken ec'hon eo ar pal-se; ne c'hell ket bezañ tizhet gant un den hepken, na zoken gant ur bagad tud o labourat a-gevret. Ha pa vefe tizhet, embann ur seurt geriadur a vefe hogos dic'hallus. Ret eo eta prederiañ ervat evit dibab hag embann, da gentañ-holl, ar pep retañ, ar pep talvoudekañ hepken.

STUMMOU HA FURMOU

Pep ger a gemm e stumm peurliesañ hervez an amzer hag al lec'h. Eus ar stummoù niverus gwisket gant pep ger, -a-wechoù kantoù ha kantoù anezho, - ne c'heller pakañ nemet un nebeudig hepken. Ha c'hoazh ne c'heller pakañ an nebeudig-se nemet evel ma 'z int bet merket hervez doareoù-skrivañ a bep seurt. Ar reolenn da heuliañ, anat eo, eo adskrivañ ar ger dres evel m' hen kaver merket e pep skrid. Klask gouzout penaos e veze distaget a zo ur gefridi all, na c'hell bezañ sevenet nemet e studiadennoù a-ratozh, distag diouzh ar Geriadur.

39

Un diforc'h a ran etre « stummoù » ha « furmoù » ; ar « stumm » e-keñver ar son, hag ar skritur, ar « furn » e-keñver ar yezhadur. Da skouer, **amnesec**, **amneseuc**, **ameseuc**, **amesec**, **amezec**, **amezek** a zo stummoù eus ar ger **amezeg**. Liester an anv-se, **amezeien**, a zo ur furn. Ur furn evel amezeien he devez d' he zro meur a stumm : **ameseyen**, **ameseien**, **amission**, **amizion**, **amezeienn**, h.a.

Pezh a ranker gouzout e-keñver ar furn a gemm hervez natur ar ger. Gerioù 'zo n' o devez nemet stummoù, hervez ar skritur da vihanañ **c'hwec'h**, da skouer : **huech**, **choech**, **hueh**, **huéh**, **c'houec'h**, **c'houeac'h**, h.a.

Un anv-kadarn en devez peurliesañ ouzhpenn ur furn : an unander hag al liester, da skouer. Ar furn a dle diskouez ar reizh pe an niver, hag a c'hell en em astenn er-maez eus ar ger. **C'hwervder** a vez lakaet gourel e yezh lennek hon amzer, hogen skouerioù a gaver, evel « ur c'huervder vras ». Diwar-benn reizh ar ger **tra** ez eo a bouez dastum skouerioù evel « ne deo ket posupl en em blijout kalz en un dra hep lakaat kalz a afeksion ennañ ». Diwar-benn ar ger **arc'hant** : lies eo e « setu arc'hant amañ, mes ne vevin ket gante », hogen gourel hag unan e « mar en deus arc'hant, e kavo implij dezhañ ». Termal a ra ar yezh alies etre furmoù : un den en deus daouarn pe daou zorn, pezh na vir ket outañ da gaout arzornoù, pe arzornioù, pe arzaouarn, pe daouarzon.

Ar verb a gemer furmoù e-leizh. N' eo ket a-walc'h kaout stummoù ha furmoù an anv-verb **anavezout**, evel **aznavout**, **aznauout**, **anauout**, **hanaouit**, **hanàuein**, **anavet**, **anavout**, **hanawet**, **hanaùein**, **hanàouèt**, h.a. Ret eo ivez menegiñ holl stummoù ha furmoù pennañ an displegadur, evel, en trede gour bremañ, **anavez**, ar stummoù **ezneu**, **eno**, **ene**, **eneff**, **anav**, **anvez**, **hanaw**, h.a.

Ur skouer all : e-keñver an araogenn, n' eo ket a-walc'h dastum stummoù **a-raok**, e-giz **arauc**, **a rauc**, **araucq**, **erauc**, **e raoc**, **a-roc**, **é raucg**, **e rauk**, **arauk**, h.a. Ret ivez gouzout penaos e vez staget ouzh ar raganvioù-gour : **araozon**, **araoc-on-me**, **em raoc**, **a roc din**, h.a.

STER

40

Pezh a anver kompren ster ur ger eo e gwirionez divinout. A-bouez klevout ur ger e mil darvoud ar vuhez e teuomp da zivinout an darempred a zo etre ar ger-se hag an dra aroueziet gantañ. Gerioù ar yezh skrivet a vez komprenet, pe gentoc'h divinet ganimp en un doare heñvel : a-bouez lenn ur ger e mil frazenn, pep frazenn o kemmañ mui-pe-vui ar patrom-ster engehentet en hor spered. Alies avat, n' hon eus ket tro da lenn mil frazenn : ne gavomp ar ger nemet en ugent, e dek, a-wechoù en ur frazenn hepken. Ur frazenn a c'hell bezañ a-walc'h da reiñ dimp ur ster resis. Peurliesañ n' eo ket, hag e tivinomp a-dreuz.

Bez' ez eus, dreist-holl e brezhoneg-krenn, ur c'halz a c'herioù a zo tost dic'hallus gouzout peseurt ster lakaat warno. Gerioù rouez, evel **stlenn**, da skouer : « **bresel stlenn pep glenn so ennhy** ». Al lenner a zivino, sur-mat, evel ma ra Ernault, ez eo un anv-gwan o talvezout kement ha « spontus, garv ». Hogen penaos gouzout ? Gerioù hag a zeu alies n' int ket atav aesoc'h da gompren. Da gaout skouerioù; n' eus nemet kemer ar rummad gerioù-didoullañ, strewet dre ar barzhonegoù kozh da ober klotennoù-diabarzh : **acc**, **dien**, **baut**, h.a., (Hep kontañ kudennoù a vefe re hir klask o diskoulmañ : daoust hag e vez sklaer atav ster ar ger e spered ar skrivagner ? Daoust ha ne vez ket treuzimplijet gantañ, hep gouzout dezhañ pe a-ratozh-kaer ? Daoust ha n' eo ket bet kemmet pe zistreset ger pe frazenn ar skrivagner gant un eilskriver bennak ?)

Keñveriañ ar ger ouzh gerioù kar dezhañ er yezhoù keltiek all, e latin, pe e galleg, a ro skoazell a-wechoù, hag a-wechoù ne ra ket. Ar gerioù amprestet digant ar galleg, a seblant bezañ aes da gompren, a zo e gwirionez diaes-kenañ, dreistholl p' o c'haver e skridoù kozh.

Un dra anavezet-mat : ur ger en devez alies meur a ster. Da gomz spisoc'h : ni eo a gav e tleomp ober kevrennoù ha kombodoù, rannañ an dachennad-ster e parkoù bihan pe vras. Diouzh ar peder frazenn-mañ, 1) pa zegouezhjont en ti, 2) ne zegouezho droug ebet, 3) ar madoù a zegouezh dezhe a-berzh o zud, 4) d'ar re m'hoc'h eus labouret evite e tegouezh ho paeañ, e troc'han pevar fark e tachennad-ster ar verb **degouezhout** : 1) dont (en ul lec'h) , 2) c'hoarvezout, 3) bezañ akuizitet dre herezh pe reolenn, 4) dereout. Anat eo n' eus ket a harzoù strizh etre ar pevar fark, nemet ar re lakaet ganin.

Un dra anavezet-mat ivez : ur ger a gemm ster a-hed ar c'hantvedoù. En hon deizioù ne vez implijet **aerouant** hogozik nemet da envel ul loen euzhus a faltazi. O studiañ istor ar ger e weler ne dle ket bezañ ar ster kentañ. E brezhoneg-krenn e talv **azrouant** kement hag « enebour » : **an Kaer hont... leun oz ezrevent**. (Ar ger dre an orin a zo marteze kar-pell da adversour.) Neuze e talv ivez kement ha « diaoul », da lavarout eo an « enebour bras » : **mirit hon enéou ouch an drouc azroüant**. Ne seblant ket ar ster bremañ bezañ koshoc'h eget ar 17-vet pe an 18-vet kantved : « **al leon, an dragon pe an aerouant** » ; « **serpanted violant, grifoù an arrouant** ». (N' eo ket diarvar koulskoude. Re skort aspadennoù ar brezhoneg-krenn da c'houzout.)

41

Ouzhpenn se e kemm ar ster hervez ar rannyezhoù. Skouer **blaz** a zeu diouzhtu d' ar spered. E Bro-Wened eo **blaz**, pe gentoc'h **vlaz** marteze, « c'hwez » pe « flaer ». Safar, e rannyezhoù 'zo hag er yezh lennegel peurliesañ, a zo « trouz bras ». E kornioù 'zo eus Kernev e seblant bezañ kentoc'h « kaoz, lavar ». A-wechoù e kaver roud eus an diforc'h-ster e brezhoneg-krenn : **a sante... quen mat blas ; soezet**

omp... dre-n saffar ouz eux lavaret ; goude ma hol saffar na muy ne lavaraf.

Ar Geriadur istorel a dle skeudennañ kemmadennoù sterioù pep ger hervez an amzer hag al lec'h. Skouerioù a dle bezañ dastumet eta, ha renket. Ur skouer, da lavarout ur frazenn, pe darn eus ur frazenn, a vo mat ma tarzh spis ar ster diouti. Un dra diaes, hogos dic'hallus zoken a-wechoù, hogen un dra a ranker klask atav.

IMPLIJ

Etre ar Geriadur hag ar Yezhadur emañ ar pezh a anvan implij. En-dro da bep ger ez eus ur goskoriad reolennoù-implij re danav da vezañ paket e roued ledan ar Yezhadur. Ha c'hoazh, « reolennoù » n' int ket marteze. « Boazioù » int kentoc'h. Da skouer, an araogenn a glot ouzh ur ger. Ar frazennoù dastumet ganin a ziskouez ez « **anzaver un dra ouzh unan bennak** » ; ur skrivagner hepken, en hon amzer, a « **anzav un dra da unan bennak** ». Eus mare ar brezhoneg-krenn betek hiziv, un den en devez « **aon rak un dra** ». Koulskoude, adal an 18-vet pe an 19-vet kantved ez eus ivez « **aon dirak un den** », hag e Treger hag e Gwened « **aon a un den** ». Diouzh ar skouerioù dastumet betek-hen e weler e kav un den traezh, bili pe vezhin « **en aod** », pa 'z da bourmen « **war an aod** ». « C'hoant da ober un dra bennak » hoc'h eus kentoc'h eget « c'hoant ober un dra bennak » ; koulskoude, « c'hoant kousket » hoc'h eus a-wechoù, ha morse « c'hoant da gousket ».

LAVARENNOU

42

Un doare implij all eo hini ar skeudennoù-lavar. Ur ger, ouzhpenn kaout sterioù disheñvel, a vez graet gantañ e lavarennoù. Ur vazh a c'hell bezañ ur vazh da skeiñ pe da vale, bazh ur foet, bazh ur skeul, h.a. Ur wech dastumet skouerioù o tiskouez ar sterioù-se, e ranker c'hoazh dastum skouerioù eus skeudennoù-lavar evel « cheñch penn d' ar vazh », « c'hoari ar vazh », « kaout fest ar vazh », h.a. Ur wech dastumet skouerioù o tiskouez sterioù lagad, fri, barv ha dremm, e ranker diskouez e talv **dirak e zaoulagad, dirak e fri, dirak e varv, dirak e zremm** kement ha « **dirazañ** », hag un dra bennak ouzhpenn koulskoude. Ur wech dastumet skouerioù eus sterioù ar verb astenn, evel « astenn un doubier, astenn an izili, astenn buhez ur c'hlañvour, astenn arc'hant », h.a., e chom c'hoazh da venegiñ skeudennoù-lavar evel astenn an dorn « skoazellañ » pe « goulenn skoazell », astenn ar c'har « difraeañ », h.a.

DAREMPRED ETRE GERIOU

Ur gudenn c'hoazh eo an darempred etre gerioù 'zo. Div skouer a zibabin. Kemeromp gerioù o verkañ an danvez, evel bara, amanenn. Lavaret e vez un tamm bara, un tamm amanenn. En tu-hont da se, avat, e kavomp anvioù resis disheñvel : un dorzh vara, ur choanenn vara, ur vouchenn vara, ur guchenn vara, ur jelkenn vara, un dachenn vara, un delienn vara, h.a., ur pilerad amanenn, ur bejenn amanenn, ur bouloudenn amanenn, h.a. Er c'hontrol, mat e vefe gouzout peseurt anvioù danvez a glot ouzh felpenn, skejenn, drailhenn, darn, skolpenn, pezh, pezhriad, h.a., ouzh banne, bannac'h, takenn, tapenn, tomm, berad, strilhenn, h.a.

An eil skouer eo ar gerioù implijet da greñvaat ster un anv-gwan : **meurbet, bras, kenañ, dreist, tre** (hemañ diwezhañ deuet da vezañ boutin er yezh skrivet en hon amzer hepken) a seblant klotañ ouzh an holl anvioù-gwan, pe dost. Darn a glot alies ivez, hep bezañ ken implijet : **krenn, naet, groñs, eston, estrañch, terrupl, hardizh, ral, direizh, diregl, iskis, marvailh**, h.a. Darn ne glotont nemet ouzh anvioù-gwan 'zo : **stank** ouzh **leun** ha **skuizh** ; **put** ha **pik** ouzh **dall** ha **sall** (ivez yen-put) **tuf, tonn** ha **tont** ouzh **brein** ; **flamm** ouzh **nevez, yaouank** ha **ruz** ; **mik** ouzh **heñvel, marv, mot, sioul, kousket, badaouet, souezhet, foll, mezv**. En tu enep, o kemer an anvgwan e c'heller dastum ar gerioù-kreñvaat a glot outañ : **marv-yen, marv-mik, marv-mik-yen** ; **kozh-kabac'h, kozh-Noe, kozh-rejis, kozh-louet, kozh-douar** ; **paour-ran, paour-razh, paour-glez, paour-du, paour-Lazar, paour-Job** ; **noazh-ran, noazh-pourc'h, noazh-pilh, noazh-pilh-pourc'h, noazh-glan, noazh-glez, noazh-bev, noazh-putiran, noazh-blouc'h, noazh-pilh-dibitilh, noazh-pidiboulc'h, noazh-pur, noazh-ganet**. Amañ ivez, e kemm ar boaz diouzh an amzer hag al lec'h. Ne lavaromp mui **pell-kreñv, leun-kreñv**, hervez boaz ar brezhoneg-krenn ; hag a-boan ma skrivfemp c'hoazh **foll-kreñv** pe **joaus-kreñv**. Ne vezomp mui **salv-pesk-fresk**,

daoust ma c'hellomp c'hoazh bezañ **yac'h-pesk**. N' eus, a gredan, nemet e Bro-Wened ma vezer **foll-brein** pe **sot a-yoc'h**, e Bro-Dreger ma vezer **klañv-moñs**, e Bro-Leon ma chomer **sioul-sibouron** pe **sioul-riboulenn**.

43

UR MELEZOUR EUS AR YEZH

Ur Geriadur istorel a dle bezañ ur melezour eus ar yezh. Ne deo ket graet da verkañ pezh a zo « reizh ». Ur furm pe ur stumm, ur ster pe un implij a zo bet. Marteze n' en deus ket bet asant Pelletier, Gonideg pe Vallee. Ne vern. Marteze n' en devo ket asant chaseourien « euzhadennou » hon amzer. Bernout a ra nebeutoc'h c'hoazh.

Amañ emañ an diforc'h bras etre ar Geriadur istorel ha geriadurioù graet da heñchañ. E broioù 'zo, Bro-C'hall da skouer, eo bet ar c'hiz dastum er geriadurioù pezh a zo « ar boaz », da lavarout eo boaz ar skrivagnerien wellañ, - pe ar re brudet da vezañ ar re wellañ. Ar skrivagnerien-se, anat eo, ne implijont ket ar gerioù evel an dud all ; hag ouzhpenn, techet e vez an dastumerien da blaouiañ war gement ger pe implij rouez hag iskis a c'hellont dizoleiñ. O « Geriadur ar boaz » a zo kentoc'h eta ur « Geriadur an divoaz ».

Ar Geriadur istorel a ra gant skridoù a-bep seurt. Ne ra fae war skrid ebet. Da lakaat a-wel emzispieg ar brezhoneg e rank an daolenn bezañ hollek. Ar barzh gouiziek a savas « Buhez Mab-Den », ar micherour pe ar c'houer dizesk a adskrivas « Buhez Nabukodonozor », ar beleg gredus a droas e « brezhoneg beleg » an « Introduction dar Vuhez devot », ar reizher-yezh a savas « Ar Feiz hag ar Vro », ar c'hemener a « gompozas ur chañson », aozer ul levr « Mentoniezhañ », o deus holl kenlabouret da stummañ ar yezh, hag e pep oberenn ezeus tra pe dra da bennaouiñ. An dornskridoù o virout roudoù an henvrezhoneg a zo talvoudus. An niverenn diwezhañ eus ur gazetennig liesskrivet a zo ken talvoudus all. **Niguid, nouuid, neuueth, neuued, neugued, negueth, neuuez, neuvez, nehué, nehui, neve, newe, nevez**, ha **cuth, coth, coz, coh, couh, koz, koh, kouh, kozh** a zo koulz da zastumer ur Geriadur istorel. Pezh a zo a bouez eo merkañ aketus e pe skrid e kaver pep stumm. Pezh a zo difennet eo ijinañ stummoù na gaver e skrid ebet.

44

Arabat ivez krediñ e talv ur ger dibaot gwelloc'h eget ur ger implijet kant gwech bemdez. Ar c'hontrol a vefe gwir : seul implijetoc'h ar ger, seul retoc'h reiñ keloù anezhañ. Mat eo kutuilh ar gerioù dibaot p' o c'haver, - zoken ur ger ken dibaot ma n' anavezer mui e ster, - zoken ur ger graet gantañ ur wech hepken gant ur skrivagner hepken. Hogen spletusoc'h c'hoazh eo diskouez buhez ur ger boutin. A dra sur eo ret notenniñ ur ger evel **denezet**, a dalv marteze kement ha « **nezet pe jahinet gant ar boan** », ha na gaver, a gredan, nemet e **Melezour ar Marv**. Hogen ken ret all, ha retoc'h zoken, eo notenniñ evezhiek sterioù niverus ar ger **den** e frazennoù boutin e-giz « Jezuz, Mab Doue ha den », « c'hwi hoc'h eus kollet ho ten, ha me a goll va gwreg », « ur c'habiten a rank kaout kalon, bezañ den », « sellit penaos e tiskaran va den », « va den, en em alese », « diwall a ober gaou ouzh den », h.a.

DOARE-SKRIVAÑ

Adskrivañ ar frazennoù dres evel m' o c'haver en un dornskrid pe en ur mouladur eus ur skrid graet e-pad buhez ar skrivagner, pe nebeut goude, - mar geller kavout unan, - a zo un doare gouiziegezhel-rik da ober.

Amañ avat e sav un diaester : ar frazennoù a rank bezañ komprenet hep riskl a fiziañ gant ar re a implijo ar Geriadur.

Ar brezhoneg-krenn a oa ur yezh lennegel hag hogozik peurunvan. Adskrivañ eta ar skridoù brezhoneg-krenn a c'heller hep luziañ neb en deus un anaoudegezh bennak eus ar yezh-se. Un notenn da spisaat ar ster a vo lakaet etre klochedoù ur wech an amzer diouzh ret.

Pa zeuer, avat, d' ar brezhoneg-bremañ, ar brezhoneg skrivet adalek ar 17-vet kantved, e kaver kement a zoareoù-skrivañ disheñvel ma 'z eo tost dic'hallus d' an neb n' en deus ket studiet ar skrid-mañ pe ar skrid-hont kompren difazi.

Ur skouer hen diskouezo anat. A-douez ar frazennoù dibabet da skeudennañ ar ger **bennak** e tennan ar re-mañ : 1) evit ma vevo... nep-pioubennâc en debro, 2) a pif bennac en tremeno, 3) piüe benac a offañçai unn deine coh, 4) anepiou bennag, 5) un deueh bras merbet, pier benac vezou, 6) pénauss-bénag e-ma bihanig er vad a chairérr ag en Tiatre.

Amañ ez eus standilhonoù eus rannyezhoù Leon, Gouelou ha Gwened. Gwellañ a vefe d' ober e vefe lakaat da heul ar skouerioù ar frazennoù en doare-skrivañ bremañ : 1) evit ma vevo neb piv bennak hen debro, 2) ha piv bennak hen tremeno, 3) piv bennak a ofañse un den kozh, 4) an neb piv bennak, 5) un devezh bras-meurbet, pe eur bennak vezo, 6) penaos bennak emañ bihanig ar vad a serrer ag an Teatr.

45

An dra-se, siwazh, ne c'hellfe bezañ graet nemet en un embannadur mikrofilmet, da skouer, pe un embannadur war vikrokartennoù. Ret eo sellout dre ziv wech a-raok daougementiñ pe dost ment ul labour moulet pe liesskrivet en devo, zoken krennet evel a zisklerian pelloc'h, war-dro 5.000 a bajennoù marteze, ha sur a-walc'h kalz muioc'h.

Goude hir brederiañ, setu amañ an diskoulm a zo bet kavet d' ar gudenn. Ar frazennoù a vo moulet evel-hen :

IN. p. 140 evit ma vevo... neb piv-bennâc hen debro ;EN. 2119 ha piv bennac hen tremeno ; HS-p.147 piv benac a ofañse un den kozh ; SAG: p. 120 an neb piv bennag ; NG-548 un devezh bras-meurbet, pe eur benac vezo ; BTRC.7 p. 324 penaos bénag emañ bihanig ar vad a serrer ag an Teatr.

Ar ger studiet hepken a vez lakaet dres evel m' emañ er skrid. Ar frazenn, avat, a vez lakaet en doare-skrivañ bremañ. Atav e vez notennet ar skrid, ar bajenn pe ar gevrenn pe ar werzenn ma kaver ar ger.

Si an doare-ober-se eo distrujañ kempouez ar frazenn. Ur si bihan eo, koulskoude, e-skoaz ar gounid : lakaat ar frazenn sklaer dirak al lenner, ha distag-mat ar ger studiet. Hag an neb piv bennak a fello dezhañ pleustriñ war ar rannyezh-mañ-rannyezh d' ar mare-mañ-mare a gavo atav aesoc'h studiañ ur skrid rag-eeun eget mont da besketa skouerioù en ur geriadur.

BEVENNOU

Etre ar pezh a vefe mat ober, am eus displeget uheloc'h, hag ar pezh a c'hell un den ober ez eus un hir a hent. Hag un dra fur, evit dont a-benn, eo merkañ bevennoù strizh d' an enklask.

E kentañ embannadur ar Geriadur istorel, - ha n' eo, evel am eus lavaret, nemet un Dafar Geriadur, - ez eus gerioù na vint ket roet :

1. An henvrezhoneg a zo lezet a-gostez.
2. Yezh derou ar brezhoneg-krenn (betek war-dro ar 14-vet kantved) a zo lezet a-gostez.
3. Ar geriadurioù, ar yezhadurioù, al levrioù-deskiñ, h.a., a zo lezet a-gostez, nemet a-wechoù ar « Catholicon », dreist-holl pa ro gerioù talvoudus na gaver ket e skridoù brezhonekkrenn.
4. Un darn vat eus ar gerioù amprestet diouzh ar galleg a zo lezet a-gostez.

46

An henvrezhoneg a zo bet studiet mat a-walc'h gant Loth, ha daoust d' un nebeut fazioù en deus graet, e c'heller implij e levrioù hag e bennadoù-skrid, klokaet gant pennadoù all embannet gant ar « Zeitschrift für celtische Philologie », h.a.

Gerioù yezh derou ar brezhoneg-krenn a zo bet dastumet, dreist-holl er « Chrestomathie », hogen kalz a chom da ober amañ. Stag-stag eo studi ar yezh-se ouzh studi an anvioù-lec'hioù hag an anvioù-tud, ur studi a-ziforc'h ha n' eo ket bet graet c'hoazh a-zevri.

Ar geriadurioù, ar yezhadurioù, al levrioù-deskiñ, daoust d' ar gerioù ha d' ar frazennoù ijinat a-ratozh a gaver a-builh enno, a zo un andon brizius. N' int bet lezet a-gostez nemet dre ziouer a amzer, ha dre ma kav din eo ar skridoù un

andon briziusoc'h c'hoazh.

Ar gerioù amprestet diouzh ar galleg, zoken gerioù ar « brezhoneg beleg », a zo talvoudus-bras alies e-keñver studi ar soniadouriezh, studi ar sevenadur, studi ar galleg hag ar rannyezhoù gallek. Ar re dalvoudusañ anezho a zo bet dastumet ganin. Ar re all ne vint ket er Geriadur, atav dre ziuver a lec'h hag a amzer.

DIBAB AR SKRIDOU

Evel am eus lavaret, kalz eus skouerioù ar Geriadur istorel a zo bet dastumet evit labourioù a soniadouriezh, a yezhadurezh pe a steroniezh savet ganin er bloavezhioù tremen, hag hogos holl diembann. An darn vuiañ eus al labourioù-se a zo diwar-benn ar brezhoneg-krenn, pe diwar-benn rannyezhoù Gwened, Treger ha Leon er 17-vet hag en 18-vet kantved. Setu perak e vo stank niver ar skouerioù eus ar yezh etre ar 15-vet hag an 18-vet kantved e-skoaz niver ar skouerioù eus ar yezh en 19-vet hag en 20-vet kantved.

Klasket em eus daoust da se ingalañ ar skouerioù etre an oadvezhioù hag ar rannyezhoù. Ha setu amañ penaos em eus graet :

1. Brezhoneg-krenn : ar skridoù deuet betek ennomp n' int ket niverus-tre, hag implijet em eus anezho holl, - da vihanañ ar re embannet.

2. Derou ar brezhoneg-bremañ, 17-18-vet kantved : ar skridoù amañ a zo stank, hag evit ar wech kentañ e kaver skouerioù eus rannyezhoù Leon, Treger ha Gwened. Ret eo bet dibab. Evit Leon ez eo bet burutellet dreist-holl oberoù Charlez Bris, evit Treger darn eus ar misterioù, dreist-holl « Buhez Loeiz Eunius », « Ar Varn Diwezhañ », « Buhez Jenovefa », evit Gwened an « Noueloù » eus ar 17-vet kantved (bremañ lakaet dindan ar wask gant « Skol ar Studioù Keltiek » Dulenn) hag un nebeut levrioù moulet e ti Galles war-dro dibenn an 18-vet kantved.

47

3. Brezhoneg an 19-vet kantved, levezonet pe nann gant Gonideg hag e ziskibien : oberoù Troude, Milin ha Inisan a zo bet dibabet dreist-holl evit rannyezh Leon, dastumadennoù F. An Uhel dreist-holl evit rannyezh Treger, barzhoniezh dreist-holl evit rannyezh Wened.

4. Brezhoneg an 20-vet kantved : e-kichen skridoù er peder rannyezh, ez eo bet dibabet ar « Sketla » hag an « Notennoù diwar-benn ar Gelted Kozh » evel skouerioù eus furmidigezh ar yezh lennegel.

Kentoc'h eget balafenniñ eus ur skrid d' egile, o kutuilh skouer amañ, skouer ahont, ez eus bet kavet fur studiañ ervat un nebeut skridoù, o notenniñ hogos kement ger a gaver e pep unan.

DOARE-EMBANN

Ne vern penaos e vo embannet **Dafar Geriadur Istorel ar Brezhoneg**, e vo koustus-bras d' an embannerien koulz ha d' ar brenerien. Tremenet eo an amzer ma c'helle Ernault lakaat moulañ e c'heriadurioù brezhoneg-krenn hep re a vizoù. N' eus ket da gontañ en amzer-mañ kennebeut war skoazell kevredigezhioù gouiziek Breizh. War ur skoazell a-berzh-Stad ez eus da gontañ nebeutoc'h c'hoazh. Ret e vo ober gant an arc'hant kaset gant rakprenerien, - marteze hanter-kant rakprener, - ha gant un nebeut profoù. Ar gudenn spontus a zo dirak an den a fell dezhañ embann ur seurt labour a glevis displeget mat gant ur c'helenner a Vro-Skos en deiz all : « A-raok reiñ arc'hant e c'houlenner diganeoc'h diskouez ar pezh a c'hellit ober, hag evit diskouez ar pezh a c'hellit ober e rankit kaout an arc'hant ».

Tu a vo kavet koulskoude, spi am eus, da voulañ pe da liesskrivañ an **Dafar**. Ezhomm hon eus da gaout labourioù a ouiziegezh diazezet war studi dielloù ar yezh. Re a sorc'hennoù savet diwar faltazi a zo bet kemeret gant Bretoned hegreidik evit yezhoniezh er bloavezhioù-mañ. Ur sell ouzh ar Geriadur Istorel a vo a-walc'h evit diskar ar sorc'hennoù-se. Diskouez a ra an darvoudoù evel m' emaint, pa c'heller o diskouez, - ha pa ne c'heller ket, ne ziskouez netra, ha ne faltazi netra. Lakaat a ra dirak ar studier danvez dastumet ha renket gant kalz a labour hag a boan, an

hent n'eus nemetañ d' ar yezhour en deus c'hoant da zizoleiñ un eskenn a wirionez.

AR GOUEZELEG

NOTENNOU DIWAR-BENN AR GOUEZELEG HAG AR YEZHOU ALL E BRO-SKOS

gant Per DENEZ

(Dibenn)

10. - AR GOUEZELEG EN ESTRENVRO.

Skosiz e-maez o bro

Da veizañ mat pegen niverus eo an harhuidi skosat, n' eus nemet teurel ur sell war ar **Scots Year Book** ha kontañ niver ar c'hevredadoù skosat a gaver en estrenvro. Setu amañ un nebeut sifroù evit 1949 : London, 100 kevredad ; Bro-Saoz, hep London, 165 ; Enez Vanav, 1 ; Kembre hag Iwerzhon, 6 pep hini ; Inizi Mor Vreizh, . 1 ; Douar-Bras Europa, 5 ; Aostralia, 301 ; Gwinea Nevez, 3 ; Zeland Nevez, 88 ; Kanada, 112 ; Kolumbia Vreizhveurek, 38 USA, 118 ; Mec'hsiko, 1 ; Arc'hantina, 4 ; Brazil, 2 ; Gwiana Vreizhveurek, 1 ; Inizi Indezat ar C'hornog, 5 ; Chile, Peru, Urugwe, Inizi Filipinas, Java, Borneo, Palestina, 1 pep hini ; Irak hag Iran, 2 pep hini ; Indez, 7 ; Selan, 1 ; Malezia, 11 ; Reter Pellañ, 7 ; Su-Afrika, 80 - da lavarout eo tost da 1.000 kevredad en holl. Gwelout a reomp diouzhtu avat e voe divrodeg Skosiz - evel hini Euskariz, Iwerzhoniz, pe Vreizhiz - un divrodeg tud trec'het, o vont hep arc'hant, hep renerien, hep raktres ebet, da vevañ e broioù kenyezh gant ar vro mac'homer. En abeg da se eo n' eus hiziv an deiz, daoust d' ar milionoù Kelted a zo e vevañ er-maez eus o broioù - muioc'h eget n' eus o vevañ er broioù o-unan - trevadenn geltiek ebet, nemet e vefe trevadenoù bihan ar Rio Chubut ha Cape Breton.

Kregiñ a reas Skosiz da zivroañ goude drouziwezh 1745. D' ar C'hanada ez ejont, pe e voent kaset, dreist-holl : da enezenn Briñs Edouarz e-tro 1769, da Biktou e Nova-Skotia e-tro 1773, da enezenn Cape Breton etre 1802 ha 1843. E-tro 1800 e voe krouet en Ontario un Glengarry nevez : ar **Gleanna garadh** skosat, hag a oa ur 6.000 den bennak o vevañ ennañ e 1745, ne chome mui ennañ e 1883 nemet un nebeut tiegezhioù. Rujumantoù a-bezh ivez, echu ganto o amzer-servij, a oa nac'het o degas en-dro d' o bro hag a oa kaset da vevañ en trevadenoù saoz : e 1784 e teu an eil batalion eus ar Royal Highland Emigrant Regiment da Nova-Skotia hag e 1786 ez a ar c'hentañ batalion da gichen Kebeg. Peurliesañ e veze dilezet a-grenn an divroidi gant o ministred, un nebeut pastored hepken a chomas feal d' o farrezioniz heskinet ha da unan anezho, Norman MacLeod, e tleer an drevadennig ouezelek nemeti a zo er bed : trevadenn Cape Breton.

49

Norman MacLeod : Nova-Skotia ha Waipu

Ganet e voe Norman MacLeod en Asainn, e kontelezh Cataibh, d' ar 17 a viz Gwengolo 1780. Ober a reas studioù doueoniezh e Dun Eidin met en abeg d' un tabut etrezañ hag e renerien ne voe ket anvet da bastor hag e tistroas d' e vro da labourat evel martolod ha gounideg : ret eo lavarout e c'hounezas brud ivez evel prezegenner dieub. Un ugent vloaz bennak en doa pa voe kroget d' ober skarzhadurioù e Cataibh : skoazellañ a reas e genvroiz paour gwellañ ma c'hellas hag, en diwezh, o kemer penn ur bagad divroerien, ez eas kuit d' ar C'hanada e 1817. E Biktou e tilestras, hervez ar boaz, met an traoù o vont fall eno, e savas, gant skoazell e vignoned, ur vag 200 tonell, An Arc'h, hag e lakaas da ouel war-du an Ohio. Ur barr-amzer a gasas anezhañ da repuiñ e bae Cape Breton ha, kavet mat ar vro gantañ, e tibabas chom eno : un nebeut bloavezhioù, diwezhatoc'h (1825) e oa kreñv ha yac'h an drevadenn. Mont a reas Norman neuze da dremen un nebeut mizioù e New-York, kensakret e voe pastor eno, hag e-pad ugent bloavezh e renas war Skosiz Cape Breton evel un ozhac'h a wechall war e diegezh.

Siwazh evit dazont ar gouezeleg en drevadenn, e 1847 e tegemeras Norman digant e vab Donald, hag en em renas en un doare iskis en holl afer-se, ul lizher o tisplegañ e oa korn-bro Adelaide, en Aostralia, ur wir baradoz an douar. E 1848

e teue ul lizher all, oc'h aspediñ Norman da zont, ha diwar-se e tivizas hemañ, oadet a 68 vloaz, loc'hañ kuit. Savet e voe daou lestr 300 tonnell hag e miz Here 1851 e tileze 134 den an enezenn war vourzh ar vag Marc'harid. E miz Ebrel 1852 ez errue an divroerien en Adelaide - un douar kras ha paour e-lec'h na oa pradenn ebet, nag ivez Donald ebet da vezañ gwelet. Goude mizvezhioù a boanioù kriz e c'hellas Norman kavout un tamm douar (47.600 akrad) e Zeland-Nevez an Hanternoz, en ul lec'h anvet Waipu, ur c'hant miltir bennak en hanternoz da Auckland, hag e miz Genver 1853, gwerzhet ar vag Marc'harid da brenañ boued, had, dilhad ha binvioù, ar re a chome eus ar paour keizh tud en em choukas e-barzh kal an Highland Lass, a oa erru etretant en Adelaide gant 88 den. Divroerien all a zeuas c'hoazh eus ar C'hanada, war bagou savet ganto o-unan : 176 den er Gertrude e miz Kerzu 1856 ; 66 er Spray, e Mezheven 1857 ; 129 er Breadalbane e miz Mae 1858 ; ha, da echuiñ, 191 e miz Mae 1860 en Ellen Lewis. Pa varvas Norman MacLeod, d' ar 14 a viz Meurzh 1866, d' an oad a 86 vloaz, e oa e Waipu un drevadenn gaer.

50

E-keñver danvez e troas an traoù da vat-tre gant an divroerien. Ma soñjer e mad ar gouezeleg, avat, e ranker anzav e reas Norman MacLeod ur mell fazi o vont d' ar Zeland-Nevez : re bell e oa an drevadenn-se eus Alba da zegemer kalz tud eus ar vro gozh, ha dre-se e oa tonket drevadenn Waipu da vezañ lonket buan gant ar saozneg. Diouzh an tu all, e voe gwall-zinerzhet drevadenn Cape Breton, hag he dije gallet bezañ evel ur Skos nevez, dieub ha gouezeleg. Sed a ziskouez adarre pegen nebeut chalet e oa gant ar gouezeleg hag ar vroadelouriezh ar re wellañ zoken e-touez Skosiz.

Zeland-Nevez hag Aostralia

Komzet e vez c'hoazh ar gouezeleg e korn-bro Waipu, daoust ma 'z eo bremañ digomprenus ar yezh da galz eus ar re yaouank. N' heller ket lavarout, siwazh, pet gouezeleger a zo er Zeland-Nevez dre m' en deus ar gouarnamant nac'het derc'hel kont eus ar gouezeleg en niveradegoù. Bezet a vezo, hepdale e vo marv-mik ar yezh eno. Ur skourr eus **an Comunn Gaidhealach** a zo e Wellington, kenlabourat a ra gant Kembreiz ar vro. Ur c'hevredad gouezeleg a zo e Dunedin ivez. An Ao. Peter Fraser, rener Zeland-Nevez n' eus ket pell c'hoazh, a oa gouezeleger.

En Aostralia ivez n' eo ket bet niveret ar gouezelegerien. Koulskoude n' eo ket marv c'hoazh ar yezh en un nebeut kêriadenoù. Kentelioù gouezeleg a vez graet e Melbourne gant **An Comunn** ; e Victoria ez eus un Emglev Gouezeleg ; e New South Wales ez eus un Highland Society a ra kentelioù gouezeleg. Ur gazetenn a zo embannet : The Scottish Australian. E-tro 1857, war a lavarar, e veze embannet ur gazetenn viziek e gouezeleg : **An Teachdaire Gaidhelach**.

Su-Afrika

N' eus bet kavet prouenn ebet e vije komzet ar yezh er vro-se.

U.S.A.

51

Abaoe un nebeut bloavezhioù e vez dedennet kalz Skosiz amerikat gant ar gouezeleg. Meneg hon eus graet dija eus an **Iona Society**, krouet e 1925 evit « diwall, gwareziñ ha kennerzhañ sevenadur ar Gelted, dreist-holl sevenadur Gouezelegerien Bro-Skos » ha da sevel en Uheldirioù « ur greizenn a sevenadur gouezeleg a zeufe da vezañ un ensavadur a studiou uhel ». Ne voe ket, siwazh, savet ar Skol-Veur a oa bet komz anezhi hogen diwezhatoc'h e sikouras ar gevredigezh krouiñ ur Skol Uhel gouezeleg en enezenn Cape Breton.

Ur greizenn all a labour eo « **Sgoil Ghaidhlig** » St. Francisco, savet e 1942 gant Seumas MacGaraidh : bep bloaz, abaoe miz Mae 1943, e ra ar **Sgoil** ur Mod hollouezeleg, a voe kemeret perzh ennañ e 1948 gant 159 kenstriver. Dindan levezon Seumas MacGaraidh e vez graet ur Mod gouezeleg e Los Angeles abaoe miz Du 1948.

E 1926 e oa 8 Skol-Veur en U.S.A. o reiñ kentelioù gouezeleg, hag e 1937 e oa degemeret ar gouezeleg evel danvez e klasoù an New York Workers' Progress Administration.

Kanada

Er C'hanada hepken, en ur c'hornig eus ar C'hanada, en deus ar gouezeleg ur chañs bennak da badout.

An daou vatalion a reas o annez er C'hanada e 1784 ha 1786 a oa deut o fastored ganto : unan eus ar re-se a oa an himnour brudet **Seumas MacGhriogair**, hag a labouras kalz da virout bev ar yezh kozh e-touez an divroidi. Un den anvet **A. Fraser** a skrive kement-mañ en **Toronto Mail** war-dro 1860 : « hervez ar pezh a zo bet jedet nevez zo gant sekretourien ar presbutelezhioù, ez eus ouzhpenn ur c'hard milion gouezelegerien er C'hanada ; ...250 kêriadenn o deus beleien pe bastored gouezeleger ». Hervez un **Dr. Mason** hag a reas ur brezegenn e **Dun Eidin** e 1873 war ar gudenn-se e oa kalzik a ouezelegerien neuze e Kornog-Pellañ ar C'hanada ; lavarout a rae ivez, o komz diwar-benn an U.S.A., e veze graet servijoù gouezelek e kalz ilizoù eus Bro-Garolina (33), koulz hag e Chikago hag er rannvro, en-dro d' al lennoù Erie hag Ontario. E Nova-Skotia hag e New-Brunswick eo avat e oa ar ouezelegerien ar stankañ : an **Dr. Mason**, oc'h ober ur brezegenn bemdez a-hed e veaj, n' en doe morse nebeutoc'h eget 400 den o selaou anezhañ, hag a-wechoù en doe ouzhpenn 1.000 ; e Cape Breton e oa 1.200 den ouzh e selaou bemdez. Ret eo, evelkent, gortoz 1931 a-barzh kaout, dre un niveradeg-stad, niver resis ar ouezelegerien er C'hanada : war ar 1.346.350 a Skosiz o chom er vro (34) e oa 29.656 (oadet a 10 vloaz pe ouzhpenn) hag a oa gouezelegerien (35) ; hag eus ar re-se e oa 24.000 o vevañ e Nova-Skotia, an darn vrasañ anezho en enezenn Cape Breton. Hervez ur pennad embannet gant Mac Talla e 1902 ha meneget gant John Lorne Campbell en *American Speech* e 1936 e oa e derou an ugentvet kantved 39 iliz pe chapel presbiterat ha 37 iliz katolik en enezenn Cape Breton : an holl ilizoù ha chapelioù presbiterat, war-bouez c'hwec'h, a oa gouezelek, hag an holl re gatolik, war-bouez c'hwec'h ivez. War an 98 kuzulier kontelezha oa en enezenn e oa 58 gouezeleger.

52

Levrioù ha kelaouennoù

An daou skrid gouezelek kentañ embannet en Amerika a seblant bezañ daou sermon gant ur **Rev. D. Crawford**, moulet e 1871 e **Fayetteville**, e Karolina an Hanternoz. Etre ar bloaz-se ha 1900 ez eus bet embannet, pe adembannet, tost da 50 levr, traoù a zevosion dreist-holl : lod anezho, evel an **Athghearradh an Teagaisg Chriodsail**, hag a voe moulet c'hwec'h gwech etre 1852 ha 1898, a reas berzh a-walc'h. Bibl ebet ne voe moulet : aesoc'h e oa kaout re Europa. E-mesk ar skridoù gouezelek gwir-amerikat e c'heller menegiñ al **Laoidhean Spioradail** gant **Mairi Fhorbeis**, gant **Domhnull Hendri**, gant **Donull Donullach**, gant **Ewen MacLaomuinn**, gant **Seumas MacGhriogair** ; ivez **Orain Iain Mhorastain** ha, dreist-holl, oberennoù **A. MacLean Sinclair** ha **Jonathan MacKinnon** e dibenn an naontekvet hag e derou an ugentvet kantved.

Kelaouennoù a zo bet ivez : e 1840 ha 1841 **Cuairtear na Cilte**, miziek, embannet e **Kingston, Ontario** ; e 1851 **An Cuairtear Og Gaidhealach**, 13 niverenn, moulet en **Antigonish** ; e 1852 **The Casket**, en div yezh, moulet div wech ar sizhun betek un nebeut bloavezhioù zo ; eus 1925 da 1938 **Teachdaire nan Gaidheal**, moulet bep miz e Sydney, Cape Breton ; e 1933, an **Teachdaire** adarre, en div yezh, berr-tre e vuhez ; eus 1925 da 1927 **An Solus luil**, embannet gant ilizoù protestant. Krediñ a ran e vez moulet c'hoazh **Mosgladh**, kelaouenn ar gatoliked, gant ar c'hard eus e bajennoù e gouezeleg. An hini vrudetañ avat eus an holl a zo bet, hag a chomo, kazetenn sizhuniek gouezelegerien Cape Breton : **Mac Talla**.

Ar stourm evit ar gouezeleg e Nova-Skotia

Istor ar stourm evit ar gouezeleg e Nova-Skotia a zo kreizennet en-dro da zaou anv : anvioù **A. MacLean Sinclair** ha **Jonathan G. MacKinnon**. E 1890, en ur vro n' he doa anavezet betek-hen nemet oberennoù relijiel ez embanne ar Reverand **MacLean Sinclair** e **Comhchrinneachadh Ghlinna-Bhaird** (Barzhaz Glenbard), **Charlottetown**, 394 pajenn, ha levrenn gentañ e Varzhaz Gouezelek, ennañ pennadoù eus oberennoù savet etre 1411 ha 1715 ; div levrenn all (1715-1765, 1765-1825) a zeue er-maez e 1893 ha 1896, ha klokaet e oa ar rummad e 1898 ha 1900 gant an div zastumadenn **Na Baird Leathanach** (Barzhed MacLeathan) .

53

Diouzh e du e rae Jonathan MacKinnon ul labour poblekoc'h oc'h embann **Mac**

Talla. Savet e miz Mae 1892 e stourmas ar gelaouenn da zerc'hel bev en enezenn Cape Breton n' eo ket hepken ar yezh, met ivez ar spered broadel ; e 1901 ne oa mui moulet ar gazetenn nemet ur wech bep pemzektez hag e 1904 e voe paouezet d' hec'h embann. E 1928 e save **Jonathan MacKinnon** ur gazetenn all, **Fear na Céilidh**, ha na badas ket pell. Neuze e krogas d' ober troidigezhioù evit e genvroiz : e-giz-se e lakaas e gouezeleg romantoù gant Thomas Hardy, Tolstoi, Henry Van Dyke, ha Stevenson. Hag a-raok mervel e 1944 e savas Skol-Uhel Ouezelek Cape Breton.

Krouet e voe ar Skol-Uhel a-drugarez d' ar profoù dastumet gant ar **Cape Breton Gaelic Foundation** ha gant ar **Iona Society**. Savet war an aod e bae Santez Anna, el lec'h end-eeun ma touaras Norman MacLeod hag e dud, e voe digoret ar skol d' ar studierien e miz Gouhere 1939 gant **Angus Mac Donald**, ar gouezeleger a oa neuze e penn gouarnamant Nova-Skotia : kentelioù a voe graet diwar-benn ar gouezeleg, al lennegezh ouezelek, istor Bro-Skos, ar micherioù skosat, ha 35 skrid-testeni roet da zibenn ar skol. E 1947 ez eus bet prenet 400 akrad-douar muioc'h hag e 1949 savet un ti brasoc'h ha kemeret ur c'helenner e gopr. Ur Mod a vez graet eno bep hañv bremañ : an unnekvat Mod, e 1949, a badas pevar devezh hag a vodas 500 kenstriver ; e 1950 ez eus bet kroget d' ober Modoù rannvro.

Bep an amzer e vez embannet dastumadennoù barzhonegoù savet gant skrivagnerien eus Nova-Skotia (div a zo bet moulet e **Claschu** e 1931 ha 1939). Pennadoù gouezelek a gav ul lec'hig e kazetennoù ar vro (Sydney Record, Steel-Worker and Miner h.a.) ; nevez zo ez eus bet kroget da embann (1950) ur **Canadian-American Gael**. Levrioù da zeskiñ gouezeleg a zo bet moulet (1939, 1949) evit ar c'hlasoù a vez graet en **Antigonish, Port Hood, Baddeck, Santez Anna, Iona, Sydney**, hag e lec'h all. Kement-se avat n' eo ket a-walc'h evit saveteiñ ar yezh : « dazoned ar gouezeleg hag ar sevenadur gouezelek e Cape Breton a zo stag ouzh youlvat pe youl-fall ar gerent hag ar vugale... hag ouzh ar skoazell a vo roet gant renerien an Deskadurezh », ha daoust ma 'z eo bet anavezet ar yezh e 1932 evel un danvez a c'heller dibab en arnodennoù, ne vez ket kenteliet c'hoazh a-zoare e skolioù ar vro. Ret eo lavarout ez eo kudenn ar gouezeleg, amañ evel e pep lec'h all, ur gudenn a vrogarouriezh emskiantek - da lavarout eo ur gudenn a vroadelouriezh.

54

DA GLOZAÑ.

En ur stad diaes-tre emañ ar gouezeleg e Bro-Skos. Morse n'eo bet komzet gant kennebeut a dud. Morse n'eo bet implijet ken nebeut gant an dud a gomz anezhañ. Yezh enket en ur c'hornig-douar a netra, kuzhet e sioulder al lochennoù, dianavezet gant ar c'helaouennoù, ar mererezh-bro, ar c'henwerzh, ar skingomz, an arme, ha kement tra bras all a stumm buhez ur bobl. Prim-ha-prim e teu ar gouezeleg da vezañ hepken un danvez-studi evit ar skolioù, ar skolioù-meur dreist-holl.

Un tammig spi a c'heller kaout koulskoude. Stourmet e vez bremañ evit ar gouezeleg muioc'h eget n' eus bet stourmet biskoazh. Damzigoret eo bet dezhañ dor ar skolioù. Ha dreistholl e vez implijet ar yezh gant un dibab tud brasoc'h-brasañ bemdez: oberennoù kaer **Somhairle MacGhillEathain** ha **Seoras Caimbeul Hay** a zo an arouez gwellañ a c'hellfed kaout eus un amzer gaer o tont.

Dazoned ar gouezeleg ne vo, goude-holl, nemet an adsked sevenadurel eus dazoned politikel Bro-Skos. Skouer an Hebraeg - marvet tri mil bloaz zo hag adsavet bremañ en Israel - a ziskouez petra c'hell ar vroadelouriezh ober. A-walc'h eo kaout ar youl. D' ar Gelted da lavarout, e Skos evel e lec'h all, daoust ha c'hoant o deus bevañ, pe mervel. Diouzh o c'hoant e vezo.

(An notennoù a vank en niverenn diwezhañ a gaver amañ)

(27) N' eus ket bet kredet e talvez e ar boan reiñ amañ ul levrlennadur resis diwar-benn an oberennoù meneget.

(28) Derc'hel soñj n' eus ket pell e vez skrivet gouezeleg Bro Skos en un doare disheñvel diouzh hini Iwerzhon. Gwelout pelloc'hik.

(29) Tennet en dije James Stuart, implij, evit ober e droidigezh, eus hini an eskob Bedell, ur manac'h Sant Frañsez a oa en em droet ouzh ar brotestantiezh.

(30) Marteze e c'heller menegiñ amañ ivez ez eo bet troet e gouezeleg dornlevrioù-lid an Demplourien, hag ar Vasoned e dibenn an naontekvet kantved.

(31) Emeur o paouez sevel, e Skol-Veur Dun Eidin, ur gevrenn a werinoniezh.

(32) E miz Meurzh 1877 e oa bet kinniget dek lur sterling priziou hag unnek levr gant **Comunn Gaidhlig na Inbhirnis** evit ur genstrivadeg ouezelek etre bugale. Unnek bugel o doa kemeret perzh enni !

55

(33) E Karolina e teuas zoken miliadoù morianed da zeskin gouezeleg ha da gemer anezhañ evel o yezh. Gwelout war-se Meven Mordiern, 'Prederiadennoù ha Transactions of the Gaelic Society of Inverness. E-keñver paoter an anvioù keltiek e-touez morianed Amerika, adlenn studiadenn Langston Hughes war Al Liamm, niv. 24.

(34) 76 dre gant anezho ganet er C'hanada, 19,4 dre gant e Bro-Skos. Setu niver Skosiz er C'hanada : 1871, 549.946 ; 1881, 699.863 ; 1901, 800.154 ; 1911, 997.880 ; 1921, 1.173.625 ; 1931, 1.346.350. 45 dre gant eus Skosiz a zo dimezet gant Skosadezed, 23,8 gant Saozezed, 14,9 gant Iwerzhonadezed (1931). Ur boblañs yac'h-tre a zo anezho : 45,1 dre gant dindan 25 bloaz, 47,8 etre, 21 ha 64, 7,1 koshoc'h e get 65. Keñveriañ gant poblañs **Cataibh**, taolennet e levrig ar c'hartennoù (e gwerzh e ti Al Liamm, 150 lur).

(35) Ar ouezelegerien-se ne oant ket holl Skosiz anezho ! 29.574 a oa a orin « breizhveurek » a lavar danevell an niveradeg, 59 a oa Gallaoued, 5 Nederlandiz, 4 Germaned, 6 Svediz, 2 Ejiptiz, unan Aostrian, unan Danad, unan Islandad ha 6 a ouennoù all.

DEUT EO ER-MAEZ

"Cours élémentaire de Breton"

gant ROPARZ HEMON

trede mouladur

144 paj. - Priz : 380 lur

P. Bodenan, 3, Chemin des Potiers, Ergué-Armel

C.C.P. 212-23 Rennes

KORN AR GWENEDEG

Mar dit da jiboes :
ur sant n' eo ket ur c'had

gant Job JAFFRE

Ar gontadenn-mañ a zo gwir penn-da-benn. N' en deus e-barzh ger gaou ebet ; nemet e vefe ur gaouiatour an hini en deus he displeget din. Ar pezh ne gredan ket...

Ur wech e oa... n' eus ket gwall bell 'zo, daou vignon bras, stummet o daou gant ar jiboes. Unan a oa o chom, lakomp, er Gemene, hag an all e Ploe. Evit ar wech-mañ tavomp anv an eil hag egile, rak tud kar o deus c'hoazh dre-se, ha marteze... marteze...

Lakomp e oa Visant, paotr ar Gemene, ha Zulian, paotr Ploe. En em glevet o doa evit monet da jiboesat en ur c'hornad gouez a-walc'h : gwernegi, koad-tailh, gwaremmoù gant lann, brug, radenn, lec'h ma kaver dre bep degouezh konifl, gad, klujar, ha me oar-me ? rak evidon, n' on ket jiboesour tamm ebet. Fet a besketat, ne lavaran ket : evit an dluzhed, ar beked, difenn a ran ma zamm ! Met sioul ! Deomp da gaout hor jiboesourion.

...Amzer fall a oa bet e-pad an deiz : glavaj, avel diharak ! Ar chas ne gavent blas da netra. Hag e oant, Visant ha Zulian, o tistreiñ da gaout an hent bras, hag hent ar ger. Tremen a refont dirak ur gozh chapelig a netra, e-kichen ur feunteun. Ur sant a oa eno, ken kozh ma oa kollet e benn dezhañ : un tammig evel ar sant-hont en doa kollet e dog. Anaout a rit marteze ar Sant Kolledog-se ? Hemañ, enta, ouzhpenn dezhañ bout dibennet, ne veze gouiet anv mat ebet dezhañ : Sant Kupern, a lavare tud an dro, Sant Filibert a zisplege un den hanter-desket. Evit ar jiboesourion e oa Sant Hubert.

- « Dre wall an tamm tra-mañ emañ bet fall an traoù ganeomp, a lavare Visant ! Evit bout patron ar jiboes, n' en deus graet sikour ebet deomp. Laosket en deus an amzer monet gant mamm an diaoul. Ne dalv netra ! Nemet un ten, an hini ez an da darc'hañ warnezhon. »

Ha paoñ neuze ! Setu Visant o lezel un taol fuzuilhenn war ar paour-kaezh sant Hubert. Truek e oa a-raok. Met bremañ ? Drañ ar gartouchenn en deus toullet e meur a lec'h, sae koat ar Sant.

57

- Ho, Visant ! e taskonias Zulian, n' eo ket mat ober traoù divalav sort-se. Ma c'halon-me ne vefe ket aes warlerc'h !

Met Visant e c'hejas e ziskouaz...

*

**

Ur miz bennak war-lerc'h, setu Zulian degouezhet er Gemene, kavet mamm Visant, ha goulennet penn eus e vignon.

- Fall eo an traoù gantañ, emezi ! Eus ar fallan ! A-c'houde ur miz-zo, droug bouzelloù en deus, kri, deiz ha noz, gant ar red-korf ! Ne vez kavet netra evit aesat dezhañ : na den , na medesinour nag apotiker... N' on ket evit kompren ! Petra en deus graet Visant enta evit bout gwallaozet evelse ? Nemet a vefe un taol « fizik » ? Lavarout a rafe un den emañ bet « sorset ».

- Sorset ! eme Zulian, en ur gravat e benn. Hem ! Hem Un tammig e teu « komprenasion » din, a gredan.

- Petra e vennet c'hwi laret ?

Ha Zulian da gontañ doare Sant Hubert.

- Ho ! Gwellet a ran, bremañ ! Met, ya, sur : kement se eo ! Ar pemoc'h : tenniñ war ur sant kozh ! Biskoazh. Met pec'het en deus, ha pec'het bras. Nag ur vezh ! Gortozet, ez an me da gontañ un tammig pemp ha pevar dezhañ.

Hag ar vamm da gaout Zulian.

War-lerc'h bout divizet dezhañ e begement : « Bremañ, emezi, n' oc'h eus nemet un dra d' ober, ma faotr ! Monet da c'houlenn pardon gant ar sant. Hag evit ma vo talvoudusoc'h ar benijenn, dav e vo deoc'h monet war droad. Peder lev a zo, met gwazh a se evidoc'h ! »

Hervez ar pezh a zo bet kontet din, monet a reas Zulian war droad betek chapelig Sant Hubert. Goulenn a reas pardon... A-raok ma oa erru er ger, ne sante ket mui droug ebet. Nag ur burzhud, n' eo ket gwir ?

*

**

N' eus ket pell 'zo, ez on bet degouezhet, me ivez, e-tal ar chapelig-se. Ur vaouez a oa eno. Me ha goulenn ganti peseurt sikour e veze kavet gant ar sant. - « Gwechall, emezi, dijablañ a reze ar boan izili, hag an Urlou. A-c'houde ur prantad amzer e klevan laret e tigas aesamant ivez d' an droug bouzelloù ! »

NOTENNOU

HOR MIGNONED. -

Glaoda Chauvez ha Janed Ansker a zo bet dimezet en Naoned, d' an 18 a viz Eost.

Isabelle ha Gwenola Hemlin a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh o breudeur gevell Gildas hag Herve, d' an 11 a viz Gouere e St Laurent (Kanada).

Soizig Assicot he deus ar blijadur da gemenn deoc'h ganedigezh he c'hoar vihan Marie-Armelle, e Roazhon, d' an 13 a viz Gwengolo.

432 KOUMANANTER.

- Kenderc'hel a reomp da vont war-raok, gant sikour kalz a vignoned : abaoe derou ar bloaz, 18 anezho o deus kavet ur c'houmananter nevez - pe paeet evitañ - 3 o deus kavet 2, unan, pevar. An Dll Saint-Gal de Pons, « dineizhet » 5 ganti he deus gonezet ur c'houmanant war baper kaer. Ar maout, avat, a ya gant Alan Al Louarn, en deus degaset deomp 21 chomlec'h nevez, ha 30.000 lur bennak d' hor c'hef. Abegoù a zo eta da vezañ laouen. Trugarez d' an holl. Ha spi hon eus ne vo nemet ur c'hoari bremañ mont en tu all d' ar 450. Kendalc'homp.

Setu ar sifrennoù :

Aodoù an Hanternoz, 60 ; Penn ar Bed, 92 ; Il ha Gwinum, 36 ; Loer Izelañ, 26 ; Mor Bihan, 30 ; Pariz ha tro-war-droioù, 92 ; Departamantoù all, 51 ; Trevadennoù Bro-C'hall, 6 ; Iwerzhon, 12 ; Bro-Skos, 1 ; Bro-Gembre, 9 ; Bro-Saoz, 3 ; Stadoù-Unanet, 4 ; Kuba, 1 ; Kanada, 4 ; Arc'hentina, 1 ; Brazil, 1 ; Helvetia, 1 ; Bro-Sveden, 1 ; Aostralia, 1.

An hevelep sifrenn evit Penn ar Bed ha Pariz, 92 : e pelec'h e vo tizhet ar 100 koumananter da gentañ ?

PROFOU.

- Degemeret hon eus e-korf an daou viz diwezhañ :

EOST.

- G. Etienne, 750 lur ; J. Konan, 100 ; ur beleg paour, 1.000 ; J. Auffret, 500 ; G. Etienne, 3.000 ; Dr Jaouen, 4.060 ; Dll Marot, 3.000 ; Dizanv, 1.000 ; Marsel Aodig, 500 ; Roue, Roazhon, 600 ; F. Kervella, 270 ; Per Peneg, 100.

- War un dro, 14.820 lur.

GWENGOLO. - Yann Boupinod, 550 lur ; C. Le Mercier d'Erm, 500 ; F. Kervella, 7.600 ; G. Etienne, 7.000 ; Paol Gwilherm, 1.000.

- War un dro, 16.050 lur.

Abaoe derou ar bloaz hon eus bet 140.270 lur a brofoù. Trugarez a greiz kalon d' an donezonerien vat.

BEZ ANDREV GEFFROY. -

Degemeret hon eus c'hoazh ar profoù-mañ : R. H., Brest, 1.000 lur ; R. Mahely, Sant-Malo, 500 lur.

KLASK A REOMP CHOMLEC'HIOU : Reun Ansquer, Job Bertho, Mikael Audrain, L. Le Bouffant, C. Le Cossu.

MIGNONED A SKRIV. -

« N' am eus ket gellet daoust d' am c'hoant, kemer perzh e devezh « Al Liamm ». Ni beleion ar parrezioù ne c'hellomp ket beajiñ pa garomp. Laouen on bet o welout e kendalc'h da vont war gresk ar stourm evit ar sevenadurezh e Breizh. Ha kerse eo ganin na c'hellan kemer nemet nebeut tre a berzh er stourm-se. Gellet e vije lavarout din : « An neb a venn, hennezh a c'hall ».

« Gwir eo, met ur c'hristen a rank mirout ur renkadur en e zleadoù. An dleadoù pennañ da gentañ, ar re all ma vez gellet. Ha n' omp holl ken barrek ha ken barrek. » C.

« Studiaden Rolland-Gwalc'h a oa un tammig diouzh spered pennad « War Sav ». Forzh penaos ar menoz 'zo dudius. Marteze ec'hellfer soñjal en un niverenn

ispisial war gudennoù pobl Vreizh, pe un dra heñvel. Niverennoù ar seurt-se a zo un dra dreist gwech-ha-gwechall. » A. L.

Digant Evnig Penn ar C'hoad :

D' ar sul 29 a viz Eost en em gave e Boulvriag ur gouel en enor da labourerion-douar ar Menez.

An ambrougadeg hag all a voe kaer-meurbet ha breizhek pep tra. Ma vije, e pep parrez a Vreizh-Izel, daou vreizhad seurt gant an aotrou beleg Ar Sant ha va mignon Kadoudal, ne vije ket kement c'hwezh ha liv ar gall gant an abadennoù a anver gouelioù breizhek.

Ar pezh a voe, disul, e Boulvriag, ur yec'hed, un dudi, e voe klevet dre holl, brezhoneg hepken koulz lavaret : gant blenierien an ambrougadeg kenkoulz ha gant bagad ar viniaouerion pe merc'hed yaouank ar c'helc'h keltiek.

Setu aze un dra a dalvoudegezh vras. « Aze emañ an uioù » evel ma hope paotr ar Menez !

Aze emañ d' am meno ar pal da vont dezhañ, ar pall eo poent mont dezhañ, ma ne fell ket dimp e teufe bagadoù ha kevrennoù da vezañ fentigelloù hepken. Rak, siwazh, bez 'z eus kelc'hioù a vez graet keltiek anezho ha... mat pell 'zo !

Er gouelioù, lakomp e giz reoù ar Bleun-Brug, e tlefe bezañ savet ha kenstrivadegoù ha rannet prizioù etre ar strolladoù evit loreañ ar reoù ar muian brezhonegerion.

Bagadoù sonerion a zo brav ha mat ; bagadoù brezhonegerion e tlefent bezañ war un dro ha, kalz anezho a c'hellfe pa garfent.

HOR YEZH. -

Niverenn 3 « Hor Yezh » a zo deut er-maez. Enni e volennet : **Kenlabourat**, pennad-digeriñ ; **Enskrivadurioù brezhonek**, diwezh ar pennad ken talvoudus diwar-benn ar brezhoneg enskrivet war an ilizoù, an delwennoù, ar stalioù, h.a. ; **Studi ur ger : Hevelep**, stagadenn gant A. J. Raude ; **Traoù ha gerioù** : an avaloù-douar (3 c'hartenn), gant Arzel Even ; **Kelennadurezh Yezhoù Afrika** ; **Anvioù pesked ha loened-mor e Kernev-Izel**, gant Alan-Gw. ar Berr, studiaden a-bouez, enni tost 150 anv ; ur varnadenn diwar-benn levr Kenneth Jackson : Language and History in Early Britain. Ha notennoù. 35 pajenn a zo en niverenn-mañ. Tevoc'h c'hoazh e vo an niverenn 4, bremañ dindan ar wask. Koumanant : 500 lur. Da gas da : P. Denis, Le Ris, Douarnenez. C.C.P. 1499-51 Rennes.

60

DA WERZHAÑ. -

Bez hon eus da werzhañ un NEBEUT skouerennoù nevez ha keinet eus « GRAND DICTIONNAIRE FRANÇAIS-BRETON » Frañsez Vallee. Ar skouerennoù-se a zo keinet-mat, an daou c'holo e kartoñs, ar c'hein e ler. Priz pep skouerenn a zo 2.000 lur. Bez hon eus ivez UR skouerenn war baper pinvidik : 3.000 lur e koust hennezh. Div skouerenn all a zo roget un tammig ar golo anezho, ar follennoù avat a zo e stad mat-tre : 1.000 lur pep hini. Mizoù-kas dre bost erbedet ouzhpenn.

Bez hon eus ivez da werzhañ « KANENN HINI LANGENAU », barzhoneg brudet Rainer Maria Rilke lakaet e brezhoneg gant Olier Mordrel. Moulet aketus eo al levr, war baper brav ha gant ur golo kartoñs. Priz pep levrig, na gaver ket mui da brenañ nep lec'h abaoe pell, a zo 200 lur. Mizoù-kas ouzhpenn (30 lur). Digant P. Bodenan.

LEVRIOU BUGALE. -

Emañ « Al Liamm » o paouez daou levr skeudennaouet evit ar vugale : Merc'hig ar Rozenn ha Paotr e Varv Glas. Ali eo an holl evit lavarout n' eus bet morse moulet traoù ken brav evit ar vugale e brezhoneg. Ar skeudennoù a zo ur bam sellout outo, ken ampart int graet, ha ken aketus int moulet. Ar skrid a zo bet savet e kenlabour gant tud akuit war ar brezhoneg ha war ar c'helenn bugale : M. Glanndour, M. Klerg, A. Ar C'halvez. ha Per Denez. Ma vez degemeret mat al levrioù-se, e vo moulet kalz re all da peul.

Ul levrig all a zo deut er-maez ivez : « LENN A RAN », lodenn gentañ. Al levrig-se ivez a zo bet graet gant kalz aked. Ma n' eo ket ken dedennus da welout hag an daou levr skeudennaouet, ez eo ken talvoudus all. Spi hon eus e vo prenet gant kalz tud, zoken gant ar re n' o deus ket ezhomm anezhañ, ha pa ne vefe nemet sikour ar gerent a ra gant ar brezhoneg en o zi hag a gelenn o bugale e

brezhoneg : ar re-mañ, nebeut anezho, o deus ezhomm a levrioù moulet, ha ne c'hellont moulañ anezho nemet ma vezont prenet gant kalz tud all.
Goulenn al levrioù gant « Al Liamm » pe gant P. Bodenan. 150 lur pep levr mizou-kas.

OBERENNOU C. Le Mercier d'Erm. -

Levrioù C. Le. Mercier d'Erm a zo e gwerzh : Editions de l'Hermine, 36, rue du Casino, Dinarz. En o zouez « Les bardes et poètes nationaux de la Bretagne Armoricaïne » ; « Les hymnes nationaux des peuples Celtiques » ; « La Chanson des siècles bretons » ; « La Tragédie des quatre fils Aymon », hag all...

DA REIZHAÑ. -

E barzhoneg « Beure » gant Y. Olier, p. 6 ha 7 niverenn 45, e vije ret reizhañ evelhen : pevare gwerzenn ar c'hentañ poz a ranker lenn er stumm-mañ :

'zo troc'het krenn gant krec'hioù du.

En eil gwerzenn ar pevare poz e ranker lenn « on » e-lec'h « eo ».

NE VO KET LAKAET AR BREZHONEG DA DALVEZOUT. -

Ur wec'h ouzhpenn ez eo bet nac'het reiñ d' ar brezhoneg un dalvoudegezh ofisiel. E Kuzul Uhel an Deskadurezh e oa bet karget ur strollad da adwelout roll an danvezioù a c'hellfe servij evel pevare sertifikad an aotreegezh war ar yezhoù. E bodadeg an 22 a viz Mezheven ez eo bet nac'het degemer ar studioù keltiek evel unan eus an danvezioù-se. Setu ar pezh a lennomp e « L'Université Syndicaliste » : « Des douze certificats actuellement à choisir, la commission n'en a retenu que sept, écartant ceux qui lui paraissaient trop spéciaux (linguistique générale) ou pas assez sérieux (littérature comparée), conservant « Etudes grecques » et « Etudes latines » pour une élite peu nombreuse, refusant d'introduire « Etudes celtiques » à cause des répercussions possibles ; « Langues et littératures scandinaves », « Etudes néerlandaises » sont maintenues pour des raisons diplomatiques, « Littérature et civilisation américaines » à cause de son importance ».

En anv ar sevenadur hag al « Liberte » .

61

A-HED HAG A-DREUZ

Resevet hon eus pevare skouerenn ar gelaouenn « Irisleabhar Ceilteach » skrivet e meur a yezh keltiek. Moulet e vez er C'hanada ; 343 Belsize drive. Toronto 12.

« Istor Breizh » an Ao. Poisson a zo bet graet anezhañ un eil mouladur. Gouzout a reer ez eo bet unan eus al levrioù brezhoneg a zo bet gwerzhet ar gwellañ er bloavezhioù tremenet.

Al levr a goust 750 lur + 70 lur evit ar mizou-kas.

Graet a zo bet ivez 100 skouerenn war baper kaer skeudennet gant Langleiz, e briz a zo 1.500 lur + 70.

E gwerzh e ti : Marie J. Moulin, 22, rue Gurvand, Rennes. C.C.P. 431 Rennes.

Graet a zo bet e Gwengamp gant Unvaniezh Speredel Breizh, ur retredig prezeget gant an Tad Chapel Jezuist, d' ar sadorn 21 ha d' ar sul 22 a viz Eost.

Navet kamp skolaerion ha kelennerion Ar Falz a zo bet dalc'het e Brasparz e dibenn miz Eost.

Lennet hon eus war gazetenn Bro-Wened « La Liberté du Morbihan » e oa bet lakaet ur maen eñvor e toull-bac'h Verkingetorix e Roma, evit kounaat bloavezh e varv 2.000 vloaz 'zo, 46 a-raok J. K. Ar skrid e brezhoneg a oa bet kempennet gant an Ao. Marker eus Kistreberc'h ha treset gant an Ao. Penhaleug. Sed aman testenn ar skrid-se :

E koun XX-vet
kantved ha bloaz
maro Verkingetorix
Breiz Leal

Erlannig ha Penhaleug. Kistreberc'h. Bro-Wened

War ar memes kelaouenn ez eus bet moulet meur a bennad diwar-benn Breizh hag ar brezhoneg. Ur studiadenn a zo bet o ivez diwar-benn niverenn Israhel « Al Liamm ».

N' eus ket kalz a gazetenoù « breizhek » a ra kemend-all.

SKRIDOU BARZHED BREIZH. -

Skridoù Barzhed Breizh a zo levrenn gentañ ur strollad studiadenoù a vo embannet gant Goursez Drouized Barzhed hag Ovizion Breizh. El levrenn-mañ e c'hellomp lenn : Petra eo Barzaz Breiz, gant Kerlann ; Anvioù lec'h Bro-Welo, gant F. Ters ; Gwerinoniezh, gant Iona, hag An doare bevañ e Bro-Leon, gant J. Creac'h. Levrennoù all roneoskrivet evel-se a zeuio er-maez ur wech an amzer.
A. Allain, 19, avenue L.-Barthou, Rennes. C.C.P. 1235-48.

62

ANVIOU LEC'HIOU. -

Moulet a zo bet gant « Service central hydrographique » ul levrenn nevez o studiañ anvioù morlenn Vrest hag an trowardroioù. Ar roll a zo bet savet aketus gant Andreu Guilcher, kelenner douaroniezh e Skol Veur Nancy.

HOL LENNEGEZH ENORET. -

Moulet a so bet nevez zo gant an N.R.F. e ti Gallimard ul levr anvet « Poésie non traduite », savet gant Armand Robin. Kavout a reer e-barzh barzhonegoù eus Bro-Sing, an Arabi, Bro-Alamagn, Bro-Holland, Bro-Flandrez, Bro-Hungaria ha... Breizh. Ar barzhonegoù dibabet gant an oberour evit Breizh a zo « Livadenn Ger Is » (L'Envoi d'eau sur Ker-Is), « Ar Chouanted ha Milc'hwid ar Serr-noz » gant Maodez Glanndour. Kalz a blijadur e ra dimp gwelout hor barzhed a-vremañ enoret en un teskad barzhonegoù a bep bro.

DOUAR BREIZH. -

Deut da vezañ sizhuniek e kendalc'h ar gazetenn-mañ d' ober bruderezh evit ar mouladurioù brezhonek. N eus ket kalz a c'helaouenoù a ra kemend-all e Breizh, anavezout a reomp « L'Echo de Lannion » ha « La Liberté du Morbihan », trugarekaat a reomp o renerion a-greiz kalon en anv Breizh.

KOUN BREIZH. -

War atiz R. Tullou, ar skulptour anavezet, ez eo bet diskleriet « Koun Breizh », ur gevredigezh he deus dija labouret, da vihanañ abaoe ur bloaz en ur sevel lidoù Sant Albin ha Ballon.

Ar c'huzuilh a zo savet evel-hen :

- Rener : an Ao. P. A. de Bourgrenet de La Tocnaie,
 - Kañseller : an Ao. R. Rafig Tullou, 3, rue de Clisson, Rennes,
 - Teñzorier : an Ao. R. Jegaden, 78 bis, rue Ed.-Combes, Rennes. C.C.P. 966-34.
- Palioù ar Gevredigezh a zo enoriñ eñvor tud Veur istor Breizh en ur sevel mein koun, delwenoù, h.a., hag aozañ gouelioù eñvor bep bloaz.
Diwezhatoc'h e vo roet roll an izili a enor.
Chomlec'h : Koun Breizh, Maison de la Bretagne à Paris.
Sekretouriezh : 3, rue de Clisson, Roazhon.

Evil an derou mat... Ul levr kaer gant JARL PRIEL

VA ZAMMIG BUHEZ

ul levr 200 pajenn

50 skouerenn war baper kaer Rives... 1.000 lur

Ar priz a vo kresket adalek ar c'hentañ a viz Genver.

Pep skouerenn a vo moulet warnañ anv ar rakprener, niverennet, ha sinet gant an oberour

War Alfa niverennet 800 lur

RAKPRENIT DIOUZHTU

EMBANNADURIOU AL LIAMM

R. Huon, 23, rue de la République - Brest

C. C. P. 684-08 Rennes

AL LIAMM 47

AL LIAMM
Tir na n-óg

NIVERENN 47

Du – Kerzu 1954

10ed BLOAVEZH

Koumananterien : 447
Profoù 162.649 lur

BLOAVEZH MAT HA NEDELEG LAOUEN D'HON HOLL LENNERION

TAOLENN

Evit ar yezh unvan, gant Per Denez	3
Jakez Riou : barzhonegoù	5
Arvar, gant Ab Modron	22
Porzh ar Gellvêneg, gant Youenn Drezen	23
An toull kurius hag ar C'horf hep ene (kontadenn bobl dastumet gant M. Klerk)	31
Mabig al loar, gant H. Dubois (br. Abanna)	53
Prederiadennoù : Kerverziou, gant Youenn Olier	57
Un tamm istor, gant E. ar Barzig	73
Drama hon Emsav, gant Abanna	78
50 vloaz e-touez Alamaned	81
Notennoù	88

Evit ar yezh unvan...

N' eus ket pell e lennen ur pennad diwar-benn an euskareg : preder bras an euskaregourien a zo kaout ur yezh skrivet unvan, forzh pegen disheñvel eo ar rannyezhoù komzet an eil eus eben. N' eus ket pell ivez e oa diskouezet din ur pennad diwar-benn ar flandrezeg : doare-skrivañ ar yezh-se hag hini an hollandeg a zo bet unvanet. Pep yezh, dreist-holl ma 'z eo ur yezh vihan, a zle bezañ unvan en he stumm skrivet evit gellout stourm ha chom bev.

E Breizh hon eus ar chañs da gaout, abaoe trizek vloaz, ur yezh skrivet unvan : diskoulmet eo bet en diwezh ur gudenn a vije bet dleet he diskoulmañ pell amzer a-raok. Abaoe trizek vloaz ez eus bet embannet ur bern levrioù er yezh unvan-se ha savet enni oberennoù a dalvoudegezh. N' eo ket chomet ar yezh unvan un dra divizet war ar paper hepken : deut eo diouzhtu da vezañ ur yezh vev, ha bev-mat.

Pa vo lakaet ar brezhoneg er skol e gwirionez, ez eo ar yezh-se a ranko bezañ lakaet. N' eus, da lavarout mat, diskoulm all ebet da gudenn ar gelennadurezh vrezhonek. Rak, ma ne gentelier ket e pep parrez an isrannyezhiq eus ar barrez (ar pezh a vefe war un dro dic'hallus ha diskiant), ne weler ket perak e rankfed unvaniñ hepken teir rannyezhi (e-giz ma lavarar) ha lezel ar bedervet er-maez : ken aes, ma n' eo ket aesoc'h, eo ar yezh unvan da Wenediz ha ma 'z eo al leoneg d' an dud a zo o chom etre Gwiskriv ha Kemperle.

Taget eo bet hol levrioù, evel m' eo bet taget Barzhaz Breizh : e kompagnunezh vat emamp. Hor fiziañs avat a vo trec'h da bep tra. Hag ivez ar gredenn divrall ez eo ganimp emañ an dazont.

Peogwir e vezo, a-benn an diwezh, pe ur brezhoneg unvan, pe brezhoneg ebet.
Per DENEZ.

JAKEZ RIOU

Jakez Riou a zo bet ganet e 1899 e Lotei, ur barrezig a vro-Gernev souchet etre ar c'hrec'hiennoù hag ar stêr Aon. Eno, e bro an torgennoù serz hag ar mengleuzioù maen-to, e tremenas e yaouankiz. Da zaouzek vloaz, war guzul un tad bennak, e voe kaset d' ar c'hloerdi savet en **Ondarribia**, Euzkadi, gant an tadoù a Bikpus repuget eno eus Gwened. C'hwec'h vloaz goude e kuitae ar **Guipuzkoa** glazvezek evit torgennoù krin **Miranda** ha, diwezhatoc'h, **San Miguel del Monte**, e Bro-Spagn. E 1918 e tistroe Jakez Riou da Vreizh evit bezañ soudard : un den kreñv a oa anezhañ neuze, met koll a reas e yec'hed e servij an arme gall. E 1921, goude bezañ bet e meur a lec'h evel soudard, hag en ospital-arme Pariz evel klañvour, e teue en-dro da vro-Gernev da ziskuizhañ.

En hevelep bloavezh, hag eñ o labourat e Roazhon, e rae anaoudegezh gant renerien Breiz Atao : eus o mignoned e voe diouzhtu, ha broadelour taer e chomas betek fin e vuhez. Ne voe ket pell o vevañ er gêrbenn avat : skolaer pe evezhier libr e teuas da vezañ neuze, hag e meur a lec'h e labouras. E 1928 e kemeras ar vicher kazetennour e Brest. E 1930 e timezas. Mervel a eure gant an droug-skevent e 1937, er vro glas a zo hanter-hent etre Roazhon hag an Naoned, e Kastellvrien.

E yaouankiz e Lotei hag en Euzkadi a verk don oberenn Jakez Riou. Eus Lotei en deus miret Jakez Riou karantez an natur - ar girzhier leun a vleunioù, an dour o lammat war bili bihan etre div vriell c'hlas - ha, stag ouzh ar garantez-se, ul levenez yac'h a darzh e lod eus e oberennoù. Eus Euzkadi en deus miret un hirnezh don, hag a oa bet da gentañ droug-ar-vro hepken, met a zeuas da vezañ, diwezhatoc'h, gant diskar e yec'hed, gwir zic'hoanag. An daou berzh-se eus e spered - levenez ha dizesper - frouezh e vloavezhioù yaouankiz, a sked, hogos atav kemmesket, en e holl oberenn. Pa varvas e oa krog da lakaat da dalvezout, evit al lennegezh, ur maread all eus e vuhez - maread e vicher kazetenner : met an ankou ne lezas ket an amzer gantañ.

6

Kregiñ a reas Jakez Riou da skrivañ brezhoneg e « **Courrier du Finistère** » hag en « **Union Agricole** ». An oberennoù savet gantañ neuze ne dalvezont ket kalz tra - an hini wellañ anezho a zo **An Ti Satanazet**, a vo lennet muioc'h evit bevder ar yezh ha drantiz an divizoù eget evit ar gened lennegel. Savetaet e voe ar skrivagner yaouank gant Gwalarn, ha reiñ a reas neuze d' e vro an heuliad danevelloù a ra ul lodenn vat eus e vrud : **Geotenn ar Werc'hez**. Ur perzh boutin kenetrezo o deus an holl danevelloù-se : diskouez a reont tud o c'hwitañ, tud trec'het. Trec'het gant ar bizhoni e Geotenn ar Werc'hez, gant gwiblennerzh ar merc'hed e Mona, gant ar c'hleñved e Gouel ar Sakramant, gant an dereadegezh en Anna Tregidi, pe gant c'hoarzh an tonkadur hepken en Ur Barr-Avel pe Ar Goulenn. Diskouez a reont ivez tud klañv, pe o skevent, pe o spered : hag eus an holl dud klañv-se n' eus nemet an inosanted hag a oar stourm, ha pa skoont e skoont taol an tonkadur.

Ma oa Jakez Riou ur gwir varzh, ha m' az eus barzhoniezh e pep unan eus e skridoù, ne savas ket koulskoude kalz barzhonegoù. Kinnig a reomp amañ d' al lenner kement barzhoneg a zo chomet diwar e zorn - nemet e skridoù yaouankiz, na fellas dezhañ biskoazh o lakaat moulañ, pe skridoù an « **Union Agricole** », a zo gwelloc'h o disoñjal. Tener e vez e varzhonegoù, bresk evel ar balafenned a ganont, hag intret, evel an danevelloù, gant ur meizadur du ha dic'hoanag eus ar bed.

An dro all eus spered Jakez Riou en em ziskouez en e bezhioù-c'hoari. **Gorsedd Digor** ha **Dogan** a vezo atav un andon a c'hoarzh evit kement den a gar ar fentigell. Ha, padal, n' eo ket fentigell hepken a zo enno ; da nebeutañ skoazellañ stourm ar vroadelourien a-enep d'ar rannvroelerien hag an eil da dalvezout d' ar polis an trubuilh o doa roet d' an oberour da vare tarzhadeg Roazhon. Anatoc'h eo c'hoazh talvoudegezh parfet-meurbet e fentigellerezh en e oberenn vras all **Nomenoe-Oe** ! Un tammig frealz a c'helle reiñ honnezh d' e vignoned eus Breiz Atao : en amzer dieubidigezh Vreizh, d' ar mare ma c'houneze Nomenoe an trec'h a zlee diazezañ frankiz ar vro evit meur a gantved, ne oa bet

nemet ur foeter-hent evit anavezout an trec'hour, ha nemet peorien ha livastred evit mont da stourm a-du gantañ.

Ken dre he stumm, ken dre he danvez, ez eo bet oberenn Jakez Riou un oberenn vroadel. Evit e vro eo en deus savet e zanevelloù, evel barzh foeter-hent Nomenoe-Oe ! e werzioù. Evit an emsav broadel eo en deus savet e bezhioù-c'hoari. Hag e holl skridoù, pa c'hellont ober kement enor da Vreizh dirak ar bed, a ziskouez, ur wech muioc'h, na c'hell bezañ a yec'hed evit hol lennegezh, evel evit Breizh a-bezh, nemet er vroadelouriezh.

Per DENEZ.

HEOL

Heol
 Heolioù
 war an houlioù
 a goroll

Afoù skedus ar mintin
 d' an aod ha d' ar wagenn
 Ur c'han a drid er sklerijenn,
 sklinton,
 hag a varv dre ma tec'h e kanenn ar wagenn

Hag ouzh hec'h askre noazh gant an heol kenedet evel an ed azo,
 ouzh he muzelloù o c'hervel afoù harluet,
 ouzh kevrin he daoulagad du lufus e giz ar glizh
 doueez dianav, gweledigezh ar Gened,
 tarzhet e bro ar sklerijenn
 e taskrenas ene va yaouankiz
 Ha gant he zreid difiñv e keje flourik al lano.

*
 **

E sioulded an iliz dindan afoù ruz gwad an heol
 silet a-dreuz sae limestra ar C'hrist ar goursao direol
 Azeulidigezh ar glin kinnig an dorn - an daou zorn o kinnig o c'hren
 Karantez ar vuzell - an div vuzell distardet o c'hervel
 afoù dianav d' an den
 Heol hag orged doueel
 e lufur he daou heol du

8
 *
 **

Sellet em eus ouzh an aod. Azezañ 'ris hep bezañ ouzh he gortoz
 Klasket em eus e kanenn al lano ur c'han heñvel ouzh he c'han
 hag en aezenn an iliz frond hec'h alan
 hec'h ene e frond an iliz he skeudenn e-touez gwerc'hezad ar gwerioù

Biskoazh ne gavis skeudenn ouzh skeudenn va huñvreoù

Klask a ris neuze kanañ ar c'han,
 klevet e bro an heol ha bezañ divenoz
 Hogen va c'halon a oa tregernek e giz an
 noz

Brest, 1 Du 1927.

AN TOUSEGI

Goude an arnev, an tousegi
 a gan en arselin,
 a gan, pa vez o noziñ,
 ar c'han a blij din.

E glebor ar geotoù,
 o c'han zo hiraezhus,
 e sioulded an nozioù,

an nozioù kenedus.

An tousegi, war lez an hent,
a gan o hiraezh,
hag huñvreoù dianavez,
en noz, en nozioù sklent.

E deltoni al leton,
e kan an tousegi ;
e kanont, pa vez o noziñ,
'vel ma kan va c'halon.

10

AR BALAFENNED GWENN

Pa zigor en hentoù ar bleunioù a garan,
e c'han, er beure hañv, ar balafenned gwenn.

En hentoù gwaskedet, brizh-heoliet o leton,
- gwenan o safroniñ, eostiged o kanañ -
e frond tanav ar gwezvoud,
e nij ar balafenned, ar balafenned hañv.

E kammigellont dibreder,
en hentoù a garan.

E c'hoariont en heol,
a vleun da vleun,
a-hed ar c'hleuzioù,
e frond ar mel gouez nijet eus an targosioù kleuz.

E sunont er bleunioù,
ar frondoù a garan.

Pa vorliv ar bleunioù ha ma tav an eostiged,
ha ma vored an hentoù,
en abardaez mouk,
e serr o eskell kizidik ar balafenned hañv.

E hunont er bleunioù,
an hun a garan.

Huniñ a reont e kalon ar bleunioù moredet,
hag an delioù leizh, klozet da serr-noz,
en o c'hreiz a zalc'ho ken na darzho an deiz
ar balafenned hañv.

11

An aezenn a luskell o huñvreoù,
an huñvreoù a garan.

Hogen, pa darzho adarre an deiz,
- ha bleunioù o tigeriñ hag eostiged o kanañ -
en hentoù o tivorediñ
ne gammigello ken ar balafenned hañv.

E kalon ar bleunioù eo marvet
ar balafenned a garan.

12

INTROIBO

Henozh emañ pellgent an deiz kentañ eus ar bloaz,

an deiz kentañ eus ar bloaz mat ;
ra viro an Aotrou Doue maouez ha gwaz
diouzh anken ha kalonad.

A-hed an amzerioù tremenet pe da dremen,
ha koshoc'h e vezomp goude ur bloavezh all,
pirc'hirined dizesk ha dall,
mibien reuzeudik mab-den ?
Nann, ne goshaomp ket dre ma'z eomp war an oad.
Eus hon derou henañ da ziwezh hor buhez,
ez eomp war yaouankaat bemnoz ha bemdez,
e yaouankiz hon Tad.

Ganet omp er pellgent,
en draonienn dizudi, tud enni o kunudañ ;
hag edo kroget ar riell e skoasell an hent,
da bred hor ginivelezh, hor yaouankiz koshañ.
Hag edo skornet an avel war ar run,
pa ziskennas ar Vuhez da bokat dimp,
ha da luskellat hor c'hentañ hun,
e traonienn ar glebor hag ar frim ;
hag edo gurudet ar richodenn e gwaskedoù ar roz.
Hag astennet ar paour divouedet hag eok
war revenn wenn an noz,
en traoniennoù deok.

Henozh emañ ar bloaz nevez,
ar bloaz nevez o tigeriñ ;
ra viro Doue tud an ti
diouzh naon ha dienez.

13

Ganet omp e traonienn an hirnez,
en noz ar bloaz ma kroge ar yenijenn galetañ ;
pred hor ginivelezh eo hor c'hozhni goshañ,
hag e c'hoañvomp o c'hortoz yaouankiz an amzer-nevez.

Douget omp bet d' an iliz,
dalc'het ouzh badez gant Ael ar Blanedenn,
ha fiziolet gant an Anken,
da zerou hor yaouankiz.
Skuilhet eo bet war hon tal dour ar C'hlanidigezh,
siellet hon ene gant ardamez roueel ;
galvet omp bet d' ar velegiezh
en anv an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.

Bugel sioc'han, en da gozhni ganet,
Kerzh war-du da yaouankiz tonket.

Henozh emañ pellgent ar c'halanna,
kalanna ar bloaz kristen ;
ra blijo gant Doue ho tiboaniañ
diouzh kalonad hag anken.

Diuzet omp bet a viskoazh da viken.
- Gwa ni ma vezemp bet dibarzh et en aner ! -
Kroaz hor Silvidigezh a zo roet dimp da zougen,
hag un oferenn da lavarout, - un oferenn bonner.

Introibo. Me a dostaio ouzh Doue, va levenez,
levenez va yaouankiz.
Ha n' eus den en iliz
da respont an oferenn nevez.
Ar gristenien diwezhañ, sevenet oferenn o fellgent,
an eil war-lerc'h egile, a zo aet gant o hent.
Hag an iliz a zo chomet goullo, goullo,

evel skiant ur c'hlañvour o tremen en alfo.

Ni a yelo davet Doue,
andon ar yaouankiz wirion ;

14

Dezhañ e taskorimp hor c'horf hag hon ene,
da vare an hinon.

Introibo. Ret eo lidañ hon oferenn douarel
dindan doare an estrenvan,
hep skor na skoazell,
hon-unan, hon-unan.
Hag e rank pep oferenner kenderc'hel gant e oferenn,
direspont e bedennoù,
kerzhout en amzivin, dalc'het war e gomzoù,
aon gantañ lavarout un oferenn wenn ;
dre groazhentoù dic'houlou morzañ hep astal,
renet gant an Tonkadur,
anken evit hor mezur,
a-hed hon hent, war-du ar pal.
Ha bemdez e tostaomp, ha diri ha diri,
e pignomp d' an aoter savet e diwezh hon hentad,
pirc'hirined sammet gant doan hag ambloari,
divi kent hor c'himiad.
Hag e sevenomp arnodenn an douar,
pirc'hirined dizesk,
divi hag ampalvar,
hon nerzh gourel aet da hesk ;
hag e pignomp divi ha blin,
strebot e kement lindag,
pistig e kement tag,
ha gloaz e kement atahin.

Bemdez avat, ha bemnoz e vezo distrujet
hor c'hozhni douarel hag al levezonoù aner,
hor yaouankiz hepken a vezo aotreet
da dostaat ouzh an aoter.
Bemdez e pellaomp diouzh traonienn ar gortoz,
war-du annez an hoal-vat ;
ha bemdez ha bemnoz
ez a hor yaouankiz war yaouankaat.

E-doug ma savont eus traonienn ar pened,
e pign da Zoue kan ar birc'hirined:

15

Gwelout a reomp o tigeriñ
an deiz kentañ eus ar bloaz ;
ne vezo mui na doan nag anoaz,
nemet levenez en hon ti.

Pa vezimp degouezhet, simidi doueel,
war run an heol,
e vezo enaouet e pep tu d' hon aoter, evit hor gouel,
ar steredegoù holl.
Enaouet e vezo ar steredegoù
en Iliz divolz ha dic'hourin,
ha Mab Doue E-unan a responto d' ar gorreoù,
hon oferenn anterin.

Tad,

setu ho kig, setu ho kwad.

Hag endra ma vezimp degemeret e-metou ar C'hoskor,
eus run an heol e savo ar bangor :

Hiziv emañ an deiz kentañ eus ar bloaz mat,
derou hor yaouankiz divarvel.
Ne vezo nag anken na kalonad
en Tad, er Mab, hag er Spered Santel.

16

BALAFENN

Bemnoz,
kerkent ha ma veze ar gouloù war enaou,
em c'hambr dizarempred e nije ur valafenn,
hag e c'hoarie er sklerijenn,
bemnoz, Bemnoz, evel va huñvreoù.

Er sklerijenn o krenañ e krene an eskell,
ha bemnoz ha Bemnoz,
e tenesae dibreder ouzh ar sklerijenn c'hell,
ar valafenn noz.

Hag e tegouezhas e-kerzh un noz
ma begas an tan e seiz an eskell kizidik.
Ouzh kalon ar sklerijenn e kouezhas ar valafennig,
ker buan hag an huñvreoù noz.

...Em noz dizarempred
ne gren mui eskell er sklerijenn ;
ar valafenn gloazet em eus lazhet,
hag ouzh ar speurenn em eus staget,
gant ur broud etre o eskell kloz,
siwazh din, an huñvreoù noz.

17

SERR-NOZ

Azezet e oa war lez an aven,
O c'hortoz an hini a gare.
Uhel e oa pa zegouezhas er glen.
...En-dro dezhañ e noze.

En halegoù e bleuñv ar vilzig a oa tavet ;
War gorre ar c'hegid gwenn an nadoz-aer a vorede,
hag eñ a c'hortoze
ar plac'h na zeue ket.

E bevenn ar c'hornog e taskrene ruzoni,
Skeud ar c'hegid gwenn a varve e-barzh an dour,
Iano blot ar vorenn a bigne lizidour.
Hag eñ a welas e oa o noziñ.

Sevel a reas goustad,
Kemerout a reas en-dro gwenodenn an dorgenn,
Hag an heol o vervel a skuillhas en aven
Ur veradenn wad.

18

AR FEUNTEUN ZU

An dour a gouezh,
goustad,
berad ha berad,
a-hed ar raden gouez.

Didrouz ha lizidour

e virbilh an dour
diouzh gorre an bantenn ;
abaoe kantvedoù
e kouezh a veradoù
ingal, ingal, diouzh kalon ar garregenn.

Noz ha deiz,
a-hed ar raden leizh,
berad ha berad,
goustad.

Hep trouz ebet
e kouezh
a-hed ar raden gouez,
en un naoz re zon evit bezañ gwelet.

Perak avat e c'hoarvezas,
p' edon va-unan,
e chomis betek ma nozas
o sellout, en estrenvan,
ouzh an dour o veradañ ;
ha pa nozas,
e klevis ar garregenn o wadañ,
a-hed ar raden hir,
berad ha berad,
goustad,
e kalir
an noz.

19

ARNEV

El liorzha broutac'het, ar rozegoù
A stou d' an douar o bleunioù limestra ha divi.
El liorzha broutac'het, ar bleunioù
Zo stouet ha difiñv, evel pa vezont o pediñ.

E poultrenn an alezioù... mezo
Gant heol tomm pe wad bero,
Al labousedigoù en em dag etrezo,
Gant c'hoant en em barat.

En oabl skedus ha goret e pign ur goumoulenn :
Koumoulenn ruz... Ha glav hag avel 'vel anken.
Ar rozegoù ruz a stou o fenn hag a gren
Gant an arnev o tremen.

Al labousedigoù simudet war o c'hilud
A zo tamolodet an eil ouzh egile.
Selaou a reont,
Endra m' emañ an avel o c'hoari en o fluñv.

Ul luc'hedenn a darzh skedusoc'h eget an heol
. ur wennili,
.
.

Pellaet eo an arnev.
Laboused bet ankeniet, moarvat,
A gan hep krediñ...
Dreist ar c'houmoul, pa groze an arnev.

Hag e tigor an va frenestr bras.
Ar goukoug,

Ar wech kentañ er bloavezh-mañ,
.....

El liorzh gleb, ar rozegoù, el leton glas,
A zo kaeroc'h o bleunioù gant levnez
. . . . gouelel ha gwadek,
A hej delioù gleb ha nevez.

Pellaet an arnev, hag, uhel, en oabl o sklaeraat,
E tarzhe adarre ur wennili.
Ar rozennoù gleb ha flamm zo stouet ha difiñv 'vel o pediñ.

Hinnennoù, avat,
A zo kouezhet war al letonenn o delioù divi,
Evel beradoù gwad.

21

ROLL AR BARZHONEGOU

HEOL : barzhoneg diembann, a zo bet roet deomp ar skrid anezhi gant Abeozen. Setu ar pezh a skriv hemañ diwar he fenn : « Danvez ar gwerzennoù a zo : e Bro ar Vasked ur vaouez kenedus o kouronkañ en noazh da serr-noz, hep gouzout dezhi e oa un den o sellout outi. From an den yaouank (J. R.) o tegouezhout gant an hevelep plac'h kenedus o pediñ, gredus en ilit antronoz ».

AN TOUSEGI : moulet evit ar wech kentañ e Gwalarn, Diskar-amzer 1928.

AR BALAFENNED GWENN moulet evit ar wech kentañ e Gwalarn war un dro gant « An Tousegi ».

INTROIBO : moulet evit ar wech kentañ e Gwalarn, Goañv 1928.

BALAFENN : moulet evit ar wech kentañ e Gwalarn, Diskar-amzer 1929.

SERR-NOZ : moulet evit ar wech kentañ e Gwalarn, Ebrel 1931.

AR FEUNTEUN ZU : moulet evit ar wech kentañ e Gwalarn, Mae 1934.

ARNEV : barzhoneg diechu kavet e-touez paperennoù J. R. goude e varv ; moulet gant Youenn Drezen e Gwalarn, Genver-C'hwevrer 1938.

ARVAR

« Ha chetu deit er Brezél Bras »

I. P. KALLOH - Ar en deulin

(Gueledigeh - II)

Houlennoù al latar 'zo nec'hus, tizh warne,
ha du-ludu o liv : deuet eo bremañ 'n arnev.

Emaint o vont... o vont 'us d' al lanneier kras.
Hag an irinjez 'skrij pa buf 'n avel-vor vras.

Houlennoù traezh an aod, diboell o c'horoll, 'dro
'n ur voudal ; ha diboell, o zuzh a-hed ar c'hro.

Ur c'hwezh a zeu diouzh pell o chou kuit 'giz moged...
Ar bili-mañ 'zo garv ; ma zreid 'zo bet roget.

Hag houlennoù ar mor 'zo kounnaret tomm-tomm ;
teñval eo spoum an dour disehañ hag a vomm.

Ha lammat, ha redek, ha blejal d' ar rec'hier.
Ar rec'hier 'zo difiñv ha mut : hir o freder...

* * *

Houlennoù 'sav em c'hreiz 'is meur a gougoulenn ;
drein ha mein ha glav ha glaou 'hed o arroudenn !

E pe lec'h emañ-me ? Dirazon wel den tra !
Ha deuet an noz, pe 'n deiz ? E pe lec'h emañ 'ta ?

Merc'hed a werzh o c'horf 'vel ma werzhez da varc'h ;
ha tud a zo pounner o c'hof, pounner o arc'h...

Ha kouerion gaezh a zo, skuizh ha gleb-glizh o zal ;
ha paotred a zo sonn o skeiñ davet o fal...

Ha te a oar piv 'zo pinvidik ? piv 'zo paour ?
Mesk-ha-mesk traoù lous ha traoù glan ha gwad hag aour...

Pulluc'h-skorn tan ar stourm 'red dre 'r bed tro-war-dro.
« - Bez' vi seder ha kreñv pa gredi krediñ 'z Pro ! - »

AB MODRON.

(Nevez-amzer 42 - Diskar-amzer 46)

Porzh ar Gellvêneg

gant Youenn DREZEN

Merc'h Chann Dilosker, gant he faner bihan da lakaat pesked ouzh pleg he brec'h, a daolas, gant ur vousklenn, ur sell du, diwar dreuzoù an ostaleri, war an hent ha war ar ganol a gas da laez ar porzh. Un dud war an hent, martoloded ha bigoudenned, safar ha buhez d' o heul, e sklerijenn roz an abardaez o sinaat gant ur moravelig. Krennarded ha mousted o turlutañ hag o c'houren war an traezh en dro d' ar c'hanodoù. Mone-done ivez, ha galvoù, du-hont, en tu-all d' an dour, e beg Lechiagad, penn-da-benn renkennad an tiez gwennrazet. Ha fiñv er ganol gant ar bagou o vont da laez, brañsell-divrañsell, gant o lien o stlakal a-raok dont d' an traoñ, ha stirlink chadennoù, an eorioù.

- Marteze eo deut ivez Herri en aod, a soil ar plac'hig a-daol-trumm. Hag hi, ha treiñ e-lec'h pennadiñ hent ar c'hal, dre gorn an ti, e roñch an iliz. Tina Garo a oa imor enni. Ar Bideo-se, ivez, dont betek en he zi d' ober lagad dezhi !... Daoust d' an dizroenn en doa bet e feunteun Kerleger... Kribell en doa ! Gouzout a rafe Herri an dra hep dale hiroc'h. Ha gouzout a rafe, ya !

Hastout a reas ar plac'h yaouank, ouzh piltrot he zreid skañv, dre ar roñchoù treuz-didreuz hag al leurioù, dre douez an tiez bihan, savet a-strob hag a-stern, tal-ouzh-tal pe gein ouzh kein, hervez faltazi o ferc'henned, pep hini evitañ e-unan. El leurioù, e touge an treilhennoù o bec'h rouedoù rouz o sec'hañ.

E-tal ti Herri, avat, mar doa birvilh ha hop, e-giz er Gellvêneg a-bezh, d' ar mare-se eus an deiz, n' eo ket an hini a oa Tina ouzh en gortoz, nag an hini e oa deut da glask. Er-maez e oa an holl diegezh : Mari Koig, c'hoar vras Herri, difrae warni oc'h istribilhañ rouedoù ouzh an treilhennoù ; ur pezh bern anezho war an tirienn ; ar vugale o c'hoari toull-pennikañ warnañ ; hag Anna, ar vamm, ur vaouezig sec'h he fas melenek, he daouarn ganti war he divgroazell, o folliñ, fuloret.

- Bez' e c'hellit mont, ya !... Redit da greñviñ adarre gant ar rañsoù eus ho kouch ! N' oc'h ket nec'het, c'hwi, penaos ha petailh ha gant petra e vo paeet bara da lakaat e genou ho pugale, gant laou ho penn pe vili an aod ! Kozh eo an dra-se, ha n' o deus ket muioc'h a skiant eget ul leue bloaz. Ma n' eo ket ur vezh ! Baleit, debrouer-Frañs ! Me ho kav'o en-dro, ramper kozh !...

24

Amzer he devoe Tina da welout un den war an oad, kruk et e ziskoaz e-giz dindan ar glav o treiñ buan-buan dre ur vanell, a-dreñv ar chanter-bagoù : Li Koig kozh, tad Herri, o tec'hout rak arne Anna Tirili, e bried.

Saludiñ a rae Mari Koig an ostizez yaouank gant ur mousc'hoarzh sioul ; hep nemeur a van ouzh ar pateroù edo he mamm o tibuniñ.

- Me 'laka, eme Dina, emañ ar voereb o pikañ chupenn an eontr !

- ...Un tad a bemzek krouadur, a gendalc'he Anna Tirili ; ur martolod, hep ti na bag war e anv, d' an oad ma 'z eo, o klask kas an ton e-giz ur marc'hadour pesked... Kant lur, sant Trevel benniget ! Kant lur en deus ezhomm an aotrou !...

Distreiñ a reas d' he zi, n' am eus ket lavaret hep kenderc'hel da gunuc'henniñ : - « Un den hag a rank paeañ ferm ; un den hag a rank mont d' ar mor e bagou an estren ! »

- Ya ! a lavare Mari, gant he mousc'hoarzh habask. Diwallet en doa va zad ur bilhed a gant lur war e lod peskerezh.

- Evit ober e baotr yaouank, Mari ?

- Feiz !... Nemet n' en deus ket bet a chañs. Rak kouezhet eo va mamm warnañ, p' edo o cheñch e zilhad, hag ar sapre bilhed war an daol.

- Kant lur a zo kalzig.

- A, oah ; eme Vari. Ar baotred a c'hounit ivez. Troet a voe trumm hec'h evezh gant he labour :

- Op a la ! Amañ 'z eus ur pezh toull, er roued-mañ.

- Labour tailhañ ha dresañ a vo aze, eme Dina. Martolod a oa bet he zad ivez, Doue d' e bardono ! Drailhet-fin eo bet gant ur morhoc'h.

Mari Koig, neuze, evel m' he dije respontet d' ur goulenn mut, ha lavarout :

- N' eo deut c'hoazh eus ar mor nemet va zad ha neuze Joz ha Per-Yann. Ne gredan ket, koulskoude, e talefe mui Herri.

Kemer a reas Tina Garo ar vouezh an diseblantañ ma c'hellas, da respont :

- Me zo o vont d' ar c'hal. Ma welan ho preur, e lavararin dezhañ eo gortozet er gêr.

- Hag oc'h sur, eme Vari, en ur c'hoarzhin, an taol-mañ, a galon vat, hag oc'h sur e viot selaouet, ur sadornvezh d' abardaez evel hemañ ! Marteze emañ dija e ostaleri Chann Dilosker.

25

Sklintinat a reas ivez c'hoarzh Tina, gant he mouezh yaouank, hag hi ha fustañ, dre ar Park-Laou, war-du ar Beg.

A heul-da-heul, gant un tammig muioc'h a zifrae, rak savet e oa un avelig-mor gant an abardaez, hag al lano, ez akosteze ar bagoù.

Tregerniñ a rae an dig gant boteier ar vartoloded o tougen o feskerezh da di ar varc'hadourien ; ha jolori ar Beg a 'n em astenne, dre ma touare an akipajoù, d' ar Park-Laou, da Greiz-Kêr ha d' ar Palud.

Da lodañ 'z eus, ar sizhun-mañ, hag emeur dija o lidañ, en ostalerioù, gousperoù pardon Plomeur, pardon kozh ar Gellvêneg, gousperoù gant boeson, dañs ha kan, ha kann.

Piltrotat a rae Tina, dre douez ar vartoloded hag ar bigoudenned, hed-a-hed an dig.

- Salud ! Korantinig, a daole ar baotred, c'hwez ar pesked ganto.

- O redek da glask kaoteriad, Rozenn ?

- Nann, te ! O vont da glask he c'hailh...

N' oa nemeti ha ne oueze ket e oueze an holl davet piv e rede.

- Du-hont emañ, Tina, e penn an dig.

Harpet e gein ouzh gwern vras e vag, moñsell-ouzh-mañsell gant bagoù all, o vrañsellat a-stok-fri ouzh an dig, e oa Herri Koig o tic'henaouiñ ouzh ar mein-ben gwemonek. Ne save ket memes e zaoulagad war ar merc'hed, harpet war ar spled-houarn, paret o selloù war bont ar bagoù, ha war an dour goloet gant brilli flastret. Ne rae ket muioc'h a van gant kann al laboused-mor, en oabl ha war c'horre an dour, evit fest ar pesked.

- Herri !

Sevel a reas ar paotr e benn. Hag e voe laouenaet e zremm.

- Tina !... Deut oc'h ivez !

- Brillli forzh pegement, Herri ?

- Tri c'hant dousenn eus c'hwezek lur, hag un tri-ugent dousenn bennak eus ar re a ziv nozvezh, eus unnek lur ha dek (1).

- N' emaac'h ket fall ganti, neuze.

- Evel-se emaomp. Nemet n' omp ket diskuizh. Bec'h a zo bet gant ar roeñvioù bras.

(1) Ar chifrou-mañ, evel an danevell, a zo mat evit ar bloazvezhioù 1919-1920. - Y. D.

26

« Taolit din ho paner, Rozenn. Poent oa deoc'h dont. Aet e oa tout ar pesked. »

Rouedoù he doa mamm Dina e bag an eontr Postolig, ha kaoteriad evit netra. Teurel a reas he faner d' ar moust, memestra.

- Hag a nevez er Gellvêneg, eme Herri.

- Netra. Atav ar memes ton... Eo ! Da genderv Joz a zo un uz ar c'haout anezhañ. Ne denn ket e bavioù diouzh an ostaleri du-mañ .

- Penaos ! Ne da ket d' ar mor ?

- Nann ! Pevar devezh a zo emañ en aod gant e viz. Evit teñsal, avat, n' en deus ket e bar.

Dirollañ a reas Herri da c'hoarzhin. Ha kavout a reas Tina n'oa ket bet bravoc'h biskoazh he den yaouank, harpet aze ouzh e wern, en e zilhad-mor.

- Kontit din ho poanioù, emezañ.

N' oa ket ar vugale baour evit dioutiñ an tourmant ruz a oa dirollet, div eur bennak a oa, e kalon Joz Bideo, goude abadenn feunteun Kerleger.

Pa voe aet Tina diwar weled, en ur rod-heol, a-dreñv laezenn Keristum, ha kaer-dudius, un trelat, en doa kavet neuze ar plac'h yaouank, en doa stlapet rust ouzh ar vein danvez e valaennoù, ha dic'hastet un taol-troad outañ gant e chouchen melen-vi, ha daoulagad wenn en e benn. Lammet en doa e galon en e greiz. Skrijet en doa penn-da-benn e gorf.

- Peul ! emezañ. Peul ma 'z on ! Filañ dirak un taolig teod ?

- Iche ! tamm, traoù. Ha gouzout a rit petra 'rit ?... Koukou ! Ya ! Koukou !... Penaos ? Ober ar fae warnon-me, Joz Bideo ? Ha gant ur fall-tra, ur c'hwitouzenn e-giz merc'h Chann Dilosker ? Piv a gavo gwelloc'h egedon-me, er Gellvêneg hag e Lechiagad ouzhpenn ?

Dic'hwezhañ a reas, en ur sellout en-dro, gant ur skrignadenn d' e javedoù, ouzh e hordad beugel, stlapet ouzh moger ar feunteun, hag ouzh e votoù-koad melen.

- Piv a glask va dibeskiñ ? Tennañ a reas adarre war e anal.

- Koig, va c'henderv, me gav eo re hir ho fri e ti Chann Dilosker. Ar grilhed-traezh, ar c'hafe mat a ya en ho tremm. N' am boa ket taolet kont war an dra. Beilhañ !... Lod o deus un teod flour da lakaat un ael da vont da ziaoul. Ya !... War zigarez int bet er skolioù. Lod all, avat, o deus daouarn reut.

Daoulinet en doa da evañ dour. Ha skler **oa an** dour, e-giz lagad an naerenn. Ar golvenig, bet spontet gantañ, a oa nijet diouzh e vodad strouezh, hag a c'hwitelle bremañ war skourr ur wezenn evlec'h.

27

- Redit ! nijit ! kefelegez. Mes, me c'houlenn mont gant ar foeltr, ma ne zeuit ket em roued.

Herri, eñ, n' oa tamm ebet heñvel ouzh Joz. A-boan brasoc'h eget e genderv divkoaz dezhañ ivez, mistroc'h e oa ouzh e zargreiz, ha gwevnoc'h, gant un tal ledan ha daoulagad bliv. Pezh a zo mat da c'houzout ivez, bet e oa e skol ar veleien, e-pad daou pe dri bloaz, e Jersey pe e-barzh an Enez Vras. Drailhañ a rae kaoz gant ar Saozon, pa zeuent er vro. Forzh piv a ouie an dra. Hag evit teodatañ, hennezh a oueze. Ur paotr desket ha speredet. Hogen, piv a welas mab ur martolod o vont da veleg ? Trec'het he doa gouenn. Ha kemeret en doa en-dro ar vicher. Martolod, evel ar re all.

- Setu, Chel ! emañ ho prilli aze ! a daole ar moust, ur c'hrenn-baotr e fri savet ha pikouz, en ur stlepel ar paner aozilh war diri an dig.

« Brillli eus ar ouenn. Me zo o vont da lavarout deoc'h penaos aozañ anezho. »

- Stank da veg, lor-mor, a droc'he ar C'hoig. Kemer da vouneiz, peg en ur sailh, ha taol dour war ar pont.

- Iche ! a responte ar moust. Emañ krog ar c'hi du ennout dija ? N' eo ket me Joz Bideo.

- Petra, orio ?

Fraoñval a reas, taol war daol, pevar baner goullo en-dro da zivskouarn an divergont. Dres, pa oa o vont da stouiñ a-dreñv ur rollad fard, ez eas unan all da skeiñ e-kreiz etre e ziv feskenn gant kement a dizh, ma cheñchas penn evit penn war ur bern rouedoù gleb.

- Del ! Fall-tra !

Hag ar baotred o c'hoarzhin. Ha Tina, skiltroc'h egeto.

- Mezh d' ar paotr ! Mezh d' ar paotr ! e lavare dre he c'hoarzh, hag edo o vont war he zreid prim.

- Rozenn, gortozit ac'hanon ! a hopas Herri.

Kroget e oa ar yaouankiz da stlepel sailhadoù dour war ar pont, ha reoù all da skubañ gant nerzh. Tapet en doa Herri ur valaenn, ha mont a rae dezhi kalonek. Gwagal a rae ar gwelini, ur vouzarenn. Ha kavout a rae da Herri e tenne Tina d' an evned-se, gwenn o fluñv, a leunie, gant o yudadeg, porzh ar Gellvêneg, eus kerreg Fautez da Lost-an-dro. A-rez moñselloù ar bagou o vont da laez, e tro ar gwerinier, luskellet goustad war an houlajenn hir, e-teid an aod ma tarzhe gorrek al lano, al laboused-mor a vlenie o nijadeg heneuz, a bigne, a ziskenne, a rik e war un askell, ur c'haer o c'horoll, e sklerijenn an heol o tiskenn.

28

Deut e oa en-dro an dougerien diouzh ti ar marc'hadour. Ha keit ha ma oad da vat oc'h echuiñ lakaat urzh er vag, e oa tabut moan diwar-benn gouzout hag aet e vijed er-maez arc'hoazh. Ar yaouankiz a lavare : nann !

- Peskerezh a zo, a lavare ar baotred kozh. N' oar den pegement a goll a vo, o tremen ar sul en aod.

- Grit evel ma karot, a daolas Herri e-kreiz ar bern. Me 'ya d' ar pardon warc'hoazh.

- Ha ni, neuze 'ta ! a lavare ar yaouankiz, c'hoarzh leizh o dent gwenn. D'ar mor, da zeiz pardon Plomeur ? N'emaoc'h ket mat, paotred kozh ? It d' ar

mor ! Ni, ni 'z ay d' ar pardon.

Krosmolat a reas ar re gozh un dra bennak evel-en : - « Ar fae a rit war an argant evit redek war-lerc'h ar blijadur ». Hag ar mestrouer a hopas :

- « Kas da laez ! » Hag e skopas e chik-butun en e voned.

N' oa ket ret d' an holl akipaj mont betek Lost-an-dro, al laez ma veze eoriet ar bagoù. Sammañ a reas Herri Koig, ha paotred all, war o divskoaz, o sac'h gwenn, o c'hapod bras, o botoù-kenou, hag un nebeut rouedoù da gas d' ar gêr da zresañ, ha pep a gaoteriad ouzhpenn.

Ha tre ma save ar baotred gant an diri davet an dig :

- Tina, ha friko a vo, pelloc'h ?

- Dont a ra ho kailh, Rozenn.

- Genaouerien ! a responte ar plac'hig, chichant e-giz heol miz Mae.

- Ur gwall-labour eo bet, a lavaras Herri, en ur zegouezhout d' e dro. Moc'h am eus tapet em daouarn gant al lorgnez a roeñvoù bras-se... D' ar gêr !

Kaer e oa an abardaez, gant an heol o vont da guzhat a-dreñv tour-tan Penn-Marc'h, en un oabl alaouret, gant kri ar gwelini, trouz boud ar boteier-kenou war an dig, c'hoarzhadegoù ar merc'hed, bal bras ar sailhadoù dour hag ar skubelennoù o walc'hiñ pontoù ar bagoù.

Ha lavarout Herri da Dina, en ur vont penn-da-benn an dig :

- Setu, neuze, Tina, n' emañ ket ar c'hizhier bihan er gêr ?

- Joz Bideo, da genderv, nann ! nann ! ha nann !

- Petra an diaoul...

- Te ! te ! te !... N' ouzez netra... » Fuc'hañ a rae ar plac'hig. « O tont eus ar mor, n' out ket evit gouzout. »

- Neuze ?

- Neuze ?... E feunteun Kerleger da gentañ. En em gavet omp, hon daou. Din eo bet aes, du-hont, e gas da glask birinig. En ostaleri avat, du-mañ, e ti va mamm, Herri...

29

- Ya ! E ti Chann Dilosker ?

- Kaoz dezho, ha luchadennoù, ha c'hoarzh hegas. Ken eo kouezhet, a-dre va daouarn, ul litrad bent-pastilhez. Ha droug em mamm, m' hel lavar dit. - « Dorn-yod ! » he deus lavaret din va mamm, ha digêret ac'hanon da gerc'hat pesked. Ha divellañ a rae ar re gozh sot, hag ar re yaouank, sotoc'h c'hoazh, rak leun eo an ti, ha termaji ganto, gwashoc'h eget e Pont 'n abad, da bardon Treminou.

- Mezo int holl, evel just.

- Mezo, mezo... Evet mat, lakaomp ! Mes, goulenn ac'hanon, e-giz-se, da zimeziñ !... Pevar chigarder, Lan Verrou, Yann-Vari Palud, hag e c'hoarzhent leizh o dent genaouek, breur Trifina hent Poull-Gwenn, ha Kaoudal gaol hir, o 'n em ginnig da vezañ paotred a enor.

- Ur spont eo, Rozennig paour...

- Ha te ! Te a ra goap ivez.

- 'Ran ket ! Lavarit din petra en deus lavaret va c'henderv.

- N' oa ket diwar e sistr, eñ. Ha pezh a lavare, pezh a lavarent ?... - « Merc'h ar Roue Gralon... Ar briñsez flour... Rozenn ar Gellvêneg... Ma n' eo ket bet droch va mamm o reiñ din ar seurt lesano... Poent eo dimeziñ ar briñsez !... » Hag an teñser e fri krok, da gamarad Lan Verrou, ar cheul anezhañ, a rae din allazig war va dorn. - « Rozenn, emezañ, setu amañ ho Priñs Ruz. Peur e vo graet an eured ? » Hag e lakaas va dorn e dorn Joz Bideo. Azezet oa hemañ war an hanter eus kador ar fri-krok, e-tal ar prenestr. Ken am oa mezh. Ober a rae da genderv toull-foulin gant e werennad gwin gwenn. Stardañ a reas va dorn. - « Pa garot ! » emezañ. Ha ne c'hoarzhaz ket. Ha me ha respont, dirukel. - « Pa gari ! »; Neuze eo e kouezhas diouzh va dorn all ar voutailhad bent-pastilhez...

Lorc'h a oa e korf Herri o welout Tina o tommañ diouti hec'h-unan, gant he c'hounnar. Droug a oa enni, anat.

- ...Bet en deus ar Bideo-se e sac'h, e Kerleger. Goulenn bremañ divskoaz ar re all d' en dougen ?... Hennezh n' eo gour.

Bouchet en dije Herri d' e vuiañ-karet, kement a vlaz a gave gant ar gaoz. C'hoant bras he doa ar vouilhezic, eus he zu, kregiñ e brec'h martolod he c'halon, ha mont gantañ dre ar gazell dirak an dud, d' an holl da c'houzout da biv e oa he c'halon. Nemet e samm en doa ar paotr dija gant e draoù-mor. Ha neuze, n' o deus ket an dud ezhomm da c'houzout.

30

Lavarout a rae Herri gant douster.

- Ni zo pemzek, du-mañ, Tina. Ha n' on ket aet c'hoazh d' ober va amzer.

- Ya !... Toulon pe Vrest, pe n' ouzon ket, a zo pell. Ha hir vo tri bloaz da c'hortoz.

- Gwelout a rit, Tina... Joz, eñ, gant e bevar bloaz war 'n ugent, a zo ur paotr a feson, ha mestrouer, mestr en e vourz. Feukiñ a rae ar vigoudenn.

- Beñ ! Un den kozh e-giz-se ? N' em eus ket ezhomm ouzh un den kozh.

- Aze 'z eus gwenneien, hag ur vag vras all war an chañter.

- N' out ket gwelloc'h o kaout argant, ma n' out ket eürus.

- C'hwi zo ur sevenn, Rozennig.

Treuzet ganto ar blasenn, e oa erru an daou zen yaouank; dre vont ha komz, ha koll ar re all en hent, hep m' o devoe taolet evezh zoken, betek korn-tro ru an iliz.

- Deus betek du-mañ, Herri ! Ur bern traoù em eus da lavarout dit. Me lakay dit ur banne.

- Bremaik, Rozenn. Gwelet em eus ac'hanoc'h. An traoù-mañ d' ar gêr, ha goude ar bailhad dour d' ar martolod da gas kuit c'hwezh ar pesked.

- Gant ma voucho din ! a soñjas neuze Tina.

Tarzhañ a rae Herri gant ar c'hoant bouchañ d' e ostizez. Ret anzav n' eo ket evit ober e doare un dra ken plijus, gant, ouzh un dorn, e banerad brilli, ha, war ar skoaz, e votoù-kenou hag e gapod sired, ha, war ar skoaz all, ar rouedoù foeltret; gant e zorn evit o derc'hel. Ha Gellvênegiz gant o mone-done, e-giz tarzhen-dro d' ar c'herreg.

Ne voe ket evit mirout, memestra.

- Plac'hig, astennit ho muzelloù !

Distagañ a reas, prim, ur pok-trouz war bep jod d' ar cheorenn, ha,

trummoc'h c'hoazh, unan all war he beg, ur pok martolod.

- O ! paotr fall ! N' ac'h eus ket mezh ?... Dirak an dud, e-giz-se !...

Ha c'hoarzhin a reas ar plac'hig gant ar blijadur, en ur fustañ d' ar gêr,
goude bezañ graet un dro warni hec'h-unan.

Diwar Rozenn ar Gellvêneg.

An Toull Kurius hag ar C'horf hep Ene

(Kontadenn bobl)
gant M. KLERK

-I-

Bez' e oa ur wech un Aotrou hag en doa tri mab. En em gavet e oa intañv abred, met savet en doa e vugale ervat, hag e vugale a gare ivez o zad. Hervez giz an amzer-se, an tad en doa prenet d' e baotred pep a loen-kezeg ha pep a gi hag e c'hellent mont da bourmen dre ar c'hoadoù hag holl douaroù o zad... Hogen ar mab-henañ, un deiz a lavaras d' e dad :

« Ma ! emezañ, va zad, ma vije c'hwi a vije kontant d' am gwelout o vont d' ober un tamm tro, da vale bro, rak hep dale, evel ma ouzoc'h, e vin galvet da vont da servijiñ ar Roue hag e vin evel ur genaoueg, pa n' am bo gwelet seurt ebet, nemet ar pezh a zo amañ en-dro d' ar c'hastell...

- Ma ! a respontas e dad, p' ac'h eus, va faotr, ar soñj da vont, me ne harzin ket ouzhit. Dre-se eta, kerzh pa gari, kas da loen-kezeg ha da gi ganit ha kemer arc'hant ar pezh a santez ac'h eus ezhomm d' ober da dro, met 'benn un deiz hag ur bloaz amañ, e vanko dit distreiñ d' ar gêr, pe e kontin e vi marv.

- O, va zad, emezañ 'benn bloaz amañ, ma ne vezan ket distro amañ war va c'hiz, e c'hellot lavarout hardizh e vin marv. »

An deiz war-lerc'h beure mat, sed hor paotr o tibrañ e varc'h, o kemerout arc'hant, ar pezh a santez kaout ezhomm d' ober e dro hag o c'hervel e gi ; hag heñ war gein e varc'h en ur lavarout « Doue a-raok ha me war-lerc'h ! »

An hent kemeret gantañ a oa hir evel an holl heñchoù, met gwashañ pezh a oa, ne gavas ar beajour ti ebet 'lec'h ma tremene, a-hed an deiz. A-wechoù e trote, a-wechoù e taoulamme, a-wechoù ez ae d' ar paz. Erru 'oa skuizh-marv war gein e aneval hag an noz a dostae, hep na wele netra, nemet parkoù, koadoù ha Pradoù. Pa oa erru serr-noz, e welas un alez : « Arsa ! emezañ, 'lec'h ma vez alezioù e kustum bezañ ivez ur pezh-lojeiz bennak... » Hag heñ en alez. A-vec'h m' en doa graet ur c'hard-lev ma welas ur gouloù bihan en un ti. Lakaat a reas e varc'h da drotal hag e berr-amzer ec'h en em gavas e-kichen ur porzh. P' edo oc'h antren er porzh e tistonas ar pavez gant henn e loen-kezeg hag e tiredas ur plac'h kozh war dreuzoù an ti : un euzh e oa he gwelout daoust d' an deñvalijenn, rak keit e oa pep dant dezhi en he genou ha va brec'h.

32

« - Salud, paotr yaouank, emezi.

- Salud deoc'h, maeronez. N' ho pije ket ar vadelezh mar plij da lojañ ha da vevañ va loen-kezeg ha me evit an noz, rak skuizh-brein ez on ?

- O ! eo ! eme an hini gozh, me ho pevo hag ho lojo gant kalz a blijadur. Diskennit diwar gein hoc'h inkane hag her roit din, ma 'z in d' her c'has d' ar marchosi. »

Pa zistroas, goude bezañ kaset ar c'hi hag al loen-kezeg d' ar marchosi, e pedas ar paotr yaouank da vont en ti, hag e lavaras dezhañ azezañ. Neuze e tommas ur bannac'h soubenn ha trempañ div skudellad soub :

« Dalit, emezi, paotr yaouank ha debrit ho koan ha bremazonn e tiskouezin deoc'h ho kambr. Menel a reas souezhet ar paotr pa voe diskouezet e gambr dezhañ, o welout e oa un ugent gwele bennak enni !

- Jezuz ! maeronez, emezañ c'hwi hoc'h eus kalz a dud amañ dindan ho tomani.

- Nann, eme an hini gozh ; me, va faotr a zo amañ va-unanik hag a gav berr an amzer pan erru unan bennak evelout-te d' am gwelout gwech en amzer ! » Hag hi er-maez eus ar gambr en ur lavarout nozvezh vat dezhañ. Ne oa ket bet pell ar paotr ouzh en em ziwiskañ, hag eñ en em silañ er gwele nesañ dezhañ ha menel kousket war an taol.

Uhel a oa an heol pa zihunas antronoz vintin : e-tro dek eur e oa. « Ma ! emezañ, kousket c'hwek em eus, met poent eo din hastañ abalamour din da vont en hent adarre. » Ne oa ket bet pell 'vit gwiskiñ e zilhad ; hag heñ da vont d' an traoñ. Pa erruas en traoñ e oa prest ur skudellad soub dezhañ : « Demat, paotr yaouank, eme an hini gozh, en ur skrignal e skilfroù hir. 'M eus aon hoc'h eus kousket ha kousket-mat... Achanta ! debrit ho tijuni ha goude e teuot ganin da welout va zraoù 'raok ma 'z eot kuit ».

Kentañ ma voe diskouezet dezhañ e oa ur gambr hag a oa enni he leizh a zilhad : dilhad-martoloded, dilhad merc'hed, dilhad aotronez, dilhad a bep seurt : « Hola ! emezañ, maeronez, c'hwi 'lavare din, n' eus nemedoc'h hoc'h-unan en ti hag hoc'h eus kement-se a zilhad ?

33

- Ya ! va faotr, kozh ez on, met evit dilhad ne vanko ket din keit ha ma vin war an tamm douar-mañ . »

Serret e voe dor ar gambr-se ha digoret un nor all : ur gambr a oa eno, hag enni leun a voneiz : arc'hant gwenn, aour melen... C'hoazh e oa ur gambr all lec'h ma oa bet o kousket, met o vezañ m' hec'h anavez, ne oa ket ezhomm d' hec'h addiskouez dezhañ.

« Arsa ! eme an hini gozh, va faotr ; bremañ ez an da ziskouez dit va jardin. » Ar jardin-se a oa enni nav devezh-arat, muriet e oa tro-war-dro, hag ur bern bokedoù eus ar re gaerañ a zispake eno dindan an heol o livioù a bep seurt. « Petra ! maeronez, eme ar paotr yaouank sebezet o welout kemend-all. Ne root ket din da grediñ n' eus nemedoc'h hoc'h-unan da labourat kement-se a zouar !

- O, va faotrig kaezh ! Me 'gav berr an amzer o labourat an douar-se war va flaen ! Met ar pep kaerañ 'zo n' ac'h eus ket gwelet c'hoazh : hennezh eo an Toull Kurius.

- An Toull Kurius ? Biskoazh c'hoazh em buhez n' am boa klevet komz dioutañ...

- Neuze, emezi, va faotr, bremazonn, ez ez da welout dirak da zaoulagad ar pezh n' ac'h eus gwelet biskoazh c'hoazh ! » Hag an hini gozh d' hen kas etrezek ur puñs hag a oa un nor warnañ ; hag o tapout ur pezh-alc'houez en he godell hag o tizalc'houeziñ an nor hag ouzh he digeriñ e lavaras d' ar paotr yaouank : « Sell, va faotr ! Kerzh aze bremañ war da vrusk ha sell d' an traoñ. Da gentañ ne weli netra, nemet teñvalijenn, met a-benn ur pennad amañ e weli traoù kaer ! »

Harpañ a eure eta e vrusk war varlenn ar puñs, met ne oa ket a-walc'h kement-se d' an hini gozh : « Ret e vo dit, emezi, lañsañ muioc'h war da gorf ha distokañ da dreid diouzh an douar ». Hep an disterañ disfiz e reas evel ma lavare ar wrac'h kozh dezhañ ; met kerkent ha ma voe distok e dreid diouzh an douar, homañ a dapas krog ennañ hag hen taolas a-eilpenn er puñs.

...C'hwec'h miz a dremenas, ur bloavezh a dremenas ha keloù ebet eus ar mab-henañ...

* * *

An eil eus ar baotred a zeuas c'hoant dezhañ ivez da vont da vale bro ; hag un deiz ez eas da gaout e dad da c'houlenn aotre digantañ da vont ivez d' ober un tamm tro war ar maez.

34

« Feiz ! eme e dad, da vreur am boa asantet gantañ mont, ha dre-se n' hellan ober dit nemet evel m' am eus bet graet dezhañ. Mar emañ da soñj mont da

vale bro, kerzh ha kas ganit da varc'h, da gi hag arc'hant ar pezh a santez kaout ezhomm evit ober da dro... »

Hag ar paotr war-raok. Siwazh dezhañ ! e kemeras ar memes hent hag e vreur henañ. Da serr-norz ec'h en em gavas e ti an hini gozh. Spontet e voe avat, pa zeuas homañ da zigeriñ an nor dezhañ, o welout keit pep dant dezhi evel brec'h un den : « Na spontit ket, priñs yaouank ! emezi, dirak va dent, rak me 'zo erru kozh-bras... »

Pa ne oa ket evit mont da lec'h all da glask lojeiz da dremen an noz, e renkas gwaskañ war e spont ha lavarout :

« Daoust ha tu a vefe, maeronez, emezañ, da gaout lojeiz d' am march, d' am c'hi, ha din va-unan, rak skuizh-marv ez on ?

- Ya ! ya ! eme ar wrac'h kozh ; da zebriñ ha da evañ az po : diskenn diwar gein da roñse ma 'z in d' her c'has d' ar marchosi ha goude-se e teui ganin-me d' an ti. »

P' en doa bet debret e goan e voe ambrouget d' ar gambr a oa bet diskouezet d' e vreur henañ ; lavaret e voe dezhañ kemerout ar gwele a garje ; hag o vezañ ma oant holl memes tra, ne chomas ket pell da dortañ hag heñ en hini nesañ dezhañ. Kousket a eure evel ur broc'h : un dek eur bennak e oa an deiz war-lerc'h ar beure, pa zihunas. Gwiskiñ a eure e zilhad, dont d' an traoñ ha saludiñ an hini gozh :

« Kousket-mat ac'h eus, va faotr, emezi ?

- Eus ar c'hentañ, maeronez, emezañ.

- Tosta amañ neuze, rak amañ ez eus ur skudellad soub prest evidout. » Ne voe ket pell o loñkañ e soub hag an hini gozh a lavaras dezhañ : « Bremañ, va faotr, ez an da ziskouez dit va zraoù kent dit mont ac'han ». Diskouezet e voe dezhañ ar c'hambrou hag an dilhad ha goude-se ez ejont d' ar jardin : ur jardin gaer e oa honnezh meurbet.

« Bremañ, eme an hini gozh, em eus diskouezet dit tout ar pezh am eus, nemet an Toull Kurius.

- Hola 'vat ! eme ar paotr yaouank, biskoazh n' em boa klevet c'hoazh kemend-all... An Toull Kurius ?

- Ya ! va faotr, aze ez ez bremañ da welout dirak da zaoulagad ar pezh n' ac'h eus gwelet c'hoazh biskoazh ! » Hag an hini gozh da zizalc'houeziñ dor ar puñs ha da lavarout : « Kae war da vrusk ha sell d' an traoñ. Da gentañ ne weli nemet teñvalijenn, met goude ur pennad e weli traoù kaer, kaer-meurbet ». Met hi ne oa ket bet liboudennek evit kregiñ en e dreid hag evit her skeiñ er puñs. Ha setu aet daou vab d' an Aotrou.

35

* * *

Ar mab yaouankañ hag a gare kalz e vreudeur, a rae poan dezhañ gwelout ne zistroe hini 'bet anezho d' ar gêr. Pa ne bade mui gant e boan, ez eas un devezh da gaout e dad da c'houlenn digantañ aotre da vont ivez da vale bro ha da glask e vreudeur : « Me, va faotr, a respontas e dad, a zo erru kozh, ha dambrest e vin gourvezet em bez e-tal da vamm ; ne chom ganin nemedout-te d' am frealziñ ; met m' ac'h eus c'hoant memes tra da vont da glask da vreudeur, ne harzin ket ouzhit a vont. Kas ganit da varc'h, da gi hag arc'hant evel da vreudeur, ar pezh a santez kaout ezhomm d' ober da hent ».

Antronoz vintin, ar mab yaouankañ a zibras e varc'h, hen bridas hag a c'halvas e gi, hag en hent... Dre eurvad e reas an hevelep hent gant e vreudeur all. En em gavet er porzh, e teuas an hini gozh da zigeriñ an nor evel hec'h ordinal. Ar paotr p' he gwelas a reas ur souz a-dreñv : « - Salud, priñs yaouank,

emezi. » - « Salud, maeronez a respontas ar paotr yaouank, en ur waskañ war e spont muiañ ma c'helle. Ha tu a vefe da vezañ lojet, mar plij, ha da gaout da zebriñ d' am c'hi, d' am aneval ha din va-unan.

- Ya ! priñs yaouank ; deuit en traoñ diwar hoc'h inkane ha me 'ya d' her c'has d' ar marchosi.

- Digarezit ! maeronez, na dostait ket d' am inkane, rak hemañ 'zo drouk...

- Ma ! eme an hini gozh, kasit anezhañ hoc'h-unan neuze d' ar marchosi ! » Hag hi da dennañ div vlevenn eus he fenn ha kerkent e oant div chadenn-houarn. « Setu aze, emezi, unan evit ho ki hag unan all evit ho loen-kezeg. »

Pa antreas er marchosi ec'h anavezaz kezeg da chas e vreudeur : « O, Va Doue, emezañ, amañ eo chomet va breudeur, ha me, nemet ur chañs a vefe, a varvo amañ ivez ! » Pa oa deuet en ti, a-benn neuze e oa prest div skudellad-soub hag e oa bet lakaet unan a-geñver dezhañ en un tu eus an daol, hag un all d' an hini gozh evel just, en tu all. Ma soñjas raktal penaos sur a-walc'h, e oa ampoezonet e soub dezhañ. Ha petra a reas - pa oa troet kein an hini gozh - nemet cheñch skudell. Met evitañ da vezañ cheñchet skudell, e oa torret e naon ha ne oa ket evit debriñ e skudellad soub.

« Ma ! va faotr, eme an hini gozh, bremazonnik e lavares din e oas marv gant an naon ha bremañ e welan ne zebrez tamm.

- Feiz ! nann ! maeronez. Aet eo drol va fenn : abaoe ar beure-mañ n' am boa debret tamm ha pa 'z on bet diskennet diwar varc'h ez eo bet mezevennet va fenn, ken ne don ket evit debriñ.

36

- Ya ! va faotr, gwelout a ran ez out skuizh, ha dre-se, me a ya da ziskouez dit da wele. »

Pa voe digoret ar gambr ha pa welas kement-se a weleoù :

« Jezuz, emezañ, Gwerc'hez Vari ! Ar gweleoù-mañ a zo sañset da vezañ tud all enno tout ?

- Nann ! va faotr, ar gambr-mañ ne vezo den nemedout-te ; choaz an hini a gari anezho, rak ar re-se a zo tout memes tra. » Hag an hini gozh a-raok.

Ar paotr yaouank chomet e-unan a skrapas kostez e benn o soñjal e renke bezañ er gweleoù, aotenoù pe un dra bennak all. Pouezañ a reas war ar gwele nesañ dezhañ ; treiñ ha distreiñ a reas an holl dapisoù a oa warnañ ; na seurt ebet ne gavas ; na seurt ebet ne welas : « Sur a-walc'h, emezañ, a-greiz an noz ec'h erruo unan bennak aze d' am lazhañ ». Met a-raok en em astenn, e prennas dor ar gambr hag e harpas outi ur gwele c'hoazh : « Evelsedik, emezañ, ne zeuio den ebet er gambr a gement n' o c'hlevfen ket ! » Neuze ec'h en em astennas war ar gwele hep en em ziwiskañ...

Tremenet e oa an noz, na den ne oa bet, evel just, o herzel outañ da gousket.

An deiz war-lerc'h ar beure, ne voe ket gwall-ziwezhat o sevel : kerkent ha strink an deiz :

« C'hwi, va faotr, eme an hini gozh a zo gwell-abred. 'M eus aon n' hoc'h eus ket kousket mat ?

- Feiz ! nann, e gwirionez, maeronez ; rak poan a oa deuet din em fenn ha poent eo din mont adarre en hent.

- Hola ! hola ! eme an hini gozh, a-raok ma 'z eot ac'han, e vo ret deoc'h debriñ ho tijuni ha neuze e teuot ganin da welout va zraoù ivez. » Kaset e voe d' ar c'hambrou evel e vreudeur. Pa veze digoret un nor, e laoske an hini gozh da antren da gentañ, gant aon n' en dije bet ur flipad bennak eus drek an nor. P' en

doe gwelet ar pezh a oa er c'hambrou, ar wrac'h kozh a c'hoantaas her c'has da welout ar jardin. O welout ur jardin ken bras hag heñ o lavarout dezhi : « O va Doue ! va maeronez ! c'hwi hoc'h eus lavaret din ne oa nemedoc'h hoc'h-unan amañ er c'hastell-mañ, hag em eus gwelet dija ur bern dilhad en ur gambr deoc'h ha gwelet ar jardin ker bras-mañ ha kempennet ken mat !

- Ha koulskoude, va faotrig kaezh, eme an hini gozh, nan eus nemedon va-unanik amañ ha me a gav berr an amzer o tont da labourat ar jardin gwech ha gwechall... Bremañ em eus diskouezet dit kement am eus, nemet an Toull Kurius. Aze ez ez da welout kaerañ traoù ac'h eus bet gwelet dirak da zaoulagad biskoazh. » Hag int etrezek ar puñs. An hini gozh a zizalc'houezas an nor hag he digoras hag a lavaras dezhañ : « Sell, va faotr, n' ac'h eus d' ober nemet mont aze war da vrusk ha sellout d' an traoñ hag e weli kaerañ traoù ac'h eus bet gwelet dirak da zaoulagad biskoazh ».

37

Heñ avat, ne rae nemet skrapat kostez e benn : « A ! emezañ, maeronez ! lavaret mat en doa va zad din, a-raok m' am boa kuitaet ar gêr ». - « Servij ket dit, va mab, mont da vale bro, peogwir nan out ket d' ober netra nemet a bop ma vez diskouezet dit... »

« Damenn ; va faotr kaezh : mont war da vrusk war varlenn ar puñs ha sellout d' an traoñ !... »

- Petra 'servij deoc'h, maeronez, lavarout din kement-se, peogwir nan on ket evit ober, ken ho pezo diskouezet din... » Neuze ar wrac'h kozh o tostaat d' ar puñs, o lakaat he daouarn war ar varlenn hag o lavarout dezhañ : « Sell, va faotr ! Evelsedik e vez graet. » Ar paotr yaouank a dostaas ivez hag a reas just evel an hini gozh : « Ret eo dit, eme houmañ, distokañ da dreid diouzh an douar ! »

« Añ ! maeronez, graet em eus evel m' hoc'h eus diskouezet din ! » An hini gozh a yeas a-nevez war varlenn ar puñs hag a zistokas he zreid diouzh an douar, en dro-se. Ar paotr avat, hag a oa en he c'hichen, ne oa ket bet liboudennek o tapout krog en he zreid : ha ploup hag er puñs...

Edo o vont da serriñ an nor, pa ziflukas eus goueled ar puñs ur briñsez koant hag a lavaras dezhañ : « C'hwi, emezi, Priñs yaouank, hoc'h eus va dilivret, rak pemp kant vloaz 'zo abaoe ma 'z on aze dindan gazel-gae gant ar wrac'h kozh divalav-se » Ar paotr a chome eno sebedennet ; ne ouie ket petra da soñjal na da ober : « Ha ret e vo deoc'h, emezi c'hoazh, va c'hemerout da bried ».

« Gwall-gontant e vefen priñsez, met a-raok da se e lavarfen deoc'h em eus amañ daou vreur er puñs don-mañ. Daoust hag-en ez int marv ?

- Pegeit 'zo, eme ar briñsez, abaoe ma 'z int aet eus ar gêr ?

- Feiz ! va breur hanter-henañ a zo tremen bloaz, ha va breur henañ a zo daou vloaz...

- Deuit neuze, eme ar briñsez, ganin d' ar c'hastell, rak ar c'hastell a zo dimp-ni. Gouzout a ran pelec'h emañ an alc'houezioù. » Hag int d' ar c'hastell ha da ziskenn dre ur viñs ken n' en em gavjont gant un nor-houarn. Ar briñsez a gemeras an alc'houezioù a oa ganti, hag hi o tizalc'houeziñ hag o tigeriñ an nor, hag o lavarout d' an den yaouank : « Antre aze bremañ ha gwel hag-eñ ec'h anavezi da vreudeur ».

38

« O ! emezañ, ar wrac'h kozh a zo war-benn !

- Ruilh anezhi alese, eme ar Briñsez, rak ar pezh vil-se en deus bet va lakaet da c'houzañv kalz a boan. » Ne oa ket bet renket hen pediñ div wech ; hag e sachas war an hini gozh ; met he fenn a oa chomet war ur breur dezhañ, sac'het war-bouez he dent. Hag eñ da reiñ taolioù-boutoù dezhi, ken na strinke he dent tri pe bevar asamblez. E vreur hanter-henañ a oa neuze war-benn, hag ar paotr yaouank her sachas er-maez. Neuze ar Briñsez a astennas ur ballenn gaer hag e voe diwisket eno an hini marv, en noazh. Ar Briñsez a lavaras d' ar paotr yaouank en ur reiñ

dezhañ un traet, frotañ anezhañ en un tu hag hi a raje er gostezenn all. Benn un hanter- eur pe war-dro, a-forzh derc'hel da frotañ, e tigoras an den marv e zivrec'h en ur lavarout : « Me, va Jezuz, am eus kousket mat ! » - « Ya ! eme e vreur, kousket ac'h eus sur, hag hor breur a zo aze e goueled ar puñs a zo kousket mat bepred. » Diskleriañ a reas dezhañ ar pezh a oa bet tremenet, hag eñ a zeuas da soñj dezhañ, a bep ma veze lavaret dezhañ... P' en devoe gwisket e zilhad e lavaras e vreur dezhañ : « Deus bremañ d' am sikour da gerc'hat hor breur henañ ha neuze da welout pelec'h e oas kousket ». Kavet o doa o breur, ha ne oa ket c'hoazh re ofrajat e gig hag e tiwiskjont anezhañ ; ha d' her frotañ evel ma oa bet graet d' egile. Startoc'h e voe an abadenn, rak koshoc'h marv e oa ar breur henañ. Un tri-c'hardeur bennak e oant bet ouzh hen frotañ hag heñ a-greiz-tout o lavarout : « O Jezuz, emezañ, me am eus kousket ! o me 'm eus kousket ! »

« Ya ! eme e vreur, kousket ec'h eus, evel m' edon-me oc'h ober er puñs ! N' ac'h eus ket a soñj eus ar wrac'h kozh hag he Zoull Kurius ?

- O ! eo ! emezañ, soñj a zeu din bremañ a bep ma vez lavaret din ! »

Neuze ar breur henañ a wiskas e zilhad ivez, evel e vreur hanter-henañ hag e voe roet dezho dour da walc'hiñ o daouarn. Ar Briñsez avat e oa tec'het alese ha distroet da ziabarzh ar c'hastell.

« Petra a levez-te eus ar Briñsez koant-se ? a lavaras ar mab yaouankañ d' e vreur henañ. Ne vefes kontant da gaout honnezh da zimeziñ ?

- O ! eo ! eme ar mab henañ.

- Ac'hanta ! lavaret he deus din e renkjen dimeziñ dezhi ; met bremazonn, peogwir ez omp ken heñvel an eil ouzh egile, ne ouezo ket pehini ac'hanomp hon-daou en deus he dilivret ; ha dre-se lavar eo te a vo, ha setu e timezi dezhi ; rak me 'gav ez on re yaouank ; na ne houlan ket dimeziñ evit c'hoazh. »

39

Pa oant antreet er c'hastell, e oa en em gavet an traoù evel m' en doa lavaret ar breur yaouankañ : « Sell, eme ar Briñsez, setu aze na n' on ket evit dishañvalout an eil diouzh egile. N' on ket evit gouzout pehini ac'hanoc'h ho tri en deus va dilivret.

- O ! feiz 'vat ! Priñsez, eme ar mab yaouankañ, 'vit n' eo ket me ez eo ; me 'zo re c'henaouek evit se !

- O ! nann ! Priñsez, eme ar mab henañ, me eo an hini en deus ho tilivret. »

Hag ar Briñsez neuze o tapeut ur sizailh arc'hant eus godell he zavañjer hag o troc'hañ korn livitenn en tu dehou danvez he-fried : « Bremañ, emezi, hoc'h anavezin an eil diouzh egile ».

- II-

Bevañ a rejont eürus en o c'hastell o-fevar a-gevret. Met un devezh, e lavaras ar Briñsez d' he daou vreur-kaer : « Ma ! emezi, ur c'hoar am eus hag a zo ivez dindan gazel-gae evel ma 'z on bet va-unan. C'hwi evidoc'h da vezañ bet ur mank da sentiñ re ouzh ar wrac'h kozh, hoc'h eus an aer da vezañ dilikat. Me 'm eus aze ur voull ha ma leverer dezhi mont da di va c'hoar, honnezh a yelo. C'hwi n' ho po ken d' ober nemet heul anezhi. Pa 'z eot prim, ar voull a yelo prim, pa 'z eot gorrek, ar voull a yelo gorrek, pa chomot a-sav, ar voull a chomo a-sav ; ha ma vije c'hwi a c'hellje dilivrañ va c'hoar, pegen brav ne vije ket dimp ar rest eus hor buhez.

- Feiz 'vat ! eme an hini yaouankañ d' e vreur, mar kerez, ni 'yelo d' ober un esae. »

An deiz war-lerc'h hag int o kas boued ganto hag en hent. Ar Briñsez a laoskas ar voull hag a lavaras dezhi : « Alo ! va boull, kit, da di va c'hoar ! » Pemzek deiz bennak he doa lakaet d' ober an hent. Un devezh, an daou vreur en em

gavas souezhet o welout ar voull o tont war an adreñv ; met da gemerout he lañs e rae kement-se, rak en un taol ez eas war-raok d' en em skeiñ a-daol-penn-herr gant ur pezh dor vras : « O va Doue ! eme ar Briñsez hag a oa er c'hastell-se dindan gazel-gae gant ur Ramz ; petra 'zo a nevez ; boull va c'hoar a zo erru amañ ! » Hag hi da zigeriñ an nor. « Demat deoc'h, daou Briñs yaouank. Petra a glaskit-hu amañ ?

- Demat deoc'h, Priñsez, ni 'zo deuet amañ a-berzh ho c'hoar evit ho tilivrañ.

40

- O Va Doue ! emezi, me 'zo amañ gant ur Ramz bras dalc'het gantañ dindan gazel-gae ! Kousket eo bremañ evit pemp kardeur, met en anv Doue, na chomit ket re bell dre amañ, peotramant, pa zihuno ez oc'h sur da vezañ debret gantañ. »

An hini yaouankañ eus an daou vreur a selle muioc'h en-dro dezhañ eget na selle ouzh ar Ramz-bras-se. Ma welas eno ouzh ar voger diwar-bouez ur pezh tach sabrenn ar Ramz hag a oa 700 lur enni : « Petra, emezañ, eo an oustilh-se ?

- Honnezh, a respontas ar Briñsez, eo sabrenn ar Ramz.

- Daoust ha ponner ez eo, emezañ ? » Hag heñ d' he hejañ kement ha ken bihan ken e oa kouezhet war ar pavez, hag en ur gouezhañ e torras dre an hanter : « Arsa ! emezañ, marteze gant an tamm-se em bije graet moien da droc'hañ e c'houzoug dezhañ ? » Sevel a reas an tamm sabrenn da kroec'h ha skeiñ war gouzoug ar Ramz, ken na zihunas hemañ en ur lavarout : « Kregiñ a ra ar fubu hiziv ! » - « A ! eme ar paotr yaouank, evit fubu e kemerez se ? »

Hag ar Ramz o tigeriñ frank e fronelloù ha lavarout : « C'hwez ar c'histren a santan, hen kaout da zebriñ a renkan ».

« Me, eme egile, n' ouzon ket c'hoazh pehini ac'hanomp hon-daou a vezo debret ! » Hag heñ da skeiñ gant e damm sabrenn herdañ ma c'helle, kement ha ken bihan ken en doa troc'het e c'houzoug d' ar Ramz a-dreuz. Neuze e lavaras d' ar Briñsez : « Bremañ, n' hon eus d' ober nemet stlabezañ ar bern-koad a zo aze ha lakaat korf ar Ramz er c'hreiz hag adverniañ ar peurrest warnezhañ ; goude-se e skoet war ar c'hoad un tri pe bevar bidoniad petrol ha c'hwezhet an tan enno ! » Ur pennadig goude ne vane nemet ludu ar c'hoad mesk-ha-mesk gant ludu ar Ramz. Hag ar Briñsez a lavaras d' an hini en doa he dilivret e renkje he c'hemerout da zimeziñ. An daou baotr a yeas da walc'hiñ o daouarnioù ; hag ar mab yaouankañ o lavarout d' e vreur hanter-henañ : « Penaos e leverez-te ? Daoust hag-eñ ne vefes ket kontant da gemerout ar Briñsez-mañ da bried ? Rak me evit c'hoazh n' em eus ket c'hoant dimeziñ. » - « O ! eme ar breur hanter-henañ, me ne c'houlennan ket well. » Setu pa zistrojont er c'hastell, ar Briñsez a lavaras dezho : « Sell 'ta n' ouzon ket pehini ac'hanoc'h ho-taou en deus va dilivret pa 'z oc'h ken heñvel an eil ouzh egile ! »

« O ! eme an hini en doa he dilivret, 'vit n' eo ket me, rak me a oa aze o krenañ o welout va breur o tistagañ ar sabrenn diouzh ar voger. » Hag ar Briñsez a dapas krog en ur sizailh arc'hant he doa en he godell, ha troc'hañ livitenn danvez he fried en tu kleiz, hag evel-se, emezi, ec'h anavezje an eil diouzh egile.

41

« Bremañ, emezi d' an hini yaouankañ, Priñs yaouank, e vanko deoc'h chom amañ ganin ivez. N' ho po tra d' ober nemet debriñ hag evañ ha pourmen, evel ma plijo ganeoc'h. »

- III -

Setu un devezh, ar breur-kaer o pourmen en alezioù ar jardin a glevas kleier ar barrouz o son trist-trist-meurbet. Hag heñ da gaout e c'hoar-gaer da c'houlenn diganti daoust petra a oa kaoz d' ar c'hleier da son ken trist-se : « Aze, emezi, ez eus ur Ramz a seizh penn hag a rank kaout unan eus ar gwad-roue bep seizh vloaz, hag ez eo merc'h ar roue a rank mont hiziv da vezañ lonket gantañ.

- Memes tra, eme ar paotr, ez eo trist leuskel merc'h ur roue da vezañ lonket e bev gant ur Ramz. Daoust hag-heñ ne vefe ket tu da zilivrañ honnezh e

tumm pe stumm ?

- Feiz ! emezi, diaes e vezo ; ha koulskoude amañ er marchosi em eus ur marc'h, hag izeloc'h d' an traoñ ez eus seizh milin ha n' o deus takenn dour ebet, nemet troazh ar marc'h da vont en-dro. Bremañ avat, mar demañ da soñj evel ma leverez, me 'zo kontant da reiñ dit va marc'h, ha neuze louzoù am eus aze, evit esae he dilivrañ. »

An deiz war-lerc'h vintin, hag ar paotr yaouank o tibrañ hag o vridañ ar marc'h, ha war e gein evit esae dilivrañ ar Briñsez. He c'haout a reas war an hent, hag heñ o lavarout dezhi :

« Demat deoc'h, Priñsez.

- Demat deoc'h, emezi, Priñs yaouank.

- Penaos, eme hemañ, na c'hwi ne vefec'h ket kontant da zont amañ ganin **war** dailher va marc'h.

- O, nann ! trugarez deoc'h, Priñs yaouank, rak amzer a-walc'h am eus d' erruout 'lec'h em eus da vont.

- Hep bezañ re gurius, emezañ, ha kontant e vijec'h, mar plij, da lavarout din da belec'h hoc'h eus da vont ?

- Me, emezi, a zo o vont da vezañ debret e-bevgant ur Ramz a seizh penn.

- Neuze, Priñsez, ez eo koulz deoc'h dont amañ ganin **war** dailher va marc'h ha me ho kaso primoc'h.

- It gant ho hent, Priñs, na ne rit ket a c'hoap ouzhin-me ! »

42

Met kement ha ken bihan a reas derc'hel warnezhi, ken ec'h asantas mont war dailher ar marc'h. Pa errujont er porzh, e lavaras ar Ramz dezhañ : « Taol honnezh din amañ, ma lonkin anezhi.

- Hola 'vat ! eme ar paotr, ur Briñsez ker kaer-mañ ne vez ket taolet er mod-se.

- Taol anezhi din diouzhtu pe me 'ya d' ho teviñ ho-taou. »

Mar dout kab da skeiñ tan, me am eus ur marc'h amañ ivez hag a zo mat da skeiñ dour. Ha da unan ac'hanomp hon-daou e vezo : dit pe din.

« Neuze, eme ar Ramz, me 'ya da gomañs. » - « Pa gari, eme ar Priñs yaouank, rak me a zo prest. »

Hag ar Ramz da skeiñ tan, met ar marc'h ivez a skoe dour da lazhañ an tan, kement ha ken bihan ken e oa distrujet c'hwec'h penn d' ar Ramz. Ar Ramz neuze a c'houlennas termen ac'han d' an deiz war-lerc'h d' an eur-se. Ar pezh a oa aotreet dezhañ diouzhtu, rak ar Briñsez hag ar Priñs a oa erru skuizh-divi.

« Ret eo deoc'h, a lavaras ar Briñsez d' he c'hompagnun va degas betek ti va zad.

- Va digarezit, Priñsez, rak n' hellan ket mont betek ti ho tad : ar marc'h-mañ hag al louzoù am boa bet, n' eus netra anezho din-me ! »

Ar Briñsez eta a yeas hec'h-unan betek palez he zad. Hemañ avat, p' he gwelas o tont en-dro a chomas mantret : « O va merc'h paour, emezañ, n' ac'h eus ket teurvezet mont hiziv betek ar Ramz-se, ha koulskoude, man na n' ez ket, e vezo devet hor rouantelezh a-bezh !

- Va digarezit, va Zad, emezi, rak me am eus kavet ur priñs yaouank war va hent hag en deus va difennet, hag e gwirionez c'hwec'h penn d' ar Ramz a zo bet

diskaret.»

Antronoz vintin 'vel just d' ar memes eur m' o doa prometet erruout e kastell ar Ramz, edo ar Briñsez o vont gant hec'h hent. Met ar Priñs yaouank, an eil devezh ne oa ket kement a vall warnañ evel an deiz kentañ. Merc'h ar Roue a oa aet pell a-raok ; derc'hel a rae da sellout war he lerc'h. « Va Doue, emezi,, hiziv ez on dilezet gant ar Priñs yaouank-se. » Ne oa ket da c'hras Doue, ha kent dont eus ar gêr, e c'hoar-gaer he doa roet dezhañ en tu-hont d' ar marc'h ha d' al louzeier ur wialenn ; ha pa skoje un taol-gwialenn war an hent, kerkent en em gavje an noz ken na welje ket an dud an eil egile.

P' erruas ar Priñs yaouank gant merc'h ar Roue, e pedas anezhi da zonet war dailher e varc'h. Ne oa ket ranket he fediñ div wech. Met pan errujont e porzh ar Ramz, hemañ a oa adarre e seizh penn en o flas, evel an deiz a-raok.

43

« Ac'hanta ! eme ar Ramz, daoust hag-en na n' out ket c'hoazh troet da reiñ honnezh din-me, hiziv ?

- Nann ! emezañ, lavaret e oa dit dec'h e vije dit pe din. Na ne zislavaran ket va ger.

- Neuze, eme ar Ramz, ma a ya adarre da skeiñ tan.

- Pa gari, eme ar Priñs ; mar dout prest va marc'h a zo ivez. » Kement ha ken bihan e c'hoarijont an deiz-se ken e oa kouezhet adarre c'hwec'h penn d' ar Ramz. Met ar penn bras a oa bepred en e sav ; hag ar Ramz a c'houlennas evel an deiz kentañ, termen ac'hann d' an deiz war-lerc'h ar beure d' an eur-se. Ar pezh a oa aotreet dezhañ diouzhtu gant ar Priñs ha merc'h ar Roue, rak erru e oant skuizh-meurbet.

En ur zistreiñ d' ar gêr e fellas d' ar Briñsez kas ar Priñs gantañ : « Me, emezi, Priñs yaouank a oa bet gourdrouzet gant va zad, ar Roue o vezañ ne oac'h ket deuet d' am degas d' ar gêr. Met hiziv e vo ret deoc'h dont betek du-mañ. Va zad hag e gompagnunezh a zeuio d' am diambroug ur c'hardlev eus e balez ».

« Va digarezit, emezañ, Priñsez, rak evel m' am boa lavaret deoc'h dec'h, ar marc'h nag ar pezh a zo ganin na n' eus netra anezho din-me, hag e rankan o c'has en-dro d' o ferc'henn... »

Er c'heit-se, e oa erru ar Roue ur c'hard-lev eus e balez da benn-hent dezho, evit esae gouzout piv e oa an hini a gemere kement a boan a-benn dilivrañ e verc'h. Met ar Priñs yaouank, pa welas tud a-leizh an hent, petra 'reas nemet derc'hel e loen-kezeg a-sav, diskenn diwar e zibr ha skeiñ un taol-gwialenn a-dreuz war an hent. Kerkent en em gavas teñval-du, ken eus un hanter-metr ne wele ket an eil egile. « Diskennit bremañ, emezañ da verc'h ar Roue, rak me a rank mont da resteurel ar pezh a zo amañ ganin. » Ne oa ket aet da bell, hag e teuas ar sklerijenn a-nevez. Met merc'h ar Roue a oa evel an deiz a-raok hec'h-unan o vont d' ar gêr ; ha kaer he doa lavaret d' he zad, ar Roue, hemañ ne grede anezhi.

An deiz war-lerc'h ar beure, an trede devezh, ar Priñs yaouank a zigarezas da vont war gein ar marc'h, rak gouzout a ouie n' antreje ket merc'h ar Roue e porzh ar Ramz, ken na vije degouezhet e-unan. Pan erruas en he c'hichen :

« Demat deoc'h, Priñsez, emezañ.

- Demat deoc'h, Prins yaouank, emezi.

- Dont a reot amañ ganin war dailher va marc'h ?

- O ! ya, emezi, a volonteze vat. »

Hag int kerkent oc'h antre e porzh ar Ramz : « Ac'hanta, eme ar Ramz, n' out ket kontant c'hoazh da reiñ honnezh din-me ?

44

- Nann ! eme ar Priñs yaouank, me a lavar dit : hiziv e vo dit pe din !

- Neuze, eme ar Ramz, me 'zo o vont da skeiñ tan.

- Mar dout prest, eme ar Priñs, da skeiñ tan, va marc'h a zo amañ dindanomp a zo prest da skeiñ dour ! »

Kement ha ken bihan e rejont adarre, ken e oa diskaret a-nevez c'hwec'h penn d' ar Ramz. Ar Ramz avat, e c'houlennas adarre koñje ac'han d' an deiz war-lerc'h ar beure d' ar memes eur : « A ! nann ! eme ar Priñs, hiziv e vo ret echuiñ, hiziv e vo dit pe din.

- Gortoz, eme ar Ramz ; seizh penn am boa, c'hwec'h a zo distag, met ar penn bras, hennezh a sko kement a dan evel o deus graet ar c'hwec'h vihan.

- Se ne ra netra din-me, a lavaras ar Priñs, rak mar dout prest, ma a zo ivez. » Hag ar Ramz da skeiñ tan. Bep ma skoe tan, ar marc'h a skoe dour ivez. Met pa oa ar penn bras o kouezhañ, edo ar marc'h ivez o kouezhañ dindan ar Priñs ha merc'h ar Roue... C'hoar-gaer ar Priñs avat, he doa roet dezhañ louzeier, ma tegouezhje dezho bezañ re zevet - da frotañ ouzh o goulioù ha kerkent e vijent gwellaet. Hag ar Priñs da frotañ merc'h ar Roue da gentañ ha d' en em frotañ e-unan d' an eil, ha d' an trede e frotas e varc'h, ma voent gwellaet o-zri.

« Bremañ, eme ar Priñs yaouank da verc'h ar Roue, e vo ret drailhañ a-dammoù bihan korf ar Ramz. C'hwi a skoio an tammoù, tamm du-mañ, tamm du-hont, met taolit evezh n' en em stokfe an eil tamm ouzh egile, rak a-hend-all 'benn warc'hoazh vintin e vezo ar Ramz ker bev ha biskoazh. » Poanial a rae ar Priñs yaouank da droc'hañ, met ar Briñsez ne oa ket didalvez ivez evit skeiñ an tammoù diouti. Erruout a rae brini ha loened all hag e kasent ganto pep a damm. Setu stlabezet ar Ramz, tamm du-mañ, tamm du-hont ha prest e oant da zistreiñ d' ar gêr, dizañjer diouzh ar Ramzed, peogwir ne oa ken nemet hennezh e-barzh ar vro...

« Bremañ, eme ar Briñsez d' ar Priñs yaouank, pe e viot kontant pe ne viot ket, e vo ret deoc'h donet betek ti va zad da zegemenn dezhañ ar c'heloù mat hoc'h eus graet hiziv evit ar vro.

- Va digarezit, Priñsez, emezañ, rak hiziv n' hellan ket mont betek ti ho tad. Ret eo din da gentañ rentiñ d' o ferc'henn ar peadra a zo amañ ganin. Met warc'hoazh a-benn kreisteiz ez in da saludiñ ho Tad. »

45

Pa glevas ar Roue ar c'heloù-se gant e verc'h, e lavaras dezhi e vije ret ober un degemer kaer d' ar Priñs yaouank-se hag e lakaas pallennañ an hent 'hed ur c'hard-lev diouzh e balez, dre lec'h ma tlee ar Priñs yaouank dont... En amzer-se e oa karreoziù hag ar Roue a lakas stagañ daou a gezeg war gaerañ karreoz en doa, evit mont da ziambroug ar Priñs yaouank. Pan erruas an eil gant egile, ar Roue evitañ da vezañ roue a lammas e kerc'henn ar Priñs yaouank, d' hen trugarekaat hag e lavaras dezhañ e rankje kemerout e verc'h da bried, ha diwezhatoc'h, pa guitaje ar bed-mañ, en dije ar gurunenn a Roue war e lerc'h.

- IV -

Hep chom da varc'hata, e roas ar Priñs yaouank e asant. Hag an deizioù war-lerc'h e voe graet an eured gant kalz a zistalac'h. Pedet e oa ur bern tud ; 'hed un hanter-lev e oa karreoziù o vont d' ar bourk, evel o tont d' ar gêr, stok-hastok an eil d' egile. Met p' edo an dud nevez o tont d' ar gêr goude bezañ resevet Sakramant ar Briedelezh, e teuas an amzer da vezañ teñval-teñval ken ne oa ket ar c'hezeg evit mont a-raok... Ur griadenn spontus a voe klevet : « Kenavezo, va fried paour ; rak me 'zo savet gant ar c'horf hep ene ». Ur pennadig goude-se, p' en em gavas sklaer an amzer ha dispak an heol, e voe spouronet an dud o welout e oa aet ar Briñsez kuit. Hag ar Priñs yaouank stonket a reas ul lamm diwar e garreoz, evit redek da gaout e dad-kaer : « Aet eo va fried, emezañ, gant ar C'horf-hep-Ene ». Ar Roue kozh a chomas dilavar ur momed hag eñ neuze en ur voustrañ war e c'hilac'har da ziskleriañ : « Lakaet e oa dezhi bezañ kollet : pa ne oa ket aet gant ar Ramz a-Seizh-Penn, e renke mont an taol-mañ. Deus bremañ ganin, va mab, ha diwezhatoc'h az po ar gurunenn a roue war va lerc'h ».

« Nann, emezañ, va Roue. Va fried a fell din-me da gaout ; na ne repozin na deiz na noz ken n' am bezo gouezet e pelec'h emañ Kastell ar C'horf-hep-Ene. » Kimiadiñ a reas raktal eus e dad-kaer hag eus ar re a oa ouzh e heul, hag e skoas, mall warnañ, war-du ar mor. Pell-amzer e voe o vale kent tizhout an aod, ha kentañ tra a welas eno a oa ur peskig bihan, war an traezh, digor gantañ e c'henou o c'houlenn ur bannac'hig-dour, evel just. « Te, loen paour, eme ar Priñs yaouank, a zo aze ivez ken nec'het ha me ; met mar bijen sur da vezañ dinec'het, ker fonnus evel-dout-te, neuze e vijen prest da zistreiñ da di va zad-kaer ». Hag heñ o tapout krog er pesk hag hen teurel en ur poullad-dour. Raktal evel m en doa kavet ar pesk bihan an dour, e lavaras dezhañ.: « M' az pezh ezhom, un dro bennak, eus Roue ar Pesked, n' az po ken d' ober nemet va gervel ha va c'haout a ri... »

46

« Mar deo te eo Roue ar Pesked, eme ar Priñs yaouank, neuze n' eo ket rust Roue ar Pesked ! »

* * *

En tu-all damdost d' an aod, e oa ur gozh foukenn ha warni un draf-valan. Hag eñ da vont war an tu-se hag oc'h antren en ti, hag o welout eno un gozh : « Salud, emezañ, maeronez ! »

« Salud, emezi, Priñs yaouank. Petra a zo evit ho servij ? O klask va fried emañ, emezañ, aet eo an deizioù-mañ gant ar C'horf-hep-Ene ; met 'm eus aon n' arruin biken.

- O, va faotr kaezh ! eme an hini gozh, n' en em zizesperez ket, rak pa vez sklaer an heol, e vez gwelet ac'han gant lunedoù bras, kastell ar C'horf-hep-Ene, a zo aze e-kreiz ar mor.

- Ya ! met penaos - m' emañ e-kreiz ar mor - e c'hellfen-me mont betek eno.

- Damañ, va faotr kaezh, netra aesoc'h ! Setu amañ ur c'hwitellerez. N' ac'h eus ken d' ober nemet c'hwezhañ enni hag ec'h en em gavo ganit un erer aze hag az kaso lec'h az po c'hoant. » Hag heñ da c'hwitellat... 'Benn ur pennadig bihan ec'h en em gavas teñval, hag an erer o tiskenn hag o c'houlenn digantañ : « Petra a zo evit da servij ? »

« Kas ac'hanon da Gastell ar C'horf-hep-Ene.

- Ya ! eme an erer, met ret eo din kaout a-raok :

« Kant maout ha kant ejen, kant barriken-win ha kant torzh-vara ».

- O ! Gwerc'hez santel ! eus a belec'h, loen paour, e c'hellfen-me kaout kemend-all a draoù da reiñ dit ! Met gortoz ur pennadig bihan ma 'z in da gaozeal gant mamm-gozh ha bremazonn e tegasin ar respont dit. » Hag heñ en ur ouelañ da gaout an hini gozh, da gontañ dezhi pegement a draoù a c'houlenne an Erer.

« Damañ, eme an hini gozh, va faotr kaezh ! se 'zo nebeut a dra. Kerzh raktal ha lavar d' an Erer en devo kement a c'houlenn diganit. Bremazonn ez i aze d' al laneg hag e liviri d' an Erer lazhañ kant maout... Ac'hano ez i war-draoñ d' ar prad hag e liviri dezhañ lazhañ kant ejen. Goude-se e teui gantañ amañ er c'hav hag e liviri dezhañ tennañ kant barriken-win... Hennezh gant e veg bras ne vo ket pell o tennañ ar re-se er-maez... Neuze e tigori ar forn hag e liviri dezhañ tennañ kant torzh-vara. »

47

An Erer a reas evel ma oa bet lavaret dezhañ hag a sammas an holl draoù war e gein. Neuze e lavaras d' ar Priñs :

« Selaou ac'hanon ervat ! Bremañ ec'h en em laki aze e-touez an traoù-se war va c'hein ha pa c'houlennin diganit « Maout », ro din maout ha maout ! Pa c'houlennin « Ején » ro din memprenn ha memprenn ! Pa c'houlennin « Bara » torzh ha torzh, ha pa c'houlennin « Gwin » barazad ha barazad ; ha pa vo goullou ar varriken sko anezhi er mor, rak me ne stlejin ket a draoù goullou ».

Ne oant ket bet pell evit erruout e Kastell ar C'horf-hep-Ene. Merc'h ar Roue a oa oc'h ober stamm en he c'hoazez, war ur gador : « Jezuz, emezi, va fried !... Penaos ac'h eus gallet dont betek-mañ ? »

« Ur wrac'h kozh diwar an aod he deus desket din penaos ober ha kaout al loen-mañ d' am degas betek amañ... Penaos ? Nag ar C'horf-hep-Ene ? N' emañ ket er gêr ?

- O ! nann ! emezi, hennezh kerkent ha strink-deiz a ya eus ar gêr ha ne zistro ket ken na vez noz.

- Neuze, emezañ, e vank dit dont ganin bremañ hag ez aimp da di da dad !

- Nann ! siwazh, emezi, n' hellan ket mont ac'hannik, rak lavaret en deus din penaos n' eus forzh pelec'h ez in, am c'havo atav.

- Daoust ha ne vefes ket gouest da glevout gantañ petra a vefe ret ober dezhañ evit hel lakaat da vervel. Gra da bosubl da glevout kement-se gantañ, ha me, mar permet an hini gozh he deus roet traoù d' an Erer d' am degas amañ, a zistroio un eil gwech, ma ro an hini gozh e volontez d' an Erer. » Met ret eo din kimiadiñ evit hiziv, rak an Erer a zo ouzh va gervel.

An deiz-se diouzh an noz, ar Briñsez a gemeras un aer trist-trist 'benn ma tegouezhas ar C'horf-hep-Ene : « Hola 'vat ! emezañ. Te 'zo klañv moarvat ; hiziv az kavan gwalldris.

- Nann ! emezi, n' eo ket se. Trubuilh a zo savet em c'halon pa 'z on deuet d' en em soñjal e vin amañ va-unan bemdeiz, adalek ar beure betek an noz, ha c'hwi un devezh 'erruo, marteze a varvo en un tu bennak du-se, ha me na n' ouezin ket pelec'h e viot. Setu ma chomin amañ va-unan-penn hep gouzout pelec'h e viot aet.

- O ! eme ar C'horf-hep-Ene, ma n' eus nemet se d' az trubuilhañ, bez dinec'h ! Rak me na n' on ket c'hoazh prest da vervel.

- Nann ! emezi, c'hwi 'lavar se, met n' ho kredin biken, nemet lavarout a rafec'h din penaos e vefe ret ober d' ho lazhañ.

48

- Neuze, emezañ, setu amañ penaos e vefe ret d' ober evit lemel va buhez diganin. E-kreiz ar mor ez eus ur c'houfr hag er c'houfr-se ez eus ur c'had, hag e vefe ret tapout ar c'had, he lazhañ, he digeriñ. Hag e-kreiz ar c'had ez eus ur c'honikl. Ar c'honikl-se a vefe ret ober adarre er memez mod dezhañ. E-kreiz ar c'honikl, ez eus un goulm hag e vefe ret lazhañ ar goulm ivez. Hag e-kreiz ar goulm ez eus ur vi, hag e vefe ret tapout ar vi-se hag hen terriñ war va zal a-raok ma varvin.

- Bremañ avat, eme ar Briñsez, mar deo gwir ho komzoù, e vezin didrubuilh ouzh ho kwelout o vont da vale. »

...Benn daou zevezh goude, ar Priñs yaouank a c'houlennas adarre digant ar wrac'h kozh hag-eñ he dije bolontez vat da reiñ sikour dezhañ evel an dro gentañ.

« Ya ! ya ! va faotr kaezh, ken alies ha ma kari. N' ac'h eus nemet tapout ar c'hwitellerez ha c'hwitellat d' an Erer, ha lavarout dezhañ kemerout ar pezh en deus ezhomm a loened, a win hag a vara. »

Evel an dro gentañ e c'houlennas an Erer : « Kant maout ha kant ejen, kant barriken-win ha kant torzh-vara ».

Lavaret e voe dezhañ mont d' al lanneg ha d' ar prad da dapout al loened a vanke dezhañ, ha dont en-dro da dennañ ar barrikennoù-gwin eus ar c'hav gant e bigos, hag an torzhioù-bara eus ar forn.

« Bremañ, eme an Erer pa voe karget an holl draoù-se war e gein, en em laka aze e-touez al loened, an evaj hag ar bara, ha pa c'houlennin diganit « Maout »,

ro din maout ha maout ; pa c'houlennin « Ejen », ro din memprenn ha memprenn ; pa c'houlennin'« Bara », ro din torzh ha torzh, ha pa c'houlennin « Gwin », ro din barazad ha barazad ! »

P' errujont e Kastell ar C'horf-hep-Ene, edo ar Briñsez e prenestr ar gambr. Pa welas he fried ec'h en em lakaas da ouelañ, rak kredout a rae n' hellje biken dont a-benn da dec'hout eus ar C'hastell. Kontañ a reas d' ar Priñs petra en doa lavaret an C'horf-hep-Ene dezhi... Nec'het e chomas ar Priñs ur pennad ha lavarout neuze : « Peogwir emañ kont evel-se, n' eus ken d' ober nemet distreiñ d' an douar-bras ha mont adarre da gaozeal gant ar wrac'h kozh vadelezhus, rak honnezh he deus kalz a zeskamant ! » Poan en doa koulskoude o vont alese hag o kimiadiñ eus e bried paour, met an Erer hag a gave hir an amzer, a stagas da c'hrozmolat ha da lavarout dezhañ : « Poent eo dit dont war va c'hein, mar kerez, rak me 'zo o vont da nijal kuit ». Ar Priñs a rankas sentiñ war an taol ha lezel e bried da c'harmat er c'hastell.

P' en em gavjont e ti ar wrac'h kozh, e c'houlennas houmañ digantañ : « Ac'hanta ! va faotr, petra he deus lavaret da wreg dit ?

49

- O va Doue ! emezañ, biken na n' hellin dont a-benn d' he zennañ eus ar C'hastell milliget-se. »

Lavaret he deus din penaos ar C'horf-hep-Ene en deus ur c'houfr e-kreiz ar mor, hag evit gallout hel lazhañ e vefe ret kaout ar c'houfr ; hag er c'houfr-se ez eus ur c'had, hag e vefe ret tapout ar c'had, he lazhañ, he digeriñ. Hag e-kreiz ar c'had ez eus ur c'honikl, hag ar c'honikl-see e vefe ret ober er memez mod dezhañ. E-kreiz ar c'honikl ez eus ur goulm hag e vefe ret lazhañ ar goulm ivez. Hag e-kreiz ar goulm ez eus ur vi hag e vefe ret tapout ar vi-se, hag hen terriñ war dal ar C'horf-hep-Ene a-benn ma varvje... Allaz ! penaos e rin-me evit kaout ar c'houfr-se p' emañ e-kreiz ar mor e-touez an dour ?

« Penaos ? va faotr, a lavaras an hini gozh. Pa oas o tont amañ, n' az poa ket gwelet loen ebet aze, war ribl ar mor ?

- Nann ! sur ! Mamm-gozh.

- Na pesk, na seurt ebet, va faotr ?

- Añ ! Eo 'vat ! Degas a rit da soñj din em boa gwelet war an traezh ur pesk bihan, digor e c'henou gantañ, o c'houlenn ur bannac'h-dour, mar plij. » Ha me a lavaras dezhañ : « Te, loen paour, a zo nec'het, ha me a zo ivez ; met mar bijen ken sur ha te da vezañ dinec'het evel-dout-te, neuze e vijen prest da zistreiñ da di va zad-kaer ; rak me 'ya raktal d' az tinec'hañ ». Ha me d' hen skeiñ en ur poullad-dour. P' en devoe evet ur bannac'hig-bihan, e lavaras din ar c'homzoù-mañ : « M' az pez ezhom, un dro bennak, eus Roue ar Pesked, n' az po ken d' ober nemet dont amañ d' am gervel.

- Ac'hanta ! va faotr, eme an hini gozh. Henezh an hini a vank dit bremañ. Kerzh aze 'bord ar mor ha galv Roue ar Pesked. »

Hag heñ raktal war ribl ar mor, ha da c'hervel a-bouez-penn « Roue ar Pesked ! Roue ar Pesked ! » A-barzh ar fin ec'h erruas ar pesk bihan hag a c'houlennas digantañ. « Petra, emezañ, a zo evit da servij ?

- Degas din amañ, ar c'houfr a zo du-se, e-kreiz ar mor, war ar sec'h. »

Ha Roue ar Pesked neuze, ha gervel ar pesked, ha gervel anezho holl dre o anv an eil war-lerc'h egile ; kement ha ken bihan ken e oant erru holl nemet ar silienn vihan. Ar Roue, evel just a rae trouz en ur c'houlenn pelec'h e oa sac'het al loen fall-se... « Honnezh, emezañ, a vez dalc'hmat war-lerc'h !

- Erru on, erru 'on, Mestr, a lavaras ar silienn, berr warni.

- Pelec'h, eme ar Roue e oas-te chomet adarre, loen fall ?

- O me, Mestr am boa kavet alc'hwezioù brav e foñs ar mor hag e oan chomet da c'hoari ganto.

- A ! eme ar Roue, alc'hwezioù brav az poa kavet ! Bremañ e vank dit mont war da giz diouzhtu, da gerc'hat an alc'hwezioù brav-se e oas chomet da c'hoari ganto.

- Ya, Mestr ! met ar re-se a zo pell ac'hannik !

- Kenneur rak-se, kae neuze diouzhtu war da giz, hag arabat dit bezañ pell oc'h ober da dro... Ha bremañ, eme ar Roue d' ar pesked all, c'hwi 'ranko deoc'h en em sikour da zegas ar c'houfr a zo du-hont, e-kreiz ar mor, pelloc'h eget kastell ar C'horf-hep-Ene. »

Pan errujont e-kichen ar c'houfr, ar pesked en em lakaas en-dro dezhañ da sachañ ha da voutañ ; ha pa c'helljont hen distokañ diouzh ar foñs, ec'h en em voutas ar siliou dindanañ. Na ne oant ket bet gwall-bell evit hen degas war ar sec'h... Met ar silienn vihan, evel just, ne oa ket erruet diouzhtu, hag ar Priñs yaouank, a c'hellit krediñ, a gave hir an amzer.

A-benn ar fin ec'h erruas, ar silienn vihan : « Erru 'oas ivez un dro bennak, loen fall, eme Roue ar Pesked dezhi.

- Ya ! Mestr, emezi, met an alc'hewzioù-mañ a zo ponner.

Ro anezho din amañ neuze, ha kerzh da ziskuizhañ e-lec'h ma kari. »

Alc'hwezioù ar c'houfr e oant, ha mat en doa graet Roue ar Pesked o kas ar silienn vihan war he c'hiz d' o c'herc'hat. Neuze ar Priñs a gemeras an alc'hwezioù digant Roue ar Pesked, hag heñ da zigeriñ ar c'houfr. P' en doa digoret ar c'houfr un tamm bihan, e oa penn ar c'had eno prest da garzhañ er-maez met tapout a reas krog enni, he lazhañ ha rogañ he c'hof dezhi gant e gontell. Kerkent ha m' en doa roget he c'hof un tamm bihan, e oa penn ar c'honikl prest ivez da dec'hel kuit. Met ar Priñs a oa kement war evezh, ma tapas krog er c'honikl, hag e reas dezhañ evel m' en doa graet d' ar c'had. Siwazh dezhañ ! roget en doa un tamm bihan amplik kof ar c'honikl, ha setu ur goulm o sevel hag o vont da ziskenn war ur c'houldri a oa war-hed gwel ac'hano. Mar boa joaus ar Priñs yaouank o soñjal edo o vont da gerc'hat e bried, bremañ avat, pa oa nijet ar goulm e-kuit, e oa gwall-drubuilhet. En ur ouelañ dourek, e skoas war-du lochenn-valan ar wrac'h kozh da ziskargañ e galonad.

« Petra, va faotr, emezi, a zo adarre ouzh da drubuilhañ ?

- O ! maeronez ! emezañ ; soñjal a rae ganin edon oc'h intentiñ mont da gerc'hat va fried, ha bremañ siwazh ! na n' hellin ket he c'haout.

51

- Petra a zo kiriek da gement-se ? a c'houlennas an hini gozh.

- Atozur ! ar goulm a oa e-kreiz ar c'honikl a zo nijet kuit hag aet da ziskenn ewar ar c'houldri bras a weler ac'hann.

- Ma ! va faotr, te 'zo trubuilhet gant nebeut a dra ! N' ac'h eus ken d' ober nemet tapout ar c'hwitellerez a zo aze ha gervel an Erer, hag hennezh ne vo ket pell o pakañ dit ar goulm. »

Ar Priñs yaouank a dapas ar c'hwitellerez hag heñ da c'hwitellat. Ur momed goude, ec'h erruas an Erer hag e c'houlennas digant ar Priñs yaouank : « Petra 'zo evit da servij ?

- Ato ! emezañ, ur goulm a zo a-baouez nijal ac'hannik, hag a zo diskennet ewar ar c'houldri-hont, hag am eus c'hoant he degasfes amañ ! »

Hag an Erer o sevel da kroec'h hag a zigoras e ziwaskell bras hag a ziskennas war ar c'houldri hag a c'houlennas : « Pehini ac'hanoc'h a zo erruet amañ da ziwezhañ ? »

An holl loened-plu a oa eno, a lavaras : « O ! n' eo ket me ! n' eo ket me !

- N' eo ket me ! n' eo ket me !... eme an Erer. N' eo ket se eo se ! Ma ne livirit ket din pehini a zo erruet amañ da ziwezhañ, me 'ya d' ho lonkañ holl gwitibunan. »

Hag al laboused neuze, krog an aon enno, o lavarout : « Homañ eo ! Homañ eo ! » An Erer a dapas krog neuze e gouzoug ar goulm hag he degasas d' ar Priñs. Hemañ ne oa ket bet pell evit rannañ he c'hof dezhi ha tapout ar vi a oa en he c'hreiz. Met ne oa ket echu c'hoazh, rak betek Kastell ar C'horf-hep-Ene e oa ret mont, ha n' helle ket ar Priñs mont hep sikour an Erer. Ar wrac'h kozh avat, a roas aotre adarre da gemerout an holl loened en doa ezhomm an Erer d' ober e dro ; hag ivez ar bara hag ar gwin a c'houlennas...

E-berr-amzer ec'h errujont e Kastell ar C'horf-hep-Ene. Hemañ a oa war e wele gwall-glañv. Ar Briñsez o welout he fried o tont a redas da gaout ar C'horf-hep-Ene hag a lavaras : « Erru 'zo ur medisin bras d' ho pizitañ ha d' ho yac'haat.

- Ya ! ya ! emezañ dinerzh e vouezh ; gouzout a ouzon. Lavar dezhañ dont pa garo, rak prest on ! »

Dont a reas ar Priñs er gambr, tostaat ouzh gwele ar C'horf-hep-Ene, ar vi gantañ en e zorn hag e torras ar vi war e dal, ha kerkent e oa marv-moust.

52

Gallout a rit krediñ ne chomas ket ar Briñsez hag he fried da ruzañ er C'hastell. Raktal, o c'halonou leun a eürusted, e pignjont o-daou war gein an Erer hag hemañ o degasas adarre e-lec'h ma kemere ar Priñs yaouank bep tro... Ne oant ket bet manket da antren da drugarekaat ar sorserez kozh (rak honnezh a oa e gwirionez, ur sorserez !)... Distreiñ a rejont neuze war o zreid da balez ar Roue. Ha ma oa bet trist ar friko, pa oa bet kollet merc'h ar Roue hag aet gant ar C'horf-hep-Ene, an dro-mañ avat, e oa bet friko ken na srake.

Me 'oa bet pedet da vont da zebriñ un tamm ha da evañ ur bannac'h, hag a zo deuet da gontañ se deoc'h.

Bremañ, mar keret, am c'hredfet
Mar, keret n' am c'hredfet ket
Met aesoc'h eo deoc'h kredout
Evit n' eo mont da welout.

Kontet gant Eujen BRIGANT. Lann-Bloubér, Miz-Kerzu 1951.

Notennoù :

I. - Adskrivet hon eus ar gontadenn, war-bouez nebeut level ma oa bet kontet nemet hon eus kemeret an doare-skrivaü K.L.T.G.

Abalamour d' ar glotenn avat, hon eus miret ar peder linenn diwezhañ e Yezh Treger. A-ratozh-kaer ivez hon eus lezet an troioù-lavar tregeriek ha gerioù damdrefoet.

II. - Marvet eo bet Eujen Brigant diwar wall-zarvoud, e fin miz Here 1953. Meur a gontadenn a oa c'hoazh en e benn. Met ne vint skrivet biken. Ur gwall-labour ez eo adskrivañ kontadennoù met un dlead d' ar Vrezhonegerion dastum anezho koulskoude, pa n' eus kevredigezh ebet en he c'harg ober al labour-se.

M. KLERK.

Mabig al Loar

gant Huguette DUBOIS
brezhoneg gant ABANNA

Ur plac'hig a lakaas eürusted an douar
En ur reze, un huñvre, ur bann loar...

Lia a zo ur plac'hig bepred o huñvreal. Anat a-walc'h eo se pa weler he daoulagad trellet : ne wel ket an douar. Ne wel-hi nemet an Neñv ha dreist-holl al Loar. Nozvezhioù-pad e chom dihun da sellout outi. A-wechoù e fiñv he diweuz. Komz a ra ouzh al loar. Ha tevel. Ha gwenc'hoarzhin. Gortoz 'ra un eilger. Peseurt eilger ?

« A sur ! » emezi, « Mabig al Loar, emañ ar gwir ganeoc'h ha me ho kar ! »

D' antronoz e vez disliv dremm Lia, un assked glas iskis ganti en he daoulagad. « Assked al Loar » a soñj he mammig. Ha komz a ra e kuzh ouzh he fried :

- Gwelout a ri, e vo tennet diganimp gant al Loar, emezi. Hogen tad Lia e 'n em lak da c'hoarzhin. Tud 'zo n' o deus merzet biskoazh dedenn boemus al Loar arc'hlas da nozvezhioù kaer an hañv.

Ar vamm avat a zivin e wel he merc'h ur paotrig e-barzh al loar, hag a ziskouez dezhi dont, bep kreiznoz pa vez-hi dihun. Kaer he deus reiñ d' he merc'h madigoù, c'hoarielloù ha bep seurt moumounerezh, gout a oar e vo trec'h al loar.

N' heller ket stourm ouzh an Neñv. Pa chom Lia da ganañ rimadelloù da serrnoz, e oar he mamm e vo Lia laeret gant al Loar.

Un noz ma oa en em silet betek kambr he merc'hig, e klevas anezhi o lavarout : « O ya, Mabig al Loar ! va ger 'roan deoc'h. Emaon o tont. Ganeoc'h, en Neñv. Ha bepred a-gevret e vevimp en ho ti aour ».

D' an noz-se, ne gouskas ket kalz ar vamm. Gout a ouie ervat ne vije tra evit herzel ouzh he merc'h vihan da vont kuit d' antronoz.

Hag evit gwir, e voe an noz diwezhañ a vevas Lia en he zi.

D' antronoz, kaer he doe ar vamm teurel evezh, trumm ez eas kuit ar bugel.

54 Gwisket ganti he c'habig glas, e oa chomet dindan guzh a-hed ar c'harzh eus al liorz. Ha hi gant an hent... e sevene he ger. Mont da gaout ar paotr el loar.

D' an noz war-lerc'h, e vanas goullo gwele bugel an ti.. « E pelec'h emañ ho merc'hig ? » eme an amezeien, goapaus, d' ar vamm baour.

An tad hag ar vamm avat a ouie ne oa ket marv o merc'h, hogen aet kuit duhont, pell, d' an nec'h, uhel, el loar.

Da nozioù loargann, e kav koulskoude d' ar gerent e c'hoarzh outo dremm aour an Neñv. E tistroont d' ar gêr, e serront ar stalafioù, e tisplegont gouelioù o frenester, hag aze, er gambr a voe kambr Lia, en disloar, e leñvont.

Da larout gwir, n' emañ ket c'hoazh Lia el Loar. Kerzhout, kerzhout a ra davet ar paotrig o vousc'hoarzhin a-hed nozioù kaer hañv.

Hi 'fell dezhi mont d' e gaout en e di aour. Hiviziken n' hello ket bevañ heptañ. E beajoù he huñvre, he deus gouezet Lia ez eus ur paotrig o vinc'hoarzhin e-barzh al loar. Gant beajoù ar vuhez wir e vo kaset betek ar bugel skedus a zo

ouzh he gervel a-douez ar spered.

Kerzhout a ra Lia. War he c'hehin, e-barzh he sac'hig, emañ ar chokolad bet espernet ganti diwar gortozennoù ar sizhun.

Ganti en he divrec'h he merc'hodenn Esperas. Ha komz 'ra outi :

Esper, va c'hoantig,
Nijomp eus an douar
Da gaout ar paotrig
A c'hoarzh el loar
Dreist an erinoù
Hed-noz en hañvoù
Ez in davetañ,
'Timezin dezhañ
Esper, va c'hoantig,
Setu va c'hoant din.

Paotredigoù an douar n' hellont ket frealziñ Lia. N' ouzont tamm diouzh he mirout ganto. Rak ne vo eürus Lia nemet gant Mabig al Loar.

Kerzhout a ra Lia, kerzhout a ra e sklaerder he huñvre. Emañ al loar atav e penn pep hent. Bez' e sav Lia he divrec'h daveti. Denesaat a ra. Hepdale e c'hello briata mabig an Neñv.

Hogen pa vez erru Lia e penn an hent, emañ al Loar e penn an hent all. Ha bewech e vez evelse. Lia avat ne goll ket kalon.

55

Ne gar den ebet ken er glen-mañ , he c'harantez-Neñv a rank-hi da gaout.

Emañ paotredigoù an douar o c'hervel anezhi, en aner. A bep tu war ar wenodenn, hag a-hed an hent, ec'h astennont dezhi o divrec'h, evit netra. Emañ paotred an douar o kinnig dezhi ar boket taolioù-lagad a gutuilhont en o c'halon, o c'houlenn diganti mont ganto e tiez gwenn an douar, mes avel kement-se dezhi. Zoken n' o gwel ket, ne glev ket-hi o gerioù karantez. N' he deus soñj erbet nemet e ti aour Mabig al Loar. Ha mont a ra, mont a ra bepred. Ankouaet ganti he zi, he c'hoarielloù, hag he gwele bihan ruz-roz, ken tomm e-kichen ar gleuzeur. Ankouaet rouzmouz ar c'hazh du, roz ha laboused al liorz. Ankouaet he deus zoken, merc'hig dizanaoudek anezhi, he c'herent, madelezh pennek he zad, mouezh ha flourigoù he mamm.

Tapet he deus un taol-loar en he c'halon, grevusañ kleñved ar bed ! N' he deus nemet un dezo ken : tizhout ar bugel n' hell ket bezañ tizhet, Bugel an Neñv, keneil ar stered, a zo dezhañ an avel da c'hoariell, ar stered da ganetennoù, bali Sant-Jalm da wenodenn, ar Mabig eus al Loar.

Hag e vale, e vale dizehan. Skuizh ez eo aet paotred an douar. Ne daolont ket mui evezh outi. Aet int da gavout gwir merc'hed an douar, ar re a gar an douar, na sellont ket re ouzh an Neñv.

Hec'h-unan-penn emañ Lia. Met kerzhout a ra, kerzhout a ra diastal. He fourvezioù diwar he gortozennoù a zo aet da get pell 'zo. E-pad an hañv e tebr frouezh hag hugennoù war vord an hent. D' ar goañv, e kav bemdeiz ur verourez vat bennak da reiñ dezhi he zamm bara.

Paour meurbet eo Lia, truilhennek, glebiet gant ar barroù-glav. Goulenn an aluzen a ra. Ne vern ! Ne vev ken hi nemet evit ar Mabig skedus a vousec'hoarzh outi en Neñv. Eñ a zo ouzh he gervel. He gortoz a ra. En nozioù brav e c'hell-hi gwelout e vinc'hoarzh e-kreiz kant aour al loar.

Bale a ra Lia, bale a ra, bale a ra. Lezet he deus he merc'hodenn Esperañs da gouezhañ en ur poull fank. Hep tra ken hep didu ken ez eo bremañ, hep c'hoariell ken, hep eñvor ebet ken. Aet eo kozh, tremen kozh, peuz toc'hor. N' eus forzh ! Aze emañ Mabig al Loar, tost, tostik, o vousec'hoarzhin dezhi, oc'h astenn daveti e zivrec'h sklerijenn. N' he deus mui nemet un nebeut kammedoù d' ober a-

benn e dizhout. Ne varvo ket kent bezañ bet gantañ.

Un nebeut kammedoù ? Siwazh nann. Pelloc'h emañ, uheloc'h ! Ret eo pignat gant ur menez gwennerc'h dindan an ebrou yen-skorn.

56

Dizant ez co deut Lia da vezañ, peuz-divlev, diskarn. En em stlejañ 'ra. Diwadañ. Du-hont avat, e krec'hig-krec'h ar menez, emañ Mabig al Loar ouzh he gortoz. E kav da Lia e klev anezhañ o c'hervel : « Deus, va muiañ-karet ». Bez e stegn he nerzhioù diwezhañ, e tap krog a-bouez he bizied kignet ouzh an tarroz. Fellout a ra dezhi gwelout he Muiañ-Karet kent mervel. En em c'horren a ra a boan vras. He daoulin n' int ken ur gouli bras. Erfin setu al lein ma c'hwezh un avel zu warnañ.

Ha Mabig al Loar, pelec'h emañ ?

Aze ! Outañ ec'h anzavo Lia he c'harantez a-raok mervel. Ul lenn steredleun zo war gern ar menez hag emañ Mabig al Loar o kouronkañ enni.

War ribl al lenn, e komz Lia ouzh hec'h ene, kement tra a chom ganti.

Ha Lia o kanañ :

Va ene, va c'haezh,
N' out nemet hiraezh
A vont e barlenn
Mabig an Neñvoù
Brenin an Hañvoù
A blav 'barzh al lenn
Ez in davetañ
'Timezin dezhañ.
A ene, va c'haezh,
N' out nemet hiraezh.

Eus al lenn stergannek ma kouronk enni emañ Mabig al Loar dalc'hmat o c'hoarzhin ouzh Lia.

Hep termal, Lia gozh, tremen gozh, en em daol el lenn da gaout he Muiañ-Karet.

Met ne dap nemet dour en he divrec'h. En em zifretañ a ra. Garmiñ a ra. Tagañ 'ra.

D' al laez, en uhelderioù didermen, e-kreiz steredennoù an neñv, emañ Mabig al Loar o vinc'hoarzhin da viken.

PREDERIADENNOU E SIGUR UN NEBEUT SKRIVAGNERION VREZHONEK

gant Youenn OLIER

Pennad X

KERVERZIOU

I

Ar pezh a zo souezhus en oberenn Gerverziou eo n' eus, tost da vat, nemet barzhoniezh anezhi, ma lakaer a-gostez an div gontadenn a skrivas e diwezh e vuhez, pe skridoù skiantel e-giz ar « Strilhouriezh » hag un nebeut pennadoù embannet e-barzh Galv pe Arvor e-pad ar brezel. Padal eo aes kompren an dra-se pa soñjer er boan a lakae ar skrivagner-mañ da sevel e bezhioù barzhoniezh. Ne zareve ar re-mañ nemet goustad en e empenn ha moarvat ne zlee ket ar barzh bezañ laouen ganto bepred peogwir e tegase kemm enno pa gave tro d' o advoulañ « Koumoul » da skouer pe « Goursav ». An doare arz a bleustre, a-hend-all, a c'houlenne kalz a aked e gwirionez. Ar skrivagner-mañ a zo unan eus ar re a gase da benn ali Roparz Hemon e-barzh « Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh » : ret eo d' un arzour sevel ur voger a-enep d' ar sottoni. Savet en deus ar voger-se, dreist-holl, gant ur yezh divoutin ha dibemdeziek a-grenn. A-ratozh kaer en deus graet, ha rak-se e c'houlenne digarez digant al lenner e-barzh rakskrid un dastumad a lakaas moulañ e-barzh Sav dres a-raok ar brezel, e-lec'h e anzav en deus ranket « gwall gas al lavarenn hag ober fae war ar savadur-gerioù ». A-bouez e vo eta studiañ yezh Kerverziou, rak bouedenn e arz eo, evit darn. Setu pezh a raimp a-hend-all e-kerzh ar studiadenn-mañ.

II

A-ziaraok, avat, e klaskin heuliañ emdroadur e varzhoniezh rak krediñ a ran e c'heller digemmañ e-touez e varzhonegoù meur a rummad hervez an displegerezh (ne zibabin ket da verk-anaout ar gwerzaouerezh ; studiet eo bet hennezh gant Arzel Even endeo).

58

Ar barzhonegoù kentañ embannet gantañ da skouer hag i gwerzaouet distrizh, o deus dija an darn vuiañ eus ar perzhioù o devo ar barzhonegoù a embanno diwezhatoc'h, e-barzh Sav dreist-holl. Ne glask ket ar barzh taolennañ ar bed diavaez hervez ar raktra (1), hogen talvezout ar merzad, al « louc'had » a ra hennezh warnañ. Alese ar c'healstrolladurioù digenstag ha di-urzh a zo enno. Al loar, da skouer, a zo da gentañ « lagad an noz » hag a zeu da vezañ da c'houde ur « bladenn-sonskriverezh » marteze dre m' emañ ar barzh o selaou d' ar mare-se « jazz-tredan » ha « saksofonioù ». Ar pezh a fell d' ar barzh rentañ er pezhioù-se *Skrivsonerezh, Lizheroùigoù, Eeunded wenvidik, Y mae' r eneth* eo fetisted di-eil ur c'houlzad amzer. Ne vo ket kement-se barzh ar galon, evel ma intenter hemañ peurliesañ. N' eo ket diouzh un drivliadenn pe ur fromadenn eo ganet ar pezhioù : d' ar muiañ e c'hellfed diverzout enno un hiraezh tregaset da eurvad ar garantez. Netra avat n' eo diskouezet en un doare resis.

Daoust ma kaver gerioù ha troiennoù divoutin e-barzh ar barzhonegoù-se e-giz « elienadur strinkel e luc'h » e chom ar yezh sklaer a-walc'h, dre vras. Rak-se e c'heller tañva duster taolenoù zo ; da skouer, ur veilhadenn a rener o lenn a-gevret, da noz, « Lizheroùigoù » ; a-wechoù ivez ur ficherezh hag ur c'hinklerezh deut mat : ar c'hemm etre « te » ha « c'hwi » en hevelep barzhoneg, koulz hag an dibenn klasket met brav evelato

Hag o lakaat perlezennoù war ho tal.

N' em eus ket komzet er rann-bennad-mañ eus daou berzh all hag a zo ispisial un tammig « Al Leñverez » a ziskouez dreist-holl un arz plastek, klasel a-walc'h. Evit « Fedeln » ez eus anezhañ ur pezh barzhoniezh arouezennel brav a-walc'h, hogen dibar ha pellik diouzh doare boaz Kerverziou.

* * *

An « Diri-Servij » er c'hontrol a darzh diouzh an hevelep mammenn ha « Skrivsonerezh ». He gwrizienn a zo er merzad fetis a santas ar barzh en un iliz e-barzh un ofis. Sevel a ra da goun al lenner skeudenn un iliz, en un amc'houlou dam sioul; lidoù a sevenor ; kantolorioù a zo war enaou, du-se, er c'hor ; hag un den a zo o vouslavarout ur brederiadenn. Ar stern resis-se a zo diazez ar varzhoneg.

(1) « objectivement »

59

Kemmoù a zo evelato etre ar barzhonegoù kentañ hag homañ. Da gentañ ar vent : un oberenn hir a-walc'h eo an *Diri-Servij*. Frammet resis ez eo, hag ar c'hellusk a zo asuroc'h alies eget a-gent, da skouer

Pe war hent poanius
e kerzho en noz skorn an dilez
va ene paour ha glac'haret

pe c'hoazh

Merzout ez eus
Dreist ger an den ha karantez ar c'hig
ho ker diharz e donder an islonk.

En danvez ez eus kemm ivez. Donoc'h eo an awenadur d' ar wech-mañ eget er rummad kentañ. Un darvoud bras o tigempouezañ buhez ar barzh hag o lakaat dirazañ gwall gudenn ar marv a oa c'hoarvezet. Ar marv, setu eta testenn ar varzhoneg hirmañ hag a zo da geñveriañ eta ouzh *Nozvezh Arkuz*, nemet kalz diabarzheloc'h eo an awenadur anezhi, ha relijeloc'h kalz ivez, war va meno. Fromus eo ar prederiadur-mañ, graet a vouezh izel en amc'houlou un difeiz ha na venn ket plegañ e-kreiz un arvar ha na da ket da get, en enklask un ene o tamwelout ur gouloù ha n' hell ket degemer. Ur stourm etre ar galon hag ar spered hon eus amañ c'hoazh 'vel e-barzh « Barzhoneg evit Kreiz ar Bloaz » nemet war un dachenn ledanoc'h. Sur mat ez eo ar varzhoneg-mañ unan eus ar re gaerañ a gement a zo bet savet en hor yezh gant un den ankeniet war vevenn ar Feiz.

N' ouzon ket perak e tremener an *Diri-Servij* da vezañ digomprenus. (Lennet em eus kement-se, a gav din war Arvor, gwechall.) E-touez ar re voullañ savet gant an aozer-mañ ez eo. Ha n' eo ket souezhus pa soñjer e gwirionded leun ar skrivagner : Tarzhañ a ra ar varzhoneg-mañ, war eeun, diouzh ar galon. An disklaered n' emañ, a-wechoù, nemet er gerioù ijinete-se a ranker treiñ evit kompren ervat, hag a glaskimp diskleriañ diwezhatoc'h.

* * *

E-mesk ar barzhonegoù a skrivas Kerverziou war-lerc'h an « Diri-Servij » e ranker diforc'hañ meur a stumm a gav din. Ha, da gentañ, ar re a c'heller diverzout enno un tem merzadel o talvezout da skeudenniñ ur « prouiad » (1) bennak eus ar skrivagner, kavatur ur wirionez bennak diwarbenn buhezegezh.

(1) « Profiad » e kembraeg. Erlebnis en alamaneg.

60

Klaskomp dielfenniñ an doare barzhoniezh-se hag a zo an hini gwriziennelañ en defe graet gantañ Kerverziou. Kavout a reer skouerioù anezhañ dreist-holl en dastumad deut ermaez war Sav (niv. 16) , dreist-holl er pezhioù-mañ *Goursav*, *Triadennoù*, *Pedenn*, *Rerall zo skuizh* (an div gentañ adembannet diwar Barzhaz Gwalarn) . Enno holl, mui pe vui, e kaver tem ar mor. Ar barzh a zispleg emskiantadennoù en deus bet war an aod pe war ar mor. E-barzh *Koumoul* avat e taolenn deomp tec'h ar c'houmoul en oabl ha *Loariad* a zo arvestadur ouzh un nozvezh loargann.

Ma ne gavfed nemet kement-se er pezhioù-se ne vefe barzhoniezh Kerverziou nemet unan livus. Hogen muioc'h a zo : graet en deus ar barzh eus ar merzadoù poentel-se, displeget en ur yezh iskis, nevez flamm evit talvezout o dibarelezh, aroueziadur e vuhez ene. Lakaomp *Goursav* : gouloù un heol hag a dreuz betek ho malvennoù serret, pa vezit astennet e don ur vag, war ar mor, a zeu da vezañ arouezenn ar sklerijenn diabarzh hep par a ziskleir deoc'h bed ha bezoud. *Triadennoù* : lusk goustad ha reoliek ar roeñvoù o kas ar vag war-raok war wagennoù diziwezh hag unton ar mor a zo skeudenn untoniezh ur vuhez skuizh ha na fell mui dezhi nemet en em lezel da vezañ kaset gant ar froud hep herzel. *Koumoul* : o zec'h a zegas deomp koun an dazont dianav, an aon razañ, klozet gant un akt a fiziañs, h.a. Ul liamm soutil tre ha n' eo ket aes atav da santout a zo eta etre an emskiantad hag ar prouiad. Peurliesañ, a-hend-all, e c'heller reiñ ur ster resis, goude prederiañ, da bep lavarenn, lakaomp, en degouezh-mañ

Hep ken lusk a vennerezh
barrad heol a-dreuz koumoul
vit reiñ dei tamm hoalerezh

e-lec'h e talv ar « barrad heol » kement ha froud ar youl oc'h argas koumoul an digasted: (Notit ivez an ereadur iskis : « barrad-heol » h.a. a zo stagad an anv-kadarn « lusk ».)

* * *

61

D' ar stumm-se en deus dalc'het Kerverziou betek diwezh e vuhez varzh, dre vras avat, rak un emdroadur a verzer evelato. Dilezel a ra an tem merzadel evit lakaat en e lec'h un tem aroueziel, hini ur raktra bennak. Ar Stern-moulañ da skouer, a zo livet ez resis kenañ evit rentañ menoz ar gened tizhet dre ur redierezh strizh (er vuhezegezh koulz hag e pep tra). Savet er memes doare eo *Brateri Mov*. Hevelep perzhioù, furm resis kenañ, linenn peur-eeun, a gaver e-barzh *Frehel* nemet amañ evit merkañ talvoudegezh ur gweledva : ar pezh en deus skoet c'hoazh amañ spered ar barzh n' eo ket livusted ar gweledva, hogen pezh a dalveze ; an nerzh hag ar startter. *Dor an Nec'h* a seblant sinifiañ kement-mañ ; n' heller tizhout ar joa nemet dre ar boan. Amañ c'hoazh avat a zo ur raktra resis a ra unded ar varzhoneg. Ar pezh diwezhañ-mañ a ziskouez ivez un tech all eus ar Kerverziou : an tech da grennañ ar muiañ ar gwellañ a dalvoudegezh veizel en un nebeut pozioù sterleun ha peurlabouret.

* * *

Erfin bez ez eus ur stumm all kar d' ar re-mañ : evit talvezout ur menoz pe ur prouiad bennak e implijo ar barzh ur rumm empennadennoù kealstrolladurioù, hep diazez nag unded verzadel resis, digenstag evel er barzhonegoù kentañ. Kemeromp « Mouez Dizremm ». Ennañ en deus Kerverziou berniet skeudennadurioù iskis, hini « ur c'hazh o viaoual ouzh ur spontailh » da skouer a zle kenlivañ stad e galon. Dam-heñvel eo e-barzh « Arouez » pe « Marvnad ». Forzh penaos, amañ c'hoazh e tleer, a gav din, treuzlakaat empennadurioù ha skeudennadurioù, evel ma tleer ivez jubenniñ ar pezh « Angelis suis mandavit » hag a zo un doare gweledigezh a seurt gant ar re a gaver e-barzh oberenn Langleiz : holl o deus un dalvoudegezh veizel resis daoust ma hañvalont bout disklaer d' ar c'hentañ lenn, setu pezh hor boa merket endeo. Ur skouer all eus ar stumm-se hon eus e-barzh ur pezh evel « D' am c'hennyoul dianav » hag a zo ur varzhoneg empennel ha meizel a-grenn hep skeudenn : kengreizennerzh ha kendastumerezh a ra an diaester hag an dudi anezhi.

III

Aes eo kompren da heul ar pennad diwezhañ n' eo ket Kerverziou, e-giz ma verken diouzhtu, barzh ar galon daoust maz eo ur skrivagner personel tre. Meizel hag empennel eo e varzhoniezh, da lavarout eo e loc'h bepred diouzh ur veizenn ha n' eo ket diouzh un drivliadenn. Ha teñval eo e zisplegerezh dre ma fell dezhañ kendastum re a ster er gerioù.

62

Bez ez eus evelato e-tal ar pezhioù diaes-se re all hag a zo didro ha didenn o intent, o tont a-wechoù, muioc'h war-eeun eus ar galon marteze. Klaskomp gwelout da vihanañ. *Da Wenn B* da skouer a blij din en abeg d' ar reoliegezh sioul ha seder, kempouez ar stumm, surentez ar werzenn, distambouc'h an displegerezh,

donder an destenn ken-awen d' an *Diri-Servij*. Bez ez eus ivez *Stered an Noz* e-lec'h e kaver an hevelep displegerezh splann gant ur geriadur eeun, skeudennoù diglask, boutin, ur stumm strizh a-walc'h, avat, ha da awenadur melkoni un arvar didrec'hus

Dumañ ne gaven met brumennoù
An heol aze a feuk va daoulagad
heklev gwall c'houlennoù ha gwall enkrezioù an *Diri-Servij*.

Heñvel eo evit *Preder Anhun* ma par ennañ atav ar spered relijiel a oa bet enaouet er barzh gant ar c'hañv kriz a c'hanas an *Diri-Servij*, war glask an emc'hланаат a gaso davet Doue

Penn an hent davet Ior, Penntiern ar Gwirvoud.

Ur varzhoneg all er rummad-mañ a zellez bezañ meneget abalamour d' ur werzenn vray tre ha kened « vizaouek » ar pezh dre vras : *Droug-vro* an hini eo, hag ar werzenn a zo houmañ

Bez e kan ez anv mil levenez tanav.

Par d' ar varzhoneg-se eo ivez *Delioù-hañv*. Kaerder ur brageriz a zo dezhi. Notomp a-hend-all e kavomp er rummad-mañ pezhioù, bas o awenadur, start ha sklaer o stumm avat, da skouer *Mae dy lygaid yn las* pe *Lidkinnigoù* (1). Neuze e teu Kerverziou da vezañ un arzour a bleustr war ar furm a-raok pep tra.

Bezomp reizh a-hend-all, hag anzavomp n' eo ket eeun an holl bezioù eeun-se netra nemet dre ma n' int ket diaes da intent. Ha, peurgetket, ne gavan ket kalz a dalvoudegezh da zaou bezh evel *Tra Nebeut* pe *C'hoant*, moarvat dre maz eo skors ha boutin an danvez, dizampart an displegerezh, pe re ordinal

Ar gwaz zeu, an ael a dec'h
ha peogwir n' eus gwir drivli ebet en diazez anezho.

(1) Menegomp ivez ar yezh plaen barzhoniel Distro Putheas da stagañ eo ouzh ar pezhioù m' eo ar mor an tem anezho.

63

IV

Graet en deus Kerverziou gant un doare barzhoniezh all : ar varzhoniezh prederouriezhel en div oberenn hir a-walc'h *Epona* ha *Manos ha Bena*. (Ur varzhoneg hir all a seurt gant ar re-mañ a oa gantañ war ar stern pa voe sammet gant an Ankou.) Enno en deus ar barzh displeget menozioù difetis, dreist pep tra, e vedvezadur, ma karit. N' em eus ket da bleidiñ gant an danvez bremañ. Merkomp avat ar pezh a zo nevez er furm.

Ur yezh klasel a-walc'h en deus dibabet Kerverziou amañ. Gwir eo e implij c'hoazh un nebeut gerioù kevrennek, nemet an implij anezho n' eo ket sistemek tamm ebet, evel e-barzh barzhonegoù all zo. D' an eil hon eus afer ouzh oberennoù hirik, frammet ha savet. D' an trede, o vezañ m' eo dezrevell ar pezh a ra ar barzh e kavimp amañ ur prezegerezh n' oa ket plas dezhañ er pezhioù all : an ereadurezh n' eo ket disprizet amañ evel ma oa e-barzh pezhioù all a zo. Bez e kejer ivez gant ur c'hellusk ledan aes hag heson, par d' an hini a zo er pezhioù resis, pezh a ro ur stumm gwirlivek un disterañ d' ar barzhonegoù-se.

Prizet em eus enno dreist-holl taolennadurioù ec'hon marzhus eus gweledvaoù ha marevezhioù espar : gweledigezhioù brav tre a zo e livadur ar gazeg e-kreiz ar c'hoad

A-dreuz da varroù stank ar brouskoad h.a.
pe

dameuc'het e doureier feunteunioù boull an ene

Ur blijadur eo ivez tañva pervezhded ar yezh hag a oar displegañ pizh ar menozioù difetis an diaesañ hag ar skoempañ. Ur varzhoniezh prederouriezhel eus ar gwellañ en deus savet Kerverziou.

N' eo ket disi kennebeut seurt pezhioù a-hend-all. Re blaen eo displegerezh *Manos ha Bena*. Re a venozioù a zo chouket e-barzh, ha rak-se e seblant bezañ sec'h daoust d' al luskad luraek kaer tre

Gwenn o bed d' ar re bur a vez awalc'h dezhe
ha bez ez eus ivez skeudennoù boutin a-walc'h evel « balafenned o sunañ glizh ar
gouzout » e-barzh *Epona*. Hogen, dre vras evelato e chom ar barzhonegoù-se e-touez
ar re arzelañ savet gant an aozer.

64
V

Deut eo ar c'houlz studiañ ar yezh implijet gant Kerverziou hag a zo darn
eus e arz hag e zoare. Ar skrivagner-mañ a zo unan eus ar re o deus klasket ar
muiañ ar gwellañ govelian ur benveg barzhoniañ dezho o unan. Kentañ tra da ober
avat eo sevel ur roll - diglok eveljust - eus ar gerioù divoutin en deus
Kerverziou graet ganto. Setu eta un toullad : eneb, hil, kenel, karbed,
kevarc'hiñ, lav ; ezneuz, ezkelc'h, ezaon, ezluskus ; amvoud, amliv ; arouestlet,
arguñvelezh, arsellout ; hudvarnedigezh, dreistsklerijennegezh, heñvelc'hlad ;
treluc'h, trec'houlou ; gwennhollwisket ; kalongemerus, dizefreizusaet,
didrevezusaet, dihevarn ; meizleun, kevrinleun ; anvek, klodveurek ; flourgen,
divlazidigezh, dilezidigezh, marvidigezh ; geneliezh ; brozeskobel.

Menegomp ouzhpenn ereadurioù direoliek amprestet awechoù digant ar brezhoneg
krenn pe ijinet gant ar skrivagner « lagad-se an noz », « dindan broud kuzh a
c'hoanage da youl ».

Studiomp un tammig orin ar geriadur hon eus meneget uheloc'h. Lakaomp a-
gostez un nebeut gerioù deveret evel « divlazidigezh », h.a., hag a zo aes a-
walc'h. Bez ez eus a-hend-all un dornad gerioù kembraek pe brezhoneg krenn : ar
rumm kentañ : eneb, wyneb ; kenel, cenedl ; karbed, cerbyd ; anvek, enwog ; ezaon,
ehofn, h.a. ; genou digevrenn nemet an hini diwezhañ.

Perak en deus Kerverziou o degaset en e skridoù ? Peogwir e krede, moarvat,
evel barzhed all e tle yezh ar varzhoniezh bezañ diforc'h krenn diouzh ar yezh
bemdez. Reiñ a reont da honnezh ul liv hud n' he defe ket hepto.

Ar gerioù all a zo gerioù kevrennek stummet e-giz ar re a gaver e-barzh
yezhoù all, gresianeg pe alamaneg. Evit o c'hompren e ranker o zreiñ :

- kalongemerus a dalv : a bik ar galon ;

- ezluskus-goulaouüs : a gas un den er-maez anezhañ e un, hag a sklerijenn
anezhañ (ster relijiel) ;

- dizefreizusaet : m' eo bet tennet dioutañ ar pezh a oa spontus ennañ.

Kendalc'hit hoc'h unan. Aes a-walc'h eo kompren peurliesañ, ket atav avat,
rak moarvat e chomo boud al lenner dirak gerioù seurt-mañ :

- dreistsklerijennegezh, rak aze e ranker meizañ roll ar ger, gouzout da
gentañ ez eus anezhañ un anv-kadarn hag a zo stagad un anv-kadarn all (n' eo ket
un anv-gwan evel mezvez). Hemañ eo ar ster : perzh un dra a ro deoc'h ur
sklerijenn dreist. Setu penaos da nebeutañ e komprenan ar ger-se.

Bez ez eus ivez ar rumm gerioù o kregiñ gant ar rakger « ez- » : ezkelc'h,
h.a. Ur ster skiantel resis o deus peurliesañ moarvat, hogen n' eo ket boull atav,
ret eo anzav.

65

Gerioù kevrennek all avat, e-giz *meizleun*, *kevrinleun*, h.a., n'int ket ken
diaes da intent eveljust, ha deut int da vezañ boutin a-walc'h hiziv a-hend-all
(1).

Bremañ, peseurt talvoudegezh reiñ d' ar gerioù kevrennek-se ? Houmañ, a gav
din : evel m' eo an dielfenniñ perzh ar yezh-plaen e tle ar c'hendastum bezañ hini
ar varzhoniezh. Ac'hann an troiennoù hag ar gerioù krennet-se hag a zoug kalz en o
berllavar, ha muioc'h kalz eget ar pezh a verzer d' ar c'hentañ sell. Kentoc'h
eget implij klasel ar skeudennoù, keñveriadurioù ha damegoù, setu merk digemmañ
barzhoniezh Kerverziou.

Ar skeudennoù, paz eus anezho, a-hend-all, n' int ket dibabet en arbenn d' o c'haerdet evel er varzhoniezh klasel met en abeg d' o zalvoudegezh veizel. Klask an dalvoudegezh-se eo a ra dudi al lenner : plijadur ar spered eo a ro barzhoniezh Kerverziou, ha pa vez unanet hounnezh gant an hini a ro ur c'hellusk (e-barzh *Triadoù* pe *Koumoul*) e tizh ar barzh kinnig deomp gwir daolioù-micher.

VI

Koulskoude e c'heller pismigat. Lakaomp da gentañ n' eo ket ar gerioù hir am eus meneget a-enep da ijin ar yezh, pezh n' eo ket diarvar, evelato e ranker anzav e chomo ul lodenn vras eus ar gerioù-se apaksoù hepken. Daoust hag heson ha kenedus int ? distagit da skouer drei-stskl-erijennezh. Penaos o fouezmouezhiañ ? Re zigorfel eo barzhoniezh Kerverziou. Ar meiz a dalv re enni.

Tamall all da ober : n' int ket sklaer atav. Lod anezho n' on ket sur da vezañ komprenet mat. Pozioù zo ne ouzon ket penaos intent dres. Padal n' em eus ket arboellet va foan na va amzer. Daoust ha kalz lennerion all, hiziv e Breizh, o devo kalon a-walc'h da studiañ pizh ar skridoù-se.

Erfin ur rebech diwezhañ. O vezañ ma striv ar skrivagner dreist-holl da reiñ ur stumm lizherjedoniezhel d' e gealioù, e walleg a-wechoù, mui pe vui, kened ar frazenn hec'h unan. Amparfal ha diheson eo ar werzenn-mañ da skouer
a ra ne deo 'n den loenigan
pe kenjedadurioù kensonennoù gwall sonus
en deus 'n d...

(1) Ur fazi eo o implijout er yezh plaen, a gav din.
Kerverziou a ginnige ivez gerioù tec'hnel e-giz ezkas (émettre).

66

Ret e oa ober ar pismigadennoù-mañ a gav din. Hogen, ne vern, barzhoniezh Kerverziou a zo unan eus ar re a ra enor d' an den en deus he savet abalamour d' al labour, d' ar boan ha d' ar preder a zo aet enni. Dellezout a ra, sur mat, muioc'h eget bezañ lennet diwar c'horre (1) .

VII

Ur gontadenn evel « Foar Vre » a vefe da geñveriañ war va meno, ouzh « Epona » ha « Manos ha Bena ». En holl bennadoù skrid-se e kaver an hevelep karantez ouzh gouenn ar Gelted hag o hengoun relijiel hag a zo anat dreist-holl en diwezh e-lec'h e verk Kerverziou e kendalc'h ar stourm etre ar Breizhad feal hep gouzout dezhañ da gredenn e hendadoù ha difenner ar relijion nevez ar person. Daoust ha peurwirion eo ar skrivagner o tiskouez an enebiezh-se ? N' ouzon ket. Pezh am eus tañvaet avat er gontadenn vras-se eo da gentañ kemmesk ar gwirvoud hag an huñvre, ampartiz ar c'honter a oar hol lakaat da c'hortoz betek an dibenn sabatuus disoc'h an danevell en deus boulc'het, livadur darvoudoù boutin ha taolennoù ar vuhez war ar maez, resided dispar ur yezh hag a oar diskleriañ en un doare biskoazh pervezhoc'h an traezoù a zo war hon tro, ar re a zo en tren da skouer. Kement-se a ra eus ar gontadenn-se ur benn-oberennig.

Disheñvel krenn diouzh hounnezh e meur a geñver eo ar gontadenn all embannet gant Kerverziou : *Barr-arnev*. Er skrid-se n' eus ket anv eus ar Vreizh speredel a oa karet gant Kerverziou. Chom e Breizh, sur mat, a ra an dud a ziskouezer deomp, hogen bourc'hizion int, hag en danevell istorel-se ne veneger nemet « resistañsourion ». Kement-se a brou pegen dibersonel ez eo a-wechoù skridoù Kerverziou.

Un dalvoudegezh studi ene he deus ar gontadenn-mañ. An amzer a zegas kemm en dud hag a zisrann ar re a grede e oant graet an eil evit egile : n' hell ket ar garantez bezañ trec'h da bep tra, hep envel bezañ trec'h d' an Ankou.

Un drama verr dezrevellet prim ha dillo, dastumet e korf un abardaevezh, saouzanus a-se, hep gwirliverezh izel, peogwir ez eus kellusk a-wechoù e komzoù an dud, setu pezh ez eo *Barr-arnev*. Enni c'hoazh e tañvaan akuitted ur skrivagner a

oar livañ pizh ur poentad amzer karget a wirvoud fetis dibar.

(1) Lakaat a ra da soñjal en hini Mallarme pe Valery e Bro-C'hall, daoust pegen disheñvel e ve barzhoniezhoù an daou-mañ

67

Ur ger a lavarin diwar-benn ar yezh. Poblek eo a-wechoù - tres an tregerieg a zo warni - hag eeunoc'h kalz eget hini ar pezhioù esoterek. Evelato ne gil ket dirak ar gerioù pe an ereadurioù dibaot : « Diwar e zont a-daol-trumm » (BA) , « Kement kalon plac'h hedouell » (BA), « Soñj a 'm bout gwelet » (IV) . Heverk eo ar fed-se peogwir e tiskouez en deus bet ar skrivagner an dezo da binvidikaat ar yezh, ha n' eo ket hepken klask un displegadur hiniennel a-grenn d' e soñjennoù (1).

Keuz a c'heller kaout, eta, n' en deus ket gellet Kerverziou sevel muioc'h a gontadennoù. Drezo e vije bet tostoc'h d' e lennerion, sur mat.

VIII

Ur gontadenn embannet war-lerc'h marv ar skrivagner eo *Llena Davies*. Hiroc'hik eget ar re all, a bouez brasoc'h egeto ivez peogwir en deus lakaet ar skrivagner ugent vloaz da sevel anezhi : kement-se a rofe a-walc'h da grediñ e oa gwriziennet don en e vuhez, e un an destenn anezhi.

Kar eo « Llena Davies » da « v-Barrad Arnev » : un istor karantez eo hi ivez. Hardis tre eo avat, ken e hañvalo « An Dour endro d' an Inizi » bezañ dinoazh a-walc'h en he c'heñver. N' eus ket evelato bourrerezh ebet en taolennadurioù hudur a gaver enni hag an dra-se marteze, a c'hell o digareziñ. Moarvat e felle da Gerverziou reiñ un dalvoudegezh kevrinel d' an orged : ar pennad diwezhañ hen diskouezfe a-walc'h. Rak ne gredan ket e savas an taolennadurioù-se a-benn tresañ ene Mab-den en e izelañ gwirvoud, evel ma ra meur a skrivagner. Pa anavezer ar skrivagner e tleer reiñ un abeg all dezho.

Testenn ar gontadenn hec'h un a-hend-all a zo boutin a-walc'h : ar garantez o tiwanañ diwar feukerezh, ar warizi foll, netra gwall nevez e kement-se. Met amañ c'hoazh eo arabat barn re brim : birvikaet eo an destenn-se gant ur gred dam-heñvel ouzh an hini a verzer e-barzh « Diri Servij ».

Pezh a zo diaesoc'h da zidamall eo dezrevelladur rouestlet a-walc'h ar gontadenn meur a zanevellour a gont en anv ar skrivagner, ha kement-se ne laka ket an oberenn da vezañ sklaeroc'h a se. En em c'houlenn a ran a-hend-all ha peurechu e oa ar skrid-mañ. Re drumm eo marteze dibunadur an darvoudoù displeget, evel pa rafe diouer pennadoù-eren. A c'hell bezañ eo mennet kement-se : ne ziskouez ket avat neuze ampartiz a-berzh ar skrivagner.

(1) Dre ma oa glanyezhour ivez e implije seurt troiennoù.

68

Erfin, bez ez eus c'hoazh kudenn ar yezh hag a zo dibar diouti hec'h unan, pinvidikaet a-wechoù, re garget ha disneuziet a-wechoù all. Da skouer, implij « henoc'hik » hep adster resis ebet, a gredan, hag a zo ur « barbarekadur », - ha furmoù all didalvez peogwir int kenster rik da re all implijet er yezh a-hend-all.

Ret eo degemer koulskoude e ra Kerverziou a-wechoù kavadennoù-geriañ dispar, goude m' int dam-zisklaer. - Lakaomp « ez divoaz », « ene-holl » pe c'hoazh « flammeg an emreiñ dianavezet pe disprizet e-kreiz he bezañ », lavarenn sterleun hag hi disklaer d' ar c'hentañ sell.

Lies a-walc'h eo a-hend-all dudi an oberenn. Ha da gentañ e venegin un dra hag a zo d' am meno, a bouez bras en hol lennegezh : Taolennadur rannvro ar Wilen hag ar gêr bennañ anezhi, Roazhon. Ar wech kentañ eo zoken, a gav din, e c'hoarvez holl zarvoudoù ur gontadenn, pe dost, er gêr-se. Ha n' eo ket hepken menegiñ anvioù straedoù, pe lec'hioù resis, labourva « Kevrenn ar Skiantoù » da skouer, eo a ra Kerverziou hogen livañ neuz ar gêr hec'h unan, gant he c'hanolioù o dourioù

du ha chag, pe ar maeziou a dro-war-dro « ma sav ar vorenn a ziwarno ».

Tennañ a ra un tammig Llena Davies, ret eo lavarout ivez d' un doare-lennegezh a zo paret e Breizh abaoe « An Aotrou Bimbochet e Breizh ». Faltazierezh amzer da zont hor bro. Moarvat n' en deus ket pouezet kalz Kerverziou war an dazont-se (*) . Hogen an dra-se a zo da verkañ evelato.

En diwezh, an taolennoù « diabarzhelzh » gant o « dazc'houlou » a zo heverk ivez. Marteze ez eus anezho ar pennadoù arzelañ : sklerijennadur un tan er siminal e-kreiz amc'houlou ha didrouz ar gambr kendoniet dezhañ « Skleur ar regez, h.a. ». Un doare barzhoneg hon eus aze.

Komzomp bremañ eus ster ar gontadenn, maz eus unan dezhi. War a seblant, e-giz m' em eus merket, e tiskouez ar gontadenn frouezh an orged dizalc'h, ar c'hastizadur anezhañ, ma karer. Petra a dalv neuze ar pennad diwezhañ iskis a-walc'h ? Marteze petra e tle bezañ gwir natur ur serc'h wirion ? N' eo ket splann, ret eo anzav. Seul vuioc'h ma kaver amañ c'hoazh ur c'hemmesk menozioù espar. Anv a zo eus kofezadur, kenunaniezh ar Sent, kenwallegezh mibion Pec'hed Eva, hag e-tal dezho eus ar meleour-hud a oa penn-destenn ur gontadenn c'hallek troet gant ar skrivagner hag embannet e 1941, e-barzh Gwalarn, hep kontañ ar ster hud, amgristen, roet d' an orged dre vras. Amañ eta e par speredegezh Kerverziou en he gwriziennelañ, kement-se, hepmuiken, a broufe a-walc'h ne c'heller ket ober fae war « Llena Davies » pa studier oberoù Kerverziou.

(*) Kejout a reer ivez gant ur Roazhon kempred, anv ennañ eus Mona Pesker !

69
IX

Estreget dudi ar furn a zo en oberenn Gerverziou estreget « damskiant ar gorre » ha « diavaezou ar furn » (1) a zo da gavout enni. Hag mat e karfen damdresañ an hentad speredel a c'heller diverzout e skridoù ar skrivagner-se.

E gwirionez ez eo diaes komz eus menozioù Kerverziou dre 'n arbenn ma voent distabil bepred. Evelato e c'heller diforc'hañ teir elfenn er gredenn a stummas dezhañ e un e-kerzh e vuhez.

Da gentañ an elfenn gristen. Gouzout a reer eo bet dedennet Kerverziou gant ar gristeniezh. Diouzh e skridoù avat eo aes merzout ne voe biskoazh nemet dedennet ganti : ne voe nepred diarvar feiz ar barzh. Lennit *An Diri-Servij pe Stered an Noz*. Gouzout a reomp perak er varzhoneg kentañ : pezh a glaske er gristeniezh e oa ur goudor da drivliadoù e galon, un diogel da adkavout an eurvad kollet. Kement-se ne c'hell ket, drezañ en un, ober eus un den ur c'hristen.

Padal eo chomet meur a roud kristen rik en e venoziadeg hag en e stumm spered. Ar fiziañs da skouer, e-barzh *Koumoul* pe *Arvar Bemdez* ar pennad brav a embannas e 1942 war *Galv*, rak me 'gred ez eus eno muioc'h eget un « amor fati » bennak. Menoz kristen pe damgristen ar grouadelezh « Ger Doue » a gavomp e-barzh *Epona* ha na hañval ket bezañ reizhkredennek tre a-hend-all. *Manos ha Bena* ne ra nemet reiñ ur stumm keltiek da levr ar Genesis : ennañ e ro Kerverziou un doare diskleriadur da natur ar pec'hed gwriziennel.

Kounañ a ran ivez penaos en em harpe war ar Bibl evit diskleriañ ar steredouriezh (2). Klask a rae stagañ hounnezh ouzh meizad Ragevezh Doue ha diskouez n' oa ket a-enep da veizad dieubiezh an den. Erfin e ranker soñjal e pezhioù zo evel ar « Salve Regina » a savas e diwezh e vuhez hag a zo awenet gant un trivliad kristen pe c'hoazh *D' am C'hennyoul Dianav* e-lec'h e par marteze ar garantez kristen evit an nesañ diazezet war gen-natur an holl dud pe c'hoazh hini ar pec'hed e meur a bezh e-lec'h ez eus kont eus an emc'hlanat ret da vont davet Doue (daoust ma c'hell ar menoz-se kaout un orin all).

(1) Maodez Glanndour (Imram).

(2) En ur brezegenn hag a reas e 1946 e kelc'h keltiek Roazhon.

An eil elfenn a zo an hini geltiek. Daou levezon he stummas. Hini Meven Mordiern d' ar c'hentañ penn. Evit gouzout peseurt azaouez en doa Kerverziou ouzh hennezh n' eus nemet lenn al lizher a skrivas da geñver marv ar skrivagner-se. *Epona* pe *Manos ha Bena* a zo o gwrizienn en *Notennoù* hag er *Sketla* da skouer. Dre vras a-hend-all eo M. M. unan eus ar re a bouezas ar muiañ warnañ da dommañ ouzh hengoun ar Gelted (1). Ar skrivagner all a levezonas Kerverziou a zo Iolo Morgannwg (Kerverziou en doa desket mat tre ar c'hembraeg). Bez e fellas dezhañ degemer da wir pe da zamwir ar skridoù, a ziskoueze e oa chomet didorr hengoun an drouized betek hiziv. (Ho pezit soñj eus Foar Vre.) Setu aze an daou zen o deus broudet Kerverziou da adsevel ar gredenn geltiek.

E-barzh hounnezh a-hend-all - amañ e kavomp an drede elfenn - e oa mesket meizadoù all a denne dreist-holl d' an deosofiezh etrevroadel : treuzannezerezh glanaus an eneoù, (marteze) da skouer, speredouriezh, steredouriezh, gant kement goulakadurezh a zeu ganto, h.a.

Ar menozioù-se ne oant ket sistemek tamm ebet : n' oa ket Kerverziou prederour a vicher hag e venoziadeg a zo heñvel a-walc'h ouzh ur « pot-pourri » dibabet an elfennoù anezhañ (setu pezh a gredan da vihanañ) ha doareet gant ur spered skiantel (war an arnodadiñ e oa diazezet ar steredouriezh, gouez dezhañ, da skouer).

Daoust n' oa ket stabil e venozioù ne oa ket Kerverziou evit se, merkomp mat, un den ankeniet, rak surentezhioù nac'hus en doa da nebeutañ. En abeg da se ne gaver roud a wall-zoan hag a enkrez don nemet e-barzh « Stered an Noz ».

(1) Ur skouer all eus doujañs Kerverziou ouzh MM. E 1942 e anzave ouzhin e oa deut da gehelañ ar Saozon d' ur mare goude lenn ar « Prederiadennoù diwar-benn ar yezhoù hag ar brezhoneg ».

X
71

Anavezet em eus Kerverziou e-pad ar brezel en ur marevezh trubuilh goude ma oa bet ret dezhañ kuitaat Landernev, ha karout a rafen lavarout un nebeut geriennoù diwar-benn an den bremañ. Ar soñj anezhañ am eus dalc'het a zo stag da gentañ ouzh kentelioù ar Skol Uhel Emil Ernod e ti Kreiz Kêr, ti ar C'helc'h, hag e ti ar Framm, da noz, goude koan, peurliesañ. Daoust na oa ket bepred a bouez al labour a veze graet er c'hentelioù-se ez oa enno un nerzh entanañ iskis en hor buhez spered. Ha neuze e tistroemp diwezhat da noz e-kreiz teñvalijenn ur gêr dic'houlou, evit bezañ distro a-barzh unnek eur. Neuze e veze ivez breutaennoù diziwezh. Eñvorañ a ran bremañ e konte deomp ur wech penaos en doa kroget d' ur mare, hag eñ deut saozgar diwar lenn ar *Prederiadennoù diwarbenn ar yezhoù M. M.*, da lenn al levrioù saoznek erbedet gantañ er P., pe e tiougane deomp ur wech all diwezh ar brezel hervez jedadennoù graet gantañ, diazezet war ar steredouriezh.

Ar soñj anezhañ a zo stag ivez ouzh e ranndi bihan st. Oberthur, e-tal st. Pariz, e-lec'h e chome gant e diegezh. Derenet e oamp en e gambr-studi ; tro-dro, hanter ar mogerioù a oa dalc'het gant astelladoù levrioù ; e-kreiz, un daol-skrivañ bras evit ar pezh bihan-se ; war he gorre, e-leizh a levrioù, a gelaouennoù, a baperennoù hag a fichennoù a stlabez. En ur gambr all, ken enk hag eben, e oa berniet rummadoù diglok, siwazh, eus **Gwalarn** ha **Sterenn**, h.a. : ur gwir deñzor evidomp-ni brezhonegerion yaouank nevez deut d' ar yezh. Gant kalz a habaskted e klaske Kerverziou al levrioù a rae diouer deomp. Dare e oa bepred ivez da brestañ deomp al levrioù a c'houlennemp. Koun am eus e kinnige e unan prestañ din un deiz « Les Celtes » gant Hubert. Gwazh a se ! Ne voen ket dedennet tre nepred gant ar Gelted kozh, ha ne ris ket va mad eus ar c'hinnig-se.

Mont a raemp ivez da glask en e di keleier diwar-benn Arvor, Gwalarn, Sterenn, embannadurioù Skridoù Breizh ; goulenn a raemp peseurt romant a oa da vezañ moulet, pehini a oa o paouez bezañ bizskrivet, petra a soñje ar goumananterion eus ar skitur nevez (gantañ e ouezis n' oa bet nemet tri den o tigoumantiñ en abeg dezhi) pe keleier eus an Emsav dre vras.

Distreiñ a raen e 1944-45 ivez d' ar c'houlz ma oa kañv ha reuz en hon

touez. Teñval e oa an eurvezhioù-se. Digalon e oa ar barzh neuze ; dilabour e oa ; alies a-walc'h, soñj am eus, e veze gant ar berr-anal ha diaes e oa dezhañ komz ganeomp. Divizout a raemp a-zivout an darvoudoù : heñ-mañ-heñ a oa bet harzet, laosket da vont, barnet, toullbac'het. Stag eo an devezhioù-se, trist pe laouen, ouzh an hevelep kambroù leun a levrioù, a baperennoù, a fichennoù a bep seurt.

Goude-se e kuitais Roazhon ha ne adwelis anezhañ nemet dre zegouezh, bep an amzer : e glevout a ran c'hoazh o komz din eus va fennadoù en AAT, en e ranndi e 1947, e welout a ran c'hoazh o kejout ganin e 1948, da zeiz Gouel Sant Erwan, dirak Iliz ar C'halonou sakr e Roazhon, e-lec'h oa pardon. Ha setu ma klevis bloaz zo e oa marv a-daol-trumm yaouank c'hoazh, war-lerc'h emsaverion all, kozh pe yaouank eveltañ : diaes eo lavarout pegement e voen fromet gant ar c'heloù-se.

72

Menel a ra em eñvor soñj e zremm askornek, e elgez balirek ha ledan, e ziweuz moan, hir, stardet ha damc'hoapaus evelato, e sell sirius pell, boaz da arvestiñ ouzh misterioù ar Bed hag ar Bezoud, hini un den, ivez, en deus ranket stourm ouzh kleñved, digalon hag arvar ; soñj am eus e zaoulagad louet, e zoare lidek hag hael un disterañ, evel hini ar beleg-meur a felle dezhañ bezañ, e vouezh raouliet ha difraezh un tammig ha padal flour, e hegaratted, e habasketed hag e guñvded.

Doue da vezañ roet dezhañ ar wirionez hag al levnez a glaske.

Sierck, 28 C'hwevrer 1952.

Ur gazetenn nevez...

AR VRO

moulet e galleg hag e brezhoneg

An niverenn gentañ a zo deut er-maez

Koumanant : 350 lur (war baper brav 500 lur)

C.C.P. 519-40 Roazhon, Dll Saint Gal de Pons, Guingamp

Goulenn a reer gant an dud a gompren talvoudegezh ar gazetenn-se sikour anezhi dre gemer ur c'houmanant

war baper brav : 12 niverenn evit 500 lur

Sekretour : Per Denez

Embannet gant AL LIAMM

UN TAMM ISTOR

gant E. Ar BARZIG

Graet am eus va soñj displegañ ul lodenn eus an istor na vez ket desket er skolioù ha koulskoude ez eo ken dedennus hag al lodennoù all. Estonet bras e vezer pa glever lavarout e oa dianav meur a blantenn d' hon tadoù-kozh

« Panesen ha suruguen
hambezou d' am meren... »

a c'helle lavarout an dud e-kerz ar Grenn-Amzer. Ur bern kaol a veze debret ivez. Met ar piz bras pe hariko na voe anavezet en Europa nemet er XVIvet kantved. « Fav an Turki » a veze graet outo. D' ar mare-se e voe anavezet ivez an avaloù-sukrin. Ar roue Charlez VIII, o vrezeliñ en Itali, en doa degaset gantañ un toulladig. Genidik e oa ar blantenn-se eus an Armeni. Ar piz-bihan n' int anavezet mat ha debret gant kalz tud nemet abaoe ar XVIIvet kantved goude bezañ degemeret e palez Versailles. E-barzh ar palez-se ne oa bet gwelet morse butun 'raok ma teuas Yann Bart da welout Loeiz XIV gant e gorn-butun a lakaas da c'hoarzhin an holl uhelidi eus al Lez. D' ar c'houlz-se ne veze gwelet o vutuniñ nemet ar vartoloded o doa kemeret ar c'hiz pe ar si en Amerika. Paotr Sant-Malo, Jakez Karter (XVIvet kantved) a zo bet an hini kentañ o komz dre skrid diwar-benn ar « betun ».

Ur blaz fall spontus en doa kavet warnañ, ha koulskoude, e derou ar Reveulzi, Mirabo a lavaro ez eo deuet da vezañ ar gwellañ eus an tailhoù. Er XVIvet kantved ivez e voe butunet evit ar wech kentañ e Bro-Saoz gant Walter Raleigh, mignon bras ar Rouanez Elesbed. Pa welas e vevel anezhañ o vutuniñ, ez eas er-maez en ur huchal : « Ar mestr en deus studiet kement, ken ez eo krog an tan en e benn ». Tapout a reas ur c'helorniad dour hag e tiskargas anezhañ war penn ar butuner.

Ar beterabez-sukr a zo bet lakaet, evit ar wech kentañ, e Bro-C'hall, e 1812. Ar c'holza (kaol-eoul) a zo bet skignet e Bro-C'hall hag e Breizh en amzer an impalaer Napoleon III.

74

An ed-du na voe degaset da Vreizh nemet e-pad ar XVI-vet kantved. Un afer vat e voe evit an debrerion krampouez. Ar gouerien a voe ret dezho ober nebeutoc'h a govadoù fav evit terriñ o naon.

An Ao. Ar Chalotez eo an hini en deus lakaet hadañ melchon e Breizh evit ar wech kentañ, en XVIIvet kantved. Hag an avaloù-douar ?.. diwar o fenn eo e fell din komz ar muiañ hiziv.

An avaloù-douar, ar pato pe ar patatez, mar deo gwelloc'h ganeoc'h, a zo genidik eus menezioù uhel Amerika ar C'hreisteiz, Arroudennad an Andoù, hag ar Chili e-lec'h ma tiwanont evelse drezo o unan. Anavezet e oant pell a oa gant an Indianed a soñje dezho e oant mat da bareañ kleñvedoù. Eus lochennoù an dud ruz e oa pato o vont da zegouezhout a daol-trumm en Eskurial, ti Roue Spagn, Fulup II, an hini a c'helle lavarout evel e dad Charlez V ne dae ket an heol da guzh war ar broioù dindan e veli. Degaset e voent (un toullad hepken), e 1534, gant martoloded o tont eus Amerika. E 1573, Ospital ar Gwad e Sevilha a bren ul lodenn anezho evit reiñ d' o c'hlañvourien. Ul lodenn all a voe degaset d' ar roue, hag, er bloavezh 1565, hemañ a gasas ur bakadenn... patatez d' ar pab Pi IV a oa klañv kaer. Ar pab madelezhuz, a rannas an avaloù gant ur c'hozh kardinal « erru tost d' ar gêr ». Hini anezho ne zeuas e-barzh, mervel a rejont nebeut amzer goude. Soñjal a reer e oa ar c'hardinal eskob-meur (primad) ar Beljig hag, e-lec'h debriñ an holl batatez roet dezhañ gant an Tad Santel, e kasas lod anezho d' e vro.

E 1601, ar botanist, al louzawour Jarlez de l'Escluse, a zesrevellas an avaloù-douar e-barzh e levr war al louzoù dibaot.

E-barzh e « d-Théâtre de l'Agriculture », Olier de Serres (1539-1619) , an

hini en deus daoubennet kement evit lakaat an dud da blantañ gwez-mouar, a lavar deomp e veze hadet un tammig patatez amañ hag a-hont e Bro-C'hall. Eñ e unan a lakae un dachennad en e zouarou ar Pradel (Vivarais).

Hadet e veze muioc'h-mui a avaloù-douar en Holland, en Alamagn hag e Bro-Saoz e-lec'h e oant bet degaset gant Walter Raleigh (1552-1618) am eus komzet outañ uheloc'h. Met Bro-Iwerzhon eo an hini a lakaas ar muiañ a avaloù-douar. An deiz a hirio emañ c'hoazh unan eus ar plasoù kentañ ganti evit pezh a sell ar pato. Setu perak e vo gwelet Parmentier o c'houlenn un delwenn evit Raleigh.

75

Gwelet hon eus eta e oa anavezet am avaloù-douar e Bro-C'hall, met ne voe graet fet outi nemet gant nebeut a dud. Koulskoude e 1616, e voe servijet pato war daol ar roue Loeiz XIII. Perak ? Kement ha brudañ ar meuz ? Moarvat... Met chom a ra mouzhet an dud diwar-ar-maez ouzh « plantenn an diaoul » evel ma lavarent ha ret e voe dezho kaout naon a-raok he zanvañ. E-pad ar goañv 1709, ken rust, kalz a voe sovetaet o buhez gant ar pato.

E-pad an XVIIIvet kantved e teu bruderezh tamm ha tamm d' an avaloù-douar. En e C'heriadur an Naturouriezh, Valmont de Bomare a lavar : « Plijus eo ar boued - par vezer kustum outañ, dreist-holl pa vez poazhet gant un tamm kig-sall ». Ma oa desket an den ez eo ret anzav e oa ivez tañv e fri, rak lavarit din, n' eo ket evelse eo ar gwellañ an avaloù-douar ? Er giz-se e vezont debret kazi bep kreisteiz e Breizh ha dreist-holl e Bro-Dreger.

Ha setu ni erru en amzer Parmentier...

Ganet e Montdidier, tost da Amiens, hemañ a zeuas da Bariz d' an oad a driwec'h vloaz evit peurzeskiñ e vicher apotiker. E-pad ma oa o vrezeliñ en Alamagn e voe pemp gwech prizoniad. C'hoarvezout a reas gantañ kaout avaloù-douar da zebriñ ha netra ken. Hag eñ da veizañ, da studiañ ar blantenn ; kompren a reas pegen talvoudus e oa : « Pa vin dieub, emezañ, me ouio ober ampled ganti ».

E 1770, e voe un naonegezh vras hag Akademi Besañson a savas ur c'henstrivadeg evit ma vije kavet ur blantenn nevez bennak mat da zebriñ ha da vevañ an dud er bloavezhioù na vefe ket eostet trawalc'h a ed. Ar maout a zeuas gant Parmentier. Adalek neuze e teu da vezañ ur gwir abostol, skrivañ a ra meur a levr war an avaloù-douar : Enklaskoù war ar plant, Enklask chimik war ar batatezenn, Diskleriadurioù war an doare d' ober bara gant an avaloù-douar. An oberoù-se a blijas da d-Turgot, ministr bras Loeiz XVI. Evit kustumiñ an dud da blantañ ha da zebriñ pato ec'h ijinis meur a dra. Un devezh, goude bezañ n' em glevet gant ar roue, e lakaas hadañ un dachennad damdost de balez Versailles. Pa voe diwanet ar pato ha deut da vezañ brav da welout, a lakaas soudarded da ziwall an dachenn. Met urzh o doa ar gwarded da... serriñ o daoulagad. « O, hola 'vat, eme an dud, ken prisius-se eo... » Hag int da laerezh, hag ar bloaz war-lerc'h e voe gwelet meur a renkadenn patatez war-dro.

76

Kement ha ken bihan ma savas bruderezh en-dro da « blantenn an diaoul », eürus kalon Parmentier o soñjal en doa kavet an tu da harzh ouzh an dud da vervel gant an naon er bloavezhioù fall evit ar gwinizh. En-dro da Bariz ez eo Parmentier en deus skignet an avaloù-douar. Met e kornioù-bro 'zo e oa graet al labour dija, ha dreist-holl e Breizh. Setu amañ an tri den hon eus anaoudegezh da gaout evito : ar maltouter Tass, an doktor Lavergne hag Ar C'hamus, labourer-douar. Taolioù esae abaf a-walc'h a reas da gentañ Tass e-kichen Sant-Brieg, met bep bloaz e lakae un tamm muioc'h hag an amezeien a reas memes tra. An doktor Lavergne, ganet e Loudieg a reas bruderezh war-dro Lambal hag e savas un tamm skrid moulet e 1790 gant an « Directoire des Côtes-du-Nord ». Hervez Goulven Mazeas ar pennad-se a zo bet lennet, dre urzh ar prefet Boule, e-barzh holl kadorioù-sarmon an departamant. Ar C'hamus a hade pato e Gurunuel, a-raok 1770.

Ha koulskoude, n' eo nemet abaoe 1820 e vez debret kalz a bato. Adalek ar mare-se e teuas ar seurtoù avaloù-douar da vezañ muioc'h-mui niverus. E-kreiz ar c'hantved en em lakaer da vrizhouennañ (hybrider) hag hanter kant vloaz goude e vo milieroù a seurtoù. E 1757 Maxwell a gomz eus seizh seurt ; e 1772, Engel en Alamagn, eus daou-ugent. Ar sifroù-se eo ivez ar re a gomz anezho pe dost Parmentier e 1809 ha Putsch e 1819. Kentañ katalog pe levr-roll Vilmorin, embannet

e 1846, a ro 177 anv, hag an eil, e 1882, a anavez 630. Ya, met setu ar mildiw daonet ! Evit harzh outañ e lezer ar pato da vleuniañ ha da reiñ greun. Hadet e voe ar greun, pezh a roas c'hoazh un niver bras a seurtoù. Ar « Silzigenn », a blij kement d' an dud lipous, hag a vez anvet c'hoazh « Rouanez ar Gelted », mar plij, a zo anavezet mat abaoe kreiz an XIXvet kantved.

War-dro 3.000 seurt a vez kontet bremañ.

77

Hogen, adalek m' int bet anavezet mat dre-holl ha gant an holl, an avaloù-douar o deus roet nec'hamant d' an dud a rae en-dro dezho. Dre blantañ bep bloaz an dorzhell n' eo anezhi nemet un asez koeñvadur eus ar c'horzhenn, o chom hep hada ar greun, daoust ha n' aio ket ar blantenn war wanaat ? Evit gwir kleñvedoù-dilignezañ e voe kavet en ur sellout pizh ouzh ar c'horzh hag an delioù. Diouzh pelec'h e teuent ? Ar gozhni ? Kabeloù-touseg ? Mikrobed ? Ar « bonnedou bras » o deus kavet e teue c'houden-gwez, ar c'houden bihan-se a vev war ar c'haol, ar gwez, hag all..., da flemmañ ar c'hloer ha da lakaat kontamm ar c'hleñved enno. Gellout a reer eta lavarout ez int kleñvedoù dre vikrobed. Bez' ez int kleñvedoù herezh (da lavarout eo kleñvedoù o chom a-rumm-da-rumm), kleñvedoù spegus, n' eus pare ebet dezho. Kas a reont an avaloù-douar da goll nebeut ha nebeut. Ret e oa stourm dre an dibab. Da gentañ e veze graet an dibab-se hepken war an torzelloù. Kemeret e veze da hadañ ar re stummet ha livet a-zoare, pezh a oa mat dija ; met e giz-se ne oa ket posubl gouzout pere o doa kleñvedoù-dilignezañ a ne vez gwelet nemet war an delioù hag ar c'horzh. Ret e oa eta ober evel an Hollandiz. Un tamm 'zo dija, tud ar Friz a oa boazhet da gemer o fatatez-had e-barzh tachenoù a veze taolet pled outo e-pad o c'hreskerezh hag ez-glas, hag e 1903 e voe krouet ur c'hevredad-tud a-ratozh evit an dra-se. Kerkent goude ar Brezel-bras 1914-1918 ez eas ur c'hevredad a Vro-C'hall da studiañ doareoù an dibaberien hollandek. Ar c'hevredad-se a oa dindan renerezh ar pastor Quanjer a oa ur mailh war kleñvedoù an avaloù-douar. Unan eus ar re a yeas gentañ a zo deuet da vezañ « tad ar seleksion » e Breizh : an Ao. Jarlez Duboys, kelenner war al louzaouriezh e Skol-Uhel al Labour-Douar e Roazhon. Ur wech distro, hemañ a grouas e Breizh ar sindikadoù-dibab kentañ (Pondi, Kastellin, Mur) gant kalz a boan a-wechoù. Poaniañ a reas evit reiñ reolennoù dezho. Redek a reas hep ehan eus an eil-penn d' egile d' ar Vro. Ne oa ket Breton met gounezet en deus ar gwir da vezañ anvet Breizhad. N' eus ket pell 'zo en deus gounezet e retred, met chomet eo e Breizh, e Roazhon. Kendalc'het en deus d' ober bruderezh en-dro d' an dibab kazi e-unan betek 1934. Kompren a reas neuze ar Gouarnamant talvoudegezh e alioù. Ministrerezh al Labour douar a savas ur strollad ensellerezh. E izili a zo tud a vicher, bet skoliataet e skolioù-uhel al Labourerezh-Douar.

An dibab en deus sovetaet an avaloù-douar.

Deuet eo an avaloù-douar da vezañ ar blantenn c'houennet talvoudusañ e Bro-C'hall (6 milion a donenn e 1946) . Hi hag a zo bet ken disprizet a zo deuet da vezañ ur bevañs ken diziouerus hag ar bara. Pegen maleurus eo bet e-pad ar brezel diwezhañ ar paour-keizh n' hellent ket klozañ pe brenañ trawalc'h a batatez ! Pegement a dud he deus pourvezet hor bro ? Rak deut eo da vezañ unan eus ar broioù gwellañ evit an avaloù-douar, abalamour d' he douar, o vezañ ivez ez eus avelaj a harzh ouzh ar c'houden-gwez da vezañ niverus. Ar plas kentañ hon eus ken e-keñver an danvez, ken e-keñver an niver, spi hon eus ez eo divrall al lec'h-se.

E 1947 e oa 30.000 dibaber e Bro-C'hall hag e Breizh, Penn-ar-Bed hepken en doa 10.000, hag an departamant-mañ a zastume e-unan kement ha Bro-C'hall a-bezh.

Notenn. - H. F. Buffet a lavar en e levr Ar Barzig « En Bretagne Morbihannaise » o doa kroget tud ar Gerveur da hadañ avaloù-douar e 1761.

E Pondi, eme an Ao. Corgne, e veze paeet, e-pad ar Reveulzi, seizh gweneg ar c'hant avaloù-douar, ar memes priz hag un dousenn vioù.

DRAMA HON EMSAV

gant ABANNA

O varn diouzh ar poell boutin e hañval bezañ kerkoulz ha dic'hallus sevel Breizh d' ur vro dizalc'h, gant frankiz d' he mibion wellañ da velestriñ pinvidigezhioù he douar hag he zud e kenurzh gant ar broioù all, kuit eus emelladur an estrenion. N' eo ket ez afe red an istor a-enep d' ar seurt adsav, peogwir emañ meur a vro-suj o tasorc'hiñ er mare-mañ, hogen gwashoc'h, Breizhiz eo a fell dezho bezañ gouarnet gant estrenion, e-giz an evn dindan teog an naer ne fell ken dezhañ nijal. Bez' e c'heller klaoustreañ dek mil enep unan ne vo broadelezh ebet ken e Breizh. Ur gudenn a boell boutin eo.

Ha neoazh ez omp tud, ha tud a boell, hag hon eus gouestlet hon buhez da adsevel ar vroadelezh e Breizh. N' eur ket evit hen meizañ hep derc'hel kont eus un nerzh a zo en diabarzh ac'hanomp, ha na voe ket ganet diwar poellatadurioù, rak labourat a rae ennomp pell a-raok dont edan kraf hon meiz, barrek d' hon sturiañ a-enep da gement galloud a zo er bed, peogwir ez eus bet tud, e-maez pep redi, er c'hontrol gant ur bobl a-bezh ouzh o dianzav, evit aberzhañ o buhez da sentiñ d' e lusk. Anv an nerzh-se, ar re varv evit Breizh o deus prouet ez eo « feiz vroadel », rak ar verzherion a brou ez eo ur feiz a zo ganto ha nann ur stultenn. Ar marvioù-se, ken sklaerius evidomp, n' int nemet an arouez eus un drama kriz : drama hon emsav, a-seurt gant an holl dramaoù lakaet da darzhañ er gwirvoud a-vremañ gant mammennoù ar gwirvoud da zont, en o zouez an drama kristen, an drama krisañ.

Dre-se e kavan spletus keñveriañ an emsaverzh breizhat hag an emsaverzh kristen, dreist-holl paz eus meneg da ren hon buhez a vroadelourion. Zoken en traoù elfennel e vez ar gristenion en eneberezh ouzh ar gwirvoud a-vremañ, ha se betek bezañ foll. Da skouer, sellout ouzh ar stered, gouzout ez eus heolioù o skediñ daou viliard bloavezhiad-luc'h pelloc'h, ha rankout empentiñ e teuy an Aozer eus kement-se davedon va-unan d' am uhelaat, d' am lakaat muioc'h eget mestr war ar miliardoù a astroù a zo o vordilhañ du-hont miliardoù kantvedoù zo, karget a voudoù n' eus ganto tamm keal eus an euflenn-ved teñval-mañ, nag eus an dakenn-heol-se a ruilh e-touesk laezh an heoleier, ha n' eo ket se diskiantañ ha netra ken ? Ha neoazh ez eus tud yac'h ha leun a boell a laka ar feiz-se da bennstur o buhez. N' eo ket avat diwar goust nebeut a dra. Gwir ez eus ul lusenn fetis pe fetisoc'h o c'hronnañ an eneoù, o c'holeiñ an islonk, o tiarbenn ar braouac'h, met sklaeraennoù a zo ivez, neuze e strak taran ar spouron anienel a vez e liv strewet a-hed krap ar menez kevrinouriel.

79

Heñvel ouzh an drama kristen eo drama ar broadelour breizhat, nemet pelloc'h ez a en amc'hallus ar c'hlaoustre kristen. Piv ac'hanomp n' en deus ket bevet ar seurt sklaeraennoù pa sailh a-daol-trumm war ar spered e-giz erevent barradoù-pil ar prouennoù anat ez omp faezhet a-raok kregiñ, emañ ar bed en e bezh hag hon empenn o redek war-enep d' hon youl. Ne oa neuze nemet krommañ hon c'hein d' ober, en ur wareziñ hadenn ar feiz hag a oa - na bresk, na difonn avat - o tideñviñ en hon askre. Ha pa zeuas-hi d' ur wezenn barrek da zerc'hel penn ouzh an aveliou, pa ziwanas er wezenn-feiz-se ur santidigezh hag ur meizerezh dezhi, pa zeuas hon boud d' en em adsevel war he zro, pa voe da vat hon feiz deut da vezañ kreiz hon buhez, e krogas un daoulagad nevez-c'hanet ennomp da spisverzout un dremm nevez d' ar bed, ha warni un hent splann war-du ar Pal o lugerniñ er pellderioù, dreist meur a venez. Un hent hir, a ouzomp adal e benn-kentañ e vimp koshaet gantañ, e vimp lazhet gantañ ; hent ar poanioù, yen, diglod, digenvez. Hent an emaberzh. Hogen un hent anezhañ. Ha disheñvel e ve hon lod diouzh lod ar gevrinourion ? Peogwir ne vez taolet struj gant ar feiz nemet pa vez ar feizad o kiañ en abeg dezhi.

Evel ar gevrinourion e talc'homp hon selloù stag ouzh ar gedern a gerzhas araozomp, a yeas da benn o menozioù, evel maz ae o menozioù da benn o feiz, Perrot, Vallee, Sohier ha meur a unan a voe kaset gantañ ar feiz d' he feurefedusted hag hon drama d' e ziskoulm skedus. N' eus evidomp a hent e-maez o

hent, hent ar striv pemdeziek divius, hent an diblegusted dirak an traoù hag an dud, buhezioù hep marc'haterezh, eeun e-giz boledoù a-dreuz d' an deil. Buhezioù sent ha harozed a vo buhezioù ar re a savetaio hon bro. Un tonkadur bras a bouez war hon divskoaz evel ma pouez war divskoaz pobloù all er bed a-vremañ. Morse ne vo sanket a-walc'h e spered yaouankiz an Emsav pouezusted hon obererezh er bloavezhioù-mañ . Ha laret e vo : ar re all a gasas o zra da vat, Breizhiz hepken a c'hwitas dre ziouer a feiz ? N' eo ket e vije luziet an traoù : ma fell deomp e vevo Breizh, e tleomp gounid he broadelezh, ha d' he gounid, he dellezout : urzhiañ he buhez-diabarzh, emskiantañ kement galluster a zo gant he douar, gant he zud, gant he finvidigezhioù meizel hag eneel. Ha labourat, labourat, da dennañ hon bro diouzh an disteradur m' eo kouezhet goude kantvedoù sujidigezh. Tadoù an Emsav ne rejont ket a-hend-all, kregiñ a raent atav diouzhtu er c'hudennoù bras, forzh pegen risklus e vije.

80

Bez e klever hiziv e meur a lec'h : « An Emsav zo morzet », pe gant re all : « Arabat mont pelloc'h ; pardonet omp bet ur wech... » Re a dud e-touesk ar re a ra war-dro Breizh bremañ o deus treuzvarc'hataet gant ar c'halvedigezh d' he difenn. Dre aon, dre ziouer a feiz o deus diskroget diouzh ar c'hudennoù meur evit plediñ gant traoùigoù dizañjer. Hon enebourion int. Rak o terc'hel kont eus tud torret o lusk, aet war-gil diouzh lañs kentañ o feiz, emañ pep ober o koll e efedusted. Gant ar re glouar-se eo morzet an Emsav, evel m' eo morzet meur a emsav gant o c'henseurted, en Iliz da skouer. Ha kristenion e vije eus an hollen divlzet-se ? C'hoarzhin a ra an diaoul da seurt kristenion a souz rak dougen o feiz vroadel hag en em lakaat da vibion d' an Emsaver brasañ, an Hini a yeas E-Unan-Penn a-enep d' an dud holl eus E amzer, ha drezo da holl c'halloudoù ar bed. Hon Emsav n' en deus nemet da goll gant hevelep tud owastañ pep tra gant pusun o feiz dianzavet.

Ya, Breizh a vo saveteet, rak kavet e vo tud emsavet betek kreizon o boud, ar re nemeto a zo evit kemer o lod en traoù meur. Ya, banniel Breizh hag eñ nemetañ a vo gwelet a-us da gement kêr a zo e Breizh. Ha se a vo graet gant un dornad tud kalonek, emroet dreistpenn d' ar feiz a servijont. Treuzvarc'had ebet ne vo etre bed an aested, an dic'hoanag hag i. Gweledigezh o bro, gwiridik e-giz ur gouli war o ene, a zougint evel ar raktres merket dezho gant Tad ar Grouadelezh. Un aon n' o devo ken : tremen hep bezañ uhelsellus a-walc'h, rak ne gouezh a-builh nerzhioù divent an Neñvoù nemet er re taer a-walc'h da begiñ enno.

Diskoulmañ an drama eus pobl hon bro, terriñ kelc'h an teogerezh war he zro, lakaat da redek adarre stivelloù sonnet hec'h ene, setu pezh a reot, Kelted yaouank, trec'h da zic'hoanag mab-den.

50 VLOAZ E-TOUEZ ALAMANED

(Fünfzig Jahre unter Deutschen)
gant Friedrich HIELSCHER

Al levr-mañ zo anezhañ eñvorennoù ur Sileziad a striv evit ma troy tud ar C'huzh-Heol diwar hentoù an teknik hag ar mac'homerezh ha ma roint da draoù ar spered hag ar feiz al lec'h pennañ. Friedrich Hielscher zo ur mignon mat d' ar Vrezhoned kar-o-bro. Abaoe ouzhpenn ugent vloaz e stourm a-enep kreizennerezh hag alouberezh ar stadoù bras disakr. Goulenn a ra ma vo roet tro, en un doare gwirion, en Alamagn koulz hag e broioù all ar C'huzh-Heol, da gement pobl (kenel) da verañ, ar sevenadur berniet dezhi e-kerzh ar c'hantvedoù ha d' en em zisplegañ hervez hec'h ijin. Ken nebeut a dud a gavomp er rannved-mañ, a wel ar reuz a ra ar stadoù bras, ma kredan erbediñ al levr d' ar re a zo prederiet gant ar sevenadur keltiek. Ouzh e lenn e vezint kadarnaet e-keñver ar re a laka ar pouez war draoù an arboellerezh, kreizennerezh stadoù ramzel, etrevroadelouriezh, ar re a walleg ar yezhoù bihan abalamour ma ne servijont ket da veajiñ ha da c'hounit arc'hant.

Friedrich Hielscher a oar peseurt talvoud a zo da frankiz ar re a stourm evit o menozioù. Evit kenoberiañ gant dispac'herien an 20. 7. da ziskar ur gouarnamant a gave astut dizellezek e-keñver meurbed an Alamagn gozh, e voe toullbac'het, ha darbet dezhañ bout krouget e dibenn 1944. E levr a zo awenet penn-da-benn gant spered ar frankiz hag an doujañs evit kredenn ha doare-bevañ kement den eeun. En doare-se ez eo douget da Friziz, Tiroliz ar C'hreistez, Brezhoned, h.a., a stourm da ziwall o hêrezh vroadel. D' ar mare ma oa an heskinerezh en e washañ en deus gwarezet un toullad mat ac'hanomp en un doare risklus evitañ hag efedusañ evidomp - ha ni dinerzh ha « didalvoud » a-walc'h da heul an drouziwezh. Diouzh seurt emzalc'h ec'h anavezet ur mignon gwirion, un den hael.

* * *

82

Friedrich a zispleg e eñvorennoù adalek e yaouankiz : e amzer-studi, e oberiantiz evel kenskriver pe bennskriver da gelc'hkelaouennoù sevenadurel, e gejadennoù gant skrivagnerien ha gouizieien evel ar vreudeur Jünger hag O. Spengler, beleien a bep kredenn hag ofisourien enep-Hitler. Diskleriañ a ra penaos en deus strivet da skoazellañ ar re heskinet (Yuzevien, Sosialdemokrated) , hag enebet ouzh ar vac'homerien. An arroudoù ma keñver e zoare-gwelout ouzh hini an den a gej gantañ a zo buhezekaet gant divizadennoù fentus. E yezh a zo barzhonius-murbet. Tra ma oar poelladiñ en un doare rik pa 'z eus anv a gredennoù, mailh eo da skeudenniñ tud donezonet gant un danvez divoaz : tud a feiz hag a youl, tud speredek ha her, livastred ivez. Netra nemet evit anaout seurt temzioù-spered e talv ar boan lenn al levr.

Met muioc'h eget melezouriñ darvoudoù e fell, d' an aozer. « Gant darvoudoù, gant gredoù ne vezomp ket dic'hoantet. Gant ar ster hag an derc'hvoud, ne lavaran ket. »

Pouezusoc'h enta ar menozioù hag an evezhiadennoù a gaver gwiet gant an eñvorennoù. Hag an emskiant eus e gefridi er vuhez-mañ a vlegn an aozer dalc'hmat.

Diskoulmet en deus kudennoù diaes hon amzer : beli ar stad ha frankiz ar spered, reizh an hiniennoù hag ar c'henelioù da greskiñ hervez o ijin, natur ar stad (stad sakret betek er Grennamzer, diktatoriezh al livastred en amzer-mañ), perzh ar gredenn evit kendalc'h ar C'huzh-Heol, diskar hor sevenadur hag an hent d' e adsav. Kement-se zo diskleriet ken fraez ma c'heller hen meizañ didorr. Ha Friedrich n' en deus ket aon o tiskuilhañ al livastred dre o anv. Tamall a ra darbarerien Hitler, met ne arboell ket renerien Bariz pe London kennebeut.

Nepred n' en deus klasket sevel ur strollad evit seveniñ e vennadoù. E-lec'h ar strollad e veul ar c'hevread (Bund). Ar c'hevread zo aroueziet gant ar c'hen-

emouestl etre ar penn hag an izili (an eil, koulz hag ar re all, en deus deverioù ha kiriegezh), gant ar spered a gevre anezho (kredenn pe zoare-deneliezh) , gant ar servij dieub a roont evit ar spered-se. Mennad an diazeour, neket gounid ar bourc'hiz, eo ar pep pouezusañ.

Ar strollad, diouzh an tu all, a zo prederiet gant mad ur rummad, o mad danvezel dreist-holl. Evit tizhout ar pal, e tro peurvuiañ da veuriad : amañ e vez goulennet ouzh an izili sentiñ hep termal, pe e vezont tamallet evel trubarded ; met ar renerien n' o deus kiriegezh ebet e-keñver an izili. E-lec'h ur spered boutin ez eus ur programm ; e-lec'h ar youl dieub e ren ar redi.

83

Dalc'hmat ez eus bet enebiezh etre ar stad ha kevreadoù evel re ar studiourien, kumuniezh ar Jesuited, ar sindikadoù, ar Frañmasonerezh.

« Ur c'helennadur hag a laka lezennoù ar stad disakr war un derez izeloc'h eget gourc'hemenoù ar c'hevread a zo ur vennozh anezhañ. Evelse e vez dispennet kevredigezh dastum-arc'hant an amzerioù-diskar, ha diazezet ur stad gwirion, un deneliezh hag ur gumuniezh nevez. »

Preder Friedrich zo gant ur stad diazezet war he c'helenioù (1), he c'hevreadoù, he c'hlanoù, he hinienoù. Ur stad dereat, gouestlet da servij Doue, neket d' ar mac'homerezh ha d' an arc'hant. Diskouez a ra pe ziri eur diskennet adalek marevezh ar stad sakret, renet gant ur roue a veze dibabet gant ar re zieub ha benniget en anv un Doue evit servij an hevelep Doue, betek ar mare-mañ, mare ar stad disakr, renet gant un diktator a redi kement den da vevañ ha da vervel hervez e vrizh-youl. Pazenoù etre : ar rouantelezh a-berzh-hêrezh, hag aotrouniezh ar vourc'hizien (demokrasi). Ar stad vourc'hizel a-vremañ zo anezhi ur gevredigezh (tra distumm) a servij da greskiñ danvez hec'h izili. « Amañ n' eus ket mui a stad-renezh (un arzh !) ; politikerezh ne lavaran ket. »

Diskar ar C'huzh-Heol a zeu diwar gredenn an dud e c'hellont bevañ hep diazezoù dreistnaturel, ha krouiñ o lezenn int o-unan. E-lec'h servijout ez dieub, e tivizont pezh a blij dezho, e nac'hont kement tra na splet ket dezho. Heuliadoù : preizherezh war an natur hag an dud all (ijinerezh, brezel gant mekanikoù, diouennerezh, barnadeg a-dolpadoù, h.a.).

Bepred ez eus bet lazherezh ha viloni en hor broioù. Met er mareadoù a verzh evit sevenadur ar C'huzh-Heol ne veze ket al livastred war c'horre.

An hinienn a zeu da vezañ muioc'h-mui digenvez. Hep darempred gant hon hentez, hep karantez evit ar boudoù all, e reutaomp hag e tisec'homp.

Etre 1920 ha 1930 e oa tuet Oswald Spengler da gredin e oa tonket ar C'huzh-Heol d' an diskar diremed, evel ma c'hoarvezas gant sevenadurioù ar Reter hag ar Mor-Kreiz. Friedrich Hielscher a soñj kentoc'h ez eus kelc'hioù (bloavezhioù) en istor ar pobloù. Bez' e c'hellont kaout yaouankiz, barr ha diskar meur a weizh. Goude ar goañv, distreiñ en nevez-amzer. Met ar gwallamzer a c'hell o lazhañ ivez.

(1) En Alamagn : Bavariz, Swabiz, Sileziz, Frankiz, Izelsaozon, h.a.

84

N' omp ket evit mirout ouzh ar goañv da c'hoarvezout. Ma fell deomp mont a-dreuz e rankomp trec'hiñ da gentañ ennomp hon unan war ar viloni hag ar vrizhkredenn e vertuz ar skiantoù-natur ; kroaziañ war ar gevredigezh vourc'hizel, sevel kevreadoù kenskoazell ha karantez.

Friedrich Hielscher a ro ar perzh pouezusañ da draoù ar gredenn evel an traoù-diazez a rank pep tra, all bout savet warno, awenet ganto, meizet drezo. Ur pagan zo anezhañ en hevelep ster ha Goethe. Harpañ 'ra war hengounioù ar C'huzh-Heol, war skouer ha kelennadurezh e dud veur, - Theodorich (Dietrich Bern, en hendanevell) , Scotus Eriugena, Mestr Eckehart, Friedrich Gozh, Goethe, h.a. - ha war ur c'hempoellañ gant meizadoù spisaet-mat. Dre zaremprediñ estrenien, Islamiz, Sinaiz, Yuzevien, koulz ha beleien gatolik ha protestant, en deus startaet e gredenoù tamm-ha-tamm. N' eus na c'hwervoni na disprizañs gantañ, pa geñver anezho gant kelennadurioù ar re-hont. Er c'hontrol, dalc'hmat e pouez war ar

vreudeuriezh a dlefe bezañ etre holl ar re a gred, hag a laka o oberoù da servijout o Doueoù, dirak ar re zizoue na vevont nemet evit o mad o-unan, o tigeriñ gant o digarantez an hent d' an diskar ha d' ar muntrevezh. Seurt skoazell vreurel en deus roet da, ha bet digant beleien gristen, koulz katolik ha protestant.

* * *

Friedrich HIELSCHER - «Fünfzig Jahre unter Deutschen ». 484 bajenn ; Ti-Moulerezh : Rowohlt Verlag, Hamburg. Ar priz en Alamagn : DM 14.80, da lavarout eo wardro : 1.250 lur gall.

TESKAD

Brezhoned. - E meur a lec'h e komz Friedrich Hielscher eus ar Vrezhoned. Setu daou arroud ma veneg anezho mat : « ...Gerhard von Tevenar a oa ganet en ul lignez brezelourien ha gouizieien eus Prus ar C'hornog. E soñjoù a oa dalc'hmat e Kornog ar C'huzh-Heol. Eno, e-touez Skosiz ha Flamiz (Flamanked), Iwerzhoniz ha Brezhoned, Bourgondiz hag Elsasiz,..., en doa e vignoned.

E gwirionez, ne argarzhemp ket ar stad-nasional alaman-dre-an-ano evit kanmeuliñ Breizh-Veur, Bro-C'hall, Itali pe Spagn. An hevelep mallozh a oa e Berlin hag e Pariz, e Rom, Madrid ha London.

85

Bombezennoù ar 7-8-1932 e Roazhon a lakae ennomp an hevelep dudi hag ar bombezennoù er Schleswig-Holstein. Ket en abeg d' ar politikerezh mibil a ziskouezent, met evel arouezioù e oa krog mogerioù ar stadoù-nasional da horellañ, stadoù na oant demokratek ha sosial nemet dre an anv, bemdez o traisañ frankiz o c'henelioù (pobloù bihan) hag o yezhoù, pezh a zigor atav an hent d' an diktatoriezh. Etre Robespierre ha Hitler ez a an hent war eeun.

Anvioù meur ha mat ar frankiz, a anavez pep hini hiziv an deiz met na gred den distagañ, adalek Cyriel Verschaeve betek Leo Jasson - ne venegan ket ar re vev, n' em eus ket c'hoant d' o diskleriañ, met soñjal a ran enno, - dizoloet int bet evit hor bro da gentañ gant Gerhard. En hent-se e oa ivez an hini kentañ eus ar re a oa davev da stourm ganin a-enep an holl stadoù-nasional, ha na felle ket dezho arsaviñ dirak o stad-i, evel ma voe graet betek-hen en tu-mañ hag en tu-hont. »

« An Alamagn a zo ur savadur anezhi, met Bavariz ha Swabiz, seta gwirvoudoù, a lavared e Pariz. Gwa an hini a ziskuilhe ar savadur gall, avat ! Hag e Berlin e komzed en hevelep doare. »

« ...N' eus mui nemet er c'hevread suis ma vez miret frankiz ar c'henelioù hag ar yezhoù, er C'huzh-Heol. »

* * *

...Goude m' en doa c'hwitet Stauffenberg gant e daol, ne oamp ket mui, Lothar ha me, evit kas hon hini da vat. (An Alamaned a vije faezhet bremañ.) Ar gwellañ a c'hellemp ober oa saveteiñ darn eus Elsasiz, Lotringiz hag ar Vrezhoned, a oa bet divezh a-walc'h evit nac'h plegañ ouzh Pariz koulz ha Berlin, ha servijout o bro nemetken. Muioc'h e oa arabat gortoz. Deut omp a-benn d' ober kement-se, a-drugarez kalz d' an urzh e kevreadoù ar stourmerien-se o-unan, ha d' o aberzhioù dreist-pep-meul. Ar Vrezhoned, koulz hag Elsasiz ha Lotringiz, o doa kejet ganeomp dre hanterouriezh Gerhard von Tevenar.

(Gouez da Friedrich e oa tuet an Nasional-sosialisted da ober ouzh Breizh en un doare ken divalav ha divergent hag ar C'hallaoued - n' o doa ket emezañ, muioc'h a zoujañs egeto evit youl ar vro vihan. Ober a reas Friedrich kement ha ma c'hellas evit gouzaouiñ Lothar hag ar Vrezhoned, ha reiñ tro dezho evelse da bleustriñ un hent gwelloc'h.)

86

« Evelse emañ al lern gozh o redek atav, hag e c'hellont kenderc'hel da oberiañ evit frankiz o bro diouzh ul lec'h diogeloc'h evit ar C'huzh-Heol enta, a vo adsavet diwar e genelioù (Stämme), pe ne vo ket. »

E-keñver E. Jünger. - « Doriou Jünger n' int ket digor. N' en em zispleg ket d' an den dirazañ, fellout a ra dezhañ bout divinet ha diskoachet. Setu ma 'z eo den d' ar ger skrivet, ha neket d' ar ger komzet, evel don. Ma ne rafen nemet skrivañ, me 'gav din e tiouerfen ar gouren-speredoù etre gwaz ha gwaz hag e vijen o tec'hout rak ar gejadenn dap-krog ma vezer darev da zegemer koulz ha da reiñ, da vezañ paket koulz ha da bakañ. »

Oswald Spengler. - « Da baotred an teknik, d' an embregourien, an nijerien hag an urzhierien e promete an amzer-da-zont hag an trec'h, tra ma taole ar varzhed hag ar brederourien, ar sonaozourien hag al livourien a-gostez evel romantelerien. Met a-c'houdevezh e skrive : « Kent dibenn ar c'hantved-mañ e roio tud speredet-donoc'h muioc'h a breder da ster ar vuhez eget d' ar ouiziegezh-natur ha d' an teknik, a voem kement a dud hiziv an deiz... Kent neuze e ray ar speredoù finañ o annez er manati. »

Ar Stad a-vremañ. - « Klask a reomp breudeur, hag e kavomp marc'hadourien oc'h en em dagañ ha komiserien o kas an eil egile d' ar groug. Klask a reomp kristenien ha paganed ; bez' e kavomp pannelloù-bruderezh, hag ar c'hounidegezh noazh skoachet a-dreñv. Klask a reomp bro hon tadoù ; bez' e kavomp chanterioù ar berc'henned vras, skraberioù-oabl an embregourien ha burevioù kaoued-heñvel ar Stad na servij da gredenn ebet nemet d' an dastum danvez d' e izili. Se ar pezh a fell deomp ? An dra-se huñvre ar bugel, huñvre ar vamm-gozh a zesavas anezhañ, huñvre hon hendadoù ?

...Piv bennak a fell dezhañ hiziv an deiz, ren ur stad en un doare gwirion, da lavarout eo gervel tud eeun gant gerioù gwirion evit ur pal reizh, a rank c'hwita. Kement-se a c'heller ober en ur c'hevread hag evit ar c'hevread. E kevredigezh an holl, evit an holl, n' heller ket. Rak en amzerioù-liz e vez al livastred war c'horre, ar re a leugn ar parkeier-sport hag ar filmdioù. Ma fell deoc'h dedennañ anezho, e rankit diskouez dezho boued chas, ha komz dezho e yezh ar chas. Ma ne rit ket, ne zeuot ket a-benn ! »

87

Deneliezh nevez. - « Me a garfe degas e goustiañs vat en-dro da gement hini a ouestl e spered hag e garantez da vevañ ha stummañ, goveliañ hag arat, e-lec'h nijal ha kavadenniñ, redek ha tennañ. El labouradegoù en em chalet endeo pa n' eus ket a-walc'h a dud varrek o tont da gemer lec'h ar re gozh. Ar vegenn e-touez an dud yaouank a zo troet adarre gant ar varzhoniezh hag ar brederouriezh, gant al livañ, ar c'hizellañ hag ar c'han.

En andon eo e rank ar ster mont d' an hesk, er gwrizioù e tle al louzaouenn dizeriañ. Eus an andon hag eus douar ar gwrizioù e tle an hoal-vat distreiñ deomp. »

« ...Ennomp hon-unan e rankomp distreiñ d' ar pezh a oa anvet alaman gwechall, ha na vez intentet mui evelse gant gour abaoe ouzhpenn kantved. Bezañ bevet 50 vloaz e-touez paotred an arc'hant ha speredoù sklav a oa gwashoc'h eget bevañ e-touez estrenien, rak ken alies ha n' hon eus ket enebet ouzh ar stad hag ar gevredigezh-se, ken alies ha m' hon eus mennet gouarn ha gounit, hag ober berzh evelto, hon eus oberiet a-enep deomp-ni hon unan. Met bep tro m' hon eus kroaziet warno, klasket ha graet ar pep reizh e troas ar vallozh da vennozh adarre. N' eo ket hepken peogwir e vez kreñvaet hor youl gant enebiezh ar bed tro-dro ; met abalamour ma anavezomp hor breur diouzhtu e-giz un den dieub en arvar e-touez ar re sujet, unan hemolc'het ha heskinet e-touez mevelien. Setu penaos e c'hell ur gumuniezh nevez diwanañ e-kreiz ur gevredigezh war he diskar, hag e c'heller kregiñ enni ha ganti da adsevel ar pezh a zo bet dilezet gant mareadoù astut, ha prientet deomp gant ar remziadoù benniget.

Evelse e kejer gant ar re nizhet, ar re amprouet, ar re yaouank hag a zo gouestl da garout hag oberiañ en-dro. Dezho eo kinniget al levr-mañ . »

NOTENNOU

HOR MIGNONED. -

An Aotrou hag an Itron Ar Bleiz a zo laouen o kemenn ganedigezh o fevare bugel, ur verc'hig a zo bet anvet Brec'hed, e Dakar.

Youenn Olier hag wreg a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh o fempvet bugel, Mikael, ganet e Gwened, d' ar 27 a viz Du. Kinnig a reomp hor gwellañ gourc'hemenoù d' hor mignoned.

447 KOUMANANTER. -

Setu ma tostaomp eus ar 450 koumananter ha krediñ a reomp start eo vo tizhet a-raok ar c'hentañ a viz Genver. Dreist-holl ma kendalc'h hor c'houmananterion gozh - ha meur a hini nevez ivez - d' hor skoazellañ evel m' o deus graet er mizioù tremenet. Kaset hon eus 145 lizher da dud bet koumanantet gwechall ha spi hon eus e taolo frouezh hol labour ivez,

Setu amañ ar sifrennoù :

Aodoù an Hanternoz, 60 ; Penn ar Bed, 95 ; Il ha Gwinum, 38 ; Loer Izelañ, 27 ; Mor Bihan, 30 ; Pariz ha tro-war-droioù, 98 ; Departamantoù all, 50 ; Trevadennoù Bro-C'hall, 6 ; Iwerzhon, 14 ; Bro-Skos, 1 ; Bro-Gembre, 10 ; Bro-Saoz, 3 ; Stadoù Unanet, 4 ; Kuba, 1 ; Kanada, 4 ; Arc'hantina, 1 ; Brazil, 1 Helvetia, 1 ; Italia, 1 ; Bro-Sveden, 1 ; Aostralia, 1.

PROFOU.

- Kouezhet eo ar profoù-mañ en hor c'hef e-korf ar miz diwezhañ :

HERE.

- Ar Flamm, Brest, 1.000 lur ; Itron Sant Per, 5.000 ; dizanv Konk-Kerne, 500. War un dro : 6.500 lur.

DU.

- Lusian Bothorel, 500 lur ; Gab Mahe, 3.500 ; Jakez Daniou, 1.000 ; P. D. 1.728 ; Per Radenag, 1.000 ; A. L., 500 ; Gi Etienne, 7.600 ; J. Poulighed, person, 200 ; Per Aoustin, 300.

War un dro : 15.878 lur.

Degemeret hon eus 162.649 lur abaoe derou ar bloaz. Trugarez d' an holl.

AR RE N' INT KET A-DU. -

Daou goumananter o deus skrivet dimp nevez 'zo diwar-benn hon niverenn gouestlet da Israhel, re all o devoa goulennet deganimp ha paeet e oamp bet gant ar Juzevien, ra vezint sioulaet rak n' hon eus bet gwennek toull ebet. Pa oa bet moulet un niverenn diwar-benn Friziz o doa ar re-mañ hor skoazellet en ur brenañ 70 skourenn, ar wech-mañ n' hellomp ket zoken lavarout kemend-all.

Setu al lizhiri :

« Aotrou ker,

« Laouen on o rein deoc'h da ouzout he deus kavet digemer kalonek e-touez hor mignoned Juzevien Niv. 44 ken hoalus Al Liamm.

Juzevien 'zo na ouzont ket penaos diskouez o c'harantez ouzh ar Vretoned. Unan anezho en deus kavet. Lenn a ran e Kazetenn ar Republik (niv. 217, 17-vet a viz Gwengolo 1954, pajenn 8923), ar pezh da heul : « M. Grumbach (Bernard-Elie), né le 1er septembre 1933 à Boulogne-Billancourt, demeurant, 43, rue de Prony, Paris, dépose une requête auprès du garde des Sceaux à l'effet de substituer à son nom patronymique celui de MORVAN ».

Ar vroadelourien a drido ! Evidoun-me e kav din e vije bet breizhekoc'h c'hoazh d' an Ao. Grumbach goulenn bezañ anvet LEZ-BREIZH.

Klaoustre e root deomp un deiz a vo, un niverenn ken plijus hag an niverenn 44 a-zivout ur vro geltiek anavezet fall : Bro-C'hall. » J. D. R.

89

« Feuket on bet gant an niverenn a-zivout Israhel hag e oan prest da zinac'h resev « Al Liamm, ». Netra n' eo heñvel etre hor bro-ni, stad hor broadelezh, hag ar gouarnamant savet e Palestina gant harp an arc'hantourion etrevroadel. Gwechall e oa kaoz en hor c'helaouennoù eus broadelezhioù a oa damheñvel o stad ouzh hon

hini : Flandrez, Elsas, Kortika, Iwerzhon ha me 'oar ! Met ar Juzevien !

...Touellet eo ar Vrezhonek nevez, a gav din. A-drugarez Doue eo an niverenn ziwezhañ (dreist-holl) un daspren. Traoù breizhat kontet gant gwellañ skrivagnerien brezhonek. A-raok am boa bet plijadur o lenn « Eñvorennoù Bisousig ». Met perak n' ho peus ket roet ul lec'h brasoc'h da bennad skrid ken saourus Jarl Priel ? Ne oa ket ken arc'hantel e liv hag e oa pennadoù Sionisted, emichañs.
» J.

LIZHIRI ALL. -

Ul lenner a skriv :

« Perak n' hoc'h eus ket kemennet d' ho lennerien emañ o tont er-maez un oberenn disheñvel-tre diouzh levr Priel, ret avat da bep Breizhad desket he lakaat en e levraoueg : « Histoire des Institutions de la Bretagne », gant Marsel Planiol, embannet gant kelc'h Brec'helien ? Emañ bremañ an eil kevrenn e gwerzh. Spletus eo d' an neb a venn anavezout mat e vro. »

Hor mignon A. Omnes a gemenn dimp e vez embannet brezhoneg gant « An Aviel e Breizh », kelaouennig protestanted Vreizh. Graet he deus ur genstrivadeg vrezhonek hag erbedet « Al Liamm » d' he lennerion. Graet he deus ivez bruderezh evit kentelioù Ober.

« Amañ war-bouez un diktafon am eus aozet un dibab barzhoniezh vreizhat : testenn vrezhonek, testenn c'hallek da heul, ha lakaet em eus ar pladennoù da dreiñ dirak ar vedisined yaouank all. Bez e oa Gwrac'h Ahez, Kanenn Vrezel, ur pezh gant Meavenn, Liñvadenn Gêr Iz (tennet eus Barzhaz Breizh), ar Varzhoneg 3 gant Per Denez, Kan y gwent gant Taliesin em boa adaozet e brezhoneg-bremañ. Souezhet kenañ eo bet ar baotred all, ken gant ar yezh (a lennan koulskoude gant un taol mouezh gallek), ken gant talvoudegezh ar pezhioù. Warno n' eus ket levezon fall Pariz ; rannroidi c'hall int, a gompren c'hoazh ar varzhoniezh ; hag a anavez a-hend-all gwaskerezh o c'hêrbenn war o bro. « Penaos, a lavarent, ha ni a grede deomp e oa marv ar varzhoniezh e Bro-C'hall ! » N' o deus ket komprenet avat e chom bev ar varzhoniezh ganeomp dre ma stourmomp ouzh Bro-C'hall ! » G. E.

90

« Laouen on bet o resev niverenn gentañ « Ar Vro ». A-dra-sur, dioueriñ a rae al lennegezh hag an embannadurioù brezhonek ur seurt kelaouenn bruderezh. Krediñ a ran e raio kalz a verzh evit mat ar brezhoneg. » L. B.

« Gant dudi em eus lennet an niv. 46 - Y. Olier zo da vout meulet evit e « Hentoù » - troet-mat eo e werzennoù gantañ, daoust m' emañ an den dalc'hmat oc'h argrediñ, ha war-nes digalonekaat... Bourrus-tre « Zon ar Matoutier ».

Pennad Roparz Hemon. Div evezhiadennig :

p. 42. Put a glot e Sant Ivi ouzh trenk ha kement ha ma ouzon, ouzh trenk nemetken (trenk-put : ken trenk ma chom ho kenou digor war-lerc'h).

p. 43. Klañv-moñs a lavaromp ivez e St Ivi (Kernev). »

B. Ni D.

HON NIVERENN DIWAR-BENN ISRAHEL. -

An niverenn se, m' he deus lakaat anavezout Israhel e-touez ar Vrezhonegerien desket, he deus ivez lakaet anavezout Breizh un tammig en Israhel. Unan eus hor mignoned en deus kaset skouerennoù eus an niverenn-se, gant ul lizher diskleriadurioù, da dud uhel Israhel (Renner ar Republik, Ministr kentañ, h.a.) ha d' un niver kazetennoù. Pennadoù diwar-benn hon niverenn, ha diwar-benn Breizh, a zo bet e kazetennoù zo, evel e Maariv, unan eus kazetennoù brasañ Israhel.

SKRIVAGNERIEN AL LIAMM. -

Abaoe an niverenn lañ (Nevez-Amzer 1946) betek an niv. 46 (Gwengolo-Here 1954) ez eo deut Al Liamm a-benn da c'hounit 432 koumananter. N' hellan ket gouzout pet a dud o deus, e-pad an 9 vloaz-se, digoumanantet vit abegoù a-bep seurt. Diaes eo d' ur gelc'hgelaouenn kontañtin he holl lennerien. N' eus nemet lenn gant evezh lerc'h-ouzh-lerc'h notennoù dastumad Al Liamm : ar pezh a blij da unan a zo disaour d' un all pa n' eo ket gwashoc'h. Netra a nevez, avat, er feur-se : Gwalarn ha Sav a zo c'hoarvezet ganto kemend-all. Ya, a lavaro meur a unan, nemet bremañ ez eus brezel ar zh. Gwir eo, ar zh a zo ur jav-emgann dispar evit an dud a-enep. Bepred ez eus bet tud a-enep. A-raok 1941 ez oant a-enep doare skrivañ

Vallee, gounezet gantañ abaoe an holl berzhioù mat diwar n' own dare pe vurzud. Pa n' oant ket a-enep an doare-skrivañ e kunujennent ar brezhoneg chimik dientent d' ar re ne fell ket dezho lenn brezhoneg. Hiziv an deiz ne deo ar zh nemet an ere n' eus nemetañ etre an dud a-enep, gwall lies-seurt o menozioù don. Met distroomp diouzh an dachenn grenegellek-se da hini skrivagnerien Al Liamm.

War roll ar pennadoù embannet gant Gwalarn ha Kannadig Gwalarn etre Meurzh 1925 hag Eost 1939 e kaver war-dro 70 anv en ur venegiñ re ar skrivagnerien estren troet gant hemañ-hen eus kenlabourerien voas ar gelaouenn. Evit nav vloaz Al Liamm e kavan 96 anv. N' em eus ket degemeret an anvioù na gaver nemet e Barzhaz al Liamm hag en notennoù. An troidigezhioù a zo lakaet war anv an troer bep gwech m' eo meneget hemañ. Dont a reomp en doare-se d' ur skrivagner evit nebeutoc'h eget pemp koumananter. Mar kendalc'h an traoù en hent-se e teuimp da vezañ war un dro skrivagnerien ha lennerien Al Liamm hag e vo fur dimp sevel ur gevredigezh ma teuimp holl da izili dezhi evel rakprenerien hon holl oberoù kenetreomp. F. E.

91

AR GER GORED. -

En Arvor Ploueskad, dirak Penn-ar-Prad, ez eus ur pleg-aod dezhañ an anv-se. Desket eo bet din gant Mōn Senant - Doue d' he fardono ! - mestrez Bisousig. N' ouien ket talvoudegezh ar ger. Hogen klotañ rik a ra ouzh al lec'h an diskleriadurioù roet e Liamm 12-13/97, 14/102. F. E.

KANNADIG UNVANIEZH AR BROIOU BIHAN. -

Kannadig Unvaniezh ar broioù; en Europa a ro keleier eus Iwerzhon, Makedonia, Kembre, Sud ar Slesvig, Traonienn An Aost, an Tirol, Bro Skoz, Inizi Feroe, h.a. N' eus netra diwar-benn Breizh, o vezañ ma n' eus moarvat den evit plediñ war ar gudenn-se. Mat e vije lakaat ar pobloù all da c'houzout ez eus ac'hanomp hag e labouromp ivez evel ma c'hellomp daoust d' ar skoilhoù a bep seurt a gavomp war hon hent.

Ar gannadig a vez embannet gant ar Sekretouriezh : Rolighed, Rungsted Kyst, Danmark.

KLASK A REER -

Ur mignon koumananter a glask al levrioù-mañ:

- 1) « Etudes Celtiques » (dindan renerezh Vendryes) : levrenn 1, 1936 ; levrenn 4, 1937 ; levrenn 6, 1939 ; levrenn 7, 1939 (diviet).
- 2) Werner Hülle : « Die Steine von Carnac » (Barth, Leipzig, 1942 - diviet).
- 3) R. Winnet Orr : « Ann of Brittany » (Lincoln, Nebraska, U.S.A.).

Anaoudek e vije hor mignon ma c'hellfe unan bennak lavarout dezhañ anv embanner al levr diwezhañ-mañ, deziad an embannadur hag e briz. Skrivañ da G. Godu, O.S.B., 5, rue des Capucins, Saint-Brieuc (Côtes-du-Nord).

RESEVET HON EUS. -

Kelaouenn Ergerzh Breizh ha Keltia a ra war-dro ar vruderezh hag an Tourism e Breizh.

Eus Breizh-Veur « Juan Doo Shialteyr » kontadennoù-pobl e gouezeleg Manav 3/3 ; e gwerzh ivez ar geriadur manaveg-saozneg ha saozneg-manaveg 3 shilling pephini ; ar yezhadur 2/6, manaveg komzet 2/6. Lakaat 3 pence ouzhpenn evit ar mizoù-kas.

M. Davies, 16, Old Highway Road, Mochdre, Colwyn Bay, Wales.

EVIT AR RE GLAÑV HAG AN HARLUIDI. -

A-drugarez da « Gef ar Brezhoneg » ha d' ar « Strolladoù Brudañ ha Skignañ » ez eus bet tu da gas kelaouennoù ha levrioù d' un nebeut tud lakaet diaes e-keñver an arc'hant evit pep seurt abegoù. Ma anavezit mignoned a blijfe dezho degemer en doare-se « Al Liamm » e-pad bloaz evit netra, kasit o chomlec'hioù ar buanañ ar gwellañ da Yann Goailh, Strolladoù Brudañ ha Skignañ e Kêranna-Yerres (S.-et-0.). Ne vez ket goulennet arc'hant, profoù hon devez digant mignoned ar yezh.

92

KARTENNOU NEDELEG. -

Embannet zo bet gant « Strolladoù Brudañ ha Skignañ », « Kef ar Brezhoneg » daouzek kartenn Nedeleg disheñvel.

Graet eo bet an engravadurioù gant Guimezanes (priz kentañ an engravadur e

Roma). Goulenn ar c'hartennoù digant Alan Al Louarn, Kêranna-Yerres. K. R. 6910-61 Paris. 50 lur ar gartenn dre ar post - 500 lur an daouzek.

DOUAR BREIZH. -

Pevar bloaz he deus ar gelaouenn « Douar Breizh ». E-lec'h peder bajenn he deus bremañ c'hwec'h hag e teu e-maez bep sizhun. A-drugarez d' ar gelaouenn-se eo bet savet ar gêriadenn vreizhek a dle kaout bremaik 180 lojeiz. Ober a ra dreistholl war-dro ar vretoned divroet. Pennadoù brezhonek fonnus a vez moulet bep sizhun. Koumanant : 600 lur. - 152, Bd de la Gare, Paris (13°). C.C.P. Paris 8301-85.

UR GELAOUENN NEVEZ MOULET GANT AL LIAMM. -

Abaoe un nebeut mizioù e oamp krog da brientiñ ar gelaouenn-se. Deuet eo er-maez. Anvet eo bet « Ar Vro » hag graet eo dreist-holl evit ar re n' int ket evit lenn Al Liamm. Setu perak ez eo skrivet en ur brezhoneg aes. Graet eo ivez evit brudañ Al Liamm e-touez an dud ha lakaat an holl da anavezout al levrioù a embannomp hag al labour pouezus a reomp evit ar yezh a vez tavet warnañ gant ar c'helaouennoù « breizhek ». Holl, lennit, koumarantit ha brudit « Ar Vro ». Diskouezit anezhi d' ar re a gav Al Liamm re ziaes da lenn. Koumanant : an 12 niverenn 500 lur war baper mat, ha 300 lur war baper boutin. Dll St Gal de Pons, rue des Salles, Guingamp.

ROLL AR PRED E GWERZENNOU. -

Setu amañ ur roll pred e gwerzennoù savet gant Jarl Priel ha bet roet d' an dud e-lec'h a re c'hallek en un eured :

Apéritif : Un dakenn hini mat

da lakaat spered Lom

God ha Yann en e blom.

Consommé volaille : Soubenn ar yar

N' eo ket soubenn an tri draig

Gant dour holen ha baraig.

Cornets jambon : Kornedachoù morzhed gwiz

Gwiz lart Fañch an Du

Maget gant laezh ha bleud ed du.

Bouchées à la reine : Gwestell e-giz ar Rouanez

Ken tener ha kalon un intañvez.

Poulet rôti petits pois : Poñsined rostet ouzh ar ber

Gant piz bihan mat ha ker.

Noix de veau : Kig leue eus ar c'hentañ.

Gant chaous ken mat-all da glakañ.

Salade maison : Ha bremañ saladenn

Ya saladenn pa lavarane, ha n' eo ket radenn.

Entremets : Evit ar re lipous.

Riz à l'impératrice : Un tamm brav a riz

Gant sukr, vioù ha laezh livriz.

93

Allumettes : Ha setu amañ chimik

Gwelloc'h eget re ar Republik.

Millefeuilles : Ur pikol bern deilhoù

(ur mil d' an nebeutañ eme Rannou !)

Pêches : Hag ur bechezenn, m' hoc'h eus c'hoant

Ken dous ha pok ur vaouez goant.

Sistr, gwin ruz, gwin gwenn, pephini 'vel ma karo

Ha kale gant gwin-ardant, pe likur, ken ma findaono !

D' ar wreg yaouank ha d' he fried

Eurvat, arc'hant ha yec'hed
Gras dezho d' ober kozh eskern
Kuit a gleiñved nag a sifern
Da vevañ o daou, kreñv ha war vale
Kant vloaz bennak, goude kemend-all a vugale !

SKOWTED BLEIMOR HAG AR RE GLAÑV. -

Ur bagad Skouted a zo bet savet daou vloaz 'zo e-touez ar re glañv. Ur bagad Breizhiz yaouank eus c'hwezek da bemzek bloaz warn ugent eo na strewet int e klañvdiou Bro-C'hall ha Breizh. Soñjet hon eus e vije un dra vat mont da gas da re glañv lezenn ar skouted, diazezet war stumm-bevañ Yann-Ber Galloc'h.

Setu amañ hor pal : bezañ skout en desped d' hor c'hleñved ; ouzhpenn-se bezañ ezel eus Urzh Skouted Bleimor a ra ur plas d' an holl draoù a ra kaerder ha pinvidigezh hor Bro.

Ha setu amañ petra a reomp : kenskrivañ alies an eil gant egile hag ouzhpenn kaieroù a vez lakaet da redek etrezomp ; en unan e vez studiet kudennoù ar skouted ha Breizh, en eil lodenn e vez roet keleier.

Evit anaout gwelloc'h istor hor Bro hag he doare bevañ e vez kaset levrioù ha kelaouennoù a bep seurt eus an eil d' egile. Lod ac'hanomp a heuil ar skol vrezhonek dre lizher, lod all a gemer perzh e kenstrivadeg « Skol Hañv » pe a sikour ober prezegennoù e Ker Vreizh.

Skouted Bleimor, 33, straed Alphonse-Daudet, Champrosay-Traveil (S.-et-O.).

HEMINGWAY, PRIZ NOBEL. -

D' an amerikan Ernest Hemingway eo degouezhet gonit ar priz Nobel er bloaz-mañ. Ar skrivagner-mañ a zo ginnidig eus Chicago. E dad a oa medisin er gêr se. Karet en dije e welout o kemer ur vicher enorus ; n' eo ket ar pezh a reas ar paotr, da 17 vloaz e tec'has kuit eus ar skolaj. Kregiñ a reas da c'hounit e vuhez evel mevel en un ostaleri hag evel dornataer dre ma oa kreñv meurbet. A-benn ar fin e voe kelaouenner evit ur gelaouennig bemdeziek amerikan hag e krogas da vat gant ur vuhez leun a zarcvoudoù.

E penn ar brezel kentañ e voe kravazataer hag ez a eas da soudard en arme italian. Gloazet e voe ha diwar-se e skrivas e levr « The Farewell to the arms ».

Chom a reas e Pariz hag eno e skrivas « The Sun also rises » e 1926. Neuze e tistroas d' an Amerika e Florida. Dedennet e voe diwezhatoc'h gant Bro-Spagn hag ar redadegoù-tirvi. Skrivañ a ra « Death in the Afternoon ». E-pad an dispac'h en em gann dirak Madrid ha diwar an darvoudoù skrijus-se e skriv « For whom the bell tolls ».

94

E 1942 e teu en Europ evit ar brezel hag ur wech echu homañ ez a da chom da Guba, eno e tremen e amzer vak o pesketa, e 1952 ec'h embann e levr brudet « The old man of the sea ».

Kalz a levezon he deus bet ar gelaouennerezh warnañ ha drezi eo en deus desket e vicher a skrivagner. E gelaouenn, ar « Kansas City Star » he doa gourc'hemenoù a oa ret sentiñ outo pe mont kuit. Ne sellent nemet ouzh an doare skrivañ ha peget e oant ouzh ar mogerioù :

Frazennoù berr a skrivi
Berr e vo da bennadoù kentañ
Gant saozneg nerzhus e ri
Fetis e vi ha nann difetis.

Arabat implij anvioù gwan. Dreist-holl ar gerioù : kaer, dispar, bras, meurdezus.

Al linennoù-se a lavar petra eo doare-skrivañ Hemingway hag eñ e unan a lavar ez eo ar reolennoù gwellañ a anaveze.

VA ZAMMIG BUHEZ. -

Deut eo er-maez levr Jarl Priel « Va Zammig Buhez ». Moulet ez eus bet eus al levr-se skouerennoù war baper kaer-tre neud disi Rives da. 1.000 lur, skouerennoù war Alfa da 800 lur, franco, ha skouerennoù war baper boutin da 490 + 30 lur mizoù-kas. Ne van nemet teir skouerenn war « Rives ».

Kas an arc'hant en a-raok. P. Bodenan, 3, chemin des Potiers, Ergué Armel, Quimper. C.C.P. 212-23 Rennes.

GALERIE BRETONNE. -

Piv e-touez hol lennerien n' en deus ket prenet c'hoazh al levrig-se ? Skrivet eo gant unan eus renerien goshañ an emsav, J. La Benelais, ken brudet e skridoù e Breiz Atao. Daoust d' un nebeut barnadennoù direizh, e vo talvoudus d' an holl lenn ar skrid, anezhañ un testeni prizius-tre eus mare bras (betek-hen) an emsav. 300 lur e koust al levr + mizoù-kas. Embannet eo gant Bretagne Réelle. Bez e c'heller prenañ anezhañ, evel an holl levrioù meneget el « Liamm », digant hor sekretour evit gwerzh al levrioù P. Bodenan.

HOL LEVRIOU EVIT AR VUGALE.

En un doare mat-eston e vez prenet hol levrioù evit ar vugale « Paotr e Varv Glas » ha « Merc'hig ar Rozenn ». A bep tu e lavarer deomp n' eus bet gwelet morse e brezhoneg levrioù ken brav. (Ur goulenn : daoust ha « difennet » e vo ar re-se er skolioù ivez gant « difennourien » ar brezhoneg ?) Emaomp o lakaat bremañ daou levr all war ar stern : mar dint degemeret ken mat hag an daou gentañ e vezimp laouen,

Al levrig LENN A RAN n' eo ket bet gwerzhet ken mat hag an daou levr skeudennaouet, ha se a oamp o c'hortoz. Servijout a ra, avat, hag e meur a familh ez eus bremañ bugale o teskiñ lenn gant al levr-se. O teskiñ lenn brezhoneg DA GENTAÑ, ar pezh na oa ket bet c'hoarvezet abaoe pell. Zoken an dud n' o deus implij ebet evit al levr-se a rafe mat prenañ ur skouerenn, evit sikour moulañ an eil levr, a zo gortozet gant mall gant ar vrezhonegerien emskiantek o deus bugale yaouank.

Pep levr : 150 lur + 10 % mizoù-kas digant P. Bodenan, 3, Chemin des Potiers, Ergué-Armel, Quimper. C.C.P. 212-23 Rennes.